

PEDENN

AN ILI7




deoc'h-c'hwi, o doue
meuleudi an holl bobloù

pedenn

an

iliz



deoch-chwi, o doue
meuleudi an holl boblon
salm 66

--- T A O L E N N ---

1 - Pedennoù, kantikoù ha meulganou pempduziek	p. 1
2 - Sizhunvezh I	p. 5
3 - Sizhunvezh II	p. 31
4 - Sizhunvezh III	p. 55
5 - Sizhunvezh IV	p. 79
6 - Komplidoù	p. 101
7 - Kompodennoù an amzer ordinal	p. 105
8 - Amzer en Azvent	p. 109
9 - Amzer Nodaleg hag an Epifaniezh	p. 125
10 - Amzer ar C'horniz	p. 148
11 - Sul Fask hag amzer Fask	p. 172
12 - Pantekost	p. 199
13 - Gouel ar C'hrist - Roue	p. 216
14 - Dedi an Ilizoù	p. 219
15 - Ofis ar Werc'hez Vari	p. 222
16 - Ofisoù ar Sant (boutin)	p. 225
17 - Gouelioù ar Sant : Genvez	p. 238
C'hwevrer	p. 241
Meurzh	p. 245
Ebrel	p. 252
Mae	p. 253
Mezheven	p. 257
Gouere	p. 265
Eost	p. 266
Gwengolo	p. 277
Here	p. 285
Du	p. 287
Kerzu	p. 295
18 - Lannadenoù ar Skritur Sakr : bloavezhioù ampar	p. 299
bloavezhioù par	p. 308

Troet ha liestennet gant J. Lec'hvien 22110 Kergrist-Moalou
 KRP : 1950-56 Roazhon
 Priz ar lavr-mañ : 25,00 lur (mizou-kas ouzhpenn)

Raklavar

*C'hwî nobloù holl, atlabit ho taouarn
 Meulit Doue gant youc'harlegoù a levezet !*
 Salm 46

PEDENN AN ILIZ am eus lakaet war dalbenn al levr-mañ evit diskouez n'eo ket graet hepken evit ar veleien hag al leaned, met evit pobl Doue a-bezh, evit an holl dud a gav dezho o deus tra pe dra da glevout digant Doue pe da lavarout dezhañ. Eskemm, kendiviz etre an Aotrou, Mestr ar bed, hag e grouadurioù : setu ar bedenn, ha dre vras e c'heller diogeliñ en deus ar bed a-bezh, danvezel ha speredel, darempred gant e Grouer, rak, gouez d'ar salmour : An neñvoù a embann gloar Doue, hag an oabl a ziskleir e oberenn (S 18). Ha mar d'eo helavar ar bedoù dispered, piv er bed speredel a chomfe dilavar ?

*Tud 'zo a yud, a hud o brud ;
 Ha c'hwî 'chomfe 'vel ul loen mit,
 Hev rannañ arik, buel divat,
 Ha reiñ klod da Zoue ho Tad ?*

*Hab-den, ra zeuio da ganañ
 An hini 'zo a-us dezhañ,
 Mestr an hollved, ovelus, disowel,
 Doue meurdeuz ha santel.*

Evel ma lavar ar c'hantik kozh :

*Kanañ 'ra 'l laboused
 D'eo C'hrouer meuleudi ;
 Me, a c'henou hag a spered,
 A dle haeroc'h c'hoazh hen meulñ.*

An den, krouet gant Doue hañval outañ ha lakaet da vestr war ar grouadelezh, an den dreist-holl ma 'z eo bet dezrevillet Doue dezhañ, n'hell ket chom dilavar dirazañ, ha n'eo ket diaes kompren penaos e-kerzh hec'h istor, pobl Israel, ar bobl dibabet, he deus savet kanennoù, salmoù ha kantikoù evit displegañ menozioù he spered ha soñjoù he c'halon d'an Hini en doa skoulmet ganti un Emglev priedel. Ar salmoù a zo bet, hag a zo c'hoazh bremañ, diazez ar bedenn e-touez ar Yuzevion. Implijet int bet gant Mab Doue e-unan pa 'z eo bet diskennet war an douar evit en em ober den ha dont da vezañ 'oiz an dud (Fil 2,7). E ziskibled n'hellent ket ober a-hend-all hag o kemer skouer divarnañ, adalek derou an Iliz, ar Grederion centañ a veze abetus ha selaou helemerezh an Ebestel, da virout humuniez, da nemer perzh e Pannadur ar Rara hag ar peñnoù (Ob 2,42). En em vodañ a raent evit meuliñ Doue, aspediñ anezhañ, goulenn e skoazell hag e bardon, ha klevout lennadeg ar Skritur Sakr. Tamm-ha-tamm, a-hed ar c'hantvedoù, ez eus bet savet gant an Iliz ur bedenn gefridiel, enni salmoù, arroudennoù ha testennoù kemeret er Bilbl santel, ha neuze meulganou, omliennoù ha skridoù o tiverrañ buhez ar Sant. Setu dre vras raktres an Ofis santel pe bedenn an Iliz. Al leaned hag ar cloer, pa reont o gouestloù, a zegemer ar garg da lavarout bemdez ar bedenn-se en anv an Iliz a-bezh. Ar fideled ivez, argentaou, a gemere perzh, d'ar sul goude kreisteiz dreist-holl, el lodenn anezhi anvet Gousperoù, a veze kanet en holl barrezioù. Ne oa ket al latin ur skoilh evit herzel outo da ganañ ar-graiz-kalon meul udiou an Aotrou. Bremañ 'vat eo deuet da vezañ rouez-tre an ilizoù na vez c'hoazh kanet eno ar Gousperoù, nemet dez ur pardon bennak a vefe. Mezet pe vezet, en ilizoù, pe e lec'h all, gant kumuniezhoù pe en o fart o-unan, e vez kavet kristenion hag a soñj dezho ez eo mat e kemerfent o lod, a-unan gant kargidi an Iliz, e kefridi ar veuleudi santel, en ur

lavarout tamm de damm eus an Ofis. Ha Vatikan II, e kenreizhadur *sacrosanctum Concilium*, a erbed al laiked da lavarout an Ofis, pe gant beleien, pe kenetrezo, pe a-hiniennoù, rak oc'h embreññ ar rann-se a-unan gant ar C'honk a-bezh e kemeront perzh en enor-meur *Pried Tezuz Krist* hag en em zalc'hont *dirak Itron Doue* en anv an *Iliz o Mamm* (Niv. 95 ha 100).

Evidomp, e Breizh, n'eus ket a Vodadeg Eskibien evit kemer breder gant pobl ar Vretoned evel pobl disheñvel diouzh hini Bro-C'hall, ha setu perak ar Vrezhonegerion, betek vremañ, pa oa diouer a levr ofisiel, o deus ranket pourchas a-gleiz hag a-zehou, an danvez rekis, m'o doa c'hoant da bedif en o yezh gant an Iliz. Har vete nebeut eo aet an holl veleien war ar gallez, pa zeue warno a zalc'he d'implijout ar breviel latin. Penaos 'n em gemer neuze ? Netra da c'hortoz a-berzh an eskoptioù, na ne seblantont ket emskiantek ouzh ar gudenn-se. Da c'hras Doue, an Testamant Nevez hag ar Salmoù, troet gant Maodez Glanndour pe zindan e renerezh, a oa bet embannet gant AL LIAMM e 1971 ha 1974. STUDI hag OBER en deus ivez embannet abaoe pell amzer 'zo levrennoù eus an Testamant kozh hag e niv. 20-21 MEULGANOU EVIT BLOAVEZH AL LIDOU. Diouzh e du, P. G. (Per ar Gall, person Lokarn) en deus embannet e 1973 LEVRIOU AR BIEL, troet n'izh diwar an hebreeg. A-hend-all, gant embannadurioù RANN-HEOL evit al liderezh, Klerg en deus graet ul labour ramzel ha kalz a pempedennoù a zo adskrivet amañ diwarno. Ne oa ken d'ober nemet klokaat ar pezh a oa dija kaset mat war-raok gant al labourioù-se. A-drasur, ne oa ket lec'h da adskrivañ em levr nag ar Salmoù, nag al Lennadennoù diwar ar Bibl : a-walc'h menegiñ anezho en o flas en Ofis. Evidon henken eo e soñjen da gentañ treiñ an destenn c'hallek : " Prière du temps présent " PEDENN AN AMZER-VRIDIAN, na n'oa ket barrek da gemer evit penn-orin an destenn latin : " Liturgia horarum " - Liturgiezh an eurioù. Un nebeut kenvreudeur o deus goulenet ouzhin tennañ evito'ha setu penaos, da c'hortoz ma vo laket un deiz bennak embann ur Breviel e brezhoneg aprouet gant pennadurezhioù an Iliz, eo deuet er-maez an oberenn-mañ, sklaer a-walc'h, a gav din, hag aezet da lenn a-drugarez da J. Ducamp en deus skriverezet ar stensiloù. + skouerunnoù

N'eus amañ a-benn ar fin nemet un taol-esa evit ar re a blij dezho bedif gant yezh o bro. Kalz a veulganou a c'hell bout kanet : ar re embannet gant STUDI hag OBER ; holl ez int rimet hag e tisoc'hont dre ar ger Amen. Ar reoù all, troet diwar ar gallez, e c'heller kanañ anezho war an tonioù merket evito el levr "Chants notés". Tu a zo ivez alies da gemer tonioù ar c'hanti-koù brezhonek.

Bebechoù e-leizh a vo kavet da ober ouzh va labour : n'eo ket graet gant un arbennigour. Hogen sotre a roan d'e reizhañ ha goulenn a ran digant ar re a implijo anezhañ degas din o evezhiadennoù. Pourchas a ranko ouzhpenn :

- Ar Bibl Santel (M. Glanndour) evit ar Salmoù hag an Testamant Nevez.
- Levrioù ar Bibl (P. ar Gall) evit an Testamant Kozh.
- Lennadennoù diwar an Tadoù (Klerg).

Pa vo meulet, kanaet, hag azeulet en holl yezhoù ar-zehed Doue an Tad, ar Mab hag ar Spered Santel.

10 a viz Du 1977

J. Lec'hvien
Person Kerzist-Moeloù

= F R A M M A D U R A N J E F I S =

Pemp lodenn (eurioù) a gaver en ofis pemdeziesik :

- 1 - Ar Meuleudioù da vezañ lavaret diouzh ar beure OFIS AR BEURE.
- 2 - Ar Gousseroù da vezañ lavaret d'abardaez OFIS AN ABARDAEZ
- 3 - Al Lennadennoù da vezañ lavaret pa garer OFIS AL LENNADENNOU.
- 4 - Ur Pedenn verr da vezañ lavaret da vare kreisteiz OFIS KREISTEIZ.
- 5 - Ar C'homplidoù da vezañ lavaret a-raok mont da gousket KOMPLIDOU.

Da zigriñ an holl eurioù e vez lavaret :

- Va Doue, deuit d'am skoazellañ.

- Va Aotroù, hastit dont d'am sikour.

Nemet d'an ofis kentañ :

- Aotroù, digorit din va muzelloù.

- Ha va genou a embanno ho meuludioù.

Ha goude :

- Klod d'an Tad, d'ar Mab ha d'ar Spered Santel.

- Evel ma oa er penn kentañ, ha bremañ ha da viken, a gantvedoù da gantvedoù. Amen. (Alleluia).

= R O L L A R P E D E N N O U =

OFIS AR BEURE

- Digor
- Salm 94 (pe 99 pe 66) gant e Respont
- Meulgan
- Salm(où) ha kantik an Testamant kozh
- Komz Doue
- Respont berr (berrganenn)
- Kantik Zakaria gant e Antifonenn
- Aspedenn
- Hon Tad...
- Kempedenn
- Bennozh.

OFIS AL LENNADENNOU

- Digor
- Meulgan
- Salm(où)
- V / e r /
- Lennadennoù (ar Bibl hag an Tadoù)
- Kempedenn
- Te Deum (d'ar gouelioù).

OFIS KREISTEIZ

- Digor
- Meulgan
- Salm(où)
- Komz Doue
- V/ & R/
- Kemedenn
- Bennozh

OFIS AN ABARDAEZ

- Digor
- Meulgan
- Salm(où) ha kantik an Testamant Nevez
- Komz Doue
- Berrganenn
- Kantik ar Werc'hez Vari gant e Antifonenn
- Aspedenn
- Hon Tad...
- Kemedenn
- Bennozh.

KOMPLIDOU

- Digor
- Meulean
- Salm(où)
- Komz Doue
- Berrganenn
- Kantik Simeon gant e antifonenn
- Kemedenn
- Bennozh
- Antifonenn en enor d'ar Werc'hez Vari.

Da glozañ ar c'hemedennoù :

- diouzh ar beure ha d'abardaez-noz :

Dre Jezuz Krist, ho Mab, hon Aotrou hag hon Doue, a ren ganeoc'h ha gant ar Spered Santel, bremañ hag a gantvedoù da gantvedoù. Amen.

(pa vez graet meneg eus ar Mab) :

Eñ da ren ganeoc'h ha gant ar Spered Santel, bremañ....

(d'ar Mab) :

C'hwi a ren gant an Tad hag ar Spered Santel, bremañ....

- ofisoù all :

Dre Jezuz Krist hon Aotrou; Amen.



Aotrou, digorit din va muzelloù.
Ha va genou a embanno ho meuleudi.

Klod d'an Tad, d'ar Mab ha d'ar Spered Santel,
Evel ma oa er penn kentañ, ha bremañ ha da viken, a gantvedoù
da gantvedoù. Amen.

S. 94

Deuit ha kanomp gant joa d'an Aotrou,
youc'homp en enor da Zoue, hor Salver.
En em ziskouezomp dirazañ gant meuleudiou,
ha rentomp gloar dezhañ gant hor salmoù.

Rak un Doue bras eo an Aotrou,
ar Roue meur a-us d'an holl doueou:
En e zorn e talc'h donderioù an douar,
ha dezhañ eo lein ar menezioù.
Dezhañ eo ar mor, graet en deus anezhañ,
an douar sec'h, stummet eo bet gant e zaouarn.

Deuit eta, stouomp hag azeulomp,
ha daoulinomp dirak an Aotrou, hor c'hrouer,
Rak eñ a zo hon Doue ha ni ar bobl maget gantañ,
hag an deñved renet gant e zorn.

Ra vefec'h hiziv evit selaou e vouezh!
" Na galedit ket ho kalonoù evel e Meriba,
evel er gouelec'h, da zeiz Masa,
E-lec'h m'on bet temptet hag aproust gant ho tadoù,
evito da vezañ gwelet va oberoù.

E-pad daou-ugent bloavezh on bet heuet gant ar rummad-se,
ha lavaret em eus : Pobl dianket a galon!
An dud-se n'anavezont ket va hentoù!

Ha neuze em eus touet em fulor:
Nann, morse n'antreint em diskuizh! "

Klod d'an Tad...

Kantik Zakaria

Ra vo benniget an Aotrou, Doue Israel,
dre m'eo deuet da welout ha da zaspren e bobl,
Ha da sevel dimp un nerzh a silvidigezh,
e tiegezh David, e servijer,
Evel m'en devoa degemmet en amzer wechall
dre c'hennec Sent, e Brofedad:
Silvidigezh evit hon dieubiñ diouzh hon enebourion
ha diouzh daouarn an holl dud a vag ouzhip kasoni,
Evit diskouez trugarez e-keñver hon tadoù,
ha kaout soñj eus e emglev santel,
Eus al le en devoa touet da Abraham, hon tad,
e roje dimp ar c'hras da vezañ dizaon,
Bet tennet a-dre daouarn hon enebourion
evit e servijer,
Er santelezh hag er reizhder dirazañ,
a-hed hon holl vuhez.

Ha te, bugelig, te 'vo anvet profed an Uhel-meurbet;
 kerzhout a ri a-ziaroek d'an Aotrou evit kempenn e hentoù,
 Evit lakaat e bobl da anaout ar silvidigezh
 dre ar pardon eus ar pec'hedoù,
 Abalamour da galon drugarezus hon Doue,
 a lakaio heol ar beure da zont eus an uhel d'hon gwelout,
 Evit sklerijennañ ar re aezet en defvalijenn hag e skeud ar marv,
 ha ren hor c'hammedoù en hent ar peoc'h.

Klod d'an Tad...

Kantik ar Werc'hez Vari

Va ene a gan braster an Aotrou,
 ha va spered a gav e levez e Doue, va Salver,
 Dre m'en deus sellat ouz izelded e vatezh,
 setu a-vremañ, na vin anvet evurus gant an holl rummadoù,
 Rak an Hollc'halloudeg en deus graet evidon traoù burzhodus,
 an Hini a zo santel e anv.
 Hag e drugarez en em astenn a rummad da rummad
 war gement hini en deus doujañ outañ.
 Diskouezet en deus nerzh e vrec'h,
 ha dispennet ar re a zo trasoni en o c'halon.
 Diskaret en deus an dud c'halloudek diwar o zron,
 hag uhelaet an dud izel.
 Ar re naoniek en deus karget a vadoù,
 ar binvidik en deus kaset kuit hep netra.
 Kemaret en deus etre e zivrec'h Israel e vogel,
 evit kaout soñj eus e dizez,
 Hervez m'en devoa prometet d'hon tadoù,
 e-keñver Abraham hag e liguez da viken.
 Klod d'an Tad...

Te Deum

Deoc'h, Aotrou, hor meuleudi!
 Deoc'h hor youc'hadeg, c'hwi eo an Aotrou!
 Deoc'h, Tad peurbadel, meulgan an hollved!
 Diracoc'h 'n em stou an Aro'haeled, an Aeled ha speredoù an neñvoù.
 Ho trugarekaat ha kanañ a reont:
 Santel, santel, santel an Aotrou Doue, Mestr ar bed.
 Leun eo gant ho kloar an neñv hag an douar!
 C'hwi eo a ganmeul an Ebistel,
 C'hwi eo a embann ar Brofeded,
 C'hwi eo a desteni ar Verzherion,
 C'hwi eo a gemenn hag a anzav an Iliz dre ar bed a-bezh.
 Doue, hoc'h azeulif a reomp,
 Tad meurbet santel,
 Mab peurbadel ha dreist-karet,
 Spered a c'halloud hag a beoc'h.
 Krist, Mab an Doue bev, Aotrou, leun a c'hloar,
 N'hoc'h eus ket disprizet 'n em enklozañ e korf ur Werc'hez
 Evit dieubiñ an deneled areet.
 Gant ho trec'h war ar marv hoc'h eus digoret d'an neb a gred
 Porzhioù ar Rouantelezh.
 A-zehoù d'ho Tad e renit, evit ar Varnedigezh e teuet.
 'N em ziskouezet evel difenner ha kariad an dud salvet gant ho kwad;
 O degemerit gant an holl Sent en ho levez hag ho sklerijenn.

MEULGANOU AR BEURE

1 - R/ - Jezuz Krist a zo savet en hon touez,
 Doue en deus gweladennet e bobl.

Deut eo da gerzhout war hon hentoù,
 Perzhiad en hor buhez, poanioù ha joaioù,
 Deut eo da saveteiñ an holl dud,
 Deskiñ dimp karout, tagañ ar gasoni. R/

Neb a gred ac'h adsav d'ar vuhez,
 Hag a gav an esper en Doue Salver;
 An neb a gred en Doue hon Tad,
 En devo gant e Vab ar vuhez peurbad. R/

An dall a wel, ar marv a adsav,
 Ar c'hamm 'zo parseet, levez d'ar paour;
 An dall a wel, ar pinvidig a rann,
 An naonieg 'zo maget, Doue a bardon. R/

Hor c'has 'ra dre an douar a-bezh,
 D'embann ar C'heloù-Mat d'ar c'halonoù reizh;
 Hor c'has 'ra da zougen ar sklaereded,
 Ha da skuilh ar joa e-touez hon holl vreurdeur. R/

Addont a ray un deiz en e c'hloar,
 Evit hor c'has gantañ en neñv gant an Tad;
 Addont a ray evit barn ar bed,
 Ha reiñ d'hor c'horfoù ar vuhez peurbadel. R/

2 - Digorit va selloù
 Da vurzudoù ho karantez.
 Aotrou, un den dall on war an hent,
 Va yac'hait, 'vit m'ho kwelin.

Digorit va daouarn,
 A 'n em serr 'vit mirout pep tra.
 Dirak va zi ar paour en deus naon:
 Deskit din rannañ gantañ.

Grit din kerzhout, Aotrou,
 Daoust pegen start e vo an hent.
 Me 'venn hoc'h heuliañ betek ar groaz:
 Deuit d'am c'hemer gant ho torn.

Grit din klevout, Aotrou,
 Va breudeur a c'harm davedoc'h.
 D'o foanioù ha d'o galvadennoù
 Ra vo digor va c'halon.

Mirit va feiz, Aotrou,
 Kement eo'h embanner ho marv.
 Pa zeu an noz ha pouezder an deiz,
 A! Aotrou! Chomit ganin.

3 - O Doue morse bet gwelet
 Gant nep krouadur,
 Na gant nep meiz bet empennet,
 Na diskleriet gant nep lavar,
 Hon noz he deus ho resevet:
 Grit ma 'n em ziskolpo he gouel.

Grit ma trido he sioulder
 Dre ho Spered,
 Doue, grit ennomp ho lavar,
 Hag ar re a zo ganet dall
 A welo an deiz prometet
 Abaoe ma 'z eo marv hoc'h hadenn.
 N'eo ket ho soñj ma kresk an den
 Davet netra,
 Met graet hoc'h eus, en ur ziskenn,
 Ma n'ay ket a-benn d'e hent dall:
 Toullet hoc'h eus an droienn gaer
 E-lec'h m'eo gras pep tra er bed.
 E-kuzh ec'h aczite evidomp
 Ar pezh a c'hell
 Derc'hel ho Teiz, pa zegouezhot;
 Eno ez eo, e skeud ho kloar,
 En em sil dija ho sklaerded,
 Antren 'reomp en hoc'h istor.
 Hadit ar gerioù 'ro buhez,
 Deoc'h e larimp:
 Sellit ouzhimp hag e welimp;
 Klevit Jezuz hag hoc'h asped:
 E kamm pellañ ar bed krouet,
 Deut d'ober an den trugarez.

4 - C'hwi, Tad ar ger kentañ
 Strinket er c'hentañ sioulder
 M'eo bet lusket an den,
 Klevit 'vont davedoc'h
 'Vel un heklev,
 Hor mouezh,
 Mesket gant meulganoù
 Ho Treist-karet.
 C'hwi, Tad an deiz kentañ
 Savet er c'hentañ douaroù
 Dre aezhenn ar Spered
 Dirak ho taoulagad,
 'Vel en distro,
 E krog
 An tan e kalonoù
 Tud Jezuz Krist.
 Tad ar frouezhenn gentañ
 C'hwezhet gant ar c'hentañ saourenn
 E-barzh ar bed hadet,
 Resevit gwad ar greun
 Bet darevet,
 Deuit,
 Leugnit an dorn a glask
 Ho mab kentañ.

5 - Peogwir emañ ganimp
 Tra ma pad ar rumm-mañ,
 Na c'hedomp ket fin an deizioù
 'Vit e gavout...
 Legad digor,
 Klaskomp e roudenn hag e zremm,
 Diguzhomp anezhañ huzhet
 E-kreiz ar bed evel un tan!

Peogwir emañ ganimp
 'Vit an amzer-griz-mañ,
 N'huñvreomp ket emañ dre-holl
 Nemet er marv...
 Kerzhomp a-dizh,
 Troomp outañ hor pasianted,
 Deomp davet an den a boan
 A ra dimp sin diwar ar groaz.

Peogwir emañ ganimp
 E deizioù hor gwander,
 N'esperomp ket derc'hel war-sav
 Hep en gervel...
 Roomp an dorn,
 Youc'homp dezhañ hon dienez,
 Hag anavezomp war an hent
 An hini 'bulluc'h hor pec'hed.

Peogwir emañ ganimp
 Evel da veure Pask,
 Na c'hwitomp ket emgavadenn
 Ar gwad skuilhet...
 Gant ar bara,
 Evomp hanafad an tremen,
 Roomp bod dezhañ 'n em roet
 'Vit hor c'harout betek ar fin.

=====

S U L 1

=====

OFIS AL LENNADENNOU

- S. 1 Ant. : Gwezenn ar vuhez eo ho kroaz, Aotrou, alleluia!
- S. 2 - : Setu ar roue am eus diazezet war va menez santel: va Mab
 muiañ-karet, alleluia!
- S. 3 - : Ur skoad oc'h evidon, Aotrou, va gloar, c'hwi a lak va fenn
 da sevel en-dro.

V/ - Komz an Aotrou da chom ennoc'h gant he finvidigezh.
 R/ - En em genteliit an eil egile e pep furmez!

OFIS AR BEURE

- S. 94 R/ - An Aotrou hon Doue, deuit, azeulomp anezhañ.

Meulgan Doue a ren! Pobleù, youc'hita levez, alleluia!
 Ar vuhez he deus trec'het war ar marv,
 Ar groaz he deus trec'het war an ifern!

R/ - Alleluia, alleluia, alleluia! Aotrou, meuleudi deoc'h!
 Setu deiz an Aotrou, deiz a levez, alleluia!
 Ar vuhez he deus trec'het war ar marv,
 Ar groaz he deus trec'het war an ifern! R/

Sul 1

Setu ar burzhud graet evidomp gant an Aotrou,
Ra vo benniget e anv, alleluia!
Salver Jezuz, karantez veur ar bed! R/

S. 62 Ant. : Me a fell din ho pennigañ, va Doue, en enor d'hoc'h anv
e savan va daouarn, alleluia!

Kant. Dn 3,57-88,56 : Andonioù, Feunteunioù ha kement a vev en dour,
benniget an Aotrou, alleluia!

C'hwi holl, oberoù an Aotrou, benniget an Aotrou:

R/ - Dezhañ Klod uhel, meuleudi peurbadel!

C'hwi holl, Aeled an Aotrou, benniget an Aotrou. R/

Ha c'hwi, neñvoù an Aotrou, benniget an Aotrou,
Ha c'hwi, doureier dreist an cabl, benniget an Aotrou,
C'hwi holl, galloudoù an Aotrou, benniget an Aotrou. R/

Ha c'hwi, heol ha loar, benniget an Aotrou,
Ha c'hwi, stered an neñv, - R/
C'hwi holl, glaveier ha glizheier, - R/

C'hwi holl, aezhennoù hag avelioù, benniget an Aotrou,
Ha c'hwi, tan ha tomder, - R/
Ha c'hwi, yenijenn ha gwrez, - R/

Ha c'hwi, glizh ha grizilh, benniget an Aotrou,
Ha c'hwi, rev ha yenijenn, - R/
Ha c'hwi, skorn hag ero'h, - R/

Ha c'hwi, nozvezhioù ha devezhioù, benniget an Aotrou,
Ha c'hwi, sklerijenn ha teñvalijenn, - R/
Ha c'hwi, luc'hed ha kounoul, - R/

Ra vennigo an douar an Aotrou. R/

Ha c'hwi, menezioù ha torgennoù, benniget an Aotrou,
Ha c'hwi, plantennoù an douar, - R/
Ha c'hwi, stivelloù ha mamennoù, - R/

Ha c'hwi, morioù ha sterioù, benniget an Aotrou,
Ha c'hwi, morloened ha pesked, - R/
C'hwi holl, evned en cabl, - R/
C'hwi holl, anevaled ha chatal, - R/

Ha c'hwi bugale an dud, benniget an Aotrou. R/

Pobl Israel, bennig an Aotrou,
Ha c'hwi, beleion an Aotrou, benniget an Aotrou,
Ha c'hwi, servijerion an Aotrou, - R/

Speredoù hag eneoù an dud just, benniget an Aotrou,
Tud santel hag izel a galon, - R/
Ananiaz, Azariaz ha Mizaël, - R/

Bazit benniget, Aotrou, en neñv: deoc'h Klod uhel,
meuleudi peurbadel!

S. 149 Ant. : Ra drido pobl Doue evit he roue.

Sul 1

Komz Doue Disk 7,12

Ar veuleudi, ar c'hloar, ar furnez,
ar grasoù, an enor, ar galloud hag an nerzh d'hon Doue
evit kantvedoù ar c'hantvedoù! Amen!

An Aotrou a vennigin e pep lec'h hag e pep amzer.

V/- E veuleudi dizehan em genou e pep lec'h...

V/- Klod d'an Tad, d'ar Mab ha d'ar Spered Santel.

An Aotrou a vennigin e pep lec'h hag e pep amzer.

Kant. Zak. : An holl vroadoù a zeüo da stouñ dirazoc'h, rak c'hwi
hepken a zo santel.

Pedomp Doue an Tad hollc'halloudek a selaou dalo'hmat
gant madslezh aspedenn e vugale, ha bennigomp anezhañ:

R/ - Benniget oc'h, Aotrou, a-viskoazh da virviken.

- Krouer ar bed, gant trugarez e tegemeromp an deiz-mañ a ro
dimp ho madelezh, en ur zerc'hel soñj eus adsav ho Mab d'ar
vuhez. R/

- Ho Spered Santel da gelenn dimp hiziv ho polontez, hag ho
furnez' da ren ac'hanomp e pep mare. R/

- Grit dimp kemer perzh, laouen, e bodadeg ar sul-mañ, ouzh
an daol ma roit dimp Komz ha Korf ho Mab. R/

- Setu ni amañ dirazoc'h, Aotrou, evit ho trugarekaat eus ho
madoberoù diniver. R/

Hon Tad hag a zo en neñv...

Kempedenn ar sul (p. 105 ...)

Ra vo bemnoz an Aotrou Doue warnomp,
Ra vimp diwallet a bep droug,
Ha kaset d'ar vuhez peurbadel. Amen.

Bemnoz da Zeue.
Ganimp eo kanneulet.

OFIS KREISTEIZ

Meulgan

Sed an amzer, Spered Santel,
Ma teuit er galon fidel,
A-unan gant an Tad, ar Mab,
Evit skuilhañ ho sklerijenn.

Ra vo hon teod hag hor c'halon
Hon nerzh hag ivez hor buhez
Holl entanet a garantez
Evit an holl dud a garit.

Hor selaouit, Hollc'halloudeg,
Dre Jezuz, ho Mab unganet,
A ren gant ar Spered Santel,
A-holl-viskoazh da virviken.

S. 117 Ant. : Setu an deiz a reas an Aotrou, alleluia!

Komz Doue I Yn 4,16

Anavezet hon eus karantez Doue
en hor c'heñver, ha kredet enni. Doue 'zo karantez,
hag an hini a chom er garantez a chom en Doue, ha
Doue a chom ennañ.

Sul 1

V/ - Kemeret en deus an Aotrou e rouantelezh en e zalc'h.
R/ - Bezomp er joa hag el levenez.

Kempedenn ar sul (p. 105 ...)

Bennozh da Zoue.
Ganimp eo kanneulet.

OFIS AN ABARDAEZ

Meulgan

R/ - Aotrou, trec'h oc'h bet war ar marv
Ha graet hoc'h eus d'ar vuhez skediñ
Er beurbadelezh.

Adsavet eo ar C'hrist a-douez ar re varv Adsavet eo ar C'hrist a-douez ar re varv
Preveudi ar re a zo chomet kousket. Ha lonket eo bet ar marv gant ar vuhez!
Trec'h eo ar vuhez war ar marv. R/ Emen, o marv, emañ da drec'h? R/

Adsavet eo ar C'hrist a-douez ar re varv!
D'an Doue Salver rentomp gras da viken
En anv an Aotrou Jezuz Krist. R/

S. 109 Ant. : Setañs Doue d'am Aotrou: azez en tu dehou din.
S. 113 A - : Dirak dremm an Aotrou e strinko an dour bev.
Kant. Disk 19, 1.2.5.7: Doue a ren, na drido an douar, alleluia!

R/ - Alleluia, alleluia!

Ar silvidigezh, ar c'hloar hag ar galloud d'hon Doue, alleluia!
Gwirion ha reizh e varmedigezhioù. R/

Meulit hon Doue, servijerion an Aotrou, alleluia!
C'hwi holl hag a zouj anezhañ, bihan ha bras. R/

Setu ma ren evel Roue, an Aotrou hon Doue, mestr an hollved, alleluia!
Bezomp laouen ha tridomp, roomp gloar dezhañ. R/

Rak setu deuet eured an Oan, alleluia!
Hag e bried a zo en em gempennet. R/

Konz Doue 2 Kor I, 3-4

Ra vo benniget Doue, Tad hon Aotrou
Jezuz Krist, Tad an trugarezioù ha Doue pep frealzidi-
gezh, eñ hag a ro frealz fimp en hon holl drubuilhoù, evit ma c'hellimp ni
ivez, dre ar frealzidigezh a rosevomp hon-unan digant Doue, frealzif
ar re all o kement trubuilh m'en em gavont emañ.

Ra vo benniget anv an Aotrou, alleluia, alleluia!
V/ - Bremañ ha da viken, alleluia, alleluia!
V/ - Klod d'an Tad...

Kant. ar W. : Tridal a rin e Doue, va Salver ha va nerzh.

Aspedomp a galon izel an Tad hollc'halloudek da selaou
hor goulennoù ha lavaromp dezhañ:

R/ - Grit ma teuo ho Rouantelezh, Aotrou.

- Doue, mignon an dud, grit d'hoc'h Iliz embann ha degas d'ar bed-holl
an unaniezh, dezhi da vezañ sin a silvidigezh evit an holl bobloù. R/
- Kennerzhit er foiz, ar Pab hag an holl eskibion, roit dezho unander,
karantezh ha peoc'h. R/

Lun 1

- Ra vo unanet donoc'h ar Cristenion gant o Fenn santel, dezho
da embann dre desteni o buhez donedigezh ho Rouantelezh. R/
- Roit ar peoc'h d'an hollved, ma ren e pep lec'h ar justis
hag ar sioulded. R/
- D'an holl Anaon roit an adsav diwezhañ hoc'h eus prometet
dimp er C'hrist Jezuz. R/

Kempedenn ar sul (p. 105 ...)

Ra vo bennozh an Aotrou Doue warnomp
Ra vimp diwallet a bep droug
Ha kaset d'ar vuhez peurbadel. Amen.
Bennozh da Zoue.
Ganimp eo kanneulet.

LUN 1

OFIS AL LEHNADEMOU

Meulgan (p. 3)

S. 9 A Ant. I : Ur repu eo an Aotrou evit ar paour da goulz an anken.
- II : Embann a rin ho meuleudi ouzh dorioù kêr Sion.

S. 6 Ant. : Va salvit, Aotrou, en abeg d'ho trugarez.

V/ - Diskouezit din penaos mirout ho lozenn.
R/ - Ma talc'hin dezhi a holl galen.

OFIS AR BEURE

S. 94 R/ Deuit, youc'homp gant joa d'an Aotrou.

Meulgan

Heol o sevel
War an dud gourvezet er marv,
Deuet oc'h 'vit ma welo ar re na welont ket,
Ar gwoled 'roit d'an den dall,
Deuit Salver Jezuz!
Sklerijenn war ar bed;
Ma kanimp evit ho tistro.

R/ - Ra vo benniget en anv an Aotrou
an hini a zeu da salviñ o bobl.

Oan Pask karet,
Oan hag a salv eus an harlu,
Deuet oc'h evit daspreañ an defived kollet,
Ha paeañ 'rejoec'h priz ar gwad,
Deuit, Salver Jezuz!
Mesaer an dourioù bev;
Ma kanimp evit ho tistro. R/

Lun 1

S. 5 Ant. : Taolit evezh ouzh mouezh va galvadenn, o va Roue ha va Doue.
Kant. David I Kron 29, 10-13 : Hoc'h anv meurdeuzus a lidomp, o Doue.

Benniget oc'h, Aotrou, Doue Israel,
hon Tad, a-holl-viskoazh ha da virviken.
Deoc'h, Aotrou, meurdez ha galloud, hag enor, ha trec'h ha klod,
pep tra, en neñv ha war an douar, a zo deoc'h.
Deoc'h, Aotrou, ar rouantelezh, hag an uhelder a-us d'an holl,
pinvidigezh ha gloar a zeu diouzhoc'h.
C'hwi 'zo mestr war bep tra, en ho torn an norzh hag ar galloud,
en ho torn pep tra a vrasa hag a greñva.
Ha bremañ, hon Doue, setu m'ho trugarekaomp
hag e veulomp hoc'h anv meurdeuzus.

S. 28 Ant. : Azeulit an Aotrou en e balez santel.

Komz Doue 2 Tes 3, 10-13 Nep piv bennak na fell ket dezhañ
labourat, ne dle ket debriñ kenne-
beut-all. Hogen klevout a reomp lavarout ez eus en ho touez
hiniennoc'h a vev en diegi, hep ober netra met o firbouchal
bepred. Ar re-se, kemenn a reomp dezho hag e c'houlennomp
diganto, en anv an Aotrou Jezuz-Krist, labourat er soulder
evit debriñ ur bara o devo gonezet o-unan. Ha c'hwi, breudeur,
grit ar mad hep skuizhañ.

Aotrou, fiziañ a ran warnoc'h, grit ma klevin er beure ho karantez.

V/- Grit gouzout an hent da vont gantañ, rak davedoc'h e savan
va ene, grit ma klevin er beure ho karantez.

V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Zakaria a ziouganas en ur lavarout: ra vo benniget
an Aotrou Doue Israel.

Pedomp Doue an Tad hollchalloudek a selaou bepred gant
madelezh aspedenn e vugale ha bennigomp anezhañ:

R - C'hwi 'zo evidomp, Aotrou, buhez ha silvidigezh.

- Doue peurbadel hag hollc'halloudek, dre ar vadeziant hoc'h
eus roet dimp sklerijenn un heol nevez; grit ma lugernno an
deiz-mañ gant e sklaerder. R/

- Roit dimp ho Furnez peurbadel ha grit dezhi ambroug ha
skoazellañ hol labourioù. R/

- Teurvezit hor mirout hiziv glan a bep pec'hod, hag hor
pinvidikait gant ho kras. R/

- Bezit hor skoazell hag hon difenn; roit dimp an unaniezh
hag ar peoc'h. R/

Kempedenn

Ra zeuio ho kras, ni ho ped, Aotrou,
da awenañ hol labour ha d'e harpañ betek ar penn, evit ma
kemero ennoc'h o mammenn hon holl bedennoù hag oberennoù, ha
ma resevint diganoc'h o feuroberiadur.

Dre Jezuz-Krist, ho Mab hag hon
Aotrou a vev hag a ren Doue ganoc'h ha gant ar Spered
Glan, a-holl-viskoazh da virviken. Amen.

Lun 1

OFIS KREISTEIZ

Meulgan

Emañ an deiz e barr e skod, Mougit onnomp tan ar pec'hod
Leun eo an douar gant ho kload; Ha birvidigezh ar gonnar;
Hi hoc'h ador, Doue nerzhus Lakit onnomp ho karantez,
E-kreiz splannder ho sklerijenn. Ra zeuio ho peoc'h d'hon unañ.

Hor selaouit, Hollaralloudeg,
Dre Jezuz, ho Mab unganet,
A ren gant ar Spered Santel
A-holl-viskoazh da virviken.

S. 18 B Ant. : Lezenn an Aotrou a zo joa 'vit ar galon,
S. 7 sklerijenn evit an daoulagad.

Komz Doue Rm 13,8 Na vezit e dle e-koñver den ebet, nemet
e dle a gengarantez. Rak an hini a gar
e nesañ en deus gant-se kasot al lezenn da benn.

V/- Va fastor eo an Aotrou, n'eus tra ebet o vankout din.
R/- War bradoier leton glas am laka da c'hourvez.

Kempedenn

Mestr ar winionn hag an eost, c'hwi
hag a lodenna an tachennoù-labour hag
a ro ar gopr wirion, hor sikourit da zougen pouez an deiz hag
ar wrez hep risignal a-enep ho polontez. Dre Jezuz Krist ...

OFIS AN ABARDAEZ

Meulgan

R/ - Joa ha sklaerder
ar c'hloar beurbadel eus an Tad,
an Uhel-mourbet, ar Santel-mourbet,
o Jezuz Krist!

Tizhet ganimp penn an devezh, Dellezek oc'h da vout kanet,
E welomp ho sklaerder en abardaez En holl amzerioù gant mouzhiou
Hag o kanomp an Tad, ar Mab, Mab Doue hag a ro buhez: / Santel,
Ha Spered santel Doue. R/ Deoc'h e ro gloar an hollved. R/

S. 10 Ant. : An Aotrou a sell ouzh ar beerion.

S. 14 - : Lovenez d'ar c'halonoc'h a glask Doue.

Kant. Ef I, 3-10

Ra vo benniget Doue, Tad hon Aotrou Jezuz Krist,
er hag on deus hor benniget ha roet dimp pep bennozh speredel,
a holl viskoazh, er C'hrist.

R/ - Bennozh deoc'h-c'hwi, hon Tad
C'hwi hag hoc'h eus hon benniget er C'hrist.

Rak hon dibabet en deus ennañ a-ziarok krouidigezh ar bed,
da vezañ santel ha dinamm dirazañ, er garantez. R/

En ur rakdivizout diwar hor penn e vefemp advibion dezhañ dre Jezuz
Krist, setu petra eo bet plijet gantañ ober en e vadelezh. R/

Evit ma vefe kanneulet splannder ar c'hras en deus roet dimp on e
Vab muiañ-karet, hon eus ennañ, dre e wad, an daspren eus hor
sklavelezh, ar pardon eus hor pec'hodoù. R/

Lun 1
Meurzh 1

Sed aze pinvidigezh ar c'hras-se en deus an Tad skuilhet warnomp gant largetez, e pep furmez ha skiant, en ur ziskuliañ dimp mister e youl, ar mennad madelezhus-se en devoa rakdivizet ennañ e-unan. R/

Evit e gas da benn pa vefe deuet leunder an amzerioù, da lavarout eo, lakaat ar C'hrist da vezañ penn pep tra hag ennañ adunvaniñ kement a zo en neñv ha war an douar. R/

Komz Doue Kol I,9-11 Goulem a ran digant Doue ma vefot karget eus anaoudegezh e youl, e pep furmez ha skiant sperelel: deoc'h da ren ur vuhez dellezek eus an Aotrou ha blijout dezhañ e pep tra, dre zougen frouezh a bep seurt oberoù mat ha dre greskiñ en anaoudegezh Doue; ha kennerzh e pep doare gant ar galloud eus e c'hloar, ra vefot evit kacut pasianted ha dalc'hegezh e pep degouezh.

Me a fell din kanañ ho lezenn, en noz e kounac'ho'h anv.

V/- Ho pet soñj eus ho komz d'ho servijer, ma roas din esper, en noz...
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. : Va ene a gan braster an Aotrou,
Va sperelel a gav e levenez en Doue, va Salver.

Aspedomp a galon izel an Tad hollc'halloudek da selaou hor goulennoù ha lavaromp dezhañ:

R/- Benniget ho pobl, Aotrou.

- Salvit ho Pobl, Aotrou, ha benniget hoc'h herezh. R/
- Bodit en unaniez an holl dud a zoug an anv kristen evit ma kredio ar bed en Hini hoc'h eus kaset. R/
- Skuilhit ho kras war hor c'herent ha war hor mignoned; ra gavint ennoc'h o gwir evurusted. R/
- Diskouezit ho karantez d'ar re a zo war o zremenvan: ra verzo o daoulagad ho silvidigezh. R/
- Diskuilhit ho trugarez d'an holl dud tremenet: degemerit anezho en ho tiskuzh peurbadel. R/

Kempedenn Ra savo davedoc'h hor pedenn-abardaez, Aotrou,
Tad santel-meurbet, Doue hollc'halloudek ha
peurbadel; ra ziskenno warnomp ho pennozh evidomp gallout bezañ
salvet gant ho skoazell, a-vremañ ha da viken. Dre Jezus Krist...

=====

M E U R Z H 1

=====

OPIS AL LENNADEHNOU

- S. 9B Ant. I : Savit, Aotrou, savit ho torn, o Doue.
- II : Gwelout a rit, Aotrou, hor poan.
- S. 11 - : Komzoù an Aotrou a zo gwirion.

V/- Sturiañ a ra an dud izel er reizhder.
R/- Kelez a ra e hentoù d'ar beorion.

Meurzh 1

OPIS AR BEURE

S. 94 R/- Hon Roue eo an Aotrou: deuit, azeulomp anezhañ.

Meulgan Oan Pask karet,
Oan hag a salv eus an harlu,
Deuet oc'h evit dasprenañ an deñved kollet,
Ha paeañ 'rejooc'h priz ar gwad,
Deuit, Salver Jezuz!
Mesaer an dourioù bev:
Ma kanimp evit ho tistro.

R/- Ra vo benniget en anv an Aotrou
an hini a zeu da salviñ e bobl.

Kariad Doue,
Ennoc'h an Tad 'gav levenez,
Deuet oc'h evit badeziñ an den er marv,
Hag ar Yordan 'walc'has ho korf.
Deuit, Salver Jezuz:
Reizh ar Rouantelezh;
Ma kanimp evit ho tistro. R/

S. 23 Ant. : Homañ eo gouenn ar re ho klask, ar re a ya war-lerc'h ho tremm, Aotrou.

Kant. Tb 13, 1-10 : Kanneulit dre hoc'h oberoù, roue ar c'hantvedoù.

Benniget ra vo Doue, bev eo da viken
hag e rouantelezh en em led a rumm da rumm.
Kastizañ a ra ha trueziñ, kas a ra da zonder bro an Ankou,
hag adsevel eus bro ar gollidigezh, den ne ziflip diouzh e zorn.
Trugarekait anezhañ, mibion Israel, dirak ar baganed,
eñ eo en devoa hon dastrewet en o mesk, embannit eno e vraster.
Uhelveulit anezhañ dirak pep bev, rak eñ eo an Aotrou,
hag hon Doue, eñ eo hon Tad a rumm da rumm.
Ho kastizañ a ra en abeg d'ho pec'hedoù, c'hwi holl en deus truez ouzhoc'h
ho tastum a ra a-douez an holl bobloù ma oac'h eno dastrewet.
Maz addeuit davetañ a-holl-galon evit ober dirazañ ar wirionez,
neuze e tistroio davedoc'h ha ne guzho ket ouzhoc'h e zremm.
Ha bremañ arvestit ouzh ar pezh en deus graet evidoc'h,
trugarekait anezhañ a vouzho uhel, benniget Aotrou ar justis,
uhelveulit ar rous peurbad.
Ha me, e bro an harlu, a zo brud dezhañ,
hag e tisklerion e c'halloud hag e vraster d'ur bobl a bec'herion.
Addeuit, pec'herion, ha grit ar pezh a zo reizh dirazañ:
piv n'hen goar? ho karout a ra hag e ray deoc'h trugarez.
Da Roue an neñv e fell din kanañ va levenez,
ha tridal bemdez va buhez-pad.

S. 32 Ant. : Ouzh ar c'halonoù eus e tere ar veulouidi.

Komz Doue Rm 13,11-13 An eur eo bremañ evidoc'h d'en em denañ eus
ar c'housted; tostoc'h dimp emañ bremañ ar
silvidigezh eget pa 'z omp deuet d'ar feiz. An noz a zo aet war-raok;
emañ an deiz o testaat. Distalomp eta oberoù an deñvalijenn, ha
gwiskomp armoù ar sklerijenn. E-giz ma reer en deiz, en em renomp
evel ma tere.

Me a fell din kanañ ho nerzh ha kenyouc'hal er beure d'ho karantez.
V/- Ya, Doue a zo va c'hreñvlec'h, davedon e teu Doue va c'harantez,
V/- Klod d'an Tad ... ha kenyouc'hal e fell din er beure d'ho karantez

Kant. Zak.: Hor salvit, Aotrou, eus dorn hon holl enebourion.

Pedomp Doue an Tad holloc'halloudek a selaou bepred gant madelezh e vugale, ha bennigomp anezhañ:

R/- Hon Tad hag hon Doue.

- Aotrou Doue holloc'halloudek, dre ar vadeziant e kavomp perzh e belegiezh roueel Jezuz: grit dimp kinnig gantañ sakrifis ar veuleudi. R/
- Grit dimp kerzhout hiziv en ho pezañs, evit ma vimp parfet e pep tra. R/
- Da bep eur eus an deiz ra vo tu dimp d'ho pennigañ, ra vimp evidoc'h, dre gomz ha dre ober, ur gwir veuleudi. R/
- Grit na vimp hiziv evit den ebet un abeg a c'hlac'har, met ma roimp joa da gement den en em gavo ganimp. R/

Kempedenn

Aotrou hon Doue a ro dimp sklerijenn ar vuhez-mañ hag a ra dimp promesa ar sklerijenn beurbad, grit ma labou- rimp en doare ma vo mat hod-ha-hed an deiz-mañ, ha peogwir ho kemeromp evel sturier, grit dimp heuliañ gant ho kras ho kourc'hemennou. Dre Jezuz Krist ...

OPIS KREISTEIZ

Meulgan

Sed an amzer, Spered Santel,
Ma teuit er galon fidel,
A-unan gant an Tad, ar Mab,
Evit skuilhañ ho sklerijenn.

Ra vo hon teod hag hor c'halon,
Hon nerzh hag ivez hor buhez,
Holl entanet a garantez
Evit an holl dud a garit.

Hor selaouit, Holloc'halloudeg,
Dre Jezuz, ho Mab unganet,
A ren gant ar Spered Santel
A-holl-viskoazh da virviken.

S. 118, 1-8 Ant. : Evurus ar re a gerzh gant hent an Aotrou.
S. 12 ha 13

Komz Doue Jb 5, 17-18

Pegen evurus an den a vez kenteliet gant Doue! Bezit eta aketus da selaou kentel an Aotrou! Glozañ a ra ha louzaouñ a ra ar gouli, bloñsañ a ra, met e zacuarn a bare.

V/- Bezit va sikour, na zilezit ket ac'hanon.
R/- N'am dilezit ket, Doue, va silvidigezh.

Kempedenn

Hor selaouit, Doue hor Salver: grit ganimp diskibion ar sklerijenn hag oberourion ar wirionez; ha peogwir, o c'hene! diouzhoc'h, ez omp deuet da vezañ bugale ar sklerijenn, grit dimp gouzout reiñ testeni deoc'h dirak an dud.

Dre Jezuz Krist...

OPIS AN ABARDAEZ

Meulgan

- 1 - Doue 'reas d'ar bed tarzhañ Eus an noz er c'hentañ beure, E-kreiz hon noz e rit skediñ An anaoudegezh eus ho kloar.
- 2 - C'hwi hag a zo skeudenn ho Tad, Ha splanner e gened skedus, War ho tremm-c'hwi, o Jezuz Krist, E sked da viken joa ar bed.
- 3 - C'hwi 'zo hoc'h-unan ar sklaerded A luc'h e don ul lec'h teñval; C'hwi 'zo gouloù hor c'hammedoù E-kreiz un hent a deñvalded.
- 4 - Pa falla pep tra, e chomit, Pa steuz pep tra, divrall 'vezit Pa zeu an noz, splannañ a rit E-barzh kalon pep krouadur.
- 5 - Ha pa savo war an hollved An gouloù-deiz a zo o tont, C'hwi a reno er goaded-se Ma teuz diouti an deñvalded.

S. 19 Ant. : Youc'homp gant joa evit Doue hon silvidigezh.
S. 20 - : Diskouezet ho nerzh, Aotrou, hag e kanimp ho karded.
Kant. Disk. 4, 11; 5, 10. 12.

Dellezek oc'h, c'hwi, hon Aotrou hag hon Doue, da resev ar c'hlod, an enor hag ar galloud.

R/- Galloud, enor ha glear da Oan Doue.

Rak c'hwi eo hoc'h eus krouet pep tra, ha dre ho polontez int deuet da vezañ hag int bet krouet. R/

Dellezek oc'h, Aotrou, da resev al levr ha da derriñ e sielloù. R/

Dre maz oc'h bet lazhet ha m'hoc'h eus dasprenet ha gonezet da Zoue gant ho kwad, tud eus pep meuriad ha pep yezh ha pep pobl ha pep broad. R/

Dre m'hoc'h eus graet anezho d'hon Doue ur rouantelezh a veleion da vezañ rouaned war an douar. R/

Dellezek eo an Oan bet lazhet da resev ar galloud, ar binvidigezh, ar furnez, an nerzh, an enor, ar c'hloar, ar veuleudi. R/

Komz Doue I Yn 3, 1-2

Cwelit pebezh karantez en deus roet dimp an Tad, ma vezomp anvet bugale da Zoue, ha maz omp. Va re garet, bremañ dija ez omp bugale da Zoue, daoust ma n'eo ket bet diskouezet c'hoazh petra 'vimp. Met gouzout a reomp penaos, pa 'n em zis-kouezo, e vimp heñvel outañ dre ma welimp anezhañ evel m'emañ.

Ennoc'h emañ mammenn ar vuhez, dre ho sklaerded e welomp ar sklerijenn. V/- Aotrou, pegen priziuz ho karantez, dre ho sklaerded e welomp ar sklerijenn. V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Va spered a drid e Doue, va Salver.

Aspedomp a galon izel an Tad holloc'halloudek da selaou hor goulennoù ha lavaromp dezhañ:

R/- Lakit ennomp ho Spered, Aotrou.

- Roue ha Mestr ar broadoù, roit ho skoaz all d'ar pobloù ha d'an dud a c'houarn anezho, ma vint fidel d'ho lezenn ha ma klaskint ar mad en unaniezh. R/

Meurzh 1
Merc'her 1

- Roit d'ar yaouankizoù ar c'hras da seveniñ o mennadoù reizh, ha grit ma vint barrek d'anavezout ho kalvadenn en o buhez. R/

- Grit d'ar vugale kreskiñ davet o oad-gour ha ma kavint en o c'helennerion karantez ha dalc'husted. R/

- Deskit dimp, Aotrou, karout hon enebourion hag ober vad dezho a greiz kalon. R/

- Degemerit an Anacon en ho rouantelezh peurbad, e-lec'h ma 'z esperomp ren un deiz ganeoc'h. R/

Kempedenn

Doue a sklerijenna an noz hag a ra sklaerded goude an deñvalded, roit dimp ar c'hras da dremen an nozvezh-mañ pell diouzh ar sailhoù an enebour, ha da c'hellout arc'hoazh-vintin ho trugarekaat en ho pezañs. Dre J.K., ho Mab hag hon Aotrou.

=====

M E R C ' H E R 1

=====

OPIS AL LENNADENNOU

- S. 17 Ant. I : Ho karout a ran, Aotrou, va nerzh ha va silvidigezh.
- II : Va salvet en deus an Aotrou dre m'en deus va c'haret.
- III : Aotrou, va Doue, sklerijennañ a rit va noz.
V/- Estlammet e oant holl,
R/- Gant ar c'homzoù o tont eus genou Doue.

OPIS AR BEURE

S. 94 R/- An Aotrou en deus hon dieubet, deuit, azeulomp anezhañ.

Meulgan

Roc'hell nevez,
Ma teu diouti Stêr ar vuhez,
Deuet oc'h evit dourañ ar re a gred ennoc'h,
Hag ho kalon 'leziñ digor.
Deuit, Salver Jezus!
O Feunteun diheskus,
Ma kanimp evit ho tistro:
R/- Ra vo benniget en anv an Aotrou
an hini a zeu da salviñ e bobl.

Konbrenn a dan
War an dud o kerzhout en noz,
Deuet oc'h evit diskouez an hent davet Doue,
Ho kalvar a zigor an neñv.
Deuit, Salver Jezus!
C'hwi 'zo bezañs ho Tad,
Ma kanimp evit ho tistro: R/

S. 35 Ant. : Aotrou, betek an neñv e sav ho trugarez.

Kant. Ydt 16,13-17 : C'hwi, Aotrou, a zo bras ha didrec'hus eo ho nerzh.

Merc'her 1

Meulomp an Aotrou gant hor c'hantikoù,
Kanomp d'hon Doue ur c'han nevez.

C'hwi, Aotrou, a zo bras ha klodus,
Souezhus ho kalloud ha didrec'hus:
Ra servijo ac'hanoc'h hoc'h holl grouadurion.

P'hoc'h eus komzet, int deuet da vezañ,
P'hoc'h eus kaset ho Spered, eo bet savet an traoù,
N'eus den hag a zalc'he a-enep ho mouezh.

Ma vefe taolet-distaolet ar menezioù gant an doueroier diwar
o diazezoù,
Ha ma teuzfe dirazoc'h ar reier evl koar, e-keñver ar re a zouj
Ac'hanoc'h e vefec'h o'hoazh madelezhus.

Nebeut a dra eo ur sakrifis bennak a c'hwez vat,
Nebeutoc'h c'hoazh an holl lardoù losket evidoc'h,
Met an hini a zouj an Aotrou dalc'hmat a zo bras.

Gwa ar pobloù a ensav enep va fobl,
An Doue hollc'halloudek o c'hastizo da zeiz ar vamm,
Tan ha preñved a lak en o c'highad o falloni a ouelint da
Viken

S. 46 Ant. : Meulit Doue gant youc'hadegoù a levenez.

Komz Doue Tb 16-17, 19-20 Ar pezh na c'houlfes ket gouzav na ra da
zen. Eus da vara ro d'ar paour hag eus da
zilhad d'ar re noazh. Un ali digant an neb a zo fur a c'houlenni. E
pep amzer, bennig an Aotrou Doue, ha goulenn digantañ ma vo ees da
hentoù, ha ma raio berzh da holl wenedoù ha mennadoù.

Aotrou, selaouit va fedenn.
V/- Ra savo davedoc'h va galvadenn, selaouit va fedenn.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Er santelezh, servijomp an Aotrou.

Pedomp Doue an Tad hollc'halloudek a selaou bepred gant
madelezh aspedennoù e vugale, ha bennigomp anezhañ:
R/- Aotrou, diwallit ho vugale.

- Aotrou, grit dimp gouestlañ curioù kentañ an deiz en enor da
Jezus adsavet da vev, ha ma vo plijus d'ho taoulagad hol labour
en deiz-mañ. R/

- Roit dimp ar c'hras d'anavezout ho pezañs en hor breudeur,
ar re baour porgen hag ar reuzeudion. R/

- Gwarezit hon teod ouzh an droug, maz embanno hor genou ho
meuleudi. R/

- Hon harzit da rentañ an droug evit an droug hag hon renit
davet ar peoc'h gant an holl dud. R/

Kempedenn

Aotrou Jezus Krist, heol hag a sklerijenna pep den
o tont er bed-mañ, roit dimp ar c'hras d'ac'hañ dirazoc'h
hent ar justis hag ar peoc'h. C'hwi a vev hag a ren...

OPIS KRISTISTEIZ

Moulgan

Emañ an deiz e barr e sked,
Deun eo an douar gant ho kloar;
Hi hoc'h ador, Doue nerzhus,
E-kreiz splannder ho sklerijenn.
Mougit ennomp tan ar pec'hed,
Ha birvidigezh ar gonnar;
Lakit ennomp ho karantez,
Ra zeuy ho peoc'h d'hon unaniñ.

Merc'her 1

Hor selaouit, Hollo'halloudeg,
Dre Jezus ho Mab unganet,
A ren gant ar Spered Santel,
A-holl-viskoazh da virviken.

S. 118,9-16 Ant. : Bezit benniget, Aotrou, deskit din ho polontezioù.
S. 16

Komz Doue I P 1, 15-16 Evel maz eo santel an hini en deus ho kalvet, c'hwi ivez, klaskit bezañ santel en holl zoareoù ho puhez, hervez maz eo skrivet : Santel e vefot, dre maz on-me santel.

V/- Va fastor eo an Aotrou, n'eus tra ebet o vankout din.
R/- War bradeier leton glas an laka da c'hourvez.

Kempedenn Doue hollo'halloudek ha peurbadel, n'eus ennozh tra ebet amsklaer na teñval, kasit ho sklerijenn d'hor c'halenou; dre zegemer ho lezenn hag ho reolennoù e kerzhimp war hoc'h hent gant ur galon skañv. Dre Jezus Krist hon Aotrou.

OPIS AN ABARDAEZ

Meulgan

R/- Joa ha sklaerder
Ar c'hloar peurbadel eus an Tad,
An Uhel-mourbet, ar Santel-mourbet,
O Jezus Krist!

Tizhet ganimp penn an devezh, Dellezek oc'h da vout kanet,
E welomp ho sklaerder en abardaez En holl amzerioù gant mouezhioù Santel,
Hag e kanomp an Tad, ar Mab, Mab Doue hag a ro buhez:
Ha Spered Santel Doue. R/ Deoc'h e ro gloar an hollved. R/

S. 26 Ant. I : Va sklerijenn ha va silvidigezh eo an Aotrou.
II : Selaouit, Aotrou, va guldann, ho tremm eo a glaskan.

Kant. Kol I, 12-20 Ant. : Klod deoc'h, Aotrou, enor, galloud ha meurdez. Trugarekait Doue an Tad en deus ho laket barrek da gaout lod en herezh ar sent, er sklerijenn.

R/- Klod deoc'h, kentañ-ganet a-douez ar re varv.

Eñ hag en deus hon tennet eus galloud an deñvalijenn evit hon degas e Rouantelezh e Vab karet, hon eus ennañ an dasprenidigezh, ar pardon eus hor pec'hedoù. R/

Eñ eo skeudenn an Doue diwelus, ar c'hentañ-ganet a-raok pep krouadelezh, rak ennañ eo bet krouet kement tra 'zo en neivoù ha war an douar. R/

Kement a weler ha kement na weler ket, pep tra 'zo bet krouet drezañ hag evitañ. Eñ a zo a-raok pep tra, ha drezañ e talc'h pep tra da vezañ. R/

Hag Eñ ivez eo ar penn eus ar C'horf, da lavarout eo eus an Iliz. Eñ eo ar pennaeg anezhi, ar c'hentañ-ganet eus a-douez ar re varv, evit ma vefe dezhañ-eñ ar renk kentañ e pep doare. R/

Rak ennañ eo bet plijet gant Doue lakant pep lounder da chom ha drezañ adunvaniñ ar bed a-bezh evitañ e-unan. R/

En ur ober ar peoc'h dre wad e Groaz, adunvaniñ drezañ kement a zo war an douar kenkoulz ha kement a zo en neivoù. R/

Merc'her-Yaou 1

Komz Doue Jk 1,22-25

Deuit da vezañ oberourion ar Gouz, ha n'eo ket selaouerion hepken, ar pezh a vefe en em douellañ hoc'h-unan. Rak an neb a selaou ar gouz, kuit d'hec'h ober, hennezh a zo hañval ouzh un den a sellfe ouzh e zremm naturel en ur meleour, hag a yafe kuit goude bezañ en em sellet, oc'h ankouaat kerkent penaos e oa. Hogen an neb a sell gant evezh ouzh al Lezenn beurlvat a frankiz, hag a zalc'h dezhi, n'eo ket evel selaouer ankouaus, met evel oberer gwirion, hennezh a vo evurus dre ober diouti.

Da viken, Aotrou, ho komz digemm en neivoù.

V/- A rumm da rumm e chom ho kwirionez, digemm en neivoù.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar H. : An Aotrou en deus graet evidon traoù burzhudus, santel e anv.

Aspedomp a galon izel an Tad hollo'halloudek da selaou hor goulennoù ha lavaromp dezhañ:

R/- Skuilhit warnomp ho karantez, Aotrou.

- Ho pet soñj, Aotrou, eus hoc'h Iliz ha diwallit anezhi a bep droug; grit ma kresko en ho karantez. R/

- An holl bobloù d'anavezout ennozh an Doue gwirion, hag en Jezus Krist ar Salver hoc'h eus kaset dezho. R/

- Roit d'hor c'herent ho madelezh, ho pennozh hag ar vuhez peurbadel. R/

- Sellit ouzh ar re a c'houzañv poan gant labourioù start, divec'hiit anezho eus o samm ha grit ma vint enoret evel ma tere. R/

- Degemerit en ho trugarez ar re a zo marvet hiziv, maz antreint en ho Rouantelezh. R/

Kempedenn Chomit ganimp, Aotrou, rak diwezhat eo hag an deiz a zo war e ziskar. Tommit hor c'halenou war an hent evit ma kavimp ac'hanozh er Skiriturioù hag er bara lodennet. C'hwi a vev hag a ren...

Y A O U 1

OPIS AL LEMNADENNOU

S. 17 Ant. : IV : Ho komz, Aotrou, a ziwall an den fidel.
V : Ho torn dehou, Aotrou, a zo va skoazell.
VI : Bevet an Aotrou! Ra vo benniget Doue va Salver!
V/- Digorit va daoulagad d'ho purzhudoù.
R/- Ha da splannder ho Lezenn.

OPIS AR BEURE

S. 94 R/- Deuit holl d'an Aotrou, azeulomp hor Mestr.

Yaou 1

Meulgan

Pried real,
 Prometet da eured ar groaz,
 Deuet oc'h evit laouanaat bugale Doue,
 Hag e trojoc'h hon dour e gwin.
 Deuit, Salver Jezuz!
 Tener 'vit an douar,
 Ma kanimp evit ho tistro:

R/- Ra vo benniget en anv an Aotrou
 An hini a zeu da salviañ e bobl.

O Mab Doue,
 Ma tiskuih warnoc'h ar Spered,
 Deuet oc'h evel un tan a bulluc'h an holl draoù,
 Ennoc'h 'n em entan an hollved.
 Deuit, Salver Jezuz!
 Annezadur ar c'hloar,
 Ma kanimp evit ho tistro: R/

S. 56 Ant. : Ennoc'h, Aotrou, en em repu va ene.
 Kant. Jr 31,10-14 Ant. : Madoù a-builh evit va fobl, eme an Aotrou.

Selaouit, poblou, komz Doue,
 Kasit ar c'heloù d'an inizi pellañ ha lavarit :
 An hini en devoa stlabezet Israel a zastum anezhañ
 Hag a vesa anezhañ evel ur pastor e dropell.

Rak Doue en deus dasprenet Jakob,
 E saveteet eus dorn unan kreñvoc'h egetañ.
 Dont a reont en ur youc'hal war grec'henn Sion,
 O terezek etrezek madou Doue.

Etrezek ar gwinizh, ar fro, an eoul fresk,
 Menned an deñved hag ar saout.

Hag e vo o ene 'vel ul liorzh dourast-mat,
 Mui-ken ne vint damantet.

Neuze he devo levezet ar werc'hez o tañsal,
 Ar baotred yaouank hag ar gozhidi ivez.

Ganin e vo kemmet o c'hañv e joa,
 Frealzet ganin, laouenaet eus o zristidigezh.

Ene ar veleion a stambouc'hin gant druzoni,
 Ha va fobl he devo he gwalo'h a vadou, - diougan an Aotrou.

S. 47 Ant. : Doue a vod ac'hanomp en e di, an eurvad a ro d'e bobl.

Komz Doue Iz 66,1-2 Evel-hen e komz Doue: an neñv eo va zron
 hag an douar skabell va zroid! Petore ti
 a rofec'h din? Petore plas a vefe va chomadur? An holl draoù-mañ
 gant va dorn a zo bet graet hag holl int din, - diougan Doue. Ar
 re a sellan outo? Ar paour hag ar galon strafuilhet a zouj va
 c'homzou.

Va dasprenit, Aotrou, ho pet truez ouzhin.

V/- Va zroad a gerzh war an hent eoun, ho pet truez ouzhin.

V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Ra vo benniget an Aotrou, heol o sevel, sklerijenn eus an
 nec'h a zeu d'hon gwelademiñ.

Yaou 1

Pedomp Doue an Tad hollo'halloudek a selaou bepred gant
 madelezh aspedennoù e vugale, ha bennigomp anezhañ:

R/- Skuilhit warnomp ho sklerijenn hag ho kwirionez.

- Doue galloudus ha trugarezus, hor c'hrouet hag hon dasprenet hoc'h
 eus en ho Mab: eveshait hiziv ouzh hor mennadoù hag hon oberoù. R/
- Roit dimp pasianted e-keñver an holl, rak en hor c'heñver ez oc'h
 divuanek ha leun a drugarez. R/
- Ho sklerijenn da skediñ warnomp a-hed an devezh-mañ, ra sklerijen-
 no hent hor buhez. R/
- Ho peoc'h da virout hor c'halonoù hag hor speredoù: grit ma lako
 ac'hanomp da deurel evezh ouzh ar wirionez ha da c'hoantaat ar
 justis. R/

Kempedenn Doue hollo'halloudek ha peurbadel, c'hwi a zo
 sklerijenn an holl sklerijennoù hag an deiz
 didermen; adalek ar beure-mañ eus un deiz nevez ho pedomp :
 ra zeuio sklaerder ho pezañs, o skarzhañ kuit noz ar pec'hed,
 da sklerijennañ hor c'halonoù. Dre J.K.

OFIS KREISTEIZ

Meulgan

Sed an amzer, Spered Santel, Ma teuit er galon fidel, A-unan gant an Tad, ar Mab, Evit skuilhañ ho sklerijenn.	Ra vo hon teod hag hor c'halon, Hon nerzh hag ivez hor buhez, Holl entanet a garantez Evit an holl dud a garit.
---	--

Hor selaouit, Hollo'halloudeg,
 Dre Jezuz, ho Mab unganet,
 A ren gant ar Spered Santel,
 A-holl-viskoazh da virviken.

S. 118,17-24 Ant. : Va henchit, Aotrou, en ho kwirionez.

S. 24

Komz Doue Am 4,13

Eñ eo en deus stummet ar menezioù, krouet an
 avel, diskleriet d'an den e soñj. Ober a ra
 eus ar goulou-deiz teñvalijenn, hag e kerzh war grec'hioù an douar.
 Aotrou, Doue an hollved eo e anv.

V/- Bezit va skoazell, n'am dilezit ket.
 R/- N'am dilaoskit ket, Doue va silvidigezh.

Kempedenn

Aotrou, skuilhit ho sklerijenn en hor speredoù, evit
 ma vimp bepred fidel d'ho servijañ, peogwir eo c'hwi
 hoc'h eus hor c'hrouet en ho furnez, hag a ren ac'hanomp
 gant karantez. Dre Jezuz Krist.

OFIS AN ABARDAEZ

Meulgan

- | | |
|---|--|
| 1 - Doue 'reas d'ar bed tarzhañ
Eus an noz er c'hentañ beure,
E-kreiz hon noz e rit skediñ
An anaoudegezh eus ho kloar. | 3 - C'hwi 'zo hoc'h-unan ar sklaerded
A luc'h e don ul lec'h teñval;
C'hwi 'zo goulou hor c'hammedoù
E-kreiz un hent a deñvalded. |
| 2 - C'hwi hag a zo skeudenn ho Tad,
Ha splander e gened skedus,
War ho tremm-c'hwi, o Jezuz Krist,
E sked da viken joa ar bed. | 4 - Pa falla pep tra e chomit,
Pa steuz pep tra, divrall 'vezit,
Pa zeu an noz, splannañ a rit
E-barzh kalon pep krouadur. |

5 - Ha pa savo war an hollved
Ar goulou-deiz a zo o tont,
C'hwi a reno er geoded-se
Ha teuz diouti an deñvalded.

S. 29 Ant. : Aotrou, war-zu ennoc'h em eus kriet ha c'hwi, va Doue,
hoc'h eus va fareet.

S. 31 - : Evurus an hini a zo gwalc'het dezhañ e bec'hed.
Kant. Disk. 11, 17-18 ; 12, 10b-12b: Kemeret en deus war e anv e rouante-
lezh, an Aotrou Doue, mestr war bep tra.

Ho trugarekaat a reomp, Aotrou Doue, c'hwi an Hollc'halloudeg,
an hini a zo hag a oa, dre m'hoc'h eus kemeret 'n ho torn ho
kalloud bras evit ren da Roue.

R/- Ho trugarekaat a reomp, o Doue.

Ar broadoù a oa en em savet gant komnar, met setu deuet ho
komnar-c'hwi, ar c'houlz evit ar re varv da vezañ barmet, ar
c'houlz da reiñ o gopr d'ho servijerion, ar Brofeded, ar Sent,
hag ar re o deus douget hoc'h anv, ar re vihan hag ar re vras. R/

Bremañ eo deut da wir silvidigezh, nerzh, rouezezh hon Doue ha
galloud e Grist, rak silapet eo bet d'an traoñ tamaller hor
breudeur, an hini o zamalle dirak hon Doue deiz ha noz. R/

Int ivez o deus trec'het warmañ dre vad an Oan ha dre lavar o
zesteni: rak disprizet o deus o buhez betek mervel. En abeg da
se, bezit laouen, o Neñvoù, ha c'hwi ar re a chom enno. R/

Komz Doue 2 Kor 10, 17-18 An hini en em veul, ra 'n em veulo en
Aotrou. Rak n'eo ket an hini en em erbed
e-unan a vefe den aprouet e dalvoudegezh, met an hini a zo erbedet
gant an Aotrou.

Hon dasprenet hoc'h eus, Aotrou, gant priz ho kwad.

V/- Tud a bep gouenn, yezh, pobl, broad, gant priz ho kwad.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. : E garantez en em astenn war gement hini a zouj anezhañ.
Aspedomp a galon izel an Tad hollc'halloudek da selaou
hor goulennoù ha lavaromp dezhañ:

R/- Hon tennit davedoc'h, Aotrou.

- Doue a garantez, c'hwi hag hoc'h eus siellet un Englev peurbad
gant ho pobl, grit dimp kounaat ho purzhudoù. R/

- Grit d'hoc'h Iliz kreskiñ en ho karantez, ha mirit ho fideled
en umander ar Spered dre liamm ar peoc'h. R/

- Ra savo bepred keoded an douar hervez ho mennad, evit na labouro
ket en aner ar re a zo ouzh he sevel. R/

- Kasit mederion da eostifi, Aotrou, evit ma vo meulet hoc'h anv
e-touez an holl bobloù. R/

- Ra gavo lod en herezh ar sent hor c'herent hag hor madoberourion
tremenet, ha ma kavimp anezho un deiz en ho Rouantelezh. R/

Kempedenn Doue hag a ro an neñv en gopr d'ar re a gemer
predar gant servij ho meuleudi, hoc'h aspediñ
a reomp: lamit an deñvalijenn eus hor c'hallonoù, evit m'hor
bo ar joa d'arvestiñ dizehan ouzh ho sklerijenn.
Dre Jezuz Krist.

OFIS AL LENNADEMOU

S. 34 Ant. I : Savit, Aotrou, deuit d'am sikour!
- II : Va zennit, Aotrou, diouz ar gwall-reuz-se.
- III : A-hed an deiz ec'h adlavarin ho reizhder.

V/- An hini a zo ganet eus Doue
R/- A glev komzoù Doue.

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- Hiziv na serrit ket ho kalon, met selaouit mouezh an Aotrou.

Meulgan

1 - Splaender strinket eus kreiz Doue, 3 - E goueled hon noz e teuit,
Sklaerder ganet eus ar sklaerder, Evit an holl dud er bod-mañ,
A-raok m'eo ganet an hollved, C'hwi a zo mammenn a vuhez,
Splannañ a rit en deñvalded. Hag ar sklerijenn wirion.

2 - Ni hoc'h ador, Mab dreist-karet, 4 - Doc'hoc ar c'hloar, o Tad santel,
Termen a bep seurt azaouez, Evel d'ho Mab ar veuleudi,
An Tad hag en deus ho kaset, Gant ar Spered Glan frealzer,
Warnoc'h e ra d'e c'hvas renoz. Bepred, dre-holl ha da viken.

S. 50 Ant. : En ho madelezh, Aotrou, diverkit va fec'hed.
Kant. Iz 45, 15-26 Ant. : Holl ouenn Israel a gano ho meuleudi, Aotrou.

Ya, un Doue kuzhet oc'h,
Doue Israel, Salver.

Mezhok ha dismegañset ez int holl, ar re ho kasa,
Gant ar vevh ez aint kuit ar gizellerion idolemoù.

Israel a vo salvet gant Doue, salvet da viken,
Kuit a vezh hag a zismegañs, da viken.

Rak evel-se e komz an Aotrou, krouer an neñvoù,
Eñ eo an Doue en deus furmet an douar, hen graet, hen diazezet.
N'eo ket da vezañ mesk-divesk en deus e grouet, da gaut annezidi ez eo
bet stummet, ganin, an Aotrou, ha hini ebet ken.

N'eo ket e kuzh em eus komzet, en ul lec'h teñval eus an douar,
N'em eus ket lavaret da ouenn Jakob: va c'hlaskeit er reustil.

Me, an Aotrou, a gomz rik, a embann resis:
En em vodit, deuit nesoc'h, a-gevret, tec'hidi ar broioù.

Diskiant eo bet ar re o deus douget koad d'ober idoloù,
Ha pedet un doue na roe ket an trec'h.

Diskleriit, tostait, kuzuliit a-gevret,
Piv en doa roet se da glevout diagent? pell-zo, hen diskleriet?

Ma n'eo ket me, an Aotrou, pa n'eus ket doaeed all estrogedon
Evit un den reizh, nag a salver kennebeut.

En em droit davedon hag e trec'hfet, holl dibennoù an douar,
Rak me 'zo Doue, ha hini all ebet ken, drezon hen touan.

Eus va genou e teu gwirionez, komzoù ha na vint ket adlavaret,
dirazon e plego pep glin, drezon e touo pep teod.

Gwener 1

Diouzhin e vo lavaret: en Doue hepken ar wirionez hag ar galloud, ha betek ennañ eo ret mont, mezh o deus bet ar re a oa entanet a-enep dezhañ, en Doue en em reishaio hag en em veulo holl vugale Israel.

S. 99 Ant. : Tud an hollved, karneulit Doue, kanit d'an Aotrou.

Komz Doue 2 Kor 13,4 Staget eo bet moarvat ouzh ar groaz en e sempladurezh, met bev ez eo dre c'halloud

Doue. Mi ivez, en hevelep doare, hon eus sempladurezh ennañ, met bev e vezimp a-gevret gantañ dre c'halloud Doue, en hon doare d'en em ren en ho keñver.

O Krist, Mab an Doue bev, ho pet truez ouzhimp.

V/- C'hwi azezet e tu dehou d'an Tad, ho pet truez ouzhimp.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Dre garantez kalon Doue, sklerijenn an heol o sevel a zeu d'hon gweladenn.

Pedomp Doue an Tad hollc'halloudek a selacu bepred gant madelezh aspedennoù e vugale, ha bennigomp anezhañ:

R/- Klod deoc'h er c'hantvedoù.

- C'hwi hor c'hrouer hag hon Tad, roit dimp hiziv ar c'hras da labourat evit ho kloar, evel Jezuz Krist ho Mab. R/

- Grit dimp Klevout ho garantez adalek ar beure; ra vezo ho levenez un nerzh evidomp en deiz-mañ betek an noz. R/

- Diskouezet dimp ho tramm evel ur sin a eurvad hag a beoc'h, hor gwarezit gant ho torn hollc'halloudek. R/

- Sellit gant madelezh ar re o deus fiziañs en hor pedenn, leuniet anezho gant madoù an ene hag ar c'horf. R/

Kempedenn

Aotrou Doue, Tad santel-meurbet, fellet ez eus bet deoc'h e vefe ho Mab gwerzh-daspen evit hon silvidigezh; grit dimp bevañ gantañ en doare m'hor bo tu, dre c'houzañv gantañ, da santout ivez enomp nerzh e adsav d'ar vuhez. Eñ a vev hag a ren...

OPIS KREISTEIZ

Meulgan

Ennañ an deiz e barr e sked, Mougit enomp tan ar pec'hed,
Leun eo an douar gant ho kloar; Ha birvidigezh ar gonnar;
Mi hoc'h ador, Doue nerzhus, Lakit enomp ho garantez,
E-kreiz splannder ho sklerijenn. Ra zeuy ho peoc'h d'hon unanif.

Hor selacuit, Hollc'halloudeg,
Dre Jezuz ho Mab unganet,
A ren gant ar Spered Santel,
A-holl-viskoazh da virviken.

S. 118,25-32 Ant. : Deskit din, Aotrou, ober ho polontez.
S. 25 ha 27

Komz Doue Kol 3,12-13

C'hwi eta, dibabidi Doue, e sent hag e dud karet, lakit ennoc'h soñjoù a drugarez, a vadelezh, a izelegezh, a zouster, a basianted. En em c'houzañvit an eil egile. Pardonit an eil d'egile mar on deus unan bennak tro da glemm eus unan all. Evel m'en deus an Aotrou pardonet deoc'h, evel-se pardonit c'hwi ivez.

Gwener 1

V/- Pardonit, Aotrou, va fec'hedoù kuzhet.
R/- Ma n'en devo ket an droug krog warnon.

Kempedenn

O Krist, c'hwi a zo azeulet en neñv ha war an douar, e pep mare hag e pep eur; c'hwi a zo pasianted, trugarez ha kendruer; karout a rit an dud just, trueziñ ouzh ar bec'herion, gervel an holl d'ar silvidigezh, prometif dezho ar madoù da zont; degemerit hor pedennoù e kreiz an devezh-mañ ha lakit hor buhez da glotañ ouzh ho polontez, santelait hon eneoù hag hor c'horfoù, reizhit hor soñjoù hag hol lakit da drec'hiñ war ar reuz hag an dristidigezh, hor gwarezit hag hor bonnigat, dimp da dizhout unander ar feiz hag anaoudegezh ho kloar, c'hwi a ren gant an Tad hag ar Spered Santel, bremañ hag er c'hantvedoù.

OPIS AN ABARDAEZ

Meulgan

R/- Joa ha sklaerder
Ar c'hloar peurbadel eus an Tad
An Uhel-mourbet, ar Santel-meurbet,
O Jezuz Krist!

Tizhet ganimp penn an devezh, Dellezek oc'h da vout kanet,
E welomp ho sklerder en abardaez En holl amzerioù gant mouezhioù santel,
Hag e kanomp an Tad, ar Mab, Mab Doue hag a ro buhez:
Ha Spered Santel Doue. R/ Deoc'h e ro gloar an hollved. R/

S. 40 Ant. : Evurus ar re a oar kendrueriz, kaout a raint trugarez.
S. 45 - : Ma vez Doue evidomp, piv a vo enep dimp?
Doue eo a zidamall, piv a c'hellfe kondaonif?

Kant. Disk. 15,3-4 Bras hag estlamus eo hoc'h oberoù, Aotrou Doue,
Mastr ar bed, reizh ha gwirion eo hoc'h hentoù,
Roue ar broadoù.

R/-Bras eo hoc'h oberoù, Aotrou.

Piv na rofe, Aotrou, doujañs ha klod d'hoc'h anv? R/

Hag an holl vroadoù a zeuio da stouñ d'an daoulin dirazoc'h,
dre maz eo 'n em ziskouezet reizhder ho pamedigezhioù. R/

Komz Doue Rm 15,1-3

An dever hon eus, ni ar re nerzhus, da skoazel-lañ sempladurezh ar re wan ha n'eo ket da glask ar pezh a blij dimp. Pep unan ac'hanomp ra blijjo d'e nesañ gant e c'hoant d'ober ar mad ha da uhelaat anezho. Rak ar C'hrist e-unan n'en deus ket klasket ar pezh a blijjo dezhañ, hogen evel maz eo skrivet: dismegañsoù da zismegañserion a zo kouezet warnon.

Etre ho taouarn, Aotrou, e lakan va spered.
V/- C'hwi eo hoc'h eus hon dasprenet, Aotrou, Doue a wirionez. Etre ho taouarn...
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. : Diskouezet, Aotrou, nerzh ho praec'h, stlabezit an dud lorc'hus, uhelaat ar re izel.

Aspedomp a galon izel an Tad hollc'halloudek da selacu hor goulennoù, ha lavaromp dezhañ:

R/- En ho truez, ho pet soñj ac'hanomp.

- Aotrou, Tad leun a drugarez, ho pedif a reomp evit ar re a c'houzañv en hoc'h Iliz, ma kinnigas ar Penn anezhi eviti war ar groaz sakrifis an abardaez. R/

Gwener - Sadorn 1

- Dieubit ar brizonidi, sklerijennit ar re dall, gweladennit an in-tañvez hag an emzivad, roit dimp ar soursi eus an dud reuzeduk. R/
- Roit d'ho pugale an nerzh ret evit herzel ouzstignoù an hini drouk. R/
- Deuit d'hor sikour pa zeuio eur hor marv, hon dalo'hit fidel ha grit dimp kuitaat ar bed-mañ er peoc'h. R/
- Renit an Anaon betek sklerijenn ho chomadur, evit ma c'hellint ho kwelout da virviken. R/

Kempedenn Peogwir en em ziskouez, Aotrou, ho furnez dreist-lavar, en un doare eston e drouk-skouer ar groaz, grit dimp gouzout arvestiñ ouzh ar c'hloar e Pasion ho Mab, evit ma lakimp en e groaz hon esperañs hag hol lorc'hentez. Dre Jezus K.

=====

S A D O R N 1

=====

OPIS AL LENNADENNOU

A - Amzer voutin

- S. 130 Ant. : An neb en em raio bihan evel ur bugel, hennezh a vo ar brasañ e rouantelezh an neñvoù.
- S. 131 - I : Gant ur galon eem ha laouen, Aotrou, em eus roet pep tra.
- II : Doue a roio dezhañ tron David hag e rouantelezh a vo didermen.
V/- Deuit ha gwelit oberoù an Aotrou Doue.
R/- War an douar e ra burzhudoù.

B - Amzer divoutin

- S. 104 Ant. I: Kanit d'an Aotrou, embannit e-touez ar pobloù e daolioù-kaer.
- III : An Aotrou en deus roet frankiz d'e bobl, levenez ha youc'hadegoù a joa evit e zibabidi.
- II : Doue a liesas e bobl hag a roas dezho nerzh dirak o enebourion.
V/- ha R/- uheloc'h.

OPIS AR BEURE

S. 94 R/- Gant son ar joa hag ar fest, deomp d'ambroug an Aotrou.

Moulgan

- | | |
|---|--|
| <p>1 - O Mab unganet, Jezus Krist,
War ho tremm-c'hwi oc'h arvestomp
Ar c'hloar ma lugernit ganti
E-tal Doue, kont an amzer.</p> <p>2 - Ar bed-mañ n'hoc'h anavez ket
An deñvalded ho tiarbonn:
D'ar re o deus ho resevet,
Roit dezho perzh en e leunder.</p> | <p>3 - C'hwi a zo o chom en hon touez,
O Verbleun eus an holl c'hrasoù,
Keleñnit dimp ar wirionez,
Hon treuzfurmit en ho skeudenn.</p> <p>4 - Deoc'h eo ar c'hloar, o Tad santel,
Evel d'ar Mab ar vouldi,
Gant ar Spered Glan frealzer,
Bepred, dre-holl ha da viken.</p> |
|---|--|

S. 118, 145-152 Ant. : A-ziaroak goulou-deiz ez an hag azgoulenn a ran, en ho komz, Aotrou, e lakan va fiziañs.

Kant. Erm 15 Ant. : Kanomp d'an Aotrou: dreist eo e drec'h.

Ez an da ganañ d'an Aotrou: dreist eo e drec'h,
Marc'h ha marc'hegor, stlapet er mor.

Va nerzh, va c'hantik, bet eo va salver,
Eñ eo va Doue hag hen brudan, Doue va Zad, hag hon uhelveulan;
Doue a zo ur brezelour: e anv eo an Aotrou.

Kirri Farao hag e armead en deus eilpennet er mor,
An dibab eus eskouderion a zo bet bezet e Mor ar C'horz,
An islonk a c'holo anezho, diskennet inter goueled, evel maen.

Ho torn dehou, Aotrou, en deus noblañs ar galloud,
Ho torn dehou, Aotrou, a blad an enebour,
Gant kalz a c'hloar hoc'h eus dispennet ar re 'n em save ouzhoc'h.

Ouzh c'hwezh ho tifronell eo bet bennet an doureier,
Ez eo manet en ur bern ar froudol,
Ez eo bet skornet an islonkoù e kalon ar mor.

Lavarout a rae an enebour: ez an da c'haloupat, da dizhout anezho,
Da lodennañ ar preizh, peurlen o vo ganto va ene,
Dic'houinañ a rin va c'hloze, o dibere'hennañ a ray va dom.

Kaset ho kwrez en deus kuzumet anezho evel plouz,
Dianalet hoc'h eus hoc'h avel, o goloet en deus ar mor,
D'ar goueled eo act, evel plom en dour, o noblañs.

Piv a zo evel doc'h, Aotrou, e-touez an doueed?
Piv evel doc'h e noblañs, e santelezh?
Ken spontus en taolioù-kaer, oc'h ober burzhudoù?

Astenn a rit ho torn, o lonkañ a ra an douar,
Eleniañ a rit gant ho kras ar bobl hoc'h eus voñjet,
He sturiañ a rit gant ho nerzh d'ho chomlec'h santel.

O c'has a rit hag o flantañ war verez hoc'h herezh,
E-lec'h ma chomit evel mestr,
Santual an Aotrou, a grouas ho taouarn.
Ra vo an Aotrou Roue da virviken!

S. 116 Ant. : Pobloù an douar, meulit an Aotrou.

Komz Doue 2 Kor 13,11 Broudeur, bezit laouen, labourit d'ho santel-
idigezh, en em frealzit an eil egile, bezit
unan a spered, bevit er peoc'h, ha Doue ar garantez hag ar peoc'h a
vozo ganeoc'h.

Youc'hit gant joa evit Doue hon nerzh.

V/- Kanmeulit Doue Jakob, youc'hit gant joa evit Doue hon nerzh.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Renit hor c'hammedoù, Aotrou, war hent ar peoc'h.

Pedomp Doue an Tad hollec'halloudek a selaou bepred gant
madelezh aspedennoù e vugale, ha bennigomp anezhañ:

R/- Ho pet truez ouzh ho pobl.

- Doue krouer an holl draoù, andon pep pinvidigezh, deoc'h en em ginnigomp, ni hag hor madoù: degemerit anezho. R/
- Adalek ar mintin hor sklerijennit gant bannoù ar C'hrist, Hool o sevel, distrujit ennomp pep santad direizh. R/
- Beilhit war hor soñjoù, hor c'homzoù hag hon oberoù, ma ne vo netra hiziv o tisplijout deoc'h. R/

Sadorn 1 - Ho pedif a reomp evit ar re a zarempredimp en deiz-mañ, skulhit ho pennozh warno ha war o ziegezhioù. R/

Kempedenn Hor muzelloù, hon ens hag hor buhez a-bezh da embann ho meuleudi, Aotrou; ha peogwir ez omp a-grenn un donezon eus ho kras, grit ma vezo gouestlet deoc'h hor buhez a-bezh. Dre Jezuz Krist.

Meulgan O C'hwi a chom bepred digenn, Mestr an amzer, Doue fidel, An deiz a deuz, an noz a zeu; Hon mirit dindan ho kwarez.

OFIS KREISTEIZ

Roit dimp ar vuhez didermen, Hag ar gozhni hep teñvalded; Grit ma paro warnomp erfin Ho kloar da zevvezh ho tistro.

Hor selaouit, Holle'halloudeg, Dre Jezuz ho Mab unganet, A ren gant ar Spered Santel A viskoazh hag er c'hantvedoù.

S. 118, 33-40 Ant. : Va renit, Aotrou, war hent ho lezenn. S. 33

Komz Doue 1 R 8, 60-61 Holl bobloù an douar a c'hoarvez eo an Aotrou a zo Doue nemetañ, ha n'eus ket hini all ebet, hag e vo hor c'halon a-grenn gant Doue, hon Aotrou, o kerzhout en e reolioù hag o virout e c'hourc'hemennoù.

V/- Va fastor eo an Aotrou, n'eus tra ebet o vankout din. R/- War bradeier leton glas am laka da c'hourvez.

Kempedenn Hor selaouit, Aotrou, ha roit dimp ar peoc'h didrouz a c'houlenomp diganeoc'h, - e-giz-se, o Klask ac'hanoc'h bemdez hor buhez-pad, ha skoazellet gant pedenn ar Wer-c'hez Vari, en em gavimp hep skoilh betek enno'h. Dre Jezuz K.

OFIS AN ABARDAEZ

Meulgan R/- Joa ha sklêrder Ar c'hloar beurbadel eus an Tad, An Uhel-neurbet, ar Santel-neurbet, O Jezuz Krist!

Tizhet ganimp penn an devezh, Dellezek oc'h da vout kanet, E welomp ho sklêrder en abardaez, En holl amzerioù gant mouezhioù santel, Hag e kanomp an Tad, ar Mab, Mab Doue hag a ro buhez; Ha Spered Santel Doue. R/ Deoc'h e ro gloar an hollved. R/

S. 118, 105-112 Ant. : Ur c'houlaouenn evit va freid, ho komz, ur sklerijenn war va hent.

S. 15 Ant. : Hent ar vuhez a zeskfot din, dirak ho tremm, eurvad peurbadel.

Kant. Fil 2, 6-11 Jezuz, hag a oa Doue a stumm Ne sellas ket evel e dra Chom en e renk, par da Zoue.

R/- Jezuz Krist eo an Aotrou Evit gloar Doue an Tad.

Met da netra eo 'n em lakot, Dre gomer stumm ar servijer, Ha dont da vezañ 'giz an dud. R/

Goude 'n em ziskouez 'vel un den, En deus c'hoazh en em izelaet, Dre sentiñ betek ar marv, Betek ar marv war ur groaz. R/

Setu perak en deus Doue Uhel-savet anezhañ, Ha roet dezhañ un anv A zo a-us da bep anv. R/

Ma vo pep glin, en anv Jezuz, O plegañ e lein an neñvoù, War an douar hag e bed an Ankou.

Evit ma tisklerio pep teod Eo Jezuz Krist eo an Aotrou Evit gloar Doue an Tad.

Komz Doue Kol 1, 3-6

Gras deoc'h ha peoc'h digant Doue hon Tad. Trugarekaat a reomp dibaoez, Doue, Tad hon Aotrou Jezuz Krist, er pedennoc'h a reomp evidoc'h, abaoe m'hon eus klevet keloù eus ho Feiz er C'hrist Jezuz, hag eus ar garantez hoc'h eus e-keñver an holl Sent, en abeg d'an esperañs miret deoc'h en neñvoù. An esperañs-se, hoc'h eus klevet diagent ar c'heloù anezhi er Gomz a wirionez, an Aviel, a zo set betek enno'h evel ivez dre ar bed a-bezh, e-lec'h m'emañ o tougen frouezh hag o kreskiñ.

Ennoc'h, Aotrou, va esperañs, Warnon mezh ebet da viken.

V/- En ho reizhder, va difennit ha va dieubit! Warnon mezh ebet da viken.

V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. Ant. : Va ene a ganseul an Aotrou, uhelaat 'ra an dud izel.

Aspedomp a galon izel an Tad holle'halloudek da selaou hor goulennoù ha lavaromp dezhañ:

R/- Ho pet soñj, Aotrou, eus hoc'h emglev.

- Tad holle'halloudek, grit d'ho justis dont war an douar, hag ho pobl a ziskuiho er peoc'h. R/

- Grit d'an holl bobloù errucut en ho rouantelezh, hag Israel a vo saveteet. R/

- Ra chom ar priedoù en ho polentez hag en ho peoc'h: ma virint bepred etrezo ar garantez wirion. R/

- Goprait ar re a gar ac'hanomp ha bennigit hon enebourion; d'an holl roit ar vuhez peurbadel. R/

- Sellit gant madolezh ar re a zo marv, muntridi ar gasoni, ar feulster pe ar brezel; degemerit anezho en diskuizh peurbadel. R/

Kempedenn ar Sul

ooooo
o o o o o
o o o o o
o o o o o
ooooo

- Grit dimp bezaf, dre hor c'homzoù hag hor skourioù, holan an douar ha sklerijenn ar bed. R/
- Ra vo gras ho Spered en hor c'halon ha war hor muzelloù, evit ma chomimp en ho karantez. R/

Kempedenn

Aotrou Doue hon Tad, dre ho furnez eo ez omp bat krouat, ha gant ho ragaovezh ez omp ranet; en ho madalezh, taurvezit e-dal ar boure, skuilh ho sklerijenn en hor c'halonou, evit ma vimp bepred stag ouzhoc'h ha gouestlet deoc'h ez-leal. Dre Jezuz Krist...

OFIS KREISTEIZ

Meulgan

Emañ an deiz e barr e sked, Leun eo an douar gant ho kloar; Ni hac'h ador, Doue noarzhus, E-kreiz splandder ho sklerijenn.	Mougit ennomp tan ar pec'hed, Ha birvidigezh ar gonner; Lakit ennomp ho karantez, Ra zeuy ho peoc'h d'hon unanif.
Hor selaouit, Helle'halloudeg, Dre Jezuz, ho Mab unganet, A ren gant ar Spered Santel, A-holl-viskoazh da virviken.	

S. 116, 57 - 64 Ant. : Disammit ho pec'h war an Aotrou hag eñ ho herpo.

S. 54

Komz Doue Adl I, 16 - 17

Hag e rois uzeh d'ho parnerion er mare-se : Selaouit pa sav bec'h etre ho proudeur ha barnit rik etre un den hag e vreur pe un estrafjour. Na sellit ket ouzh an dremmoù pa varnit : an hini bihan kenkoulz hag an hini bras a selaoufet. N'ho pat ket aon rak den : ar varn a zo d'an Aotrou.

- V/- Pardonit din, Aotrou, va mankoù kuzhet.
- R/- Ma 'n devo ket an droug krog warnon.

Kempedenn

Doue helle'halloudek ha peurbadel.... p. 41

OFIS AL LENNADENNOU

- S. 103 Ant. I: Aotrou, va Doue, na bras oc'h-c'hwil!
 - II: Gant frouezh hoc'h oberoù, Aotrou, e vez leuniet an douar.
 - III: Doue a sellas ouzhe labourhag e welas e oa nat pep tra.
 V/- Evurus an daoulaged a wel ar pezh a welit.
 R/- Hag an divskouarn a glev ar pezh a glevit.

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- Pobl dibabet gant Doue, deuit d'azeulif ho Mestr hag ho Pastor.

Meulgan

Doue a ren! Pobloù, youc'hit gant levenez, alleluia!
 Ar vuhez he deus trec'het war ar marv,
 Ar groaz he deus trec'het war an ifern!
 R/- Alleluia! alleluia! alleluia! Aotrou, meuleudi deoc'h!
 Setu deiz an Aotrou, deiz a levenez, alleluia!
 Ar vuhez he deus trec'het war ar marv,
 Ar groaz he deus trec'het war an ifern! R/
 Setu ar burzhud en deus graet an Aotrou evidomp,
 Ra vo benniget e anv, alleluia!
 Krist Jezuz, karantez-veur ar bed! R/

S. 117 Ant. : Setu an deiz a reas an Aotrou, alleluia!

Kant. Dn

- 3, 52-57 Ant. : Kanneulomp an Aotrou, bennigomp Doue da viken.
 Bennigomp deoc'h, Aotrou, Doue hon Tadoù.
 R/- Deoc'h meuleudi ha gloar da virviken.
 Ra vezo benniget hoc'h anv gloriüs ha santel. R/- Dezhañ...
 Benniget oc'h en ho Templ santel ha gloriüs. R/- Deoc'h...
 Benniget oc'h war ho kador a Roue. R/- Deoc'h...
 Benniget oc'h, c'hwil hag a wel an islonkoù. R/- Deoc'h...
 C'hwil hag a dron a-us d'ar Gerubined. R/- Deoc'h...
 Benniget oc'h en neñv hag en oabl. R/- Deoc'h...
 C'hwil holl oberoù an Aotrou, benniget an Aotrou. R/- Dezhañ...

S. 150 Ant. : Kement a zo buhez emañ da veulo an Aotrou!

Komz Doue

Ez 36, 25-27 Me a sparfo warnoc'h dour glan hag e vefot glanaset. Eus hoc'h holl saotradurioù hag hoc'h holl idolennoù e c'hlanain ac'hanoc'h. Hag e roin deoc'h ur galon nevez, ur spered nevez a lakin ennoc'h. Lemel a rin ar galon vaen eus ho korf hag e roin deoc'h ur galon gig. Va spered a lakin en ho kreiz, hag e rin deoc'h kerzhout em reolennoù ha mirout va gourc'hemmennoù ha heuliañ anezho.

- Karantez an Aotrou da viken a ganmeulin.
- V/- A rumm da rumm e anv da viken a ganmeulin.
- V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.

: Kemeret en deus an Aotrou en e zalc'h e rouantelezh, bezomp el levenez hag er joa.
 Pedomp hor Salver a ro e sklerijenn da bep den er bed-mañ ha lavaromp gant feiz:

Sul 2

R/- Gweladennit ho pobl, Aotrou.

- Aotrou Jezuz Krist, Sklerijenn ganet eus ar Sklerijenn, preveudi an dasorc'hidigezh o tonet, renit hon esperañs hag hor buhez davet an Tad. R/
- Hor blegnit en deiz-mañ gant ho Furmez, maz aimp war-raok en ur vuhez nevez. R/
- N'hol lezit ket da vezañ trec'het gant an droug, met deskit dimp trec'hiñ war an droug dre ar mad. R/
- Hor c'homzoù hag hon oberoù d'embann ho meuleudi, ma vo ennoc'h joa hor c'halon. R/

Kempedenn ar Sul (P. 105...)

OPIS KREISTEIZ

Meulgan Sed an amser, Spered Santel, Ra vo hon teod hag hor c'halon,
 Ma touit er galon fidel, Hon nerzh hag ivez hor buhez,
 A-unan gant an Tad, ar Mab, Holl ontanet a garantez
 Evit skuilhañ ho sklerijenn. Evit an holl dud a garit.

Hor selaouit, Hollc'halloudeg,
 Dre Jezuz, ho Mab unganet,
 A ren gant ar Spered Santel,
 A-holl-viskoazh da virviken.

S. 22 Ant. : Hor renit, Aotrou, da andeniou ar vuhez.

S. 75

Komz Doue 2 Kor 1, 21-22 Eñ, Doue, hag a ro dimp a-gevret ganeoc'h,
 kaout kennerzh er C'hrist ha bezañ sakret
 ennañ, eñ ivez eo an hini en deus hor merket gant e siell en ur reiñ
 dimp en hor c'halonoh, evel arrez, ar Spered.

V/- Youc'hit da Zoue, douar a-bezh.
 R/- Kaniñ da c'hloar e anv.

Kempedenn ar Sul (P. 105 ...)

OPIS AN ABARDAEZ

Meulgan R/- Trec'h oc'h bet, Aotrou, war ar marv
 Ha graet hoc'h eus d'ar vuhez skediñ
 Er beurbadelezh.

Adsavet eo ar C'hrist a-douez ar re varv, Adsavet eo ar C'hrist a-douez ar re varv,
 Preveudi ar re a zo chomet kousket. Ha lonket eo bet ar marv gant ar vuhez!
 Trec'h eo ar vuhez war ar marv. R/ Emen, o marv, emañ da drec'h? R/

Adsavet eo ar C'hrist a-douez ar re varv,
 D'an Doue Salver rentomp gras da viken
 -En anv an Aotrou Jezuz Krist. R/

S. 109 Ant. : Diougan an Aotrou d'am Aotrou: Azez a-zehou din.

S. 113 B - : Hon Doue-ni, en neñv ha war an douar, kement a fell dezhañ hen seveniñ a ra.

Kant. Disk. 19, 1b.2a.5b.6b.7 Ant. : Alleluia! Antrec'h, ar c'hloar, ar
 galloud d'hon Doue, alleluia! Ren a ra er
 c'hantvedoh.

R/- Alleluia! alleluia!

Ar silvidigezh, ar galloud, ar c'hloar, ar veuleudi d'hon Doue,
 alleluia. Gwirion ha reizh e varmedigezhioù. R/

Sul - Lun 2

Meulit hon Doue, servijerion an Aotrou, alleluia!
 C'hwi holl hag a zouj anezhañ, bihan ha bras. R/

Setu ma ren evel roue, an Aotrou hon Doue, mestr ar bed, alleluia!
 Bezomp laouen ha tridomp, roomp glear dezhañ. R/

Rak setu deuet eured an Can, alleluia!
 Hag e bried a zo en em gempennet. R/

Komz Doue Ef 1, 3-4 Ra vo benniget Doue, Tad hon Aotrou Jezuz Krist,
 eñ hag en deus hor benniget ha roet dimp pep
 bennozh speredel, a-holl-viskoazh, er C'hrist. Rak hon ditabet en deus
 emañ a-ziarok krouidigezh ar bed, da vezañ santel ha dinamm dirazañ,
 er garantez.

Ra vo benniget anv an Aotrou, alleluia, alleluia!
 V/- Bremañ ha da holl viken, alleluia, alleluia!
 V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar M.: Kan ha trid, pobl Doue, rak setu ma teuan da chomen da greiz.

Pedomp hor Salver a ro e sklerijenn da bep den er bed-mañ
 ha lavaromp gant feiz:

R/- Deuit da sikour ho pobl, Aotrou.

- Jezuz, Heol hor buhez, tra ma tiskenn ar sklerijenn ho pedomp evit an holl dud, ma kavint dudi dizehan gant ho sklerijenn. R/
- Beilhit war ar Pab ...; roit joa ha kennerzh dezhañ. R/
- Bezit soñj eus hor c'hhevredigezh gouestlet deoc'h, ma vezo chomadur ho klear. R/
- Ambrougit ar veajourion er peoc'h hag en eurvad, ma c'hellint distreiñ d'ar gêr yac'h ha laouen. R/
- Kemerit ganeoc'h an Anaon; roit dezho ho pardon hag ar vuhez peurbadel. R/

Kempedenn ar Sul

=====

L U N 2

=====

OPIS AL LENNADENNOU

- S. 30 Ant. I : En ho reizhder va selaouit, Aotrou.
 - II : Evit ho servijer na skedo ho tremm!
 - III : Ra vo benniget an Aotrou en deus graet evidon burzhudoù a garantez.
 V/- Va renit war hent ho kemmañduriou.
 R/- C'hwi a zo va Doue.

OPIS AR BEURE

S. 94 R/ Deomp davet an Aotrou ha youc'homp dezhañ gant ar sonerezh.

Meulgan Heol o sevel
 War an dud gourvezet er marv,
 Deuit oc'h vit ma welo ar re na welont ket,
 Ar gweled 'roit d'an den dall,
 Deuit, Salver Jezuz!
 Sklerijenn war ar bed:
 Ma kanimp evit ho tistro.

Lun 2

R/- Ra vo benniget en anv an Aotrou
An hini a zeu da salviañ e bobl.

Oan Paak karet,
Oan hag a salv eus an harlu,
Deuet oc'h evit dasprenañ an deñved kollet,
Ha pasañ 'rejooc'h priz ar gwad,
Deuit, Salver Jezuz!
Mesaer an dourioù bev:
Ma kanimp evit ho tistro. R/

S. 41 Ant. : Sec'heden deus va ene eus an Doue bev: peur Ewelin tal-ouzh-tal?
Kant. Si 36, 1-5. 10-13 Ant.: Diskouezet dimp, Aotrou, galloud ha trugarez.

Hor salvit, Doue an hollved,
Taolit ho spont war ar broadoù;
Savit ho torn war ar pobloù estren,
Ma welint braster ho kalloud;
Diwar hor c'houst e tiskouejoc'h dezho ho santelezh,
Diwar o c'houst, diskouezet dimp ho kload;
Ma ouzint, evel ma ouzomp-ni
N'eus Doue all ebet, nemedoc'h.

Grit a-nevez sinoù ha burzhudoù all,
Roit gloar d'ho torn ha d'ho prec'h dehou.

Dastumit holl rummadoù Yakob,
En ur reif dezho o herezh kentañ.

Ho pet truez ouzh ho pobl, Aotrou, bet galvet diwar hoc'h anv,
Ouzh Israel, ho mab henañ heñvel ouzhoc'h.

Ho pet truez ouzh ho kêr santel,
Ouzh Jerusalem, ho chomlec'h.

Kargit Sion gant ho meuleudioù,
Hag ho Templ, e leugnit gant ho kload.

S. 18 A Ant. : An neñvoù a embann ho kload, Aotrou.

Komz Doue Yr 15,16 Kavet ho komzoù, e tebren anezho: evidon
e oa ho komzoù ur joa, ul levnez d'am
c'halon. Rak hoc'h anv eo a zougen, Aotrou, Doue an hollved.

Troit va c'halon war-zu ho testeni, grit din bevañ eus ho komz.

V/- Dalc'hit d'ho promesa d'ho servijer, grit din bevañ eus ho komz.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Ra vo benniget an Aotrou, Doue Israel, gweladenniñ ha
dasprenañ a ra e bobl.

Pedomp hor Salver a ro e sklerijenn da bep den er bed-mañ
ha lavaromp gant feiz:

R/- Aotrou, roit dimp ho kras.

- Aotrou Jezuz, beleg peurbadel, c'hwi hag a ra eus ho pobl ur bobl
a veleion, grit dimp kinnig da Zoue profadoù speredel plijus. R/
- Roit dimp frouezh ar Spered: ar vadelezh, ar basianted hag an dousten
- Sklerijenn ar feiz da sklerijennañ hiziv hor c'herzhadeg ha da
vleniañ ac'hanomp war hentoù ur wir garantez. R/
- Hol likit da glask ar pezh a vo talvoudus d'hor breudeur ha da
asesañ o silvidigezh. R/

Lun 2

Kempedenn

Adal ar mintin, Aotrou, hol leugnit gant ho
trugarez; neuze e tremenimp el levnez an devezh-mañ, hag
e kavimp bepred ur joa nevez o kanneulif ac'hanoc'h. Dre Jezuz K.

OPIS KREISTEIZ
=====

Meulgan

Emañ an deiz e barr e sked, Leun eo an douar gant ho kload; Ni hoc'h ador, Doue nerhus, E-kreiz splannder ho sklerijenn.	Mougit ennomp tan ar pec'hed, Ha birvidigezh ar gomar; Lakit ennomp ho karantez, Ra zeuy ho peoc'h d'hon unanif.
---	---

Hor selaouit, Hollc'halloudeg,
Dre Jezuz, ho Mab unganet,
A ren gant ar Spered Santel,
A-holl-viskoazh da virviken.

S. 118, 41-48 Ant. : Evurus ar re a glev komz Doue hag a vir anezhi.

S. 39

Komz Doue Yr 32,40

Ganto e tivizin an emglev peurbad, ha no
souzin kot diwar o lerc'h, oc'h ober vad
dezho, ha va doujañs a lakin en o c'halon, ma ne dec'hint kot eus
va c'hichen.

V/- Va fastor eo an Aotrou, n'eus tra ebet o vankout din.
R/- War bradeier leton glas am laka da c'hourvez.

Kempedenn

Aotrou, kreskit, ennomp ar feiz ha grit skediñ en hor
c'halon sklerijenn ar Spered Santel. Dre Jezuz Krist.

OPIS AN ABARDAEZ
=====

Meulgan

R/- Joa ha splannder
Ar c'hload peurbadel eus an Tad,
An Uhel-meurbet, ar Santel-meurbet,
O Jezuz Krist!

Tizhet ganimp penn an devezh,
E welomp ho sklaarder en abardaez, En holl amzerioù gant mouzhioù santel,
Hag e kanomp an Tad, ar Mab, Mab Doue hag a ro buhez;
Ha Spered Santel Doue. R/ Deoc'h e ro gloar an hollved. R/

S. 44 Ant. I: War ho muzellou e vleugn ar goantiz, benniget oc'h gant Doue
da viken.

- II: Evurus ar re kouviet da bred-eured an Oan.

Kant. Ef 1, 3-10

Ra vo benniget Doue, Tad hon Aotrou Jezuz Krist,
Eñ hag en deus hor benniget ha roet dimp pep bennozh speredel,
A-holl-viskoazh, er C'hrist.

R/- Bennozh deoc'h-c'hwi, hon Tad,
C'hwi hag hoc'h eus hor benniget er C'hrist.

Rak hon dibabet en deus ennañ a-ziaroak krouidigezh ar bed,
da vezañ santel ha dinamm dirazañ, er garantez. R/

En ur rakdivizout diwar hor penn e vefemp advibion dezhañ dre
Jezuz Krist, setu petra eo bet plijet gantañ ober en e vadelezh. R/

Evit ma vefe kanneulet splannder ar c'hraes en deus roet dimp en
e Vab muiañ-karet, hon eus ennañ dre o wad, an daspren eus hor
sklavelezh, ar pardon eus hor pechedoù. R/

Lun - meurzh 2

Sed aze pinvidigezh ar c'hras-se en deus an Tad skuilhet warnomp gant largentez, e pep furnoz haskiant, en ur ziskuliañ dimp mister e youl, ar mennad madelezhus-se en devoa rakdivizet ennañ e-unan. R/
Evit e gas da benn pa vefe deuet leunder an amzerioù, da lavarout eo lakaat ar C'hrist da vezañ penn pep tra hag ennañ adunvanif kement a zo en neñv ha war an douar. R/

Komz Doue 1 Tes 2,13 Na baouezomp ket da drugarekaat Doue, rak p'hoc'h eus resevet komz Doue diganimp, hoc'h eus he degemeret n'eo ket evel ur gomz a-berzh tud, met evel maz eo e gwirionez, evel komz Doue a labour gant nerzh ennoc'h-c'hwi, ar grederion.

Dre gomz an Aotrou, an neñvoù a voe krouet.
V/- Bagad an neñvoù, gant c'hwez e c'henou an neñvoù a voe krouet.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. : Va ene a ganmeul an Aotrou, ra drido va spered o Doue, va Salver.

Pedomp hor Salver a re e sklerijenn da bep den er bed-mañ ha lavaromp gant feiz:

R/- Selacuit pedenn ho pobl.

- Aotrou, grit ma vezo salvet an holl dud, ra zouint a-benn da anaout ar wirionez. R/
- En ho trugarez he pet truez ouz an dud dilabour, ra gavint implij stabil. R/
- Bezit repu ar reuzedion, o gwarez en amzer an dienez. R/
- Deskit dimp dougen sammoù an oil d'egile, evel-se e sevenimp ho lezenn. R/
- Erbedif a reomp deoc'h an holl re ho poa galvet d'ar garg a veleg e-pad o buhez : ra ganint dizehan ho meuleudi en neñvoù. R/

Kempodenn Aotrou hon Doue, ra sklerijenne Pasion ho Mab hor speredoù evit ma vimp bepred prest da zougen ar yev a gawimp skañv en abeg d'ho karantez. Dre Jezus Krist.

=====

M E U R Z H 2

=====

OFIS AL LEUNADENNOU

- S. 36 Ant. I : Fizit ho puhez en Aotrou: eñ he blenio.
- II : Distro diouz an droug ha gra ar mad: an Aotrou a souten an dud reizh.
- III : Esper en Aotrou ha mir e hentoù.
V/- Deskit din barn ervat.
R/- O'n em harpañ war ho lezenn.

S. 94 R/- Youc'homp evit Doue, Roc'h hor silvidigezh. OFIS AR BEURE

Meulgan
Oan Pask karet,
Oan hag a salv eus an harlu,
Deuet oc'h evit dasprenañ an deñved kollet,
Ha pacañ 'rejoec'h priz ar gwad,

Meurzh 2

Deuit, Salver Jezuz!
Mesaer an dourioù bev;
Ma kanimp evit ho tistro.

R/- Ra vo benniget on anv Doue an hini a zeu da salviañ e pobl.

Kariad Doue,
Ennoc'h an Tad 'gav levenez,
Deuet oc'h evit badeziñ an den er marv,
Hag ar Yordan 'walc'has ho korf.
Deuit, Salver Jezuz!
Reizh ar rouantelezh;
Ma kanimp evit ho tistro. R/

S. 42 Ant. : E sklerijenn ho kwirionez, Aotrou, e kerzhin.
Kant. Iz 36, 10-20 Ant. : En tu-hont d'am dienez, grit din bevañ, Aotrou.

Lavarout a raen: pan eo masket din va deizioù,
Ez in betek dorjoù an Ankoù,
Dizorniet eus ar restad eus va bloavezhioù;

Me a lavare: ne welin kon an Aotrou war zouar ar re bev,
Ne welin den kon e-touez amezidi bed-an-diskuizh;

Va lojeiz a vo diframmet, lemet diganin, evel tinell ar mesaer,
Sizailhañ va buhez a ra din ur gwiaer,
Diwar va steuenn o vez krennet din.

Etre beure ha noz e vo peurochu ganin,
Kaer on bez gamat betek ar beure,
E vez ul leon o trailhañ va eskern.

Evel ar wenili, an drask, e filipan, o hirvoudif evel un durzhunell,
Skuizh va daoulagad dre forzh solet ouzh krec'h,
Anken am eus, bezit hegarat ganin.

Petra a lavarin? Prometet en doa se din, hag en deus graot,
Bale a ran a-hed va bloavezhioù, o'hwerv va ene.

Va Aotrou, muioc'h eget se e vever!
Koment-se holl e vo buhez va spered?
Paret ac'hanon ha grit din bevañ,
E-loc'h kaout peoc'h em eus bet c'hwervoni.

Met plijet eo bet ganec'h tennañ va ene eus foz an netra,
O teurel a-drek ho kein va holl bec'hedoù.

Rak e bro an Ankoù n'enorer ket ac'hanoc'h,
Er marv n'ho kweler ket,
Ha n'esper ket ar re a ziskonn er bez en ho fealded.

An hini bev, an hini bev hoc'h enor evel don on deiz-mañ,
An tad d'e vibion a zesko ho loalded,
Aotrou, deuit d'am skoazellañ.

S. 64 Ant. ; Deoc'h, Aotrou, ar veuleudi e Sion.

Komz Doue 1 Tes 5, 4-5 C'hwi, breudeur, n'emaoc'h ket on deñvalijenn on deare ma teufe an deiz-se da gouezhañ war-
noc'h evel ul laer: c'hwi holl, bugale ar sklerijenn, ez oc'h bugale
an deiz. N'omp ket eus an noz nag eus an deñvalijenn.

Ennoc'h, mammenn ar vuhez, dre ho sklerijenn e welomp ar sklerijenn.
V/- Aotrou, pegen prizius ho karantez, dre ho sklerijenn e welomp...
V/- Klod d'an Tad...

Meurzh 2

Kant. Zak. : Diouzh daouarn hon enebourion, Aotrou, hor salvit.

Pedomp hor Salver a ro e sklerijenn da bep den er bed-mañ, ha lavaromp gant feiz:

R/- Hor mirit war hoc'h hentoù, Aotrou.

- Aotrou Jezuz, ra zeuio esperañs ho kloar da sklerijennañ hon devezh, peogwir e lidomp hoc'h adsav d'ar vuhez dre ar bedenn-vaure. R/
- Degemerit hor goulennoù, kennerzhit hon divizoù, ra vezint preveudic'hoù an deiz-mañ. R/
- Hol lakit da greskiñ hiziv en ho karantez: ma kenoberio pep tra d'hor mad ha da vad an holl. R/
- Grit d'imp dougen testeni dirak an dud; o welout hon oberoù-mat, ra zeuint da reiñ gloar d'an Tad a zo en neñv. R/

Kempedenn

Doue hag a ra skediñ ho splannder war an denelezh diskennet e teñvalijenn an noz, argasit diouzh hor c'hreiz morgousk an displealded hag hon adsavit eus hor pec'hedoù; hol lakit da veilhañ war servij ho meuleudioù, da zilezel oberoù an deñvalijenn, ha da heuliañ roudoù an hini a zo Priñs ar sklerijenn ha mammenn nemeti ar vuhez, Jezuz Krist ho Mab hag hon Aotrou.

OPIS KREISTEIZ

<u>Meulgan</u>	Sed an amzer, Spered Santel, Ma teuit er galon fidel, A-unan gant an Tad, ar Mab, Evit skuilhañ ho sklerijenn.	Ra vo hon teod hag hor c'halon, Hon nerzh hag ivez hor buhez, Holl entanet a garantez, Evit an holl dud a garit.
----------------	---	---

Hor selaouit, Hollc'halloudeg,
Dre Jezuz, ho Mab unaganet,
A ren gant ar Spered Santel
A-holl-viskoazh da virviken.

S. 118, 49-56 Ant. : Er vro-mañ ma tremenan enni evel pirc'hirin e virin ho lezenn.

S. 52 ha 53

Komz Doue 1 Kor 12, 4-6 Donezonoù Doue a zo disheñvel, met an hevelep Spered eo bepred; ha kargoù disheñvel a zo er ministrerezh, met an hevelep Aotrou eo bepred; hag obererezhioù disheñvel a zo, met an hevelep Doue eo bepred a ra pep tra e pep unan.

V/- Bezit va sikour, n'am dilezit ket.
R/- N'am dilaoskit ket, Doue va silvidigezh.

Kempedenn

Doue hor Salver, hor selaouit: grit ac'hanomp diskibled ar sklerijenn hag oberourion ar wirionez; peogwir ganet diouzhoc'h e teuomp da vezañ mibion ar sklerijenn, hol lakit da reiñ testeni deoc'h dirak an dud. Dre Jezuz Krist.

OPIS AN ABARDAEZ

Meulgan

1 - Doue 'reas d'ar bed tarzhañ Eus an noz er c'hentañ beure, E-kreiz hon noz e rit skediñ, An anaoudegezh eus ho kloar.	3 - C'hwi 'zo hoc'h-unan arsklaered A luc'h e don ul lec'h teñval; C'hwi 'zo gouloù hor c'hammedoù E-kreiz un hent a deñvalded.
---	--

Meurzh 2

2 - C'hwi hag a zo skeudenn ho Tad, 4 - Pa falla pep tra e chomit,
Ha splannder e gened skedus, Pasteur pep tra, dirrall 'vezit,
War hotremm-c'hwi, o Jezuz Krist, Pa zeu an noz, splannañ a rit
E sked da viken joa ar bed. E-barzh kalon pep krouadur.

5 - Ha pa savo war an hollved
Ar goulou-deiz a zo o tont
C'hwi a ren eo er geoded-se
Ma teuz diouti an deñvalded.

S. 48 Ant. I : N'hellit ket servijañ Doue hag an arc'hant.
- II : Dastumit evidoc'h teñzorioù en neñvoù, eme an Aotrou.

Kant. Disk. 4, 11; 5, 9. 10. 12

Dellezek oc'h, c'hwi, hon Aotrou hag hon Doue da resev ar c'hloed, an enor hag ar galloud.

R/- Galloud, enor ha gloar da Oan Doue.

Rak o'hwi eo hoc'h eus krouet pep tra, ha dre ho polontez ez int deuet da vezañ hag ez int bet krouet. R/

Dellezek oc'h, Aotrou, da resev al Lev'r ha da derrañ e sielloù. R/

Dre maz oc'h bet lazhet ha m'hoc'h eus dasprenet ha gonezet da Zoue gant ho kwad, tud eus pep meuriad hag eus pep yezh, eus pep pobl hag eus pep broad. R/

Dre m'hoc'h eus graet anezho d'hon Doue ur rouantelezh a veleion da vezañ rouaned war an douar. R/

Dellezek eo an Oan bet lazhet da resev ar galloud, ar binvidigezh, ar furnez, an nerzh, an enor, ar c'hloar, ar veuleudi. R/

Komz Doue Rm 3, 23-25

An holl o deus pec'het hag a vank dezho gloar Doue; an holl eo dre zonezon e vezont laket reizh, gant e c'hras, dre nerzh an dasprenidigezh-se hon eus er C'hrist Jezuz: eñ hag a zo bet diazezet gant Doue evel galloud a bardon dre ar feiz en e wad. Evel-se Doue a felle dezhañ diskouez e reizhder.

Hon dasprenet hoc'h eus, Aotrou, gant priz ho kwad.

V/- Tud a bep gouenn, yezh, pobl, broad, gant priz ho kwad.
V/- Klod d'an Tad....

Kant. ar W. : An Aotrou en deus sellet ouzh izelded e vatezh hag an Hollc'halloudeg en deus graet evidon burzhudoù.

Pedomp hor Salver a ro e sklerijenn da bep den er bed-mañ ha lavaromp gant feiz:

R/- Enooc'h, Aotrou, emañ va esper.

- Pastor peurbadel, gwarezit hon Eskob.... hag holl bastored an Iliz. R/

- Sellit gant madelezh ouzh ar re a zo heskinet, dieubit anezho diouzh o diwaskoù. R/

- Ho pet truez ouzh ar reuzeudion, roit bouad d'ar re a c'houzañv naon. R/

- Sklerijennit ar re o deus karg da votiñ al lezennoù, ma vezint ar pezh a zo just ha fur. R/

Meurzh - Merc'her 2

- N'ankouait ket ar re a zo marv hag hoc'h eus dasprenet gant ho kwad; degemerit anezho e pred an eured peurbad. R/

Kempedenn

Dous a sklerijenn hag a c'hloar, d'an eur ma kresk an deñvalded, grit sevel warnomp sklerijenn ho reizher, ha roit dimp, da serr-noz an deiz-mañ, kalonoù anaoudek ouzh ho madoberoù. Dre J. K.

=====
M E R C ' H E R 2
=====

OPIS AL LENNADENNOU

- S. 38 Ant. I : Ni ivez a c'houzañv, o c'hortoz dasprenidigezh hor c'horfoù.
 - II : Selaouit va fedenn, Aotrou, na vezit ket bouzar ouzh va
 - S. 51 - : Da virviken ec'h esperan en ho trugarez. / c'hlemvan.
- V/- Va ene a gont war an Aotrou.
R/- Fiziañs am eus en e gomzoù.

OPIS AR BEURE

S. 94 R/- En ho torn, Aotrou, emañ an hollved.

Meulgan

Roc'hell nevez,
Ma teu diouti Stêr ar vuhez,
Deuet oc'h evit dourañ ar re a gred ennoc'h,
Hag ho kalon 'lezit digor.
Deuit, Salver Jezuz!
O Feunteun diheskus,
Ma kanimp evit ho tistro:

R/- Ra vo benniget en anv an Aotrou
An hini a zeu da salviñ e bobl.

Koabrenn a dan
War an dud o kerzhout en noz,
Deuet oc'h evit diskouez an hent davet Doue,
Ho kalvar a zigor an neñv.
Deuit Salver Jezuz!
C'hwi 'zo bezañs ho Tad,
Ma kanimp evit ho tistro: R/

S. 76 Ant. : C'hwi, an Doue a ra burzhudoù.
Kant. 1 S 2, 1-10 Ant. : Va ene a ganmeul an Aotrou, adsevel a ra an dud izel.

Lammat a ra va c'halon a joa evit an Aotrou,
va nerzh a zo adsavet gant Doue;
Va genou a ra fent gant va enebourion,
laouenaet on bet gant ho silvidigezh;
N'eus den ebet santel evel an Aotrou,
n'eus Roc'h ebet evel hon Doue: n'eus nemedoc'h, Aotrou.
Na gomzit ket ken uhel, ken rok,
dont a ra pouferezh eus ho kenou;
An Aotrou a zo un Doue gouizieq,
reizh eo kement tra en deus graet;
Gwareg an dud c'halloudek a zo torret,
hag ar re a vrafiselle a zo bet gourizet gant nerzh;

Meurzh 2

Ar re o doa o gwalc'h a vo gopraet evit bara,
hag ar re naoniek o deus paouezet da labourat;
An hini gaonac'h he deus bugale, betek seizh,
an hini he doa kalz bugale a zo difrouezh;
An Aotrou a ra mervel ha bevañ,
diskenn da vro an Ankou hag adsevel;
Paouraat ha pinvidikaat a ra an Aotrou,
izelaat a ra, met ivez uhelaat;
Adsevel a ra eus ar poultr an ezhommeg,
ha diwar an teil ec'h adsav ar paour;
Evit e azezañ e renk ar briñsed,
ha reiñ dezhañ an herezh un tron a c'hloar;
Rak sichennoù an douar a zo d'an Aotrou,
diazezet en deus warno ar bed;
Diwall a ra treid e vignoned,
met an dud fall a ziskenno en deñvalijenn;
N'eo ket dre an nerzh e trec'h an den,
brevet e vo ar re a sav enep Doue;
Taranal a ra Doue en neñvoù;
barn a ray an Aotrou dibennoù an douar;
Reiñ a ra galloud d'e roue,
adsevel a ra taled e Hini sakr.

S. 96 Ant. : Doue a ren, ra drido an douar!

Komz Doue Rm 8, 35-37

Piv hon disrammo diouzh karantez ar
C'hrist? An trubuilhoù? an anken? an
heskinerezh? an naon? an noazhder? ar riskloù? ar c'hleze? Met e
kement-se n'eo ket diaes dimp trec'hifi dre an hini en deus karet
ac'hanomp.

Me a fell din kanañ ho nerzh ha kanmeuliñ ho karantez diouzh ar beure.
V/- Ya, Doue a zo va c'hreñvlec'h, Doue va c'harantez a zeu davedon
me a fell din kanmeuliñ ho karantez diouzh ar beure.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Ho pet soñj, Aotrou, eus ho karantez, eus ho promesa d'hon tadoù.

Pedomp hor Salver a ro e sklerijenn da bep den er bed-mañ
ha lavaromp gant feiz:
R/- Chomit ganimp, Aotrou.

- Chomit ganimp, Aotrou, a-had an devezh-mañ, ma ne zihano morse sklerijenn ho kras d'hon sklerijennañ. R/
- Deskit dimp pediñ ha labourat gant hoc'h Iliz, evit kenlabourat da silvidigezh ar bed. R/
- Crit dimp bezañ, dre hor c'homzoù hag hor skouerioù, helen an douar ha sklerijenn ar bed. R/

Kempedenn

Doue hollc'halloudek ha peurbadel, n'eus
netra ennoc'h a deñval na displann, roit
eta ho sklerijenn d'hor c'halonoù: en ur zegemer ho lezenn hag
ho kemmenadurioù e kerzhimp gant hoc'h hent gant ur galon skañv.
Dre Jezus Krist.

Meulgan

R/- Joa ha sklaerder
Ar c'hloar beurbadel eus an Tad,
An Uhel-meurbet, ar Santel-meurbet,
O Jezus Krist!

OPIS AN ABARDAEZ

Merc'her 2

Tizhet ganimp penn an devezh, Dellezek oc'h da vout kanet,
E welomp ho sklaerder en abardaez En holl amserioù gant mouezhioù santel,
Hag e kanomp an Tad, ar Mab, Mab Doue hag a ro buhez:
Ha Spered Santel Doue. R/ Deoc'h e ro gloar an hollved. R/

S. 61 Ant. : En Doue hepken emañ repoz va ens.
S. 66 - : Deoc'h, o Doue, meuleudi ar pobloù, deoc'h-c'hwi meuleudi an holl bobloù.

Kant. Kol 1, 12-20 Ant. : Da Zoue ar c'hloar da viken, rak pep tra a zo dioutañ, drezañ hag evitañ! Amen!

Trugarekait Doue an Tad en deus ho laket barrek da gaout lod en herezh ar sent er sklerijenn.

R/- Klod deoc'h, kentañ-ganet a-douez ar re varv.

Eñ hag en deus hon tennet eus galloud an deñvalijenn evit hon degas e Rouantelezh e Vab karek, hon eus ennañ an dasprenidigezh, ar pardon eus hor pec'hedoù. R/

Eñ eo skeudenn an Doue diwelus, ar c'hentañ-ganet a-rack pep krouadelezh, rak ennañ eo bet krouet kement tra 'zo en neñvoù ha war an douar. R/

Kement a weler ha kement na weler ket, pep tra 'zo betkrouet drezañ hag evitañ. Eñ a zo a-rack pep tra, ha drezañ e talc'h pep tra da vezañ. R/

Hag eñ ivez eo ar penn eus ar C'horf, da lavarout eo, eus an Iliz. Eñ eo ar penn-abeg anezhi, ar c'hentañ-ganet eus a-douez ar re varv, evit ma vefe dezhañ-eñ ar renk kentañ e pep doare. R/

Rak ennañ eo bet plijet gant Doue lakaat pep leunder da chom ha drezañ adunvaniñ ar bed a-bezh evitañ e-unan. R/

En ur ober ar peoc'h dre wad e groaz, adunvaniñ drezañ kement a zo war an douar kenkoulz ha kement a zo en neñvoù. R/

Komz Doue 1 P 5, 5-7

C'hwi holl, en em wiskit a izelegezh an eil e-keñver egile, rak Doue a harp ouzh ar re lorc'hus, met ar re izel a galon e ro dezho e c'hras. Scublit izelek dindan dorn galloudus Doue, dezhañ d'hoc'h uhelaat pa vo deuet ar c'houlz. Hoc'h holl brederioù o disammit warnañ, rak eñ en deus soursi ac'hanoc'h.

Etre ho taouarn, Aotrou, e lakan va spered.

V/- C'hwi eo hon daspren, Doue a wirionez, etre ho taouarn...

V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. : An Aotrou a reas evidon burzhudoù, santel eo e anv.

Pedomp Doue hon Tad a gar e vugale ha na zispriiz ket o fedenn; lavaromp dezhañ a galon izel:

R/- Hol leugnit eus ho trugarez, Aotrou.

- Doue hon tadou, ho pet soñj eus hoc'h emglev santel ha chomit gant hoc'h Iliz. R/

- Roit amzer vat evit an trevadoù, ma roio an douar frouezh puilh. R/

- Lakit ho fideled da garout ar pezh a zeu diouzh ar Spered, ma vevint evit ho kloar amzer al labour hag amzer an diskuizh. R/

Merc'her-Yaou 2

- Hon dieubit a bep droug ha bennigit hon tiegezhioù. R/
- Hon Anaon, grit dezho arvestiñ ouzh ho tremm, ha dimp-ni ivez roit ar c'hras da gaout un deiz lod ganeoc'h en o evurusted. R/

Kempedenn

Degemerit, Aotrou Doue, ar veuleudi a ginnigomp deoc'h evel sakrifis an abardaez; grit ganimp goulaoueroù bev evit ho Krist, ha ma talc'himp start d'ho komzoù a vuhez, evit ho kloar, ur wech disammet ho kras diouzh oberoù an deñvalijenn. Dre Jezus Krist.

=====

Y A O U 2

=====

OFIS AL LENNADEMOU

S. 43 Ant. I : Hor salvet hoc'h eus, Aotrou, deoc'h meuleudi da viken.

- II : Sellit, Aotrou, ha gwelit hor reuzeudigezh.
- III : Savit, Aotrou, hon dieubit evit enor hoc'h anv.

V/- Aotrou, da biv ez afemp?

R/- Ganeoc'h emañ komzoù ar vuhez peurbadel.

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- Deuit, azeulomp an Aotrou.

Meulgan

Fried real,
Prometet da eured ar groaz,
Deuet oc'h evit laouenat bugale Doue,
Hag e trojoc'h hon dour en gwin.
Deuit, Salver Jezuz!
Tener 'vit an douar,
Ma kanimp evit ho tistro:

R/- Ra vo benniget en anv an Aotrou
An hini a zeu da salviñ e bobl.

O Mab Doue,
Ma tiskuizh warmoc'h ar Spered,
Deuet oc'h evel un tan a bulluc'h an holl draoù,
Ennoc'h 'n em entan an hollved.
Deuit, Salver Jezuz!
Annezadur ar c'hloar,
Ma kanimp evit ho tistro: R/

S. 79 Ant. : Dihunit, o Doue, ho kalloudegezh ha deuit d'hor sikour.

Kant. Iz 12, 1-6 Ant. : Va nerzh ha va c'han eo an Aotrou.

Trugarez deoc'h, Aotrou, konnaret oac'h ouzhin,
met, distroet ho konnar, e frealzit ac'hanon.
Setu an Doue en deus roet an trec'h din, fizius e vin ha dispont,
ja, va c'hantik eo Doue, bet eo evidon an trec'h.

Yaou 2

Tennañ a refot dour gant joa
eus andoniou ar silvidigezh;
Hag en deiz-se e lavarot: trugarekait an Aotrou,
pedit en e anv, brudit e-touez ar pobloù e oberoù.
Degasit soñj ez eo uhel e anv, kanit da Zoue,
meurdeus e oberoù, anat int dre-holl war an douar.
Skrijit ha youc'hit, annezidi Sion,
rak bras eo du-se sant Israel.

S. 80 Ant. : Hon youc'hadegoù da Zoue, hon nerzh; hor meulgan da
Zoue Jakob.

Komz Doue Rm 14, 17-19 Rouantelezh Doue n'eo ket un afer
a voued pe a evaj, met reizhder,
peoc'h ha levenez er Spered Santel. An neb a servij ar C'hrist en
doare-se a zo plijus da Zoue hag a vez kavet mat gant an dud.
Neuze'ta, klaskomp ar pezh a c'hell degas ar peoc'h hag uhelaat
ar re all.

Bezit laouen en Aotrou, tridit, c'hwi, tud just.

V/- Kenyouc'hit, c'hwi holl tud eun a galon, tridit, c'hwi,
tud just.

V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Ha c'hwi, bugelig, profed an Uhel-meurbet, c'hwi a gerzho
a-ziarok d'an Aotrou evit kempenn e hentoù.

Pedomp Doue hon Tad a gar e vugale ha na zispri ket o
fedennou; lavaromp dezhañ a galon izel:

R/- Gweladennit ho pobl, Aotrou.

- Ho trugarekaat a reomp o vezañ m'hoc'h eus hor sklerijennet
dre ho Mab; e sklerijenn da reiñ dimp levenez a-hed an devezh-
mañ. R/
- Diskouezet dimp ho madelezh e pep tra, grit dimp arvestiñ ouzh
ho kload e pep krouadur. R/
- Deskit dimp gouzañv gant nerzh-kalon an droukverzh hag ho ser-
vijañ gant ur galon vrokus. R/
- Renit hiziv hor soñjoù hag hon oberoù, ma sentimp a-youl-vat
ouzh ho renadur a dad. R/

Kempenn Aotrou Jezuz Krist, Heol o sklerijen-
nañ kement den a zeu er bed-mañ, hol
lakit da zozañ dirazoc'h hent ar reizhder hag ar peoc'h.
C'hwi a vev hag a ren...

OFIS KREISTEIZ

Meulgan Sed an amzer, Spered Santel, Ra vo hon teod hag hor c'halon,
Ma teuit er galon fidel, Hon nerzh hag ivez hor buhez,
A-unan gant an Tad, ar Mab, Holl entanet a garantez,
Evit skuilhañ ho sklerijenn. Evit an holl dud a garit.

Hor selaouit, Hollc'halloudeg,
Dre Jezuz, ho Mab unganet,
A ren gant ar Spered Santel,
A-holl-viskoazh da virviken.

Yaou 2

S. 118, 65-72 Ant. : War an Aotrou e kontan ha n'em eus aon ebet ken.
S. 55 ha 56

Komz Doue Ga 5, 16.22.23.25 En em lezit da vezañ renet
gant ar Spered, ha neuze
n'efot ket da seveniñ drouke'hoantegezh ar c'horf. Frouezh ar
Spered a zo: karantez, levenez, peoc'h, pasianted, hegarated,
madelezh, fiziañs er re all, douster, emzalc'hegezh. War hon eus
buhez dre ar Spered, bezomp renet ivez gant ar Spered.

V/- Va fastor eo an Aotrou, n'eus tra ebet o vankout din.
R/- War bradeier leton glas an laka da c'hourvez.

Kempenn Hor mirit, Aotrou, er joa, en
eeunder, en drugarez hervez an
Aviel. Bennigit ac'hanomp e-kreiz an deiz-mañ, ni hag an
holl re hoc'h eus fiziet anomp. Dre Jezuz Krist.

OFIS AN ABARDAEZ

Meulgan

- 1 - Doue 'reas d'ar bed tarzhañ 2 - C'hwi hag a zo skeudenn ho Tad,
Eus an noz er c'hentañ beure, Ha splannder e gened skodus,
E-kreiz hon noz e rit skediñ War'ho tremm-c'hwi, o Jezuz Krist,
An anaoudegezh eus ho kload. E sked da viken joa ar bed.
- 3 - C'hwi 'zo hoc'h-umanarsklaerded 4 - Pa falla pep tra e chomit,
A luc'hedon ul lec'h teñval; Pasteuz pep tra, divrall 'vezit,
C'hwi 'zo gouloù hor c'hammedoù Pa zeu an noz, splannañ a rit
E-kreiz un hent a deñvalded. E-barzh kalon pep krouadur.
- 5 - Ha pa savo war an hollved
Ar gouloù-deiz a zo o tont,
C'hwi a reno er geded-se,
Ma teuz diouti an deñvalded.

S. 71 Ant. I : En deizioù-se e vleunio ar reizhder ha launder ar peoc'h
da viken.
- II : Ra vo benniget an Aotrou, Doue Israel, a ra burzhudoù
hag en nemetken.

Kant. Disk. 11, 17-18 Ant. : Dezhañ gloar ha galloud da gantvedoù ar
c'hantvedoù. Amen.

Ho trugarekaat a reomp, Aotrou Doue, c'hwi an Hollc'halloudeg,
an hini a zo hag a oa, dre m'hoc'h eus kemeret 'n ho torn ho
kalloud bras evit ren da Roue :

R/- Ho trugarekaat a reomp, o Doue.

Ar broadoù a oa en em savet gant konnar, met setu deuet ho
konnar-c'hwi, ar c'houlz evit ar re varv da vezañ barnet,
ar c'houlz da reiñ o gopr d'ho servijerion, ar Brofeded, ar
Sent, hag ar re o deus douget hoc'h anv, ar re vihan hag ar
re vras. R/

Yaou-Gwener 2

Bremañ eo deuet da wir silvidigezh, nerzh, rouezezh hon Doue ha galloud e Grist, rak stlapet eo bet d'an traoñ tamaller hor breudeur, an hini o zamalle dirak hon Doue deiz ha noz. R/

Int ivez o deus trec'het warnañ dre wad an Can ha dre lavar o zesteni: rak disprizet o deus o buhez betek mervel. En abeg da se, bezit laouen, o Neñvoù, ha c'hwil ar re a chom enno. R/

Komz Doue 1 P 1, 22-23

O sentif ouzh ar wirionez hoc'h eus glanaet hoc'h eneoù, betek en em garout en-leal evel breudeur; a-greiz-kalon eta, en em garit an eil egile hep fallaenn, rak ganet oc'h bet n'eo ket diwar un had brein-nus, met diwar un had divreinus, diwar Gomz an Doue bev ha peurbadel.

Da viken, Aotrou, e chom digemm ho komz en neñvoù.

V/- A rumm da rumm e chom digemm ho kwirionez en neñvoù.

V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: E drugarez en em astenn a rummad da rummad war gement hini en deus doujañs outañ.

Pedomp Doue hon Tad a-gar e vugale ha na zispri ket o fedennoù; lavaromp dezhañ a galon izel:

R/- Chomit ganimp, Aotrou.

- Doue hollc'halloudek ha drugarezus, beilhit war ar Pab... hoc'h eus roet hoc'h-unan d'hoc'h Iliz. R/

- Gwarezit hor bro hag hon diwallit a bep droug. R/

- Galvit bugale niverus ouzh taol an Iliz, liesait niver disklibon ho Mab. R/

- Beilhit war an dud, paotred ha merc'hed, engouestlet deoc'h, lakit anezho da heuliañ ho Mab gant kalon. R/

- Ra ziskuzho an Anaon er peoc'h peurbadel, ha ra gavimp anezho un deiz el levenez. R/

Kempedenn

O Krist, tennet hoc'h eus e c'halloud digant ar marv ha laket er sklerijenn ar vuhez hag an divarvelezh; ho meulif a reomp evel sklerijenn beurbad hag heol ar bed da zont; ra vezo kuzhet ganec'h hor buhez on Doue, dimp da vevañ war an douar evel tud prometet d'ho rouantelezh. C'hwil a vev hag a ren...

=====

=====
G W E N E R 2
=====

OFIS AL LENNADENNOU

S. 37 Ant. I : Aotrou, va zamallit hep konnar.
- II : Aotrou, ve reizhit hep fulor.
- III : Ya, anzav a ran va fec'hed, n'am dilezit ket, Doue, va Salver.

Gwener 2

V/- Grit din, Aotrou, anavezout hoc'h hentoù.
R/- Doskitdin ho kwenodennoù.

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- En anv Jezuz, ra embanno kement yezha zo : Eñ eo an Aotrou.

Meulgan

- | | |
|--|--|
| 1 - Splaender strinket eus kreiz Doue, Sklaerder ganet eus arsklaerder, A-raok m'eo ganet an hollved, Splannañ a rit en deñvalded. | 3 - E goueled hon noz e teuit, Evit an holl dud er bed-mañ, C'hwil a zo mammenn a vuhez, Hag ar sklerijenn wirion. |
| 2 - Ni hoc'h ador, Mab dreist-karet, An Tad hag en deus ho kaset, Warnoc'h e ra d'e c'hras repoz. | 4 - Deoc'h eo ar c'hloar, o Tad santel, Evel d'ho Mab ar veuleudi, Gant ar Spered Glan frealzer, Bepred, dre-holl ha da viken. |

S. 50 Ant. : Ouzh ur galon fregot n'hoc'h eus ket dispriz, Aotrou.

Kant. Hk 3, 2-4. 13-19 Ant. : Ho pet soñj, Aotrou, da gaout truez.

Aotrou, klevet am eus ho prud, doujañs am eus, Aotrou, ouzh ho labour. E-kerz ar bloavezhioù hel lakit da advevañ, e-kerz ar bloavezhioù-mañ, da vezañ anavezet. 'N ho puanegezh, ho pet soñj da gaout truez.

Doue a zeu eus Teman, ar sant, eus menez Paran, goloet eo an neñvoù gant e splaender, hag e veuleudioc'h a leugn an douar. Dezhañ an hentoù kozh, e sked a zo evel ar sklerijenn, bennoc'h en deus o tont eus e torn, eno emañ kuzhet e nerzh.

Aet oc'h da sikour ho pobl, ha da salviañ hoc'h hini sakr: Skeif a rit 'n e benn tiri ar fallakr, e ziazezoù a ziskarit betek ar roc'h. Toullañ a rit gant ho piroù penne noblañsoù, a zeue d'hor stlabezañ, stad enno o vont da zebriñ ur paour-kaezh e kuzh. Kerzhout a rit dre ar mor gant ho kezeg, war ar bemioù doureier-neur.

Klevout a ran, krenañ 'ra va c'hoarf, ouzh an trouz-mañ e tarlamm va muzelloù, Hag e teu va eskern da vevinañ, ha dindanon e krennan.

Dinec'h on evit an deiz-se a enkrez, emañ o sevel war ar bobl a wast ac'hanomp.

Ar fiezenned ne vleugint ken, ne vo ket a frouezh er winienn. Touellus pezh a roy an olivezenn, er parkeier ne vo ken a voued.

Mankout a ra ar c'hrevier a zeñved, ha n'eus ket a saout er stolioù. Met gant Doue e vez stad ennon, tridal a ran e Doue va Salver. An Aotrou, va Doue, eo va galloud en a lako va zroid evel re an heizezed, ha war ar c'hrec'hioù e ray din kerzhout.

Gwener 2

S. 144 Ant. : Meul an Aotrou, o Sion, brud da Zoue, o Jeruzalem.

Komz Doue Ef 1, 7-10

Er C'hrist, dre e wad, hon eus an das-pren eus hor sklavezh, ar pardon eus hor pec'hedou. Sed aze pinvidigezh ar c'hras-se en deus an Tadskuil-het warnomp gant largentez, e pep furnez ha skiant, en ur ziskuliañ dimp mister e youl, ar mennad madelezhus-se en devoa rakdivizet ennañ e-unan evit e gas da benn pa vefe deuet leunder an amzeriou, da lavarout eo lakaat ar C'hrist da vezañ penn pep tra hag ennañ adunvaniñ kement a zo en neñv ha kement a zo war an douar.

O Krist, Mab an Doue bev, ho pet truez ouzhimp.

V/- C'hwi hag a zo azezet en tu dehou d'an Tad, ho pet truez ouzhimp.

V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Sklerijennit, Aotrou, ar re azezet e skeud ar marv.

Pedomp Doue hon Tad a gar e vugale ha na zispriiz ket o fedennoù: lavaromp dezhañ a galon izel:

R/- Ennoc'h, Aotrou, ec'h esper hor c'halon.

- Tad trugarezus, e derou an devezh-mañ a ro dimp ho madelezh, grit dimp bevañ eus buhez nevez ar vadeziant. R/

- C'hwi a grou pep tra hag a ra anezho evel m'emaint, deskit dimp dizoleiñ testeni ho madoberou e pep krouadur. R/

- Hol lakit d'ober gant eunder al labour hoc'h eus fiziet ennomp, ma vimp servijerion mat ha fidel. R/

- Roit dimp ar c'hras d'ho heuliañ hiziv a-greiz-kalon, ha klask dizehan ho pezañs. R/

Kempedenn

Aotrou, Tad santel, fellet ez eus bet deoc'h e vefe ho Mab gwerzh-daspren evit hor silvidigezh; grit dimp bevañ gantañ kement ha ken bihan ma santimp efed e zasorec'hidigezh dre hon unaniesz gant poanioù e Basion. Eñ a vev hag a ren...

OPIS KREISTEIZ

Moulgan

Emañ an deiz e barr e sked, Mougit ennomp tan ar pec'hed, Leun eo an douar gant ho kloar; Ha birvidigezh ar gonnar; Ni hoc'h ador, Doue nerzhus, Lakit ennomp ho karantez, E-kreiz splannder ho sklerijenn. Ra zey ho peoc'h d'hon unanif.

Hor selaouit, Hollc'hallodeg, Dre Jezuz, ho Mab unganet, A ren gant ar Spered Santel, A-holl-viskoazh da virviken.

S. 118, 73-80 Ant. : Ra vezo ho karantez ur frealzidigezh evidomp, S. 58 ha 59 Aotrou, hervez ho komz.

Komz Doue Fur 1, 13-15

Doue n'en deus ket graet ar marv, ne blij ket dezhañ pa 'za da get ar re vev. Krouet en deus pep hini evit bezañ; yac'h e vezer ganet er bed, ne vez ket en den a boezon marvel, ha rouantelezh ar marv n'ho deus ket he domani war an douar, nemet ar reizhder a zo divarvel.

Gwener 2

V/- Bezit va sikour, n'am dilezit ket. R/- N'am dilaoskit ket, Doue va silvidigezh.

Kempedenn

Aotrou, oaled lesket a garantez, roit dimp ur gred ken bras ma vimp gouest d'ho karout dreist pep tra, ha da garout hor breudeur en abeg deoc'h. Dre Jezuz Krist.

OPIS AN ABARDAEZ

Meulgan

R/- Joa ha sklaerder Ar c'hloar peurbadel eus an Tad An Uhel-meurbet, ar Santel-meurbet, O Jezuz-Krist!

Tizhet ganimp penn an devezh, Dellezek oc'h da vout kanet, E welomp ho sklerder en abardaez, En holl amzeriou gant mouszhioù santel, Hag e kanomp an Tad, ar Mab, Mab Doue hag a ro buhez: Ha Spered Santel Doue. R/ Deoc'h e ro gloar an hollved. R/

S. 120 Ant. : Va sikour din eo an Aotrou, oberour an neñv hag an douar. S. 114 - : Davedon, Aotrou, a stouit ho skouarn.

Kant. Disk. 15, 3-4 Ant. : Gloar d'an Oan lazhet! Roue eo da virviken!

Bras hag estlammus hoc'h oberou, Aotrou Doue, mestr ar bed, reizh ha gwirion hoc'h oberou, roue ar broadou.

R/- Bras eo hoc'h oberou, Aotrou.

Fiv na rofe, Aotrou, doujañs ha klod d'hoc'h anv? Rak c'hwi hepken a zo santel. R/

Hag an holl vroadou a zeuio da stouñ dirazoc'h, dre maz 'eo 'n en ziskouezet reizhder ho parnedigezhioù. R/

Komz Doue 1 Kor 2, 7-10

Prezeg a reomp furnez misterius Doue, an hini 'oa chomet kuzhet, a oa bet ragaozet a-holl-viskoazh gant Doue evit hor gloar, met miret dianav da holl briñsed ar bed-mañ: rak mar o divije hec'h anavezet, n'o divije ket staget ouzh ar Groaz Aotrou ar c'hloar. Hogen, evel maz eo skrivet: Ar pezh n'o deus ket gwelet daoulagad an den ha n'o deus ket klevet e zivskouarn, ar pezh n'he deus ket ijinet e galon, eo kement-se en deus ragaozet Doue evit ar re a gar anezhañ. Ya, dimp-ni en deus Doue diskleriet se dre ar Spered.

Benniget oc'h, Aotrou, e lein an neñvoù.

V/- Din a veuleudi hag a c'hloar da viken, e lein an neñvoù. V/- Klod d'an Tad.

Kant. ar W. : Diskar a ra an dud c'halloudek, heskinerion e fideled.

Pedomp Doue hon Tad a gar e vugale ha na zispriiz ket o fedennoù; lavaromp dezhañ a galon izel:

R/- Ho pet truez ouzh ho pobl, Aotrou.

- Aotrou, c'hwi hag a gannerzh an dud izel, klevit garmadennoù ar boerion o sevel davedoc'h, ma ne vo ket o reuzeudigezh hep espe-rañs. R/

- Selaouit hirvoudoù an dud war o zremenvan, gweladennit anezho ha konnerzhit anezho. R/

Gwener-Sadorn 2

- Ra verzo an harluidi ho karantez, maz adkavint o bro ha ma tishint un deiz mammvro an neñv. R/
- Ra glevo erfin ar bec'herion ho kalv trugarezus ha ma 'n em adunvanint gant an Iliz. R/
- Salvit ar re o deus kuitaet ac'hanomp; ma tennint o mad diouzh dasprenidigezh ho Mab. R/

Kempedenn

O Krist, Mab unganet ha komz peurbadel an Tad, c'hwi hor sakrifis nemetañ kinniget war ar Groaz evit hor pec'hedoù, degemerit hor meuleudioù evel sakrifis an abardaez a brofomp deoc'h unanet gant hor breudeur er feiz, deoc'h-c'hwi a vev hag a ren gant an Tad en unander ar Spered Santel, un Doue nemetken a gantvedoù da gantvedoù.

=====

S A D O R N 2

=====

OPIS AL LENMADENNOU

A - Amzer voutin

S. 135 I, II, III Ant. : Eñ an hini nemetañ en deus graet burzhudoù bras, rak da viken e pad e drugarez.

V/- Grit din, Aotrou, anavezout hoc'h hentoù.
R/- Deskit din ho kwenedennoù.

B - Amzer divoutin

S. 105 Ant. I : Doue a salvas anezho evit enor e anv.
- II : Disoñjet o deus Doue a salvas anezho.
- III : Hon dastumit, Aotrou, eus a-douez ar broadoù, evit lidañ ho Kloar.

V/ & R/ (Uheloc'h)

OPIS AR BEURE

S. 94 R/- Gant joa e kerzhomp davedoc'h, Aotrou,
gant joa e kerzhomp davedoc'h.

Meulgan

- | | |
|--|---|
| 1 - O Mab unganet, Jezuz Krist,
War ho tremm-c'hwi ec'h arvestomp
Ar c'hloar ma lugermit ganti
E-tal Doue, kent an amzer. | 3 - C'hwi a zo o chom en hon touez,
O Verb leun eus an holl c'hrasoù,
Kelennit dimp ar wirionez,
Hon treuzfurmten en ho skeudenn. |
| 2 - Ar bed-mañ n'hooc'h anavez ket,
An deñvalded ho tiarbenn:
D'ar re o deus ho resevet,
Roit dezho perzh en ho leunder. | 4 - Deoc'h eo ar c'hloaro Tad gan-
Evel d'ar Mab ar veuleudi, ^{tel}
Gant ar Spered Glan frealzer,
Bepred, dre-holl ha da viken. |

S. 91 Ant. : Mat eo trugarekaat an Aotrou.

Sadorn 2

Kant. Adl. 32, 1-12 Ant. : Anvan Aotrou eo a bedan, rentit gloar d'hon Doue!

Roit skouarn, neñv ha glenn,
ra glevo an douar lavarioù va genou.
Ra strilho evel glav va c'hentel,
ra zivero evel glizh va lavarenn.
Evel barradoù war ar c'hlasvezh,
evel kaouadoù war ar geot.
Rak anv Doue a bedan,
brasat Doue so hon hini!
Ur Roc'h: diad e oberoù,
e holl hentoù a zo reizhder.
Un Doue gwirion hep dislealded,
reizh ez eo hag eeun.
Kollet int evitañ, n'int ket e vibion gant o sioù,
rumm treitour ha gwidreus, evel-se e paeit Doue?
Pobl droch, hep furnez, hag-efñ n'eo ket da Dad, da Grouer?
efñ hag en deus graet, krouet ac'hanoc'h?
Soñj en amzerioù a wechall,
meizata er bloavezhioù tremenet.
Gouenn digant da dad hag e konto dit,
digant da gozhidi hag e lavarint dit:
Pa roe an Uheldañ o herozh d'ar pobloù,
pa zispantie mibion Adam,
E verkas harzoù ar broioù,
goude niveriñ mibion Israel.
Lodenn an Aotrou e oa e bobl,
Yakob, kordennad e herezh.
Kavet an ur vro: ar gouelec'h,
e goulonder yudus an dezrezh,
E ra war e dro, intent outañ, evashaat warnañ,
evel ouzh mabig e lagad.
Evel un erer o tihun e noizhiad,
war e ervedigoù o plavañ,
E tispleg e zivaskell, e kemer anezhañ,
hag hen doug war e stuc'h.
An Aotrou e-unan a gaso anezhañ,
hap ma vo gantañ doue estren.

S. 8 Ant. : Na bras hoc'h anv, Aotrou, hon Doue, war an douar a-bezh!

Komz Doue Rm 12, 18, 20, 21 Bezit e peoc'h gant an holl dud,
na glaskit ket ober justis evidoc'h
hoc'h-unan. Mar en deus naon da enebour, ro dezhañ da zebriñ, mar en
deus sec'hed, ro dezhañ da evañ. Na vez ket trec'het gant an droug,
met ganj ar mad bez trec'h war an droug.

Ho kervel a ran a greiz kalon, respontit din, Aotrou.

V/- Mirout a rin ho polentezioù, respontit din, Aotrou.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Skleri-jennit, Aotrou, ar re a zo en deñvalijenn;
renit hor c'hammedoù war hent ar peoc'h.

Fedomp Doue hon Tad a gar e vugale ha na zispriiz ket o fedemoù, lavaromp dezhañ a galon izel:

R/- Ho pet soñj, Aotrou, eus ho pobl.

Sadorn 2

- En ur lidañ, er beure-mañ, dasorc'hidigezh ho Mab, ra vimp gouest da resev frouezh e zasprenidigezh. R/
- Grit dimp hiziv reiñ testeni d'ho Mab Jezuz, ha kinnig dezhañ ar sakrifik a blij deoc'h-c'hwi. R/
- Deskit dimp anavezout ho skeudenn en hor breudeur hag ho servijañ e pep hini anezho. R/
- Hol leugnit gant ho trugarez, evit ma kavimp ennoc'h hon eurvad. R/

Kempedenn

O Krist, adsked gloar an Tad ha skeudenn barfet an hini en deus ho kanet, en em ziskouezet oc'h e natur an den marvel, sklerijennet hoc'h eus dre an Aviel teñvalijenn hon diouiziegezh; ho trugarekaat a reomp evit ho truez divent he deus graet deoc'h diskenn betek ennomp, hoc'h anzav a reomp evel sklerijenn ha buhez ar bed hag hoc'h azauliñ a reomp evel hon Aotrou hag hon Doue. C'hwi a vev hag a ren...

OPIS KREISTEIZ

Meulgan

O C'hwi a chom bepred digemm,
Mostr an amzer, Doue fidel,
An deiz a deuz, an noz a zeu;
Hor mirit dindan ho kwarez.

Roit dimp ar vuhez didermen,
Hag ar gozhni hep teñvalded;
Grit ma paro warnomp erfin
Ho kload da zevezh ho tistro.

Hor selaouit, Hollo'halloudeg,
Dre Jezuz, ho Mab unganet,
A ren gant ar Spered Santel,
A viskoazh hag er c'hantvedoù.

S. 118, 81-88 Ant. : Ur goudor, Aotrou, ez oc'h evidon.
S. 60 ha 63

Komz Doue 1 R 2, 2-3

Bez kreñv ha bez un den! Mir reolenn Doue en ur vont gant e hentoù, en ur virout e urzhioù, e c'houro'hennoù, e setañsoù hag e destenioù evel 'maint skrivet e lezenn Voizez, evit ober berzh e kement tra a ri, e kement tra a embregi.

V/- Grit din, Aotrou, anavezout hoc'h hentoù.
R/- Deskit din ho kwanodennoù.

Kempedenn

Hor selaouit, Aotrou, ha roit dimp ar peoc'h asur a c'houlennomp; evel-se, o klask ac'hanoc'h bemdez hor buhez-pad, harpet gant pedennoù ar Werc'hez Vari, e tegouezhimp hep skoilh betek ennoc'h. Dre Jezuz Krist.

OPIS AN ABARDAEZ

Meulgan

R/- Joa ha sklaerder
Ar c'hloar beurbadel eus an Tad,
An Uhel-meurbet, ar Santel-meurbet,
O Jezuz Krist!

Tizhet ganimp penn an devezh,
Ewelomp ho sklaerder en abardaez,
Hag e kanomp an Tad, ar Mab,
Ha Spered Santel Doue. R/

Dellezek oc'h da vout kanet,
En holl amzerioù gant mouezhioù santel,
Mab Doue hag a ro buhez;
Deoc'h e ro gloar an hollved. R/

S. 115 Ant. : Seveniñ a rin va gouestloù d'an Aotrou dirak holl dud e boblad.
S. 112 - : Ra vo benniget anv an Aotrou, a-vremañ da holl viken.
Kant. Fil 2, 6-11: Krist, marvet evit hor pec'hedoù, Krist adsavet evit hor buhez!

Jezuz hag a oa Doue a stumm
Ne sellas ket evel e dra
Chom en e renk, par da Zoue;

R/- Jezuz Krist eo an Aotrou
Evit gloar Doue an Tad.

Met da netra eo 'n em laket
Dre gemer stumm ar servijer
Ha dont da vezañ 'giz an dud. R/

Goude 'n em ziskouez 'vel un den
En deus c'hoazh en em izelaet
Dre sentiñ betek ar marv,
Betek ar marv war ar Groaz. R/

Setu perak en deus Doue
Uhelsavet anezhañ
Ha roet dezhañ an anv
A zo a-us da bep anv. R/

Ma vo pep glin en anv Jezuz
O plegañ e lein an neñvoù,
War an douar hag e bed an Ankoù

Evit ma tisklerio pep teod
Eo Jezuz Krist eo an Aotrou
Evit gloar Doue an Tad.

Komz Doue Hb 13, 20-21

Doue ar peoc'h, hag en deus degaset en-dro eus a-douez ar ro varv, an hini a zo deuet da vezañ dre wad un Englev peurbadus, Pastor an deñved, ar Pastor meur, hon Aotrou Jezuz, Doue ar peoc'h d'ho lakaio d'ober ar mad e pep dugouezh ha da gas e youl da benn, ma seveno ennomp ar pezh a blij d'e zaulagad, dre Jezuz Krist, a zo dleet ar c'hloar dezhañ evit kantvedoù ar c'hantvedoù. Amen!

Hon dasprenet hoc'h eus, Aotrou, gant priz ho kwañ.

V/- Tud a bep ouenn, yezh, pobl, broad, gant priz ho kwañ.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. : Va ene a ganmeul an Aotrou, adsevel a ra an dud izel.

Pedomp Doue hon Tad a gar e vugale ha na zispriiz ket o fedennoù; lavaromp dezhañ a galon izel:

R/- Hor fiziañs, Aotrou, a ziskuzh warnoc'h.

- Tad hollo'halloudek ha trugarezus, ho pediñ a reomp evit ar Pab..., gwarezit anezhañ hag e santolait gant ho kras. R/
- Sellit gant madelezh an dud hep lojeiz, ma kavint un ti da chom ennañ. R/

Sul 2

- Lieskementit frouezh an douar, m'en devo pep den e led a vara pemdezick. R/
- Ra sello ar glañvourion ouzh Pasion Jezuz gant feiz, ma kavint ennañ frealzidigezh. R/
- Diskouezet d'an Anaon ho karantez hollo'halloudek: digorit dezho doriñ ar baradoz. R/

Kompedenn ar Sul (P. 105...)



Sul 3

=====

S U L 3

=====

=====
OPIS AL LENNADENNNOU
=====

- S. 144 Ant. I : Bemdez e lavarin bennozh deoc'h, alleluia!
 - II : Ho rouantelesh, Aotrou, a bad da viken, alleluia!
 - III : An Aotrou a zo gwirion en e gomzoù ha santel en e holl oberoù.

V/- Ma virit va c'homzoù,
R/- E ouiot ez oc'h va diskibion.

=====
OPIS AR BEURE
=====

- S. 94 R/- An Aotrou, hon Doue, douit, zoulomp anwezhañ
Meulgan Doue a ren! Poblou, youc'hit gant levenez, alleluia!
 Ar vuhez he deus trec'het war ar marv,
 Ar Groaz he deus trec'het war an infern!

R/- Alleluia, alleluia, alleluia! Aotrou, meuleudi deoc'h!
 Setu deiz an Aotrou, deiz a levenez, alleluia!
 Ar vuhez he deus trec'het war ar marv,
 Ar Groaz he deus trec'het war an infern. R/
 Setu ar burzhud graet evidomp gant an Aotrou,
 Benniget ra vezo e anv, alleluia!
 Salver Jezuz, karantez-vour ar bed! R/

- S. 92 Ant. : Alleluia! An Aotrou a ren, gwisket a veurdez, alleluia,
 alleluia!

Kant. Dn 3, 57-88, 56 Ant. : E-kreiz an tan e kane ar vugale: bennozh da Zoue, alleluia!

C'hwi holl, oberoù an Aotrou, benniget an Aotrou:

R/- Dezhañ klod uhel, meuleudi beurbadel!

- C'hwi holl, Aeled an Aotrou, benniget an Aotrou. R/
 Ha c'hwi, neñvoù an Aotrou, benniget an Aotrou,
 Ha c'hwi, doueier dreist an eabl, benniget an Aotrou,
 C'hwi holl, galloudoù an Aotrou, - - R/
 Ha c'hwi heol ha loar, benniget an Aotrou,
 Ha c'hwi, stered an neñv, - - R/
 C'hwi holl, glaveier ha glizheier, - - R/
 C'hwi holl, aezhemoù hag avelioù, benniget an Aotrou,
 Ha c'hwi, tan ha tomder, - - R/
 Ha c'hwi, yenijenn ha gwrez, - - R/
 Ha c'hwi, glizh ha grizilh, benniget an Aotrou,
 Ha c'hwi, rev ha yenijenn, - - R/
 Ha c'hwi, skorn hag ere'h, - - R/
 Ha c'hwi, nozvezhioù ha devezhioù, benniget an Aotrou. R/
 Ha c'hwi, sklerijenn ha teñvalijenn, - - R/
 Ha c'hwi, luc'had ha koumoul, - - R/
 Ra vennigo an douar an Aotrou. R/

Sul 3

Ha c'hwi, menezioù ha torgennoù, benniget an Aotrou,
 Ha c'hwi, planternoù an douar, - - R/
 Ha c'hwi, stivelloù ha mammannoù, - -
 Ha c'hwi, morioù ha stêrioù, benniget an Aotrou,
 Ha c'hwi, morloened ha peskad, - -
 Ha c'hwi holl, evned en cahl, - - R/
 C'hwi holl, anevaled ha chatal, - -
 Ha c'hwi, bugale an dud, benniget an Aotrou. R/
 Pobl Israel, bennig an Aotrou,
 Ha c'hwi, beleion an Aotrou, benniget an Aotrou, R/
 Ha c'hwi, servijerion an Aotrou - -
 Speredoù hag eneoù an dud just, benniget an Aotrou,
 Tud santel hag izel a galon, - - R/
 Ananias, Azarias, ha Mizaël, - -
 Bezit benniget, Aotrou, en neñv: deoc'h klod uhel, meuloudi
 beurbadel!

S. 148 Ant. : Alleluia! meulit an Aotrou en neñvoù, alleluia, alleluia!

Komz Doue Ez 37, 12-14 Eval-hen e komz an Aotrou Doue: me
 a zigoro ho peziou, a savo ac'ha-
 noc'h eus ho peziou, va fobl, hag e kasin ac'hanoc'h da zouar Israel.
 Hag e c'uiot ez on an Aotrou, pa zigorin ho peziou, hag e savin
 ac'hanoc'h eus ho peziou, va fobl. Lakaat a rin va spered ennoc'h
 hag e rovet, hag e rin deoc'h ohom war ho touar, hag e c'uiot eo me,
 an Aotrou, eo em eus prometet ha graet se, diougan an Aotrou Doue.

Roit d'an Aotrou gloar ha galloud, alleluia, alleluia!

V/- Roit dezhañ gloar e anv, alleluia, alleluia!
 V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Setu ma ran an hollved nevez; me eo an alpha hag an omega,
 an derou hag an dibenn.

Pedomp Doue hon Tad a selaou ar re a glask anezhañ,
 ha lavaromp gant fiziñs:

R/- Klod deoc'h er c'hantvedoù!

- Bezit benniget, Doue hor sklerijenn, rak hon dihum a rit d'an
 deiz-mañ nevez evit ho kloar. R/
- Dre adsav ho Mab d'ar vuhez hoc'h eus sklerijennet ar bed, ra
 skuilho hoc'h Iliz ar sklerijenn-se war an holl dud. R/
- Dre ho Spered hoc'h eus sklerijennet diskibion ho Mab, kasit
 c'hoazh ho Spered war hoc'h Iliz evit ma chomo feal deoc'h-c'hwi. R/
- Sklerijenn ar broadoù, ho pet soñj eus ar re a zo c'hoazh dindan
 teñvalded ar falskredennoù, digorit dezho o daoulagad, ma c'hellint
 hoc'h anavezout, c'hwi an Doue nemedoc'h gwirion. R/

Kempedenn ar Sul (P. 105 ...)

OPIS KREñVEIZ

Meulgan

Sed an amzer, Spered Santel, Ra vo hon teod hag hor c'halon,
 Ma teuit er galon fidel, Hon nerzh hag ivez hor buhez,
 A-unan gant an Tad, ar Mab, Holl entanet a garantez,
 Evit skuilhañ ho sklerijenn. Evit an holl dud a garit.

Sul 3

Hor selaouit, Hollc'halloudeg,
 Dre Jezuz, ho Mab unganet,
 A ren gant ar Spered Santel,
 A-holl-viskoazh da virviken.

S. 117 Ant. : An Aotrou Doue hor sklerijenna.

Komz Doue Kol 1, 12-13 Trugarekait gant levezeg an Tad en deus
 ho laket barrak da gaout lod en herezh
 ar Sent er sklerijenn, eñ hag en deus hon tennet eus galloud an deñ-
 valienn evit hon degas e rouantelezh e Vab karet, hon eus ennañ an
 dasprenidigezh, ar pardon eus hor pec'hedoù.

V/- Setu an deiz graet gant an Aotrou.
 R/- Deiz a joa hag a levezeg.

Kempedenn ar Sul (P. 105 ...)

OPIS AN ABARDAEZ

Meulgan

R/- Aotrou, trec'h oc'h bet war ar marv,
 Ha graet hoc'h eus d'ar vuhez skediñ
 Er beurbadelañ.

Adsavet eo ar C'hrist a-douez ar re varv, Adsavet eo ar C'hrist a-douez ar re varv,
 Prevedit ar re a zo chomet kousket. Ha lonket eo bet ar marv gant ar vuhez!
 Trec'h eo ar vuhez war ar marv. R/ Emen, o marv, emañ da drec'h? R/

Adsavet eo ar C'hrist a-douez ar re varv!
 D'an Doue Salver rentomp gras da viken,
 En anv an Aotrou Jezuz Krist. R/

S. 109 Ant. : Diougan an Aotrou d'am mestr: azev en tu dehou din.
S. 110 - : Bras eo oberoù an Aotrou, dellezek da vout anavetha karet.
Kant. Disk. 19, 1.2.5.6.7 Ant. : Doue a ren, ra drido an douar, alleluia!

R/- Alleluia, alleluia!

Ar silvidigezh, ar c'hloar, hag ar galloud d'hon Doue, alleluia!
 Gwirion ha reizh e varnedigezhioù. R/

Meulit hon Doue, servijerion an Aotrou, alleluia!
 C'hwi holl hag a zouj anezhañ, bihan ha bras. R/

Setu ma ren evel Roue, an Aotrou hon Doue, mestr an hollved, alleluia!
 Bezomp laouen ha tridomp, reomp gloar dezhañ. R/

Rak setu deuet eured an Oan, alleluia!
 Hag e bried a zo en em gompennet. R/

Komz Doue I P 1, 3-5 Ra vo benniget Doue, Tad hon Aotrou Jezuz
 Krist, en deus hon laket en e garantez
 vras, da vezañ adganet dre adsavidigezh Jezuz Krist eus a-douez ar
 re varv, evit na esperañs a vuhez: rak gortoz a reomp un herezh
 n'hell ket na breinañ, na gweñviñ, na bezañ saotret, an hini miret
 en neñvoù, evidoc'h-c'hwi ar re ziwallet dre ar feiz gant galloud
 Doue, a-benn ar silvidigezh prest d'en em ziskleriañ e fin an amser.

Ra vo benniget anv an Aotrou, alleluia, alleluia!
 V/- Bremañ ha da viken, alleluia, alleluia!
 V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. Ra vevlo va ene an Aotrou: adsevel ara ar re a gouezh,
 karout a ra an dud just.

Sul - Lun 3

Pedomp Doue hor Mestr a selaou pedenn an dud izel ha lavaromp gant feiz:

R/- N'ankouait ket, Aotrou, garmadenn ar reuzeudion.

- Ho trugarekaat a reomp, Aotrou hon Doue, rak diskouez a rit ho kalloud e krouidigezh ar bed, diskouezit ivez ho ragevezhe buhez ar bed. R/
- Dre gomz ho Mab a drec'h war ar marv hon diwallit diouzh an dizesper hag an aon. R/
- Roit d'an holl dud a gar hag a heuilh ar reizhder ar c'hraes da genlabourat evit diazezañ ar bed war ur peoc'h gwirion. R/
- Skoazellet an dud ankeniet; frealzit ar reuzeudion, roit frankiz d'ar brizonidi, magit an dud naoniek, kemmerhit ar re n'o deus ken esper: enno holl grit lugerminsked an trec'h dre ar groaz. R/
- D'an trede deiz hoc'h eus adsavet ho Mab er c'hloar, lakit ivez an Anaon da vevañ ganeoc'h. R/

Kempedenn ar Sul (P. 105 ...)

L U N 3

OPIS AL LENNADENNOU

- S. 49 Ant. I : Ra zeuio hon Doue ha ne davo ket.
 - II : Kinnigit da Zoue ur sakrifis a veuleudi.
 - III : An drugarez eo a feil din ha 'eoket ar sakrifisoù.
 V/- Selaouit va lezenn, o va fobl.
 R/- Me eo an Aotrou, ho Toue.

OPIS AR BEURE

S. 94 R/- Deuit, youc'homp gant joa evit an Aotrou.

Moulgan

Heol o sevel
 War an dud gourvezet er marv,
 Deuet oc'h 'vit ma welo ar re na walont ket,
 Ar gweled 'roit d'an den dall,
 Deuit, Salver Jezus!
 Sklerijenn war ar bed:
 Ma kanimp evit ho tistro:

R/- Ra vo benniget en anv an Aotrou an hini a zeu da salvif e bobl.

Can Pask karet,
 Can hag a salv eus an harlu,
 Deuet oc'h evit dasprenañ an dañved kollet
 Ha paeañ 'rejoc'h priz ar gwad,
 Deuit Salver Jezus!
 Meser an dourioù bev:
 Ma kanimp evit ho tistro: R/

S. 83 Ant. : Evurus ar re a zo o chom en ho ti, Aotrou.

Kant. Iz 2, 2-5 Ant. : Deuit, eomp da di an Aotrou.

Lun 3

Setu ma vo lakez diwezhatoc'h menez ti Doue e penn ar menezioù an uhelañ e-touez ar runioù,
 Hag e tredo war-zu ennañ an holl bobloù,
 dont a ray pobloù niverus.
 Hag e lavarint: eomp war laez da venez Doue,
 da di Doue Yakob;
 Ma kelenno dimp e hentoù,
 hag e kerzhimp war e roudoù.
 Rak eus a Sion e teu al lezenn,
 eus a Jeruzalem komzoù Doue.
 Barn a ray etre ar pobloù,
 o reiñ kental da vroadoù niverus.
 Hag e vo goveliet ar c'hlezeier e soc'hioù,
 hag ar goafioù e filzier.
 Ne savo ket ur vro ar c'hleze enep d'un all,
 ne vo ken desket ober brezel.
 Deuit, ti Yakob,
 kerzhomp e sklerijenn an Aotrou.

S. 95 Ant. : Kanomp d'an Aotrou ur c'han nevez, embannit a zeiz da zeiz e silvidigezh.

Komz Doue Jk 2, 12-13

En ho komzoù hag en ho toareoù en em renit evel tud a dle bezañ barnet diwar al lezenn a frankiz. Didruet e vo ar varn evit an neb na vo ket bet trugarezus, met an drugarez a zo trec'h war ar varn.

Pareit va ene, Aotrou, rak pec'het em eus enep deoc'h.

V/- Lavaret em eus: truez ouzhin, Aotrou, rak pec'het em eus ...
 V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Ra vo benniget an Aotrou, Doue Israel, dre m'eo deuet da welout ha da zaspren e bobl.

Pedomp Doue hon Tad a selaou ar re a glask anezhañ, ha lavaromp gant fiziañs:

R/- Benniget oc'h, Aotrou, da virviken.

- Bezit benniget, Krouer an hollved, rak graet hoc'h eus d'ar bed-se bezañ hag hon dalc'het hoc'h eus en buhez. R/
- Ho pet soñj ac'hanomp, ni hag a zo o vont da adkregiñ gant al labour, dre hon lakaat da genlabourat ganeoc'h grit dimp karout ho polontez. R/
- Ra vezo talvoudus d'hor breudeur hol labour pemdeziek, evit ma sevenimp ganto hag evito ur bed da blijout deoc'h. R/
- Dimp ha d'ar re a zarempredimp hiziv roit ar joa hag ar peoc'h. R/

Kempedenn

Aotrou Doue, Roue an neñv hag andouar, renit ha santelait, urzhiit ha sturiiit hiziv hor c'halonoù hag hor c'horfoù, hor soñjoù, hor c'homzoù hag hon oberoù; grit dimp bevañ hervez ho polontez hag oberiañ hervez hoc'h urzhioù, evit ma tougimp, bremañ ha da viken, frouezh ar silvidigezh hag ar frankiz, o c'hwi, Salver ar bed, a vev hag a ren...

Lun 3
Meulgan

OPIS KREISTEIZ
=====

Emañ an deiz e barr e sked,
Leun eo an douar gant ho kloar;
Ni hoc'h ador, Doue nerzhus,
E-kreiz splannder ho sklerijenn.
Mougit ennomp tan ar pec'hed,
Ha birvidigezh ar gonnar;
Lakit ennomp ho karantez,
Ra zeuy ho peoc'h d'hon unaniñ.

Hor selacuit, Hollc'halloudezh,
Dre Jezuz, ho Mab unganet,
A ren gant ar Spered Santel,
A-holl-viskoazh da virviken.

S. 118, 89-96 Ant. : Aotrou, c'hwi a zo va esperadal va yaouankiz.
S. 70

Komz Doue Kol 1, 21-22 Ha c'hwi ivez hag a oa deuet gwechall
da vezañ evit Doue estrenion hag ene-
bourion dre ho soñjoù hag hoc'h oberoù fall, setu bremañ m'en deus
hoc'h adunvanet gantañ e korf-den e Vab, dre e varv, evit holakaat
da chom dirazañ santel, dinamm ha didamall.
V/- Deuit, gwelit oberenn an Aotrou.
R/- War an douar en deus graet burzhudoù.

Kempedenn Mestr ar winienn hag an eost, c'hwi hag a lodenna
ar c'hargoù hag a ro ar gopr reizh, hor sikourit
da zougenn pouez an deiz hag ar wrez hep tabutal enep ho
polontez. Dre J. K.

OPIS AN ABARDAEZ
=====

Meulgan R/- Joa ha sklaerder
Ar c'hloar beurbadel eus an Tad,
An Uhel-murbet, ar Santel-murbet,
O Jezuz Krist!
Tizhet ganimp penn an devezh,
E welomp ho sklaerder en abardaez,
Hag e kanomp an Tad, ar Mab,
Ha Spered Santel Doue. R/
Dellezek oc'h da vout kanet,
En holl amzerioù gant mouezhioù
santel,
Mab Doue hag a ro buhez:
Deoc'h e ro gloar an hollved. R/

S. 122 Ant. : War-zu ennoc'h e savomp hon daoulagad, war-zu ennoc'h
hag a chom en neñvoh.

S. 123 - : Horskoazell a zo en anv an Aotrou, oberour an neñv hag an douar.
Kant. Ef 1, 5-10 Ra vo benniget Doue, Tad hon Aotrou Jezuz Krist,
eñ hag en deus hor benniget ha roet dimp pep bennozh
spredel, a-holl-viskoazh, er C'hrist.

R/- Bennozh deoc'h-c'hwi, hon Tad, c'hwi hag hoc'h eus
hor benniget er C'hrist.

Rak hon dibabet en deus ennañ a-ziaarak krouidigezh
ar bed, da vezañ santel ha dinamm, er garantez. R/

En ur rakdivizout diwar hor penn e vefemp advibion
dezhañ, dre Jezuz Krist, setu petra eo bet plijet
gantañ ober en e vadelezh. R/

Evit ma vefe kanneulet splannder ar c'hraas en deus
roet dimp en e Vab muiañ-karet, hon eus ennañ, dre e wad,
an daspren eus hor sklavelezh, ar pardon eus hor pe-
c'hedoù. R/

Lun - Meurzh 3

Sed aze pinvidigezh ar c'hraas-se en deus an Tad skuilhet warnomp gant
largentez, e pep furnez ha skiant, en ur ziskuliañ dimp mister e youl,
ar mennad madelezhus-se en devoa rakdivizet ennañ e-uman. R/

Evit e gas da benn pa vefe deuet leunder an amzerioù, da lavarout eo,
lakaat ar C'hrist da vezañ penn pep tra hag ennañ adunvaniñ kement a zo
en neñv ha kement a zo war an douar. R/

Komz Doue Jk 4, 11-12 Breudeur, na zroukkomzit ket an eil enep
egile. An hini a zroukkomz diwar-benn e

vreur, pe a varn anezhañ, a zroukkomz diwar-benn al Lezenn hag a
varn al Lezenn. Hogen, mar barnes al Lezenn, n'out mui an oberour
anezhi, met he barnes. N'eus avat nemet ul lezennour hag ur barnes
hepmuiken: an Hini a c'hell salvifi pe goll. Te avat, piv out-te evit
barn da nesañ?

Etre ho taouarn, Aotrou, e lakan va spered.

V/- C'hwi a zo hon dasprener, Doue a wirionez, etre ho taouarn...
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. : Va ene a gameul an Aotrou ha va spered a drid e Doue va Salver.

Pedomp Doue hor Mestr a selao pedenn an dud izel,
ha lavaromp dezhañ gant feiz:

R/- Benniget ho pobl, Aotrou.

- Bezit benniget, Aotrou, rak hon dasprenet hoc'h eus diouzh sklave-
lezh ar pec'hed dre wad ho Mab unganet; roit dimp ar frankiz hag
ar c'hloar a virit d'ho pugale. R/
- Roit ho kras d'hon Eskob... ha da holl Eskibion an Iliz, evit ma
lidint ho misterioù er joa ha gant gred. R/
- D'an holl re a striv evit anavezout ar wirionez, grit dezho klask
anezhi gant ar c'hoant d'he c'havout, ha kavout anezhi gant ar
c'hoant d'he c'hilask a-nevez. R/
- Difennit an emzivad, an intañvezed hag an holl dud digenvez,
pourvezit d' o holl ezhommoù. R/
- Degenerit gant madelezh ar re o deus kuitaet ar bed-mañ er Gêr
santel e-lec'h ma viot holl en holl. R/

Kempedenn Ra savo hor pedenn-noz betek ennoc'h, Aotrou,
Tad santel-murbet, Doue beurbadel hag hollc'halloudek; ra
ziskenno warnomp ho pennozh evit ma c'hellimp gant ho sikour,
a-vremañ ha da viken, bezañ salvet. Dre Jezuz Krist.

=====

M E U R Z H 3

=====

OPIS AL LENNADENNOU
=====

S. 67 Ant. I : Ra savo Doue ha setu stlabezet e enebourion.
- II : Hon Doue a zo evidomp un Doue a frankiz, an Aotrou a denn eus
- III : Rouantelezhioù an douar, kanit d'an Aotrou.
V/- Kas a ra e Verb war an douar.
R/- Prim e red e lavar.

Meurzh 3

S. 94 R/- Hor Roue eo an Aotrou: deuit, azeulomp anezhañ.

Meulgan

Oan Pask karet,
Oan hag a skr eus an harlu,
Deuet oc'h evit dasprenañ an deñved kollet,
Ha paseañ 'rejec'h priz ar gwad,
Deuit, Salver Jezuz!
Mesaer an dourioù bev;
Ma kanimp evit ho tistro:

R/- Ra vo benniget en anv Doue
an hini a zeu da salviñ e bobl.

Kariad Doue,
Ennoc'h an Tad 'gav levez,ez,
Deuet oc'h evit badeziñ an den er marv,
Hag ar Yordan 'walc'has ho korf.
Deuit, Salver Jezuz!
Reizh ar rouantelezh;
Ma kanimp evit ho tistro: R/

S. 84 Ant.: Uhelveulit an Aotrou hon Doue, stouit dirazañ.
Kant. Iz 26, 1-10.12 Ant.: Ho klask a ran, Aotrou, a-dal ar goulou-deiz;
ho c'hoantaat a ra va ene.

Hor C'hêr-greñv eo Sion,
'vel ramparzh ha moger-zifenn hon eus ar Salver.
Digorit an dorjoù ma teulo ar bobl feal
he deus dalc'het d'ar feiz.
An emglev skoulmet a zo miret, sevenet ar feur-skrid,
ha warnomp en em harpont.
Ho pet fiziañs en Aotrou da virviken,
en Doue, ar Roc'h peurbad.
Izelaet en deus annezidi ar grec'hienn, ar Gêr uhel,
he diskaret en deus, taolet d'an douar, skoet er poultr.
He mac'hellet en deus dindan treid an dud keizh
ha kammedoù ar beorion.
Un hent eum a zigorit evit an den reizh,
ha kompez evit an den just, hent ho pamedigezhioù, Aotrou.
En hoc'h anv hepken ec'h esperomp,
ha c'hoant an ene eo an eñvor ac'hanoc'h.
E-kerz an noz e vez va ene euzh ho c'hoantaat
ha va spered emnon ho klask evel ar goulou-deiz.
Pa vo ho justis war an douar,
annezidi ar bed a zesko ar reizhder.
Goude trueziñ ouzh ar re fallakr, ne zeskont ket ar reizhder,
e bro an oneztiz e reont tonfedoù, ne welont ket meurdez an Aotrou.
Aotrou, reiñ a rit dimp ar peoc'h,
zoken hon oberoù eo c'hwi a seven anezho.

S. 66 Ant.: Deoc'h, o Doue, meuleudi ar pobloù, deoc'h-c'hwi meuleudi
an holl bobloù.

Komz Doue I Yn 4, 14-15

Ha ni hon eus arvestet ouzh an den-se,
hag e testeniom en deus an Tad dega-
set e Vab da vezañ Salver ar bed. An neb a ziskleir ez eo Jezuz Mab
Doue, e chom Doue ennañ hag eñ en Doue.

O Krist, Mab an Doue bev, ho pet truez ouzhimp.

Meurzh 3

V/- C'hwi hag a zo azezet en tu dehou d'an Tad, ho pet truez
ouzhimp.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Hor salvit, Aotrou, eus daouarn hon holl enebourion.

Padomp Doue hon Tad, a selaou ar re a glask anezhañ,
ha lavaromp gant fiziañs:

R/- C'hwi 'zo evidomp, Aotrou, buhez ha silvidigezh.

- Aotrou, hor repu hag hon nerzh, klevit meuleudi hoc'h Iliz
e derou an deiz-mañ; deskit dezhi ho kanmeulif hep paouez. R/
- Ennoc'h e lakomp hon esperañs hag hor feiz: ra vosevenet
hor spi. R/
- Gwelit hor gwander ha deuit d'hor sikour: rak hep ho
skoazell n'hellomp ober netra. R/
- Ho pet soñj eus ar beorion hag eus ar re vihan; grit na
vint ket gwasket gant an deiz-nevez-mañ, met ma tegaso
dezh ho kennerzh ha levez. R/

Kempedenn

Aotrou, hon Doue, c'hwi hag a ro dimp skleri-
jenn ar vuhez-mañ hag a bromet hini ar bed
all, grit dimp labourat en doare ma tremeno mat an devezh-mañ,
ha peogwir ho kemeromp evel sturier, grit dimp mirout gant ho
kras ho kourc'hemennoù. Dre J. K.

OFIS KREISTEIZ
=====

Meulgan

Sed an amzer, Spered Santel, Ra vohon teod hag hor c'halon,
Ma teuit er galon fidel, Hon nerzh hag ivez hor buhez,
A-unan gant an Tad, ar Mab, Holl entanet a garantez,
Evit skuilhañ ho sklerijenn. Evit an holl dud a garit.

Hor selaouit, Hollo'halloudeg,
Dre Jezuz, ho Mab unganet,
A ran gant ar Spered Santel,
A-holl-viskoazh da virviken.

S. 118, 17-24 Ant.: Va henchit, Aotrou, en ho kwirionez.

S. 24

Komz Doue Am 4, 13

Eñ eo en deus stummet ar menezioù, krouet
an avel, diskleriet d'an den e soñj. Ober
a ra eus ar goulou-deiz teñvalijenn, hag e kerzh war grec'hioù an
douar. Aotrou, Doue an hollved eo e anv.

V/- Bezit va sikour, n'am dilezit ket.
R/- N'am dilaoskit ket, Doue va silvidigezh.

Kempedenn

Aotrou, skuilhit ho sklerijenn en hor spere-
doù, evit ma vimp bepred fidel d'ho servijañ,
peogwir eo c'hwi hoc'h eus hor c'hrouet en ho furnez, hag a
ren ac'hanomp gant karantez. Dre Jezuz Krist.

Meurzh 3

Meulgan

- 1 - Doue 'reas d'ar bed tarzhañ
Eus an noz er c'hentañ beure,
E-kreiz hon noz e rit skediñ
An anaoudegezh eus ho kloar.
- 2 - C'hwi hag a zo skeudenn ho Tad,
Ha splannder e gened skedus;
War ho tremm-c'hwi, o Jezuz Krist,
E sked da viken joa ar bed.
- 3 - C'hwi 'zo hoc'h-unan ar sklaerded
A luc'h e don ul lec'h teñval,
C'hwi 'zo goulouhor o'hammedoù,
E-kreiz un hent a deñvalded.
- 4 - Pa falla pep tra e chomit,
Pa steuz pep tra, diwrall 'vezit,
Pa zeu an noz, splannañ a rit
E-barzh kalon pep krouadur.

5 - Ha pa savo war an hollved
Ar goulou-deiz a zo o tont,
C'hwi a reno er geoded-se,
Ma teuz diouti an deñvalded.

S. 125 Ant. : Ar re a had en ur cuslañ a ved en ur ganañ.
S. 124 - : An Aotrou a zo en-dro d'e bobl a vremañ ha da viken.

Kant. Disk. 4, 11; 5, 9.10.12

Dellezek oc'h, c'hwi hon Aotrou hag hon Doue,
da resev ar c'hlod, an enor hag ar galloud.

R/- Galloud, enor ha gloar da Oan Doue.

Rak c'hwi eo hoc'h eus krouet pep tra ha dre ho polontez
int deuet da vezañ hag int bet krouet. R/

Dellezek oc'h, Aotrou, da resev al levr ha da derriñ e
sielloù. R/

Dre maz oc'h bet lazhet ha m'hoc'h eus dasprenet ha gonezet
da Zeue gant ho kwad tud eus pep meuriad, eus pep yezh, eus
pep pobl hag eus pep broad. R/

Dre m'hoc'h eus graet anezho d'hon Doue ur rouantelezh a
veleion da vezañ rouaned war an douar. R/

Dellezek eo an Oan bet lazhet da resev ar galloud, ar bin-
vidigezh, ar furnez, an nerzh, an enor, ar c'hloar, ar
veulleudi. R/

Kcmz Doue Jk 2, 5 Selaouit, va breudeur muiañ-karet, hag-eñ
n'en deus ket Doue dibabet ar re baour
hervez ar bed, da vezañ pinvidik er feiz hag heritourion ar Rou-
antelezh-se en deus prometet d'ar re a gar anezhañ?

En devezh e enkrez e klaskan an Aotrou, en noz ec'h astennan
va daouarn dizehan.

V/- Koumaat a ran taolioù-kaer an Aotrou, soñjal a ran en e
vurzhudoù a-wechall, en noz ec'h astennan va daouarn dizehan.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. : Va spered a drid e Doue, va Salver.

Aspedomp Doue hor Mestr a selaou pedenn an dud izel,
ha lavaromp gant feiz:

R/- Grit ma teuo ho Rouantelezh, Aotrou.

- Bezit benniget, Aotrou, rak er C'hrist hoc'h eus hol leuniet gant
pinvidigezhioù ar gomz hag ar skiant. R/

- Mestr ar c'halloudeion, roit ho furnez d'ar re a c'houarn ac'ha-
nomp, ho kuzul da sklerijennañ o c'halonoù hag o oberoù. R/

OFIS AN ABARDAEZ

Meurzh-Merc'her 3

- C'hwi hag a laka an arzourion da vannañ ho kened, grit ma tegaso
o oberoù an esper hag ar joa d'ar bed. R/
- Prometet hoc'h eus adsevel an dud d'ar vuhez, dre ho Mab, en deiz
diwezhañ, n'ankouait ket da viken ar re a zo marv. R/

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag a sklerijenna an noz
hag a ra skediñ ar sklerijenn war-lec'h an
deñvalijenn, grit dimp tremen an nozvezh-mañ pell diouzh ar-
gadoù an enebour ha gallout ho trugarekaat antronoz-vintin.
Dre Jezuz Krist.

M E R C ' H E R 3

OFIS AL LENNADENNOU

- S. 88 Ant. I : Madelezh ha fealded a gerzh dirazoc'h, Aotrou.
 - II : C'hwi a zo Mab Doue, eus gouenn David, hervez ar gwad.
 - III : Diazezet em eus evit atavlignez David va servijer.
- V/- Ennoc'h, Aotrou, emañ andon ar vuhez.
R/- Dre ho sklerijenn e welomp ar sklerijenn.

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- Hon dieubeten deus an Aotrou, deuit, azeulomp anezhañ.

Meulgan

Roc'hell nevez,
Ma teu diouti Stêr ar vuhez,
Deuet oc'h evit dourañ ar re a gred ennoc'h,
Hag ho kalon 'lezit digor.
Deuit, Salver Jezuz!
O Feunteun diheskus,
Ma kanimp evit ho tistro:

R/- Ra vo benniget en anv an Aotrou
añ hini a zeu da salviñ e bobl.

Koabrenn a dan,
War an dud o kerzhout en noz,
Deuet oc'h evit diskouez an hent davet Doue,
Ho kalvar a zigor an neñv.
Deuit, Salver Jezuz!
C'hwi 'zo bezañs ho Tad,
Ma kanimp evit ho tistro: R/

S. 85 Ant. : Selaouit va fedenn, Aotrou, va dieubit.
Kant. Iz 33, 13-18 Ant. : Evurus an neb a gerzh er justis.

C'hwi a zo pell, selaouit ar pezh an eus graet,
ha c'hwi a zo tost, anzavit va galloud.

R/- Ho trugarekaat a reomp evit kement a vurzhudoù.

Krenañ a ra e Sion ar bec'herion,
krog 'zo un hiris en dud dizoue.
Piv ac'hanomp a bado gant an tan-se o teviñ?
piv a bado gant an tan-gwall peurbadus? R/

Merc'her 3

An hini a gerzh ez-reizh hag a gomz ez-eeun,
a zispriz gonidoù dre heg, a serr e zacuarn hep kemer donezon,
An hini a stouv e skouarn d'ar c'homzoù gwadus,
hag a gloc e zaoulagad e-lec'h sellout ouzh ar fall. R/

Hennezh a vo c'hom en uhelderioù,
bod a gavo war ar reier kreñvlec'hiet.
Ar bara a vo roet dezhañ,
hag an dour kretet dezhañ. R/

Da zaoulagad a welo ur roue en e gaerder, ur vro a welint
led-astennet, da galon a brederio er spont bet diagent. R/

S. 97 Ant. : C'hwi a zo evit gwir Salver ar bed, Aotrou Jezuz!

Komz Doue Jb 1, 21; 2, 10 Noazh ez on deuet eus kof va mamm
ha noazh e tistroin di. Doue en doa
roet ha Doue en deus adkemeret. Evel ma felle d'an Aotrou eo degou-
ezhet, ra vo benniget anv an Aotrou. Ma tegemeromp an eurvad evel
donezon Doue, perak ne zegemeromp ket ar gwalleur?

Ennoc'h, Aotrou, emañ va esper, warnon mezh ebet da viken.

V/- En ho reizhder va difennit, va dieubit, warnon mezh ebet....
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Servijomp an Aotrou er santelezh, tennañ 'ra ac'hanomp eus
daouarn hon holl enebourin.

Kinnigomp hor pedemmoù-veure da Jezuz, hon hanterour dirak
an Tad, ha lavaromp:

R/- Ho pediñ a reomp, Aotrou.

- Bezit benniget, o Krist, Pastor an Iliz, evit ar vuhez hag ar
sklerijenn a roit dimp er beure-mañ; ra vezo ar c'hras-se hor joa. R/
- Sellit gant madelezh ar bobl dastumet en hoc'h anv, na lezit ket da vont
da goll nep piv bennak eus ar re en deus ho Tad roet deoc'h. R/
- Sturidit hoc'h Iliz war hent ho kourc'hemenoù ma chomo fidel dre
nerzh ho Spered Santel. R/
- Ra vago he feiz ouzh taol ho komz hag ouzh taol ho para:
konnerzh gant ar boued-se ra gerzho d'ho heul. R/

Kempedenn

Aotrou Jezuz Krist, heol o reiñ sklerijenn
da gement den a zeu er bed-mañ, hol lakit
da ac'zañ dirazoc'h hent ar reizhder hag ar peoc'h. C'hwi
a vev hag a ren...

OFIS KREISTEIZ

Meulgan

Emañ an deiz e barr e sked,	Mougit ennomp tan ar pec'hed,
Leun eo an douar gant ho kloar;	Ha birvidigezh ar gonnar;
Ni hoc'h ador, Doue nerzhus,	Lakit ennomp ho karantez,
E-kreiz splannder ho sklerijenn.	Ra zeuy ho peoc'h d'hon unaniñ.

Hor selaouit, Hollo'halloudeg,
Dre Jezuz, ho Mab unganet,
A ren gant ar Spered Santel,
A-holl-viskoazh da virviken.

Merc'her 3

S. 118, 105-112 Ant. : Savit, Aotrou, kemerit ho kaoz en ho torn.
S. 69 ha 74

Komz Doue Kol 3, 14-15 Dreist pep tra lakit ennoc'h ar garan-
tez, hi hag a zo al liamm peurvat. Ha
peoc'h ar C'hrist da reno en ho kalonoù, rak d'ar peoc'h-se oc'h bet
galvet dre vezañ bodet en un hevelep korf. Erfin bezit troet da dru-
garekaat.

V/- Va factor eo an Aotrou, n'eus tra ebet o vankout din.
R/- War bradeier leton glas am laka da c'hourvez.

Kempedenn

Doue hollo'halloudek ha peurbadel,
ennoc'h n'eus tra ebet amsklaer na
teñval, degasit ho sklerijenn d'hor c'halonoù: dre zegemer
ho lezenn hag ho kemennadurioù e kerzhimp war hoc'h hent gant
ur galon skañv. Dre Jezuz Krist.

OFIS AN ABARDAEZ

Meulgan

R/- Joa ha sklaerder
Ar c'hloar beurbadel eus an Tad,
An Uhel-meurbet, ar Santel-meurbet,
O Jezuz Krist!

Tizhet ganimp penn an devezh, Dellezek oc'h da vout kanet,
E welomp ho sklêrder en abardaez, En holl amzerioù gant mouezhioù santel,
Hag e kancamp an Tad, ar Mab, Mab Doue hag a ro buhez:
Ha Spered Santel Doue. R/ Deoc'h er gloar an hollvad. R/

S. 126 Ant. : Ra savo an Aotrou un ti evidomp ha ra ziwallo kêr.
S. 130 - : Esper en Aotrou a-vremañ ha da viken.

Kant. Kol 1, 12-20 Ant. : Gloar deoc'h, Aotrou, enor, galloud ha meurdez!

Trugarekait Doue an Tad en deus ho laket barrek da gaout
lod en herezh ar Sent er sklerijenn.

R/- Klod deoc'h, kentañ-ganet a-douez ar re varv.

Eñ hag en deus hon tennet eus galloud an deñvalijenn evit
hon degas e Rouantelezh e Vab karet, hon eus ennañ an das-
prenidigezh, ar pardon eus hor pec'hedoù. R/

Eñ eo skeudenn an Doue diwelus, ar c'hentañ-ganet a-rack
pep krouadelezh, rak ennañ eo bet krouet kement tra 'zo en
neñvoù ha war an douar. R/

Kement a weler ha kement na weler ket, pep tra 'zo bet krouet
gantañ hag evitañ. Eñ a zo a-rack pep tra, ha drezañ e talc'h
pep tra da vezañ. R/

Hag eñ ivez eo ar penn eus ar C'horf, da lavarout eo eus an
Iliz. Eñ eo ar penn-abeg anszhi, ar c'hentañ-ganet eus a-douez
ar re varv, evit ma vefe dezhañ-eñ ar renk kentañ e pep doare. R/

Rak ennañ eo bet plijet gant Doue lakaat pep lounder da chom
ha drezañ adunvaniñ ar bed a-bezh evitañ e-unan. R/

En ur ober ar peoc'h dre vad e Groaz, adunvaniñ drezañ kement
a zo war an douar kenkouls ha kement a zo en neñvoù. R/

Komz Doue Ef 3, 20-21 D'an Hini a c'hell gant e c'halloud o
labourat ennomp ober mil gwech en tu-
hont d'ar pezh a c'houlennomp pe a soñjomp soken, dezhañ ar c'hloar en Iliz
hag er C'hrist Jezuz, evit holl rumadoù an holl gantvedoù. Amen.

Merc'her-Yaou 3

An douar a-bezh a stou dirazoc'h hag a veul ac'hanoc'h.

V/- Kanañ a ra hoc'h anv, Aotrou, hag a veul ac'hanoc'h.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. : An Aotrou en deus graet evidon burzhudoù, santel eo e anv.

Aspedomp Doue hor Mestr a selaou pedenn an dud izel,
ha lavaromp gant feiz:

R/- Skuilhit warnomp ho karantez, Aotrou.

- Ho trugarekaat a reomp, Aotrou, rak hon dibabet hoc'h eus a-viskoazh hag hon gervel a rit da resev gloar Jezuz hon Aotrou. R/
- Roit d'ar re a anzav hoc'h anv santel ar c'hras d'en em glevout e gwirionez hoc'komz ha da vout entanet gant ho karantez. R/
- Ho pet soñj eus an dud engouestlet e servij o breudeur, evit na zeuint ket da fallgaloniñ gant ar gwallverzh nag an digompren. R/
- Krouer an hollved, maz eus bet fellet gant ho Mab en em c'hraet den pleustriñ war ur vicher-zen, ho pet soñj eus ar re a c'honez o buhez diwar c'hwezenn o zal. R/
- Diskouezit ho madelezh e-keñver hor breudeur tremenet, n'o lakit ket e galloud spered an droug. R/

Kempedenn

Chomit ganimp, Aotrou, rak diwezhat eo
hag an deiz a zo war e ziskar. Tommit hor
c'halonoù war an hent, evito kavout ac'hanoc'h er Skriturioù
hag er Bara lodennet. C'hwi a ren...

=====
Y A O U 3
=====

OFIS AL LENNADENNOU

- S. 88 Ant. IV : Sellit, Aotrou, ha gwelit hon dichez.
- V : Me a zo diwar gouenn David, sterodenn skedus ar bourc.
- S. 89 - : Evel goet o voutañ e tremen hor bloavezhioù; c'hwi a zo Doue a rumm da rumm.

V/- Grit din anavezout hoc'h hentoù, Aotrou.
R/- Deskit din ho kwenodennou.

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- Deuit holl d'an Aotrou, azeulomp hor Mestr.

Meulgan

Pried real,
Prometet da eured ar Groaz,
Deuet oc'h evit laouenaat bugale Doue,
Hag e trojoc'h hon dour en gwin.
Deuit, Salver Jezuz!
Tener 'vit an douar,
Ma kanimp evit ho tistro:

R/- Ra vo benniget en anv an Aotrou
an hini a zeu da salviñ e bobl.

O Mab Doue,
Ma tiskuzh warnoc'h ar Spered,

Deuet oc'h evel un tan a bulluc'h an holl draoù,
Ennoc'h 'n em entan an hollved.
Deuit, Salver Jezuz!
Annezadur ar c'hloar,
Ma kanimp evit ho tistro: R/

S. 86 Ant. : An douar a-bezh a gan ho kloar, kêr santel Doue.

Kant. Iz 40, 10-17 Ant. : Setu an Aotrou hon Doue! Dont a ra gant
galloud, sklerijenn evit daculagad e vugale.

Setu an Aotrou ho Toue o tont gant galloud,
hag e vrec'h a drec'ho evitañ.
Emañ e c'hoar gantañ
hag e c'honidoù dirazañ.

R/- Bennozh d'an hini a zo o tont.

Evel ur mesaer e vasa e dropell,
war e vrec'h e kemer an oaned;
En e varlenn e toug anozho,
hag e kas goustadik ar re 'zo o vagañ. R/

Piv en deus muzuliet a-vozadoù an doueier?
an neñvoù a-rahouennadoù mentet?
Jedet poszelladoù poultr an douar?
pouezet gant ur valañs ar menezioù hag ar runioù gant krigi-pouezañ?

Piv a bouezo Spered Doue?
piv a roio ali pe gentel dezhañ?
Digant piv e kemer kuzul evit kompren?
evit deskiñ hent ar justis, deskiñ ar skiant? R/

Emañ ar pobloù evel beradoù ur c'helorn, evel poultr ur valañs,
hag an inizi evel bruzhunoù a bouez. R/

An holl vroioù a zo evel netra dirazañ,
nebeutoc'h eget netra, goull e int istimet gantañ.

S. 98 Ant. : Uhelvruidit an Aotrou hon Doue, stouit dirazañ.

Komz Doue 1 P 4, 9-10 Roit degemer an eil d'ogile hep klemm.
Pep unan ac'hanoc'h, hervez ar c'hras en
deus resevet, d'en em lakaat e servij ar re all, evel merourien vat
gras liesseurt Doue.

Bennigañ a rin an Aotrou, o pop amzer hag o pop loc'h.

V/- E vouldi dizehan em genou, e pep amzer hag e pep loc'h.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Ra vo benniget an Aotrou, heol o sevel, sklerijenn hag a
zeu eus an neñv d'hon gweladenniñ.

Pedomp Doue hon Tad a selaou ar re a glask anezhañ,
ha lavaromp dezhañ gant fiziañs:

R/- Skuilhit warnomp ho sklerijenn hag ho kwirionez.

- Aotrou, Mestr ar bed, ho meuliñ a reomp evit ho karantez: sebezus
oc'h pa grouit ac'hanomp ha maoc'h c'hoazh pa salvit ac'hanomp. R/
- Kerkent ha goulou-deiz, lakit emomp ar c'hoant d'ho servijañ,
ma roio gloar deoc'h hon holl soñjoù hag oberoù. R/
- Glanait hor c'halonoù diouz ar c'hoantegezhioù fall, hel lakit
da vout evezhiek d'ho polontez. R/

Yaou 3 - Ra zigoro ho kras hor c'halonou da ezhemmoù hor breudeur; n'hol lezit ket d'en em gavout ganto hep o c'harout. R/

Kempedenn Doue hollc'halloudek ha peurbadel, c'hwi a zo sklerijenn an holl sklerijennoù hag an deiz didermen; kerkent hag an deiz-nevz-mañ ho pedomp: ra vo sklerijennet hor c'halonou gant sklerder ho pezañs o skarzhañ noz ar pec'hod. Dre Jezuz Krist.

OPIS KREISTEIZ

Moulgan

Sed an amzer, Spered Santel, Ma teuit er galon fidel, A-unan gant an Tad, ar Mab, Evit skuilhañ ho sklerijenn. Ra vo hon teod hag hor c'halon, Hon nerzh hag ivez hor buhez, Holl entanet a garantez Evit an holl dud a garit.

Hor selaouit, Hollc'halloudeg, Dre Jezuz, ho Mab unganet, A ren gant ar Spered Santel A-holl-viskoazh da virviken.

S. 113, 113-120 Ant. : Ho promesa d'am souten hag e vovo ho servijer. S. 78 ha 79

Komz Doue 4, 7 N'eus ket pobl vras hag e defe doueou ken tost ha m'emañ hon Doue evidomp bewech m'e pedomp.

V/- Bezit va skoazell, n'am dilezit ket. R/- N'am dilaoskit ket, Doue va silvidigezh.

Kempedenn

Doue hollc'halloudek, graet hoc'h eus al labour evit ma c'hellfe an dud mont war well e^{oc'h} n'em harpañ an eil ogile, roit dimp, en hol labour, ur spered a-vreudeur. Dre ar C'hrist hon Aotrou.

OPIS AN ABARDAEZ

Moulgan

- 1 - Doue 'reas d'ar bed tarzhañ Eus an noz er c'hentañ beure, E-kreiz hop noz e rit skediñ An anaoudegezh eus ho kloar.
- 2 - C'hwi hag a zo skeudenn ho Tad, Ha splannder e gened skedus, War ho tremm-c'hwi, o Jezuz Krist, E sked da viken joa ar bed.
- 3 - C'hwi 'zo hoc'h-uman ar sklaerded A luc'h e donul lec'h teñval; C'hwi 'zo goulou hor c'hammedou E-kreiz un hent a deñvalded.
- 4 - Pa falla pep tra e chomit, Pasteuz pep tra, divrall 'vezit, Pa zeu an noz splannañ a rit, E-barzh kalon pep krouadur.
- 5 - Ha pa savo war an hollved, Ar goulou-deiz a zo o tont, C'hwi a rano er geoded-se, Ma teuz diouti an deñvalded.

S. 131 Ant. I : An Aotrou en deus dibabet Jeruzalem evit e chomadur. II : Ho fideled a youc'ho gant ar joa, Aotrou, pa 'z antreintec'h ma chomit.

Kant. Disk. 11, 17-18; 12, 10-12 Ant. : An Aotrou Doue, Mestr war bep tra, en deus kemeret war e anv e Rouantelezh.

Yaou 3

Ho trugarekaat a reomp, Aotrou Doue, c'hwi an Hollc'halloudeg, an hini a zo hag a oa, dre m'hoc'h eus kemeret 'n ho torn ho kalloud bras evit ren da Rous.

R/- Ho trugarekaat a reomp, o Doue.

Ar broadoù a oa en em savet gant konnar, met setu deuet ho konnar-c'hwi, ar c'houlz evit ar re varv da vezañ barnet, ar c'houlz da reiñ o gopr d'ho servijerion, ar Brofedad, ar Sent, hag ar re o deus douget hoc'h anv, ar re vihan hag ar re vras. R/

Bremañ eo deuet da wir silvidigezh, nerzh, rouezezh hon Doue ha galloud e Grist, rak stlapet eo bet d'an traoñ tamaller hor breudeur, an hini o zamalle dirak hon Doue deiz ha noz. R/

Int ivez o deus trec'het warnañ dre wad an Oan ha dre lavar o zesti: rak disprizet o deus o buhez betek mervel. En abeg da se, bezit laouen, o Neñvou, ha c'hwi ar re a chom enno. R/

Komz Doue 1 P 3, 8-9 Bezit holl unanet kenstrezoc'h, leun a druez, a gengarantez, a zouster hag a izelegezh; na rentit ket an droug evit an droug, na kumujenn evit kumujenn; bennigit kentoc'h, rak galvet oc'h bet end-eeun da gaout ar vonnozh da lod-herozh.

Bennigit oc'h, Aotrou, e lein an neñvou.

V/- Din a veuleudi hag a c'hloar er beurbadelezh, e lein an neñvou. V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. E garantez en em astenn a rummad da rummad war gement hini en deus doujañs outañ.

Aspedomp Doue hor Mestr a selaou pedenn an dud izel, ha lavaromp gant feiz:

R/- Hon dedennit davedoc'h, Aotrou.

- Bezit benniget, Aotrou, c'hwi hag hoc'h eus hor galvet d'hoz Iliz; hor mirit, dre ho kras, en unander. R/

- C'hwi hag hoc'h eus fiziet er Pab... karg an holl ilizoù, roit dezhañ ur feiz divrall, un esperañs virvidik hag ur garantez ovezhiak. R/

- Lezet oc'h eus ho Mab da guitaat e di hag e vro evit mont da chom 'n ur vro estren; bezit soñj eus ar re a zo o chom pell diouzh o ziegezh hag eus o fobl. R/

- Iakit ar bec'herion da anzav o fec'hedoù hag an dud gwan da adkemer nerzh-kalon, d'an holl ar binijenn hag ar silvidigezh. R/

- D'an holl dud tremenet o deus esperañs enno-c'h, roitar peoc'h peurbadus. R/

Kempedenn

Doue hag a ro ar baradoz en gopr d'ar re a veilh e servij ho meuloudi, ni ho ped da zilenn kuit an deñvalijenn eus hor c'halonou dimp da gaout ar joa d'arvestiñ dizehan ouzh ho sklerijenn. Dre Jezuz Krist.

=====

GWENER 3

OTIS AL LENNADENHO

S. 68 Ant. I : Gant va esperañs e skuizhan oc'h aspediñ.
 - II : Evel boud e kinnigent din ampeozon, ha gwinegre meoc'hed.
 - III : Deoc'h-c'hwi hag a glask Doue, buhez hag eurvad.
 V/- Grit din anavezout hoc'h hentoù, Aotrou.
 R/- Deskit din ho kwenodemoù.

OTIS AR BEURE

S. 94 R/- Hiziv na galedit ket ho kalonoù met selaouit maez an Aotrou.
Meulgan

- 1 - Splander strinket eus kreiz Doue, 3 - E goueled hon noz e teuit,
 Sklaerder ganet eus ar sklêrder, Evit an holl dud, er bed-mañ,
 A-rack m'eo ganet an hollved, C'hwi a zo mammenn a vuhez,
 Splaññ a rit en deñvalded. Hag ar sklêrijenn wirion.
- 2 - Ni hoc'h ador, Mab dreist-karet, 4 - Deoc'h eo ar c'hloar, o Tad santel,
 Termen a bep seurt azaouez, Evel d'ho Mab ar veuleudi,
 An Tad hag en deus ho kaset, Gant ar Spered Glan frealzer,
 Warmoc'h e ra d'e c'hras renoz. Bepred, dre-holl ha da viken.

S. 50 Ant. : Eus va fec'hed, Aotrou, va glanait.
 Kant. Yr 14, 17-21 Ant. : Truez ouzhin, Aotrou, truez ouzhin.

Va daoulagad a skuilh daeroù noz-deiz, dibaouez,
 rak ur reuz bras eo reuz ar werc'hez, merc'h va fobl,
 skoet eo bet grevus-tre.
 Ma 'z an war ar maez, sed tud lazhet gant ar c'hleze,
 ma teuan en kêr, sed klañvourion naoniek.
 Met ar profed hag ar beleg a zo aet da vale,
 d'ur vro n'anavezent ket.
 Ha disteurel a rit Youda?
 eus Sion e heugfe hoc'h ene?
 Perak bezañ skoet ac'hanomp, hep m'hor befe ur remed?
 goanag a beoc'h a oa bet, ha n'eus ket a welladenn,
 hag e-lec'h kaout ur remed ez a spontusoc'h.
 Anzav a reomp, Aotrou, hor fallagriez, faziou hon tadoù,
 pec'hot hon eus en ho keñver.
 Evit enor hoc'h anv, na zistaolit ket ac'hanomp,
 n'it ket d'ober fae war ho tron gloriuz,
 ho pet soñj: na freuzit ket hoc'h emglev ganimp.

S. 99 Ant. : Gant joa e kerzhomp davedoc'h, Aotrou, gant joa e korzhomp davedoc'h.

Komz Doue 2 Kor 12, 9-10 A galon laouen eta eo eus va gwam-
 derioù kentoc'h en em voulin, evit
 ma vo nerzh ar C'hrist o chom ennon. Neuze en em blijout a ran em
 gwanderioù, en dismegañsoù, en enkreziou, en heskinadurioù, en an-
 kenioù gouzavet evit ar C'hrist: rak pa vezan sempl, eo neuze e
 vezan nerzhus.

Bras eo hon Doue ha bras e c'halloud.
 V/- D'e skiant n'eus ment ebet, ha bras eo e c'halloud.
 V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Doue a zegas dimp ar silvidigezh, oberenn e galon garantezus.
 Kinnigomp hor pedennoù-beure da Jezuz, hon hanterour
 e-kichen an Tad ha lavaromp:

- R/- Gloar deoc'h-c'hwi a-hed ar c'hantvedoù.
- Bezit beniget, o Krist Salver ar bed, o vezañ m'hoc'h eus gouzañ-
 vet evidomp ho Pasion; rak gant ho kwad priziuz hoc'h eus hon das-
 prenet. R/
- C'hwi hag hoc'h eus prometet e strinkfe diouzh ho kostez digor
 stêrioù dour bev, dre vister ho Kroaz, skuilhit ar Spered war an
 holl dud. R/
- C'hwi hag hoc'h eus kaset ho tiskibion da embann an Aviel dre ar
 bed, harpit ar re a embann ho Kroaz trec'hus. R/
- D'an dud klañv ha glao'haret a zo kenlodek en ho Kroaz roit nerzh
 ha pasianted. R/

Kempedenn Aotrou, Tad santel-meurbet, plijet eo bet
 deoc'h e vefe ho Mab an daspren evit hor
 silvidigezh; grit dimp bevañ gantañ en doare ma o'hollimp sar-
 tout efed e adsav d'ar vuhez dre gomer perzh en e boanioù. Eñ
 a vev hag a ren...

OTIS KREISTEIZ

Meulgan

Emañ an deiz e barr e sked, Mougit ennomp tan ar pec'hod,
 Leun eo an douar gant ho kloar; Ha birvidigezh ar gonnar;
 Ni hoc'h ador, Doue nerzhus, Lakit ennomp ho karantez,
 E-kreiz splander ho sklêrijenn. Ra zeuyho peoc'h d'hon unaniñ.

Hor selaouit, Hollo'halloudeg,
 Dre Jezuz ho Mab unganet,
 A ren gant ar Spered Santel,
 A-holl-viskoazh da virviken.

S. 21 Ant. : Dirazañ e stoue an holl bobloù.

Komz Doue Rm 1, 16-17 Un norzh Doue eo an Aviel evit silvidigezh
 an neb a gred, rak an Aviel en em ziskuilh
 reizher Doue, o tont dimp eus ar feiz evit kreskiñ er feiz, hervez
 ar pezh a zo skrivet: an den reizh en devo buhez dre ar feiz.
 V/- Va fador eo an Aotrou, n'eus tra ebet e vankout din.
 R/- War bradeier leton glas am laka da c'hourvez.

Kempedenn

Tad fidel en ho promesaou, c'hwi hag
 hoc'h eus kaset ar Spered Santel evit
 adunvaniñ an dud disrannet gant ar pec'hed, grit ac'hanomp
 oberourion ho peoc'h. Dre Jezuz Krist.

OTIS AN ABARDAEZ

Meulgan

R/- Joa ha sklêrder
 An c'hloar beurbadel eus an Tad,
 An Uhel-meurbet, ar Santel-meurbet,
 O Jezuz Krist!

Gwener 3

Tizhet ganimp penn an devezh,
E welomp ho sklaerder en abardaez,
Hag e kanomp an Tad, ar Mab,
Ha Spered Santel Doue. R/

Dellezek oc'h da vout kanat,
En holl amzerioù gant mouezhioù
santel,
Mab Doue hag a ro buhez
Deoc'h e ro gloar an hollved. R/

S. 134 Ant. I : Gouzout a ran ez eo bras an Aotrou, dreist eo hor
Mestr war an holl zouezeoù.
- II : Tiegezh Israel, benniget an Aotrou, sonit evit e anv,
rak hegarat eo.

Kant. Disk. 15, 3-4

Bras hag estlammus hoc'h oberoù, Aotrou Doue, mestr ar bed,
reizh ha gwirion hoc'h hentoù, roue ar broadoù.

R/- Bras eo hoc'h oberoù, Aotrou.

Piv na rofe, Aotrou, doujañs ha klod d'hoc'h anv?
rak c'hwi hepken a zo santel. R/

Hag an holl vroadoù a zeuio da stouñf dirazoc'h,
dre maz eo 'n em ziskouezet reizhder ho pamedigezhioù. R/

Komz Doue Jk 1, 2-4

Sellit evel un abeg a levenez vras, va
breudeur, e koezhfe warnoc'h reuzioù

a hep seurt, en ur c'houzout e teu gant aprou ho feiz pasianted da
sevel ennoc'h. Met ho pasianted, na vo ganti obererezh peurvat, na
vefet parfet ha peurreizh hep netra o vankout ennoc'h.

Dre hoc'h anv, Aotrou, wasalvit.

V/- En ho madelezh va dieubit, va salvit.

V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. : Diskouezet, Aotrou, nerzh ho preec'h, stlabezit an dud
lorc'hus, savit ar re izel.

Aspedomp Doue hor Mestr a selaou pedenn an dud izel,
ha lavaromp gant feiz:

R/- Ho pet truez ouzhimp, Aotrou.

- Aotrou, na gastizit ket ac'hanomp evit hor pec'hedoù, rak anzav a
reomp anezho dirazoc'h: roit dimp ar pardon hag ar peoc'h. R/
- C'hwi hag a lavar dre an abostol: E-lec'h m'eo bet puilh ar peoc'hed,
fonnusoc'h c'hoazh eo bet ar c'hras, kasit ho kras fonnus-dreist war
hor pec'hedoù diniver. R/
- Pec'het hon eus e-leizh, Aotrou, met anavezout a reomp ho trugarez
divent; troit ac'hanomp ouzh Doue hag e vimp troet. R/
- Peogwir hoc'h eus digoret ar Baradoz d'an torfedour en deus kredet
en ho Mab, na serrit ket dorioù an neñv d'an Anaon. R/

Kempenn

Peogwir, Aotrou, en em ziskouez ho fur-
nez dreist-lavar en un doare souszhus e
gwallskouer ar Groaz, grit dimp gouzout arvestif ouzh ar
c'hloar e Pasion ho Mab, evit ma lakimp en e Groaz hon
esperañs hag hol lorc'hentez. Eñ a vev hag a ren...

===== S A D O R N 3 =====

OFIS AL LENNADEHNOU

S. 106 I, II, III Ant. : Ra embannint trugarez an Aotrou hag e
vurzhudoù e-keñver an dud.

V/- Deuit ha gwelit oberoù an Aotrou.

R/- War an douar e ra burzhudoù.

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- Gant son ar joa hag ar gouel eomp a-ziarbennd'an Aotrou.

Moulgan

1 - O Mab unganet, Jezuz Krist,
War ho tremm-c'hwioc'h arvestomp
Ar c'hloar ma lugernit ganti
E-tal Doue, kent an amzer.

3 - C'hwi a zo o chom en hon touez,
O Verb leun eus an holl c'hrasoù
Kelennit dimp ar wirionez,
Hon treuzfurmten ho skeudenn.

2 - Ar bed-mañ n'hoc'h anavez ket,
An deñvalded ho tizarbenn:
D'ar re o deus ho resevet,
Roit dezho perzh en ho leunder.

4 - Deoc'h eo ar c'hloar, o Tad santel,
Evel d'ar Mab ar veuloudi,
Gant ar Spered Glan frealzer,
Bepred, dre-holl, ha da viken.

S. 118, 145-152 Ant. : Ho pet soñj eus ho komz, Aotrou, va frealz eo
em reuzeudigezh.

Kant. Fur 9, 1-12

Doue hon Tadoù, Aotrou a drugarez,
C'hwi hag hoc'h eus, gant ho komz, graet an hollved,
C'hwi hag hoc'h eus, gant ho Furnez, stummet an don,
Dezhañ da vestroniañ ar c'hrouadurien bet savet ganeoc'h,
Da c'houarn ar bed er santelezh hag er reizhder,
Ha da varn an dud a galon eun,
Roit din ar Furnez azezet war ho tron, en ho kichen.

R/- Roit din ar Furnez a zeu eus ho kichen.

N'am argasit ket er-maez eus niver ho mibion,
Rak ho servijer ez en ha mab ho servijerez,
Un den gwan ha barrbad e vuhez,
Divarrek da gompren ar reizhadurozh hag al lezennoù.
Ha pa vije unan peurvat e-touez mibion an dud,
Ma vank dezhañ ar Furnez a zeudiganeoc'h eo kontet evit netra.

C'hwi hoc'h eus va dibabet evit ren ho pobl,
Evit gouarn ho mibion hag ho merc'hed.
Gourc'hemennet hoc'h eus din sevel un Templ-war ho menez santel,
Un aoter er gêr-se hoc'h eus diazezet enni ho teljenn,
Skeudenn eus an deltenn sakt hoc'h eus aozet a-dal an derou. R/

Ganeoc'h emañ ar Furnez a anavez hoc'h oberoù,
Dre m'edo ase ganeoc'h pa raec'h an hollved.
Hi a car petra 'zo plijus d'ho taoulagad,
Ha petra 'zo kenson gant ho gourc'hemennnoù.
Kasit anezhi eus an neñvoù meurdeuz,
He lakait da ziskenn eus kador veur ho klod. R/

Evit ma 'm skoazello ha ma labouro ganin,
Ha maz anavin petra 'blij deoc'h,
Rak gouzout a ra pep tra, kompren a ra pep tra.

Sadorn 3

Va bleniañ a ray gant poellegezh em oberoù,
Va diwall a ray gant norzh ha gloar.
Ha plijus e vo deoc'h neuze va labour. R/
Gouarn a rin ho pobl gant justis,
Hag e vin dellezek eus kador-veur va zad.

S. 116 Ant. : Meulit an Aotrou, bras eo e garantez evidomp.

Komz Doue Fil 2, 14-15 Grit pep tra hep grozmolat na tabutal,
evit dont da vezañ direbec'h ha dinamm,
evel bugale Doue didamall e-kreiz ur rummad tud diroudet ha fallakr,
en doare da skediñ en o zouez evel goulaouennoù er bed.

Mat eo embann ho kwirionez a-hed an nozvezhoù,
mat eo embann diouzh ar beure ho karantez.

V/- Na bras eo hoc'h oberoù, Aotrou, pegen den ho soñjoù!
Mat eo embann diouzh ar beure ho karantez.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Sturiiit hor c'hammedoù, Aotrou, war hent ar peoc'h.

Pedomp Doue hon Tad, a selaou ar re a glask anezhañ,
ha lavaromp gant fiziañs:

R/- En ho trugarez, he pet soñj ac'hanomp.

- Tad meurbet madelezhus, ho trugarekaat a reomp da vezañ roet
dimp Mari evel mamm ha skouer, dre he fedenn santelait ac'hanomp. R/
- Laket hoc'h eus anezhi da vezañ evezhiok d'ho Komz, ha graet
anezhi ho servijeroz fidel, dre he fedenn hol lakit da vezañ
servijerion ha dekskibion ho Mab. R/
- Kaset hoc'h eus warni ho Spered hag he deus kofsevet ho Mab
Jezuz, dre he fedenn roet dimp frouezh ar Spered. R/
- E-kichen Kroaz ho Mab hoc'h eus roet dezhi norzh-kalon, hag he
laouenaet hoc'h eus e mintin kec'h adsav; dre he fedenn disammit
hor poanioù ha kennerzhit hon esperañs. R/

Kempedenn Hor muzelloù, hon ene hag hor buhez
a-bezh da embann ho meuleudi, Aotrou,
ha peogwir ez omp holl un donezon eus ho kras, grit ma vo
gouestlet deoc'h hor buhez a-bezh. Dre Jezuz Krist.

OFIS KREISTEIZ

Meulgan

O C'hwi a chom bopred digemm,
Mestr an amzer, Doue fidel,
An deus a deus, an noz a zeus;
Hor mirit dindan ho kwarez.

Hor selaouit, Hollc'halloudeg,
Dre Jezuz, ho Mab unganet,
A ren gant ar Spered Santel,
A-viskoazh hag or c'hantvedoù.

S. 118, 122-128 Ant. : Grit emglev gant ho servijer evit ar mad.
S. 33

Sadorn 3

Komz Doue Mi 6, 8

Disklariet ez eus bet dit, o den, petra
a zo mat, petra emañ Doue o c'houlenn
diganit: netra nemet ober ar justis, karout gant teneridigezh hag
en em izelaat da vont gant da Zeus.

V/- Bezit va skoazell, n'am dilezit ket.
R/- N'am dilaoskit ket, Doue va silvidigezh.

Kempedenn

Hor selaouit, Aotrou, ha roit dimp ar
peoc'h gwirion a c'houlennomp diganeoc'h;
e-giz-se, o klask ac'hanoc'h a-hed hor buhez ha harpet gant
pedenn ar Werc'hez Vari, oc'h eruiimp hep skoilh betek ennoù.
Dre Jezuz Krist, hon Aotrou.

OFIS AN ABARDAEZ

Meulgan

R/- Joa ha sklaerder
Ar c'hloar beurbadel eus an Tad,
An Uhel-meurbet, ar Santel-meurbet,
O Jezuz Krist!

Tizhet ganimp penn an devezh, Dellezek oc'h da vont kanet,
E welomp ho sklerder en abardaez, En holl amzerioù gant mouezhioù santel
Hag e kanomp an Tad, ar Mab Mab Doue hag a ro buhez:
Ha Spered Santel Doue. R/ Deoc'h e ro gloar an hollved. R/

S. 121 Ant. : Roit ar peoc'h, Aotrou, d'ar re a gont warnoc'h.
S. 129 - : An Aotrou a zo leun a drugarez, largetezus d'hon daspreñañ.

Kant. Fil 2, 6-11

Jezus hag a oa Doue a stumm
Ne sellas ket evit e dra
Chom en e renk, par da Zeus;

R/- Jezuz Krist eo an Aotrou
Evit gloar Doue an Tad.
Met da netra eo 'n em laket
Dre gemer stumm ar servijer
Ha dont da vezañ 'giz an dud. R/
Goude 'n em ziskouez 'vel un den
En deus c'hoazh en em izelaet
Dre sentiñ betek ar marv,
Betek ar marv war ar Groaz. R/

Setu perak en deus Doue
Uhelsavet anezhañ
Ha roet dezhañ an anv
A zo a-us da bep anv. R/
Ma vo pep glin en anv Jezuz
O plegañ e lein an neivoù,
War an douar hag e bed an Ankoù
Evit ma tisklerio pep teod
Eo Jezuz Krist eo an Aotrou
Evit gloar Doue an Tad.

Sadorn 3

Komz Doue 2 P 1, 19-21

Suroc'h a se e teu da vesañ evidomp lavar ar Brofeded, a rit mat o terc'hel

dezhañ evel ouzh ur c'houlouenn o luger-mañ en ul lec'h teñval, betek ma paro an deiz ha ma savo ar werelaouen en ho kalonoù. Dreist pep tra, gouvezit kement-mañ: n'eus diougan ebet eus ar Skritur a vefe da zisplegañ hervez soñj an-unan, rak n'eus diougan ebet a vefe bet lavaret hiskoazh diwar-bousz youl an den; met dindan lusk ar Spered Santel eo o deus komzet tud 'zo a-berzh Doue.

Da viken, Aotrou, e chom digemm ho komz en neñvoù.

V/- A rumm da rumm e chom digemm ho kwirionez en neñvoù.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Va ene a gan braster an Aotrou, uhelaat a ra an dud izel.

Aspedomp Doue, hor Meistr, a selaou pedenn an dud izel, ha lavaromp gant feiz:

R/- Hor salvit dre ho trugarez.

- Anaout a reomp, Aotrou, ar madoberoù resevat hiziv digant ho madelezh; grit na zistrount ket diefed davedoc'h, hogen ma tougint frouezh en hor c'halonoù. R/
- Sklerijenn ha silvidigezh an holl bobloù, gwarezit e pep lec'h an dud a ro testeni deoc'h ha skuilhit warno tan ho karentez. R/
- C'hwil hor C'hrouer hag hor Providañs, deskit dimp labourat da sevel ur bed gwelloc'h ha bezañ doujusoc'h e-keñver hor breudeur. R/
- C'hwil mezeg an eneoù hag ar c'horfoù, diboagnit ar re glañv, roit ar peoc'h d'ar re 'zo war o zremenvañ; en ho trugarez deuit d'hor gweladenniñ ha d'hor pareañ.
- Dogemerit hon Anaon er peoc'h, e-touez an dud evurus o deus o anv enskrivet el Levr ar Vuhez. R/

Kempedenn ar Sul (P. 105 ...)

=====

=====

OFIS AL LENWADENNOU

S. 23 Ant. : Aotrou ar gallouedoù an hini eo, hennezh eo Roue ar c'hloar.

- S. 65 - I: Broadoù, benniget an Aotrou, eñ hag a ro dimp ar vuhez.
- II: Selaouit, deoc'h e lavarin an holl gement en deus graet Doue evidon.

V/- Komz Doue a zo bev hag efedus.
L/- Lemmoc'h eget ur c'hleze divzremmet.

=====

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- Pobl dibabet gant Doue, d'it da azuliñ ho rener hag ho pastor.

Meulgan
Doue a ren! Bobloù, youc'hit gant levez, alleluia!
Ar vuhez he deus trec'het war ar marv,
Ar groaz he deus trec'het war an ifern!

R/- Alleluia, alleluia, alleluia! Aotrou, meuleudi deoc'h!

Setu deiz an Aotrou, deiz a levez, alleluia!
Ar vuhez he deus trec'het war ar marv,
Ar groaz he deus trec'het war an ifern. R/
Setu ar burzhud graet evidomp gant an Aotrou,
Ra vo benniget e anv, alleluia!
Salver Jezuz, karantez-vour ar bed! R/

S. 117 Ant. : Trugarekait an Aotrou evit e vadelezh, peurbad eo e drugarez.

Kant. Dn 3, 52-57 Ant. : Kanomp ur meulgan, bennigomp Doue da virviken.

Bannozh deoc'h, Aotrou, Doue hon tadou.

R/- Deoc'h meuleudi ha gloar da virviken.

Ra vezo benniget hoc'h anv glorius ha santel. R/- Dezhañ...

Benniget oc'h en ho Templ santel ha glorius. R/- Deoc'h...

Benniget oc'h war ho kador a roue. R/- Deoc'h...

Benniget oc'h, c'hwil hag a wel an islonkoù. R/- Deoc'h...

C'hwil hag a dron a-us d'ar Gerubined. R/- Deoc'h...

Benniget oc'h en neñv hag en cabl. R/- Deoc'h...

C'hwil holl, oberoù an Aotrou, benniget an Aotrou. R/- Dezhañ...

S. 150 Ant. : Kement a zo buhez ennañ da veulo an Aotrou.

Komz Doue Rm 8, 18-21

N'heller ket lakaat poanioù an amzer a-vremañ e-skoaz gant ar c'hloar a dlo bezañ diskleriet ennaomp. Rak ar grouadelezh gant hiraoc'h a c'hortoz an diskleriadur-se eus gloar bugale Doue. Gouzout a reomp enañ betek vremañ ar grouadelezh a-bezh oc'h hirvoudiñ en ur c'houzañv gwentrou ar gwilioud. Ha n'eo ket hi hepken, ni ivez ha goude ma perc'hennomp frouezh kentañ ar Spered, a vez hon-unan oc'h hirvoudiñ en hon dia-barzh en ur c'hortoz an advaberezh hag ar c'houlz ma vo dieubet hor c'horfoù.

Dre gomz an Aotrou e voe krouet an neñvoù.

V/- Armead an neñvoù, dre c'hwezhadonn e c'henoù e voe krouet an neñvoù.

V/- Klod d'an Tad...

Sul 4

Kant. Zak. : D'an trec'her e rein ar werelaouen ha kretaat a rin anezhañ dirak va Zad.

Kasomp hor pedenn war-zu Doue ar vadelezh ha lavaromp gant feiz :

R/- Hon Tad hag hon Doue.

- Bezit benniget, Doue hollc'halloudek, Roue an hollved, rak n'hoc'h eus ket hon disprizet daoust d'hor pecc'hedoù, met gervol a rit ac'hanomp d'hoc'h anaout, d'ho karout ha d'ho serviñ. R/
- C'hwi a zo trugarezus hag oc'h astennit ho tivrec'h war-zu ennomp, hol lakit da heuliañ ac'hanoc'h hep pellaat nepred diouzh hent ar vuhez. R/
- Peogwir e lidomp dasorc'hidigezh ho Mab muiañ-karet, grit dimp tremen an deiz-mañ e jea ar Spered. R/
- Roit dimp, Aotrou, ar spered a veuleudi hag a bedenn ma rentimp deoc'h trugarez e pep tra hag e pep amzer. R/

Kempedenn ar Sul (P. 105 ...)

OPIS KREISTEIZ

Meulgan

Sed an amzer, Spered Santel,
Ma teuit er galon fidel,
A-uman gant an Tad, ar Mab,
Evit skuilhañ ho sklerijenn.

Ra vo hon teod hag hor c'halon,
Hon nerzh hag ivez hor buhez,
Holl entanet a garantez
Evit an holl dud a garit.

Hor selaouit, Hollc'halloudeg,
Dre Jezuz, ho Mab unganet,
A ren gant ar Spered Santel,
A-holl-viskoazh da virviken.

S. 22 Ant. : An neb a zebro ous ar Bara-se a vevo da viken.
S. 75

Komz Doue Av 6, 4-6

Selaou, Israel, an Aotrou hon Doue eo an Doue nemetañ. Hag e kari an Aotrou,

hon Doue, a holl galon, a holl ene, a holl nerzh. Hag e vo an trec'her-se, a c'heourc'hemenenn dit hiziv, war da galon.

V/- Da virviken, Aotrou, ho komz.
R/- Digemm en nefvoù.

Kempedenn ar Sul (P. 105 ...)

OPIS AN ABARDAEZ

Meulgan

R/- Aotrou, trec'h oc'h bet war ar marv
Ha graet hoc'h ous d'ar vuhez skedin
Er beurbadelezh.

Adsavet eo ar C'hrist a-douez ar re varv, Adsavet eo ar C'hrist a-douez ar re varv,
Prevoudi ar re a zo chomet kousket. Ha lonket eo bet ar marv gant ar vuhez!
Trec'h eo ar vuhez war ar marv. R/ Emon, o marv, emañ da drec'h? R/

Adsavet eo ar C'hrist a-douez ar re varv!
D'an Doue Salver rentomp gras da viken
En anv an Aotrou Jezuz Krist. R/

S. 109 Ant. : Diougan an Aotrou d'am Aotrou: azez a-zehou din.
S. 111 - : Evurus an neb en em blij en ho Lezenn, Aotrou.

Sul 4

Kant. Disk 19 Ant.: Alleluia! An trec'h, ar c'hloar, ar galloud d'hon Doue!
Alleluia! Ren a ra evit ar c'hantvedoù didermen.

R/- Alleluia, alleluia!

Ar silvidigezh, ar galloud, ar c'hloar, ar veuleudi d'hon Doue,
alleluia! Gwirion ha reizh e varmedigezhioù. R/

Meulit hon Doue, servijerion an Aotrou, alleluia!
C'hwi holl hag a zouj anezhañ, bihan ha bras. R/

Setu ma ren evel roue, an Aotrou hon Doue, Mestr ar bed, alleluia!
Bezomp laouen ha tridomp, roomp gloar dezhañ. R/

Rak setu deuet eured an Oan, alleluia!
Hag e bried a zo en em gempennet. R/

Komz Doue He 12, 22-24

C'hwi avat hoc'h eus tostaet ouzh Menez

Sion, ouzh Kêr an Doue bev, Jeruzalem an
neñv, ouzh milmiliadoù an Aeled en o lidadeg, ouzh iliziad ar re
gontañ-ganet enskrivet en nefvoù, ouzh Doue barnar an holl, ouzh
speredoù an dud reizh deuet da vezañ purvat, ouzh Jezuz, hanterour
un Englev nevez, ouzh ar gwad en deus nerzh-glanaat, a gomz splan-
noc'h eget hini Abel.

Hon dasprenet hoc'h eus, Aotrou, gant ho kwad prizius.

V/- Tud a bep gouenn, yezh, pobl, broad, gant ho kwad prizius.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. An Aotrou, da Zoue, a zo ganit, adnevesaat a ra ac'hanout
dre e drugarez.

Pedomp gant fiziañs Tad an holl dud ha lavaromp a galon izel:

R/- Chomit gameomp, Aotrou.

- Aotrou, Tad an hollved, c'hwi hoc'h eus kaset ho Mab evit ma vo
enoret hoc'h anv e pep lec'h, konnerzhit testeni hoc'h Iliz en
holl vroadoù. R/

- Hol lakit da vezañ sentus ouzh prezegerezh an Ebestel ha konstumm
da wirionez ar feiz. R/

- C'hwi a gar an dud reizh, grit justis d'ar re wasket. R/

- Diliammit an dud chadennet, roit ar gweled d'ar re zall, yac'hañ
ar re c'hloazet, gwarezit an estrenion. R/

- Roit bara d'an dud naoniek, ma vo embannet ar c'heloù-mat d'ar re baoude.

- Ra gaso dasorc'hidigezh Jezuz d'ar vuhez didermen ar re a ziskuizh
dija er peoc'h. R/

Kempedenn ar Sul (P. 105 ...)

=====

OPIS AL LENNADENNOU

S. 72 Ant. I: Mat eo Doue evit Israel, evit an neb a zo glan e galon.
- II: Ho c'hoarzh a droic en gouselvan hag ho jea e karv.
- III: Chom test da Zoue a ra va holl evurusted.

Lun 4

V/- Ho tremm, Aotrou, eo a glaskan.
R/- Mirout a rin ho polontezioù.

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- Deomp davet an Aotrou, gant son ar muzik youc'homp dezhañ.

Meulgan

Heol o sevel
War an dud gourvezet er marv,
Deuet oc'h 'vit ma welo ar re na wolont ket,
Ar gwelad 'roit d'an den dall,
Deuit, Salver Jezuz!
Sklerijenn war ar bed,
Ma kanimp evit ho tistro.

R/- Ra vo benniget en anv an Aotrou,
an hini a zeu da salviañ e bobl.

Oan Pask karet,
Oan hag a salv eus an harlu,
Deuet oc'h evit dasprenañ an deñvad kollet,
Ha pegen 'rejoec'h priz ar gwad,
Deuit, Salver Jezuz!
Mesaer an dourioù bev,
Ma kanimp evit ho tistro. R/

S. 89 Ant. : Roit dimp gant ar beure hor gwalc'h eus ho trugarez.
Kant. Iz 42, 10-16 Ant. : Poblou an douar, meulit an Aotrou.

R/- Kanit da Zoue ur c'han nevez,
Meuleudi dezhañ eus dibennou an douar.

Ra vezo meulet gant ar re a ziskenn war vor, a leugn an inizi, ar re 'zo o chom eno. Ra savo o mouz ar gouelec'h hag o geroù,
ar c'hériadennoù, chomlec'h Kedar. R/

Ra youc'ho annezidi Sela, eus penn ar monezioù o hopal,
Ra vezo roet gloar da Zoue, embannet e veuleudioù en inizi. R/

Mont a ra an Aotrou evel un trec'hor, evel un den a vrezel oc'h atizañ
Youc'hal ha skrijal a ra, war e enebourion e trec'ho. R/ e warizi,

Sioul e oan pell-a-zo, tevel a raen, en em zerc'hel a raen,
Evel unan o vont da wilioudiñ e hirvouden, e tizanalen, e trec'hwezhen. R/

Ar monezioù hag ar runioù a wastin, kement geotenn 'zo a zisec'ho,
Lakaat a rin ar stêrioù da vezañ inizi, hag al lennoù a vo disec'hot. R/

Lakaat a rin an deñvalijenn da vezañ dirazo sklerijenn,
Hag an hentou-treuz da vezañ ocum. R/

S. 145 Ant. : Alleluia! An Aotrou a ren evit ar c'hanvedoù.

Komz Doue Ydt 8, 21-23 An Aotrou hon Doue a aprou ac'hanomp
evel hon tadou. Ho pet soñj eus pezh
a reas gant Abraham, ha penaos e aprous Isak, ha petra 'c'erruas
gant Jakob... Rak evel ma pure evit furchal o c'halonou, n'eo ket
evit kastizañ ac'hanomp, met hor c'henteliañ, eo e skourjez an Aotrou
ar re a dosta outañ.

Mat eo embann ho kwirionez a-hed an nozvezhioù,
mat eo embann diouzh ar beure ho karantez.

V/- Pegen bras hoc'h oberou, Aotrou, pegen don ho soñjoù
mat eo embann diouzh ar beure ho karantez.

V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Zakaria a ziougenas en ur lavarout: ra vo banniget
an Aotrou, Doue Israel.

* Lakaat a rin da welo tud dall war hentou wo annezidi ket
war c'halonou n'arvezent ket e vezint hendet gann. R/

Lun 4

Kasomp hor pedenn war-zu an Doue a vadelezh ha lavaromp gant feiz:

R/- Lakit enomp ho Spered, Aotrou.

- Ho trugarekaat a reomp, Doue, pinvidik en ho trugarez, en abeg
d'ar garantez vras n'hoc'h eus karet ac'hanomp ganti. R/

- C'hwi a labour e pep amzer er bed, deuit d'ober nevez an holl
draoù dre c'halloud ho Spered.

- Digorit hiziv hon daoulagad ha re hor breudeur, ma welimp ho purzhudoù.
R/

- C'hwi hor galv d'ho servij santel, grit ac'hanomp ministred ho
kras evit hor breudeur. R/

Kompedenn

Adal ar beure roit dimp hor gwalc'h eus
ho trugarez, Aotrou, ha neuze e c'hellimp
tremen an deiz-mañ el levenez ha e kavimp ur joa bepred nevez
o kanañ evidoc'h. Dre Jezuz Krist, ho Mab...

OFIS KREISTEIZ

Meulgan

Emañ an deiz e barr e sked,
Leun eo an douar gant ho kloar;
Ni hoc'h ador, Doue nerzhus,
E-kreiz splannad ho sklerijenn.

Mougit enomp tan ar pec'hed,
Ha birvidigezh ar gonnar;
Lakit enomp ho karantez,
Ra zeu ho peoc'h d'hon unaniñ.

Hor selaouit, Hellec'halloudeg,
Dre Jezuz, ho Mab unganet,
A ren gant ar Spered Santel,
A-holl-viskoazh da virviken.

S. 118, 129-136 Ant. : Garmet em eus hag an Aotrou an deus va selaouet.
S. 61 ha 119

Komz Doue Lv 20, 26

Hag e vefet evidon sent rak santel
on-me, Doue, hag o tisraman ac'hanoc'h
diouzh ar baganed evit bezañ din.

V/- Bezit va sikour, n'am dilezit ket,
R/- N'am dilaoskit ket, Doue va silvidigozh.

Kompedenn

Aotrou, kreskit enomp ar feiz ha grit
skodiñ en hor c'halonou sklerijenn ar
Spered Santel. Dre Jezuz Krist hon Aotrou.

OFIS AN ABARDAEZ

Meulgan

R/- Joa ha sklaerder
Ar c'hloar beurbadel eus an Tad,
An Unel-mourbet, ar Santel-mourbet,
O Jezuz Krist!

Tizhet ganimp penn an devezh,
E welomp ho sklaerder en abardaez
Hag e kanomp an Tad, ar Mab
Ha Spered Santel Doue. R/

Dellezek oc'h da vout kanet,
En holl amzerioù gant monezhioù santel,
Mab Doue hag a ro buhez:
Dooc'h e ro gloar an hollved. R/

S. 135 Ant. : Trugarekaat an Aotrou, rak peurbad eo e garantez.
Kant. Ef 1, 3-10 : Evurus ar bobl dastumet gant ar C'hrist.

Ra vo benniget Doue, Tad hon Aotrou Jezuz Krist, eñ hag en deus hor ben-
niget ha roet dimp pep bemozh speredel a-holl-viskoazh er C'hrist.

R/- Bemozh deoc'h-c'hwi, hon Tad,
C'hwi hag hoc'h eus hor benniget er C'hrist.

Lun 4

Rak hon dibabet en deus ennañ a-ziaerck krouidigezh ar bed, da vezañ santel ha dinamm dirazañ, er garantez. R/

En ur rakdivizout diwar hor penn e vefemp advibion dezhañ dre Jezuz Krist, setu petra eo bet plijet gantañ ober en e vadelezh. R/

Evit ma vefe kanmeulet splannder ar c'hras en deus roet dimpen e Vab muiañ-karet, hon eus ennañ dre e wad an daspren eus hor sklavelezh, ar pardon eus hor pec'hedoù. R/

Sed aze pinvidigezh ar c'hras-se en deus an Tad skuilbet warnomp gant largentez, e pep furnez ha skiant, en ur ziskuilhañ dimp mister e youl, ar mennad madelezhus-se en devoa rakdivizet ennañ e-unan. R/

Evit e gas da benn pa vefe deuet leunder an amzerioù, da lavarout eo, lakaat ar C'hrist da vezañ penn pep tra hag ennañ adunvaniñ kement a zo en neñv ha kement a zo war an douar. R/

Komz Doue 1 Tes 3, 12-13 Ha c'hwi, ra blijo gant an Aotrou ho lakaat da greskiñ ha da fonnaat er garantez an eil evit egile, evel ivez e-keñver an holl, diwar skouer ar garantez hon eus-ni en ho keñver. Ra vo startaet ho kalonoh en ur santelezh didamall dirak Doue hon Tad, a-benn donedigezh hon Aotrou Jezuz gant e holl sent.

Troit hor c'halon war-zu ho testeni, grit din bevañ dre ho komz.

V/- Dalc'hit d'ho promesa e-keñver ho servijer, grit din bevañ dre ho komz.

V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. : Va ene a gan braster an Aotrou, va spered a gav elevenez e Doue, va Salver.

Pedomp gant fiziañs Tad an holl dud ha lavaromp a galon izel:

R/- Selaouit pedenn ho pobl.

- Doue hor sklerijenn, sklerijennit hoc'h Iliz gant ho skl'erder maz embanno d'ar broadoù mister bras ar garantez en em c'hraet den. R/

- Beilhit war veleion ha pastored hoc'h Iliz, evit dezho bezañ fidel ivez d'ho servijañ, i hag a brezeg d'ar re all. R/

- C'hwi hoc'h eus roet d'ar bed ar peoc'h dre wad ho Mab kroazstaget, pellait diouzhip pec'hed an disranniezha gwalenn ar brezel. R/

- Dre ho trugarez pardonit o fec'hedoù d'an Anaon, evit ma kavint plas e-touez ar sent en neñvoù. R/

Kempedenn Aotrou hon Doue, ra zeuio Pasion ho Mab da sklerijennañ hor speredoù, evit hol lakaat prest bepred da zougen ar yev a gavimp skañv en abeg d'e garantez. Dre Jezuz Krist, ho Mab...

=====
M E U R Z H 4
=====

OPIS AL LENNADEINNOU

- S. 101 Ant. I: Aotrou, selaouit va fedenn, na guzhit ket ouzhin ho tremm.
- II: Selaouit, Aotrou, garmadeg ar rouzaudiñ.
- III: Aotrou, diazezet hoc'h eus an douar hag an neñvoù a zo oberenn ho taouarn.

Meurzh 4

V/- Crit din anaout hoc'h hentoù, Aotrou.
R/- Rak davodoc'h e savan va ene.

S. 94 R/- Youc'homp en enor da Zoue, hor Salver. OPIS AR DEURE

Meulgan

Oan Pask karet,
Oan hag a sav eus an harlu,
Deuet oc'h evit dasprenañ an deñved kollet,
Ha pasañ 'rejoç'h priz ar gwad,
Deuit, Salver Jezuz!
Mesaer an dourioù bev;
Ma kanimp evit ho tistro.

R/- Ra vo beniget en anv an Aotrou an hini a zeu da salviñ e bobl.

Kariad Doue,
Ennoc'h an Tad 'gav levenez,
Deuet oc'h evit badeziñ an den er maro,
Hag ar Yordan 'walc'has ho korf.
Deuit, Salver Jezuz!
Reizh ar Rouantelezh;
Ma kanimp evit ho tistro. R/

S. 100 Ant. : Me a fell dinkanañ d'an Aotrou ha kerzhout didamall.
Kant. Dn 3, 26.. R/- Bennozh deoc'h, Aotrou, Doue hon tadoù,
Meuloudi da viken d'hoc'h anv enorus.

Rak hor renet hoc'h eus gant reizhdor,
reizh eo hoc'h oberoù, eun hoc'h hentoù ha gwirion ho pardedigezhioù. R/

Ya, pec'het hon eus o tilezel ac'hanoc'h,
manket hon eus dre-holl. R/

Evit enor hoc'h anv, n'hon dilezit ket da viken,
na dorrit ket hoc'h englev ganimp. R/

Na zilamit diganimp ho krad-vat, en abeg d'Abraham, ho kariad,
da Isaak, ho servijer, ha da Israel, ho ten dibabet. R/

Prometet ho pe lakaat o gouenn ken niverus ha stered an neñv,
pe an traezh war ribl ar mor. R/

Met gwelit, Aotrou, penaos ez omp bihanaet muic'h eget pobl all ebet,
izelaet hiziv gant ar bed-holl en abeg d'hor pec'hedoù. R/

N'eus ken en hon amzer, na penn na diouganer,
na kinnigadenn na loskaberzh, dimp da gavout truez. R/

Degemerit hor c'halonoh frailhet, hor speredoù mezhekaet
evel loskaberzh an touzad, an tirvi hameot lart, dre vilieroh. R/

Ra vo evel-se hor sakrifis hiziv hag e plijo deoc'h,
rek n'eus ket a saouzan d'an neb a fizi ennoc'h. R/

A-holl galon, bremañ, e heuliomp ac'hanoc'h,
e toujomp ac'hanoc'h hag e klaskomp ho tremm. R/

S. 134 Ant. : Kement blij dezhañ a ra an Aotrou.

Komz Doue Iz 55, 1 Neb on deus sec'hed, it davit dour. Nag
n'ho pefe ket arc'hant, deuit da bremañ ha
da evañ. Deuit da bremañ gwin ha laezh kuit da baeñ netra.
Ennoc'h mammenn ar vuhez, dre ho sklerijenn eo e welomp ar sklerijenn.
V/- Aotrou, pegen priziuz ho trugarez, dre ho sklerijenn ...
V/- Klod d'an Tad...

Meurzh 4

Kant. Zak. : Diouzh daouarn hon enebourion hor salvit, Aotrou.
 Kasomp hor pedenn war-zu Doue ar vadelezh ha lavaromp gant feiz:
 R/- Glear deoc'h-c'hwi, Aotrou.

- Ho trugarekaat a reomp, Doue ha Tad Jezuz hor Salver, evit an anaoudegezh hag an divarvelezh hoc'h eus roet dimp dre ho Mab. R/
- Roit dimp an izelegezh a galon, evit ma vezimp e servij an eil egile e karantez ar C'hrist. R/
- Skuilhit ho Spered war ho fideled, evit ma vezo dibilpous hor c'harantez evit hor breudeur. R/
- C'hwi hoc'h eus goulennet gant an den mestroniañ ar bed dre al labour, grit ma roio enor deoc'h hon oberoù ha ma santelaint hor breudeur. R/

Kempedenn O Doue hag a ra skediñ ho sklaerder war an denelezh sanket en noz teñval, skarzhit diouzh hor c'halennoù morgousk an displealded hag adsavit ac'hanomp eus hor pec'hedoù, hol lakit da veilhal e servij ho meuleudi, da zilezel oberoù an deñvalijenn ha da heuliañ bepred roudu an hini a zo priñs ar Sklerijenn ha mammenn nemeti ar Vuhez, Jezuz Krist, ho Mab hag hon Aotrou.

OPIS KREISTEIZ

Meulgan Sed an amzer, Spered Santel, Ra vo hon teod hag hor c'halen,
 Ma teuit er galon fidel, Hon nerzh hag ivez hor buhez,
 A-unan gant an Tad, ar Mab, Holl entanet a garantez,
 Evit skuilhañ ho sklerijenn. Evit an holl dud a garit.

Hor selaouit, Hollc'halloudeg,
 Dre Jezuz, ho Mab unganet,
 A ren gant ar Spered Santel,
 A-holl-viskoazh da virviken.

S. 118, 137-144 Ant. : Ra savo va fedenn davedoc'h, Aotrou.
 S. 87

Komz Doue Ad 30, 11-14 Al lezenn-se a gemennan dit hiziv n'eo ket dreist d'az kalloud nag en tu-hont d'az nerzh. Rak tost emañ ar Gompz, ez kenou hag ez kalon emañ dit da seveniñ anezhi.

V/- Pardonit din, Aotrou, va fec'hedoù kuzh.
 R/- Ma n'en devo ket krog warnon an droug.

Kempedenn Doue on deus hor salvet, selaouit ac'hanomp: grit ganimp diskibled ar sklerijenn hag oberourion ar peoc'h; ha peogwir o tont diouzhoc'h ez omp deuet da vezañ mibion ar sklerijenn, grit dimp reiñ deoc'h testenñ dirak an dud. Dre Jezuz Krist.

OPIS AN ABARDAEZ

Meulgan

1 - Doue 'reas d'ar bed tarzhañ Eus an noz er c'hentañ boure, E-kreiz hon noz e rit skediñ An anaoudegezh eus ho kloar.

2 - C'hwi haga zo skoudenn ho Tad, Ha splander e goned skedus, War ho tremm-c'hwi, o Jezuz Krist, E sked da viken joa ar bed.

Meurzh 4

3 - C'hwi 'zo hoc'h-unan ar sklaerder A luc'h e don ul leo'h teñval; C'hwi 'zo goulou hor c'hammedoù E-kreiz un hent a deñvalded.

4 - Pa falla pep tra e c'homit, Pa steuz pep tra, divrall 'vezit, Pa zeu an noz, splannañ a rit E-barzh kalon pep krouadur.

5 - Ha pa savo war an hollved, Ar goulou-deiz a zo o tont, C'hwi a reno er goded-se, Ma teuz diouti an deñvalded.

S. 136 Ant. : Kanit dimp, a lavarent, eus kanennoù Sion.
 S. 137 - : Dirak an Aeled e kanin deoc'h meuleudi.
 Kant. Disk 4, 11; 5, 9.10.12

Dellezek oc'h, C'hwi hon Aotrou hag hon Doue, da resev ar c'hloed, an enor hag ar galloud.
 R/- Galloud, enor ha gloar da Oan Doue.

Rak c'hwi eo hoc'h eus krouet pep tra, ha dre ho polontez int deuet da vezañ hag int bet krouet. R/

Dellezek oc'h, Aotrou, da resev al Lev'r ha da derriñ e sielloù. R/

Dre maz oc'h bet lazhet ha m'hoc'h eus dasprenet ha gonezet da Zoue gant ho kwad tud eus pep meuriad hag eus pep yezh, eus pep pobl hag eus pep broad. R/

Dre m'hoc'h eus graet anezho d'hon Doue ur rouantelezh a veleion da vezañ rouaned war an douar. R/

Dellezek eo an Oan bet lazhet da resev ar galloud, ar binvidigezh, ar fumez, an nerzh, an enor, ar c'hloar, ar veuleudi. R/

Komz Doue Kol 3, 16 Ra vezo komz ar C'hrist o c'hom en ho touez gant leunder; en em gelemnit an eil. Regile, gant en em aliañ e pep furnoz, kanit a-greiz-kalon da Zoue gant salmoù, meulganoù ha kananoennoù en ur drugarekaat dindan lusk ar Spered.

Trugarez an Aotrou da viken a ganin.
 V/- A rumm da rumm e anv da viken a ganin.
 V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. : Sellet en deus ouzh izalded e vatezh hag an Hollc'halloudeg en deus graet evidon burzhudoù.

Kasomp hor pedenn war-zu Jezuz hor Salver ha lavaromp gant feiz:
 R/- Hor mirit war hoc'h hentoù, Aotrou.

- O Krist hon nerzh, roit feiz ha dalc'husted d'ar re a c'halvit da c'houarn ho kwirionez. R/
- Dre ho Spered a furnez renit ar re a c'houarn ar vro, tuit o c'halon d'hor bleniañ davet ar peoc'h. R/
- Er gouelec'h-mac'h eus maget an Hebreed gant ar manna, ha gant pemp baraenn hoc'h eus maget un engroez a dud, deskit dimp lodannañ gant ar re naoniek. R/
- D'hor breudeur tremenet roit ar vuhez hag an dasorc'h pa zeout d'en em ziskouez en dud o devo kredet ennoc'h. R/

Kempedenn Hon Doue, Aotrou ha Salver an holl, c'hwi a gar an dud, hol lakit, daoust d'hor gwander, dellezek eus ar silvidigezh hoc'h eus aozet ha roet

Meurzh - Merc'her 4

dimp; hor glanait diouzh pep pilpouzerzh, evit ma vimp unanet an eil ouzh egile dre liamm ar peoc'h hag ar garantez, hor startait er santeladur hag en anaoudegezh ho kwirionez. Dre Jezuz Krist, ho Mab hag hon Aotrou.

=====
MERC'HER 4
=====

OFIS AL LENNADENNOU

- S. 102 Ant. I : Va ene, bennig an Aotrou ha n'ankoua hini ebeteus e vadelezhioù.
- II : Evel maz eo an Tad tener ouzh e vibion, ez eo tener an Aotrou e-keñver e dud fidel.
- III : Bennig an Aotrou, o va ene.
V/- Digorit va daoulagad d'ho purzhudoù.
R/- Da splannderioù ho lezenn.

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- En ho torn, Aotrou, an hollvod.

Meulgan

Roc'hell nevez,
Ma teu dic'hoi Stêr ar vuhez,
Deuet oc'h evit douarañ ar re a gred ennoc'h,
Hag ho kalon 'lezeit digor.
Deuit, Salver Jezuz!
O Feunteun diheskus,
Ma kanimp evit ho tistro:

R/- Ra vo benniget en anv an Aotrou an hini a zeu da salviañ e bobl.

Koabrenn a dan,
War an dud o kerzhout en noz,
Deuet oc'h evit diskouez an hent davet Doue,
Ho kalvar a zigor an neñv.
Deuit, Salver Jezuz!
C'hwi 'zo bezañs ho Tad,
Ma kanimp evit ho tistro: R/

S. 107 Ant. : Kasit, Aotrou, ho karantez hag ho kwirionez.

Kant. Iz 61, 10 - 62, 5 Ant.: Va leuniet a joa en deus an Aotrou ha va gwisket a santelezh.

Tridal a joa a ran en Aotrou
ha va spered a gav levezon en Doue.
Rak va gwisket en deus gant dilhad ar silvidigezh,
ha va goloet gant mantell ar reizhdad.
Evel an ozhac'h yaouank a zoug e gurmenn
hag ar wreg yaouank a gempenn he bragerizhoù.
Evel ma ra an douar bountañ e gellidoù,
hag ul liorzh kellidoù e hadoù,
Doue a raio kellidoù reizhdad ha meuleudi
dirak an holl vroadoù.
Evit karantez Sion ne davin ket,
evit Jerusalem ne roin ket peoc'h,

Merc'her 4

Ken na vo deuet da skedif he reizhdad,
ha silvidigezh evl ur piled ennouet,
Hag e welo ar broioù ho reizhdad,
hag an holl rouaned, ho kloar.
Galvet e vi gant un anv nevez
a zistago gencu an Aotrou.
Ur gurunenn skedus 'o vezi
etre daouarn an Aotrou,
Un talgen rouanez
e dorn da Zoue.
Ne vo ken lavaret diouzhit: " dilezet ",
na diouzh da vro: " dismantret ";
Galvet e vi: " va muiañ-karet ";
hag an douar-mañ: " dimezet ";
Rak an Aotrou da gar dreist ar re all,
hag a ray eus an douar-mañ ur pried.
Evel ma timez ur paotr yaouank gant ur werc'hez,
e timezo ganit da sawer;
Hag ar joa en devez ur pried gant e wreg
a vo ar joa en devo ganit da Zoue.

S. 143 Ant. : Evidoc'h, va Doue, e kanin ur ganenn nevez.

Komz Doue Bd 4, 39-40

Guez eta hiziv ha soñj onnañ ez kalon:
an Aotrou eo a zo Doue, e krec'he-barzh
an neñv, hag e traoñ war an douar, ha n'eus nemetañ. Hag e viri e
reolennoù hag e c'houre'hemenoù a gemennan dit hiziv.

Gervel a ran a-holl-galon, respontit din, Aotrou.

V/- Mirout a rin ho polontezioù, respontit din, Aotrou.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Ho pet soñj eus ho trugarez, Aotrou, eus ho promesa d'hon tadoù.

Kasomp hor pedenn war-zu Doue ar vadelezh en ur lavarout gant feiz:

R/- Diwallit ho pugale, Aotrou.

- Bezit benniget, Tad meurbet santel, rak hor galvet hoc'h eus
diouzh an deñvalijenn d'ho sklerijenn estlammus. R/

- Doue kuzhet, bet en em ziskuliet d'an dud, grit ma kresko hor
feiz en ho komz. R/

- Aotrou, grit dimp chom en ho karantez, ma ne vimp ket disrannet
an eil diouzh egile. R/

- Roit dimp nerzh en temptadur, pasianted en trubuilhoù ha truga-
rekadenn er builhentez. R/

Kempodenn

Aotrou ha Doue, hon Tad, dre ho furnez eo
ez omp bet krouet, ha dre ho ragevezh eo ez
omp blienet, dre ho madolezh skulhit ho sklerijenn en hor c'ha-
lonoù adal ar beure, evit ma chomimp dalc'hmat stag ouzhoc'h
ha gouestlet deoc'h diaro. Dre Jezuz Krist.

OFIS KREISTEIZ

Meulgan

Emañ an deiz e barr e sked,
Leun eo an douar gant ho kloar;
Ni hoc'h ador, Doue nerzhus,
E-kreiz splannder ho sklerijenn.

Mougit ennomp tan ar pec'hod,
Ha birvidigezh ar gonnar;
Lakit ennomp ho karantez,
Ra zeuy ho peoc'h d'hon unanif.

Merc'her 4

Hor selaouit, Hello'halloudeg,
Dre Jezuz, ho Mab unganet,
A ren gant ar Spered Santel,
A-holl-viskoazh da virviken.

S. 118, 145-152 Ant. : C'hwi, Aotrou, a zo tost dimp.
S. 93

Komz Doue Kol 3, 17

Petra bennak a c'hellfec'h lavarout pe
ober, ra vo bepred en anv an Aotrou Jezuz,
en ur rentañ bennozh drezañ da Zoue an Tad.

V/- Bezit va skoazell, n'am dilezit ket.
R/- N'am dilasokit ket, Doue, va silvidigezh.

Kempedenn

Doue hollc'halloudek ha pourbadel, n'eus
netra ennoc'h na teñval na displann, kasit
eta ho sklerijenn d'hor c'halonoc'h en ur zegemer ho lezenn hag ho
kemennadurioù e kerzhimp war hoc'h hent gant ur galon skañv.
Dre Jezuz Krist hon Aotrou.

OFIS AN ABARDAEZ

Meulgan

R/- Joa ha sklaerder
Ar c'hloar beurbadel eus an Tad,
An Uhel-meurbet, ar Santel-meurbet,
O Jezuz Krist!

Tizhet ganimp penn an devezh,
E welomp ho sklaerder en abardaez
Hag e kanomp an Tad, ar Mab,
Ha Spered Santel Doue. R/

Dellezek oc'h da vout kanet,
En holl amzerioù gant mouszhioù santel,
Mab Doue hag a ro buhez:
Deoc'h e ro gloar an hollvod. R/

S. 138 Ant. I : Aotrou, va amprouiñ a rit ha va anavezout.
- II : Burzhodus hoc'h oberoc'h, Aotrou, o anaout 'ra va ene.

Kant. Kol 1, 12-20 : Gloar da Zoue da virviken! Rak pep tra a zo
dioutañ ha drezañ hag evitañ! Amen!

Trugarekait Doue an Tad en deus ho laket barrek da gaout
lod en heresh ar Sent er sklerijenn//

R/- Klod deoc'h-c'hwi, kentañ-ganet a-douez ar re varv.

Eñ hag en deus hon tennet eus galloud an deñvalijenn/evit hon
degas e Rouantelezh e Vab karot, hon eus ennañ an dasprenidigezh,
ar pardon eus hor pec'hedoc'h. R/

Eñ eo skoudenn an Doue diwelus, ar c'hentañ-ganet a-raok pep
kroudelezh// rak ennañ eo bet krouet kement tra 'zo en neñvoù
ha war an douar. R/

Kement a weler ha kement na weler ket, pep tra 'zo bet krouet gan-
tañ hag evitañ// Eñ a zo a-raok pep tra, ha drezañ e talc'h pep tra da
vezañ. R/

Hag eñ ivez eo ar penn eus ar C'horf, da lavarout eo, eus an
Iliz// Eñ eo ar pennabeg anezhi, ar c'hentañ-ganet eus a-douez ar re
varv, evit ma vefe dezhañ-eñ ar renk kentañ e pep doare. R/

Rak ennañ eo bet plijet gant Doue lakaat pep leunder da chom// ha
drezañ adunvaniñ ar bed a-bezh evitañ e-unan. R/

En ur ober ar peoc'h dre wad e Groaz// adunvaniñ drezañ kement a
zo war an douar konkoulz ha kement a'zo en neñvoù. R/

Merc'her - Yaou 4

Komz Doue 1 P 4, 11

Maz eus unan en deus donson ar Gomz, ra
vo evit kemenn lavaroc'h Doue. Mar d'eo

karg ur ministrerezh en deus resevet, ra 'n en sello evel o kaout
perzh er galloud m'emañ Doue o ren gantañ evit ma vo e pep tra en-
ret Doue dre Jezuz Krist, a zo dezhañ ar c'hloar hag ar galloud evit
kantvedoù ar c'hantvedoù. Amen!

Pellout a ra din kanañ ho lezenn, en noz em bez soñj eus hoc'h anv.

V/- Kounait ho komz d'ho servijer hag a rae va esper, en noz em bez soñj...
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. : An Aotrou en deus graet evidon burzhudoù, an Hini a zo santel e anv.

Pedomp gant fiziañs Tad an holl dud en ur lavarout a galon izel :

R/- Ho pet soñj, Aotrou, eus hoc'h emglev.

- Aotrou, peogwir hoc'h eus kaset ho Mab evit salviñ ar bed ha
nann evit barm anezhañ, e varv glorius da zegaso dimp ar silvidigezh. R/

- C'hwi a grouas er penn kentañ ar gwaz hag ar vacuez, mirit
an holl diegezhioù en ur garantez wirion. R/

- Ar re hoc'h eus galvet d'ar c'hlandod beurbat evit Rouantelezh an
neñvoù, roit dezho ar c'hras da heuliañ ho Mab gant fealded. R/

- C'hwi a gasas ho Mab d'ar bed evit salviñ ar bec'herion, roit
d'an holl Anaon ar pardon eus o fec'hedoc'h. R/

Kempedenn

Aotrou Doue, eus lein an neñv taclit ur
sell war hoc'h Iliz ha roit dezhi donezon
ho peoc'h, ho garantez, ho skoazell; kasit dimp ho Spered Glan
evit m'en em garimp an eil egile; hon dalc'hit en hevelep Spered
dre liammoù ar peoc'h hag ar garantez dimp da vezañ ur c'horf
hepken, hag anzav ur feiz hepken, evel maz omp bet galvet d'an
hevelep esperañs evit tizhout a-gevret ar garantez beurbat e
Jezuz Krist, ho Mab hag hon Aotrou.

=====

=====

=====

OFIS AL LENNADEINNOU

S. 43 Ant. I : Ho torn dehou, Aotrou, eo a re an trec'h.

- II : Na guzhit ket ho tremm pell diouzhin.

- III : Savit, Aotrou, d'horskoazellañ. N'hon argasit ket betek
ar fin.

V/- Evit ho servijer sklerijennit ho tremm.

R/- Deskit din ho polantezioù.

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- Deuit, azeulomp an Aotrou.

Meulgan

Fried real,
Prometet da eured ar Groaz,
Douet oc'h evit laouennaat bugale Doue,
Hag e' trojoc'h hon dour e gwin.
Deuit, Salver Jezuz!
Tener 'vit an douar,
Ma kanimp evit ho tistro.

Yaou 4

R/- Ra vo benniget en anv an Aotrou
an hini a zeu da salvifi e bobl.

O Mab Doue,
Ma tiskuizh warnoc'h ar Spered,
Deuet oc'h evel un tan a bulluc'h an holl draoù,
Ennoc'h 'n em entan an hollved.
Deuit, Salver Jezus!
Annezadur ar c'hloar,
Ma kanimp evit ho tistro: R/

S. 142 Ant. : Aotrou, selaouit va fedenn, stouit ho skouarn d'am galvadennoù.
Kant. Iz 66, 10-14 : Davedout, Jeruzalem, en em ren ar peoc'h evel ur stêr.

Gourc'hemennacuit Jeruzalem ha tridit ganti,
c'hwi holl a gar anezhi,
Lodennit hec'h ourvad,
c'hwi holl a ouelas dezhi.

Evit denañ ho kwalc'h eus bronn he frealzidigezh,
evit sunañ, gant dudi, eus fonnusted he gloarioù.
Rak evel-hen e komz an Aotrou: ez an da ren daveti,
eval ur stêr, ar peoc'h,
Hag evel ur froud dioc'hlanmet,
pinvidigezh ar pobloù.

Bronnet e viot ha douget war ar vrec'h
ha flouret war an daoulin.
Evel ur mab frealset gant e vamm,
me va-unan ho frealzo hag e Jeruzalem ho po frealzidigezh.

Pa welot se, gant ar joa en ho kalonoù,
hoc'h eskern, evel geot, a ziwano,
Hag en em ziskouezo darn Doue d'e servijerion,
hag e gonnar d'e enebourion.

S. 146 Ant. : Meulit an Aotrou, rak mat eo kanañ d'hon Doue.

Komz Doue Ef 2, 10 Labour Doue ez omp, krouet maz omp bet
er C'hrist Jezus gant Doue evit dougen
an oberoù mat en deus rakdivizet anozho dimp da seveniñ.

Pegen niverus hoc'h oberoù, Aotrou.

V/- Holl ez int ganet eus ho furnez, Aotrou.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Ha c'hwi, bugelig, profed an Uhel-meurbet, c'hwi a gersho
dirak an Aotrou evit kempenn e hentoù.

Kasomp hor pedenn war-zu Doue ar vadelezh ha lavaromp gant feiz:

R/- Ho pet soñj, Aotrou, eus ho karantez.

- Bezit benniget, Tad hon Aotrou Jezus Krist, dre e zasorc'hidigezh
e rit dimp genel a-nevez d'an esperañs vev. R/

- Er C'hrist hoc'h eus nevesaet an den krouet diwar ho skeudenn, hol
lakit da vezañ muioc'h heñvel ouzh ho Mab. R/

- Glozet eo hor c'hhalonoù gant spered ar wariz hag ar gasoni;
skuilhit warno ar garantez a ro ho Spered. R/

- D'an dud dilabour roit labour, d'ar re naoniek roit boued, d'ar re
c'hlae'haret (ar) joa, d'an holl ar c'hres hag ar silvidigezh. R/

Kempedenn

Aotrou Jezus Krist, heol a sklerijenn
koment den a zo o tont er bed-mañ, grit
dimp kempenn dirazoc'h hent ar justis hag ar peoc'h, C'hwi a
vev hag ren evit kantvedoù ar c'hantvedoù. Amen!

Yaou 4

OFIS KREISTEIZ

Meulgan

Sed an amzer, Spered Santel,
Ma teuit er galon fidel,
A-unan gant an Tad, ar Mab,
Evit skuilhañ ho sklerijenn.

Ra vo hon teod hag hor c'halon,
Hon nerzh hag ivez hor buhez,
Holl entanet a garantez,
Evit an holl dud a garit.

Hor selaouit, Hollc'halloudeg,
Dre Jezus, ho Mab unganet,
A ren gant ar Spered Santel,
A-holl-viskoazh da virviken.

S. 118, 153-160 Ant. : An Aotrou d'ho pennigo! Peoc'h war Israel!
S. 127 ha 128

Komz Doue Jb 23, 8-10

D'ar reter maz an, n'emañ ket, d'ar
c'hornog, n'e welan ket. Pa glaskan
anezhañ en hanternoz, n'e santan ket, chom a ra diwelus ma 'n em droan
war-zu c'hreisteiz. Ha koulskoude oc'h anavez an hent a zo va hini.

V/- Pardonit din, Aotrou, va fec'hedoù kuzh.
R/- Ma n'en devo ket an droug krog warnon.

Kempedenn

Aotrou Doue, n'eo ho tron pourbadel nemet
sklerijenn ha kasred, gromet oc'h gant
peoc'h ar beurbedelezh hag ho karantez a sked warnomp evel an
heol da greisteiz; ho labour a ziskouez ho kloar hag ho kalloud,
ho madelezh hag ho trugarez; hon degemerit ganeoc'h e-kreiz an
dovezh-mañ a labour, hon tuit da glask ha da seveniñ dalc'hmat
an dra ret nemetañ a-unan gant ar C'hrist hon Aotrou, a vev hag
a ren ganeoc'h ha gant ar Spered Glan a-holl-viskoazh da virviken.

OFIS AN ABARDAEZ

Meulgan

- 1 - Doue 'roas d'ar bed tarzhañ
Eus an noz er c'hentañ beure,
E-kreiz hon noz e rit skedin
An anaoudegezh eus ho kloar.
- 2 - C'hwi hag a zo skoudenn ho Tad,
Ha splannder e gened skedus,
War ho tremm-c'hwi, o Jezus Krist,
E sked da viken joa ar bed.
- 3 - C'hwi 'zo hoc'h-unan ar sklaeredd,
A luc'h e don ul lec'h teñval,
C'hwi 'zo goulou hor c'hammedoù,
E-kreiz un hent a deñvalded.
- 4 - Pa falla pep tra e chomit,
Pasteuz pep tra, divrall 'vezit,
Pa zeu an noz, splannañ a rit,
E-barzh kalon pep krouadur.
- 5 - Ha pa savo war an hollved,
Ar goulou-deiz a zo o tont,
C'hwi a reno er geoded-se,
Ma touz diouti an deñvalded.

S. 143 Ant. I : Ra vo benniget an Aotrou, va c'hreñvlec'h, va dieuber.
II : Evurus ar bobl eo an Aotrou he Doue.

Kant. Disk. 11, 17-18; 12, 10-12 : Dezhañ gloar ha galloud evit kantvedoù
ar c'hantvedoù.

Ho trugarekaat a reomp, Aotrou Doue, c'hwi an Hollc'halloudeg,
an hini a zo hag a oa, dre m'hoc'h eus kemeret 'n ho torn ho
kalloud bras evit ren da Roue.

R/- Ho trugarekaat a reomp, o Doue.

Ar broadoù a oa en em savet gant konnar, met setu deuet ho konnar-
c'hwi, ar c'houlz evit ar re varv da vezañ barnet, ar c'houlz da reiñ o
gorr d'ho servijerion, ar Brafaded, ar Sant, hag ar re o deus douget hoc'h

Yaou - Gwener 4

anv, ar re vihan hag ar re vras. R/
 Bremañ eo deuet da wir silvidigezh, nerzh, rouezezh hon Doue, ha
 galloud e Grist, rak stlapet eo bet d'an traoñ tamaller hor breudeur,
 an hini o zamalle dirak hon Doue deziz ha noz. R/
 Int ivez o deus trec'het warnañ dre wad an Oan ha dre lavar o zesteni:
 rak disprizet o deus o buhez betek mervel. En abeg da se, bezit laouen,
 o Neñvoù, ha c'hwi ar re a chom enno. R/

Komz Doue Kol 1, 23 Ret eo deoc'h dere'hel d'ar feiz, bezañ
 diazezet enni, start ha divrall, chom hep
 pellaat diouzh an esperañs a zo bet roet gant an Aviel hoc'h eus klevet,
 Aviel a zo bet prezegot da bep krouadur dindan an neñv.

Fellout a ra din kanañ ho lezenn, en noz en bez soñj eus hoc'h anv.
 V/- Kounait ho komz d'ho servijer hag a rae va esper, en noz en bez soñj...
 V/- Klod d'an Tad....

Kant. ar W. : E drugarez en em astenn a rumm da rumm war ar re o deus
 doujañs outañ.

Pedomp gantfiziañs Tad an holl dud en ur lavarout a galon izel:
 R/- Emmoc'h, Aotrou, emañ va esper.

- Aotrou, Doue a sklerijenn, fellout a radeoc'h ma vo salvet an holl dud
 ha ma teuint da anaout ar wirionez, renit ar gitekizidi evit ma
 kavint ar sklerijenn. R/
- Aotrou, na zalc'hit ket soñj eus hor pec'hedoù, rak ganeoc'h emañ
 ar pardon. R/
- Fellout a radeoc'h ma klasko spered an dud sekredoù an natur evit gouarn
 ar bed; grit d'ar quizegezh ha d'ar vicherouriezh servijout d'ho
 kloar ha da eurvad an holl. R/
- Aotrou, peogwir n'eus den a vefe gouest da serrif ar pezh hoc'h eus di-
 goret, renit war hent ar sklerijenn hor breudeur a zo c'hoazh gour-
 vezet e skeud ar marv. R/

Kempedenn O Doue, kement hoc'h eus karot ar bed
 m'hoc'h eus roet dezhañ ho Mab unganet;
 kreskit ha kennezhit hor feiz, ma vo diazezet start war vister
 ho Komz en em c'hraot den, evit ma c'hollimp e-giz-se trec'hif
 war an droug; hor selaout dre Jezuz Krist, ho Mab...

=====
 G W E N E R 4
 =====

OPIS AL LENNADENNOU

A - Amzer ordinal

S. 49 Ant. I : Gervel a ra an Aotrou an neñvoù hag an douar evit prosez e bobl.
 - II : Kinniget da Zoue ur sakrifis a veuloudi.
 - III : An drugarez eo a fell din ha n'eo ket ar sakrifisoù.
 V/- Selaou va lezenn, o va fobl.
 R/- Me eo an Aotrou da Zoue.

Gwener 4

B - Amzer an Azvent, Nedeleg, Korreiz ha Pask.

S. 77 Ant. I : Stouit ho skouarn da gomzoù an Aotrou.
 - II : Evit hon tadoù e reas an Aotrou burzhudoù.
 - III : Evit o magañ e reas kouezhañ ar manna hag e roas dezho
 gwinizh an neñvoù.
 V/- Grit din, Aotrou, anavezout hoc'h hentoù.
 R/- Deskit din ho kenedennoù.

=====
 OPIS AR BEURE
 =====

S. 94 R/- En anv Jezuz ra vo embannet gant pep tood: c'ho eo an Aotrou.

Meulgan

- 1 - Splander strinket eus kreiz Doue, 3 - E goueled hon noz e teuit,
 Sklaerder ganet eus ar sklaerder, Evit an holl dud er bed-mañ,
 A-raok m'eo ganet an hollved, C'hwi a zo mammenn a vuhez,
 Splannañ a rit en deñvalded. Hag ar sklerijenn wirion.
- 2 - Ni hoc'h ador, Mab dreist-karet, 4 - Deoc'h eo ar c'hloar, o Tad santol,
 Termen a bep seurt azaouez, Eval d'ho Mab ar veuloudi,
 An Tad hag en deus ho kaset, Gant ar Spered Glan frealzer,
 Warnoc'h e rad'e c'hras repoz. Bepred, dre-holl ha da viken.

S. 50 Ant. : Va glansit, va Doue, hag e vin glan,
 gwalc'hit va ene hag e vin gwennoc'h eget an erc'h.

Kant. Tb 13, 10-15, 17-19 Ant. : Largentez an Aotrou: ar mibion a rodimp.

Benniget an Aotrou, c'hwi holl, e re zibabet,
 kanit dezhañ ha trugarekait anezhañ.
 Jeruzalem, kêr santel, an Aotrou en deus da gastizet
 evit oberoù da zaoarn.
 Trugareka an Aotrou evel ma tere,
 ha bennig Roue ar c'hantvedoù,
 Evit ma'z adsavo enout ar santual, maz adgalvo davedout an harluidi,
 ha ma roio dital levez evit ar c'hantvedoù didermen.
 Skedif a ri gant ur sklerijenn sebezus,
 betek dibemoù an douar.
 A-bell e teuo dit ar broadoù, o frofoù en o daouarn,
 da azeulif an Aotrou ez ramparzhioù.
 War da zouar e wellint ur santual,
 du-se e c'hellint pediñ an Anv-dreist.
 Er joa e vezi en abeg d'az mibion,
 rak benniget e vint ha bodet holl e-kichen an Aotrou.
 Evurus ar re ho kar,
 ar re a gemer joa gant ho peoc'h.
 Va ens, bennig an Aotrou, salvet en deus Jeruzalem eus he holl
 enkreziou, eñ an Aotrou hon Doue.

S. 147 Ant. : Kanmeul an Aotrou, Jeruzalem.

Komz Doue Gal 2, 19-20 Gant ar C'hrist ez on bet staget ouzh
 ar Groaz, ha mar bevan, n'eo ket me ken
 an hini a vev, met ar C'hrist a vev ennon. Evidon da vevañ bremañ
 en ur c'horf, e vevan er feiz-se am eus e Mab Doue en deus va c'ha-
 ret hag en em roet d'ar marv evidon.

Gwener 4

Ho nerzh a fell din kanañ hag embann ho karantez diouzh ar beure.

- V/- Ya, va Doue eo va c'hrañv-lec'h, Doue va c'harantez a zeu davedon. Me a fell din embann ho karantez diouzh ar beure.
- V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Hon diframmit diouzh hon noz, o sklerijenn Jezuz Krist.

Kasomp hor pedenn war-zu Doue ar vadolezh en ur lavarout gant feiz:

R/- Truez, Aotrou, rak pec'het hon eus.

- Doue a drugarez gemit hor c'hammedoù war un hent santel, grit dimp klask atavar pezh a zo gwir ha reizh, ar pezh a zo glan ha c'hoantaus. R/
- Aotrou, n'hon dilezit ket da viken en abeg d'hoc'h anv, ha na zis-taolit ket hoc'h emglev. R/
- Degemerit hor c'halonoh freget hag hor spered izelaet; evit ar re o deus fiziañs ennoc'h ne vo ket a vozh. R/
- C'hwi hag a c'halv ac'hanomp da velegiezh roueel ar C'hrist, grit dimp kinnig deoc'h ur brofadenn speredel hag embann ho purzhudoù. R/

Kompedenn

Aotrou, Tad santel, fellet ez eus bet deoc'h e vafe ho Mab an daspren evit hor silvidigezh, grit dimp bevañ gantañ ken mat ma teump da sant-toutefed vat e zasorc'hidigezh en ur lodennañ gantañ en e beaniou. EH a vev hag a ren...

OFIS KREñTEIZ

Meulgan

Enañ an deiz e barr e sked, Mougit enomp tan ar pec'hed, Leun eo an douar gant ho kloc'h, Ha birvidigezh ar gommar; Ni hoc'h ador, Doue nerzhus, Lakit enomp ho karantez, E-kreiz splannder ho sklerijenn. Ra zeuy ho peoc'h d'hon unaniñ.

Hor selaouit, Holle'hallodeg, Dre Jezuz, ho Mab unganet, A ren gant ar Spered Santel, A-holl-viskoazh da virviken.

S. 118, 161-168 Ant. : N'am dilezit ket, Doue, va silvidigezh. S. 132 ha 139

Komz Doue 1 Yn 3, 16

Dre goment-mañ hon eus anavezot ar garantez, dre m'en deus Jezuz roete e vuhez evidomp. Ha ni a dle ivez reiñ hor vuhez evit hor broudeur.

- V/- Bezit va skoazell, n'am dilezit ket.
- R/- N'am dilaoskit ket, Doue, va silvidigezh.

Kompedenn

Aotrou, oaled leskus a garantez, roit dimp ur gred ken birvidik na vezimp gouest d'ho karout dreist pep tra ha da garout hor broudeur en abeg deoc'h. Dre Jezuz Krist...

OFIS AN ABARDAEZ

Meulgan

R/- Joa ha sklaerder Ar c'hloar beurbadel eus an Tad, An Uhel-meurbet, ar Santel-meurbet, O Jezuz Krist!

Tizhet ganimp penn an devezh, Dellezek oc'h da vout ganet, E welomp ho sklaered en abardaez, En holl amzerioù gant mouezhioù santel, Hag e kanomp an Tad, ar Mab, Mab Doue hag a ro vuhez; Ha Spered Santel Doue. R/ Deoc'h e ro gloc'h an hollved. R/

- S. 144 Ant. I : Ho kammeulifañ a ran, o Roue, va Doue, hoc'h anv a vennigan da viken.
- II : An holl o deus warnoc'h o daoulagad, Aotrou, hag ec'h esperont.

Kant. Disk. 15, 3-4 Ant. : Gloc'h d'an Oan lidlazhet! Roue eo da viken!

Bras, estlammus hoc'h oberoù, Aotrou Doue, mestr ar bed; Eoun ha pearsur hoc'h hentou, Roue ar broadoù.

R/- Bras eo hoc'h oberoù, Aotrou.

Piv na rofe, Aotrou, doujañs ha klod d'hoc'h anv? Rak c'hwi hepken a zo santel. R/

An holl vroadoù a zeuio da stoufif d'an daoulin dirazoc'h, dromaz eo 'n em ziskouezet reizher ho pardedigezhioù. R/

Komz Doue Rm 8, 1-2

Bremañ avat n'eus ket a gondaonidigezh evit ar re a zo er C'hrist Jezuz, rak lezenn ar Spered a zo mammenn a vuhez er C'hrist Jezuz en deus dieubet ac'hanon eus lezenn ar pec'hed hag ar marv.

Pareit va ene, Aotrou, rak pec'het em eus enep deoc'h.

- V/- Lavaret em eus: Truez ouzhin, Aotrou, rak pec'het em eus...
- V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Diskar a ra an dud c'halloudek, heskinerion e fideled.

Kasomp hon aspedenn da Jezuz hor Salver en ur lavarout gant feiz:

R/- Truez, Aotrou, truez ouzhip.

- O Krist, frealzidigezh an dud izel, gwelit hor gwander hon doug d'ar pec'hed, bezit hon nerzh er pardon. R/
- C'hwi hag a zo dismegeñset gant ar pec'hed hag habaskaet gant ar binijenn, distroit ho kennar hon eus meritet gant hor pec'hedoù. R/
- C'hwi hag hoc'h eus pardonet d'ar bec'herez, c'hwi hag a sav war ho tivskoaz an dañvad dianket, na bellait ket ho drugarez pa 'z anzavomp hor pec'hedoù. R/
- Digorit dorioù ar barmoz d'ar re o deus esperet ennoc'h, peogwir n'hoc'h eus ket damantet da c'houzañv evito. R/

Kompedenn

O Krist, Mab unganet ha Komz peurbadel an Tad, c'hwi eo hor sakrifis nemetek, kinniget war ar groaz evit hor pec'hedoù, degemerit hor meuleudioù evel sakrifis an abardaez, a brofomp deoc'h a-unan gant hon holl vroadeur er feiz, deoc'h hag a vev ha ren...

S A D O R N 4

OFIS AL LENNADENNOU

A - Amser ordinal

- S. 54 Ant. I : Aotrou, selaouit va fedenn, skrijañ a ran dindan youc'hadeg
- II : Evidon-me, war-zu Doue e c'halvan /an enebour. hag an Aotrou am salvo.
- III : Ho peoc'h a zaspren va ene, warnoc'h e kontan, Aotrou.

Sadorn 4

V/- Deskiñ a refot din hent ar vuhez.
R/- Dirak ho tremm, leunder a joa.

B - Amzer an Azvent, Nedeleg, Korais ha Pask.

S. 77 Ant. IV + V + VI : Stouit ho skouarn da gomzoù an Aotrou.

V/- Deuit ha gwelit oberenn Doue.
R/- War an douar e ra burzhadoù.

OPIS AR BEURE

S. 94 R/- Gant joa e kerzhomp davedoc'h, Aotrou, gant joa e kerzhomp davedoc'h.

Meulgan

- 1 - O Mab unganet, Jezuz Krist,
War ho tremm-c'hwi eo'h arvestomp
Ar c'hloar ma lugermit ganti
E-tal Doue, kent an amzer.
- 2 - Ar bed-mañ n'hoc'h anavez ket
An deñvalded ho tiarbenn:
D'ar re o deus ho resevet,
Roit dezho perzhen ho leunder.
- 3 - C'hwi a zo o chom en hon-touez,
O Verbleun eus an holl c'hrasoù,
Kelennit dimp ar wirionez.
Hon treuzfurmit en ho skoudenn.
- 4 - Deoc'h eo ar c'hloar, o Tad santel,
Evel d'ar Mab ar vouleudi,
Gant ar Spered Glan frealzer,
Bepred, dre-holl ha da viken.

S. 91 Ant.: Mat eo trugarekaat an Aotrou, o'hoari evit hoc'h anv, Doue meurbet uhel.

Kant. Ez 36, 24-28 : Roit dimp, Aotrou, ur galon nevez, lakit ennomp ur spered nevez.

Ho kemer a rin eus a-douez ar broadoù,
ho podañ a rin eus an holl vroioù,
ho tegas a rin war ho touar.

Skuilhañ a rin warnoc'h un dour glan hag e vefot glanaet,
eus hoc'h holl saotradurioù, eus hoc'h holl idolennoù
e c'hlanain ac'hanoc'h.

Reiñ a rin deoc'h ur galon nevez,
lakaat a rin ennoc'h ur spered nevez.

Lemel a rin eus ho korf ar galon vaen,
reiñ a rin deoc'h ur galon-gig.

Lakaat a rin ennoc'h va spered hage rin deoc'h kerzhout hervez va
mirout va gourc'hemenoù hag o seveniñ. / lezennoù,

Chom a reot er vro an eus roet d'ho tadoù,
c'hwi a vo va fobl ha me ho Toue.

S. 8 Ant. : R/- Aotrou hon Doue, na pegen estlammus eo hoc'h anv dre an douar a-bezh!

Komz Doue Fil 4, 8-9 Va braudeur, koment a zo gwir, uhel, leal,
koment a zo glan, kardek, a vrud mat,
kement a zo vertuzus ha meulus, eo koment-se a dle bezañ mennad ho
spered, hag an Doue a beoc'h a vo ganec'h.

Aotrou, ennoc'h emañ va esper, grit ma klevin diouzh ar beure
ho karantez.

V/- Grit din anavezout va hent rakdavedoc'h e savan va ene, grit ma klevin.
V/- Klod d'an Tad...

Sadorn 4

Kant. Zak. : Sklerijennit, Aotrou, ar re a zo en deñvalijenn,
renit hor c'hammedoù war hent ar peoc'h.

Kasomp hor pedenn war-zu Doue ar vadelezh en ur lavarout gant feiz:

R/- Aotrou, hor selnuit.

- Aotrou, Tad an hollved, grit dimp bevañ en deiz-mañ o ternaouiñ evit
meuleudi ho kloar. R/

- Gras ar feiz, an esperañs hag ar garantez hoc'h eus hor pinvidikaet
ganti, he mirit dizelhan d'hor c'halonoù. R/

- Aotrou, grit ma savo hep ehan hon daoulagad davedoc'h, evit ma res-
pontimp diouzhtu d'ho kalvadenn. R/

- Hor gwarezit diouzh gwidreoh ha tromplerezhioù an tempter, pellait
hor c'hammedoù diouzh pep droug. R/

Kempedenn

O Krist, adsked gloar an Tad ha skoudenn
beuryat an hini an deus ho karet, en em
ziskouezet oc'h en hon natur-den marvel, ha sklerijennet hoc'h
eus teñvalijenn hon diouziagezh dre hoc'h Aviel, ho trugare-
kaat a reomp evit ho madelezh divent he deus graet deoc'h dis-
kenn betek ennomp, hoc'h anavez a reomp evel sklerijenn ha
buhez ar bed hag hoc'h azuliñ a reomp evel hon Aotrou hag hon
Doue. C'hwi a vev hag a ren...

OPIS KREISTEIZ

Meulgan

O C'hwi a chom bepred digemm,
Mestr an amzer, Doue fidel,
An deiz a deuz, an noz a zeuz;
Hor mirit dindan ho gwarez.

Roit dimp ar vuhez didermen,
Hag ar gozhni hep teñvalded;
Grit ma paro warnomp erfin
Ho kloar da zevvezh ho tistro.

Hor selaouit, Hollc'halloudeg,
Dre Jezuz, ho Mab unganet,
A ren gant ar Spered Santel,
A-viskoazh hag er c'hantvedoù.

S. 118, 169-176 Ant. : Astennit ho torn, va salvit, choazet en eus sentiñ.
S. 44

Komz Doue Iz 44, 6-7

Evel-se e komz Roue Israel (Komz an
Aotrou) hag e zasprenner, Doue an holl-
ved: " Me a zo ar c'hentañ hag an diwezhañ, ha me hepken : n'eus doue
all ebet nemadon. Piv a zo hañval ouzhin? "

V/- An Aotrou eo va fastor, n'eus tra ebet o vankout din.
R/- War bradeier leton glas an laka da ziskuiñ.

Kempedenn

Hor selaouit, Aotrou, ha roit dimp ar
peoc'h gwirion a c'houlennomp diganeoc'h;
evel-se, o klask ac'hanoc'h holl deizioù hor buhez ha skoazel-
let gant pedenn ar Werc'hez Vari, e c'hellimp mont hep skoilh
betek ennoc'h. Dre ar C'hrist hon Aotrou.

Meulgan

R/- Joa ha sklaerder
Ar c'hloar beurbadel eus an Tad,
An Uhel-meurbet, ar Santel-meurbet,
O Jezuz Krist!

OPIS AN ABARDAEZ

Sadorn 4

Tizhet ganimp penn an devezh, Dellezek oc'h da vout ganet,
E welomp ho sklêrder en abardaer, En holl amzerioù gant mouezhioù santel,
Hag e kanomp an Tad, ar Mab, Mab Doue hag a ro buhez,
Ha Spered Santel Doue. R/ Deoc'h e ro gloar an hollved. R/

S. 140 Ant. : Ra savo davedoc'h va fedenn evel un ezañs,
ha va dacuarn evel profadenn an abardaer.
S. 141 - : An Aotrou eo va lod en douar ar re vev.

Kant. Fil 2, 6-11 : Krist, marvet evit hor peoc'hedoù, Krist adsavet evit hor buhez.

Jezus hag a oa Doue a stumm
ne sellas ket evel e dra
chm en e renk, par da Zeou.

R/- Jezus Krist eo an Aotrou evit gloar Doue an Tad.

Met da netra eo 'n em laket
dre gomez stumm ar servijer
ha dont da vezañ 'giz an dud. R/

Goude 'n em ziskouez 'vel un den
en deus c'hoazh on em izelaet dre sentif betek ar marv,
betek ar marv war ur groaz. R/

Setu perak en deus Doue uhelsavet anezhañ
ha roet dezhañ un anv a zo a-us da bep anv. R/

Ma vo pep glin en anv Jezus o plegañ e lein an neñvoù,
war an douar hag e bed an Ankoù

evit ma tisklerio pep teod
eo Jezus Krist eo an Aotrou evit gloar Doue an Tad.

Komz Doue Rm 11, 33-36

O donder dreist-muzul pinvidigezh,
fuzvez ha gouiziegezh Doue! Pegen di-
gomprenus eo e zivizoù, pegon diveizus e hentoù! Piv en deus ana-
vezet biskoazh soñjoù Doue? Piv a zo bet biskoazh e guzulier? Pe
c'hoazh, piv en deus roet dezhañ da gentañ, ma vefe dleet en-dro ur
paemant dezhañ? Rak an holl draoù a zo digantañ, drezañ hag evitañ.
Dezhañ ar c'hloar da virviken! Amen!

Bras eo hon Doue ha bras eo e c'halloud.

V/- D'e skiant n'eus ket a harzoù, ha bras eo e c'halloud.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. : Va ene a ganneul an Aotrou, adsevel a ra an dud izel.

Pedomp gant fiziañs Tad an holl dud en ur lavarout a galon izel:

R/- Hor salvit dre ho karantez.

- Doue, mammenn ar vadelezh, diouzhoc'h e teu kement a zo mat, hol laouenait gant soñj ho purzhudoù. R/
- Sellit ouzh hor breudeur hoc'h eus galvet da brezeg an Aviel ar bed, ra vezint ministred kalonek ha fidel misterioù ho Rouantelezh. R/
- Roue habask, kasit Spered ho Mab war ar re a c'houarn ar pobloù evit ma sellint gant madelezh ouzh ar beorion hag ar reuzeudion. R/
- D'ar re a zo marvet en ho karantez grit dezho lodennañ an evurusted hag ar peoc'h gant ar Werc'hez Vari hag an holl sent. R/

Kempenn ar Sul (P. 105 ...)

=====
KOMPLIDOU
=====

Komplidoù

Moulgan

A-rack ma teue fin an deiz,
Ho pedomp, krouer mat ar bed,
Da vezañ dimp on ho truez
Hon gward e-pad an deñvalded.

Ra gilo pell ar gwall-huñvre, Ni ho ped, Tad trugarezus,
Hag ar faltazi amzers, Ha c'hwil, e Vab madelezhuz,
Argasit mat hon enebour, A ren gant ar Spered Santel
Na vezo ket hor c'horf loudour. En klod ho Meurded peurbadel. Amen!

S. 90 Ant. : Eskoud e zivaskell, n'ho pet ket aon rak an noz. SUL I - III

S. 4 & 133 Ant. : Grit sevel warnomp sklerijenn ho Fas. SUL II - IV

S. 85 Ant. : Truez ouzhin, Aotrou, c'hwil hag a c'halvan a-hed LUN

S. 142 Ant. : Na c'halvit ket ho servijer, Aotrou, dirak al lez- MEURZH

S. 30 & 129 Ant. : Va roc'holl ha va ramparzh ez oc'h-c'hwil. MERC'HER

S. 15 Ant. : Va mirit, o Doue, va ropu a zo ennoc'h. YAOU

S. 89 Ant. : Dindan skod ho tremme tirollit hon deizioù. GWEENER

S. 122 & 120 Ant. : D'annoz emañ va ene ouzho c'hountaat. SADORN

Komz Doue SUL 1 Tes 5, 9-10 Doue n'en deus ket hol laketa a-gostez evit ar gonnar, met evit ma c'honzimp ar silvidigezh dre hon Aotrou Jezus Krist, eñ hag a zo bet marvet evidomp, evit ma vezimp bepred o vevañ unanet outañ, pe dihun pe goustot e vefemp.

LUN 14] 6, 2-7 Doujañ a ri an Aotrou da Zeou holl deizioù da vuhez, mirout a ri e holl lezennoù ha gourc'hemenoù, hag e predonni warno, azezet ez ti kenkoulz hag o kerzhout war an hent, gourvezet kenkoulz hag ez-sav.

MEURZH Lm 2, 19 Garm en noz, e derou ar veilhadeg, skuilh da galon dirak an Aotrou, sav daveañ da Zeouarn.

MERC'HER Ef 4, 26-27 N'it ket d'ober an droug; arabat d'an heol mont da guzhat war ho konnar, na roit ket d'an diaoul krog warnoc'h.

YAOU 1 P 6-7 Soublit izelek dindan dom galloudus Doue, dezhañ d'hoc'h uhelaat pa vo deuet ar c'houlz. Hoc'holl brederioù, o disammit warnañ, rak eñ en deus soursi ac'hanoc'h.

GWEENER Yr 14, 9 En hon touez ez oc'h, Aotrou, ha galvet ez omp dre hoc'h anv, n'hon dilezit ket, hon Aotrou hag hon Doue.

SADORN Iz 30, 15-18 Evel-hen e komz an Aotrou: En distro a galon da Zeou hag er sioulded e oa ar silvidigezh, er fiziañs beuzvat e oa ho nerzh. An Aotrou a c'hortoz an eur d'ober deoc'h trugarez. Evurus ar re a esper omnañ.

Etre ho taouarn, Aotrou, e lakan va spered.

V/- C'hwil eo hoc'h eus hon dasprenet, Aotrou, Doue a wirionez, etre ho... V/- Klod d'an Tad...

Komplidoù

Kant. Simeon Lk 2, 29-32 Ant. : Hor salvit, Aotrou, war hon dihun,
Hon diwallit e-pad hor c'houisk,
Ma veilhimp gant ar C'hrist,
Ha ma tiskuzhimp er peoc'h.

Bremañ, o Mestr, e c'hellit lezel ho servijer,
hervez ho komz, da dremen e peoc'h;
Rak gwelet o deus va daoulagad ho silvidigezh,
an hini hoc'h eus aozet dirak an holl bobloù:
Goulou da sklerijennañ ar broadoù,
ha klod evit ho pobl Israel.

Kempedenn SUL I

Hon Aotrou hag hon Doue, ra zeuio splannder hoc'h
adsav d'hor sklerijennañ, evit ma c'hellimp tec'h-
out rak skeud ar marv ha tizhout ar sklerijenn beurbad en ho
rouantelezh. Dre ar C'hrist hon Aotrou.

SUL II - IV Doue peurbadel, selaouet hoc'h eus pedenn ho Krist
ha dieubet anezhañ eus ar marv; na lezit ket hor c'ha-
lonoù da vezañ strafuilhet, hon dinec'hit e-pad an noz, hon leu-
gnit gant ho joa, hag e c'hortozimper sioulded hag er peoc'h ma
savo warnomp sklerijenn hoc'h adsav d'ar vuhez. Dre ar C'hrist...

SUL III Doue, hon Aotrou hag hor Mestr dreist-par, gant
sklênder ho Verb peurbadel hoc'h eus sklerijen-
net hon daoulagad; bremañ paz eo noz, mirit e peoc'h hon ensou,
ha pa varvo hor buhez, hol lezit da vont d'ho paradouz gant ho
Mab Jezuz Krist hon Aotrou.

LUN E-pad ma kouskimp e peoc'h, ni ho ped, Aotrou,
grit ma savo ha ma kresko betek an eost hadenn
rouantelezh an neñvoù hon eus skoet en douar dre labour an
deiz-mañ. Dre ar C'hrist hon Aotrou.

NEURZH Hon Aotrou hag hon Doue, graet hoc'h eus dimp
klevout ho karantez e mintin hoc'h adsav; pa
zeuio evidomp ar mare da verzvel, ra zeuio anal ho puhez d'hon
ambroug betek ennoc'h. Dre ar C'hrist...

MERC'HER Doue a c'hras hag a bardon, n'hon dilezitet ket en
islonk maz omp kouezet ennañ dre hor pec'hedoù,
met selaouit garmadenn hoc'h Iliz ha grit dimp gwelout ho
silvidigezh. Dre ar C'hrist hon Aotrou.

YAOU C'hwi, Aotrou, hon lod-hervez, grit dimp klask
ennoc'h hepken hon evurusted, ha gortoz gant fi-
ziañs, en tu all d'ar marv, al levenez da vevañ ganeoc'h. Dre
ar C'hrist hon Aotrou.

GWENER E-kerz an deiz-mañ oc'h echuiñ bremañ ez oc'h
bet evidomp, Aotrou, ur repu, hag hor gwalc'h
eus ho karantez hoc'h eus roet dimp; e deiz ho tistro teur-
vezit diskouez dimp ho splannder. Dre ar C'hrist hon Aotrou.

SADORN Aotrou, hor Mestr hag hon Doue, d'ar servijer ho
po kavet fidel hoc'h eus graet ar promesa d'e
lakaat da azezañ ouzh ho taol evit e servijiñ, grit dimp bezañ
evezhiek ouzh an disterañ sin eus ho tern, evit ma c'hellimp,
goude bezañ beilhet betek ho tistro, kaout hor gwalc'h eus
holl vadoù ho Ti. Dre ar C'hrist hon Aotrou.

pe: C'hwi, Aotrou, a zo aes ho yev ha skañv ho samm,
etre ho taouarn e lakomp samm an devezh-mañ evit
ma c'hellimp kavout ganeoc'h an diskuizh. C'hwi a vevhag a ren..

Komplidoù

V/- Bennigomp an Aotrou.
R/- Bennoz da Zoue.

Hon Doue hollc'halloudek ha trugarezus d'hon bennigañ ha d'hon
diwall, an Tad, ar Mab hag ar Spered Santel. Amen!

SALVE REGINA

Salud, Rouanez, o Mari, Mamm a druez,
Buhez ha douster hag esper hor c'haezhvezh,
Etrezek ennoc'h e kricmp e-kreiz hon arvar;
Klevit hon huanad, pa c'harmomp en daerou
eus an draonienn-mañ a c'hilac'har;
Troit eta war-zu hon dienez, kened dispar ho
taoulagad trugarezus, hon advnkadez!
Ha Jezuz, ho Mab santel, frouezh ho korf benniget,
E ziskouezit dimp en neñvoù, er vuhez,
Mamm ken dous, o ken mat, o Mamm ar joa, Itron Varia.

V/- Pedit evidomp, Mamm santel da Zoue.
R/- Ma vezimp dellezek eus promesañ Jezuz.

Kempedenn

Doue hollc'halloudek ha peurbadel, gant kenlabour ho
Spered Glan hoc'h eus kempennet korf hag ene ar Wer-
c'hez Vari, ma vefe ul lojeiz dellezek eus ho Mab,
grit dimp-ni hag a zo leun a joa o lidañ an envor
anezhi, bezañ dieubet, dre ha fedenn drugarezus, eus
an droug a-vremañ hag eus ar marv peurbadus. Ni ho
ped dre an hevelep Jezuz Krist hon Aotrou.

ALMA REDEMPTORIS MATER

Ni ho ped, Gwerc'hez Mamm hor Salver, a zo d'ar bara-
doz an nor asur ha steren ar mor, teurvezit hor sikour, skoazel-
lit ho pobl en hoc'h enkreiz. Ganeoc'h eo bet ganet, estlamm bras
d'hon natur, an Hini en deus ho krouet. Gwerc'hez bepred, ha goude
genel, gant salad Gabriel resevit hon Ave, hag ouzhimp, peorion,
ho pet truez.

V/- Ael an Aotrou a zegasas ar C'hel'ou mat,
R/- Ha dre nerzh ar Spered e voe dougerez ar Werc'hez.

Kempedenn

Skuilhit ho krasoù puilh en hor spered, Aotrou, ha gou-
de anavezout dre galoù mat an Ael enkerfidigezh ho Mab
Jezuz, ra vimp degaset dre hent e boanioù hag e Groaz
betek klod an Dasorc'h peurbadus. Ni ho ped dre an
hevelep Jezuz Krist hon Aotrou.

V/- Benniget oc'h dreist an holl gwragez,
R/- Ha benniget frouezh ho korf, Jezuz.

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus grataet da Vab-den ar
silvidigezh peurbadel dre Werc'head frouezhus an Itron
Varia, grit dimp klevout oc'h aspediñ evidomp ho truez
an Hini hon eus drezi resevet oberour hor buhez, Jezuz
Krist, ho Mab hag hon Aotrou.

Komplidoñ

AVE REGINA COELORUM -

Salud, Rouanez an Neñv,
Salud, o Itron an holl Aeled,
Drezoc'h eo paret war ar bed
Gwir sklerijenn an eneoù;

V/- Va lezit d'ho meulifi, o Gwerc'hez sakr,
R/- Ha roit norzh gin-me a-enep hoc'h enebourion.


Kempedenn Doue trugarezus, gratait ho kwarez d'hon gwaded, ha
pa reomp anv eus Mamm santel Doue, grit dimp adsevel
eus hon holl bec'hedoù, dre skoazell vat he fedennoù.
Ni ho ped dre Jezuz Krist hon Aotrou.

REGINA COELI -

Rouanez an neñv, en ho joe, alleluia!
Tritit, rak an Hini hoc'h eus douget, alleluia!
'Zo dasorc'het, evel laret, alleluia!
Pedit evidomp Doue, alleluia!

V/- Bezit laouen ha drant, Gwerc'hez Vari, alleluia!
R/- Rak dasorc'het en gwirionez eo an Aotrou, alleluia!

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus en ho trugarez
laouenaet ar bed gant dasorc'hidigezh ho Mab, Jezuz
Krist hon Aotrou, grit dimp dre bedennoù e Vamm santel,
ar Werc'hez Vari, gonit levezioù ar vuhez
peurbadel. Ni ho ped dre an hevelep Jezuz Krist hon
Aotrou.



- I - (Sizhunvezh kentañ) - Badeziant hor Salver.
Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, selaou gant madelezh goulennoù ho
pobl a zo ouzho pe diñ, roit da bep hini ar c'hras da welout
sklaer ar pezh en deus d'ober hag an nerzh d'ober ar pezh en
deus gwelet. Dre hor Salver Jezuz Krist, ho Mab hag hon Aotrou,
a vev hag a ren, Doue ganeoc'h ha gant ar Spered Glan a-holl-
viskoazh da virviken. Amen.
II - Doue peurbadel hag hollc'halloudek, c'hwi hag a ren gant furnez
traoù an Neñvoù ha traoù an douar, selaouit gant madelezh peden-
noù ho pobl ha roit dimp ho peoc'h en hon amzer. Dre H. S. J. K.
III - Doue hollc'halloudek ha peurbadel, renit hor buhez evel ma plij
deoc'h, evit ma c'hellimp, dre veritoù ho Mab karet, dougen
frouezh e-leizh a santelezh hag a vertuz. Dre Jezuz Krist...
IV - Roit dimp ar c'hras, ni ho ped, C'hwi hor Mestr hag hon Doue,
d'ho toujañ a-greiz hor c'halon ha da gaout e-keñver pep den
ur gwir garantez. Dre Jezuz Krist...
V - Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, diwall hep ehan gant karantez ho
servijerion, ha peogwir e lakomp ennoc'h hepken hon esper, teur-
vezit hor mirout e pep amzer dindan ho kwarez. Dre Jezuz Krist...
VI - Aotrou Doue, pa lavarit e vezit o chom er c'halonoù reizh ha
leal, grit deomp bevañ e-giz-se gant sikour ho kras, evit ma
plijo ganeoc'h dont da chom ennoc'h. Dre Jezuz Krist...
VII - Crit, ni ho ped, Doue hollc'halloudek, ma vimp troet bepred da
soñjal en traoù santel, evit na glaskimp nemet plijout deoc'h
dre gomz ha dre ober. Dre Jezuz Krist...
IX - Aotrou Doue, C'hwi hag a ren ar bed hep na zeufe ho furnez da
faziñ, pellait diouzhip an holl draoù noazus, ha roit dimp
kement a c'hell hor sikour. Dre Jezuz Krist...
X - O Doue, C'hwi hag a zeu diganeoc'h kement mad a zo, roit dimp
hor goulen, hervez ho largentez; sklerijennet gant ho kras,
ra zougimp hor spered da soñjal er pezh a zo reizh ha santel,
hag hor renit C'hwi hoc'h-unan evit hen ober. Dre Jezuz Krist...
XI - Aotrou Doue, C'hwi nerzh ar re a esper ennoc'h, selaouit gant
madelezh ouzho hor pedennoù: pa ne c'hell sempladurezh an den
marvel ober hepdoc'h netra santel, roit dimp bepred ho kras
evel skoazell, ma c'hellimp heuliañ ervat ho kourc'hemennoù
ha plijout deoc'h dre hor bolontez vat hag hon oberoù. Dre
Jezuz Krist...
XII - Grit dimp bevañ e pep amzer, ni ho ped, Aotrou Doue, er garan-
tez hag en doujañs dileet d'hoc'h anv santel, rak ne vankit morse

Kempedennoù

da ren ar re a stagit ouzhoc'h gant liamm start ar garantez.
Dre Jezuz Krist...

- XIII - Fellet ez eus bet deoc'h, Aotrou Doue, e teufemp da vezañ, gant donezon ho kras, mibion ar sklerijenn; plijet ganeoc'h ni ho ped, mirout na vefemp paket gant teñvalijenn ar gaol, hag ober ma talc'himp bepred da lugerniñ e-kreiz splannder ar wirionez. Dre Jezuz Krist...
- XIV - Aotrou Doue, dre ho Mab en em c'hrast izel-meurbet hoc'h eus adsavet ar bed gourvezet er marv; roit, ni ho ped, d'ho tud fidel levenez santel, ha peogwir hoc'h eus o zennet eus chadennoù ar pec'hed, grit dezho tañva un deiz an evurusted peurbadus. Dre Jezuz Krist...
- XV - Aotrou Doue, C'hwi hag a ziskouez d'an dud dianket sklerijenn ho kwirionez evit o degas en-dro war an hent mat, roit, ni ho ped, da gement hini a zo enskrivet war roll ar gristenion, ar c'hras da zilezel kement a zo kontrol d'an anv-se ha da glask a-greiz kalon kement a zere outañ. Dre Jezuz Krist...
- XVI - Bezit leun a druez, Aotrou Doue, e-keñver ho servijerion, hag en ho madelezh kargit anezho gant donezonoù ho kras, ma vo birvidik en o c'hriz ar Feiz, an Esperañs hag ar Garantez, ha ma vint bepred war-vezh evit mirout ho kourc'hemennoù. Dre Jezuz Krist...
- XVII - Aotrou Doue, C'hwi hag a ziwall ar re a gont warnoc'h ha n'eus hepdoc'h netra start, netra santel, skuilhit warnomp ho krasoù gant largentez, evit ma c'hellimp, heñchet ha renet ganeoc'h, tennañ implij eus madoù tremeniat ar bed-mañ en doare da vezañ stag dija ouzh ar re na dremenont ket. Dre Jezuz Krist...
- XVIII - Roit sikour, Aotrou Doue, d'ho servijerion, ha skuilhit hep ehan ho madelezhoù war ar re a zo ouzh ho pediñ, ha peogwir ez eo o gloar ho kaout da Vestr ha da Grouer, nevesait enno donezonoù ho karantez, ha mirit goude-se e stad vat ar pezh ho po nevesaet. Dre Jezuz Krist...
- XIX - Doue hollc'halloudek ha peurbadel, C'hwi hag a c'hellomp dija lavarout deoc'h hon Tad, lakit da greskiñ en hor c'halonoù ar spered-se hag a ra ac'hanomp gwir vugale deoc'h, ma c'hellimp un deiz kaout perzh en herezh prometet. Dre Jezuz Krist...
- XX - Evit ar re ho kar, Aotrou Doue, hoc'h eus aozet madoù ha n'hell ket lagad an den gwelout; skuilhit en hor c'halonoù tan ho karantez evit m'ho karimp e pep tra ha dreist pep tra, en doare ma c'hellimp kaout an herezh hoc'h eus prometet hag a zo trec'h da bep c'hoantegezh. Dre Jezuz Krist...
- XXI - Aotrou Doue, C'hwi hag a ra da speredoù ho tud fidel kaout ar memes bolontez, roit d'ho pobl ar c'hras da garout ar pezh a c'houre'hemennit ha da c'hoantaat ar madoù a brometit, evit ma vo, e-kreiz cheñchamantoù ar bed-mañ, stag-mat hor c'halonoù e-lec'h m'emañ ar gwir joaloù. Dre Jezuz Krist...

Kempedennoù

XXII - Aotrou Doue, Mestr ar bed, diganeoc'h e teu pep donezon peurbat, lakit don en hor c'halonoù ar garantez evit hoc'h anv, magit ennomp ar pezh a zo mat dre greskiñ en hor c'hriz ar vertuz a relijion, ha beilhit gant madelezh war ar pezh a zo bet maget dija ganeoc'h evit hen mirout. Dre Jezuz Krist...

XXIII - Ho Mab hoc'h eus kaset, Aotrou Doue, d'hor salviñ ha d'ober diouzhimp ho pugale, sellit, ni ho ped, gant madelezh, ouzh ar re a garit evel un Tad, ha peogwir e kradomp e Jezuz Krist, roit dimp ar c'hras da vevañ er gwir frankiz ha da gaout un deiz an evurusted peurbadus. Dre Jezuz Krist...

XXIV - Aotrou Doue, Krouer ha Mestr kement tra a zo, taolit warnomp ho sell, ni ho ped, hag evit ma santimp efed vat ho karantez, roit dimp ar c'hras d'ho servijañ gant ur galon reizh. Dre Jezuz Krist...

XXV - Fellet ez eus bet deoc'h, Aotrou Doue, e vefe klozet kement a zo en ho Lesenn er garantez en ho keñver hag e-keñver an mesañ, roit dimp ar c'hras, ni ho ped, da virout ho kourc'hemennoù ha da dizhout evel-se ar vuhez peurbadus. Dre Jezuz Krist...

XXVI - Aotrou Doue, C'hwi hag a ziskouez ho kalloud bras dreist-holl o kaout truz hag o pardonñ, skuilhit ho kras warnomp hep paouez, ma kerzhimp mall warnomp war hent ho promesañ evit rosev un deiz diganeoc'h lod e madoù ar baradoz. Dre Jezuz Krist...

XXVII - Doue hollc'halloudek ha peurbadel, dre largentez ho madelezh ez oc'h trec'h da veritoù ha da c'hoantoù ar re ho ped; skuilhit warnomp ho trugarez evit pardonñ dimp ar pec'hedoù a ra d'hor c'houstiañs spontañ, hag evit reiñ dimp ar pezh na gradomp ket goulem. Dre Jezuz Krist...

XXVIII - Ni ho ped, Aotrou Doue, grit d'ho kras bezañ bepred en hor raok ha war hol lerc'h, ma vimp douget ganti e pep amzer d'an oberoù mat. Dre Jezuz Krist...

XXIX - Doue hollc'halloudek ha peurbadel, roit dimp ar c'hras da ouest-lañ deoc'h bepred hor bolontez, ha da servijañ ho gloar gant ur galon leal. Dre Jezuz Krist...

XXX - Doue hollc'halloudek ha peurbadel, kreskit ennomp, ni ho ped, ar Feiz, an Esperañs hag ar Garantez, hag evit ma c'hellimp obten ar pezh a brometit, grit dimp karout ar pezh a c'houre'hemennit. Dre Jezuz Krist...

XXXI - Doue hollc'halloudek ha trugarezus, dre ho kras e roit d'ho tud fidel galloud d'ho servijañ evel ma'z eo dleet; grit dimp, ni ho ped, mont war-raok, hep na zeufe netra d'hon herzel, davet ar madoù a brometit. Dre Jezuz Krist...

Kempedennoù

XXXII - Aotrou Doue, C'hwi hag a zo mat hag hollc'halloudek, pellait diouzhip, ni ho ped, kement a zo o stourm ouzhip, ma vimp dishual a gorf hag a spered en doare da vezañ e stad d'ober a galon vat ho polontez santel. Dre Jezus Krist...

XXXIII - Reit dimp ar c'hras, ni ho ped, Aotrou Doue, da gaout hol levenez ouzh ho servijañ gant lealded, rak n'eus ket kaeroc'h na padusoc'h evurusted eget bezañ e servij Krouer an holl vadou. Dre Jezus Krist...

XXXIV - Entanit kalonoù ho tud fidel, ni ho ped, Aotrou Doue, ma klas-kint gant muicoc'h a c'hred frouezh an oberoù-mat evit resev evel-se muicoc'h a c'hrasoù digant ho madelezh. Dre Jezus K...



Azvent

=====
A M Z E R A N A Z V E N T
=====

SADORN D'ABARDAEZ
=====

Meulgan

Deuit, Aotrou, prest eo an douar 'vit ho tegemer.
Deuit, Aotrou, war hon irvi ar greun 'c'hell azviñ.
Rak kement den 'zo o c'hortoz Verb Doue;
Ra zigoro erfin an Neñvoù d'hon hiraezh!

R/- Doue, ra zeuy ho Rouantelezh!

Deuit, Aotrou, n'eus ken a vara ha naon hon eus.
Deuit, Aotrou, prest eo an daol evit ar banvez.
Ra vezo ho korf hcn nerzh evit an dsiz,
Ho pezañs ennomp d'entanañ ar garantez. R/

Deuit, Aotrou, da c'houzañv ennomp diwaskoù ar marv,
Deuit, Aotrou, da zougen ar bec'h a bleg hor c'horf.
Ra savo ho Kroz da stajkañ hor gouelvan,
Hag ho sell, dizale, da skarzhañ hon aon! R/

Deuit, Aotrou, rak yen eo ha n'eus fin ebet d'an noz.
Deuit, Aotrou, esperañs hon eus en ho peure.
Ra savo ho peoc'h war hon ankenioù,
Ha war ar bed toc'hor, ho Spered entanet! R/

DERC'HENT AR SUL I

S. 115 Ant. : En em ziskouez a ray an Aotrou en e c'hloar ha
pop dan a welo silvidigezh Doue.

S. 112 - : Pobl Doue, gwel da Aotrou: dont ara da salviñ ar broadoù.

Kant. Fil 2, 6-11 : Setu hon Doue o tont d'hor salviñ.

Jezus, hag a oa Doue a stumm
ne sellas ket evel e dra
chm en e renk, par da Zoue.

R/- Jezus Krist eo an Aotrou evit gloar Doue an Tad.

Met da netra eo 'n em laket,
dre gemer stumm ar servijer,
ha dont da vezañ 'giz an dud. R/

Goude 'n em ziskouez 'val un den,
en deus c'hoazh en em izelaet,
dre sentif betek ar marv,
betek ar marv war ar Groaz. R/

Setu perak en deus Doue
uhelsavet anezhañ,
ha roet dezhañ un anv
a zo a-us da bep anv. R/

Ma vo pep glin, en anv Jezus,
o plegañ e lein an neñvoù
war an douar hag e bed an Ankou,

evit ma tisklerio pep teod
eo Jezus Krist eo an Aotrou
evit gloar Doue an Tad.

DERC'HENT AR SUL II

Azvent

- S. 118, 105-112 Ant. : Doue a zeud'hon salviañ hag an douar a zo leun gant e c'hloar.
- S. 15 - : Sav, Jeruzalem, sell ouzh al levenez a zeudavedout.
- Kant. Fil 2, 6-11- : An Aotrou en em ziskoueze en e c'hloar ha pep den a welo silvidigezh Doue.

DERC'HENT AR SUL III

- S. 115 Ant. : Pobl Doue, setu da Salver.
- S. 112 - : Bezit kalonek, c'hwi holl hag a esper en Aotrou.
- Kant. Fil - : Ra vo leun-barr an neñvoù a levenez ha ra drido an douar a joa e pep lec'h.

DERC'HENT AR SUL IV

- S. 121 Ant. : (17 - 25 Kerzu)
- S. 129 - : - - - - -
- Kant. Fil - - - - -

Komz Doue 1 Tes 5, 23-24 Doue ar peoc'h e-unan d'ho santelaat e kement a zo ac'hanoc'h; ho spered, hoc'h ene hag ho korf da vezañ miret didamall a-benn Donedigezh hon Aotrou Jezuz Krist. Feal eo an Hini ho kalv; eñ an Hini a raio kement-se.

Va one a gont war an Aotrou, fiziañs am eus en e gomzoù.

- V/- Eus donder an islonk e krian davedoc'h, Aotrou, selaouit va galvadenn; fiziañs am eus en e gomzoù.
- V/- Klod d'an Tad...

- Kant. ar W.:
- I - Setu an Aotrou; dont a ra eus a-bell, an douar a-bezh a zo leun gant e c'hloar.
 - II - Kompennit hentoù an Aotrou, plaenait an hent: pep den a welo silvidigezh Doue.
 - III - Jeruzalem, diroll da youc'hal gant joa, rak emañ da Salver o tont, alleluia!
 - IV - (17 - 25 Kerzu)

Pedomp Jezuz Krist hon Aotrou, ganet eus ar Werc'hez Vari ha lavaromp dezhañ:

R/- Deuit, Salver Jezuz.

- Mab unganet Doue an Tad, C'hwi hag a zo 'n em c'hraet den e korf ur werc'hez, hon dieubit diouzh chadennoù ar peoc'hed. R/
- C'hwi hag a zo deuit evit trec'hiñ war ar marv dre ar vuhez, n'hol lezit ket da vezañ kondaonet d'ar marv. R/
- Ho karantez fidel da reiñ dimp ar gopr evel m'he deus dalc'hamat roet dimp ar pardon eus hor peoc'hedoù. R/
- C'hwi hag hoc'h eus sikouret ar re varv dre ho marv hoc'h-unan, selaouit hor pedennoù evit hor breudeur tremenet. R/
- Bezit benniget, C'hwi a vev hag a ren pep tra, roit dimp en ho madelezh ar c'hras da gaout un deiz an evurusted peurbadel. R/

Azvent

Kempedenn

- I - Roit d'ho tud fidel, ni ho ped, Aotrou Doue, mont gant nerzh-kalon war hentoù ar reizher da ziambroug ho Mab Jezuz Krist, evit ma vint galvet da zeiz ar varn da gaout perzh gantañ e Rouantelezh an Neñvoù. Dre Jezuz Krist...
- II - Doue hollc'halloudek ha trugarezus, p'emaomp o vont, pres warnomp, en arbenn d'ho Mab, mirit na ve scursi nag afer ebet eus ar bed-mañ ouzh hor strobañ, ha grit dimp heuliañ kentelioù ar Furnez eus an Neñv, evit ma vimp degemeret en e gompagnunezh. Dre ESJK.
- III - Aotrou Doue, pa welit ho pobl o c'hortoz gant feiz goul Ginivelezh hor Salver, roit dimp ar c'hras, ni ho ped, da vezañ prest a-benn joañic' ur silvidigezh ken bras, ha da lidañ ar goul-se bep bloaz er vrasañ levenez. Dre Jezuz Krist...
- IV - Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, skuilh ho kras en hor c'halenoù, ha peogwir hon eus anavezot, dre salud an Ael, mister ho Mab en em c'hraet den, renit ac'hanomp dre hent e Basion hag e Groaz, betek gloar an adsav d'ar vuhez. Dre Jezuz Krist...

SULIOU AN AZVENT

OFIS AL LENNADEMOU

Meulgan

Sklerder 'vit an den a-hiziv,
 Abaoe ez eus war an douar
 Ur paour oc'h esperif ennoc'h,
 Tizhit an den dall 'zo onnon!
 Grit ma welo va daoulagad
 Pegement 'karit ac'hanon.
 Penaos goñt pelec'h 'mañ an deiz
 Mar n'anzavan ket me va noz?

Komzoù Doue e-kreiz va c'horf
 A lar ar bed hag e istor
 Evit d'an den gallout krediñ,
 Enaouit onnon ur respont!
 Digorit va genou d'ar vouezh
 A dregern 6-barzh ar gouelec'h.
 Penaos anaout ho lavaronn
 Mar ne zalc'han kalon digor?

Hadenn beurbad e-barzh va c'horf,
 Hag onnon bevoc'h egedon,
 Abaoe amzer va badeziant,
 Dougit onnon e-leizh a frouezh!
 Diwanit e skeud va eskern,
 Rak ne don c'hoazh nemet ludu.
 Ha penaos anaout ho puhez
 Mar ne zegemaran va marv?

Salmoù hag antifonennoù an deiz

- V/- Ur vouezh a c'harm er gouelec'h: kompennit hent an Aotrou.
- R/- Plaenait e wenedennoù.

OFIS AR BEURE

- S. 94 R/- I & II : Ar Roue a zo o tont: deuit, azeulomp anezhañ.
- III & IV : Bremañ emañ tost an Aotrou: deuit, azeulomp anezhañ.

Sulioù an Azvent

Meulgan

- 1 - O Tad ar c'hantvedoù bedal
Sed an Deiz diwezhañ-ganet
A sav
'Vit mont drezomp da ziambroug
Kentañ-ganet ho karantez.
- 2 - Eñ a zigore evidoc'h
Eñ eo a gane dirazoc'h
An deiz
D'ar c'houlz na oa den ebet c'hoazh
Da gemer perzh en e gaerder.
- 3 - Drezhañ pep tra 'chom da c'henel
Hon deizioc'h en o c'hozh-amzer
A sav
En o dihun d'e yacuankiz,
Rak sevel a ra er Sav-heol.
- 4 - Eñ eo a zasorc'h dibaouez
Eñ a vir a-hed an amzer
Ar c'han
Estlamm et abaoe an derou
Dirak oberenn ho taouarn.

- 5 - Setu ar sklerijenn nevez
O sevel e den ar c'horfoù,
O Tad,
War an douar kasit alan
Kentañ-ganet ar re varc'h.

- I - S.62 Ant. : An Aotrou en em ziskouezo en e c'hloar ha pep den
a welo silvidigezh Doue.
Kant. Dn p.6: Pobl Doue, gwel da Aotrou: dont a ra da salviñ ar broadoù.
S.149 Ant. : Setu hon Doue o tont d'hor salviñ.
- II - S.117 Ant. : Doue a zeu d'hor salviñ hag an douar a zo leun gant
e c'hloar.
Kant. Dn p.31: Sav, Jeruzalem, sell ouzhal levezeg a zeu davedout.
S.150 Ant. : An Aotrou en em ziskouezo en e c'hloar: pep den a
welo silvidigezh Doue.
- III - S.92 Ant. : Pobl Doue, setu da Salver.
Kant. Dn p.6 : Bezit kalonek, c'hwi holl hag a esper en Aotrou.
S.148 Ant. : Ra vo leun an Neivoù a jae ha ra drido an douar
e pep lec'h rak emañ o tont.
- IV - S.117 Ant. : En em laouenait en Aotrou, rak emañ o tostaat.
Kant. Dn p.31: Doue a zeu d'hor salviñ hag an douar a zo leun gant
e c'hloar.
S.150 Ant. : Astenn a ray e vestroni, ur peoc'h hep fin a reno.

Komz Doue Rm 13, 11-12

An our eo bremañ evidoc'h d'en em
denañ eus ar c'houked, tostoc'h
dimp emañ bremañ ar silvidigezh eget pa 'z omp deuet d'ar feiz. An
noz a zo aet war-raok, emañ an deiz o tostaat. Distalomp eta oberoc'h
an deñvalijenn, ha gwiskomp armoù ar sklerijenn.

Grit dimp, Aotrou, gwelout ho karantez.

- V/- Roit dimp ho silvidigezh, Aotrou, ho karantez.
- V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.

- I - Ar Spered Santel a zeuio warnout, ha galloud an Uheleñ
az koloc'h gant e skeud.
- II - Deuit, Aotrou, d'hon gweladenniñ er peoc'h.
- III - Skuilh da c'hlizhenn, o Neñv, gra diskenn ar Just,
o Koabrenn, gan ar Salver, o Douar.
- IV - (17 - 24 Kerzu)

Sulioù an Azvent

Pedomp gant feiz an Aotrou Jezuz Krist, barnet ar re vev hag
ar re varv, ha lavaromp dezhañ:

R/- Deuit, Salver Jezuz!

- Aotrou Jezuz Krist, C'hwi hag a zo deuet da salviñ ar bec'harion,
hon dieubit eus pep temptadur. R/
- C'hwi hag a zeuio gant gloar evit barn ac'hanomp, diskouezit
dimp ho kalloud a c'hall hor salviñ. R/
- Roit dimp ar c'hras da heuliañ gant nerzh-kalon komennadurioù
ho lezonn, evit ma c'hortozimp ho tonedigezh gant karantez. R/
- Bezit benniget, C'hwi a vev hag a ren pep tra, dre ho truga-
rez grit dimp bevañ er bed-mañ gant furnez, reizhder ha dou-
jañs Doue, evit gortoz an esperañs evurus hag ho Tonedigezh
er c'hloar. R/

Kempedenn p. 111

OPIS KREISTEIZ

Meulgan, Salmoù hag Ant. ar Sul

Komz Doue 1 Tes 3, 12-13

Ha c'hwi, ra blijo gant an Aotrou ho
lakaat da greskiñ ha da fonnaat er
garantez an eil evit egile, evel ivez e-keñver an holl, diwar skouer
ar garantez hon eus-ni en ho keñver. Ra vo startaet ho kalonou en ur
santelezh didemall dirak Doue hon Tad, a-benn donedigezh hon Aotrou
Jezuz gant e holl Sent.

- V/- Ur vouezh a c'harmer gouelec'h: kempennit hent an Aotrou.
- R/- Plaenait e wenedennou.

Kempedenn p. 111

OPIS AN ABARDAEZ

Meulgan

- 1 - O Mab an Tad, Salver ar bed,
Diskennit prim eus an neivoù;
Gwir sklerijenn ar speredoù,
I'hol lezit ket en hor pec'hed.
- 2 - Deuit buan, deuit timat,
Evit salviñ hon eneoù,
Evit digoll ar pec'hedoù
O deus dismegañset an Tad.
- 3 - Douget gant nerzh ho karantez,
Setu ma tiskennit er bed,
Profad dinamm ha dibec'hed,
O kemor korf eus ar Werc'hez.
- 4 - Roue an holl grouadelezh,
Kaset gant Aled an neivoù,
Ra blego bremañ ar broioù
Dindan lezenn ho karantez.
- 5 - C'hwi 'zeuio c'hoazh leun a splann-
Barnet bras an deiz diwezhañ, / der,
Gant trugarez a-dal bremañ
Evidomp bezit ur Salver.
- 6 - Meulgan ha gloar hag azaouez
D'an Tad, d'ar Mab ha d'ar Spered,
A-berzh an dud hag an Aled
A-hed an holl beurbadalezh. Amen.

I - S. 109, 113 A, Kant. Disk 19 : Ant. ar beure p. 112

Ar silvidigezh, ar c'hloar hag argalloud d'hon Doue, alleluia!
Gwirion ha reizhe varmedigezhioù. R/- alleluia, alleluia!

Meulit hon Doue, servijerion an Aotrou, alleluia!
C'hwi holl hag a zouj anezhañ, bihan ha bras. R/

Setu ma ren evel Roue, an Aotrou, hon Doue, mestr an hollved, alle-
Besomp laouen ha tridomp, roomp gloar dezhañ. R/ luia!

Rak setu deuet eured an Oan, alleluia!
Hag e bried a zo en em gempennet. R/

Sulioù an Azvent - Lun

II - S. 109, 113 B, Kant. Disk.: Ant. p. 112

III - S. 109, 110, Kant. Disk.: - p. 112

IV - S. 109, 111, Kant. Disk. - p. 112

Komz Doue Fil 4, 4-5 En em laouenait hep ehan an Aotrou,
hel lavarout a ran adarre, en em laoue-
nait. Ra vezo anat ho touster d'an holl dud. Tost eo an Aotrou.

Va ene a c'hortoz an Aotrou, fiziañs am eus ene gomzou.

V/- Eus donder an islonk e krian davedoc'h, Aotrou, selaouit
va galvadenn, fiziañs am eus ene gomzou.

V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: I - Bezit dinec'h, o Mari, gras hoc'h eus kavet dirak Doue.
II - Ar Werc'hez a gonsevo, a c'hano ur Mab, Emmanouel, Doue
III - Wardron David e reno da virviken, alleluia. /ganimp.
IV - (17 - 24 Kerzu)

Pedomp ar C'hrist Dasprener a zeu evit salviñ an holl dud,
ha lavaromp dezhañ:

R/- Deuit, Salver Jezuz.

- Aotrou Jezuz Krist, o tont d'on em ober den hoc'h eus diskouezet
d'ar bed gloar ho natur-Doue; grit dimp advevañ dre ho tonedigezh. R/
- C'hwi hag hoc'h eus kemeret hon gwander, diskouezet dimp ho
trugarez. R/
- Deut oc'h gent izelegezh evit dasprenañ ar bed eus ar pec'hed,
pa zeufot evit an eil gwech hor salvit eus hor mankoù. R/
- Bezit benniget, C'hwi a vev hag a ren pep tra; dre ho trugarez
roit dimp ar c'hras da c'hounit an evurusted peurbadel. R/

Kempedenn p. 111

=====

== L U N A N A Z V E N T ==

=====

OPIS AR BEURE

Komz Doue Iz 2, 3 Deuit, savomp war verez an Aotrou,
da di Doue Jakob. Kelenn a ray e
hentoù hag e heuilhimp e wenedemoù. Rak eus a Sion eo e teu al
Lezenn hag eus Jeruzalem komzoù an Aotrou.

Diskouezet dimp, Aotrou, ho karantez.

V/- Roit dimp ho silvidigezh, Aotrou, ho karantez.

V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Setu ma teu hor Salver. N'ho pet ket aon.

Pedomp ar C'hrist Dasprener a zle dont hep dale ha lavaromp dezhañ:
R/- Deuit Salver Jezuz.

- Gortoz a reomp ho Tonedigezh, Aotrou, teurvezit glanaathor
c'halenoù eus a spered an distervez. R/
- Grit d'an Iliz diazezet ganeoc'h reiñ gloar deoc'h e-touez ar
broadoù. R/

Lun an Azvent

- Grit d'ho Lezenn bezañ sklerijenn hon daoulagad: ra zeuio da
wareziñ ar pobloù a veul ac'hanoc'h. R/

- Bezit benniget, C'hwi an Doue bev hag a ren pep tra; dre ho
trugarez grit d'ho bevañ er bed-mañ gant fumez, reizher ha
doujañs Doue, evit gortoz an esperañs evurus hag ho tonedi-
gezh er c'hloar. R/

Kempedenn (Beure ha kreiteiz) Grit ma savo hor pedenn betek annoc'h,
Aotrou, ha ma teuo e kalon ho servi-
jerion ar c'hoantoù reizh ha kreñv a lako anezho prest a-benn
donedigezh ho Mab. Eñ a vev hag a ren gant an Tad hag ar Spered
Glan a-holl-viskoazh da virviken.

OPIS AN ABARDAEZ

Komz Doue Ms 2, 6 Ha te, Betlehem, douar Youda, n'out ket
an disterañ e-touez kêrioù Youda; rak
ac'hanout e teuo ur penn-rener hag a vo pastor va fobl Israel.

Va ene a gont war an Aotrou, fiziañs am eus ene gomzou.

V/- Eus donder an islonk e krian davedoc'h, Aotrou, selaouit
va galvadenn, fiziañs am eus ene gomzou.

V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Sav da zaoulagad, Pobl Doue, gwel ar Roue galloudek a zeu
d'az tieubiñ.

Pedomp gant feiz an Aotrou Jezuz Krist, barm ar re vev
hag ar re varv, ha lavaromp dezhañ:

R/- Deuit, Salver Jezuz.

- Aotrou Jezuz Krist, C'hwi hag a zo deut evit hon dasprenañ, hon
renit betek splander ho kloar en ho Rouantelezh. R/
- Pa 'z oc'h deut, hoc'h eus adunvanet ar bed gant an Tad; pa zeu-
fot d'hor barn, hon dieubit eus ar poanioù hon eus maritet. R/
- C'hwi hag a zle dont evit barn ac'hanomp, grit maz antre ar re
varv e Rouantelezh an Meñvou. R/
- Bezit benniget, C'hwi an Doue bev hag a ren pep tra; dre ho tru-
garez roit dimp ar c'hras da gaout un deiz an evurusted peurbadus. R/

Kempedenn Roit dimp ar c'hras, ni ha ped, Aotrou,
da c'hortoz hep falladenn donedigezh ho
Mab, evit ma kavo ac'hanomp o veilhal er bedenn, pa zeuio da
skeiñ war hon nor, hag evurus o kanañ e veuleudi. Eñ a vev ...

=====

== M E U R Z H A N A Z V E N T ==

=====

OPIS AR BEURE

S. 94 R/- p. 111

Meulgan p. 112

Komz Doue Gn 49, 10

Ne vo ket lemet ar vash-roue digant Youda,
ar wialenn eus etre e droid, ken na zeuio
an Hini eo dezhañ hag e sento ar pobloù outañ.

Meurzh an Azvent

Grit dimp gwelout, Aotrou, ho karantez.
V/- Roit dimp, Aotrou, ho silvidigezh, ho karantez.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Setu an Aotrou o tont, hag e Sent gantañ.

Pedomp an Aotrou Jezuz Krist, sklerijenn o luc'hañ war gement den a zeu er bed-mañ, ha lavaromp dezhañ:

R/- Deuit, Salver Jezuz.

- Hor salvit, C'hwi hon Aotrou hag hon Doue, evit ma kanmeulimp hiziv hoc'h anv santel. R/
- Ra zeuio sklerder ho pezañs da sklerijennañ hon tañvalijenn ha d'hol lakaat dellezek da zegemer ho tonezonoù. R/
- C'hwi hag hoc'h eus kemeret warnoc'h hon gwander, deuit da skoazel-lañ ar glañvourion hag ar re a zo war o zremenvan. R/
- Bezit benniget, C'hwi an Doue bev hag a ren pep tra, dre ho truga-rez grit dimp bevañ er bed-mañ gant furmez, reizhder ha doujañs Doue, evit gortoz an esperañs evurus hag ho tonedigezher c'hoar. R/

Kempedenn (Beure ha kreisteiz)

Respontit, ni ho ped, Aotrou,
d'hor galvadennoù, en ur reiñ
ho sikour d'an dud a zo o stourm hag o poaniañ, ha peogwir
emañ o chom en hon touez an Hini a zle dont, ho Mab muiañ-
karet, ra blijo gantañ reiñ dimp nerzh-kalon, hag hormirout
ouzh gwastadur ar pec'hed. Dre Jezuz Krist...

OFIS AN ABARDAEZ

Komz Doue I Kor I, 7-9

Gortoz a rit Emziskleriñdur hon Aotrou
Jezuz Krist. Doue eo an Hini ho startaio
betek ar fin, evit ma vefot didamall en Deiz hon Aotrou Jezuz Krist.
Peal eo an Doue en deus ho kalvet da genvevañ gant e Vab Jezuz Krist
hon Aotrou.

Va ene a gont war an Aotrou, fiziañs am eus en e gomzoù.
V/- Eus donder an islonk e krian davedoc'h, Aotrou, selaouit va
galvadenn, fiziañs am eus en e gomzoù.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. : Klaskit an Aotrou, tra ma c'heller e gavout; pedit anezhañ
rak tost emañ.

Pedomp Jezuz Krist hon Aotrou hag hon Dasprener, a zeuio da fin
an amzerioù, ha lavaromp dezhañ:

R/- Deuit, Salver Jezuz.

- C'hwi hon Aotrou hag hon Dasprener, o kemer hon natur-den hoc'h eus dieubet ar bed eus ar pec'hed, grit ma raio berzh ennomp madoberoù ho karantez. R/
- Kemeret hoc'h eus ennomp ar pezh a glote gant ho natur-Doue, deuit da leuniañ hon natur-den gant ho pinvidigezhioù. R/
- Roit dimp ar c'hras da vezañ laouen ganeoc'h, rak ho kanmeulif a fell dimp gant ur feiz wirion. R/
- Skuilhit puilh ho karantez war hon holl vreurder tremenet. R/

- Bezit benniget, C'hwi an Doue bev hag a ren pep tra, dre ho truga-rez, roit dimp ar c'hras da gaut un deiz an evurusted peurbadus. R/

Kempedenn

Prometet hoc'h eus, Doue hollc'halloudek,
kas ur Salver da holl bobloù an douar;
grit dimp ar c'hras da c'hortoz er jea deiz glorius e c'hane-digezh. Eñ a vev hag a ren...

MERC'HER AN AZVENT

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- ha Meulgan p. 111 - 112.

Komz Doue Ia 7, 14-15.

Setu ma koñsevo ur werc'hez hag e c'hano
ur Mab a vo galvet e anv Emmanuel.

Amann ha mel a zebro hag e ouezo disteurel an droug ha dibab ar mad.

Grit dimp gwelout, Aotrou, ho karantez.
V/- Roit dimp, Aotrou, ho silvidigezh, ho karantez.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Me eo ar vouezh a gri er gouelec'h: kempennit hent an Aotrou.

Pedomp ezuz hon Aotrou a zeu d'hor gweladenniñ, leun a drugarez,
ha lavaromp dezhañ:

R/- Deuit, Salver Jezuz.

- O Krist hon Aotrou, hor gloar eo ho meulif; deuit d'hor gwelout gant ho silvidigezh. R/
- Hor renet hoc'h eus dija d'ho sklerijenn dre ar feiz, ra vezo hon oberoù dellezek ac'hanoc'h. R/
- Dastumit holl bobloù an douar ha diazevit ganto un emglev peurbadel. R/
- Bezit benniget, C'hwi an Doue bev hag a ren pep tra; dre ho truga-rez grit dimp bevañ er bed-mañ gant furmez, reizhder ha doujañs Doue, evit gortoz an esperañs evurus hag ho tonedigezher c'hoar. R/

Kempedenn (Beure ha kreisteiz)

Lakit prest hor c'halonoù,
Doue neurbet madelezhus, dre
c'halloud ho kras, evit ma vimp kavet din gant ho Mab pa zeuio,
da gemer plas ouzh e daol ha da zegemer eus e zorn bara an
Nefvoù. Eñ a vev hag a ren...

OFIS AN ABARDAEZ

Komz Doue I Kor 4, 5

Na varnit ket a-raok ar c'houlz, gortozit
na teuo an Aotrou: Eñ a sklerijenno ar
sekredoù kuzhat en deñvalijenn hag a ziskulio menozioù ar c'halonoù.
Ha neuze e resevo pep hini digant Doue ar veuleudi dleet dezhañ.

Va ene a gont war an Aotrou, fiziañs am eus en e gomzoù.
V/- Eus donder an islonk e krian davedoc'h, Aotrou, selaouit va
galvadenn - Fiziañs ...
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. : Benniget oc'h dreist an holl gwraez ha benniget frouezh ho
korf.

Merc'her, Yacu an Azvent

Pedomp Jezus Krist en deus hon dasprenet eus teñvalijenn ar pec'hed, ha lavaromp dezhañ:

R/- Deuit, Salver Jezus.

- Oan Doue, C'hwi hag a zo deuet evit dilemel pec'hed ar bed, diverkit ennomp kement roudenn a chomfe eus hon mankoù. R/
- C'hwi hag a zo deuet evit salviñ ar pezh a oa kollet, mirit ar re hoc'h eus salvet. R/
- Pa zeufot, C'hwi hag hon eus-ni laket ennoc'h hor feiz, grit dimp kaout lod ganeoc'h el levenez peurbadel. R/
- C'hwi hag a zeuio da vam ar re vev hag ar re varv, renit an holl dud tremenet e-touez ho re zibabet. R/
- Bezit benniget, C'hwi an Doue bev hag a ren pep tra; dre ho trugarez, roit dimp ar c'hras da gaout un deiz an evurusted peurbadus. R/

Kempedenn

Doue hollc'halloudek, C'hwi hag a c'houlenn diganimp kempenn an hent d'ho Mab, na lezit ket ar skuizhder d'hon diskar, tra ma c'hortozomp donedigezh evurus an Hini a rento dimp nerzh ha yec'hed. Eni a vev hag a ren...

=====

Y A O U A N A Z V E N T

=====

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- ha meulgan p. 111 - 112.

Komz Doue Iz 45, 8

O Neñvoù, diskennit ho klizh warnomp hag ar c'houmoul, ra skuilhint ar Justis evel glav, ra zigoro an douar ha ra zougo frouezh ar silvidigezh, ha ra lako da ziw an Justis ivez.

Grit dimp gwelout, Aotrou, ho karantez.

V/- Roit dimp, Aotrou, ho silvidigezh, ho karantez.

V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Uwelit, dont a ray an Aotrou hag e holl Sent gantañ; en deizioù-se o weler ur sklerijenn skedus, alleluia!

Pedomp Doue an Tad en deus kaset e Vab evit salviñ an holl dud, ha lavaromp dezhañ:

R/- Grit dimp, Aotrou, gwelout ho trugarez.

- Tad madelezhus, grit na zistaolimp ket ar C'hrist dre hor buhez, Eni hag a embannomp er feiz gant hon teod. R/

- C'hwi hag hoc'h eus kaset ho Mab evit hor salviñ, pellait diouzh hor Bro ha diouzh ar bed kement gwask a c'hellfe dont warno. R/

- Karget a jon gant donedigezh Jezus, ra anavo an douar leunder hoc'h evurusted. R/

- Bezit benniget, C'hwi an Doue bev hag a ren pep tra; dre ho trugarez, grit dimp bevañ er bed-mañ gant furnez, reizhder ha doujañs Doue, evit gortoz an esperañs evurus ha donedigezh gloriüs ho Mab. R/

Kempedenn

Dispakit ho kalloud, Aotrou, hag hor skoa-sellit gant ho nerzh, evit ma teuio fon-

Yacu, Gwener an Azvent

OFIS AN ABARDAEZ

Meulgan p. 109 pe 113

Komz Doue Jk 5, 7-9

Bezit leun a basianted, breudeur, betek donedigezh an Aotrou; sellit ouzh al labourer-douar: gant an esper da gaout frouezh prizius e c'hortoz gant pasianted glaveier an diskar-amzer ha re an nevez-amzer. C'hwi ivez, bezit leun a basianted, startait ho kalonoù, rak tost emañ donedigezh an Aotrou. Setu m'emañ ar Barner e-tal an nor.

Va ene a gont war an Aotrou - Fiziañs am eus en e gomzoù.

V/- Eus donder an islonk e krian davedoc'h, Aotrou, selaout va galvadenn - Fiziañs am eus...

V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. : Gortoz a rin an Aotrou, va Salver. Setu m'emañ tost, alleluia!

Pedomp Jezus Krist hon Aotrou en deus en em izelaet evidomp ha lavaromp dezhañ:

R/- Deuit, Salver Jezus.

- Dre en em ober den oc'h deuet, Aotrou Jezus Krist, da sikour ar bed, glanait diouzh ar pec'hed hon eneoù hag hor c'horfoù. R/

- Ar re hoc'h eus graet ganto ho predeur, n'o lezit ket da zont da vezañ estrenion dre ar pec'hed. R/

- Ar re hoc'h eus meritet evito ar silvidigezh, n'o lezit ket da vezañ kastizet pa zeufot evit ar varnedigezh. R/

- Ho pet soñj eus ho fideled o deus kuitaet ar bed-mañ, ma vevint ganeoc'h da virviken. R/

- Bezit benniget, C'hwi an Doue bev hag a ren pep tra; dre ho trugarez roit dimp ar c'hras da gaout un deiz an evurusted peurbadus. R/

Kempedenn

Hon dihunit, ni ho ped, Aotrou, hag hon lakit da gempenn hentoù ho Mab, evit ma c'hellimp, dre vister e zonedigezh, ho servijañ gant ur galon glanaet. Dre Jezus Krist...

=====

G W E N E R A N A Z V E N T

=====

OFIS AR BEURE

ha S. 94 R/- Meulgan p. 111 ha 112

Komz Doue Jr 30, 21-22

Setu lavar an Aotrou: bez' e vo e rener dioutañ, e vestr a zeuio eus a greiz hag e rin dezhañ tostaat nesoc'h ouzhin. Hag e vefot va fobl hag e vin ho Toue.

Grit dimp gwelout, Aotrou, ho karantez.

V/- Roit dimp, Aotrou, ho silvidigezh, ho karantez.

V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Heol o sevel, sklerijenn eus an nec'h, an Aotrou a zeu d'hor gweladenniñ.

Pedomp Doue an Tad en deus kaset an Dasprener evit kemenn ar C'heloù-mañ d'ar beorien, ha lavaromp dezhañ :

R/- Diskouezit dimp ho kloar, Aotrou.

Cwener an Azevent

- Kasit ho Mab, Aotrou, d'ar poblou n'anavezont ket c'hoazh anezhañ, evit ma welint ho silvidigezh. R/
- Dimp-ni hag a gemenn kelou-mat ar silvidigezh roit ivez ar c'hras da vezañ salvet. R/
- Ra vo prezeget hoc'h anv betek dibennoù ar bed, ma teuo an holl dud da anaout hoc'h hentou. R/
- Bezit benniget, C'hwi an Doue bev hag a ren pep tra; dre ho trugarez, grit dimp bevañ er bed-mañ gant furnez, reizhder ha doujañs Doue, evit gortoz an esperañs evurus ha donedigezh gloriou ho Mab. R/

Kempedenn

Ra vo bepred ho kras, ni ho ped, Doue hollc'halloudek, ouzh hon diarbenn hag ouzh hon heuliañ, en hevelep doare ma c'hellimp, ni hag a zo o c'hortoz gant holl c'hoant hor c'halon donedigezh ho Mab unganet, kaout sikour koulz evit ar vuhez-mañ hag evit ar vuhez-da-zont. Dre Jezuz Krist...

OPIS AN ABARDAEZ

Meulgan p. 109 pe 113

Komz Doue 2 P 3, 8-9

Va breudeur karet, un devezh dirak Doue a zo evel mil bloavezh, ha mil bloavezh

evel un devezh. Wann, an Aotrou ne zale ket da gas da wir ar pezh en deus prometet, daoust d'ar pezh a soñj hiniennou; met en em ren a ra gant pasianted en ho keñver-c'hwi, dre ma fell dezhañ ned afe da goll den ebet, met e trofe an holl d'ober pinienn.

Va ene a gont war an Aotrou - Fiziañs am eus en e gomzou.

- V/- Eus donder an islonk e krian davedoc'h, Aotrou, selaouit va galvadenn - Fiziañs am eus...
- V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Pobl Doue, n'ho pet ket aon, setu ma teu ho Salver.

Pedomp ar C'hrist Dasprener en deus graet dimp kaout perzh e sklerijenn e zonedigezh, ha lavaromp dezhañ:

R/- Deuit, Salver Jezuz.

- Aotrou Jezuz Krist, grit dimp mont betek ennec'h ha roit dimp donezon ho trugarez. R/
- Dre gement a gredomp hag a anzavomp diwar ho penn, pellait diouzh-imp poanioù an ifern. R/
- Difennit ennomp frouezh ho Tasprenidigezh, o virout dimp ar frankiz hoc'h eus meritet evidomp. R/
- Ra zeuic feiz an Iliz d'hor glanaat diouzh hor pec'hedoù ha da zieubiñ an Anaon eus o foanioù. R/
- Bezit benniget, C'hwi Doue bev hag a ren pep tra; dre ho trugarez roit dimp ar c'hras da gaout un deiz an evurusted peurbadus. R/

Kempedenn

Plijet ganeoc'h, ni ho ped, Doue hollc'halloudek, reiñ d'ho pobl ar c'hras da c'hortoz gant ar beasañ aked donedigezh ho Mab unganet, dimp da vezañ dihun, evel m'en deus desket hor Salver e-unan, evit mont, pres warnomp, d'e ziambroug gant hol lampou war-elum. Eñ a vev...

Sadorn an Azevent + 17 Kerzu

SADORN AN AZEVENT

OPIS AR BEURD

S. 94 R/- ha meulgan p. 111 ha 112

Komz Doue Iz 11, 1-2.

Dont a raio ur skoultrig eus kef Yesso, ur skourr eus e wrizioù a frouezho, hag e chomo warnañ spered an Aotrou, spered a furnez hag a boell, spered a guzul hag a nerzh, spered a skiant hag a zoujañs Doue. Hag e c'hoant a vo doujañ Doue.

Grit dimp gwelout, Aotrou, ho karantez.

- V/- Roit dimp, Aotrou, ho silvidigezh, ho karantez.
- V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Deuit, Aotrou, diskouezet dimp ho fas hag e vimp salvet.

Pedomp ar C'hrist Dasprener a zeuic gant gloar ha galloud, ha lavaromp dezhañ:

R/- Deuit, Salver Jezuz!

- O Krist hon Aotrou, C'hwi hag a zeuic eus an neñv gant galloud, sellit ouzh hor gwander ha lakit ac'hanomp dellezek eus ho kras. R/
- C'hwi hag a zo deuet evit kemenn ar C'helou-mat d'an dud, roit dimp nerzh-kalon evit dougen ho kemennadur. R/
- C'hwi hag a zo deuet evit frealziñ ar re brevet o c'halonoù, yac'hait reuzeudigezh ho pobl. R/
- Bezit benniget, C'hwi an Doue bev hag a ren pep tra; dre ho trugarez, grit dimp bevañ er bed-mañ gant furnez, reizhder ha doujañs Doue, evit gortoz an esperañs evurus hag ho tonedigezh er c'hloar. R/

Kempedenn (beure ha kreisteiz) Lektit, ni ho ped, Doue hollc'halloudek, splanner ho kloar da sevel en hor c'hallonoù; ha donedigezh ho Mab unganet, o skarzhañ kuit skeudoù diwezhañ an noz a raio da c'houzout splann ez omp mibion ho sklerijenn. Dre Jezuz Krist...

17 - 25 KERZU

17 KERZU

Ant. 1: Diskouezet dimp, Aotrou, ho madelezh, ha roit dimp ar Salver.

Ant. 2: Setu hon Doue, emañ o tont d'hor salviñ.

Kant. Zak.: En em laouenait en Aotrou, rak tost emañ.

Kant. ar W.: O Furnez deuet eus genou an Uhel-meurbet, kemennet gant ar Brofeded, deuit da gelenn dimp hent ar silvidigezh, deuit, Aotrou, deuit d'hor salviñ.

Kempedenn (beure, kreisteiz ha noz)

Aotrou Doue, krouer ha salver mat-den, C'hwi hag a zo bet fellet deoc'h e kemerfe ho Mab hon natur-den e korf ar Werc'hez gloriou Vari bepred Werc'hez, taolit ur sell trugareus war hor pedennoù, evit ma plijo gant ho Mab unganet deuet da vezañ den reiñ dimp perzh en e natur-Doue. Eñ a vev..

18 KERZU

Ant. 1 : Ho pet soñj ac'hanomp, Aotroù, hor gweladennit dre ho silvidigezh.
Ant. 2 : Ur Werc'hez a c'hano ur mab, Emmanouel, Doue ganimp.

Kant. Zak. : Pobl Doue, gwelitho Salver, dont a ra da salviñ ar broadoù.

Kant. ar W. : O Aotroù, Mosaer ti Israel, C'hwi hag a ren ho pobl, deuit d'hon dasprenañ dre c'halloud ho prec'h, deuit, Aotroù, deuit d'hor salviñ.

Kempedenn
Hon gwelout a rit, Doue hollc'halloudek, penaos e plegomp dindan ar pec'hed on deus sujet an den d'e lezenn, degasit dimp an dieubidigezh, a-drugarez d'an nevezadur a c'hortozomp eus ganedigezh dispar ho Mab muiañ-karet. Eñ a vev hag a ren...

19 KERZU

Ant. 1 : Bezit kalonek, c'hwi holl hag a esper en Aotroù.

Ant. 2 : Astenn 'raio e vestroniezh, ur peoc'h dizivezh a reno.

Kant. Zak. : Salud, Mari, leun a c'hras, an Aotroù a zo ganeoc'h.

Kant. ar W. : O Mab David, banniel ar pobloù hag ar rouaned, C'hwi hag emañ ar bed o c'hortoz, deuit d'hon dieubiñ, Aotroù, na zaleit ket, deuit, Aotroù, deuit d'hor salviñ.

Kempedenn
Aotroù Doue, C'hwi hag hoc'h eus lakaet da barañ splannder ho klor dirak ar bed, dre willoud ar Werc'hez glorius Vari, roit dimp ar c'hras, ni ho ped, da enoriñ gant ur feiz yac'h ha reizh ar mister bras-se eus ho Mab en em c'hraet den; ha d'en lidañ bepred gant doujañs ha devosion. Dre Jezuz Krist...

20 KERZU

Ant. 1 : Grit dimp distreiñ davedoc'h, Aotroù, hag e vimp salvet.

Ant. 2 : Mont a ray er-maez eus e neved an Aotroù, ha dont a ray da salviñ e bobl.

Kant. Zak. : Diskenn a ray evel ar glav war an adtaol, evel ar morc'hlav o c'hlebiañ an douar.

Kant. ar W. : O Alc'houez David ha bazh-roue ti Israel, C'hwi hag a ren war ar bed, deuit d'hon dieubiñ; Aotroù, na zaleit ket, deuit, Aotroù, deuit d'hor salviñ.

Kempedenn
Aotroù Doue, dre salud an Ael e tegemeras ar Werc'hez c'hlan ho Mab, ar Verb peurbadel, hag hi deuit da vezañ lez Doue, a zo leun gant sklerijenn ar Spered Santel; roit dimp ar c'hras, ni ho ped, da gemer skouer diwarni ha d'en em stagañ a galon izel ouzh ho polontez. Dre Jezuz Krist...

21 KERZU

Ant. 1 : En em frealzit, en em frealzit, va Pobl, eme an Aotroù.

Ant. 2 : En em gempennit, Pobl Doue, it a-ziarok an Aotroù, rak emañ o tont.

Kant. Zak. : N'ho pet ket aon; a-raok pemp deiz e teuo an Aotroù davedoc'h.

Kant. ar W. : O Heol o sevel, splannder ar sklerijenn beurbadel hag heol ar reizhder, deuit da sklerijonnañ ar re a zo aezet dindan skoud ar marv; deuit, Aotroù, deuit d'hor salviñ.

Kempedenn
Selvaout gant madelezh, ni ho ped, Aotroù, pedennoù ho Pobl hag a zo laouen gant donedigezh ho Mab en hon natur-den; pe zeuio on e c'hloar, grit dimp tafia evurusted ar vuhez peurbadel. Dre Jezuz Krist...

22 KERZU

Ant. 1 : Deuit, Aotroù, na zaleit ket, distaolit he zorfedoù d'ho Pobl.

Ant. 2 : En deizioù-se e vleunio ar reizhder hag ur peoc'h bras da viken.

Kant. Zak. : En em digrommit, savit ho penn, rak tost emañ ho tieubidigezh.

Kant. ar W. : O Roue ar broadoù, maen-korn an Iliz oc'h un-vaniñ an div bobl, deuit da zieubiñ an den hoc'h eus krouet; deuit, Aotroù, deuit d'hor salviñ.

Kempedenn
Aotroù Doue, o welout mab-den kouezhet er marv ez eus bet fallet deoc'h e zasprenañ en ur zegas ho Mab unganet er bed; plijet ganeoc'h, ni ho ped, reiñ d'ar re a anzav gant devosion hag izelegoñ ez eo deuit da vezañ den, ar c'hras da vezañ unanet outañ pa'z eo eñ o Dasprener. Eñ a vev hag a ren...

23 KERZU

Ant. 1 : Diskenn a raio evel ar glav war an adtaol, evel ar morc'hlav o c'hlebiañ an douar.

Ant. 2 : Astenn a raio e vestroniezh, ur peoc'h dizivezh a reno.

Kant. Zak. : En em laouenait en Aotroù, en em laouenait, rak tost emañ.

Kant. ar W. : O Emmanouel, hor Roue, esper ar broadoù ha Salver an holl bobloù, deuit d'hon dieubiñ; Aotroù, na zaleit ket, deuit, Aotroù, deuit d'hor salviñ.

Kempedenn
Doue hollc'halloudek ha peurbadel, dizale e lidimp ginivelezh ho Mab en deus teurezet kemer hon natur-den e korf pur ar Werc'hez Vari; peogwir en deus liammet da viken e vuhez gant hon hini, daoust ma'z omp servijerion fall, ra blijjo gantañ diskouez dimp ho trugarez. Eñ a vev hag a ren...

24 KERZU

Ant. 1 : Ware'hoazh e vo divarket displealded an douar ha Salver ar bed a reno warnomp.

Ant. 2 : Ware'hoazh e vo evidoc'h deiz ar silvidigezh, eme an Aotroù, Doue an hollved.

Kant. Zak. : Deskit hiziv donedigezh an Aotroù hag arc'hoazh e welot e c'hloar.

Kempedenn
Hastit buan, na zaleit ket, ni ho ped, Salver Jezuz, evit ma vo diboaniet ha frealzet gant ho tonedigezh ar re o deus fiziañs en ho madelezh. C'hwi a ren...



Derc'hent Nedeleg

Kant. ar W.: Pa 'n em ziskouezo an heol war an drommwel, e welot Roue ar Rouaned o tont eus an Tad, evel ur pried eus ar gambr-eured.

Pedomp Doue an Tad en deus, dre garantez evidomp, kaset e Vab en hon touez, ha lavaromp dezhañ:

R/- Doue a drugarez, ho pet truez ouzhimp.

- Doue peurbadel ha drugarezus, C'hwi hag a fell deoc'h salviñ an holl dud ha reiñ dezho da anaout ar Wirionez, ho drugarekaat a reomp da vezañ roet d'ar bed ho Mab unganet; laouenait an douar a-bezh gant e zonedigezh. R/
- Kaset hoc'h eus evit embann ar C'heloù-mat d'ar beorien, kemenn ar frankiz d'ar brisonidi, degemenn eus ho perzh un amzera c'hras; roit d'an holl dud ar frankiz hag ar peoc'h. R/
- Renet hoc'h eus davetañ furion ar pobloù evit en adoriñ, degemerit profadenn hor feiz hag hor pedennoù. R/
- An holl dud a fell deoc'h gervel war ho lerc'h eus an deñvalijenn d'ho sklerijenn ostlammus, evit ma stouc an holl d'an daoulin en anv Jezuz; grit ac'hanomp testoù ar C'heloù-mat-se. R/
- Evurus ar re varo hag a vary an Aotrou; adal bremañ, ra ziskuit-hint eus o foanioù, rak o labourioù a ya d'o heul; ra luc'ho warno ar sklerijenn beurbadus. R/

Kempedenn

Aotrou Doue, bep bloaz e roit lec'h dimp da gaout levenez o c'hortoz hor silvidigezh; grit ma c'hellimp, goude bezañ degemeret gant joa ho Mab unganet evel Salver, hor gwelout hep aon ebet pa zeuio an-dro evel Barnet. Eh a ren...

DEIZ NEDDELEG

OFIS AL DENNADENNOU

Heulgan

- 1 - Em hor c'halon e oa kollet An eñvoradur eus ho tremm. War hon dremennoù ne skede mui Ho skeudenn. Digenvez, diharp a-grenn, 'Vit kavout an heñvalded E kantreomp en noz.
- 2 - Kas a rejoc'h, en ho truez, Evit sklaeraat hon dienez, Ho Profeded o deus kaset Ar bromesa. O c'homzoù, evel un tan, War an hent a esperañs Hor renas tram ho Lec'h.

- 3 - Sed ar Werc'hez ho deus ganet, Sevenet eo an diouganou. Splannañ a ra ho karantez Ho kwirded. Dindan gouel ur c'horf-denel Ho sklaerder diziraezus A genkiz hor goañv.
- 4 - N'o deus ket gwelet an holl dud! Gant ho mister sklerijennet, Ni 'gred, en ho Verb, ho kervel 'Vel hon Tad. Hiziv, disoc'h ar gouelvan! Diwanet eo 'n hor c'halon Hoc'h hadenn divreinus.

S. 2 Ant.: An Aotrou a lavar: Va Mab out-te, hiziv, me am eus da c'hanet.

S. 18 A - : Er joa an Aotrou a grog e redadenn.

S. 44 - : Da Zoue en deus da gensakret gant un eoul a levenez.

V/- Ar Verb a zo 'n em c'hraet den, alleluia, alleluia!

R/- Douet eo da chom en hon touez, alleluia, alleluia!

Nedeleg

Lonnadenn Iz 11, 1-10

- R/- Evidomp, hiziv, Roue an neñv en deus c'hoantaet genel eus ar Werc'hez, evit degas an-dro da Rouantelezh an neñvoù an den a oa kollet. + Ingroez an Aeled a zo er joa, peogwir ez eo en em ziskouezet d'an dud ar silvidigezh peurbadel.
- V/- Klod da Zoue e barr an neñvoù ha peoc'h war an douar d'an dud a blij dezhañ. + Engroez...

Te Deum p. 2

Kempedenn

Aotrou Doue, C'hwi hag hoc'h eus krouet ken kaer natur mab-den, hag hoc'h eus ho savet a-nevez kaeroc'h c'hoazh, grit dimp, ni ho ped, kaout perzh e natur-Doue an Hini a zo bet plijet gantañ kemerout hon natur-den. Eh a ren...

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- Ganet eo ar C'hrist evidomp; deuit, azeulomp anezhañ, alleluia.

Meulgan

- 1 - Peur-leun eo an cabl Gant ur joa nevez: En noz e klev ar burzhud, Ur gouel hep e bar: Ganet ar Salver, Roet eo dimp Mab-Doue.
- 2 - An Aotrou a zeu, Verb a sklerijenn: An hollved a wel Madelezh an Tad. Doue, war ar bed, A zigor an hent Evit ma kerzhimp drezañ.
- 3 - Gant ar vesaeri 1, Gant an holl furion, Ar bed a-bezh eo A gerzh davetañ, Evit gwelout dremm Ar garantez vev 'N em c'hraet bugel evidomp.
- 4 - Klod da Jezuz Krist, Klod da Vab an Tad! Ha Klod d'e Spered, E garantez 'luc'h Er mister skedus A leugn an oabloù: Klod d'an den-Doue, Nouel!

S. 62 : Enur c'hraou hon eus gwelet ur bugel nevez-ganet, mailhuret hon eus arvestet anezhañ, alleluia.

Kant. Dm P. 6: Niverus, an Aeled a vennige an Aotrou: Gload da Zoue en neñvoù, peoc'h ha joa d'an dud war an douar.

S. 149 Ant. : Hiziv ez eo ganet Salver ar bed, alleluia.

Komz Doue He 1, 1-2

Goude bezañ, meur a wech hag e meur a c'hiz, komzet gwechall ouzh hon Tadou dre ar Profeded, Doue, en daizioù-mañ, ar re ziwezhañ, en deus komzet ouzhimp dre ar Mab, an hini bet laketañ gantañ da benn-hêr war bep tra, hag ez eo drezañ ivez en deus krouet ar bedoù.

Diskouezet en deus an Aotrou e silvidigezh, alleluia, alleluia.

V/- Holl zibennoù an douar o deus gwelet anezhañ, - -

V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Setu sevenet an diougan: tarzhet eo en hor bed sklerijenn an Uhel-murbet, ur vuhez a zo roet dimp: joa an Tad a resevimp en hêrezh.

Pedomp gant joa hor Salver Mab Doue en em c'hraet den, ha lavaromp dezhañ:

R/- Mab an Doue bev, hor selaout.

- O Krist ganet eus an Tad a-rack ar c'hantvedoù, splannder o c'hloar ha skeudenn e zerc'hvoud, c'hwi hag a scuten ar bed-holl dre ho komz c'halloudus, grit, ni ho ped, ma vo bevaet an deiz-mañ dre an Avisel. R/

Nedeleg

- O Krist, ganet er bed pa oa peurochu an amzerioù evit silvidigozh an holl dud ha dieubidigezh pep krouadur, grit, ni ho ped, ma vo roet e frankiz da bep den. R/
- O Krist, Mab kennatur gant an Tad ha ganet a-raok galloudoù an neñv, ganet e Betleem evit seveniñ an diouganoù, grit, ni ho ped, ma vo bevot ar Baourantez gant an Iliz. R/
- O Krist, Doue ha den, Aotrou ha Mab David, ganet eus ti David evit seveniñ ar Skriturioù, grit, ni ho ped, ma vo anzavet gant Israel ez eo C'hwi ar Mesiaz. R/
- O Krist, ganet eus ar Werc'hez Vari, bugel estlemus ha Mab burzhudus, priñs ar peoc'h, glorius e-touez ar Brofeded, grit, ni ho ped, ma vevo ar bed-holl er peoc'h. R/

Kempedenn

Doue hollc'halloudek, dre ho Mab en em c'hraet den ez eus bet skuilhet warnomp ur sklerijenn nevez, roit dimp, ni ho ped, ar c'hras ma luger-no en hon oberoù ar gwirionezioù a luc'h en hor spored dre ar feiz. Dre Jezuz Krist...

OFIS KREISTEIZ

Meulgan Aviel an Doue, Sklaerder dreist da bop tra
 Heol luc'hus a reizhder Da vare kreiz an deiz,
 Hag heol a garantez, Eus uhelañ ar Groaz
 Deut e-barzh hor buhez; E soubit an hollved;
 E den ar c'halonù E-barzh ho peoc'h divent
 Glanait, treuzfurmit. E vodit an holl dud.

S. 119 - 120 - 121 (pe S. ar sul 1) Ant.: En em izelaet en deus an Aotrou, sellet en deus ouzh an douar: arvestif a reomp ouzhe zremm.

Komz Doue 1 Yn 4,9 Dre gement-mañ eo en em ziskouezet karantez Doue en hor c'heñver: dre m'en deus Doue kaset er bed e Vab unganet, evit ma vevimp drezañ.
 V/- Ar Verb a zo en em c'hraet den, alleluia.
 R/- Deuet eo da chom en hon touez, alleluia.

Kempedenn

Aotrou Doue, C'hwi hag hoc'h eus krouet kon kaer natur mab-den, hag hoc'h eus he savet a-nevez kaeroc'h c'hoazh, grit dimp, ni ho ped, kaout perzh e natur-Doue an hini a zo bet plijet gantañ kemerouthon natur-den. Eñ a vev hag a ren...

OFIS AN ABARDAEZ

- Meulgan
- 1 - He oa netra eus ar bed c'hoazh 3 - Ho pezet soñj, krouer ar bed,
 Ma oac'h ganet a holl-viskoazh, Hoc'h eus evidomp kemeret
 Doue gant ho Tad en Neñv, Eus korf ar Werc'hez evirus
 Jezuz, Salver an holl bobloù. Hon doare diester ha marvus.
 - 2 - Mab unganet, splander an Tad, 4 - Sed ar memorigant an deiz-mañ
 C'hwi 'felle deoc'h en ho krad-vat Oc'h diskennet betek amañ,
 Dont da goner evidomp-ni Sklerijenn splam e kreiz an noz,
 Un natur-den 'vel hon hini. 'Vithor blienñ d'ar Baradoz.

Nedeleg

- 5 - Setu perak gant an Aelez, 6 - Evit deiz ho kinivelezh,
 Douar ha mor, a vouezh nevez, Ni adganet d'ar gwir vuhez
 Ho saludomp gant kaniri, A veul ho kloar a galon drant,
 O Salver deut d'hon nevezin. Bugale sakr ar vadeziant.

7 - Ra vo gloar deoc'h ha meulouidi,
 Mab Doue deut da Vab Mari,
 Ha deoc'h ivez, Tad ha Spered,
 Doue unan en ho Treinded. Amen.

S. 109 Ant.: Te 'zo priñs en deiz da c'hanedigozh; eus va c'halon, a-raok goulou-deiz, me am eus da c'honet.

S. 129 - : An Aotrou a zo leun a drugarez, largentezus d'hon dasprenañ.
Kant. Kol 1, 12-20 : Eus e leunder hon eus resevet ur c'hras diheskus.

Trugarekait Doue an Tad en deus ho lakat barrek da gaout lod en hârezh ar Sent er sklerijenn.

R/- Klod deoc'h, kontañ-ganet a-douez ar re varv.

Eñ hag en deus hon tennet eus galloud an deñvalijenn evit hon degas e Rouantelezh e Vab karet, hon eus ennañ an dasprenidigezh, ar pardon eus hor peo'hodoù. R/

Eñ eo skoudenn an Doue diwelus, ar c'hentañ-ganet a-raok pep krouadeg, rak ennañ eo bet krouet kement tra 'zo en neñvoù ha war an douar. R/

Kement a weler ha kement na weler ket, pep tra 'zo bet krouet drezañ hag evitañ. Eñ a zo a-raok pep tra, ha drezañ e talc'h pep tra da vezañ. R/

Hag eñ ivez eo ar penn eus ar C'horf, da lavarout eo, eus an Iliz. Eñ eo ar pennabeg anezhi, ar c'hentañ-ganet eus a-douez ar re varv, evit ma vefe dezhañ-eñ ar renk kentañ e pep doare. R/

Rak ennañ eo bet plijet gant Doue lakaat pep leunder da chom ha drezañ adunvaniñ ar bed a-bezh evitañ e-unan. R/

En ur ober ar peoc'h dre vad e Groaz, adunvaniñ drezañ kement a zo war an douar kenkouls ha kement a zo en neñvoù. R/

Komz Doue 1 Yn 1, 1-3 Ar pezh a oa adalek ar penn kentañ, ar pezh hon eus klevet, ar pezh hon eus gwel-let gant hon daoulagad hon-unan, ar pezh hon eus sellet outañ, hag e deus touchet hon daouarn eus ar Verb a vuhez, - rak ar Vuhez a zo en em ziskouezet hag he gwellet hon eus, hag e testeniom, hag e komon-nomp deoc'h ar vuhez-se peurbadel a oa gant an Tad hag a zo en em ziskouezet dimp - ar pezh hon eus gwellet eta ha klevet eo an hini a gemennomp deoc'h, evit m'ho po c'hwi ivez kumuniezh ganimp, hag hor c'humuniezh dimp-ni a zo bezañ gant an Tad ha gant e Vab Jezuz Krist.

Ar Verb a zo en em c'hraet den, alleluia, alleluia.
 V/- Deuet eo da chom en hon touez, -
 V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. : O eskemm burzhudus! Ar C'hrouer a gemer hor c'horf hag hor gwad; den hep dileout netra d'an den, a laka e kalon an den un hadenn doueel, alleluia.

Pedomp... (p. 126)

Kempedenn (p. 127)

St. Stefan, St. Yann, Inosanted Santel

26 KERZU - Sant S T E F A N

(Ofis ar verzhherion p. 228) nemet:

Ofis al lennadennou: Ob 6, 8 - 7, 2a. 44-60.

Ofis ar beure: Komz Doue Ob 6, 2-5 An Daouzek, o vezañ dec'halvet engroez an diskibled, a lavaras:

" N'eo ket mat e tilezfemp komz Doue evit ober war-dro ar pourvezerezh. Klaskit kentoc'h en ho touez, breudeur, seizh gwaz a vrud vat, leun a Spered Santel hag a furnez, a vo lakat ganimp war ar servij-se. Ni avat a chomo aketus d'ar bedenn ha da vinitrezezh ar Gouz. Plijout a reas ar c'homzou-se d'an engroez a-bezh.

Kant. Zak.: Stefan, leun gant ar Spered Santel, paret e sell ouzh an noñv, a welas gloar Doue.

Kant. ar W.: Stefan a bede: Aotrou Jezuz, degemerit va spered.

Kempedenn Roit dimp, ni ho ped, Aotrou Doue, ar c'hras da zeskiñ karout hon enebourion, diwar skouer sant Stefan, eñ ar c'hentañ eus ho merzherion hag en deus gouezet goulenn ar pardon evit e vourrevion. Dre J.K...

27 KERZU - Sant Y A N N - aviel.

(Ofis an Ebestel p. 225) nemet:

Ofis al lennadennou: 1 Yn 1, 1 - 2, 3

Ofis ar beure: Komz Doue Ob 4, 19-20 Pêr ha Yann a respontas da renorion ar bobl ha d'an Henaurion: sentif ouzhoc'h-c'hwi kentoc'h eget ouzh Doue, deoc'h-c'hwi da varn. Rak ne c'hellomp ket ni chom hep displegañ ar pezh hon eus gwolet ha Klevet."

Kant. Zak.: N'eus ket brasoc'h karantez eget reiñ e vuhez evit ar re a garer.

Kempedenn Aotrou Doue, C'hwi hag hoc'h eus dizolotet dimp dre an abostol sant Yann sekredoù ho Verb, roit d'hor spered, ni ho ped, ar c'hras da intentha da garout ar gwirionezhioù bet displeget gantañ en un doare dispar. Dre Jezuz Krist...

Ofis an abardaez: Komz Doue 1 Yn 2, 12 - 14 Skrivañ a ran deoc'h, bugaligoù, o vezañ m'eo bet pardonet deoc'h ho pec'hedoù dre norzh e Anv. Skrivañ a ran deoc'h tadoù, dre m'hoc'h eus anavezet an Hini a zo a-dal ar penn-kentañ. Skrivañ a ran deoc'h, tud yaouank, dre m'hoc'h eus trec'het an Hini drouk.

Kant. ar W. ha kempedenn: (evel d'ar beure).

28 KERZU - An INOSANTED SANTEL

(Ofis ar verzhherion p. 228) nemet:

Ofis al lennadennou: Erm 1, 8-16. 22

28 KERZU (Inosanted Santel) - Amzer Nedeleg

Ofis ar beure: Komz Doue: Yr 31, 15 Evel-hen e komz an Aotrou: Ur vout, ur gouelvan c'hwerv: Rahel o culañ war he mibion. N'houl ket bezañ frealzet war he mibion pa n'emaint ken.

Kant. Zak.: Ar Sent o deus gouzañvet evidoc'h, Aotrou; azeulif ha bennigañ a reont an Hini a zo bev er c'hantvedoù.

Kempedenn Poogwir, an deiz-mañ, Aotrou, o deus an Inosanted Santel kemennet ho kloar, n'eo ket dre gomz, met dre o marv hepken, grit, ni ho ped, m'en em ziskouezo hor feiz, neket hepken diwar-bouez hon teod, met ivez dre hor buhez. Dre Jezuz Krist...

Ofis kreisteiz: Komz Doue Yr 31, 16-17 Evel-hen e komz an Aotrou: harz ouzh da vouezh da culañ, ouzh da zaoulagad d'ober daeroc'h. Bezañ az po ur gopr evit da boanicoù: addont a raint eus bro an enebour. Ur goanag ac'h eus en amzer-da-zont: addont a ray da vibion war o douar.

Ofis an abardaez: Komz Doue Disk 14, 4-5 Ar re-se eo a zo bet dasprenet a-douez an dud dalodenn gantañ da Zoue ha d'an Onn, hag en o genou n'eus bet kavet gant ebet, dinamm ez int dirak tron Doue.

Kant. ar W. ha kempedenn (evel d'ar beure).

===== AMZER NEDELEG HAG AN EPIFANIEZH =====

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- Ganet eo ar C'hrist evidomp: deuit, azeulomp anezhañ.

Meulgan (p. 125 - 126 - 127...)

A) L U N & Y A O U

Komz Doue Fur 7, 26-27 Ar Furnez a zo un adsked eus ar sklaerder peurbad, ur melc'our disaotr eus oberiantiz Doue, ur skudenn eus e vadelezh. Eviti da vezañ hec'h-unan-penn, e c'hell pep tra, hag e chom enni hec'h-unan, ec'h adnevesa pep tra. En em skuilhaf a ra a-hed an oadvezhioù, en eneoù santel, oc'h ober diouto mignoned da Zoue ha profedet.

Diskouezet en deus an Aotrou e silvidigezh, alleluia, alleluia.
V/- Rouaned an douar a zegas o frofoù, alleluia, alleluia.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Kement en deus Doue karet ar bed m'en deus roet e Vab unganet.

Pedomp gant joa hor Salver Mab Doue en em c'hraet den, ha lavaromp dezhañ:
R/- Bezit ganimp, Emmanouel.

- Jezuz, Mab an Doue bev, splannder an Tad, sklerijenn peurbadel, roue a c'hloar, heol ar reizher, Mab ar Werc'hez Vari, sklerijennit an deiz-mañ gant sklaerder ho tonedigezh. R/
- Jezuz, kuzulier burzhudus, Doue kreñv, Aotrou peurbadel, priif ar peoc'h, renit hor buhez dre santelezh ho natur-den. R/

Amzer Nedeleg hag an Epifaniezh (Lun - Yaou)

- Jezuz meurbet-galloudus, habask, sentus, kuñv hag izel a galon, C'hwi a gar ac'hanomp hag e fell deoc'h m'hor-hafa ur galon c'hlan, diskouezet d'an holl nerzh hoc'h izelegezh. R/
- Jezuz, Doue ar peoc'h, mammen ar vuhez, skouer ar santelezh, mignon an dud, hon Doue, hor repu, diazezet ar peoc'h war an douar hervez hoc'h Aviel. R/
- Jezuz, Tad ar beorien, teñzor an dud fidel, Pastor mat, sklerijenn wirion, furrez diheskus, madelezh divent, hon hent hag hor buhez, roit d'hoc'h Iliz ar spered a baourantez. R/

Kempedenn (a-raok an Epifaniezh) Doue hollc'halloudek ha diwelus, pa 'z eo diskennet war an douar an Hini a zo ho sklerijenn, hoc'h eus argaset kuit an deñvalijenn diouzh ar bed; lakit ho sell da lugerniñ warnomp, ma c'hellimp meuliñ a-zoare Giniwelezh dispar ho Mab unganet, a vev hag a ren Doue ganeoc'h ha gant ar Spered Glan a-holl-viskoazh da virviken.

(goude an Epifaniezh) Aotrou Doue, pa 'z eo gwir ez eo en em ziskouezet ho Mab unganet en un natur-den heñvel ouzh hon hini, plijet ganeoc'h, ni ho ped, reiñ dimp ar c'hras da vezañ adstummet en hon diabarzh evit dont da vezañ heñvel ouzh an Hini a welomp heñvel ouzhimp a-ziavezh. Eñ a vev...

OPIS KREISTEIZ

Komz Doue 2 Kor 8, 9 Anavezout a rit Karitez hon Aotrou Jezuz Krist: abalamour deoc'h, goude ma oa pinvidik, ez eo en em c'hraet paour, evit ho pinvidikaat dre e baourantez.

V/- Ar Verb a zo en em c'hraet den, alleluia.
R/- Deut eo da chom en hon touez, alleluia.

OPIS AN ABARDAEZ

Komz Doue Ef 1, 5-6 En e garantez en deus Doue rakdivizet diwar hor penn e vefomp advibion dezhañ dre Jezuz Krist. Setu petra eo bet plijet gantañ ober en e vadelezh evit ma vefe kanmeulet e c'hloar.

Ar Verb a zo en em c'hraet den, alleluia, alleluia.
V/- Deut eo da chom en hon touez, - -
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Ar Verb a zo en em c'hraet den hag hon eus gwelete c'hloar.

Pedomp gant joa hor Salver Mab Doue en em c'hraet den, ha lavaromp dezhañ:

R/- Hon dieubit, Aotrou.

- Dre vister hoc'h emsenedur, dre ho kanedigezh hag ho pugaleerezh, dre ho puhez holl-gensakret. R/
- Dre ho labourioù, dre ho prezegennoù, dre ho kerzhademoù, dre hoc'h emzivizoù gant ar beo'herion hag hoc'h holl skuzhderioù, diouzh stignoù an diaoul ha diouzh ar pec'hed. R/
- Dre ho tremenvan hag ho Pasion, dre ho kroaz hag ho tigenvez, dre hoc'h enkreziou, dre ho marv hag ho sebeliadur. R/
- Dre hoc'h adsav d'ar vuhez hag ho pignidigezh d'an neñvoù, dre zonzon ar Spered, ar vadeziant hag an Eukaristiezh, dre ho leveno-

Nedeleg - Epifaniezh (Meurzh - Gwener)

zioù hag ho kloar. R/

- Evurus ar re varv a varv en Aotrou: adal vremañ ra ziskuzhrint eus o foanioù, rak o labourioù a ya d'o heul; ra lugern warno ar sklerijenn beurbadel. R/

Kempedenn

a) Plijet ganeoc'h, ni ho ped, Doue hollc'halloudek, ober da c'hiniwelezh nevez ho Mab unganet evel den, reiñ ar frankiz dimp-ni hag a zo dalc'het dindan sklavelezh kozh ar pec'hed. Eñ a vev...

b) Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, sklerijennañ hor c'halonoù gant splannder ho kloar, ma c'hellimp tremen diriskl a-dreuz teñvalijenn ar bed-mañ, hag en em gaout en hor gwir vro, Bro ar Sklerijenn beurbadus. Dre Jezuz Krist...

B) MEURZH & GWENER

Komz Doue Iz 9, 6

Ur bugel a zo ganet dimp, ur mab, bet roet dimp; an arouez-veli a zo war e skoaz; galvet eo e anv: kuzulier-burzhdus, Doue-haroz, Tad-da-viken, Priñs ar peoc'h.

Diskouezet en deus an Aotrou e silvidigezh, alleluia, alleluia.
V/- Rouaned an douar a zegas o frofoù, alleluia, alleluia.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Koment en deus Doue karet ar bed-m'en deus roet e Vab unganet.

Pedomp gant joa hor Salver Mab Doue en em c'hraet den, ha lavaromp dezhañ:

R/- Bezit benniget, Aotrou.

- O Krist, Mab Doue, hag a oa a-raok ma oa eus ar bed, deut war an douar evit salviñ an holl dud, grit ganimp testoù ar C'helou-mat-se. R/
- Heol a reizhder, c'hwi hag hoc'h eus skedet eus askre an Tad ha sklerijennet ar bed-holl, sklerijennet an dud a zo c'hoazh gourvezot a skeud ar marv. R/
- C'hwi hag a zo en em c'hraet bugelig hag a zo bet lakot en ur c'hraou, adnevesait enomp ceunded ar bugel. R/
- Roue a c'hloar, c'hwi hag hoc'h eus sujet d'an izellegezh dreil-lavar-se, roit dimp ar spered a sentidigezh. R/
- C'hwi hag a zo deut da vezañ hor Bara bev evit reiñ dimp ar vuhez peurbadus, laouenait hor c'halonoù dre hoc'h Eukaristiezh. R/

Kempedenn

a) Doue hollc'halloudek ha peurbadel, c'hwi hag a zo bet plijet ganeoc'h, dre zonedigezh ho Mab unganet, lugerniñ gant ur sklerijenn nevez, peogwir dre ar Werc'hez Vari deut da vezañ Mamm hon eus bet ar c'hras d'e gaout en hon touez gant ur c'horf-den evel hon hini, grit ivez m'hor be ar c'hras da vezañ lodek a-unan gantañ en e Rouantelezh. Eñ a vev hag a ren...

b) Doue, c'hwi hag a ro sklerder d'an holl bobloù, roit d'ho tud fidel a bep bro ar c'hras da vevañ dalc'hat er peoc'h ha skuilhit en hor c'halonoù ar sklerijenn lugernus-meurbet hoc'h eus lakot da barañ gwechall e speredoù hon Tud-kozh. Eñ a vev hag a ren...

Nedeleg - Epifaniezh (Meurzh - Gwener)

OFIS KREISTEIZ

Komz Doue Ef 2, 3-5 Dre natur e oamp bugale dleet dezho ar gonnar, evel ar re all. Met Doue hag a zo pinvidik e drugarez, dre ar garantez vras en deus hor c'haret ganti, goude ma oamp marv en abeg d'hor pec'hedoù, en deus adroet dimp ar vuhez a-unan gant ar C'hrist, rak dre c'hras ez oc'h salvet.
V/- Ar Verb a zo en em c'hraet den, alleluia.
R/- Deuet eo da chom en hon touez, alleluia.

OFIS AN ABARDAEZ

Komz Doue 1 Yn 1, 6-7 Doue 'zo sklerijenn ha n'eus ket a defivalijenn ennañ. Ma valeomp er sklerijenn, hon eus kumuniezh kenetreomp, ha gwad Jezuz, e Vab, hor glana eus pep pec'hed.
Ar Verb a zo en em c'hraet den, alleluia, alleluia.
V/- Deuet eo da chom en hon touez, - - -
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. : Ar Verb a zo en em c'hraet den hag hon eus gwelet e c'hloar.
Pedomp Doue, an Tad, en deus, dre garantez evidomp, kaset e Vab en hon touez, ha lavaromp dezhañ:
R/- Gras an Aotrou Jezuz Krist da vezañ ganec'h.
- Doue a garantez, Tad hon Aotrou Jezuz Krist, c'hwi hag hoc'h eus bet truez ouzh ar re a gerzhe en defivalijenn, degemerit ar pedennoù a gasomp davedoc'h evit silvidigozh an dud. R/
- Ho pet soñj, Aotrou Doue, eus hoc'h Iliz skignet dre ar bed a-bezh, benniget ho Pobl ha roit dimp ar peoc'h. R/
- C'hwi hag a zo un Doue a beoc'h, grit ma reno ar peoc'h etre ar broadoù. R/
- Troit davet ho Mab selloù an holl bobloù, ha lakit e Spered e kalon an dud a zo o c'houarn anezho. R/
- Evurus ar re varv ha a varv en Aotrou: adal vremañ ra ziskuzhint eus o foanioù, rak o labourioù a ya d'o heul, ra lugernno warno ar sklerijenn beurbadus. R/

Kempedenn
a) Plijet ganec'h, Aotrou, sklerijannañ ho Pobl hag entanañ bepred kalon ho tud fidel gantsplannder ho kloar, evit ma 'z anzavit o Salver ha m'en em roint dezhañ e pep gwirionez. Eñ a vev hag a ren...
b) Aotrou Doue, dre ho Mab Jezuz Krist hoc'h eus laket da skediñ war an holl vroioù splannder ho kloar beurbadus; roit eta ar c'hras d'ho tud fidel da anaout mui-ouzh-mui ar sklerijenn a zo en hor Salver ha d'hec'h heuliañ ken mat m'en em gavint un deiz er sklaerded na dremen ket. Dre Jezuz Krist...

C) M E R C ' H E R & S A D O R N

Komz Doue Em 8, 3-4 E sell da ziskar ar pec'hed, en deus Doue kondaonet ar pec'hed en e gorf, en ur gas e Vab e-unan en ur c'horf heñvel ouzh ar pec'hed, evit m'he defe reizhidigezh al lezenn he leunder enomp-ni, ar re en em ren n'eo ket diouzh ar c'horf met diouzh ar spered.

Nedeleg - Epifaniezh (Merc'her - Sador)

Diskouezet en deus an Aotrou e silvidigezh, alleluia, alleluia.
V/- Holl zibennoù an douar o deus hen gwelet, - - -
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Kement en deus Doue karet ar bed m'en deus roet e Vab unganet.
Pedomp gant joa Verb Doue, ganet a-viskoazh, deuet da vezañ den evidomp en amzer verket, ha lavaromp dezhañ:
R/- Klod deoc'h, Aotrou.

- Dasprenar ar bed, dre ho kinivelezh hoc'h eus diskaret ar voger a zisranne ar Yuzevion diouzh ar Baganed, diverkit holl pezh a zisram gouenn mab-den. R/
- Dre ho kinivelezh hoc'h eus diazezet ho chomadur en hon touez; deskit dimp anaout ho pezañs en Iliz hag er bed. R/
- Feurziskleriet hoc'h eus Doue d'an dud: grit dimp en em stagañ ouzh ho komz dre ar feiz hag an oberoù. R/
- O Emmanuel, en un doare ostlammus meurbet hoc'h eus adnevesañ pep tra, ra vezo nevez pep tra enomp. R/

Kempedenn
a) Plijet ganec'h, Aotrou Doue; reif d'ho pobl ur feiz start ha divrall: kredif a reont ez eo bet ganet eus ar Merc'hez Vari, gant ur c'horf evel hon hini, ho Mab unganet peurbadel ganec'h en ho kloar, grit eta ma vint diwallet diouzh trubuilhoù ar bed-mañ ha me vo roet perzh dezho er joaioù peurbadus. Dre Jezuz Krist...
b) Doue hollc'halloudek ha peurbadel, dre ho Mab unganet hoc'h eus graet ganimp tud nevez evidoc'h, prizit, ni ho ped, ober ma teump da vezañ dre ho kras heñvel ouzh an Hini en deus unanet ganec'h hon natur-den. Eñ a vev hag a ren...

OFIS KREISTEIZ

Komz Doue Disk 21, 23-24 Ar GER Santel n'he deus ket oshomm eus an heol hag eus al loar d'he goulaouiñ, rak klod Doue a ro sklerijenn dezhi, hag he lamp eo an Oan. Ha kerzhout a ray ar broadoù diouzh he gouloù, ha rouaned an douar a zegaso dezhi o zeñorioù.
Ar Verb a zo en em c'hraet den, alleluia, alleluia.
V/- Deuet eo da chom en hon touez, - - -
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. : Ar Verb a zo en em c'hraet den hag hon eus gwelet e c'hloar.
Pedomp gant joa hor Salver Mab Doue en em c'hraet den, ha lavaromp dezhañ:
R/- Gras Jezuz Krist da vezañ ganimp.

- O Krist Salver, c'hoantaet gant ar bobloù, skignit hoc'h Aviel er broioù n'o deus ket c'hoazh degemeret ho komz a vuhez. R/
- O Krist hon Aotrou, grit d'hoc'h Iliz kreskiñ ha ledanaat hec'h annezioù evit degemer an dud a bep yezh hag a bep gouenn. R/
- Roue ar rouaned, reñt kalonoù ha speredoù ar pennoù-bras, evit ma klaskint ar reizhded ha ma labourint evit peoc'h ha frankiz an holl bobloù. R/

An Tiegezh Santel

- Mestr galloudus, nerzh an dud gwan ha frealz ar reuzedion, konnerzhit ar re a zo temptet, adsavit ar re a zo kouzhet, beilhit war ar re a zo en digenvez pe en arvar, skoazellit o feiz d'ar re a zo heskinet. R/

Kempedenn

a) Aotrou Doue, gant ginivelezh ho Mab un- hoc'h eus boulc'het evit ho pobl, en un doare burzhudus, labour ar silvidigezh; roit, ni ho ped, d'ho servijerion ur feiz ken start ma c'hellint, henchet gant ho Mab e-unan, gonit ar c'hloar hoc'h eus prometet. Dre Jezuz Krist...

b) Selacuit hor pedenn, Aotrou Doue holc'halloudek, prizet hoc'h eus reif da anaout dre ur steredenn varzhudus ganedigezh Salver ar bed, grit ma 'z aio war greskiñ mui-ouzh-mui en hor spere-dou an anacudegezh-se. Dre Jezuz Krist...

= - A N T I E G E Z H S A N T E L =

(Sul goude Nedeleg)

DERC'HEMT

Moulgan An deiz-mañ... (P. 125)

S. 112 Ant.: Edad hag e vamm a estlamme gant ar pezh a lavared diwar-benn Jezuz.

S. 147 - : Jezuz a greske en ment, en fuzez hag en gras dirak Doue hag an dud.

Kant. Fil 2, 6-11 : Jezuz hag a oa Doue a stumm... (p. 125)

Komz Doue 2 Kor 8,9 Anavezout a rit karitez hon Aotrou Jezuz Krist: abalamour deoc'h, goude ma oa pinvidik, ez eo en em c'hraet paour, evit ho pinvidikant dre e bacourtezh.

Ar Verb a zo en em c'hraet don, alleluia, alleluia.
V/- Deut eo da chom en hon touez,
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. : En ur sioulded vras, e-kreiz an noz, ho Komz holc'halloudek, Aotrou, a zo diskonet eus an Neiv.

Azeulomp ar Verb peurbadel en deus c'hoantaet bezañ ganet en ur familh eus ar bed-mañ ha lavaromp dezhañ:

R/- Besit hor skouer hag hor Salver.

- Aotrou Jezuz Krist, dre vister ho sujidigezh da Vari ha da Jozef, kelennit dimp an doujañs hag ar sentidigezh e-kouvent hor mistri. R/

- Karet hoc'h eus ho kerent hag int ho kare gant tenerded; diazezit an holl diegezhioù er peoc'h hag er garantez. R/

- C'hwi a oa aketus ouzh traoù ho Tad eus an Neiv; ra vezo enoret e anv e pep tiegezh. R/

- Fellet ez eus bet deoc'h ma klaskfe ho kerent ac'hanc'h pa oac'h chomet en Templ; deskit dimp klask a-raok pep tra Rouantelezh Doue. R/

- Roet hoc'h eus perzh da Vari ha da Jozef en ho kloar beurbadus, grit d'hon Anaon antren e bodadeg ar Sent. R/

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag a zo bet plijet ganeoc'h diskouez dimp skouerioù dispar an Tiegezh Santel, roit dimp ar c'hras, ni ho ped, da gorchout

An Tiegezh Santel

war e roudoù evit pezh a sell vertuzioù an tiegezh ha liammoù ar garantez, ma c'hellimp, e levnez ho Ti, tañva an evurusted beurbadus. Dre Jezuz Krist...

OFIS AL LENNADENNOU

Meulgan En hor c'halon e oa kollet... (p. 126)

S. 23 Ant.: Bep bloaz e pigne kerent Jezuz da Jeruzalem, da geñver Pask.

S. 45 - : Jozef a savas e kreiz an noz, a gemeras ar Bugel hag e Vamm hag a dec'has d'an Ejipt.

S. 86 - : Evurus ar re a zo o chom en ho Ti, Aotrou.

V/- Ar Verb a zo en em c'hraet den, alleluia.
R/- Deut eo da chom en hon touez, alleluia.

Lennadenn Ef 5, 21 - 6,4

R/- C'hwi, bugale, selacuit ouzh ho kerent: en Aotrou, just eo an dra-se; + Enor da dad ha da vamm, hennezh eo ar gourc'hemenn kentañ a vefe stag outañ ur bromesa. V/- Diskenn a eure Jezuz eus Jeruzalem gant e garent hag e teuas da Nazared, ha sujañ a rae dezho. + Enor...

Te Deum ha kempedenn

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- Ar C'hrist, Mab Doue, sentus ouzh Mari ha Jozef, deut, azeulomp anezhañ.

Meulgan An deiz-mañ, en hor bed, ar Verb a zo ganet... (p. 125)

S. 62 Ant.: C'hwi a zo un Doue kuzhet, Doue, Salver Israel.

Kant. Dn : (p. 6)

S. 149 Ant.: Hag e teuas da Nazared hag e touje dezho.

Komz Doue 4th 5, 16

Enor da dad ha da vamm, evel m'en deus gourc'hemennet dit an Aotrou, da Zoue, evit ma vo mat ar bed ganit ha ma vev e-pad pell amzer war an douar a ro dit an Aotrou da Zoue.

An Aotrou en deus diskouezet e silvidigezh, alleluia, alleluia.
V/- Holl zibennoù an douar o deus hen gwelet,
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Hor sklerijennit, Aotrou, gant skouerioù ho tiegezh ha renit hor c'hammedoù war hentoù ar peoc'h.

Azeulomp ar Verb peurbadel en deus c'hoantaet bezañ mab-den ha lavaromp dezhañ:

R/- Dre ho sentidigezh, o Jezuz, hor santelait.

- Jezuz, Verb peurbadel, c'hwi hag a zoujas da Vari ha da Jozef, kelennit dimp an izelegezh. R/

- C'hwi hor Mestr, ma vire Mari hoc'h oberoù hag ho konoù en he c'halon, deskit dimp selaouha mirout ho komz en ur galon reizh ha mat. R/

- C'hwi hag hoc'h eus aozet an hollved, ez eo bet plijet deoc'h bezañ anvet mab ar c'halvez, roit dimp ar c'hras da labourat gant kous-tiañs ha nerzh-kalon. R/

- C'hwi hag hoc'h eus kresket en fuzez, en oad hag en gras e tiegezh Nazared, roit dimp ar c'hras da greskiñ bepred enno c'hwi hor Mestr. R/

Kempedenn (p. 136)

OPIS KREISTEIZ

S. 117 Ant.: Setu an deiz a reas an Aotrou, alleluia.
Komz Doue Kol 3, 17 Petra bennak a c'hellfec'h lavarout pe ober, ra vo bepred en anv an Aotrou Jezuz, en ur rentañ bennozh drezañ da Zoue an Tad.
V/- Ar Verb a zo en em c'hraet den, alleluia.
R/- Deuet eo da chom en hon touez, alleluia.
Kempedenn (p. 136)

OPIS AN ABARDAEZ

Meulgan Ne oa netra eus ar bed c'hoazh... (p. 128)
S. 109 Ant.: E dad hage vamm a estlamme gant ar pezh a lavared diwar-benn Jezuz, S. 126 - : Jezuz a groske en furnez, en oad hag en gras dirak Doue hag an dud.
Kant. Ef 1, 2-10 (p.83)
Komz Doue 2 Kor 8,9 Anavezout a rit karitez hon Aotrou Jezuz Krist: abalamour deoc'h, goude ma oa pinvidik, ez eo en em c'hraet paour, evit ho pinidikaat dre e bacurente.
Ar Verb a zo en em c'hraet den, alleluia, alleluia.
V/- Deuet eo da chom en hon touez, alleluia, alleluia.
Kant. ar W.: Mari a vire an holl draoù-se hag a brederie warno en he c'halon.
Azoulomp ar Verb... (p. 136)

1 GENVER

S A N T E Z M A R I
M A M M D A Z O U E

DERG'HEM

Meulgan An deiz-mañ en hor bed... (p.125)
S. 112 Ant.: O eskomm bunzhudus: Krouer Mab-den, ganet eus ar Werc'hez Vari a re dimp perzh en e natur-Doue.
S. 147 Ant.: Bleuniet en deus kef Yose, deuet eo ar steredenn eus Yakots ar Werc'hez he deus ganet ar Salver; deoc'h, Aotrou, hor meuleudi.
Kant. Disk.19 (p. 113)
Komz Doue Ga 4, 4-5 Pa 'z eo deuet lounder an amzer, en deus Doue kaset e Vab, ganet eus ur vaouez, ganet dindan al lezenn, evit dasprenañ ar re a oa sujet d'al lezenn hag ober ac'hanomp e adbibion.
Ar Verb a zo en em c'hraet den, alleluia, alleluia.
V/- Deuet eo da chom en hon touez, - -
V/- Klod d'an Tad...
Kant. ar W.: Dre ar garantez vras en deus hor c'haret ganti, Doue en deus kaset e Vab en ur c'horf-den heñvel ouzh hini ar pec'hed, allel.
Pedomp gant jon Verb Doue, ganet a-viskoazh, deuet da vezañ den en amzer evidomp, ha lavaremp dezhañ:
R - Peoc'h en Neñv ha peoc'h war an douar.

- Aotrou, lakaat a rit laouen hoc'h Iliz gant mister ho kinivelezh, leugnit anezhi gant ho madoberoñ. R/
- Priñs ar bastored ha mesaer hon eneoñ, ra vezo ar Pab hag an Eskibion servijerion fidel ho Rouantelezh. R/
- C'hwi, Rous ar c'hantvedoù, hoc'h eus laket merk ho pezañs hag hoc'h anv war istor an dud, grit ma troid bepred o fedenn davedoc'h. R/
- Esper ar bed, deuet oc'h pa zeuas lounder an amzerioù, diskouezet ho pezañs d'ar re a zo c'hoazh ouzh ho kortoz. R/
- Dre hoc'h enkorfidigezh hoc'h eus adkrouet an natur-dengwall-dizhet gant ar marv; grit d'an Anaon antran er grouidigezh nevez. R/

Kempedenn Aotrou Doue, dre ar Werc'hez gloriuz Vari deuet da vezañ Mamm hoc'h eus roet d'an dud gras ar silvidigezh peurbadus; grit, ni ho ped, ma santimp anezhi oc'h erbediñ evidomp, pa 'z eo drezi eo hon eus resevet ar vuhez, hor Salver Jezuz Krist, ho Mab hag hon Aotrou, a vev..

OPIS AL LENNADENNOU

Meulgan En hor c'halon e oa kollet... (p. 126)
S. 23 Ant.: En em zigorit, o porzhioù kozh, maz antreo Rous ar c'hloar.
S. 86 - : An holl a zo adganet enni, rak Doue en deus he startaet da viken.
S. 98 - : Salud, enor, meuleudi da Oan Doue.
V/- Ar Verb a zo en em c'hraet den, alleluia.
R/- Deuet eo da chom en hon touez, alleluia.

Lennadenn He 2, 9-18
R/- Evurus ez oc'h-c'hwi, Gwerc'hez Vari, dre m'hoc'h eus douget an Aotrou, krouer ar bed. + Ganet hoc'h eus an Hini en deus ho krouet hag e chomit gwerc'hez da viken. V/- Bezit laouen, Mari, leun a c'hraes, an Aotrou a zo ganeoc'h. + Ganet hoc'h eus...
Te Deum ha Kempedenn

OPIS AR BEURE

S. 94 R/- Ganet eo ar C'hrist evidoc'h, deuit, azoulomp anezhañ.
Meulgan An deiz-mañ en hor bed... (p. 125)
S. 62 Ant.: Te 'zo priñs e deiz da c'handedigezh, ganet eus va c'halon a-raok gouloù-deiz.
Kant. Dn : (p. 6)
S. 149 - : Ganet he deus Mari Oan Doue, Salver ar bed.
Komz Doue Mi 5, 4-5 Sevel a ray hag e vo Pastor an tropell dre nerzh an Aotrou, dre vraster anv e Zoue. Hag e tistroint, ken e vo nouze bras betek dibennoù an douar. Hag e vo hemañ Peoc'h.
Ar Verb a zo en em c'hraet den, alleluia, alleluia.
V/- Deuet eo da chom en hon touez, - -
V/- Klod d'an Tad...
Kant. Zak.: Dre ar garantez vras en deus hor c'haret ganti, en deus Doue kaset e Vab en ur c'horf-den heñvel ouzh hini ar pec'hed, alleluia.

1 Conver, Mari Mamm da Jezuz

Pedomp gant joa Verb Doue, ganet a-viskoazh, en em c'hraet den evidomp pa oa deuet an amzer, ha lavaromp dezhañ:

R/- Joa 'vit an douar, rak deuet oc'h davetañ.

- Verb peurbadel Doue, o tont war an douar hoc'h eus e leuniet a levo-noz; dre ho kweladenn kargit hor c'halon a laouenidigezh. R/
- C'hwi, hor Salver, dre vister ho kanedigezh hoc'h eus diskouezet dimp fealded Doue an Dmglev; grit dimp bezañ fidel da ouestloù hor badeziant. R/
- Roue an neñv hag an douar, gant ho kanedigezh o deus an Aeled kemmet ar peoc'h d'an dud; mirit hor buhez er peoc'h. R/
- C'hwi, gwinienn wirion, hag a zo deuet evit dougen ennomp frouezh ar vuhez, grit ac'hanomp skourroù strujek. R/

Kempedenn (p. 139)

OFIS KREISTEIZ

S. 122 - 123 - 124 Ant. : O eskemm burzhudus, Krouer mab-den ganet eus ar Werc'hez a ro dimp perzh en e natur-Doue.

Komz Doue So 3, 14 - 15 Huchit, merc'h Sion, youc'hit a levez, Israel, besit laouen o tridal a graiz-lon, merc'h Jeruzalem! An Aotrou, Roue Israel, a zo ganoc'h.

V/- Ar Verb a zo en em c'hraet den, alleluia.
R/- Deuet eo da chom en hon touez, alleluia.

Kempedenn (p. 139)

OFIS AN ABARDAEZ

Moulgen Ne oa netra eus ar bed c'hoazh... (p. 128)

S. 109 Ant. : O eskemm burzhudus: Krouer mab-den, ganet eus ur werc'hez, a ro dimp perzh en e natur-Doue.

S. 126 - : Bleuniet en deus kef Yeso, deuet eo ar steredenn eus Jakob.
Kant. Ef 1, 3-10 Ra vo benniget... (p. 83)

Komz Doue Ga 4, 4-5 Pa 'z eo deuet leunder an amzer, en deus Doue kaset e Vab, ganet eus ur vaouez, ganet dindan al lezenn, evit daspremañ ar re a oa sujet d'al lezenn, hag ober ac'hanomp e advibion.

Ar Verb a zo en em c'hraet den, alleluia, alleluia.
V/- Deuet eo da chom en hon touez, - - -
V/- Klod d'an Tad....

Kant. ar W.: Mister dilavarus, kalon ar Werc'hez a zeu da vezañ Templ Doue; an holl vroadoù a zeuio hag a lavaro: klod deoc'h-c'hwi, Aotrou.

Pedomp gant joa... (p. 139)

OFIS KREISTEIZ

DERO'HEM

Moulgen O Mab unganet, Jezuz Krist,
War ho tremm-c'hwi oc'h a'vesomp
Ar c'hloar ma lugernit ganti
E-tal Doue, kent an amzer.

Epifaniezh

Ar bed-mañ n'hoc'h anavez ket C'hwi a zo o chom en hon touez,
An deñvalded ho tizarbenn: O Verb leun eus an holl c'hrasoù,
D'ar re o deus ho resevet, Kolonit dimp ar wirionez,
Roit dezho perzh en ho leunder. Hon treuzfurmit en ho skoudenn.

Deoc'h eo ar c'hloar, o Tad Santel,
Evel d'ar Mab ar veuleudi,
Gant ar Spored Glan frealzer,
Bepred, dre-holl ha da viken.

S. 116 Ant. : A-belle teulo davedoc'h ar broadoù, gant o frofoù 'n o daouarn, allel.

S. 134 - : Gwelet hon eus arouez ar Roue bras hag ez omp deuet d'e azouliñ, alleluia.

Kant. 1 Tim 3, 16

Klod ha meuleudi deoc'h, Aotrou Jezuz.
Krist, bet diskouezet er c'horf, klod ha meuleudi deoc'h.
Krist, diskleriet santel gant ar Spored, klod ha meuleudi deoc'h.
Krist, bet gwelet gant an Aeled, klod ha meuleudi deoc'h.
Krist, prezeget d'ar Baganed, - - -
Krist, kredet gant ar bed, - - -
Krist, uhelsavet er c'hloar, klod ha meuleudi deoc'h, Aotrou Jezuz.

Komz Doue 2 Tim 1, 9-10 Doue en deus hor salvet hag hor galvet a c'halvidigezh santel, n'eo ket en abeg d'hon oberoù, met hervez e vonnaed hag e c'hras dezhañ e-unan. Ar c'hras-se, bet roet dimp a-raok an holl amzer er C'hrist Jezuz, eo an hini a zo bet diskleriet en amzer-mañ gant emziskouezidigezh hor Salver, ar C'hrist Jezuz, eñ hag en deus diskaret ar marv ha laket ar vuhez hag an divarveloed da splannañ dre an Aviold.

Sav ha splanna, rak setu da sklerijenn.
V/- Glear an Aotrou a sav warnout, rak setu da sklerijenn.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Pa weljont ar steredenn, e lavaras ar Vajed etrezo: setu arouez ar Roue bras; omp d'e glask ha kinnigomp dezhañ en prof an our, an ezafis hag ar mir, alleluia.

O Doue, C'hwi hag hoc'h eus galvet ar Vajed, preveudi ar broadoù, da zont da azeuliñ ho Mab, roit dimp spered an azeuliñ hag ar servij.

R/- Aotrou, dioubit ar beorien.

- Aotrou a c'hloar, c'hwi hag a ren ar pobloù gant reizhder, roit d'an dud ur peoc'h dinamm. R/
- Aotrou peurbadel, c'hwi hag a bad er c'hantvedoù, skuilhit ho komz a vuhez en hor c'halonoù. R/
- Aotrou, Mestr a reizhder, c'hwi hag a fell deoc'h dioubiñ ar paour dizifenn, ho pet truez ouzh ar reuzeudion. R/
- Aotrou, an holl rumadoù a vennig hoc'h Anv, sevenit evit hor broudour tremenet burzhudoù ho silvidigezh. R/

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus, da geñver an deiz-mañ, roet da anaout ho Mab unganet d'ar pobloù pagan ouzh o henchañ gant ur steredenn,

Epifaniezh

prizit en ho madelezh reiñ dimp-ni hag hoc'h anavez dre ar
Feiz, ar c'hraes da vezañ renet betek ennozh d'ho kwelout
fas-ouzh-fas e splannderho kload. Dre Jezuz Krist...

OFIS AL LENNADENNOU

Meulgan N'eus mui sin ebet en noz,
Mary ar sterenn.
Met Doue, en e Vugel
Roet d'ar bed.
Jezuz Krist 'zo diskleriet
Da galon-den.

N'eus mui a vouezhus an neñv
Pa vadez Yann.
Jezuz, Doue anavet
Edan e Gomz,
P'en adlavar e-uman
E kalon-den.

N'eus mui a jarl 'vit dihun
Joa an cured.
Nemet gwin troet en gwad.
Burzhud nevez!
Doue, ostiz dre Jezuz
E kalon-den.

- S. 71 Ant.: Rouaned ar bed-holl a zegaso o frofoù d'an Aotroù, alleluia.
 - S. 95 - : Rentit d'an Aotroù, remziadoù ar pobloù, rentit d'an Aotroù enor ha gloar.
 - S. 96 - : Skodifiñ a ri gant sklerijenn an Aotroù betek dibennoù an douar, alleluia.
- V/- An douar a-bezh d'hoc'hazeuliñ ha d'ho meulifiñ, alleluia.
R/- Ra gano ur salm d'hoc'h Anv, alleluia.

Lennadenn Iz 60, 1-22

R/- Sav, sked, rak setu da sklerijenn + ha warnout e splann
gloar an Aotroù. V/- Kerzhout a ra ar broadoù davet da
sklerijenn hag ar rouaned davet sked da splannder + warnout
e splann gloar an Aotroù.

Te Doum ha kempedenn

OFIS AN BEURE

S. 94 R/- En em ziskouezet dimp eo ar C'hrist, deuit, azeulomp anozhañ.

Meulgan

- 1 - Splannder strinket eus kreiz Doue, 3 - E goueled hon noz e teuit,
Sklaerder ganet eus ar sklaerder,
A-raok m'eo ganet an hollved,
Splannañ a rit en deñvalded.
- 2 - Ni hoc'h ador, Mab dreist-karet, 4 - Deoc'hoc ar c'hloar, o Tad santol,
Termon a bep seurt azaouez,
An Tad hag en deus ho kaset,
Warnoc'h a rad e c'hraes repoz.

S. 62 Ant.: Karget o voent a levnez o kwelout ar steredenn, alleluia.
Kant. Du (p.6): Benniget an Aotroù, c'hwi holl stered an neñv.
S. 149 Ant.: Bennig da Roue, Jeruzalem, eñ hag az laka e barr al levnez,
alleluia.

Komz Doue Iz 52, 7. 9-10 Pegen brav war menezioù treid ar gelaou-
erion-vat oc'h embann ar peoc'h, o tegas
an eurvad, oc'h embann ar silvidigezh, o lavarout da Sion: ren a ra

da Zoue! Dirollit holl da youc'hal gant levnez, rivinoù Jeruzalem,
rak frealzet eo bet e bobl gant Doue ha dasprenet Jeruzalem. Troñset
en deus Doue e vrec'h santel dirak daoulagad an holl bobloù, ha di-
bennoù an douar a wel silvidigezh Doue.

Azeulit an Aotroù, alleluia, alleluia.
V/- Rouaned an douar a zegaso o frofoù, alleluia, alleluia.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Diouzh tu ar sav-heol ez eus bet gwelot ur steredenn, hag ar
Vajed, karget a levnez, o deus hoc'h anavezet: setu arouez
ar Roue bras: kinniget eo ar silvidigezh hag ar peoc'h d'ar
broadoù, alleluia.

- Krist, bet diskouezet er c'horf, hor santelait dre an Aviel hag ar bedenn.
- R/- Sklerijenn deuet eus ar Sklerijenn, goulacuit an deiz-mañ.
- Krist, diskleriet santel gant ar Spered, hon dieubit eus pep fazi. R/
- Krist, bet gwelot gant an Aeled, grit dimp tañva war an douar joaioù ho Rouantelezh. R/
- Krist, prezeget d'ar Baganed, digorit kalonoù an dud da c'halloud ar Spered. R/
- Krist, kredet gant ar bed, adnevesait feiz an holl grederion. R/
- Krist, uhelsavet er c'hloar, enaouit en hor c'halonoù ar c'hoant ma teuo ho Rouantelezh. R/

Kempedenn (p. 142)

OFIS AN ABARDAEZ

Meulgan

- 1 - Na spontez ket, Herodez kriz, 4 - Jezuz gant Yann 'zo badezet
Mar d-eo bet ganet hor roue,
Ne skrapo ket tronioù dibriz
An hini 'zo gwir Vab Doue.
- 2 - Diskennet eo d'en em ziskouez 5 - Hag e Kana, burzhud nevez,
'Vel Redemptor an holl vroioù:
E c'halloud hag e vadalezh
A bar warnomp 'n e vuzhudoù.
- 3 - Majed da heul e steredenn 6 - Jezuz, Mab Doue benniget,
O deus adoret gant profoù
An hini 'zo gwir sklerijenn
Ha splannder Doue an Neñvoù.

S. 109 Ant.: Sevenet eo an amzerioù ha gwelet hon eus gloar ar Mab.
S. 113 A - : Rouaned Saba a zeuio, oc'h embann meuleudioù an Aotroù.

Kant. Disk. 15, 3-4 Bras, ostilamm hoc'h oberoù, Aotroù Doue, mestr ar bed.
Beun ha peursur hoc'h hentoù, Roue ar broadoù.

R/- Bras eo hoc'h oberoù, Aotroù.

Piv na rofe, Aotroù, doujañs ha klod d'hoc'h anv?
Rak c'hwi hepken a zo santel. R/

An holl vroadoù a zeuio da stouñf d'an daoulin dirazoc'h,
dre ma 'z eo 'n em ziskouezet reizhdor ho parnedigezhioù. R/

Komz Doue Tt 3, 4-5

D'an deiz maz eo en em ziskouezet made-
lezh hon Doue Salver hag e garantez evit
an dud, en deus hor salvot n'eo ket en obero a reizhdor
hor bije graet, met diwar doug e drugarez, en ur reñf dimp bezañ
ganet d'ar vuhez nevez dre welo'hadenn ar Spered Santel.

Sav ha sked, rak setu da sklerijenn.
V/- Clear an Aotrou a sav warnout, rak setu da sklerijenn.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Mero'h Abraham ewurus, azeuliñ a ra ar Vajed ho pugel hag e
welit sevenet ar bromesa: ennañ e vo levenez broadoù an douar.

O Doue, c'hwi hag hoc'h eus galvet... (p. 141)

Kempedenn (p. 142)

=====

BADEZIAN T HOR SALVER

=====

DERO'HENT

Meulgan

- | | |
|---|---|
| 1 - Dont 'ra Jezuz betek ar stêr
Hag a lavar da Yann souezhet:
" Va badezit."
From an tonnoù!
Piv a c'hellfe gwalo'hiñ
Ur c'horf kon sakr? | 4 - Perak fromañ, islonkoù du,
Pa vez gwelet an aecrouant
Emoc'h kouezhet?
E kreiz ar skoud
E tiskenn Mab Doue,
Sklaerier ha tan. |
| 2 - Petra 'vern, Yann, na pa veo'h din?
Lezit ober ar pezh n'eo c'hoazh
Heizet gant den.
Ur sin a ro,
Dimp da heuilh e lezenn
A garantez. | 5 - War ar c'hlam eo'had sav Jezuz.
P'en deus glebiet e gorf santel
Ho tour, Yordan,
A zo dour bev.
Emoc'h ar bed a-bezh
'Zo nevesaet. |
| 3 - Warnañ e kemer droug ar bed.
Diskenn 'ra noazh 'vel ur pec'her,
Eñ, an Aotrou,
E don an dour.
Mestr an tonkad a ya
Da glask ar marv. | 6 - Doursebelier ha dour mager
M'eo savet dioutañ an den kozh
Ennañ beziet,
Bev a-nevez,
Evit bout emannet
Mab dreist-karet. |
- 7 - An Neñv a zispak e vister,
Ael a beoc'h, ar Spered a zeu
Hag e klover
Mouezh an Tad.
Anav a ra ar bed
Ar Garantez.

S. 116 Ant.: A-bell e teuo davedout ar broadoù gant o frofoù 'n o
daouarn, alleluia.

S. 134 - : Gwelet hon eus arouez ar Roue bras hag ez omp deuet d'hen
azeuliñ, alleluia.

Kant. Disk. 15, 3-4 Setu diskouezet madelezh Doue.
Bras, estlammus... (p. 143)

Komz Doue Ob 10, 37-38 O'hwi ivez a oar petra 'zo c'hoarvezet
dre vro Judea a-bezh, penaos Jezuz eus

Nazarod a grogas da gentañ gant Galilea goude ar vadeziant bet preze-
get gant Yann, penaos Doue en deus clevet anezhañ gant ar Spered San-
tel ha gant galloud; eñ en deus tremenet oc'h ober ar mad hag o pa-
reañ ar re holl a oa kouezhet dindan galloud an diaoul, rak Doue a oa
gantañ.

Ho kwelout a reas an dourioù, o Doue, ho kwelout a rejont,
alleluia, alleluia.

V/- An oabl a roas e vouezh, alleluia, alleluia.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Hiziv e tigor an neñvoù hag e tregorin mouezh an Tad; Hemañ
eo va Mab muiañ-karet.

Servijer Doue, harpet gant an Tad a ro deoc'h e c'hrad-
vat, o Krist, lakit warnomp ho Spered.

R/- Lakit warnomp ho Spered.

- C'hwi, dibabet gant Doue, ha na dorrit ket ar gorzenn breset, ma
ne vougit ket ar vouchenn o tivogediñ, ho pet truez ouz ar re ho
klask en gwirionez. R/

- Mab Doue, dibabet gant an Tad evel emglev ar bobl ha sklerijenn ar
broadoù, digorit daoulagad an dalied e dourioù ar vadeziant. R/

- Salver an dud, an Tad a gemeras ho torn er Yordan hag ho tivallas
er gouelec'h, grit d'ar brizonidi dont er-maez eus an toull-bac'h. R/

- Krist, hon esperañs, c'hwi hag a ren ar brizonidi eus o zefvalijenn
da sklerijenn ar silvidigozh, degemerit en ho Rouantelezh hon holl
vreudeur tremenet. R/

Kempedenn

Doue hollc'halloudek ha peurbadel, pa vo
badozet Jezuz e stêr Yordan, e tiskennas
ar Spered Santel warnañ hag ho poa diskleriet e oa ho Mab muiañ-
karet; plijet ganeoc'h eta reñf d'ar re a zo bet ganet a-nevez
dre an dour hag ar Spered Santel evit dont da vezañ ho pugalo,
ar c'hrao da gondero'hol d'ober e pep amzer ar pezh a blij
deoc'h. Dre Jezuz Krist...

OPIS AL LEMNADEINNOU

Meulgan (p. 142)

S. 28 Ant.: Mouezh an Tad o tont eus an neñv: Setu va Mab, an Hini am
eus dibabet, ha warnañ e tiskuizh ar Spered.

S. 65 - I: Eñ ho padazo er Spered hag an tan.
- II: Ur vadeziant am eus da zegomer hag ez on onkrezet.

V/- Duit, pobloù ar bed.

V/- Duit da evañ da stivell ar Salver.

Lennadenn

Iz 42, 1-8; 49, 1-9.

R/- Hiziv, da geñver badeziant an Aotrou er Yordan, o tigoras an
neñvoù; dindan stumm ur goum e teuas warnañ ar Spered hag e
voe klevet mouezh an Tad: + Hemañ eo va Mab muiañ-karet an
eus lakot ennañ va levenez.

V/- Hag e tiskennas ar Spered Santel, dindan stumm ur goum hag
e teuas ur vouezh eus an neñv: + Hemañ...

Te Doum ha Kempedenn

S. 94 R/- Deuit, azeulomp an Aotrou.

Meulgan R/- Spered Doue a ziskuih warnon,
Spered Doue 'n deus va sakret,
Spered Doue en deus va c'haset d'embann ar peoc'h, ar joa.

Spered Doue am dibab
'Vit astenn Ren an Aotrou Krist e-touez ar broadoù,
Hag evit embann ar C'heloù-mat d'e beorion,
Me 'drid a joa en Doue, va Salver. R/

Spered Doue am dibab
'Vit astenn...
Evit kemenn d'an holl gras ar frankiz adkavet... R/

Spered Doue...
Hag evit lidañ e c'hloar e-touez an holl bobloù... R/

S. 62 Ant. : Deuit, pobloù ar bed, deuit da evañ da stivell hor Salver.
Kant. Dn (p.6) : Edourioù ar Yordan ar bed a zo adnevezet; Feunteunioù an Aotrou, benniget an Aotrou.

S. 149 Ant. : An Aotrou en em blijed a zo bobl.

Komz Doue Iz 61, 1-2 Spered an Aotrou a zo warnon, rak sakret en deus ac'hanon evit reiñ ar C'heloù-mat d'an dud keizh, ha kaset ac'hanon evit lienañ ar re brevet o c'halon, evit embann d'an harluidi ar frankiz, d'ar brizonidi an digor, evit kemenn ur bloavezh a blijo da Zoue.

Ennoc'h emañ mammenn ar vuhez, en ho sklerijenn e welomp ar sklerijenn.

V/- Pegen prizius ho karantez, en ho sklerijenn...
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. : Merket gant sin ar Spered, Jezuz a zeu er-maez eus an dour; an diaraoger a anav anozhafi hag a ziougan: Setu an Oan a ro dimp ar peoc'h hag a gensakr ar bed.

- Krist, c'hwi hag hoc'h eus, dre an Epifaniezh, laket ho sklerijenn da skediñ warnomp ha roet dimp leunder ar silvidigezh, roit, ni ho ped, ho sklerijenn d'ar re en em gavimp hiziv ganto.

R/- Kyrie eleison.

- Krist, c'hwi hag hoc'h eus en em izelaet da vezañ badezet gant ho servijer, evit diskouez dimp hent an izelegezh, roit dimp, ni ho ped, ar Spered-se a raio dimp en em lakaat e servij ar dud. R/

- Krist, c'hwi hag hoc'h eus, dre ho padeziant, hor gwalo'hetdiouzh pep mastar ha graet ganimp bugale d'an Tad, roit, ni ho ped, an advabelezh d'ar re a zo ouzh ho klask. R/

- Krist, c'hwi hag hoc'h eus, dre ho padeziant, santelaet ho krouadelezh ha digoret dor ar geuzidigezh d'ar re vadeziet, grit ganimp, ni ho ped, kannaded ha testoù an Aviel dre ar bed. R/

- Krist, c'hwi hag hoc'h eus, dre ho padeziant, diskuliet mister an Dreinded: an Tad o tiskouez ac'hanoc'h evel ar Mab muiañ-karet dre ar Spered Santel o tiskenn warnoc'h, adnevesait, ni ho ped, spered an azeulerezh e belegiezh roueel an dud vadezet. R/

Kempedenn (p. 145)

S. 22 ha 75 Ant. : Hor renit, Aotrou, davet andonioù ar vuhez.

Komz Doue Iz 42, 1 Sed va servijer am eus kemeret, dibabet, hag a blij din. Laket em eus va spered warnañ evit ma kaso ar reizhder d'ar pobloù.

V/- Deuit, pobloù ar bed.
R/- Deuit da evañ da stivell ar Salver.

Kempedenn (p. 145)

Meulgan Dont 'ra Jezuz betek ar stêr... (p. 144)

S. 108 Ant. : Va Mab out-te, va muiañ-karet, bez sklerijenn ar broadoù.
S. 111 - : Va c'hensakret en deus an Aotrou evit reiñ d'ar beorion silvidigezh Doue.

Kant. Disk. 15, 3-4: Setu diskleriet madelezh Doue.

Bras, estlammus... (p. 143)

Komz Doue Ob 10, 37-38 (p. 145)

Kant. ar W. : Ar pezh am eus graet, eme an Aotrou, dizale en komprenot: Diskennet on, kemeret em eus ho pec'hedoù warnon. En em garit an eil egile ovel m'em eus ho karet.

Servijer Doue... (p. 145)

Kempedenn (p. 145)



AMZER AR C'HORAIZ

SULIOU

DERC'HENT

Meulgan

- 1 - Ni hoc'h asped, krouer ar bed,
En amzervezh-mañ da glevet
Pedenn ha keuz hon eneoù
A brofomp deoc'h gant ho yunioù.
2 - C'hwi a wel hor sempladurozh
Hag holl bec'hedoù hor buhez,
Met roit dimp gras ho pardon
Pa zistroomp deoc'h a galon.
3 - Klask a reomp gwir binijenn
Dre yun, aluzon ha pedenn:
Evit ma c'hellimp ho mouliñ
Pareit ennomp pep gouli.
4 - Hor c'hoantegezh a gastizomp,
Ho kras nerzhus a c'houlennomp,
Ma yuno ivez hor spered
Dicuzh banvez hudur ar peoc'hed.
5 - Ni hoc'h asped, o Treinded sakr,
Ni a gement a zo fallakr,
Da reifi d'hon eneoù direizh
Adsav ha nerzh dre ar c'hoareiz. Amen.

Ant. 1 : Eñ, ar Mab, a zeskas sentifi er boan.
Ant. 2 : Doue en deus tennet ar C'hrist eus ar marv ha graet dezhañ
azezañ er c'hloar.

Kant. Fil 2, 6-11 (p. 125)

Komz Doue 2 Kor 6, 1-4
Ho pedifi a reomp start na vo ket en aner
e resevfot gras Doue. Rak lavarout a ra:
" En amzer a drugarez em eus da selaouet, hag en deiz ar silvidigezh
em eus da sikouret ". Setu bremañ da vat amzer an drugarez, setu
bremañ deiz ar silvidigezh. E stumm ebet, da zont ebet, na reomp
skouer fall: arabat e vefe kavet abeg en hor ministrerezh; er
c'hontrol en em ziskouezomp e pep tra evel gwir servijerion da Zoue.

Aotrou, va nerzh, buan d'am sikour!
V/- Ha vezit ket pell, rak tost eo an enkreiz, buan d'am sikour!
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar M.: Meulit an Aotrou, c'hwi, an holl bobloù: bras eo e garantez
evidomp.

Pedomp an Aotrou Krist en deus savet ar vadeziant evit ma
teufemp da vezañ krouadurion nevez, ha lavaromp dezhañ:

R/- Santelait ar bobl hoc'h eus daspronet.

- Aotrou Jezuz, prometet hoc'h eus ober pep tra nevez e Jeruzalem an
neñv; adnevosait hoc'h Iliz en deizioù-mañ a goareiz. R/
- Na zilcizit ket ho tud fidel hag a zo atpell diouzhoc'h dre ar pe-
oc'hed; hon distroit davedoc'h, Aotrou, hag e vimp troet. R/
- D'ar re o deus ur galloud bennak er bed-mañ, kelennit dezho hentoù
ar reizhder hag ar garantez. R/
- Deskit dimp labourat gant hon holl vreurour evit an urzh-vat hag
ar peoc'h, ma tigoro an douar d'ho Rouantelezh. R/
- Pa zeufot en ho Rouantelezh, ho pet soñj eus ar re a zo marvet
hiziv. R/

Sulioù ar C'horaiz

Kempedonn Sul 1

Roit dimp ar c'hras, Doue hollc'hallou-
dek, ma teuimp, dre oberoù santel ar C'ho-
raiz, da gomprenn gwelloc'h mister an Aotrou Krist, ha da glask
ar frouezh anezhañ dre ur vuhez dereat. Eñ a vev hag a ren...

Sul 2

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus gourc'ha-
mnet dimp selaou ho Mab karet, plijet
ganoc'h magañ hor c'halonoù gant e gomzoù, evit ma vo sklaeraet
selloù hor spered ha ma c'hellimp gant levezon gwelout splann-
der ho kloar. Dre Jezuz Krist...

Sul 3

Aotrou Doue, krouer ha mammenn an holl
drugarez ha kement madelezh a zo, diskoue-
zet hoc'h eus ez eo ar yun, ar bedenn hag an aluzen louzoù ar
peoc'hed; taolit eta ur sell a druez warnomp-ni a anzav amañ
dirazoc'h pegen dister hag izel ez omp, ha peogwir en em san-
temp o plegañ dindan bouez hor peoc'hedoù, plijet ganoc'h, en
ho drugarez, ober dimp sevel en-dro. Dre Jezuz Krist...

Sul 4

Aotrou Doue, c'hwi hag a ra ar peoc'h, en
un doare burzhudus, gant ar bed-holl, dre
ho Mab, ar Verb peurbadus, roit ar c'hras d'ar bobl gristen
d'en em azezañ gant feiz bev ha garantez virvidik d'ar gouelioù-
bras a zo o testaat. Dre Jezuz Krist...

Sul 5

Selaouit hor gouenn, c'hwi hor Mestr
hag hon Doue: ho Mab Jezuz a zo en em
roet d'ar marv dre garantez evit an dud; roit dimp eta ar
c'hras da gaut en hor c'hreiz ur garantez virvidik heñvel
ouzh e hini. Eñ a vev hag a ren...

Sul ar Bleunioù

Doue hollc'halloudek ha peurbadel, evit
reifi d'an dud ur skouer da zeskiñ dezho
en em izelaat hoc'h eus graet d'hor Salver donet da vezañ den
ha marvel war ar groaz, plijet ganoc'h reifi dimp ar c'hras
da gompren ar gentel a basianted a ro dimp en e Basion, ha da
gaut perzh en e Adsav a varv da vev. Eñ a vev hag a ren...

OFIS AL LENIADENNOU

Meulgan

Da vont davedoc'h, Aotrou, me n'on ket din.
Ra zeuio ho komz da ren va c'hammedoù,
Hag e vin pareet.
Ma da gomz ouzhoc'h, Aotrou, me n'on ket din.
Ra zeuio ho komz ivez d'am laouenaat
Hag e vin pareet.
Ma d'ho kouviañ, Aotrou, me n'on ket din.
Ra zeuio ho komz ivez da c'hom ennon
Hag e vin pareet.
Ma d'ho servijañ, Aotrou, me n'on ket din.
Ra zeuio c'hoas ho komz da vegañ va feiz,
Hag e vin pareet.
Ma d'ho kanmouliñ, Aotrou, me n'on ket din.
Ra zeuio ho komz-c'hwi da dremen em mouezh,
Hag e vin pareet.

(Salmoù hag antifonenoù an deiz)

S. 94 R/- Hizivna serrit ket ho kalon, met selaouit muezh an aotrou.

Neulgan

- 1 - Ennoc'h, Aotrou, 'mañ va esper, Hep ho skoazell ez en kollot, Met rentet kreñv gant ho kalloud, Horse ne vin-me kerseet.
- 2 - Bezit va meger, va repu, Va skood ivez, va gwarezer, Bezit va roc'h er gwall-amzer, Bezit va goudor, va salver.
- 3 - Eus gwall-veo'h va reuzoudigezh Pa zeuy ho torn d'am zioubiñ, Neuze war hent ar sklerijenn A galon laouen e kerzhin.
- 4 - Diouzh pep dañjer va diwallit, En ho taouarn 'mañ va ene; Ouzh an enebour war va c'hilask Va gwarezit, me a zo deoc'h.

Ant. 1: C'hwi 'zo galloudus, Aotrou, evit hon diframmañ diouzh dorn ar re greñv; hon dieubit, o c'hwi hon Doue.

Ant. 2: Kant. (gant e ziskan).

Ant. 3: Hon tommañ 'ra an Aotrou diouzh dalc'h an deñvalijenn hag hor ren a ra da Rouantelezh e Vab.

Komz Doue Sul 1 - 2 - 3: Me 8, 9-10 An deiz-mañ a zo santel evit an Aotrou, ho Toue. Bezit dic'hla-c'har ha na ouelit ket, rak an deiz-mañ a zo santel evit an Aotrou! Ma vezit ket ankoniet: levenez an Aotrou eo hor ramparzh.

Sul 4 - 5 - 6: ZA 9,9 Bezit leun a levenez, merc'h Sion! Tridit ha youc'hit, merc'h Jeruzalem! Emañ ho Roue o tont davedoc'h; reizh ha trec'her, dilore'h hag a-c'haolind war un azen, war obuilig an azenez.

Aotrou, va nerzh, buan d'am sikour!
V/- Ma vezit ket pell, rak tost eo an enkreuz, buan d'am sikour!
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Ra vo benniget an hini a zou en anv an Aotrou!

Pedomp gant feiz an Aotrou Jezuz Krist ha lavaromp deshañ a galon unvan:

R/- Lakit ennomp, Aotrou, ur spered nevez.

- Aotrou Jezuz Krist, hor buhez, dre ar vadeziant hoc'h eus graet dimp kaout perzh en ho marv hag en hoc'h adsav d'ar vuhez; grit ma korzhimp hiziv en ur vuhez nevez. R/
- C'hwi hag a zo bet tremenet en hon touez en ur ober ar mad, hon lakit da vezañ evezhiek d'ober vad d'hon nesañ. R/
- Roit dimp ar c'hras da labourat a-gevret evit sevel keoded ar bed-mañ ha klask dre eno ho Rouantelezh peurbadus. R/
- C'hwi hag hoc'h eus kaset dimp komz vev Doue, roit dimp naon eus ar Komz-se muioe'h c'hoazh eget a vara. R/

Kempedenn (p. 149)

OPIS KREISTELZ

Ant.: Ho varvin ket, bevañ a rin hag embann a rin oberoù Doue.

Komz Doue Ez 18, 30-32 Distroit war ho kiz eus hoc'h holl van-koù, ha ne vo ket an droug ur skoilh evidoc'h. Taolit diwammoc'h an holl beo'hedoù hoc'h eus graet ha stummit ennoc'h kalonoù nevez ha speredoù novoù. Perak mervel, ti Israel? Rak n'em bez ket a blijadur gant marv ar re a varv, diougan

an Aotrou Doue; ya, distroit evit bevañ.

V/- An Aotrou a zo leun a drugarez.
R/- Largetezus d'hon daspreañ.

Kempedenn (p. 149)

OPIS AN ABARDAEZ

Neulgan

- 1 - Aotrou, trampa c'harma ho foan Da Volz ho Pobl sec'hedet, E tigorjoc'h 'viti ar roc'h: Souden e strinkas An dour a ro buhez Da birc'hirined an douar touet.
- 2 - Ho komz, Jezuz, 'zo evidomp Mammenn ar vuhez peurbadel: Doue, gouez deoc'h, 'Zokarantez, Hag e prometit Sklerijenn ha peoc'h dimp, Ma kredomp en Doue a gar 'c'hanomp.
- 3 - Soubet geneoc'h er gouronkenn Pa ziskennomp d'ar vadeziant, Ennoc'h e klaskomp ar skoazell, Hag ez omp asur Da vezañ savetaet Pa'z oc'h Mab Doue a gar ac'hanomp.
- 4 - Deut geneoc'h er-maez eus ar bez Pa bignomp eus ar vadeziant, 'Vit Doue 'vevomp a-nevez, Hag an deiz 'zeuic Ma welo fraezh ho Pobl An neñvoù hag an douaroù nevez.

Ant. 1: Eñ, ar Mab, en deus desket sentiñ er boan.

Ant. 2: Doue en deus tennet ar C'hrist eus ar marv ha graet dezhañ azezañ er c'hloar.

Kant. 1 P 2, 21-24

Gouzañvet en deus ar C'hrist evidomp ha lezet dimp ur skouer evit ma korzhimp war e roudoù.

R/- Dre e boanioù ez omp yac'haet.

Eñ n'em deus graet pec'hed ebet, n'eus bet gaou ebet en e c'henou; pa veze kunujennet, ne ronta kunujenn da zen; pa c'houzañve poan, ne c'hourdrouze ket, met en em lakaat a rae etre daouarn an Hini a varn gant reizhder. R/ Eñ en deus douget hor pec'hedoù ene gorf war ar c'hoad, evit hol lakaat da vervel d'hor pec'hedoù ha da vezañ er reizhder. R/

Komz Doue Sul 1 - 2 - 3 2 Kor 6, 1-4

Ho pediñ a romp start na vo ket en aner e resevot gras Doue. Rak lavarout a ra: "En amzer an drugarez em eus da selaouet, hag en deiz ar silvidigezh em eus da sikouret." Setu bremañ da vat amzer an drugarez, setu bremañ deiz ar silvidigezh. E stumm ebet, da zen ebet, na romp skouer fall: arabat e vefe kavet abeg en hor ministrerezh; er c'hontrol en em ziskouezomp e pep tra evel gwir servijerion da Zoue.

Sul 4 - 5 - 6 Ob 13, 26-30

Breudeur, deoc'h-c'hwi eo bet kaset kemenn ar silvidigezh-mañ. Rak annezidi Jeruzalem hag o fennrenerion o deus dianna-vezet Jezuz, kenkouls ha komzoù an diouganerion a vez lennet bep sabad: o degaset o deus da wir dre gondaoniñ anezhañ. Daoust na gavent ennañ abeg ebet a varv, o deus goullanet digant Pilat na vefe kaset da lazhañ. P'o devoa peursevenet kemenn a oa bet skrivet diware benn, e tiskennjont anezhañ diouzh ar c'hoad d'e lakaat en ur bez. Met Doue en deus e zihonet a-douez ar re varv.

Sulioù ar C'horaiz

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- Hizivna serrit ket ho kalon, met selaouit mouezh an Aotrou.

Meulgan

- 1 - Ennoc'h, Aotrou, 'mañ va esper, Hop ho skoazell ez on kollet, Met rentet kroñv gant ho kalloud, Morse ne vin-ne kerseet.
- 2 - Bezit va moger, va repu, Va skood ivez, va gwarezer, Bezit va roc'h er gwall-amzer, Bezit va goudor, va salver.
- 3 - Eus gwall-vec'h va reuzeudigozh Pa zouy ho torn d'am zieubiñ, Neuze war hent ar sklerijenn A galon laouen e kerzhin.
- 4 - Diouzh pep dañjer va diwallit, En ho taouarn 'mañ va eno; Ouzh an enebour war va c'hlask Va gwarezit, me a zo deoc'h.

Ant. 1: C'hwi 'zo galloudus, Aotrou, evit hon diframmañ diouzh dorn ar re greñv; hon dieubit, o c'hwi hon Doue.

Ant. 2: Kant. (gant e ziskan).

Ant. 3: Hon tennañ 'ra an Aotrou diouzh dalc'h an deñvalijenn hag hor ren a ra da Rouantelezh e Vab.

Komz Doue Sul 1 - 2 - 3: Ne 8, 9-10 An deiz-mañ a zo santel evit an Aotrou, ho Toue. Bezit dic'hla-c'har ha na ouelit ket, rak an deiz-mañ a zo santel evit an Aotrou! Na vezit ket ankeniet: levenez an Aotrou eo hor ramparzh.

Sul 4 - 5 - 6: ZA 9,9 Bezit leun a levenez, merc'h Sion! Troidit ha youc'hit, marc'h Jeruzalem! Emañ ho Roue o tont davedoc'h; reizh ha trec'her, dilore'h hag a-c'haoliad war un azen, war ebeulig an azenez.

Aotrou, va nerzh, buan d'am sikour! V/- Na vezit ket pell, rak tost eo an enkreiz, buan d'am sikour! V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Ra vo benniget an hini a zou en anv an Aotrou!

Pe domp gant feiz an Aotrou Jezuz Krist ha lavaromp dezhañ a galon unvan:

R/- Lakit ennomp, Aotrou, ur spered nevez.

- Aotrou Jezuz Krist, hor buhez, dre ar vadeziant hoc'h eus graet dimp kaout perzh en ho marv hag en hoc'h adsav d'ar vuhez; grit me kerzhimp hiziv en ur vuhez nevez. R/
- C'hwi hag a zo bet tremenet en hon touez en ur ober ar mad, hon lakit da vezañ evezhiek d'ober vad d'hon nesañ. R/
- Roit dimp ar c'hras da labourat a-govret evit sevel koded ar bod-mañ ha klask dre eno ho Rouantelezh peurbadus. R/
- C'hwi hag hoc'h eus kaset dimp komz vev Doue, roit dimp naon eus ar Gomp-se muoc'h c'hoazh eget a vara. R/

Kempedenn (p. 149)

OFIS KREISTELZ

Ant.: Ne varvin ket, bevañ a rin hag ombann a rin oberoù Doue.

Komz Doue Ez 18, 30-32 Distroit war ho kiz eus hoc'h holl van-kou, ha ne vo ket an droug ur skoilh evidoc'h. Taolit diwarnoc'h an holl bec'hedoù hoc'h eus graet ha stummit ennoc'h kalonou nevez ha spredoù nevez. Perak mervel, ti Israel? Rak n'em bez ket a blijadur gant marv ar re a varv, diougan

Sulioù ar C'horaiz

an Aotrou Doue; ya, distroit evit bevañ.

V/- An Aotrou a zo leun a drugarez. R/- Dargentezus d'hon daspreañ.

Kempedenn (p. 149)

OFIS AN ABARDAEZ

Meulgan

- 1 - Aotrou, trama c'harma ho foan Da Volz ho Pobl sec'hedet, E tigorjoc'h 'viti ar roc'h: Souden e strinkas An dour a ro buhez Da bire'hirined an douar touet.
- 2 - Ho komz, Jezuz, 'zo evidomp Mammenn ar vuhez peurbadel: Doue, gouez deoc'h, 'zo karantez, Hag e prometit Sklerijenn ha peoc'h dimp, Ma kredomp en Doue a gar c'hanomp.
- 3 - Soubet ganeoc'h er gouronkenn Pa ziskennomp d'ar vadeziant, Ennoc'h e klaskomp ar skoazell, Hag ez omp asur Da vezañ savetaet Pa'z oc'h Mab Doue a gar ac'hanomp.
- 4 - Deut ganeoc'h er-maez eus ar bez Pa bignomp eus ar vadeziant, 'Vit Doue 'vevomp a-nevez, Hag an deiz 'zeuio Ma welo fraezh ho Pobl An neñvoù hag an douaroù nevez.

Ant. 1: Eñ, ar Mab, en deus desket sentif er boan.

Ant. 2: Doue en deus tennet ar C'hrist eus ar marv ha graet dezhañ azezañ er c'hloar.

Kant. 1 P 2, 21-24

Gouzañvet en deus ar C'hrist evidomp ha lezet dimp ur skouer evit ma kerzhimp war e roudoù.

R/- Dre e boanioù ez omp yac'haet.

Eñ n'en deus graet pec'hed ebet, n'eus bet gaou ebet en e c'henou; pa veze kunujennet, ne rante kunujenn da zen; pa c'houzañve poan, ne c'hourdrouze ket, met en em lakaat a rae etre daouarn an Hini a varn gant reizhdor. R/ Eñ en deus dougether pec'hedoù ene gorf war ar c'hoad, evit hol lakaat da vervel d'hor pec'hedoù ha da vezañ er reizhdor. R/

Komz Doue Sul 1 - 2 - 3 2 Kor 6, 1-4 Ho pedif a roomp start na vo ket en anar e resevot gras Doue. Rak lavarout a ra: "En amzer an drugarez em eus da selaouet, hag an deiz ar silvidigezh em eus da sikouret." Setu bremañ da vat amzer an drugarez, setu bremañ deiz ar silvidigezh. E stumm ebet, da zen ebet, na roomp skouer fall: arabat e vefe kavet abeg en hor ministrerezh; er c'hontrol en em ziskouezomp e pep tra evel gwir ser-vijerion da Zoue.

Sul 4 - 5 - 6 Ob 13, 26-30 Breudeur, deoc'h-c'hwi eo bet kaset kemenn ar silvi-digezh-mañ. Rak annezidi Jeruzalem hag o fennrenerion o deus diana-vozet Jezuz, kenkouls ha komzoù an diouganerion a vez lennet bep sabad: o degaset o deus da wir dre gondañf anezhañ. Daoust na gavent ennañ abeg ebet a varv, o deus goulnet digant Pilat ma vefe kaset da lazhañ. P'o devoa peursevenet kement a oa bet skrivet diware benn, o tiskennjont anezhañ diouzh ar c'hoad d'e lakaat en ur bez. Met Doue en deus e zihumet a-douez ar re varv.

Va dasprenit, Aotrou, ho pet truez ouzhin.
V/- Va zroad a chom war an hent mat, ho pet truez ouzhin.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Klod ho krouz a sklerijenn ar bed, ho trugarekaat a reomp,
o Krist hor Salver.

Pedomp gant feiz an Aotrou Jezus Krist, ha lavaromp dezhañ
a galon unvan:

R/- Aotrou, ho pet truez ouzh ho Pobl.

- Aotrou Jezus, hor blenier, c'hwi a zo pigmet da Jerusalem evit gouzhañ ho Pasion hag antron er c'hloar, renit hoc'h Iliz war hent ho Pask peurbadel. R/
- Roit d'an holl dud a zoug hoc'h anv hag a zo ganet eus an hevelep Spered ar c'hras da vevañ unanet er wirionez hager garantez. R/
- Ho pet soñj eus ar re en em brient d'ar Vadeziant, ma touint da vezañ mein bev an Iliz. R/
- Na gonnarit ket ouzh hor pec'hedoù: hor salvit dre ar feiz en ho trugarez divent. R/

Kempedenn (p. 149)

LUN AR C'HORAIZ

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- Hiziv na serrit ket ho kalon, met selaouit mouezh an Aotrou.
Moulgan (p. 15D)

Komz Doue Em 19, 4-6
Gwellet hoc'h eus ar pezh am eus graet: douget em eus ac'hanoc'h war eskell erered ha kaset ac'hanoc'h betek emnon. Ha bremañ, mar sentit ouzh va mouezh ha mar mirit va lezenn, e vafot evidon un dibab a-douez an holl bobloù; rak din eo an holl zouar. Hag e vicit evidon ur rouantelezh e veleion, ur bobl santel.

Gervel a ran a-greiz kalon, respentit din, Aotrou.
V/- Mirout a rin ho polontezioù, - - -
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Doue en deus graet dimp tremen e rouantelezh e Vab muiañ-karet, ennañ e kavomp an daspren dre e wad, ha pardon d'hor pec'hedoù.

(Sizhun Santel): Tad reizh, ar bed n'en deus ket da anavezet, me avat am eus da anavezet dre m'ac'h eus va c'haset.

Pedomp Doue an Tad peurbadel a c'halv ac'hanomp da zistreiñ davetañ hor c'halon ha lavaromp dezhañ:

R/- Hor renit war hoc'h hentoù, Aotrou.

- Aotrou Doue, mignon an dud, douet omp da vezañ pec'herion dre Adam hon tad, met hon adsavet hoc'h eus gant Jezus, an den nevez; hol lakit da vezañ heñvel outañ. R/

- Deskit dimp anavezout ho Mab en hor breudeur, deskit dimp degas lovenez d'ar reuzeudion. R/

- Roit dimp ar c'hras d'ober ar pezh a zo mat ha reizh hag ho klask a-greiz-kalon en hon oberoù. R/

- Pardonit hor mankoù a-enep da unanded ho familh: hol lakit da vezañ unanet a galon hag a spered. R/

Kempedenn Lun 1 Hon distroit war-zu ennoù, Aotrou Doue, c'hwi hor Salver, hag evit ma raio vad dimp labour ar C'horaiz, kelennit hor speredoù gant skiantoù an neñv. Dre Jezus Krist...

Lun 2 Doue, c'hwi hag hoc'h eus gourc'hemennet kastizañ ar c'horfoù evit yac'haat an eneoù, plijet ganec'h rañf dimp ar c'hras ma c'hellimp en em ziwall diouz an holl pec'hedoù, ha ma c'hellio hor c'halonoù mirout ar gourc'hemenoù hoc'h eus reet dimp dre garantez. Dre Jezus Krist...

Lun 3 Doue leun a drugarez, plijet ganec'h glanaat ha skozeñlañ hoc'h Iliz, hep pesuez, ha peogwir ne c'hell ket hepd'oc'h chom war an hent mat, renit anezhi dalc'hmat gant ho kras. Dre Jezus Krist...

Lun 4 Aotrou Doue, c'hwi hag a nevesa ar bed dre visterioù kaer-meurbet, grit eta, ni ho ped, ma tenno hoc'h Iliz ho mad eus ar pezh hoc'h eus renket eviti evit ar vuhez peurbadus, ha ma kavio ivez ar sikourioù ho deus ezhomm evit buhez an douar-mañ. Dre Jezus Krist...

Lun 5 Aotrou Doue, gant ho kras hep he far, e vezomp pinvidikaet gant bennozhioù a bep seurt, grit dimp, ni ho ped, tremen eus an traoù kozh d'an traoù nevez, ma vezimp lakaet war hent ar vuhez peurbadus. Dre Jezus Krist...

Lun 6 Ni ho ped, Aotrou Doue hollc'halloudek, peogwir ez omp prest da gouzhañ, ken simpl ha ken dinerzh evel ma'z omp, grit dre vertuz Pasion ho Mab unganet, ma frankaio warnomp. Eñ a vev hag a ren...

OFIS KREISTEIZ

Komz Doue Ia 58, 7
Rann da vara gant an hini en deus naon, degemer ar paour di'houder, ro dilhad d'an den divisk e-lec'h en em guzhat ouzh da nesañ.

V/- An Aotrou a zo leun a drugarez.
R/- Largetezus d'hon dasprenañ.

OFIS AN ABARDAEZ

Komz Doue Rm 12, 1-2
Hoc'h aspediñ a ran, breudeur, an anv trugarez Doue, d'en em ginnig hoc'h-unan da brofadenn vev, santel ha plijus da Zoue: sed ar servijerozh aperedel a die bezañ hoc'h hini. Ha n'it ket da gemer skouer war ar bed a-vremañ, met en em stummit on-dro dre neveziañ ho spered, evit anavezout petra eo youl Doue, kement a zo mat, kement a blij dezhañ, kement a zo parfet. a zo

Trugarez an Aotrou da viken a ganmeulin.
V/- A rumm da rumm e anv da viken a ganmeulin.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: An neb a vev hag a grañ ennon ne varvo ket da virviken
ome hor Salver.

(Sizhun Santel): Pa vin bet savet a-us d'an douar e sachin davedon
an holl dud.

Pedomp an Aotrou Krist en deus savet ar vadeziant evit ma
toupimp da vezañ krouadurion nevez, ha lavaromp dezhañ:

R/- Salvit ho Pobl, Aotrou.

- Aotrou Jezus, hor breur, fellet ez eus bet deoc'h trec'hiñ war
Satan a glaske ho tistreiñ diouzh ho Tad: n'hol lezit ket da selaeo
e gomzoù lubanus. R/
- Ho pet soñj eus hoc'h Iliz hoc'h eus roet eviti ho puhez; he san-
telait hag le glanait dre ar binijenn. R/
- An dud yaouank, grit dezho anavezout an hent o deus da heuliañ
evit ma respontañ gant kalon d'ho kalvadennoù. R/
- O'hwï hag hoc'h eus bet truez ouzh an holl glañfourion degaset
deoc'h, hol lakit da daol evezho evit reiñ dezho sikour. R/
- D'an holl Anaon, d'ar re n'o deus ket bet tu da ziskouez o c'heuz,
roit ar silvidigezh hag ar peoc'h. R/

Kempedenn ar beure

=====

M E U R Z H A R C ' H O R A I Z

=====

OFIS AR BEURE

Komz Doue J1 2, 12-13 Distroet davedon a greiz ho kalon, gant
yun ha deroù ha pinijenn. Rogit ho ka-
lonoù ha n'eo ket ho tilhad hag addeuit d'an Aotrou ho Toue, rak
truezus ha trugarezus ez eo, gorrek da gonnariñ ha pinvidik en ma-
delezh, ha keuz en devez d'an droug.
Pareit va ene, rak pec'het em eus enep deoc'h.
V/- Lavarot em eus: truez ouzhin, Aotrou, rak pec'het em eus...
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Lakit ho fiziañs en Aotrou ha bezit kalonek; kennerzhit ho
kalon ha kontit war an Aotrou.

(Sizhun Santel): Dre sentañ betek ar marv, Jezus Krist eo an Aotrou
evit gloar Doue an Tad.

Pedomp an Doue hollec'halloudek, en deus Jezus Krist desket
dimp gervel Tad ha lavaromp dezhañ:

R/- Hon Tad, ho pet truez ouzhimp.

- Doue a drugarez, pardonet hoc'h eus da Niniveiz p'o deus bet kouz
diwar gomzoù Yonas, ha bramañ hoc'h eus kaset dimp muioc'h eget
Yonas; grit ma teulo komz ho Mab da zigeriñ hor c'halonoù d'ar
binijenn. R/

- Grit dimp mirout e gomz en ur galon mat hag hael, ha dougen frouezh
padus. R/
- Grit ma servijo hol labour e-touez an dud d'o lakaat da zegemer
hadenn ho komz, ha da resev kemenn ar peoc'h. R/
- Anzav a reomp hon eus pec'het, Aotrou, pardonit hor mankoù dre ho
trugarez salvus. R/

Kempedenn Meurzh 1 Taolit ho sell, Aotrou Doue, war ho tie-
gezh ha roit ar c'hras d'hon ene da lu-
germiñ dirazoc'h gant ar c'hoant ac'hanoc'h, tra m'en em gas-
tiz dre reizhañ ezhommoù ar c'horf. Dre Jezus Krist...

Meurzh 2 Diwallit gant madelezh, ni ho ped Aotrou
Doue, hoc'h Iliz hep ehan, ha peogwir
ned eo an dud hopoc'h nemet sempladurozh, skoazellit ho Pobl
e pep amser d'en em virout diouzh an droug ha d'en em ren war
hent ar silvidigezh. Dre Jezus Krist...

Meurzh 3 Ni ho ped, Aotrou Doue, roit dimp ho
kras e pep amzer, ma vimp dalc'hmat
aketus d'ober ho servij santel ha ma veritimp kaout ho sikour
vadolozhus. Dre Jezus Krist...

Meurzh 4 Aotrou Doue, lakuit oberoù ha labour san-
tel ar c'horaiz da brientañ kalonoù ho
tud fidel, en doare ma vezint gouest da lidañ Mister Pask gant
eneoù e stad vat, ha ma c'hollint kanañ gloar deoc'h evit ho
silvidigezh. Dre Jezus Krist...

Meurzh 5 Roit dimp ar c'hras, ni ho ped, Aotrou
Doue, da chom fidel en ho servij, hervez
ho polontez, evit ma kresko e santelezh hag e niver ivez, pobl
ho servijerion. Dre Jezus Krist...

Meurzh 6 Doue hollec'halloudek ha peurbadel, roit
dimp ar c'hras da lidañ gant koment a
feiz hag a zevesion Misterion Pasion hor Salver ma veritimp
kaout diganeoc'h ar pardon eus hor pec'hedoù. Dre Jezus Krist..

OFIS KREISTEIZ

Komz Doue Yr 3, 25b Pec'het hon eus enep Doue, ni hag hon
tadoù, adalek hor yaouankiz betek an
deiz-a-hiziv, ha n'hon eus ket selaeuet mouezh an Aotrou hon Doue.
V/- Pareit va ene, Aotrou.
R/- Rak pec'het em eus enep deoc'h.

OFIS AN ABARDAEZ

Komz Doue Jk 2, 14. 17-18 Breudeur, da betra e talv d'un lavarout
/den
an deus ar feiz mar n'en deus ket an
oberoù? Ar feiz, mar ne ra ket an oberoù, ez eo marv emni hec'h-unan.
Diskouez din da feiz, pa ne rez ket an oberoù, ha me a ziskouezo dit
va feiz dre an oberoù.

Troit va c'halon war-zu ho testenioù, grit din bevañ hervez ho
komz.

V/- Dalc'hit d'ho promesa e-keñver ho servijer, grit din bevañ...
V/- Klod d'an Tad...

Meurzh - Merc'her ar C'horaiz

Kant. ar M.: Ar C'hrist, en e gorf, en deus douget hor pec'hedoù war ar groaz.

(Sizhun Santel): Doue n'en deus ket espermet e Vab e-unan, mete roet en deus d'ar marv evidomp-holl.

Pedomp an Aotrou Jezuz, en deus goulennet ganimp bailhañ ha pe-diañ, evit chom hep kouezhañ en temptadur, ha lavaromp deshañ:

R/- Ho pet truez ouzhimp, Aotrou.

- Aotrou Jezuz Krist, prometet hoc'h eus chom e-touez ar re a bed en hoc'h Anv; grit dimp unaniñ hor padenn gant hoc'h hini evit ma teuo ho Rouantelezh. R/
- Glanait eus ar pec'hed an Iliz oc'h ober pinienn, ha renit anezhi en esper ha galloud ar Spered Santel. R/
- Roit esper d'an dud klañv ha yac'hait anezho; lakit enomp ur galon evezhiok ouzh e ezhommoù. R/
- C'hwi hag a zo bet marvet evit adunvaniñ an holl dud dre wad ho kroaz, grit dimp bezañ oberourion ar peoc'h ha mibion da Zoue. R/
- C'hwi hag ez eus bet fellet deoc'h gouzañv ar marv evit m'hon devo ar vuhez, kemerit hon Anaon en ho klear. R/

=====

M E R C ' H E R A R C ' H O R A I Z

=====

OFIS AR BEURE

Komz Doue Adl 7, 6.8.9

Da zibabet en deus an Aotrou da Zoue evit kacout ur bobl dispar a-douez an holl bobloù a zo war an douar, Dre ma kare ac'hanoc'h, hag evit mirout al le en devoa touet d'hoc'h hendadoù e tomas an Aotrou ac'hanoc'h er-maez dre un dorn kreñv, a zasprenas ac'hanoc'h eus dorn Faraon, roue an Ejipt. Gouzout a rez ez eo an Aotrou da Zoue, hag ez eo un Doue fidel, a zaloc'h d'e emglev ha d'e vadelezh e-keñver ar re a gar anezhañ hag a vir e c'heure'h emennoc'h.

Emnoc'h emañ mammenn ar vuhez, en ho sklerijenn e welomp ar sklerijenn.

- V/- Aotrou, pegen prizius ho karantez, en ho sklerijenn...
- V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Diouzh va enebourion, Aotrou, e tieubit ac'hanon, diouzh an den a wall-nerzh e salvit ac'hanon.

(Sizhun Santel): Gant e wad e ro dimp ar C'hrist an daspren, ar pardon eus hor pec'hedoù, hervez pinvidigezh gloar Doue.

Pedomp Doue an Tad peurbadel a c'halv ac'hanomp da dreuzfurmif hor c'halonoù ha lavaromp deshañ:

R/- Keleennit dimp hoc'h hentoù, Aotrou.

- Doue hollc'halloudek, dre zour ar vadeziant hoc'h eus hon dieubet diouzh ar sklavelezh ha graet ganimp ur bobl nevez; hor mirithiziv a bep temptadur hag a bep pec'hed. R/
- Ra zeuio ho komz a vuhez d'hor magañ ha ma skoazello ac'hanomp war hent ho menez santel. R/

Merc'her ar C'horaiz

- Pellait hor c'hammedoù diouzh hent ar falskredennoù hag hor mirit a bep droukskouer. R/

- Deskit dimp herzel ouzh c'hoant ar pinvidigezhioù, ha lodennañ gant ar beorion. R/

Kempedenn Merc'her al ludu Setu ni, Aotrou Doue, o stagañ dre yuniok santel gant ar brezel a zle ober e-pad daou-ugent devezh armead ar gristenion, roit dimp ar c'hras eta, ni ho ped, da vezañ kreñv en engann hon eus d'ober ouzh gwallardoù an droukspered, ha da vezañ diwallet gant sikour ar vertuz a binijenn. Dre Jezuz Krist..

Merc'her 1 Taolit ur sell a garantez, ni ho ped, Aotrou Doue, war zevosion ho Pobl, ha d'ar re a zo o waskañ o c'horfoù dre an diouer a voued, roit ar c'hras ma vo nevosat o eneoù gant frouezh an oberou-mat. Dre Jezuz Krist..

Merc'her 2 Dalc'hit tud ho familh aketus bepred evit an oberou-mat, Aotrou Doue, hag en traoù eus ar bed-mañ konfortit anezho, gant trugarez, etrezek ar madoù eus an neñv. Dre Jezuz Krist..

Merc'her 3 Roit dimp ar c'hras, ni ho ped, Aotrou Doue, da denañ kentel eus lezennoc'h santel ar C'horaiz, ha da vagañ hon eneoù gant ho komzoù, evit ma c'hellimp, gant ar vertuz a binijenn, bezañ douget deoc'h a greiz hor c'halon, ha bezañ unanet bepred etrezomp er bedenn. Dre Jezuz Krist..

Merc'her 4 Aotrou Doue, dre ar binijenn, e roit d'an dud santel priz o meritoù ha d'ar bec'herion e roit ar pardon eus o fec'hedoù. Setu ni ouzh ho pediñ a galon izel, ho pet truez ouzhimp ha peogwir ec'h anzavomp ez omp kablus, plijet ganeoc'h pardonif dimp hor mankoù. Dre Jezuz Krist..

Merc'her 5 Doue leun a drugarez, e kalonoù ho pugalo bet santelaet gant ar binijenn, skuilhit ho sklerijenn ha peogwir e roit dezho ar c'hoant d'ho servijañ gant devosion, plijet ganeoc'h eta selaou o fedennoù gant madaelezh. Dre Jezuz Krist..

Merc'her 6 Aotrou Doue, fellet ez eus bet deoc'h e savfe ho Mab ouzh ar groaz dre garantez evidomp, evit hon tennañ eus galloud hon enebour, plijet ganeoc'h eta reiñ dimp-ni, ho servijerion, ar c'hras da gaout perzh e frouezh e adsav d'ar vuhez. Dre Jezuz Krist..

OFIS KREISTEIZ

Komz Doue Ez 18, 30-32

Kemmit ha distroet eus ho pec'hedoù, ma ne vo ken tro emnoc'h d'ober an droug.

En em zicubit eus ho pec'hedoù ha grit deoc'h ur galon nevez hag ur spered nevez. Perak klask mervel, tiagezh Israel? H'on ket plijet gant marv nep den, a lavar an Aotrou. En em gomit ha bevit.

V/- N'am dilezit ket, Aotrou.

R/- Va Doue, na chomit ket pell diouzhin.

OFIS AN ABARDAEZ

Komz Doue Fil 2, 12b. 15a

Labourit d'ho silvidigezh gant an ha spouron, rak Doue eo an hini a ra emnoc'h ar mennout hag an ober, hervez ma plij d'e drugarez. Grit pep tra

Merc'hor - Yaou ar C'horreiz

hep krouzal na tabutal evit dont da vezañ direbech ha dinamm, evel bugale Doue didamall.

Aotrou, va norzh, buan d'am sikour!
V/- Na vezit ketpell, tost eo an enkrez, buan d'am sikour!
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar H.: N'en deus ket Doue espermet e Vab, met o roet en deus evidomp holl: gantañ eo bet roet dimp pep tra.

(Sizhun Santel): Mab an Den n'eo ket deuet evit bout servijet, met evit servijañ, ha reiñ e vuhez en daspren evit an dud.

Pedomp Doue an Tad peurbadel a c'halv ac'hanomp da drouz-furmif hor c'halon, ha lavaromp dezhañ:

R/- Grit lugermif warnomp ho trugarez.

- C'hwi, Aotrou, hor sklerijonn, hoc'h eus kelennet ho Pobl dre ar Brofedod ha lavaret dimp pep komz en ho Mab, grit na zistroio ket goull ho komz, met ma tougo frouc'h ennomp. R/

- D'an dud a gasit evit diskouez d'ar bed testoni Jezuz, roit ur spered a brofed. R/

- Dieubit an dud wasket eus o sklavelezh direizh hag o gwaskerion eus sklavelezh ar pec'hed. R/

- Roit dimp ar pardon eus hor pec'hedoù, ma vimp adunvanet ganeoc'h ha gant hor breudeur. R/

- An holl dud hoc'h eus maget er bed-mañ gant korf ha gwad Jezuz, degemerit anezho er banvez peurbadel. R/

=====
Y A O U A R C ' H O R A I Z
=====

OFIS AR BEURE

Komz Doue 1 R 8, 51-53a Ho Pobl hag hoc'h herezh ez omp, bet tennet ganeoc'h eus an Ejipt, eus Kreiz ar form houarn. Hag e vez ho taoulagad digor ouzh aspedenn ho servijer hag aspedenn ho pobl Israel, o selacou ouzhimp a-greann pa bedomp ac'hanoc'h. Rak c'hwi hoc'h eus hon dibabet evidoc'h da herezh adouez holl bobloù an douar.

Va dasprenit, Aotrou, ho pet truez ouzhin.
V/- Va zroad en em zalc'hen hent reizh, ho pet truez ouzhin.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Kaset en deus Doue e Vab er bed, n'eo ket evit barn ar bed, met evit ma vo salvet ar bed gantañ.

(Sizhun Santel): C'hoant bras am eus bet da zebrif ar Pask-mañ ganeoc'h, kent din gouzav.

Pedomp Doue an Tad peurbadel a c'halv ac'hanomp da drouz-furmif hor c'halon, ha lavaromp dezhañ:

R/- Roit dimp, Aotrou, ur galon nevez.

- Doue bepred fidel, dre ar vadesiant hoc'h eus graet dimp antren en emglev nevez, na lezit ket hor c'halon da vont hiziv pell diouzhoc'h. R/

Yaou ar C'horreiz

- Grit dimp bezañ aketus d'ho kourc'hemannoù ha kelennit dimp kement-nadurioù an Emglev. R/

- C'hwi hag hoc'h eus salvet ho Pobl pec'her dre bedenn Voizez, dre hor pedenn disammit ac'hanomp eus hor mankoù. R/

- Ra vimp hiziv laouen o servijañ hor breudeur, ha ra vimp evezhiek ouzh ar re bacur. R/

Kempedenn (Goude merc'her al ludu) Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, bouc'hañ c'hwi hoc'h-unan, dre ho kras, hon oberoù, hag hor sikour, gant karantez, d'eo c'has da bonn, en doare ma vict c'hwi ar penn-kentañ bepred hag ar penn-diwezhañ eus kement tra a reomp. Dre Jezuz Krist...

Yaou 1 Roit dimp ar c'hvas, ni ho ped, Aotrou Doue, da soñjal dalc'hmat ha da ober gant brasoc'h gred ar pezh a zo reizh ha santel, evit ma c'hellimp, ni ha ne domp netra hepdoc'h, ren hor vuhez evel ma plij deoc'h. Dre Jezuz Krist...

Yaou 2 Doue, c'hwi hag a gar ar c'hlanded hag a rent anezhi en-dro, renit war-zu annoc'h kalonoc'h ho servijerion, evit ma vezint, goude bezañ bet antanet gant nerzh ho Spered, dirall er foiz ha gred-evit an oberoù-mat. Dre Jezuz Krist...

Yaou 3 O Doue leun a c'hleor ha bras-meurbet, selaouit hor pedenn: seul-vui ma tosta gouel hor silvidigezh, grit ma vimp seul c'hredusoc'h d'en em aozañ evit lidañ mister Pask. Dre Jezuz Krist...

Yaou 4 A-greiz-kalon e savomp hor pedenn war-zu annoc'h, Aotrou Doue: ni ho ped, roit dimp-ni, ho servijerion, ar c'hvas da reizhañ hor vuhez dre ar binijenn ha da vezañ kelennet gant an oberoù-mat, ma vimp fidel da heuliañ ho kourc'hemannoù evit en em gaout direbech a-benn gouelioù-Pask. Dre Jezuz Krist...

Yaou 5 Selaouit, Aotrou Doue, ar pedennoù a ra deoc'h ho tud a-greiz o c'halon: diwallit gant karantez ar re a laka o fiziañs en ho trugarez, gwalc'hit anezho diouzh stlabez o pec'hedoù, ma t'ac'hint da ren ur vuhez santel ha ma vint un deiz heritourion d'ho promesoù. Dre J.K...

Yaou 6 Doue hollc'halloudek, c'hwi hag hoc'h eus kensakret ho Mab unganet dre ar Spered Santel, ha diazezet anezhañ evel Krist hag Aotrou, peogwir hoc'h eus hor c'hensakret emañ, grit, ni ho ped, ma vimp evit ar bed teston un Aviel a silvidigezh. Dre Jezuz Krist...

OFIS KREISTEIZ

Komz Doue Iz 55, 6-7 Klaskit an Aotrou, tra ma c'heller e gavout; pedit anezhañ tra m'emañ tost. Ra zilezo ar fallakr e hent hag an den disleal e soñjoù. Ra zistroio da Zoue en devo outañ truez hag a bardon gant largentez.

V/- An Aotrou a zo leun a dmgaraz.
R/- Largentezus d'hon dasprenañ.

OFIS AN ABARDAEZ

Komz Doue Jk 4, 7-8. 10 Plegit eta da Zoue, enebit ouzh an diaoul hag e tec'ho diwar ho tro. Testait ouzh

Yaou - Gwener ar C'horaiz

Doue hag eñ a dostaio ouzhoc'h. Gwalc'hit ho taouarn, pec'herion, naetai ho kalonoù, tud daouek. En em izelait dirak an Aotrou hag eñ hoc'h uhelaio.

Pareit va ene, rak pec'het em eus enep deoc'h.

V/- Lavaret em eus: ho pet truz ouzhin, Aotrou, rak pec'het em eus...

V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: En c'halon em eus lavaret deoc'h: ho tremm a glaskan, ho tremm, Aotrou, eo a glaskan.

Pedomp an Aotrou Krist en deus savet ar vadeziant evit ma teuimp da vezañ krouadurion nevez, ha lavaromp dezhañ:

R/- Bodit ho Pobl, Aotrou.

- Jezuz Salver, fellet ez eus bet deoc'h dastum bugale Jeruzalem evel ma tastum ar yar hoc'h ermed bihan, deskit dimp anavezout amzer ho gweladenn. R/

- Sellit gant karantez ouzh ho katekizidi hoc'h eus gweladennet, bodit anezho eus pennoù pellañ ar bed. R/

- C'hwi hag a oe kaset d'ar gouelec'h gant ar Spered evit trec'hifi war Satan, roit dimp an hevelep Spered ma tistaolo dimp hor pe-c'hedoù. R/

- Ho pet soñj eus ar re a zo pell diouzh o bro pe diouzh o ziegezh, roit dezho breudeur degemerus. R/

- En ho Rouantelezh ma sec'hit omni an holl zaeroù, bodit an dud o deus klasket ac'hanoc'h war an douar. R/

=====
G W E N E R A R C ' H O R A I Z
=====

OPIS AR BEURE

Komz Doue Iz 53, 11b-12

Dre m'en deus gouzavet, ar Just, va servijer, a reizho an engroezioù, en em samme eus o fec'hedoù. Setu porak e roin dezhañ an engroezioù en herezh; ar re c'halloudus a vo e lod a breizh, rak en em zibourc'het en deus e-unan, betek ar marv, ha kontet eo bet e-touez ar bec'herion, tra ma touge pec'het an engroezioù ha ma pede evit ar bec'herion.

Hon dasprenet hoc'h eus, Aotrou, gant priz ho kwad.

V/- Tud a bep gouenn, a bep yezh, a bep pobl, a bep broad, gant priz ho kwad.

V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Dasprenet ez omp bet gant ur gwad prizius, ovel gwad un oan direbec'h ha dinamm, ar C'hris.

Pedomp gant feiz an Aotrou Jezuz Krist, ha lavaromp dezhañ a galon unvan:

R/- Dre ho marv hor salvit.

- Aotrou Jezuz, en ur astenn ho taouarn da eur ho Pasion, hoc'h eus skuilhet ho kras war ar bed; grit dimp bevañ dindan lusk ar Spered rosevet gant dour ar vadeziant. R/

- Sklaerait hor c'halonoù dre gomzoù hoc'h Aviel, rak spered ha buhez ez int. R/

Gwener ar C'horaiz

- Ra vimp unanet gant ho Pasion dre ar sakrifis hag an emaberzh, ha kaset ganto da c'Hoar hoc'h adsav. R/

- Grit dimp kemer preder ouzh ar beorion, evit ma vo anatho karantez en ho tiskibled. R/

Kempedenn Goude merc'her al ludu Grit ur sell a vadelezh, ni ho ped, Aotrou Doue, war an oberoù a binijenn nevez-digoret ganimp, evit ma c'hellimp ober anezho neket hepken a-ziavaez gant hor c'horfoù, met ivez gant kalonoù leal. Dre Jezuz Krist...

Gwener 1 Sikourit ho tud fidel, ni ho ped, Aotrou Doue, d'en em lakaat e stad vat a-benn lidañ mister Pask, en doare ma talvezo ar binijenn-gorf digoret gant lid-bras, d'ober d'an holl dougen frouezh a santelezh. Dre J.K.

Gwener 2 Roit dimp ar c'hras, ni ho ped, Aotrou Doue hollo'halloudek, da vezañ leun a c'hred santel evit en em c'hlanat dre ar binijenn, evit ma vo pur ha divlam hor c'halonoù a-benn ar gouelioù a zo e testaat. Dre Jezuz K.

Gwener 3 Skuilhit ho kras en hor c'halonoù, ni ho ped, Doue a vadelezh, evit ma c'hellimp herzel ouzh c'hoantoù hor c'horf ha dre-se klevout gwelloc'h ho komzoù. Dre Jezuz Krist...

Gwener 4 Aotrou Doue, da harpañ hor sempladurezh hoc'h eus aozet sikourioù, roit dimp ar c'hras da anzav laouen an efed-vat eus ar silvidigezh a roit dimp, ha da vezañ troet d'hen diskouez ivez dre oberoù ur vuhez fidel. Dre Jezuz Krist...

Gwener 5 Pardonit, ni ho ped, Aotrou Doue, o gwall-oberoù d'ho Pobl, ha torrit en ho madelezh liammoù ar pec'hedoù hon eus graet dre sempladurezh. Dre J. K...

OPIS KREISTEIZ

Komz Doue Jk 1, 27

Ar relijion bur ha dinamm dirak Doue an Tad eo homañ: reiñ sikour d'an emzivaded ha d'an intañvezed en o reizvedigezh, hag en em virout digailhar diouzh lastez ar bed-mañ.

V/- Pareit va ene, Aotrou.

R/- Rak pec'het em eus enep deoc'h.

OPIS AN ABARDAEZ

Komz Doue Jk 5, 16 - 19. 20

Kofesait eta ho pec'hedoù an eil d'egile evit bezañ yac'haet. Galloudus bras eo pedenn virvidik an den reizh. Breudeur, mar deu unan bennak en ho touez da dec'hout diouzh ar wirionez, ha mar c'hoarvez d'un all en degas en-dro dezhi, ra c'houvezo penaos an hini a zistro ur pec'her diwar e zihenchedenn, a salvo ivez e ene e-unan eus ar marv hag en devo ar pardon eus ur benn pec'hedoù.

Dre hoc'h Anv, Aotrou, va salvit.

V/- En ho madelezh, va dieubit, va salvit.

V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: ^{Doue} Jezuz en deus karet ac'hanomp: kaset en deus dimp e Vab evel Olevad aberzhet evit hor pec'hedoù.

Gwener - Sadorn ar C'horaiz

Pedomp an Doue hollc'halloudek en deus Jezuz desket dimp gervel Tad ha lavaromp dezhañ:

R/- Ho pet truez ouzh ho Pobl, Aotrou.

- Doue a silvidigezh, c'hwi hag hoc'h eus yac'haet an Hebreed pa sellent ouzh ar sarpann arem, deskit dimp anavezout hor Salver en ho Mab kroc'zstaget. R/
- C'hwi hag hoc'h eus roet ho Mab evit bodañ en unaniezh ho pugale dispartiet a bep tu, selaout hor galvadenn evit an dud n'o deus ket c'hoazh hoc'h anavezet. R/
- Deskit dimp talvoudegezh pep krouadur ha deskit dimp euzont a c'hloar. R/
- Deskit dimp labourat evit diorreadur an holl bobloù er wirionez, er reizhder hag er peoc'h. R/
- D'an holl dud o deus bet truez eus o breudeur hag o deus kinniget dezho ur werennad dour, roit gopr ar garantez peurbadel. R/

=====

== S A D O R N A R C ' H O R A I Z ==

=====

OFIS AR BEURE

Komz Doue Iz 1, 16-18

En em walc'hit hag en em naetait, lemit ar fallentez diouzh hoc'h oberoù. Dirak va daoulaged paouezit d'ober an droug. Deskit ober ar mad. Pleus-trit ar reizhder, skoazellit an dud gwasket, grit justis d'an emzivad, bezit advakaded an intañvezed... Deuit eta da vrentant ganin, eme an Aotrou. Nag o ve ho pec'hedoù evel skarleg, evel erc'h e teuint gwenn; mar dint ruz-mouk, evel gloan e teuint.

Pareit va ene, rak pec'het em eus enep deoc'h.
V/- Lavaret em eus: ho pet truez ouzhin, rak pec'het em eus...
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Roet eo bet ar C'hrist evit bodañ en unaniezh bugale Doue dispartiet.

Pedomp gant an Aotrou Jezuz Krist, ha lavaromp dezhañ a galon un-van:

R/- Aotrou, salvit ar re ho ped.

- Aotrou Jezuz, diskleriet hoc'h eus evurus ar re a selaou evel Mari ar Gouz hag a vir anezhi: deskit dimp mirout ar Gouz-se gant lealded en hor c'halonou. R/
- Roit d'hoc'h Iliz ar c'hras da deurel evezh ouzh ho kemennadurioù, evit o c'has d'ar bed gant fealded. R/
- Pardonit dimp bezañ tremenet hep hoc'h anavezout er beorion hag er reuzeudion, ha bezañ ho tisprizet en hor breudeur. R/
- Deskit dimp labourat evit eurvad hor breudeur en ur glask diazezañ ar bed horvoz soñjoù ho karantez. R/

Sadorn ar C'horaiz

Kempodenn Goude merc'her al ludu

Doue hollc'halloudek ha peurbadel, sellit a-druez ouzh hor sepladurezh hag astennit ho torn galloudus evit hon diwall. Dre Jezuz K...

Sadorn 1

Troit hor c'halonou war-zu ennoc'h, Tad peurbadel, ma klaskimp dalc'hmat an dra nemetañ a zo ezhomm, ma 'n em roimp d'an oberoù a garantez ha ma vimp evel-se, gant ho kras, aketus d'ho servijañ. Dre J. K...

Sadorn 2

Aotrou Doue, e-keit ha m'emaomp c'hoazh war an douar e roit dimp sikourioù gloriuz d'hol lakaat dija lod e madoù an neñvoù, selaout eta hor pedenn: plijet ganeoc'h hor ren e-pad ar vuhez-mañ, evit hor c'has d'ar sklerijenn gaer e-lec'h m'emaoc'h-c'hwi hoc'h-unan. Dre Jezuz Krist...

Sadorn 3

E-kreiz al levenez hor bez bep bloaz o heuliañ lid santel ar C'horaiz, ni ho ped, Aotrou Doue, da reiñ dimp ar c'hras d'en em stagañ ouzh misterioù Pask, en doare ma c'hellimp kaout ar joa da santout an efed leun anezho. Dre Jezuz Krist...

Sadorn 4

Plijet ganeoc'h, Doue leun a drugarez, ren hoc'h-unan hor c'halonou, rak hep-dec'h ne c'hellomp ket plijout deoc'h. Dre Jezuz Krist...

Sadorn 5

Aotrou Doue, daoust ma roit e pep amzer grasou a silvidigezh d'an dud, an amzer-mañ koulskoude e laouenit ho Pobl gant ur c'hras fonnusoc'h c'hoazh, taolit eta ur sell a druez war ar re hoc'h eus dibabet, en doare ma vo ho karantez o tiwall hag o skoazellañ kouls ar re a zo da vezañ adganet dre ar vadeziant evel ar re vadezet o-unan. Dre Jezuz Krist...

OFIS KREISTEIZ

Komz Doue Disk 3, 19-20

Mo, ar re a garan, o zamall hag o c'has-tizañ a ren. Striv eta ha distro a galon! Setu m'emaon ouzh an nor ha maskoan. Haz eus unan bennak o klevout va mouezh, hag o tigeriñ din e zor, eo'h antrein d'e gaout hag e koanin gantañ hag eñ ganin.

V/- N'am dilezit biken, Aotrou.
R/- Va Doue, na vezit ket pell diouzhin.

OFIS AN ABARDAEZ

(P. 148)

oooooooo
oooooo
oooooo
oooooo
oooooo

oooooooooooooooooooooooooooooooooooo
TRIDUUM PASK
oooooooooooooooooooooooooooooooooooo

=====
YAOU GAMBLIT
=====

=====
OFIS AN ABARDAEZ
=====

Meulgan

Pa zeu an deiz d'astenn e zivrac'h,
Ha da liammañ ar marv war ar groaz,
Neuze Mab an den, e-kerz ur pred,
A lak e gorf e dorn ar pec'her. (bis)

"Setu va C'horf, kemerit, debrit,
Setu va Gwad, kemerit, ovit,
Evit ma vo kounaet va maro
Grit kement-mañ betek va distro." (bis)

Nebaon, na sec'hed, na naon,
Rak Korf ar C'hrist a zo hor banvez;
Pa zalc'homp e Gibad 'n hon daouarn,
Ez eus ganti blaz ar bed nevez. (bis)

Pred Pask m'eo debret ennañ Doue,
Sin a garantez, a unanded,
Ma kav ennañ an dud nevezet
Madoù ar Rouantelezh da zont. (bis)

Dre Jezuz Krist, Beleg-meur pourvat,
Er Spered Glan a zegas ar peoc'h,
'Vit kement a c'hras, a vadelezh,
Ho kenmaulomp, o Tad an nefoù. (bis)

Komz Doue He 13, 12-15 En abeg da se, Jezuz ivez, evit santelaat
ar bobl gant e wad e-unan, en deus gou-
zanvet a-ziavaez eus der Kêr. Evit mont d'e gaout, doomp eta e-maez
ar c'hamp, en ur zougen warnomp e zismegafis. Rak n'hon eus kot amañ
ur Gêr da badout, met klask a reomp an hini da zont. Drezañ eta e
pop amzer, kinnigomp da Zoue ur sakrifis a veuleudi, da lavarout eo
frouezh muzelloù o vouliñ e Anv.

Evidomp-ni ar C'hrist a zo en em c'hraet sentus.

Kant. ar W.: An Aotrou Jezuz a gemeras bara, e vonnigas, e rannas hag e
roas d'e ziskibled.

Kempedenn Evit ho kloar, Aotrou, ha silvidigezh an
holl dud, hoc'h eus graet eus ar C'hrist
ar Beleg-meur ha peurbadel; gant priz e wad hor pobl a zo deoc'h
hag a lid en deiz-mañ an eñvoradur anezhañ: roit dimp ar c'hras
da zegemer pinvidigezhioù ar vuhez deuet eus e groaz hag e ad-
sav. Eñ a ren hag a vov...

=====
GWEENER AR GROAZ
=====

=====
OFIS AR BEURE
=====

S. 94 R/- Oan Doue en em aberzh evidomp: deuit, houliomp anezhañ war
Hent ar Groaz.

Gwoner ar Groaz

Meulgan

Koad entanet, hodenn gwrezus,
n'eus tamm ludu,
Kroaz m'eo staget outi ar Mab
pa zeu an eur,
Doue a gomz drezoc'h hag e tougit
priz an daspren.
Dimp-ni e roit muzul e garantez
o tiskouez 'n e gorf ar gouli
ma lavar dimp
pe anv en deus.

R/- Pa zeuic-efi da vam ar bed,
ra vo Doue trugarezus!

Koad 'lec'h m'hell pep hini sellout
'n e zienez,
Ar Mab roet dimp gant Doue
leun a draez;
'Vit ar pardon e sachit davedoc'h
ar bed a-bezh;
A bep pec'hed 'roit disamm ha pare,
Skourmig bev a ro ar vuhez
d'an hini 'wel
kalon digor. R/

Koad burzhudus ma ver dioutañ
gwad hon daspren,
Kroaz 'lec'h m'eo paket gant an Oan
al leon kriz,
Evel ur sin a booc'h ez oc'h savet
'vit ar pec'her;
E-kreiz an dour e freuzit hor sklavelezh,
O tigeriñ dimp an tremen
daveit sekred
Doue Salver. R/

S. 50 Ant.: Doue n'en deus ket espernet e Vab unganet, met hen roet en
deus evidomp holl.

Kant. Hk 3, 2-4. 13-19: En ho konnar, Aotrou, ho pet soñj da gaout truez. (P. 47)
S. 147 Ant.: Ho pet soñj ac'hanon, Aotrou, pa zeuet en ho Rouantelezh.

Komz Doue Iz 53, 4-5 Her poanioù eo a zouge, gant hor gloazioù
eo e oa sammet. Ha ni'istime anezhañ evel
tizhet, skoet gant Doue, ur paour-kaezh. Met eñ a oa glozet en abeg
d'hor mankoù, brevet evit hor pec'hedoù, an dell-gastiz da baeañ evi-
domp a voe war e gent, ha dre e c'houlioù ez omp bet yac'haet.

Evidomp-ni, ar C'hrist a zo 'n em c'hraet sentus betek ar
marv war ar Groaz.

Kant. Zak.: Ur skrid a lakjont a-us d'e benn ha warnañ an abeg eus e
gondaonidigezh: Jezuz a Nazared, rous ar Yuzevion.

Breudeur, aspedomp hor Redemptor a c'houzañvas ar Basion, a voe sebeliet
hag a adsavas a-douez ar re varv, ha lavaromp dezhañ:

R/- O Krist, hoc'h azouliñ a reomp.

- Aotrou, hor Mestr, en em c'hraet sentus betek ar marv, deskit dimp
ober bepred bolontez ho Tad. R/

- C'hwi, hor buhez, o vorvel war ar groaz hoc'h eus distrujet ar marv
ha galloudoù an Ifern: grit dimp kaout perzh en ho marv hag en hoc'h
adsav er c'hloar. R/

Gwener ar Groaz

- C'hwi, hor Roue, disprizet gant an dud, dism@gañset evel ur preñv, kelennit dimp an izelegezh a salv. R/
- C'hwi, hor Silvidigezh, hoc'h eus roet ho puhez dre garantez evit ho proudeur: deskit dimp en em garout an eil egile gant an hovelepe karantez. R/
- C'hwi, hor Salver, gant ho taouarn astennet war ar Groaz e sachit davedoc'h an holl gantvedoù: bedit en ho Rouantelezh holl vugale Doue dispartiet. R/

Kompedonn

Taolit ho sell, ni ho ped, war ar familh a zo deoc'h: eviti Jezuz Krist hon Aotrou n'en deus ket nac'het en em lakaat etre daouarn an dud fallakr ha gouzañv boureviadur ar Groaz. Eñ a ren hag a vev...

OPIS AL LENNADENNOU

Meulgan

Koad entanet, bodennwrezus,
n'eus tamm ludu,
Kroaz m'eo bet staget outi ar Mab
pa zeu an eur,
Doue a gomz drezoñ'h hag e tougit
priz an daspren;
Dimp-ni e roit muzul e garantez
o tiskouez 'n e gorf ar gouli
ma lavar dimp
pe anv en deus.

R/- Pa zeudo-efi da varn ar bed,
ra vo Doue trugarezus!

Koad 'lec'h m'eo lonket an Ifern
'n e dreo'hadenn,
Kroaz hag a adsav leum a c'hloar
ar Mab kasaet,
Gwezenn a vuhez hag a frouz binin
ar frouzheñn fall;
Ho kwad-Doue, war ar c'halvar 'ra azvif
a gutuilhomp
evit hor Peoc'h. R/

Koad 'lec'h ma varv 'r c'hentañ-ganet
e-kreiz ar sperm,
Kroaz 'lec'h m'eo muntrad ar beleg
'vit ar pec'hed,
C'hwi 'zo ar maen 'lec'h ma tiskuzh e dal
ar Mab-kaset:
War hoc'h noter eo peure'hraet ar volegiezh
Pa ziston ar gunenn-cured
a ro dezhañ
ar broadoù. R/

S. 2 Ant.: En em sevel a ra rouaned an douar a-enep Doue hag e Crist.

S. 21 - : Toullañ a reont va daouarn ha va zreid; gallout a ran kontañ va holl eskorn.

S. 37 - : Va mignoned, na va zud-kar, ne dostaont ket.

V/- Komzeñ e vez ganin ur yezh a c'hevier.
R/- Komzoù a gasoni a zo en-dro din.

X ar frouzheñn kerz gant han Tad

Gwener ar Groaz

Lennadenn Ho 9,11-28

Pa vo dilamet diganeoc'h ar Fried, an deizioh-se e ymfot.
R/- Met ho kañvoù a droio en levenez.
Pa vezo kañv ha daeroù ganeoc'h, ar bed a vo laouen. R/

Kompedonn (P. 166)

OPIS KRIBISTEIZ

- S. 39 Ant.: Ar bed a zle gouzout e karan an Tad.
- S. 53 - : Deoc'h e profin ur sakrifis a drugarez.
- S. 87 - : N'em eus keneil obet nemet an deñvalijenn.

Komz Doue 1 P 2, 21-24

Ar C'hrist en deus gouzañvet evidoc'h ha lozet ganeoc'h ur skouer evit na kerzhfet war e roudoù: eñ n'en deus graet pec'hed ebet, n'eus bet gao ebet en e c'halvar; pa veze kunujennet, ne rente kunujenn da zen; pa c'houzañve poan, ne c'hourrouze ket, met en em lakaat a rae etre daouarn an Hini a varn gant reizhder; eñ en deus douget hor pec'hedoù en e gorf war ar c'head evit hon lakaat da varval d'hor pec'hedoù ha da vevañ e reizhder; gant e c'houlioù ez omp bet yac'haet.

V/- Hoc'h azeulifiñ a reomp, o Krist, hag ho pennigañ.
R/- Dasprenet hoc'h eus ar bed gant ho kroaz.

OPIS AN ABARDAEZ

Meulgan

R/- Aotrou Jezuz, hon Redemptor,
War hon daoulin ni hoc'h ador,
Rak dre ho kroaz santel-meurbet
Hoc'h eus dasprenet an hollved.

- | | |
|--|--|
| 1 - Evel ho poa en lavaret,
'Us d'an douar c'hwi 'zo savet,
Evit sachañ betek ennoc'h
Kement 'zo bet krouet ganeoc'h. | 4 - O Salver mat, Salver ar bed,
Horsalvit diouzharvar ar pec'hed:
Dre ho Pasion hag ho Kroaz,
Hor mirit bepred en ho kras. |
| 2 - Me 'wel ho tivroc'h astennet
Hag ho kostez frank-digoret,
Evit hor c'houviañ da vont
Da repuiñ en ho kalon. | 5 - Roit din, Jezuz, en ho truez,
Anacout gwalloc'h ho karantez,
C'hwi hag hoc'h eus 'vidomp douget
E tourmant ho korf hor pec'hed. |
| 3 - Leun a geuz 'vel ar publikan,
War boull va c'halon e skoan:
Plijet ganeoc'h, o va Doue,
Pardonifiñ bremañ d'am ene. | 6 - Ni hoc'h asped, Tad peurbadel,
Dre Jezuz Krist, ho Mab santel,
Pa 'z eo drezañ, drezañ hepken,
E selaouit pedenn Mab-den. Amen. |

S. 115 Ant.: Mar ne c'hell ket ar c'haliriad-mañ tremen hep bezañ evet ganin, ra vo graet ho polontez.

S. 142 - : Sec'hed am eus ac'hano'c'h; respontit din; na zistroit ket ho tremm.

Kant. Fil 2, 6-11 : Mab an den a dle bezañ savet. (P. 125)

Komz Doue Iz 53, 6-7

Holl e cemp evel deñved dianket, pep hini gant e hent. Met Doue en deus diskarget warmañ hor pec'hedoù dimp-ni holl. Gwallgaset e vos hag en e bonioù ne zigoras ket e c'henou. Evel un oan kaset d'ar c'higer, evel un dañvad dirak an touzer e tave.

Evidomp-ni ar C'hrist a zo 'n em c'hraet sentus betek ar marv, hag ar marv war ar Groaz.

Kant. ar W.: Goude bezañ kemeret ar gwinegr, Jezuz a lavaras: peurechu eo! Hag e vozañ soublet e benn e rentas e spored.

Broudeur, aspedomp hor Redemtor... (P. 165)

Kempedenn (P. 166)

SADORN FASK

OFIS AL LENNADENNOU

Meulgan

Koad entanet... (P. 166)

pe:

- 1 - Banniel ar Roue a lugern, Ar Groaz m'eo bet marvet warni... 4 - O gwezenn santel ar vuhez, A sked ruziet gant gwad Jezuz...

S. 4 Ant.: Asur en amroan da gousket. S. 15 - : Va c'horf a ziskuih gant fiziañs. S. 23 - : O porzhioù kozh, digorit ho torojoh, maz antreo Roue ar C'hloar!

V/- Savit, Aotrou, difennit ho kaoz. R/- Ra zeuio ho Komz d'ober din bevañ.

Lennadenn He 4, 1-16

Dre-holl e Klevan an droukkomz, spont a bep tu. Aotrou, chomit ganin evit va difenn. Va mignoned o-unan a c'hortoz va diskar, va c'holl a glaskont. R/- Aotrou...

Kempedenn

Doue holloc'halloudek, tra 'z enoromp mister sebeliadur ho Mab, ni ho ped, hol lakit da brientiñ ha da lidañ gloar e adsav d'ar vuhez. Eñ a ren hag a rev...

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- Mestr ar vuhez, kentañ-ganet a-douez ar re varv, deuit, azeulomp anezhañ.

Meulgan

Koad entanet... (P. 166)

pe:

- 1 - Goude kas da benn an amzer En doa da chom en hon touez, A youl e galon hor Salver... 4 - Gwezenn uhel, pleg da vrankoù Evit distegnañ d'e gorf... 7 - Doue peurlivret gant ar gwad A skuilh warnout korf Jezuz.

S. 63 Ant.: Sellit, an holl bobloù, ha gwelit va glac'har Kant. Iz 38, 10-20: En tu-hont d'am dienez, grit din bevañ, Aotrou. (P. 37) S. 150 Ant.: Marv e oan ha setu me bev evit ar c'hantvedoù.

Komz Doue Iz 65, 1-3' Lavaret em eus: ya, setu me amañ! d'ur bobl na bede ket em anv. Astennet em eus va douarn da dud disensus hag a gerzhe war un hent na oa ket mat, war-lerc'h o soñjoù, tud hag a hegase ac'hamon dalc'hmat.

Evidomp-ni ar C'hrist a zo 'n em c'hraet sentus betek ar marv, hag ar marv war ar groaz. Setu perak Doue en deus uhelsavet anezhañ ha roet dezhañ an Anv a zo dreist da bep anv.

Kant. Zak.: Ar merc'hed aezet e-kichen ar bez a hirvoude hag a ouele d'an Aotrou.

Broudeur, aspedomp hor Redemtor a c'houzañvas ar Basion, o'oe sebeliet hag a adsavas a-douez ar re varv, ha lavaromp dezhañ:

R/- O Krist, hoc'h azeuliñ a reomp.

- O Krist Salver, ho Mamm ankeniet a oa ouzh troad ar Groaz hag e-tal ho pezh, grit dimp kemer perzh en ho Pasion pa vezomp en enkreiz. R/ - O Krist Salver, evel ur winizhenn skoet an douar hoc'h eus roet froushenn ar vuhez douzel; grit dimp mervel d'ar pec'hed evit bevañ 'vit Doue. R/ - O Krist, Adam nevez, diskennet oc'h bet e bro an Ankoù evit dieubiñ an dud just dalc'het eno; grit d'ho mouezh bout klevet gant ar re a zo marv gant ar pec'hed, evit ma vevint. R/ - O Krist, Mab an Doue bev, dre ar vadeziant ez omp bet sebeliet ganeoc'h er marv; hor c'hevredit ouzh hoc'h adsav d'ar vuhez evit ma kerzhimp en ur vuhez nevez. R/

Kempedenn

Doue holloc'halloudek ha peurbadel, ho Mab unganet a zo diskennet betek donderioù an douar hag adsavet alese er c'hloar; roit eta, ni ho ped, d'ho tud fidel, sebeliet gantañ er vadeziant, ar c'hras, dre e adsav, da dizhout ar vuhez peurbadus. Eñ a ren...

S. 26 Ant.: Sur on: gwelout a rin madelezh an Aotrou e douar ar re vev.
 S. 29 - : Aotrou, va Doue, va adsevel a rit.
 S. 75 - : Brevet en deus armoù ar marv.

Komz Doue 1 Yn 2, 8-10
 O vezañ maz a kuit an deñvalijenn ha
 m'emañ dija ar sklerijenn wirion o sevel,
 an neb a lavar bezañ er sklerijenn hag a gasa e vreur, a zo c'hoazh
 on deñvalijenn. An neb a gar e vreur a chom er sklerijenn ha n'eus
 emañ abeg ebet da gouzhañ.

V/- Aotrou, va zennet hoc'h eus eus an islonk.
 R/- Graet hoc'h eus din advefañ paz aen d'ar marv.

OPIS AN ABARDAEZ

Meulgan

- 1 - Peogwir emañ ganimp
 Tra ma pad ar rumm-mañ,
 Na c'hedomp ket fin an deizioù
 'Vit e gavout...
 Lagad digor,
 Klaskomp e roudenn hag e zremm,
 Diguzhomp anezhañ kuzhet
 E-kreiz ar bed evel un tan.
- 2 - Peogwir emañ ganimp
 'Vit an amzer-griz-mañ,
 N'huvreomp ket emañ dre-holl
 Nemet er marv...
 Kerzhomp a-diz
 Troomp outañ hor pasianted,
 Deomp davet an den a bean
 Hag a ra dimp sin war ar groaz.
- 3 - Peogwir emañ ganimp
 E deizioù hor gwander,
 N'esperomp ket derec'hel war-sav
 Hop en gervel...
 Rocomp an dorn,
 Youc'homp dezhañ hor dienez,
 Hag anavezomp war an hent
 An hini 'bulluc'h hor pec'hed.
- 4 - Peogwir emañ ganimp
 Ewel da veure Fask.
 Na c'hwitomp ket engavadenn
 Ar gwad skuilhet...
 Kemer barn,
 Hag evañ hanaf an tremen,
 Degemeromp-eh 'n em roet
 D'hor c'harout betek an diwezh.

S. 115 Ant.: Profañ a rin deoc'h ur sakrifis a drugarez.
 S. 142 - : Grit ma klevin er beure ho karantez.
Kent. Fil 2, 6-11 : Ret eo da Vab an den bezañ adsavet. (P. 125)

Komz Doue 1 P 1, 18-21
 Gouvezit n'eo ket gant danvezioù kollidik,
 arc'hant pe aour, ez oc'h bet dieubet eus
 ar vuhez diskiant ho poa bet da herezh digant ho tadoù, met dasprenet
 oc'h bet gant ur gwad priziuz, hini un oan dibec'h ha dinamm, ar
 C'hrist: eh hag a zo bet rakdibabet a-raok krouidigezh ar bed ha
 diskleriet en amzerioù diwezhañ-mañ en abeg deoc'h, eo drezañ e kredit
 en Doue, Doue hag en deus e laket da adsevel a-douez ar re varv ha
 roet dezhañ ar c'hloar, en doare maz eo Doue an hini a gredit hag a
 esperit ennañ.

Evidomp-ni ar C'hrist a zo 'n em c'hraet sentus betek ar marv
 hag ar marv war ar groaz. Setu perak Doue en deus adsavet
 anezhañ ha roet dezhañ an Anv a zo dreist da bep anv.

Kant. ar W.: Goude ar Sabad, da c'houlou-deiz an deiz-kentañ ar sizhun
 e teuas Mari-Madalen hag ar Vari all da welout ar bez.

Broudeur, aspedomp hor Redemptor a c'houzañvas ar Basion, a eo
 sebeliet hag a adsavas a-douez ar re varv, ha lavaromp dezhañ:

R/- O Krist, hoc'h azeulif a reomp.

- Aotrou Jezuz, eus ho kostez toullset gant ar goaf hoc'h eus skuilhet
 gwad ha dour evel arouez an Iliz o c'henel; dre ho marv, ho sebel-
 liadur hag hoc'h adsav d'ar vuhez roit buhez d'ho Pobl. R/
- Aotrou Jezuz, bet hoc'h eus soñj eus ar re o doa ankouast promesa
 hoc'h adsav; ho pet soñj ivez eus ar re n'o deus anaoudegezh ebet
 diouti hag a vev hep esperañs. R/
- Oan Doue, hor Fask, sakrifiet evit an holl, degasit davedoc'h an
 holl dud. R/
- Doue ar bed holl ha n'hell ket ar bed ho terec'hel, fellet ez eus bet
 deoc'h bout serret er bez; mirit an dud diouzh ar marv peurbadel ha
 roit dezho an divarvelezh gloriuz. R/
- O Krist, Mab an Doue bev, diskennet d'an ifernioù, ho pet truez ouzh
 ar re o deus evelloc'h anavezet ar marv hag ar bez, ha grit dezho
 mont ganec'h e glour hoc'h adsav d'ar vuhez. R/

Kempedenn

Doue hollc'halloudek ha peurbadel, ho Mab
 unganet a zo diskennet betek donderioù an
 douar hag adsavet alese er c'hloar; roit eta, ni ho ped, d'ho
 tud fidal sebeliet gantañ er vadeziant ar c'hras, dre e adsav,
 da dizhout ar vuhez peurbadus. Eñ a ren hag a vev...

=====
 NOZVEZH FASK
 =====

(Ar re n'o deus ket bet perzh e lid an Nozveilh Fask a lavar
 ofis al lennadennou) :

- 3 lennadenn eus an Testamant kozh (dibabet e-touez ar re
 a zo merket e leksional an Ofereñn) gant o respentoù hag
 an orezon.
- An Avioul, ha goude: Te Deum ha kempedenn an deiz.

=====
 + + + +
 =====

SUL PASK

DASORC'HIDICEZH AN AOTROU

OPIS AR BEURE

S. 94 R/- Dasorc'het gwirion eo an Aotrou, alleluia!

Meulgan

- 1 - Pask an Aotrou Krist, hor Salver!
Ren a ra en e drec'h,
trec'hlied ar garantez:
e zivrec'h digor-bras
war-zu Doue
'stign enkreuz ar vuhez,
ha doug dezhañ hor c'halon.
2 - Bevañ dasorc'het 'vit Doue
er sklerijenn nevez,
sed tarzh-an-deiz a joa:
Difoupañ 'ray an dud
gant esper bras
a sav en o c'horfoù
da c'houlou an devezh-mañ.
3 - Pobl an dud vadezet, warno
siell ar Bromesa,
testoù da Jezuz Krist,
deuit da zebrif korf,
da evañ gwad
Mab droist-karet Doue,
'vit bevañ eus e Spered.
4 - Deut eo dija an eur: beilhit,
Doue a stign an daol
evit eured an Oan:
ar Mestr hag an Aotrou
d'ho servijañ
a zeu gwin e zistro:
trec'hadenn ar garantez.

PS:

- 1 - Lidet hon eus banvez an Oan
Gwisket ganimp dilhad gwenn-kann,
Goude tremen dre ar Mor Ruz
Kanomp trec'h hon Roue, Jezuz.
2 - Rak e gorf sakr en deus profet
War aoter ar Groaz venniget,
Ha skuilhet evidomp e wad
'N e garantez evit e Dad.
3 - 'Vel ma oa bet er Mor beuzet
Eus an Ejipt ar soudarded,
Hor pec'hedoù e mor ar c'hraas
'Zo bet gwalc'het dre nerzh ar Groaz.
4 - Jezuz, hor Pask hag hor rener,
Hor magadur hag hor Salver,
Puridigezh hor pec'hedoù,
Bare dinamm hon ennoù.
5 - Profadenn sakr 'vidomp lazhet,
Ganec'h an Ifern 'zo trec'het,
Diskaret galloud an Ankoù
Ha dimp rentet gloar an Neñvoù.
6 - Dispakit, Jezuz, ho panniol
A-us d'ar bed, ho Kroaz santel,
Ha mac'hit gant ho troad garo
Satan, roue bro ar maro.
7 - Evit ma vefot dimp, Jezuz,
Atac levezeg peurbadus,
Mirit diouzh maro ar pec'hed
Ar re 'zo ennoc'h adganet.
8 - Deoc'h-c'hwi, o Salver benniget,
A zo da viken dasorc'het,
D'an Tad ha d'ar Spered Santel,
Gloar ha meuleudi peurbadel. Amen.

S. 62 Ant.: Tad, deuteo an eur: roit gloard'ho Mab, alleluia.
Kant. Dn (P. 6): Eñ eo ar c'hentañ-ganet eus an holl grouadurion, alleluia.
S. 149 Ant.: Alleluia! Kanit d'an Aotrou ar c'han nevez, alleluia!

Komz Doue Ob 10, 40-43 Jezuz eo en deus Doue dasorc'het anezhañ
d'an trede deiz, ha roet dezhañ en em
ziskouez, n'eo ket d'ar bobl a-bezh, met da destoù bet dibabet en
a-raok gant Doue, dimp-ni hag hon eus debret hag evet gantañ goude
dezhañ adsevel a-douez ar re varv. Ha goure'hemennet en deus dimp
prezeg d'ar bobl ha testeniañ ez eo eñ a zo bet diazezet gant Doue
da varner ar re varv hag ar re varv. Dezhañ e toug testiñ an holl
brofeded a rosevo dre e anv ar pardon eus e bec'hedoù kement hini
a gred ennañ.

Hemañ eo an deiz graet gant an Aotrou, alleluia!
deiz a levezeg hag a joa, alleluia!

Sul Pask

Kant. Zak.: An heol a zo savet: na glaskit ket e-touez ar re varv Mab an
den; freuzet en deus morailhoù ar marv, alleluia.

Pedomp Doue an Tad peurbadel, en deus dieubet Jezuz diouzh an
droug hag ar marv, ha lavaromp dezhañ:

R/- Klod deoc'h evit ar c'hantvedoù.

- Tad santel-meurbet, graet hoc'h eus da Jezuz, ho Mab muiañ-karet,
tremen eus teñvalijenn ar marv da sklerijenn ar c'haloar: grit dimp
tizhout ho sklerijenn estlammus. R/
- Horsalvet hoc'h eus dre ar feiz en ho Mab, en deus hor c'haret hag en em
roet evidomp: hor mirit hiziv e feiz ar vadeziant. R/
- Fellout a ra deoc'h e klaskfemp traoù an nec'h gant ho Mab azezet e tu
dehoù deoc'h: hon dieubit diouzh strobinoù ar pec'hed. R/
- Ra lugemo war ar bed hor buhez kuzhet ennoc'h gant ar C'hrist, evit
ma teuy war-wel an neñvoù nevez hag an douar nevez. R/

Kempedenn

Aotrou Doue, da geñver an deiz-mañ, dre
ho Mab unganet o trec'hif war ar marv,
hoc'h eus digoret dimp dor ar beurbadelezh; roit dimp ar c'hraas,
ni ho ped, pa lidomp goual bras hor Salver o sevel a varv da
vev, da vezañ neveset gant ho Spered Santel, ha da sevel ni
ivez da sklerijenn ar gwir vuhez. Dre Jezuz Krist...

(Eil sul)

Aotrou Doue, c'hwi hag a zo peurbadel ho
trugarez, gant gouelioù Pask o tistreiñ
beñ bloaz ec'h entanit feiz ar bobl a zo gouastlet deoc'h; kres-
kit eta ar c'hraas hoc'h eus roet evit ma kompreno an holl evel
maz eo dleet, gant peseurt badeziant ez int bet gwalc'het, gant
peseurt Spered ez int bet ganet a-nevez ha gant peseurt gwad ez
int bet dasprenet. Dre Jezuz Krist...

OPIS KREISTEIZ

S. 117 Ant.: Ar C'hrist dasorc'het a-douez ar re varv ne varv mui, alleluia.

Komz Doue Rm 6, 4-5 Mar d-omp bet laket a-gevret gantañ er bez
evq'f'ar dre ar vadeziant, ez eo evit dontni ivez
da vevañ en ur vuhez nevez, evel maz eo adsavet ar C'hrist a-douez ar
re varv dre nerzh gloar an Tad. Rak mar d-omp deuet da vezañ unan gan-
tañ dre ur marv heñvel ouzh e hini, e vezimp ivez unan gantañ dre un
adsavidigezh hañval ouzh e hini.

V/- Hemañ eo an deiz graet gant an Aotrou, alleluia.
R/- Deiz a levezeg hag a joa, alleluia.

OPIS AN ABARDAEZ

Meulgan

R/- Aotrou, trec'h oc'h bet war ar marv,
Ha graet hoc'h eus d'ar vuhez skediñ
Er beurbadelezh.

varv,
Adsaveteo ar C'hrist a-douez ar re varv, Adsaveteo ar C'hrist a-douez ar re
Preveudi ar re a zo chomet kousket. Ha lonket eo bet ar marv gant ar vuhez!
Trec'h eo ar vuhez war ar marv. R/ Emen, o marv, emañ da drec'h? R/

Adsaveteo ar C'hrist a-douez ar re varv!
D'an Doue Salver rentomp gras da viken
En anv an Aotrou Jezuz Krist. R/

Sul Fask

S. 109 Ant.: Ael an Aotrou a ziskennas eus an neñv, a dostaas, a ruilhas ar maen hag a azezas warnañ, alleluia, alleluia.

S. 113A - : Ur c'hren-douar bras a voe hag ael an Aotrou a ziskennas eus an neñv, alleluia.

Kant. Disk 19: N'ho pet ket aon; Jezuz a Nazared eo a glaskit, an hini a zo bet staget ouzh ar groaz: dasorc'het eo, n'emañ ket amañ, alleluia.

R/- Alleluia, alleluia.

Ar silvidigezh, ar c'hloar hag ar galloud d'hon Doue, alleluia! Gwirion ha reizh e varmedigezhioù, alleluia, alleluia.

Moult hon Doue, servijerion an Aotrou, alleluia: C'hwi holl hag a zouj anezhañ, bihan ha bras. R/

Setuma ren evel Roue an Aotrou hon Doue; mestr an hollved, alleluia! Bezomp laouen ha triomp, romp glear dezhañ. R/

Rak setu deuet eured an Oan, alleluia. Hag e bried a zo en em gempennet. R/

Komz Doue He 10, 12-14 Ar C'hris, goude bezañ kinniget evit ar pec'hedoù ur sakrifis hep muiken, a zo aet da azezañ evit atav en tu dehou da Zoue, o c'hortoz hiviziken ma vo liket e enobourion da skabell dindan e dreid. Rak dre ur brofadom hepken en deus peurvellaet da viken ar re santelaet.

V/- Hemañ eo an deiz graet gant an Aotrou, alleluia. R/- Deiz a levenez hag a joa, alleluia.

Kant. ar M.: Un tan a lesk hor c'halonou: Jezuz a chom ganimp; onomp e kerzh e vister: ar marv a zigor war ar c'hloar, alleluia.

Aspedomp an Doue hollc'halloudek en deus daskoret dimp ar vuhez en e Vab dasorc'het, ha lavaromp dezhañ:

R/- Ra vo warnomp ho karantez, Aotrou.

- Tad just-neurbot, ho trugarekaat a reomp da vezañ barnet ar bed-mañ ha diskaret galloud Satan: Jezuz savet eus an douar, ra sacho an holl dud davetañ. R/

- Dre adsav ho Mab d'ar vuhez kasit ho Spered war an Iliz, ma vo ar sin da zastum ennoc'h an dud. R/

- Mirit er feiz evit ar vuhez peurbadus ar vagale nevez hoc'h eus adganet dre an douar hag ar Spered. R/

- Disammit ar reuzevion, disubit ar brizonidi, yac'hait ar glañvourion, roit boued d'an dud naoniet, daskorit o enor d'an dud disprizet ha leuniet ar bed gant ho madoberoù. R/

- D'hor breudeur marv o deus resevet korf ha gwad Jezuz dasorc'het roit perzh en adsav an deiz diwezhañ.

Kempedenn (P. 173)



oooooooooooooooooooooooooooooooooooo
E I Z H V E D P A S K
oooooooooooooooooooooooooooooooooooo

LUN FASK

(Evel da Sul-Fask)

OFIS AL LENNADENNOU

S. 1 Ant.: Gwezenn ar vuhez eo ho Kroaz, Aotrou, alleluia.

S. 2 - Va Mab out-te, alleluia, me eo am eus da c'haret hiziv, alleluia.

S. 3 - O Te a gousk, dihun, alleluia, sava-douez ar re varv, alleluia.

V/- Hemañ eo an deiz graet gant an Aotrou, alleluia. R/- Deiz a levenez hag a joa, alleluia.

Te Doue (P. 2)

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag a ra d'hoc'h Iliz kreskiñ hep paouez dre reiñ dezhi bugale nevez gant ar vadeziant, plijet ganeoc'h reiñ d'ho servijerion ar c'hras da ziskouez dre o oberoù ar Sakramant o deus resevet dre ar Feiz. Dre Jezuz Krist...

MEURZH

S. 23 Ant.: Diskennet e oa, savet eo ivez a-us d'an holl neñvoù, alleluia.

S. 65 - : Broadoù, benniget hon Doue, eñ hag a rent dimp ar vuhez, alleluia.

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus hor salvet dre vister Pask, dalc'hit eta gant karantez da reiñ sikour d'ar re a zo ho pobl, ma c'hellit, goude bezañ resevet ar gwir frankiz traiva or baradoz ar pezh a zo dija o levenez war an douar. Dre Jezuz Krist...

MERC'HER

S. 103 Ant.: Aotrou, va Doue, na pegen bras ez oc'h, alleluia.

Kempedenn

Aotrou Doue, bep bloaz e roit dimp joa ha levenez gant gouelioù hor Salver oc'h adsevel eus ar bez, plijet ganeoc'h eta en ho madelezh reiñ dimp ar c'hras, dre vertuz ar gouelioù a lidomp amañ war an douar, d'en em gaout un deiz er joaioù peurbadus. Dre Jezuz K.

YAOU

S. 117 Ant.: Ne varvin ket, ha bevañ a rin evit embann oberoù an Aotrou, alleluia.

Kempedenn

Aotrou Doue, bodet hoc'h eus pobloù dis-heñvel ar bed da veuliñ hoc'h Anvsantel, roit eta, ni ho ped, d'ar re a zo bet ganet a-nevez e feunteun ar vadeziant, ar c'hras da gaout ar memes feiz en o speredoù hag ar memes aked en o oberoù. Dre Jezuz Krist...

GWEENER

S. 135 Ant.: N'eus nemetañ d'ober burzhudoù, rak da viken e pad e drugarez.

Kempedenn

Doue hollc'halloudek ha peurbadel, dre vister Pask hoc'h eus siellet an Englev-a-beoc'h etrezoc'h hag an dud, plijet ganeoc'h eta reiñ d'hon eneoù ar c'hras neket hepken da grediñ ar gwirionezioù a enoromp dre al lidoù-mañ, met ivez d'o lakaat da ren hon oberoù. Dre Jezuz Krist...

Eizhved Pask - Amzer Pask

SADORN

S. 144 Ant.: Pep gloar ha pep enor da Roue ar c'hantvedoù, divarvel ha diwel, alleluia.

Kempedenn Aotrou Doue, gant ho kras largentezus e rit da niver ar pobloù a gred ennoc'h mont war greskiñ, taolit eta ur sell a vadelesh war an dudhoc'h eus dibabet evit ma teuo ar re a zo adganet dre sakramant ar vadeziant, da gaout un deiz gwiskamant ar vuhez peurbadus. Mñ a ren hag a vev...

2et SUL PASK

(Salmoù, antifonnoù, evel d'al lun)

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag a zo peurbadel ho trugarez, gant gouelioù Pask o tistreiñ bep bloaz eo'h entanit feiz ar bobl a zo gouestlet deoc'h, kreskit eta ar c'hras hoc'h eus roet evit ma kompreno an holl evel ma 'z eo dleet, gant peseurt badeziant ez int bet gwalc'het, gant peseurt Spered ez int bet ganet a-nevez, ha gant peseurt gwad ez int bet dasprenet. Dre Jezuz Krist...

oooooooooooooooooooooooooooo
o A M Z E R F A S K o
oooooooooooooooooooooooooooo

SULIOU AMZER PASK

DERO'HEMT

Meulgan

- 1 - Petra 'glaskit d'abaradec'h noz Gant kalonoù ken birvidik? Pelec'h e redit o plegañ Ho penn? Traken 'met an deiz prometet D'ar re o do degemeret Ar sklaerder-se ma lar Doue A sked en noz.
2 - Daoust ha ne c'ac'h ket kemennet? An deiz nevez 'n em ziskouez Da geñver an deiz Pask Jezuz A sav; 'Men ez afempma n'eo ket di? Rak pa ziskenn hor sklerijenn Ec'h ouzomp mat ez ev dija Devezh ar bed.
3 - Ha c'hwi ivez, deut d'e welout, Met deut timat, diwezhat eo! Pep hini en devo e lod A c'hras; Pep hini, m'en deus ar spered, Ar spered ho kaso d'e noz, 'Welo o tarzhañ an deiz-se: Doue 'dremen.
4 - Setu perak e toredomp D'eo grouidigezh nevez-flamm; Atav 'ra Doue 'r pezh 'zo mat D'an den. Hen merzout a ra tamm-ha-tamm, Dre gaeur 'tigor hon daoulagad, N'eus mann dic'hallus da Zoue P'en em ro dimp.

SUL 3 & 7

- S. 115 Ant.: Torret hoc'h eus va liammoù: kinnig a rin deoc'h sakrifis ar veuleudi, alleluia.
S. 112 - : An Aotrou kanneulet en neñvoù a denn ar paour eus an douar, alleluia.
Kant. Fil 2, 6-11 Jezuz hag a oa Doue a stumm ne sellas ket evel e dra chom en e renk, par da Zoue.

Sulioù amzer Pask

R/- Jezuz Krist eo an Aotrou evit gloar Doue an Tad.

Met da netra eo 'n em laket dre gemer stumm ar servijer ha dont da vezañ 'giz an dud. R/

Goude 'n em ziskouez 'vel un den en deus c'hoazh en em izelaet dre sentiñ betek ar marv, betek ar marv war ur groaz. R/

Setu perak en deus Doue uhelsavet anezhañ ha roet dezhañ an anv a zo a-us da bep anv. R/

Ma vo pep glin en anv Jezuz o plegañ e lein an neñvoù, war an douar hag e bed an Ankoù,

evit ma tisklerio pep teod eo Jezuz Krist eo an Aotrou evit gloar Doue an Tad.

SUL 4

- S. 121 Ant.: Ra zeuic peoc'h an Aotrou Krist da ren war hor c'halonoù, alleluia.
S. 129 - : Hon dasprenet hoc'h eus evit Doue gant ho kwad, alleluia.
Kant. Fil 2, 6-11

SUL 5

- S. 140 Ant.: Ra savo davedoc'h va fedenn, evel moked an ezañs, ha va daouarn evel aberzh an abardaer, alleluia.
S. 141 - : Eus toull-bac'h an Ankoù hoc'h eus va zennet evit ma trugarekain hoc'h anv, alleluia.
Kant. Fil 2, 6-11

SUL 6

- S. 118, 105-112: Neb a ra ar wirionez a gerzher sklerijenn, alleluia.
S. 15 : Dieubet diouzh an Ankoù, an Aotrou a zo dasorc'het, alleluia.
Kant. Fil 2, 6-11

Komz Doue 1 Kor 5,8 Skarzhit diouzhoc'h ar g'bell kozh, evit dic'h'bell al lealded hag ar wirionez.

Chomit ganimp, Aotrou, alleluia, alleluia.
V/- Rak emañ dija an deiz war e ziskar, alleluia, alleluia.
R/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Sebeliet gant ar C'hrist er vadeziant, gantañ ivez ez omp dasorc'het, alleluia.

Pedomp Jezuz hor Salver en deus distrujet ar marv gant e groaz ha lavaromp dezhañ:

R/- Ho pet soñjeus hoc'h Iliz, Aotrou a c'hloar.

- C'hwi, ar maen distaolet gant ar vañsnerion, a zo deuet da vezañ ar maen-korn; grit ganimp-holl mañ-bev hoc'h Iliz. R/
- C'hwi, an Test fidel ha gwirion, kentañ-ganet a-douez ar re varv; grit d'hoc'h Iliz gouzout reiñ testeni hep fallaenn, e-kreiz ar bed-mañ. R/

Sulioù amzer Pask

- C'hwi, Fried nemetañ an Iliz strinket eus ho kostez toullet, roit d'al leaned ar c'hras da vezañ tes toù glan an dimezi kevrinus-se. R/
- C'hwi, an Hini kenfañ hag an diwezhañ, c'hwi hag a zo marvet hag addeuet d'ar vuhez, mirit ar re a zo bet badezet fidel betek ar marv. R/
- C'hwi, sklerijenn ha goulaouenn Kêr santel Doue, skuilhit ho sklaered war an Annon evit ma revint da viken. R/

Kempedenn Sul 3 Ra vo ho Pobl dalc'hmat el levenez, Aotrou Doue, pa 'z eo nevesaet yaouankiz an eneoù, ha bremañ ma 'z omp adlaket e renk gloriuz ho pugale, roit dimp ar c'hras da c'hortoz gant un esperañs leun a anaoudegezh vat adsav ar c'horfoù marv d'ar vuhez. Dre Jezuz Krist..

Sul 4 Doue hollc'halloudek ha peurbadel, renit ac'hanomp d'ar joaioù peurbadus, evit ma c'hellou deñved dinerzh ho trespellad erruout el lec'h m'eo aet a-raok dezho ar Pastor Nerzhuz. EH a ren hag a vev...

Sul 5 Aotrou Doue, c'hwi eo hoc'h eus hon dasprenet ha graet ganimp ho pugale, taolit eta ur sell a vadeizh war ho pugale garet, evit m'o devezo, pa gredont e Jezuz Krist, ar gwir frankiz hag ivez an herezh peurbadus. Dre Jezuz Krist...

Sul 6 Doue hollc'halloudek, an deizioù-mañ a levenez a dramenomp en enor d'hor Salver oc'h adsevel a varv da vev, roit dimp ar c'hras d'eo lidañ gant aked ha karantez, en doare m'en em ziskouezo bapred, en hon oberoù ar pezh a adtremenomp warnañ dre soñj hor spered. Dre Jezuz Krist...

Sul 7 Selaouit gant madelezh hor pedennoù, Aotrou Doue: evel ma kredomp emañ ganeoc'h en ho kloar Jezuz, Salver ar bed, grit dimp ivez kompren e chom ganimp-ni betek fin ar bed, evel m'en deus prometet e-unan. EH a ren hag a vev...

OPIS AL LENNADENNOU

Meulgan

- | | |
|---|---|
| 1 - War ar bed e par limestra
Ar mintin o kanañ laouen:
An douar a drid gant ar joa
Hag an ifern gant spont a gren. | 4 - A-walc'h a gafiñ hag a boanioù,
A-walc'h evel-se a zaeroù:
Lazher ar pec'hod a sav splann
Hag e paran Ael saet-kann. |
| 2 - Galloudus-mour, sed ar Roue
A denn eus mougev ar maro
Da sklerijenn frank ar vuhez
Strollad prizoniet an Tadoù. | 5 - Evit ma viot dimp, Jezuz,
Atao levenez peurbadus,
Mirit diouzh maro ar pec'hed
Ar re 'zo ennoc'h adganet. |
| 3 - Kaer e oa bat stouvañ e vez
Gant ur maen bras gwardet pervezh,
En e boull e-un an Aotrou
En deus douaret an Ankoù. | 6 - Deoc'h-c'hwi, o Salver banniget
A zo da viken dasorc'het,
D'an Tad ha d'ar Spered Santel,
Gloar ha meuleudi peurbadel. Amen. |

OPIS AR BEURE

S. 94 R/- Dasorc'het en gwirionez eo an Aotrou, alleluia.

Meulgan (P. 172)

Sul 3 - 7

S. 92 Ant.: An Aotrou a zo Roue: gwisket eo a nerzh, alleluia.
Kant. Dn : (P. 6)
S. 148 - : Dreist eo anv an Aotrou, alleluia.

Sul 4

S. 117 Ant.: Ne varvin ket, met bevañ a rin evit embann oberoù an Aotrou, allel.
Kant. Dn : (P. 31)
S. 150 - : Salud, enor, galloud ha gloar d'hon Doue, alleluia.

Sul 5

S. 62 Ant.: Hoppaeañ, ra zegemero ar sec'hedet dour ar vuhez, alleluia.
Kant. Dn : (P. 6)
S. 149 - : Dañsal a ra ar Sent gant levenez er c'hloar, alleluia.

Sul 6

S. 117 Ant.: Hemañ eo an deiz graet gant an Aotrou, alleluia.
Kant. Dn : (P. 31)
S. 150 - : An hini a zo war an tron, azeulit anezhañ ha lavarit: Amen, allel.

Komz Doue Ob 10, 40-43

Jezuz en deus Doue dasorc'het anezhañ d'an trede deiz ha roet dezhañ en em ziskouez, n'eo ket d'ar bobl a-bezh, met da destoù bet dibabet en a-raok gant Doue, dimp-ni hag hon eus debret hag evet gantañ goude dezhañ adsevel a-douez ar re varv. Ha gourc'hennet en deus dimp prezeg d'ar bobl ha testeniañ ez eo eñ a zo bet diazezet gant Doue da varner ar re ev hag ar re varv. Dezhañ e toug testeni an holl brofeded e resevo dre e anv ar pardon eus e bec'hedoù kement hini a gred enañ.

Dasorc'het en gwirionez eo an Aotrou, alleluia, alleluia.
V/- En em ziskouezet eo da Simon, alleluia, alleluia.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Hon Oan Pask, ar C'hrist, a zo bet lazhet e sakrifiks, dezhañ ar galloud hag ar c'hloar, alleluia.

Pedomp Doue an Tad peurbadel en d'us dieubet Jezuz diouzh an droug ha diouzh ar marv, ha lavaromp dezhañ:

R/- Klod deoc'h-c'hwi a-hed ar c'hantvedoù.

- Tad santel-meurbet, graet hoc'h eus da Jezuz, ho Mab muiañ-karet, tremen eus deñvalijenn ar marv da sklerijenn ar c'hloar: grit dimp ivez tizhout ho sklerijenn vuzhudus. R/
- Hor salvet hoc'h eus dre ar feiz en ho Mab en deus hor c'hareh hag en em roet evidomp: hormirit hizive feiz ar vadeziant. R/
- Fellout a ra deoc'h ma klaskimp traoù an nec'h, gant ho Mab azezet en tu dehou deoc'h: hon dieubit diouzh strobinoù ar pec'hed. R/
- Ra lugern war ar bed hor buhez kuzhet ennoc'h gant ar C'hrist, evit ma teuy war-wel an neñvoù nevez hag an douar nevez. R/

Kempedenn (P. 178)

OPIS KREISTEIZ

(Salmoù hag antifonenoù ar Sul)

Komz Doue Ef 4, 23-24

En em nevezit a spered hag a soñj ha gwiskit warnoc'h an Den nevez a zo bet krouet diouzh skeudenn Doue er reizhder hag er santelezh hervez ar wirionez.

Sulioù amzer Fask

V/- Dasorc'het en gwirionez eo an Aotrou, alleluia.
R/- En em ziskouezet eo da Simon, alleluia.

OPIS AN ABARDAEZ

Heulgan (P. 173)

Sul 3 - 7

S. 109 Ant.: Glanaet en deus ar C'hrist ar pec'hedoù hag aet eo d'azezañ a-zehou d'ar Veurdez en neñvoù, alleluia.
S. 110 - : Roet en deus an Aotrou ar silvidigezh d'e bobl, alleluia.
Kant. Disk. 19 (P. 113)

Sul 4

S. 109 Ant.: Klaskit madoù an nec'h, e-lec'hma ren ar C'hrist a-zehou da Zoue, alleluia.
S. 110 - : Evit ar c'halonoù eem ursklerijenn a zo savet, alleluia.
Kant. Disk. 19 (P. 113)

Sul 5

S. 109 Ant.: Dasorc'het, Jezuz a zo hiziviken azezet en tudshou da Zoue, allel.
S. 113A - : Hon diframmañ 'ra eus galloud an deñvalijenn hag hon ambroug 'ra da Rouantelezh e Vab, alleluia.
Kant. Disk 19 (P. 113)

Sul 6

S. 109 Ant.: Doue en deus temnet e Vab diouzh galloud ar marv ha graet dezhañ azezañ en e c'hloar, alleluia.
S. 113B - : Dilezet hoc'h eus an idolemoù evit en em reiñ d'an Doue bev, alleluia.
Kant. Disk 19 (P. 113) : Meuleudi d'hon Doue! Burzhudus eo e oberoù! Reizh eo e hentoù, alleluia.

Komz Doue He 10, 12-14

Ar C'hrist, goude bezañ kinniget evit ar pec'hedoù ur sakrifis hepmuiken, a zo aet da azezañ evit atav en tu dehou da Zoue, o c'hortoz hiziviken ma vo laket e enebourion da skabell dindan e dreid. Rak dre ur brofadenn hepken en deus peurwelllaet da viken ar re santelaet.

Chomit ganimp, Aotrou, alleluia, alleluia.
V/- Rak dija emañ an deiz war e ziskar, alleluia, alleluia.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Dasorc'het eo Jezuz, ar gwir Pastor, ha roet en deus e vuhez evit e dropell, alleluia.

Aspedomp an Doue hollc'halloudek... (P. 174)

Kempedenn (P. 178)



LUN AMZER FASK

OPIS AR BEURE

Sizhun 2 - 6

S. 41 Ant.: Evel ma hirvoud an heizez etrezek an dourioù bev, evel-se emañ va ene ouzh ho c'hoantaat, o Doue, alleluia.
Kant. Si 36, 1-5. 10-13 (P. 34) : Dezevellit hoc'h oberoù da Jeruzalem, ma vo kanet ho purzhudoù, alleluia.
S. 18A Ant.: Gloar Doue a sklerijenn kêr; an Can eo he sklerijenn, alleluia.

Sizhun 3 - 7

S. 83 Ant.: War-zu ennoc'h, o Doue bev, e youc'h va c'halon ha va c'horf gant levenez, alleluia.
Kant. Iz 2,2 - 5: (P. 59): An holl-bobloù a zeuio etrezek ti Doue, alleluia.
S. 95 Ant.: Lavarit d'an holl bobloù: an Aotrou a ren, alleluia.

Sizhun 4

S. 89 Ant.: Ra vezo warnomp splannder an Aotrou, alleluia.
Kant. Iz 42, 10-16 (P. 82): An deñvalijenn a droin dirazo e sklerijenn, allel.
S. 145 Ant.: An Aotrou, da Zoue, a ren evit ar c'hantvedoù, alleluia.

Sizhun 5

S. 5 Ant.: Ra drido en bokichen ar re a gar hoc'h Anv, alleluia.
Kant. Dav 1 Kr 29, 10-13 (P. 10): Deoc'h-c'hwi, Aotrou, ar roueelezh war an holl bobloù, alleluia.
S. 28 Ant.: An Aotrou a zo roue da virviken, alleluia.

Komz Doue 2 Kor 5, 14-15

Karantez ar C'hrist a wask ac'hanomp, pa soñjomp penaos, ma 'z eus bet unan marvet evit an holl, eo an holl ivez a zo marvet ennañ; ya, evit an holl ez eo marvet evit na vevo mui ar re vev evito o-unan, met evit an hini a zo marvet hag adsavet evito.

Dasorc'het en gwirionez eo an Aotrou, alleluia, alleluia.
V/- En em ziskouezet eo da Simon, alleluia, alleluia.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak: Dasorc'het a-douez ar re varv, ar C'hrist na varv mui, warnañ en deus kollet an Ankoù e c'halloud, alleluia.

Pedomp Doue an Tad peurbadel en deus dieubet Jezuz diouzh an droug hag ar marv, ha lavaromp dezhañ:

R/- Klod deoc'h-c'hwi a-hed ar c'hantvedoù!

- Doue a sklerijenn, sklerijennet hoc'h eus ar bed gant gloar ar C'hrist dasorc'het, sklerijennit hor c'halonoù er beure-mañ gant sklerijenn ar Feiz. R/
- Dre adsav ho Mab d'ar vuhez hoc'h eus digoret d'an dud hent ar beurbadelezh, roit dimp e labourioù an deiz-mañ esperañs ar vuhez peurbadus. R/
- Dre adsav ho Mab d'ar vuhez hoc'h eus skuilhet ho Spered war ar bed, grit d'e garantez entañ hor c'halonoù en deiz-mañ.
- Jezuz Krist staget ouzh ar groaz evit dieubiñ an dud, ra vezo hiziv hor silvidigezh hag hon dasprenidigezh. R/

Kempedenn Lun 2

Doue hollc'halloudek ha peurbadel, c'hwi hag hon eus an hardizhegezh da lavarout deoc'h: Hon Tad, startait en hor c'halonoù ar spered hag a ra

ac'hanomp gwir vugale doc'h, evit ma c'hellimp kaout perzh en herezh prometet. Dre Jezuz Krist...

Lun 3 Aotrou Doue, evit ma c'hellfe ar rezianket donet en-dro war an hent mat, e tiskouezit dezho sklerijenn ho kwirionez; roit eta ar c'hras da gement hini a zoug an anv kristen da zisteurel ar pezh a zo kontrol d'an anv-se ha d'en em stagañ ouzh ar pezh a zere outañ. Dre Jezuz Krist...

Lun 4 Aotrou Doue, dre ho Mab en em lakaet izel hoc'h eus savet ar bed kouezhet, roit d'ho tud fidel gras al levenez santel, ha grit d'ar re hoc'h eus diframmet eus a sklavelezh ar pec'hed tañva un deiz ar joaioù peurbadus. Dre Jezuz Krist...

Lun 5 Aotrou Doue, c'hwi hag a ro da speredoù an dud fidel ar c'hras da vezañ unanet, grit d'ho pobloù karout ar pezh hoc'h eus gourc'hemennet, c'hoantaat ar pezh a brometit, evit ma vo hor c'halonoù e-touez traoù tremeniat ar bed-mañ troet dalc'hmata war-zu al lec'h m'emañ ar gwir joaioù. Dre Jezuz Krist...

Lun 6 Doue leun a drugarez, lakait ar misterioù a enoromp gant gouelioù-Pask da zougen frouezh evidomp e pep amzer. Dre Jezuz Krist...

Lun 7 Ra ziskerno warnomp, ni ho ped, Aotrou Doue, nerzh ar Spered Santel, ma c'hellimp heuliañ gant un ene fidel ho polontez hag he diskouez dre hor buhez santel. Dre Jezuz Krist...

OFIS KREISTIDIZ

(Salmoù hag antifonemoù an deiz)

Komz Doue Ob 4, 11-12 Henezh eo ar maen bet distaolet ganeoc'h-c'hwi, ar saverion, hag a zo deuet da vezañ ar maen-korn. N'emañ ar silvidigezh en hini all ebet, rak n'eus dindan an cabl anv all ebet roet d'an dud a dleomp bezañ salvet gantañ.

V/- Dasorc'het en gwirionez eo an Aotrou, alleluia.
R/- En em ziskouezet eo da Simon, alleluia.

OFIS AN ABARDAEZ

Sizhun 2 - 6

S. 44 Ant. I: Ra vo benniget ar Roue a zeu en anv an Aotrou, alleluia.
- II: Eyrus ar re a zo pedet da eured an Oan, alleluia.
Kant. Ef 1, 3-10: (P. 35).

Sizhun 3 - 7

S. 122 Ant. : Tarzhet en deus ur sklerijenn, an holl dud izel a zo bet uhelaet, alleluia.

Kant. Ef (P. 35).

Sizhun 4

S. 135 Ant. : Trugarekait an Aotrou, rak peurbadus eo e garantez, alleluia.
Kant. Ef (P. 35)

Sizhun 5

S. 10 Ant. : Bezit dizaon, trec'het em eus war ar bed, alleluia.
S. 14 - : Degemarete vezo en ho Ti, war ho Menez santel, alleluia.

Kant. Ef 1, 3-10 (P. 35)

Komz Doue 1 P 2, 9-10

C'hwi a zo ar c'uemn dibabet, ar velegiezh roueel, ar vroad santel, ar bobl bet prenet gant Doue evit embann oberoù galloudus an hini en deus ho kalvet eus an deñvalijenn d'e sklerijenn vuzhodus; ha c'hwi, pa ne oac'h ket gwechall e bobl, a zo deuet da vezañ bremañ Pobl Doue, c'hwi pa n'ho poa ket gwechall kavet trugarez, a zo bremañ ar re a zo bet graet trugarez outo.

Chomit ganeomp, Aotrou, alleluia, alleluia.
V/- Rak dija emañ an deiz war e ziskar, alleluia, alleluia.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Mar domp marvet gant ar C'hrist, e kredomp ivez e vevfomp gantañ, alleluia.

Pedomp hor Salver en deus distrujet ar marv gant e groaz, ha lavaromp dezhañ:

R/- Chomit ganeomp, Aotrou.

- Aotrou Jezuz, war an hent hoc'h eus ambrouget an diskibled en arvar hag en em ziskouezet dezho; skoazellit hoc'h Iliz en he beaj ha chomit ganti pa zeu an noz. R/

- Na lezit ket ho fideled da vezañ digomprena gorrek da grediñ, kras-kit feiz hoc'h Iliz evit ma 'z embanno ho trec'h war ar marv. R/

- Sellit gant madelezh ouzh ar re n'o deus ket hoc'h anavezet war an hent, en em ziskouezet dezho evit ma teuint da welout ennoc'h o Salver. R/

- Dre ho kroaz hoc'h eus adunvanet an holl dud en ur C'horf hepken, roit ar peoc'h hag an unaniezh d'an holl vroadoù. R/

- C'hwi, barnar ar re vev hag ar re varv, roit an distaol eus o fe-c'hedoù d'an holl dud o deus kredet ennoc'h. R/

Kempedenn (P. 182)

NEURZH AMZER FASK

OFIS AR DEURE

Sizhun 2 - 6

S. 42 Ant.: Testaet oc'h bet ouzh Sion, Kêr an Doue bev, alleluia.
Kant. Iz 38, 10-20 (P. 27): Harzet hoc'h eus va ene dirak foz an netra, allel.
S. 64 Ant.: Gweladennet hoc'h eus an douar hag hol leuniet a binvidigezhioù, allel.

Sizhun 3 - 7

S. 84 Ant.: Ennoc'h en em laouena ho Pobl, Aotrou, alleluia.
Kant. Iz 26, 1-10-12 (P. 62): Esperhor boa en Aotrou, roet en deus dimp ar peoc'h, alleluia.

S. 66 Ant.: Diha an douar en deus roet e frouezh, ra drido ar pobloù, alleluia.

Sizhun 4

S. 100 Ant.: Neb a ra bolontez va Zad a yelo en e Rouantelezh, alleluia.
Kant. Dn 3, 26. 27. 29. 34-41 (P. 85): Ra ouic ar bed-holl ez oc'h Doue, Aotrou ar c'hantvedoù, alleluia.

S. 134 Ant.: Kement tra a blij dezhañ, an Aotrou hen gra, alleluia.

Sizhun 5

S. 23 Ant.: Diskennet e oa, savet eo ivez a-us d'an holl neñvoù, alleluia.
Kant. Tb 13,1-10 (P.13): Liditho kouelioù ha trugarekait anezhañ, alleluia.
S. 32 Ant.: Leun eo an douar gant karantez an Aotrou, alleluia.

Komz Doue Rm 14, 7-9 Hini ebet ac'hanomp ne vev evitañ e-unan, na kennebeud-all, hini ebet ne varvevitañ e-unan. Mar bevomp eo evit an Aotrou e vevomp, ha mar varvomp eo evit an Aotrou e varvomp. Pe o vevañ pe o vervel ez omp eta d'an Aotrou. Rak evit se eo bet marvet ar C'hrist ha deuet en-dro d'ar vuhez, evit bezañ Aotrou ar re varv kenkouz hag ar re vev.

Dasorc'het en gwirionez eo an Aotrou, alleluia, alleluia.
V/- En em ziskouezet eo da Simon, alleluia, alleluia.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Kanomp an Aotrou en deus en em wisket a c'hloar, alleluia.

Pedomp Doue an Tad peurbadel en deus dieubet Jezuz diouzh an droug hag ar marv, ha lavaromp dezhañ:

R/- En ho trugarez, ho pet soñj ac'hanomp.

- Doue mestr ar vuhez, ho pet soñj eus Pasion ha Dasorc'hidigezh an Oan aberzhet, selaouit-efñ hag a erbed evit hor mad. R/
- Hon dieubid diouzh kement egin a falloni hag a fallagriezh, grit dimp bevañ e glanded ha gwirionez ar C'hrist. R/
- Grit dimp ar c'hras da stourm en oberoù an deiz-mañ a-enep d'an disranniezh hag ar varizi, hol lakit da deurel evezh ouzh ezhommoù hor breudeur. R/
- Troit hor c'halon-vaen en ur galon-gig, roit dimpspered nevez an Aviel, dimp da gerzhout hep fallaenn gant hoc'h hentoù. R/

Kempedenn Meurzh 2 Roit dimp ar c'hras, Doue hollc'halloudek, da embann galloud hor Salver o sevel eus ar bez, evit ma veritimp kacut un deiz ar madoù hon eus resevet dija an arrez anezho. Dre Jezuz Krist...

Meurzh 3 Aotrou Doue, d'ar re a vez adganet eus an dour hag eus ar Spered e tigorit d'or Rouantelezh an Neñvoù, kreskit eta en ho servijerion ar c'hras hoc'h eus roet evit na vo ket ar re a zo bet glanaet eus o fec'hedoù dibourvezet eus hini ebet eus ar promesaoù hoc'h eus graet dezho dre garantez. Dre Jezuz Krist...

Meurzh 4 Roit dimp hor goulem, ni ho ped, Aotrou Doue, ni a zo . lidañ misterioù Adsav hor Salver d'ar vuhez, grit dimp eta meritout resev un deiz joa ar silvidigezh. ~~Ma~~ a ren...

Meurzh 5 Aotrou Doue, dre Adsav ho Mab d'ar vuhez hoc'h eus rentet dimp ar vuhez peurbadus, roit eta d'ho Pobl ar c'hras da vezañ start er feiz hag en esperañs, evit m'hor bo tamm doustañs ebet e teuy da wir ar promesaoù hoc'h eus graet dimp dre garantez. Dre Jezuz K..

Meurzh 6 Roit d'ho tud fidel, Aotrou Doue, ar c'hras da vezañ dalc'hmata er joa pa 'z eo nevesaet yaouankiz an ensoù: stad a zo enno bremañ o vezañ m'o deus adkavet ar c'hloar da vezañ ho pugale, grit dezho gortoz deiz an Adsav d'ar vuhez gant un esperañs leun a anaoudegezh vat. Dre Jezuz Krist...

Meurzh 7

Doue hollc'halloudek ha peurbadel, grit, ni ho ped, pa zeuio ar Spered Santel, ma plijo gantañ dont da chom en hor c'hreiz d'ober ganimp templ e c'hloar. Dre Jezuz Krist...

OFIS KREISTELIZ

Komz Doue Disk 1, 17-18 Gwelout a ris Mab an Den hag a lavararas din: Ne eo ar c'hentañ hag an diwezhañ, an hini bev. Marv on bet ha setu me bev evit kantvedoù ar c'hantvedoù hag em dalc'h emañ alc'houezioù ar Marv hag an Ifern.

V/- An diskibled a oa leun a joa, alleluia.
R/- O welout an Aotrou, alleluia.

OFIS AN ABARDAEZ

Sizhun 2 - 6

S. 48 I Ant.: Klaskit traoù an nec'h, nann traoù an douar, alleluia.
II - : An Aotrou a denn va buhez eus skilfom ar Marv, alleluia.
Kant. Disk 4,11. 5,9.10.12 (P. 39)

Sizhun 3 - 7

S. 125 Ant. : Ho tristidigezh a zeuio da vezañ levez, alleluia.
S. 124 - : Peoc'h warnoc'h, setu me emañ, alleluia, bezit dizaon, allel.
Kant. Disk (P. 39)

Sizhun 4

S. 136 Ant. : Kanit dimp eus kantikoù Sion, alleluia.
S. 137 - : A-greiz va anken hoc'h eus graet din bevañ, alleluia.
Kant. Disk (P. 39)

Sizhun 5

S. 19 Ant. : Deuet eo bremañ Rouantelezh Doue ha galloud e Grist, alleluia.
S. 20 - : Diazezet hoc'h eus ho kalloud ha kemeret perc'henniezh ho ren, alleluia.
Kant. Disk (P. 39)

Komz Doue Ef 2, 4-6 Doue a zo pinvidik e drugarez, dre ar garantez vras en deus hor c'haret ganti; goude ma oamp marv en abeg d'hor pec'hedoù, en deus adroet dimp ar vuhez a-unan gant ar C'hrist, rak dre c'hras ez oc'h salvet; a-unan gantañ en deus hon adsavet da vev ha laket da azezañ en neñvoù a-unan gantañ, ar C'hrist Jezuz.

Chomit ganeomp, Aotrou, alleluia, alleluia.
V/- Rak dija emañ an deiz war e ziskar, alleluia, alleluia.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Tridomp gant al levez, rentomp gloar d'an Aotrou: rak setu ma ren evel roue, alleluia.

Pedomp Jezuz hor Salver en deus distrujet ar marv dre e groaz, ha lavaromp dezhañ:

R/- Hor salvit, Salver adsavet da vev.

- Aotrou Jezuz, an dour hag ar gwad o deus strinket eus ho kostez digor evit ma vefe ganet hoc'h Iliz, grit dezhi bezañ ho Fried santel ha dinamm. R/
- Pastor an Iliz, fiziet hoc'h eus e Pêr ho tropell da ziwall, efñ hag a anzave ho karantez: roit d'ar Fab... karantez ha gred an abostol. R/

Merc'her amzer Fask

- C'hwi hag hoc'h eus karget a besked rouedoù ho tiskibled, kasit labourerion da gander'hel o labour a ebestel. R/
- C'hwi hag a aczas evithoc'h ebestel bara ha pesked war ribl ar mor, na lezit ket hor breudeur da vervel dre hor fact gant an naon. R/
- Jezuz, Adam nevez, hag a ro ar vuhez, lakit hor breudeur tremenet da vezañ heñvel ouzhoc'h evit m'eo devo parzhe joa ho Rouantelezh. R/

Kempedenn (P. 184)

MERC'HER AMZER FASK

OFIS AR BEURE

Sizhun 2 - 6

- S. 76 Ant.: An dourioù ho kwelas, Aotrou Doue, hag ho Pobl a voe renet ganeoc'h a-dreuz d'ar mor, alleluia.
- Kant. 1 Sam 2, 1-10 (P. 41): An Aotrou a ramervel ha bevañ, alleluia.
- S. 96 Ant.: Savet eo ar sklerijenn evit an dud just, youc'hit gant levez, all.

Sizhun 3 - 7

- S. 85 Ant.: An holl bobloù a zeuio da azeuliñ an Aotrou, alleluia.
- Kant. Iz 33, 13-18 (P. 65): Arvestiñ a ray hon daculagad ouzh ar Roue en e gaerder, alleluia.
- S. 97 Ant.: An holl dud a welo silvidigezh Doue, alleluia.

Sizhun 4

- S. 107 Ant.: Savit, o Doue, a-us d'an neñvoù, alleluia.
- Kant. Iz 61, 10-62, 5 (P. 88): An Aotrou a ra bleuniañ dirak ar broadoù ar justis hag ar veuleudi, alleluia.
- S. 143 Ant.: An Aotrou eo va Salver, va dieuber, alleluia.

Sizhun 5

- S. 35 Ant.: Ennoc'h, Aotrou, emañ feunteun ar vuhez, alleluia.
- Kant. Ydt 16, 13-17 (P. 16): Kas a rit ho Spered hag e teu pep tra da vezañ nevez, alleluia.
- S. 46 Ant.: Doue a zo deuet da vezañ Roue ar broadoù, alleluia.

Komz Doue Kol 2, 9.10.12 Ennañ emañ o chom hag o kemer korf holl leunder an Doueelezh, en doare m'hoc'h eus pep leunder ennañ-eh. Rak laket oc'h bet er bez a-unan gantañ dre ar vadeziant, ha gantañ ivez oc'h adsavet da vev dre grediñ e nerzh galloudus Doue en deus e zihunet a-douez ar re varv.

Dasorc'het en gwirionez eo an Aotrou, alleluia, alleluia.
 V/- En em ziskouezet eo da Simon, alleluia, alleluia.
 V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Adsavet eo an Aotrou d'ar vuhez hag hon dasprenet en deus gant e wad, hol leuniañ a ra gant e sklerijenn, alleluia.
 Pedomp Doue an Tad peurbadel en deus dieubet Jezuz diouzh an droug hag ar marv, ha lavaromp dezhañ:

R/- Hon Tad, ho pet truez ouzhimp.

- Aotrou, Tad ar sklerijenn, gant anaoudegezh-vate talc'homp soñj ac'hanoc'h, ~~mak~~ hor gervel a rit d'ho sklerijenn evit degemer ho trugarez. R/

Merc'her amzer Fask

- Aotrou, labourit ennomp gant ho Spered a ro glanded ha nerzh, evit ma klaskimp gwellaat stad ar vuhez e-touez an dud. R/
- Aotrou, dre labour an deiz-mañ hol lakit da c'honit ho krad-vat evit hor breudour, kreskit ennomp an emrousted ha grit dimp dilezel an emvrud. R/
- Aotrou, evit ma kavimp hor joa o veuliñ ac'hanoc'h en ur dremen an deiz-mañ el levez, hol leugnita-vremañ gant ho trugarez. R/

Kempedenn Merc'her 2

Bep bloaz e lidomp ar misterioù o deus adlakat an den en e renk uhel, evel ma oa er penn-kentañ, ha rentet dezhañ an esperañs da sevel a varv da vev, a-greiz-kalon eta, Aotrou Doue, e c'houlennomp digant ho madelezh ar c'hras da garout dalc'hmatac'ht ar pezh emamp o lidañ gant feiz. Dre Jezuz Krist...

Merc'her 3

Selaouit, ni ho ped, pedennoù ho familh, teurvezit stouñ etrezek enni, hag ar re hoc'h eus roet dezho gras ar feiz, plijet ganeoc'h ivez reiñ dezho lod en Adsav ho Mab d'ar vuhez. Eh a ren...

Merc'her 4

Aotrou Doue, c'hwi hag a zo buhez an dud fidel, gloar an dud izel, evurusted an dud santel, troit ho selloù gant madelezh war-zu goulennoù ar re ho ped a wir galon: peogwir emañ en o c'hreiz ar c'hoant bras d'ar madoù kaer hoc'h eus promet gant largentez, roit o gwalc'h dezho e pep amzer, eus ho pinvidigezh. Dre Jezuz K...

Merc'her 5

Aotrou Doue, c'hwi a blij deoc'h ar santelezh hag a rent anezhi en-dro, renit war-zu ennoc'h kalonoù ho servijerion, ha na lezit ket ar re hoc'h eus tennet eus teñvalijenn an difeiz da bellaat biken diouzh sklerijenn ho kwirionez. Dre Jezuz Krist...

Merc'her 6

Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, reiñ dimp hor goulen: evel ma 'z enoromp dre lidoù santel gouelioù Adsav ho Mab d'ar vuhez, grit ma c'hellimp bezañ leun a levez gant hoc'h holl Sent, pa zeuio endro. Eh a ren...

Merc'her 7

Doue leun a drugarez, teurvezit reiñ d'hoc'h Iliz hag a zo bet dastumet asamblez gant ar Spered Santel, ar c'hras d'ho servijañ a-greiz-kalon, ha da vezañ unanet hoc'h-unan e skoum ar gwir garantez. Dre Jezuz Krist...

OFIS KREISTEIZ

Komz Doue Ob 2, 32.36 Hennezh, Jezuz, eo an hini en deus Doue laket da adsevel da vev, ar pezh ez omp ni-holl an testoù anezhañ. Ra ouvezo eta holl diegzh Israel en deus Doue graet Jezuz, Aotrou ha Krist, ar Jezuz-se hoc'h eus c'hwi staget ouzh ar Gouz.

V/- En hoc'h Adsav d'ar vuhez, o Krist, alleluia.
 R/- En em laouena an neñv hag an douar, alleluia.

OFIS AN ABARDAEZ

Sizhun 2 - 6

- S. 61 Ant.: Bezit dinec'h, lakit ennon ho fiziañs, alleluia.
- S. 66 - : Ar bobloù, ra youc'hint evidoc'h, Aotrou, ha ra zegemerint gant joa ho silvidigezh, alleluia.

Kant. Kol 1, 12-20 (P. 42): E veurdez en em astenn war an neñvoù, an douar a zo leun gant e c'hloar, alleluia.

Sizhun 3 - 7

S. 126 Ant.: Pe o vevañ pe o vervel ez eo evit an Aotrou, alleluia.
S. 130 - : Laka da fiziañs, Israel, en Aotrou, alleluia.
Kant. Kol (P. 42)

Sizhun 4

S. 138 I Ant.: Ken splann eo an noz hag an deiz, alleluia.
- II - : Anaout a ran va deñved ha va deñved an anav, alleluia.
Kant. Kol (P. 42)

Sizhun 5

S. 26 I Ant.: Galloud an Aotrou en deus uhelsavet anezhañ evit e ziaze-zañ evel Penn-rener ha Salver, alleluia.
- II - : Sur one welin madelezh an Aotrou war zouar ar re vev, alleluia.
Kant. Kol (P. 42)

Komz Doue 1 P 2, 4-5 Tostait outañ, rak eñ eo ar maen-bev, bet distaclet gant an dud, hogen an hini dibabet ha prizius da sell Doue. Ha c'hwi ivez, evel mein bev, bezit danvez an Templ speredel a zo o sevel, deuit da vezañ ur velegiezh santel evit kinnig sakrifisoù plijus da Zoue dre Jezuz Krist.

Chomit ganimp, Aotrou, alleluia, alleluia.
V/- Rak dija emañ an deiz war e ziskar, alleluia, alleluia.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Ar C'hrist hon Aotrou, gwerzhet evit hor pec'hedoù, a zo adsevel d'ar vuhez evit hor rentañ santel, alleluia.

Pedomp an Doue hollc'halloudek en deus rentet dimp ar vuhez en e Vab dasorc'het, ha lavaromp dezhañ:
R/- Hol leugnit gant ho trugarez.

- Doue hon Tadoù, c'hwi hag a re gloar d'ho Mab Jezuz oc'h adsevel anezhañ a-douez ar re varv, kemmit hor c'halonoù evit ar vuhez peurbadus. R/
- Hon dogaset hoc'h eus en-dro, goude ma camp kollet, davet Pastor ha mesaer hon eneoù: hor mirit fidel dindan renerezh Eskibion an Iliz. R/
- C'hwi hag hoc'h eus dibabet diskibled kentañ ho Mab e pobl ar Yuzevion, diskouezet da vugale Israel hoc'h eus sevenet ar bromesa graet d'o zadoù. R/
- Ho pet soñj eus hor breudeur dilezet, eus an intañvezed, eus an emzivaded, eus ar priedoù disrannet: na lezit ket da vezañ digenvez ar re en deus ho Mab adunvanet dre e varv. R/
- C'hwi hag hoc'h eus galvet davedoc'h Stefan hag a wele Jezuz azezet a-zehou deoc'h, degemerit hor breudeur o deus esperet enoc'h er feiz hag er garantez. R/

Kempedenn (P. 187)

=====

OPIS AR BEURE

Sizhun 2 - 6

S. 70 Ant.: Me eo ar winienn ha c'hwi ar barroù, alleluia.
Kant. Iz 12, 1-6 (P. 44): Gant joa tennit ar vuhez eus andon ar Salver, allel.
S. 80 Ant.: Doue a vag anezho gant flour ha gwinizh, alleluia, hag a ro o gwalc'h dezho eus mel ar roc'h, alleluia.

Sizhun 3 - 7

S. 86 Ant.: Jeruzalem, Kêr Doue, ennout emañ hor gwrizioù, alleluia.
Kant. Iz 40, 10-17 (P. 69): Evel ur mesaer en deus dasstumet zefved, allel.
S. 98 Ant.: Galloudus eo an Aotrou, mestr eo war ar pobloù, alleluia.

Sizhun 4

S. 142 Ant.: Daskorit din ar vuhez en abeg d'hoc'h Anv, alleluia.
Kant. Iz 66, 10-14 (P. 92): Hop dulo ho kwelin hag ho kalon a drido, allel.
S. 146 Ant.: An Aotrou a sav Jeruzalem hag a bare ar c'halonoù brevet, alleluia.

Sizhun 5

S. 56 Ant.: Savit, o Doue, a-us d'an neñvoù, alleluia.
Kant. Yr 31, 10-14 (P. 20): An Aotrou en deus salvet e bobl, alleluia.
S. 47 Ant.: An Aotrou a zo karget a enor e Kêr hon Doue, alleluia.

Komz Doue Rm 6, 8-11

Mar domp parvet war un dro gant ar C'hrist, kredomp hor bo buhez ivez war un dro gantañ, rak, gouvezomp mat an dra-se, ar C'hrist adsavet a-douez ar re varv ne varvo ken hag ar Marv n'en devo ken galloud warnañ. E Varv e voe ur marv d'ar pec'hed, ur wech evit mat, met e vuhez a zo ur vuhez evit Doue. Ha c'hwi ivez, en hevelep doare, en em sellit evel marv d'ar pec'hed, met o vevañ evit Doue er C'hrist Jezuz.

Dasorc'het en gwirionez eo an Aotrou, alleluia, alleluia.
V/- Er em ziskouezet eo da Simon, alleluia, alleluia.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Pobl dibabet, embannit meuleudioù an hini en deus ho kalvet eus an deñvalijenn d'e sklerijenn vurzhodus, alleluia.

Pedomp Jezuz adsavet d'ar vuhez ha n'ehan ket da bediñ evidomp, ha lavaromp dezhañ:
R/- Salvit ar bobl hoc'h eus dasprenet, Aotrou.

- Aotrou Jezuz, gant ar goumoulenn skedus hoc'h eus sklerijennet ho pobl er gouelec'h: dre hoc'h adsav d'ar vuhez bezit hiziv evidomp sklerijenn ar vuhez. R/
- Dre vouezh Moizez hoc'h eus keleñnet ho pobl war ar menez: dre hoc'h adsav d'ar vuhez bezit hiziv evidomp ar Gomz a vuhez. R/
- Gant doneson ar manna hoc'h eus maget ho pobl en he beaj, dre hoc'h adsav d'ar vuhez bezit hiziv evidomp ar bara a vuhez. R/
- Gant an dour strinket eus ar roc'h hoc'h eus roet da evañ d'ho pobl, dre hoc'h adsav d'ar vuhez roit dimp hiziv ar Spered a vuhez. R/

Kempedenn Yaou 2

Doue leun a drugarez, lakit ar misterioù a enoromp gant gouelioù-Pask da zougen frouezh evidomp e pep amzer. Dre Jezuz Krist...

Yaou 3

Doue hollc'halloudek ha peurbadel, grit dimp santout ho garantez muioc'h eget

Yaou amzer Fask

kustum en deizioù-mañ dreist-holl m'hon eus, gant sikour ho kras, hoc'h anavezet gwelloc'h, evit ma c'hellimp, pa 'z omp bet tennet ganeoc'h eus teñvalijenn ar gaou, en em stagañ ouzh ar wirionez hoc'h eus diskuliet dimp. Dre Jezuz Krist...

Yaou 4 Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus laket hon natur-den en ur renk uheloc'h eget na oa bet da gentañ, plijet ganeoc'h tourl ho selloù war vister dispar ho karantez, hag ar re hoc'h eus prizet reñf dezho buhez nevez dre Sakramant an eil c'haneidigezh, mirit bepred enno donezonnoù ho kras hag ho pennozh. Dre Jezuz Krist...

Yaou 5 Aotrou Doue, hon tennet hoc'h eus gant ho kras eus ar pec'hed hag eus ar reuzeudigezh evit reñf dimp ar santelezh hag an evurusted, skoazelit ar re hoc'h eus leuniet gant ho tonezonnoù evit ma kendalc'ho ar re a zo bet rentet just dre ar feiz, d'ho servijañ betek ar fin. Dre Jezuz Krist...

Yaou 6 Aotrou Doue, fellet ez eus bet deoc'h reñf d'ho pobl lod en ho silvidigezh, plijet ganeoc'h eta, ni ho ped, reñf dimp ar c'hras d'ho trugarekaat e pep amzer evit Adsav hor Salver d'ar vuhez. Eñ a ren.

Yaou 7 Ho Spered, ni ho ped, Aotrou Doue, ra skuilho enomp gant nerzh e zonezonnoù, evit reñf dimp ur spered a blizo deoc'h, hag evit hol lakaat gant karantez e stad da heuliañ ho polontez. Dre Jezuz Krist...

OPIS KREISTEIZ

Komz Doue Ga 3, 27-28 C'hwi-holl hag a zo bet badezet er C'hrist, hoc'h eus gwisket ar C'hrist warnoc'h. N'eus mui-ken na Yuzev na Gresian, n'eus mui-ken na sklavour na den en e frankiz, n'eus mui-ken na gwaz na maouez, rak c'hwi-holl n'oc'h ken nemet unan er C'hrist Jezuz.

V/- Dasorc'het en gwirionez eo an Aotrou, alleluia.
R/- En em ziskouezet eo da Simon, alleluia.

(Sizhun 2 - 6) OPIS AN ABARDAEZ

S. 71 I Ant.: Doue en deus graet anezhañ bamer ar re vev hag ar re varv, all.
- II - : Graet em eus ac'hanout sklerijenn ar pobloù, va silvidigezh betek dibennol an douar, alleluia.

Kant. Disk 11, 17-18. 12, 10-12 (P. 46): Krist dec'h, hiziv, an hevelep hini da viken, alleluia.

Sizhun 3 - 7

S. 131 I Ant.: An Aotrou en deus roet dezhañ tron David, alleluia.
- II - : Rouantelezh David a zo sevenet, bennozh da Zoue, alleluia.

Kant. Disk (P. 46): Ho trugarekaat a reomp, o Doue, alleluia.

Sizhun 4

S. 143 I Ant.: An Aotrou eo va Salver, va dieuber, alleluia.
- II - : Bennozh da Zoue a ro dimp an Trec'h dre ar C'hrist, hon Aotrou.

Kant. Disk (P. 46): Krist dec'h, hiziv, an hevelep hini da viken, allel. Al.

Sizhun 5

S. 29 Ant.: Troet hoc'h eus hor c'hañv er joa, alleluia.
S. 31 - : Adkavethon eus ar peoc'h gant Doue dre varve Vab, alleluia.

Kant. Disk (P. 46): Ho trugarekaat a reomp, o Doue, alleluia.

Yaou - Gwener amzer Fask

Komz Doue He 5, 8-9

Petra bennak ma oa Mab, en deus desket dre ar poanioù gouzañvet petra eo ar sentidigezh, ha bet laket evel-se da vezañ parfet, eo deut da vezañ evit ar re a sent outañ mammenn a silvidigezh peurbadel, diskleriet m'eo bet gant Doue arc'hveleg hervez urzh Malkisedek.

Chomit ganimp, Aotrou, alleluia, alleluia.
V/- Rak dija emañ an deiz war e ziskar, alleluia, alleluia.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Setuma 'z on ganeoc'h, bemdez, betek fin ar bed, alleluia.

Pedomp Jezuz hor Salver en deus distrujet ar marv dre e Groaz, ha lavaromp dezhañ:

R/- Deut d'hor sikour, Jezuz dasorc'het.

- Aotrou Jezuz, dre hoc'h adsav d'ar vuhez ez oc'h antreet er santual peurbadel, hor renit ganeoc'h da c'hloar an Tad. R/

- Dre hoc'h adsav d'ar vuhez hoc'h eus kreñvaet feiz ho tiskibled kaset ganeoc'h dre ar bed: ra vezo an eskibien hag ar veleion kannaded fidel an Aviel. R/

- Dre hoc'h adsav d'ar vuhez ez oc'h deutet da vezañ hor peoc'h hag hon unvanidigezh, roit d'an dud vadezet leunder ar feiz hag ar garantez. R/

- Dre hoc'h adsav d'ar vuhez hoc'h eus pareet an den seizet ha rentet dezhañ e nerzh: sellit gant trugarez ouzh hor re glañv ha diskouezet enno ho kloar. R/

- Dre hoc'h adsav d'ar vuhez ez oc'h deutet da vezañ preveudioù hor buhez hag hon dasorc'hidigezh, roit lod en ho kloar d'ar re o deus esperet ennoc'h. R/

GWENER ANZER FASK

OPIS AR BEURE

Sizhun 2 - 6

S. 50 Ant.: Kemer fiziañs, vamab, distaoleteo dit da beo'hedoù, alleluia.
Kant. Hk 3, 2-4, 13-19 (P. 47) Gant ho Krist ez oc'h aet er-maez evit silvidigezh ho Pobl, alleluia.

S. 147 Ant.: Jeruzalem, meul da Zoue, dit e ro ar peoc'h, alleluia.

Sizhun 3 - 7

S. 50 Ant.: Va gwalc'hit, Aotrou, va glanait eus va feo'hed, alleluia.
Kant. Yr 14, 17-21 (P. 72): Ar C'hrist, en e gorf, en deus douget hor peo'hedoù,
S. 99 Ant.: Kejit gant an Aotrou, er joa, alleluia. allel.

Sizhun 4

S. 50 Ant.: En em ginniget en deus an Aotrou, lazhiad evit hor peo'hedoù, all.
Kant. Tt 13, 10-15, 17-19 (P. 95): Jeruzalem, Kêr Doue, skedif a ri gant ur sklerijenn sebezus, alleluia.

S. 147 Ant.: Gwellet em eus Jeruzalem, ar Gêr nevez, o tiskenn eus an neñv, allel.

Sizhun 5

S. 50 Ant.: O Jezuz, ho pet soñj ac'hanon pa zeufot en ho Rouantelezh, all.
Kant. Iz 45, 15-26 (P. 23): Evit gwir, c'hwi eo an Doue kuzhet, Doue Israel, Salver, alleluia.

Gwener amzer Fask

S. 99 Ant.: Meulit an Aotrou gant joa, alleluia.

Komz Doue Tt 3,5-7 Doue en deus hor salvet en ur reif dimp dre ar vadeziant bezañ ganet d'ar vuhez nevez dre welc'hadenn ar Spered Santel. Ar Spered-se hag en deus Doue skullhet anezhañ warnomp a-builh, dre Jezuz Krist hor Salver. Ha neuze adreizhet gant gras ar C'hrist, e teuomp da vezañ en esperañs heritourion ar vuhez peurbadus.

Dasorc'het en gwirionez eo an Aotrou, alleluia, alleluia. V/- En em ziskouezet eo da Simon, alleluia, alleluia. V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Ar C'hrist a gar ac'hanomp, hor gwalc'het en deus eus hor pec'hedoù gant e wad ha graet ac'hanomp Rouantelezh ha beleion e Dad, alleluia.

Pedomp Doue an Tad peurbadel en deus dieubet Jezuz diouzh an droug hag ar marv, ha lavaromp dezhañ:

R/- Ra zeuic warnomp ho trugarez.

- Tad santel, c'hwi hag hoc'h eus degemeret sakrifis ho Mab ouzh hen adsevel a-douez ar re varv, degemerit profadenn an deiz-mañ hag hor renit d'ar vuhez. R/

- En ho madelezh, benniget hon oberoù en deiz-mañ, grit dimp klask hep ehan ho Klod ha santelidigezh an holl. R/

- Ra servijo hiziv hol labour d'an holl dud, ha grit dimp tizhout drezañ ho Rouantelezh. R/

- Lakit hon daoulagad hag hor c'halon da deurel evezh ouzh hor breudeur: ma vezimp e servij an eil egile. R/

Kempedenn Gwener 2 Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus divizet e savfe ho Mab ar Groaz evidomp, evit hon diframañ diouzh galloud an enebour, plijet ganeoc'h eta reif dimp-ni ho servijerion, ar c'hras da gacut lod en e Adsav d'ar vuhez. Dre Jezuz Krist...

Gwener 3 Ni ho ped, Doue hollc'halloudek, p'hon eus ar c'hras da anavezout adsav hor Salver d'ar vuhez, grit dimp eta, dre garantez ar Spered Santel, adsevel d'ur vuhez nevez. Dre Jezuz Krist...

Gwener 4 Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus roet dimp ar frankiz hag ar silvidigezh, selaouit monezhioù ar re a zo ouzh ho pediñ, hag ar re hoc'h eus prenet dre wad ho Mab skullhet war ar Groaz, grit dezho bevañ drezoc'h ha kacut ennoc'h da viken ar gwir yec'hed. Dre J.K...

Gwener 5 Roit dimp hor goulem, ni ho ped, Aotrou Doue, tra m'emaomp o lidañ misterioù santel Fask, lakit ac'hanomp e stad a zere outo, ma vint gant o nerzh peurbadus difenn ha silvidigezh evidomp. Dre Jezuz K...

Gwener 6 Aotrou Doue, dre adsav an Aotrou Krist, e lakit ac'hanomp en-dro e stad da c'honit ar vuhez peurbadus, savit eta hor spered war-zu an Hini a zo azezet en tu-dehou deoc'h, ha pa zistroio hor Salver e-kreiz e c'hloar, grit d'ar re hoc'h eus laketaet da vezañ adganet dre ar vadeziant gwiskañ an divarvelezh evurus. Dre Jezuz Krist...

Gwener amzer Fask

Gwener 7 Aotrou Doue, digoret hoc'h eus dimp dor ar beurbadelezh en ur reif gloar d'ho Mab Jezuz Krist, hag en ur zegas sklerijenn ar Spered Santel, ni ho ped, pa 'z omp lodet en un donezon ken kaer, grit ma 'z aio hon devosion war wellaat, ha ma 'z aio hor feiz ivez war greskiñ. Dre Jezuz Krist...

OPIS KREISTEIZ

Komz Doue 1 Kor 12,13 Ni holl ivez a zo bet badezet en hevelep Spered unan, evit dont d'ober ur c'horf hepken, Yuzevion ha Gresianed, sklavourion ha tud en o frankiz.

V/- An diskibled a oa leun a joa, alleluia. R/- O welout an Aotrou, alleluia.

OPIS AN ABARDAEZ

Sizhun 2 - 6

S. 120 Ant.: Evel ma tiwaller an ibil-lagad, evel ^{tiwaller} Doue e bobl, alleluia. S. 114 - : Va dieubet en deus an Aotrou diouzh entrez ar marv, alleluia. Kant. Disk 15,3-4 (P. 25): An Aotrou eo va nerzh ha va c'han, eñ am laka dieub, alleluia.

Sizhun 3 - 7

S. 134 I Ant.: Me eo an Aotrou, da Salver, da Zasprenner, alleluia. II - : Jezuz Krist, an hini galloudus nemetañ, a zo Roue ar rouaned hag Aotrou an aotrenion, alleluia. Kant. Disk (P. 25): Kanomp d'an Aotrou, dispar eo e drec'h, alleluia.

Sizhun 4

S. 144 I Ant.: Kement en deus Doue karet ar bed m'en deus roet dezhañ e Vab, all. II - : Pep- enor ha pep gloar da Roue ar c'hantvedoù, divarvel ha diwelus, alleluia. Kant. Disk (P. 25): An Aotrou eo va nerzh ha va c'han, eñ am laka dieub, alleluia.

Sizhun 5

S. 40 Ant.: Evit reif dimp e binvidigezh, an Aotrou a zo en em c'hraet paour, alleluia. S. 45 - : Ur stêr a vuhez a laouena kêr, alleluia. Kant. Disk (P. 25): Bras eo hoc'h oberoù, Aotrou, alleluia.

Komz Doue 1 P 3,18-22 Ar C'hrist e-uman a zo marvet ue wechevit mat evit ar pec'hedoù, eñ dibec'h evit ar bec'herion, evit hon degas da Zoue; ha bet laketaet d'ar marv en e gorf eo bet bevaet en e spered. Eñ hag a zo azezet en tu-dehou da Zoue, goude pignat d'an neñvoù ha sujañ dindanañ an Aelez, ar Priñselezhioù hag ar Galloudegezhioù.

Chomit ganimp, Aotrou, alleluia, alleluia. V/- Rak dija emañ an deiz war e ziskar, alleluia, alleluia. V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: An hini a oa bet kroazstaget, setu eñ dasorc'het hag hon dasprenet en deus, alleluia.

Pedomp Jezuz hor Salver en deus distrujet ar marv dre e Groaz, ha lavaromp dezhañ:

R/- Lakit ennomp, Aotrou, ur spered nevez.

- Jezuz hor Salver, bet oc'h lakat d'ar marv en ho korf, met addeuet oc'h bev dre ar Spered: peogwir ez omp marv d'ar pec'hed, grit dimp bevañ dre ar Spered. R/
- Kaset hoc'h eus ho diskibled da brezeg ar C'heloù-mat d'an holl grouadurion, ar re a embann an Aviel grit dezho bevañ dre ar Spered. R/
- Pep galloud a zo bet roet deoc'h en neñv ha war an douar evit reiñ testi d'ar wirionez: mirit e gwirionez ar Spered ar re a c'houarn ac'hanomp. R/
- An holl draoù a rit nevez hag e lavarit dimp gedal gant evezh ho Rouantelezh, ar gortoz-se eus ar bed nevez da lakay da greskiñ ennomp ar soursi da urzhiañ an douar. R/
- Diskennet oc'h d'an ifernioù evit dougen di keloù-mat ar silvidigezh, bezit esperañs ha levenez hor breudeur tremenet. R/

Kempedenn (P. 192)

SADORN ANZER FASK

OPIS AR DEURE

Sizhun 2 - 6

S. 91 Ant.: Dre hoc'h oberoù, Aotrou, hoc'h eus hol leuniet a joa, all.

Kant. Adl 32,1-12 (P. 51): Me eo a ra mervel ha bevañ, me eo a sko hag a bare, alleluia.

S. 6 Ant.: Kurunemañ a ritho Krist a c'halloud hag a enor, alleluia.

Sizhun 3 - 7

S. 118, 145-152 Ant.: Ar c'homzoù am eus roet a zo spered ha buhez, alleluia.

Kant. Fur 9,1-12 (P. 75): Roit din ar Furnez a zeu eus ho kichen, alleluia.

S. 116 Ant.: Me eo an Hent, ar Wirionez, ar Vuhez, alleluia.

Sizhun 4

S. 91 Ant.: Burzhudoù hoc'h oberoù, Aotrou, alleluia.

Kant. Ez 36,24-28 (P. 98): Skuilh a rin warnoc'h un dour glan, alleluia.

S. 8 Ant.: Pep tra 'zo deoc'h, met c'hwi a zo d'ar C'hrist hag ar C'hrist da Zoue, alleluia.

Sizhun 5

S. 118, 145-152 Ant.: Roit din ar vuhez hervez ho karantez, alleluia.

Kant. Ern 15 (P. 26): An trec'h war al Loen o deus bet en ur ganañ kantik Moizez ha kantik an Oan, alleluia.

S. 116 Ant.: Krefiv eo e garantez evidomp, alleluia.

Komz Doue 1 Kor 15,20-22

Ar C'hrist evit gwir a zo dihnet da vev a-douez ar re varv, an hini kentañ eus ar re gousket. Rak gant un den eo dauet ar marv, ha gant un dene teu adsavidigezh ar re varv. Evel ma varv an holl en Adam, evel-se ivez eo er C'hrist ec'h adkavo an holl ar vuhez.

Dasorc'het en gwirionez eo an Aotrou, alleluia, alleluia.
V/- En em ziskouezet eo da Simon, alleluia, alleluia.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Gant youc'hadennoù a levenez, embannit ar C'heloù, kasit anezhañ betek penn ar bed: an Aotrou en deus dieubet e bobl, all.
Pedomp Jezuz adsavet da vev ha n'ehan ket da bediñ evidomp ha lavaromp dezhañ:

R/- Pastor peurbadel, salvit ac'hanomp.

- Pastor peurbadel, sellit ouzh ho pobl o tihun d'un deiz nevez, lakit-hi d'en em vagañ gant ho komz hag ho para. R/
- N'hol lezit ket da vout dedennet gant ar bleiz lonker pe ar goprad tec'her: bezit ar pastor-mat ma selaouimp ar vouezh anezhañ. R/
- Labourat a rit er re a brezeg hoc'h Anv hag ar Gornz a harpit: ra vimp hiziv testoù kalonek hoc'h adsav d'ar vuhez. R/
- Grit dimp skarzhañ kuit tristidigezh ar pec'hed ha c'hoantaat ar vuhez: bezit hoc'h-unan ar joa na vezo ket lemet diganimp. R/

Kempedenn Sadorn 2

Aotrou Doue, c'hwi eo hoc'h eus hon dasprenet ha graet ganimp ho pugale, taolit eta ur sell a vadelezh war ho pugale garet, evit m'o devezo, pa gredont e Jezuz Krist, ar gwir frankiz hag ivez ar vuhez peurbadus. Dre Jezuz Krist...

Sadorn 3

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus roet dre zour ar vadeziant ur vuhez nevez d'ar re a gred ennoc'h, plijet ganeoc'h gwarezin ar re a zo bet ganet a-nevez en Aotrou Jezuz Krist, en doare ma vint trec'h da holl dagadennoù ar falskredennoù ha ma vint fidel gras ho pennozh. Dre Jezuz Krist...

Sadorn 4

Doue hollc'halloudek ha peurbadel, dalc'hit e pep amzer da beurechuiñ ennomp mister Pask, hag ar re a zo bet plijet ganeoc'h reiñ dezho ur vuhez nevez dre ar vadeziant, roit dezho ho sikour hag ho kwarez evit ma tougint frouezh e-laizh ha ma 'z erruint e joaioù ar vuhez peurbadus. Dre Jezuz Krist...

Sadorn 5

Doue hollc'halloudek ha peurbadel, c'hwi hag hoc'h eus prizet reiñ dimp buhez an neñv dre eil c'hamedigezh ar vadeziant, roit ar c'hras, ni ho ped, d'ar re hoc'h eus laket gouest da gaout ar vuhez divarvel, da erruout, hañchet ha renet ganeoc'h, betek ar c'hloar en e leunder. En a ren...

Sadorn 6

Aotrou Doue, pa savas ho Mab d'ar Baradoz, ho poa teurvezet prometin ar Spered Santel d'an Ebstel, selaouit eta hor gouenn, ni ho ped: evel m'o devoa an Ebstel o-unan resevet donezonoù a bep doare d'o siklerijennañ war ar gelennadurezh santel, aotreit dimp ivez ar roadoù speredel. Dre Jezuz Krist...

Sadorn 7

Roit dimp ar c'hras, ni ho ped, Aotrou Doue p'emaomp o klozañ gouelioù Pask, da virout en hor buhez hag en hor stumm-bevañ ar frouezh hon eus kavet enno. Dre Jezuz Krist...

OPIS KREISTEIZ

Komz Doue 2 Tm 2,8-11

Dalc'h soñj eus Jezuz Krist, ganet eus gouenn David, adsavet bev a-douez ar re varv, hervez an Aviel a brezegant; gwir-mat eo ar gomz-mañ: mar domp marv gantañ, gantañ ivez e vovimp.

V/- En hoc'h adsav d'ar vuhez, o Krist, alleluia.
R/- En em laouena an neñv hag an douar, alleluia.

OFIS AN ABARDAEZ

(P. 176)

Y A O U - F A S K

DERO' HENT D'ABARDAEZ

Meulgan
(p. 173)

R/- Aotrou, trec'h oc'h bet war ar marv,
Ha graet hoc'h eus d'ar vuhez skediñ
Er beurbadelezh.

Adsavet eo ar C'hrist a-douez ar re varv, Adsavet eo ar C'hrist a-douez ar re varv,
Preveudi ar re a zo chomet kousket. Ha lonket eo bet ar marv gant ar vuhez!
Trec'h eo ar vuhez war ar marv. R/ Emen, o marv, emañ da drec'h? R/

S. 112 Ant.: Uheloc'h eget an neñvoù emañ gloar an Aotrou, alleluia.
S. 116 - : Pa vin savet 'us an douar e sachin an holl davedon, alleluia.
Kant. Disk 11,17-18;12,10-12 (P. 22): Rouantelezh Doue a zo deuet bremañ
ha galloud e Crist, alleluia.

Komz Doue Ef 2,4-6

Doue hag a zo pinvidik e drugarez, dre ar
garantez vras en deus hor c'haret ganti,
goude ma cAMP marv en abeg d'hor pec'hedoù, en deus adroet dimp ar
vuhez a-unan gant ar C'hrist, rak dre c'hras ez oc'h salvet; a-unan
gantañ en deus hon adsavet da vev hag hon laket da azezañ en neñvoù
a-unan gantañ, ar C'hrist Jezuz.

Savet oc'h e barr an neñvoù, alleluia, alleluia.
V/- Ha sachet ganeoc'h ar re a oa dalc'het er prizen, all., all.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. Tad, roet em eus da anaout hoc'h anv d'ar re hoc'h eus roet
din; evito eo e pedan ha n'eo ket evit ar bed, alleluia.

Pedomp gant joa ar C'hrist azezet en tu dehoù d'an Tad, ha
lavaromp dozhañ:

R/- O Krist, c'hwi a zo roue a c'hloar.

- Roue a c'hloar, c'hwi hag hoc'h eus savet gwander hor horfoù betek
gloar an neñvoù, hon disammit eus hor pec'hedoù hag hol lakit a-
nevez dellezek eus hor buhez gantañ. R/
- Hor feiz da reñf dimp sevel e-kichen an Tad, e-lec'h ma kredomp ez
oc'h savet hoc'h-unan. R/
- C'hwi hag hoc'h eus prometet degas an holl dud davedoc'h, na lezit
nikun ac'hanomp da vout dirannet diouzh ho korf. R/
- C'hwi hag a zo pignet d'an neñv leun a c'hloar, grit dimp bremañ
mont d'ho heul a spered hag a galon.
- C'hwi, gwir Doue, hag a zeuio d'hor barn, grit dimp gallout arves-
tifi ennoc'h ouzh an Aotrou a c'hloar gant hor breudeur tremenet R/

Kempedenn

Doue hollc'halloudek, plijet ganeoc'h kar-
gañ hor c'halonoc'h a levezet santel hag a
anaoudegezh vat, rak hor Salver o pignat d'ar Baradoz a sach
ac'hanomp war e lerc'h, ha peogwir ez eo antreet en ho kloar
evel ar Penn, e ro esperañs dimp-ni hag a zo izili e Gorf, da
vont d'al lec'h m'emañ e-unan. Dre Jezuz Krist...

OFIS AL LENNADENNOU

Meulgan

Doue a ren! Poblou, youc'hit gant levezet, alleluia!
Ar vuhez he deus trec'het war ar marv,
Ar Groaz he deus trec'het war an Ifern!

R/- Alleluia, alleluia, alleluia! Aotrou, meuleudi deoc'h!

Setu deiz an Aotrou, deiz a levezet, alleluia!
Ar vuhez he deus trec'het war ar marv,
Ar Groaz he deus trec'het war an Ifern. R/
Setu ar burzhud graet evidomp gant an Aotrou,
Benniget ra vezo e Anv, alleluia!
Salver Jezuz, karantez veur ar bed! R/

- S. 67 I Ant.: Ur goumoulenn a zeuas d'e guzhat ouzho daoulagad, alleluia.
- II - : Krapat a ra en uhelderioù, kas a ra gantañ ar brizonidi
ha d'an holl e ro e largenteziou, alleluia.
- III - : Testaet oc'h ouzh Sion, Kâr an Doue bev, en ur yodadeg
lidus, alleluia.

V/- An Aotrou a zigoras dezho o spered, alleluia.
R/- Evit ma komprenfent ar Skritur, alleluia.

Lennadenn Ef 4,1-24

An Aotrou a zo pignet d'an uhelderioù ha kaset en deus gantañ
ar re zalc'het. R/- Hor benniget en deus hag hol leugnet gant
e zenezonoù, alleluia, alleluia, alleluia.
Savet eo Doue e-kreiz ar you'hadennoc'h; an Aotrou, gant tregern
ar c'horn. R/- Hor benniget...

Te Deum ha kempedenn

OFIS AR BEURE

Meulgan

- 1 - O Mab an Tad, hor sklerijenn,
Hor buhez hag hor c'hoantadenn,
Doue peurbadel en neñvoù
Ha den e fin an amzerioù.
- 2 - A splander ho tivarvelezh
Oc'h diskennet leun a druez,
D'en em brofañ war ar C'halvar
Ha raskañ pec'hed an douar.
- 3 - O Redemptor hon eneoù,
Diskaret hoc'h eus an Ankoù
Ha gant ho maro dieubet
Ar re 'oa gant Satan dalc'het.
- 4 - Trec'hour pignet d'an uhelañ
E barr ar galloud o tronañ,
Ho madelezh eo a bedomp
Da skuilh nerzh ho Spered ennomp.
- 5 - C'hwi eo an hent hag ar pastor,
D'ar re ho kar o gwir deñzor,
Bezit amañ hol levezet,
Hag hor gloar er beurbadelezh. Amen.

S. 62 Ant.: Antreet eo ar C'hrist er santual; glanaet eus hor pec'hedoù,
lidomp an Doue bev, alleluia.
Kant. Dn (P. 6): D'an Aotrou uhelsavet er c'hloar, meuleudi peurbadel, all.
S.149 Ant.: Laket en deus pep tra dindan e dreid, alleluia.

Yacou-Fask

Komz Doue He 10,12-14

Ar C'hrist avat, goude bezañ kinniget evit ar pec'hedoù ur sakrifis hep muiken, a zo aet da azezañ evit atav en tu dehou da Zoue, o c'hortoz hiviziken ma vo laket e enebourion da skabell dindan e dreid. Rak dre ur brofadenn hepken en deus peurwellaet da viken ar re santelaet.

Doue a sav e-kreiz ar youc'hadeg, alleluia, alleluia.
V/-An Aotrou, gant tregorn ar c'horn, alleluia, alleluia.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: An neñvoù a zigor o dorjoù: Mab an den, trec'her war ar marv, a ren hor c'hammedoù war hent ar vuhez, alleluia.

Pedomp an Aotrou savet a-us d'an douar hag o sachañ ac'hanomp-holl davetañ, ha lavaromp dezhañ:

R/- O Krist, c'hwi eo Roue ar c'hloar.

- Aotrou Jezuz, Roue a c'hloar, goude bezañ kinniget evit ar pec'hedoù ur sakrifis hep muiken, ez oc'h savet, trec'hour, en tu dehou d'an Tad: Lakit da vezañ parfet da viken ar re hoc'h eus santelaet, R/
- Beleg peurbadel an Englev nevez, bepred bev evit pedif evidomp, salvit ar bobl a bed ac'hanoc'h. R/
- C'hwi hag a zo bet gwelet bev goude ho Pasion hag en em ziskouezet d'ho tiskibled e-pad daou-ugent deiz, kreñvait hor feiz. R/
- C'hwi hag hoc'h eus prometet ar Spered Santel d'an Ebestel evit embann an Aviel betek pennoù pellañ ar bed, dre c'halloud ar Spered kreñvait hon testeni. R/

Kempedenn (P. 197)

OPIS KREISTEIZ

S. 8 Ant.: Azez en tu dehou din, alleluia. Da enebourion a rin dicuto ur skabell d'az treid, alleluia.

S. 18 A ha B

Komz Doue Kol 3,1-2

Mar doc'h adsavet da vev a-gevret gant ar C'hrist, klaskit traoù an nec'h e-

lec'h m'emañ ar C'hrist azezet a-zehou da Zoue. Lakit ho soñj e traoù an neñv ha n'eo ket e traoù an douar.

V/- Uhelveulit Roue ar rouaned, alleluia.
R/- Kanit ur meulgan da Zoue, alleluia.

OPIS AN ABARDAEZ

Meulgan (P. 196)

S. 109 Ant.: Azez en tu dehou din, alleluia. Da enebourion a rin ganto ur skabell d'az treid, alleluia.

Kant. Disk. (P. 22): Heuze en em zigoras Templ Doue Hag e voe gwelet arc'h an Englev, alleluia.

S. 46 Ant.: Ar C'hrist a zo Roue an hollved, alleluia; ho meulganoù hag ho kantikoù d'hen deskiñ dimp, alleluia.

Komz Doue 1 P 3,18,22

Ar C'hrist e-unan a zo marvet ur wech evit mat evit ar pec'hedoù, eñ dibec'h evit ar bec'herion, evit hon degas da Zoue; ha bet laketa d'ar marv en e gorf eo bet bevaet en e spered. Eñ hag a zo azezet en tudehou da Zoue, goude pignat d'an neñvoù ha sujañ dindanañ an Aelez, ar Priñselezhioù hag ar Galloudegezhioù.

Savet oc'h e barr an neñvoù, alleluia, alleluia.
V/- Ha sachet ganeoc'h ar re a oa dalc'het er prison, alleluia, alleluia.

Kant. ar W.: Chom a ran ganeoc'h e-keit ha ma pado ar bed, va gwelout a refot: hag e ouzefot emañ o vevañ gant an Tad, alleluia.
Pedomp gant joa ar C'hrist azezet... (P. 196)

AR PANTEKOST

DERC'HEM'T D'ABARDAEZ

Meulgan (Veni Creator)

- | | |
|--|---|
| 1 - Spered Santel, deut eus an neñv,
Deut en enc ho pugale,
Ma vezo gant ho kras karget
Ar c'halonoù hoc'h eus krouet. | 4 - Roit sklerijenn d'horsperedoù
Ha karantez d'hor c'halonoù:
Distanit hon drouke'hoantegezh
Gant galloud ho puridigezh. |
| 2 - C'hwi 'zo anvet ar Parakled,
Donezon an Uhel-neurbet,
Feunteun a vuhez, karantez,
Sklerijenn, douster, levenez. | 5 - Kasit da bell hon enebour,
Ma vimp e peoc'h gant ho sikour,
Ma c'hellimp gant ho kras bepred
En em ziwall diouzh ar pec'hed. |
| 3 - Stummit gant ho seizh donezon,
Diouzh skour Mab Doue, hor c'halon:
Hag hon dougit, o flamm nerzhus,
D'embann d'ar bed komzoù Jezuz. | 6 - Roit dimp anavout ho Treinded,
An Tad, ar Mab, ha c'hwi Spered,
Kevre santel a garantez
Ha skoulm didorr a levenez. |
| 7 - Bezit meulet, Krouer ar bed,
Dre Jezuz, ho Mab unganet,
A ren gant ar Spered Santel
E buhez ho kloar peurbadel. Amen. | |

Pe:

O Spered, c'hwi hag a ren an holl dud,
Mirit anezho evit gloar an Tad;
O unvanit 'n ho pobl eus an douar,
Ha renit anezho war hent ar Rouantelezh.

R/- Hor sturiet war hentoù an douar,
Hor renit davet an dud hor breudeur.

O Spered, c'hwi hag a c'hwez war ar bed,
Hol leskit gant ho flamm ken lugernus,
Glanait hon oberoù rouzeudik,
Hor renit e-lec'h ma fonnusa gras ar C'hrist. R/

O Spered, c'hwi hag a ro ar reizhder,
Grit dimp stoum a-onap d'ar gasoni;
Hol lakit da zifenn an dud a boan,
Hor renit war-zu ar beorion 'zo hoc'h Iliz. R/

S. 112 Ant.: Pa zeuas ar Pantekost, an diskibled, bodet holl a-gevret, a bede Doue, alleluia.

S. 146 - : An Aotrou, hiziv, a vod e Iliz, alleluia.

Kant. Disk. (P. 25): Deuet eus an holl vroioù e klevent an Ebestel oc'h embann oberoù Doue, alleluia.

Pantekost

Komz Doue Rm 8,10-11

Mar demañ ar C'hrist ennoc'h, ha goude
ma vefe ho korf tra a varv en abeg d'ar
pec'hed, ho spered en deus buhez en abeg d'ar reizhder. Mar demañ o
chom ennoc'h Spered an Hini hag en deus dihunet Jezuz a-douez ar re
varv, neuze an hevelep hini hag en deus dasoro'het Jezuz a advevo
ivez ho korfoù marvel, dre e Spered o chom ennoc'h.

Spered an Aotrou a leugn an hollved, alleluia, alleluia.
V/- Gouzout a ra pep lavar, eñ hag a zalc'h ennañ pep tra,
alleluia, alleluia.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Deuit, Spered Santel! Deuit e-barzh kalon ho fideled! ma vint
lesket ouzh tan ho karantez, alleluia, alleluia.

Pedomp Doue an Tad a ro buhez hep chan d'an Iliz dre zonezon
ar Spered, ha lavaromp dezhañ gant joa:

R/- Ra nevesao ar Spered an holl draoù.

- Aotrou, hon Doue, Tad da gement tra 'zo, fellouf a ra deoc'h unvan-
niñ er memes feiz ho pugale dispartiet: sklerijennit ar bed a-bezh
dre c'hras ar Spered. R/
- Dre ar vadeziant er Spered o fell deoc'h bodañ an holl dud a zoug
anv ar C'hrist, d'ar re a gred roit ar c'hras da vezañ unan a galon
hag a ene. R/
- C'hwi a fell deoc'h leuniañ ar bed gant ar Spered: roit d'an dud
ar da ziazezañ er bed-se ar reizhder hag ar peoc'h. R/
- Dre ho Spered e lakit pep tra nevez: pareit ar re glañv, kennerzhit
ar reuzeudion. R/
- Adsavet hoc'h eus ho Mab a-douez ar re varv dre zonezon ar Spered:
roit d'hor c'horfoù marvel ar vuhez ha na dremen ket. R/

Kempedenn

Doue hollc'halloudek ha peurbadel, fellot
ez eus bet deoc'h en ho polontez viste-
rius, e pañfe Mister Pask hanter-kant devezh, grit eta, daoust
ma 'z eo dispartiet ar pobloù, m'en em unano ar yezhoù disheñ-
vel da veuliñ holl war-un-dro hoc'h anv santel. Dre Jezuz Krist.

OFIS AL LENNADENNOU

Neulgan

Digerit ho kalon da c'hwezh Doue,
En ene a douch e lak e vuhez;
Ur bobl a-nevez
'Savo eus an dour
E-lec'h ma plav Spered ho padeziant!
- Digeromp hor c'halon da c'hwezh Doue,
Rak analañ 'ra en hor genou
Iñtioc'h egadomp.
Profit ho korf da deodoù an Tan:
Ra lesko erfin kalon an douar!
Ho tal 'zo merket
Gant sinoù nevet:
Ar gerioù-mañ: Jezuz ha Trec'hadenn.
- Profomp hor c'horf da deodoù an Tan
Evit ma embanno ar mister:
Mister hor gloar-ni.

Pantekost

Roit ho puhez da had ar Spered
Deut da 'n em unaniñ da bep poan:
Rak Korf an Aotrou
'Zo graet a boaniou
An Den mac'het gant an direizhder.
- Roomp hor buhez da had ar Spered
Evit ma roio dimp e feulster
E-barzh e servij.

Troit ho sell ouzh an ostiziad
Hep klask ennoc'h netra nemetañ;
Bevit er Spered
'Vit bout an hini
A zeuio da reiñ e Anv d'ho Tad.
- Troomp hor sell ouzh an ostiziad
Emañ o chom en hor sioulded
Hag hor pedennoù.

- S. 103 I Ant.: Spered an Aotrou a leugn an hollved, alleluia.
- II - : Mezet o c'halon gant gwin ar Spered, an Ebestel a
embanne burzhudoù Doue, alleluia.
- III - : Kas a rit ho Spered hag e teu pep tra da vezañ nevez, all.
V/- Spered an Aotrou a leugn an hollved, alleluia.
R/- Eñ hag a zalc'h pep tra en unanded a anav pep komz, all.

Lennadenn Rm 8,5-27

Spered an Aotrou a ro testeni en hor c'halonoù ez omp bugale
dezhañ. R/- Spered ar Mab hag a c'hazm: Abba, hon Tad, alleluia,
alleluia. Doue ne ro ket ur spered a aon, met Spered a nerzh
hag a garantez. R/

Te Deum

Kempedenn

Grit, ni ho ped, Doue hollc'halloudek,
ma lugerno warnomp splannder ho kloar,
ha ma teuio ho sklerijenn da gommerzhañ dre sked ar Spered
Santel kalonoù ar re a zo bet ganet a-nevez dre ho kras. Dre
Jezuz Krist...

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- Alleluia, Spered an Aotrou a leugn an hollved, deuit,
aseulomp anezhañ.

Neulgan

Doue hag a ro pep tra nevez,
Pa dremen avol ar Spered,
Deuit c'hoazh d'ober ho purzhudoù
En deiz-mañ.
I'hoc'h eus ket santelaet preveudioù
Ar Bobl choazet dre garantez?
Sklaerait an holl dud 'zo ganet
En Iliz.
En aezhern pe e tarzh ar gurun
Ar Spered hor sach en e gan:
Ho mouezh eo, Aotrou, war an douar,
A-vremañ.

Pantekost

S. 62 Ant.: Bus e galon e redo tonnoù dour-bev, alleluia.
Kant. Dn (P. 6): Feunteunioù ha kement a vev en dour, benniget an Aotrou, all.
S. 149 Ant.: Er Spered, dre Jezuz Krist, kanomp da Zoue ur c'han nevez, allel.

Komz Doue Ob 5,30-32 Dous hon Tadoù en deus adsavet Jezuz, hoc'h eus c'hwi laket d'ar marv, dre e stagañ a-ispilh ouzh ar c'head. Hannezh eo en deus Doue uhelsavet, dre nerzh e zorn dehou, ouzh e lakaat da Bennrener ha da Salver, evit reiñ da Israel keuzidigezh ha pardon e boc'hedoù. Ha ni a zo testoù d'an holl draoù-se, ni hag ar Spered Santel en deus roet Doue d'ar re a sent outañ.

Spered an Aotrou a leugn an hollved, alleluia, alleluia.
V/- Gouzout a ra pep lavar, eñ hag a zalc'h ennañ pep tra, alleluia, alleluia.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Un zvel a joa a sav war ar bed; e tan ar Spered, kement teod a embann ar burzhud: Jezuz, Aotrou, alleluia.

Pedomp an Aotrou en deus krouet e Iliz dre zonezon ar Spered ha lavaromp dezhañ gant joa:

R/- Nevesait, Aotrou, dremm an douar.

- Aotrou Jezuz, uhelsavet dre zorn dehou Doue, skuilhet hoc'h eus war ho tiskibled ar Spered Santel deuet eus an Tad: kasit ho Spered ma vo adkrouet an douar. R/
- Pa voe roet gloar deoc'h e trec'h ar Groaz, stêrioù dour bev o deus strinket eus ho kostez: kasit ho Spered ma roio dimp ar vuhez.
- Dre ho c'hwezenn hoc'h eus roet ar Spered d'hoc'h Ebestel evit m'o defe ar galloud da bardoniñ ar pec'hedoù: kasit ho Spered da ziverkañ hor maffoù. R/
- Prometet hoc'h eus e teskfe dimp ar Spered kement tra hag e tegasfe soñj dimp eus ar pezh ho poa lavaret hoc'h-unan: kasit ho Spered da sklerijennañ hor feiz. R/
- Prometet hoc'h eus kas Spered ar wirionez evit ma rofe testeni diwarnoc'h: kasit ho Spered evit ma raio ac'hanomp testoù fidel. R/

Kompedenn Aotrou Doue, dre vister gouel ar Pantekost a reomp en deiz-mañ, e santelait hoc'h Iliz e pep pobl, skuilhit eta dre ar bed-holl donezonoù ar Spered Glan, hag ar pezh ho poa prizet ober er penn-kantañ eus prezegerezh an Aviel, grit anezhañ adarre bremañ e kalon an dud fidel. Dre Jezuz Krist...

OFIS KRISTEIZ

Meulgan

- R/- Kasit dimp ho Spered, Aotrou,
Ma vo adkrouet an douar:
Ha nevesat hor c'halonoù
E kanimp meuleudi d'ho kloar.
- 1 - Spered Santel, en hor c'halon
Deuit gant ho seizh donezon:
Hag entañt ho tud fidel
Gant ho karantez peurbadel. R/
- 2 - Roit dimp sklerijenn ha furnez,
Kuzul ha nerzh bepred nevez,
Lakit skiant ha feiz gwirion,
Doujañs Doue en hor c'halon. R/

S. 117 Ant.: Pa vo roet deoc'h Spered ar wirionez, eñ a roio gloar din, all.

Komz Doue Tt 3,5-7 Doue en deus hor salvet n'eo ket en abeg d'an oberoù a reizhder hor biye graet, met diwar doug e drugarez, en ur reiñ dimp bezañ ganet d'ar vuhez nevez dre welc'hadenn ar Spered Santel. Ar Spered-se hag en deus Doue skuilhet warnomp a-builh, dre Jezuz Krist hor Salver. Ha neuze adreizhet gant gras ar C'hrist, e teuomp da vevañ en esperañs heritourion ar vuhez peurbadus.

V/- Spered an Aotrou a leugn an hollved, alleluia.
R/- Eñ hag a zalc'h an holl draoù unanet, a oar kement a vez lavaret, alleluia.

OFIS AN ABARDAEZ

Meulgan R/- Spered Doue a ziskuilh warnon,
Spered Doue 'n deus va sakret,
Spered Doue en deus va c'haset d'embann ar peoc'h, ar joa.

- 1 - Spered Doue am dibab
'Vit astenn ren an Aotrou Krist e-touez ar broadoù,
Hag evit embann ar C'heloù-mat d'e beorien.
Me 'drid a joa e Doue, va Salver. R/
- 2 - ... 'Vit frealziñ ar c'halonoù gwasket gant ar boan... R/
- 3 - Hag evit degemer ar pacour a ouel hag a boagn... R/
- 4 - ... Evit kemenn d'an holl gras ar frankiz adkavet... R/
- 5 - Hag evit lidañ e c'hloar e-touez an holl bobloù... R/

S. 109 Ant.: Pa vo roet deoc'h Spered ar wirionez, eñ a roio gloar din, alleluia.

S. 113 - : A-daol-drumm e c'hoarvezas o tont eus an neñv un trouz evel hini ur barr-avel, alleluia.

Kant. Disk. (P. 8): Karget gant joaioù ar Spered, rentomp gloar d'hon Doue, alleluia.

Komz Doue Ef 4,3-6 Bezit aketus da virout umander ar Spered dre chom liammet er peoc'h. N'eus nemet ur c'horf, nemet ur Spered, evel kennebeud-all n'eus nemet un esperañs ez oc'h bet galvet da vevañ enni. N'eus nemet un Aotrou, ur feiz, ur vadeziant, n'eus nemet un Doue ha Tad an holl, a zo a-us da bep tra, a labour dre bep tra hag e pep tra.

Spered an Aotrou a leugn an hollved, alleluia, alleluia.
V/- Gouzout a ra pep lavar, eñ hag a zalc'h ennañ pep tra, alleluia, all.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Hiziv, o tegemer Spered ar bromesa, ennañ, karget eus an holl zonezonoù, an Iliz, dre ar bed-holl, a drid a levenez, all.
Pedomp... (P. 200)



A N D R E I N D E D S A N T E L

DERC'HEM'T D'ABARDAEZ

Meulgan

- 1 - Setuma tec'h an heol ruz-mouk, Met c'hwi, Sklerijenn beurbadus, Treinded hag unander evurus, Skuilhit enomp nerzh ho kouloù.
2 - Ho kanet hon eus d'ar mintin, Ha gant an noz c'hoazh ho pedimp, A vourzh dizehan, ni fell dimp, Gant tud an neñv hoc'h adoriñ.
3 - Roitdimp bremañ en ho truez Bevañ bepred eus ho puhez Maz antreimp gant hñn tremen Eklod ho splannder didermen.
4 - Gloar deoc'h-c'hwi, Tri Ferson Doue, Kenkoultz an eil hag egile, Tri Ferson an Doue unan, An Tad, ar Mab, ar Spered Glan.Amen.

S. 112 Ant.: Meuleudi ha gloar peurbadel da Zoue an Tad, d'ar Mab ha d'ar Spered Santel, er c'hantvedoù.

S. 147 - : Pep tra a zeu dioutañ, pep tra a zo drezañ, klod dezhañ er c'hantvedoù.

Kant. Ef 1,3-10 (P. 11): Doue en deus hor galvet da vozañ e vibion dre Jezuz Krist.

Konk Doue Rm 11,33-36

O donder dreist-muzul pinvidigezh, furnezh ha gouiziegezh Doue! Pegen digom-prenus e zivizoù, pegen diveizus e hentoù! Piv en deus anavezot biskoazh soñjoù Doue? Piv a zo bet biskoazh e guzulier? Po c'hoazh, piv en deus roet dezhañ da gentañ, ma vefe dleet en-dro ur paeamant dezhañ. Rak an holl draoù a zo digantañ, drezañ hag evitañ. Dezhañ ar c'hloar da virviken. Amen.

Bras eo hon Doue, ha bras e c'halloud.

V/- D'e skiant n'eus ket a vuzul, ha bras eo e c'halloud.

V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Ra vezo benniget an Dreinded Santel ha disrammus a grou hag a c'houarn pep tra bremañ ha da viken, hag er c'hantvedoù didermen.

Azeulomp an Tad, ar Mab hag ar Spered Santel ha kammoulomp anezho en ur lavarout:

R/- Gloar ha meuleudi d'hon Doue.

- Doue hollc'halloudek ha peurbadel, kasit ho Spered Trealzer war Iliz ho Mab, ma viro anezhi en unander ar wirionez hag ar garantez. R/
- Ho kannaded da embann ar gwir feiz e-touez ar broadoù ha da ren ar gredierion d'ar vadeziant. R/
- Deuit da sikour ar re a c'houzañv heskinerezh evit Anv ho Mab, ar Spered e-unan da gomzo enno. R/
- Ra vo anavezot gant an holl dud an Doue unan en Tri Ferson ha ra vevint er feiz, en esperañs hag er garantez. R/
- Tad ar re vev, c'hwi hag a ren gant ar Mab hag ar Spered Santel, grit d'an Anaon antren e gloar ho Rouantelezh. R/

Kempedenn

Aotrou Doue, Tad hollc'halloudek, c'hwi hag hoc'h eus degaset er bed ho Mab, Verb a wirionez, hag ar Spered a san'elezh, evit sklerijennañ an dud war vister burzhudus ho puhez, roit dimp ar c'hras, ni ho ped, pa ziskleriomp ar gwir feiz, da rentañ gloar d'an Dreinded Santel, ha da azouliñ un Doue hepken leun a c'hloar hag a c'halloud. Dre Jezuz Krist...

An Dreinded Santel

OFIS AL LEHHADEHIOU

Meulgan

C'hwi hon Doue tri hag unan, A ren ar bed en galloudus, Selaout ouzh mouezh hor meulgan Ha klevit hor pedenn doujus. Embanner an deiz a gamenn Eo krog ar sklaerdor da skediñ Ra gouezho an deñvalijenn! Ho luc'h santel d'hor goulaouiñ!

Meuleudi deoc'h, Doue santel, O Tad, ha Mab ha Spered Glan, Tri Ferson an Doue unan, E klod ho puhez divarvel. Amen.

S. 8 Ant.: Ho pediñ, ho meuliñ, hoc'h azeuliñ a reomp, o Treinded evurus.

S. 32 I - : C'hwi a zo hon esperañs, hor silvidigezh, hon eurvad, o Treinded evurus.

II - : Hondieubit, hor salvit, roit dimp ar vuhez, o Treinded evurus.

V/- Bennigomp an Tad hag ar Mab hag ar Spered Santel.

R/- Meulomp ha kammoulomp anezho da virviken.

Lennadenn Ef 1,1-14

Plijet gant Doue hon Aotrou Jezuz Krist, Tad ar c'hloar, reiñ deoc'h gras ar furnez, ma 'n em ziskulio deoc'h ha ma teufot d'e anavezout da vat. Plijet gentañ sklerijennañ daoulagad ho spered + ma ouezfot pebezh esperañs hoc'h eus en e c'halv, pegen kaer eo pinvidigezh ar c'hloar ho po da herezh e-touez ar Sent. V/- Ni avat n'eo ket spered ar bed-mañ hon eus resevet, met ar Spered a zo eus Doue + ma ouezfot...

To Deum ha kempedenn

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- An Doue gwirion, unan en Dreinded ha Treinded en unan, deuit, azeulomp anezhañ.

Meulgan

- 1 - O Tad ar c'hantvedoù bedal, Sed an deiz diwezhañ ganet O sevel A-dreuz dimp, evit diambroug Kentañ-ganet ho karantez.
2 - Er a zigore evidoc'h Er eo a gane dirazoc'h Tersh-an-deiz D'ar c'houlz ne oa den ebet c'hoazh Da gaout perzh en e gaerder.
3 - Drezañ pep tra 'chom da c'henel, Hon deizioù en e c'hozh-amzer Er em sav Er o dihum d'eo yaouankiz Rak sevel a ra er Sav-heol.
4 - Er eo a zasorc'h dizehan Er a vir a-hed an amzer Ar c'han-se Estlammet abaoe an deroù Dirak oberenn ho taouarn.
5 - Setu ar sklerijenn nevez O sevel e don ar c'horfoù, O c'hwi, Tad, War an douar kasit alan Kentañ-ganet ar re varv.

S. 62 Ant.: Meuleudi ha gloar peurbadel da Zoue an Tad, d'ar Mab ha d'ar Spered Santel, evit ar c'hantvedoù.

Kant. Dn (P. 6): Meuleudi da Zoue an Tad, d'ar Mab par dezhañ hag hor genou d'ho kanañ, o Spered Santel, evit ar c'hantvedoù.

S. 149 Ant.: Pep tra a zeu dioutañ, pep tra a zo drezañ, pep tra a zo ennañ. Gloar dezhañ evit ar c'hantvedoù.

An Dreinded Santel

Komz Doue 1 Kor 12,4-6 Donezenoù disheñvel a zo, met an hevelep Spered eo bepred; ha kargoù disheñvel a zo er ministrerezh, met an hevelep Aotrou eo bepred; hag obererezhioù disheñvel a zo, met an hevelep Doue eo bepred a ra pep tra e pep unan.

Benniget oc'h, Aotrou, e barr an neñvoù. V/- Din a veuleudi hag a c'hloar er beurbadelezh, e barr an neñvoù. V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Ra vezo benniget an Dreinded Santel ha disrannus a grou hag a c'hoularn pep tra bremañ ha da viken hager c'hantvedoù didermen.

Azeulomp an Tad, ar Mab hag ar Spered Santel ha kanneulomp anezho en ur lavarout:

R/- Gloar ha meuleudi d'hon Doue.

- Tad santel-meurbet, pa n'ouzoamp ket penaos pediñ, roit dimp ar Spered Santel: ma teuio da harpañ hor gwander ha da bediñ ennoomp evel ma plij deoc'h-c'hwi. R/
- Tad hollo'halloudek, kaset hoc'h eus Spered ho Mab en hor c'halonoù evit lavarout: Abba, Tad. E labour ennoomp d'ober ganimp hoc'h horitourion ha kenhered ar C'hrist. R/
- Mab unganet Doue, goulnnet hoc'h eus digant an Tad reiñ ar Parakled d'an Iliz: ra chomo bepred ganimp ar Spered-se a wirionez. R/
- Jezuz adsavet a-douez ar re varv, kaset hoc'h eus ar Spered Frealzer evit reiñ testeni deoc'h: ra lako ivez ac'hanomp dellezek da reiñ testeni dirak an dud. R/
- Spered an Tad hag ar Mab, deuit da zougenn ho frouezh en hor c'halon: ar garantez, ar joa hag ar peoc'h. R/

Kempedenn (P. 204)

OFIS KREISTEIZ

Meulgan, Ant. ha Salmoù ar Sul 1 (P. 7)

Komz Doue 2 Kor 1,21-22 Eñ, Doue, hag a ro dimp a-gevret ganeoc'h, kaout kemmerzh er C'hrist ha bezañ sakret ennañ, eñ ivez eo an hini en deus hor merket gant e siell en ur reiñ dimp en hor c'halonoù, evel arrez, ar Spered.

V/- Bennigomp an Tad hag ar Mab hag ar Spered Santel. R/- Meulomp hag uhelveulomp anezhañ da virviken.

Kempedenn (P. 204)

OFIS AN ABARDAEZ

Meulgan

- 1 - Bezit ganimp, Treinded Santel, Unan en ho buhez dispar, Krouer ha reizhder divarvel Bedoù an neñv hag an douar. 3 - Evelto ni 'fell dimp ivez Profañ deoc'h kan hor c'halonoù, Hag unaniñ hol liderozh Gant meulidigezh an neñvoù.
2 - Dirazoc'h arme an Aelez A stou izelek d'ho meuliñ, Ha norzhioù ar Grouadelezh A respont ouzhoc'h e sentifiñ. 4 - O sklerijenn bur hag unan 'Zo tra kumun ho tri ferson, O buhez divent ha dinamm A zo mammerñ pep donezon.

Gouel ar Sakramant

5 - Meuleudi deoc'h, Tad peurbadel, Dre Jezuz Krist, ho Mab karet, A ren gant ar Spered Santel, E gloar ha splannder ho Treinded. Amen.

S. 109 Ant.: Meuleudi ha gloar peurbadel da Zoue an Tad, d'ar Mab ha d'ar Spered Santel evit ar c'hantvedoù.

S. 113A - : Pep tra a zeu dioutañ, pep tra a zo drouzhañ, pep tra a zo ennañ, klod dezhañ evit ar c'hantvedoù.

Kant. Disk. 19 (P. 174): Meulit hon Doue, c'hwi holl a servij anezhañ, bihan ha bras, alleluia.

Komz Doue Ef 4,3-6

Bezit aketus da virout unander ar Spered dre chom liammet er peoc'h. N'eus nemet

ur c'horf, n'eus nemet ur Spered, evel kennebeud-all n'eus nemet un esperañs ez oc'h bet galvet da vevañ anni. N'eus nemet un Aotrou, ur feiz, ur vadeziant, n'eus nemet un Doue ha Tad an holl a zo a-us da bep tra, a labour dre bep tra hag e pep tra.

Bras eo hon Doue ha bras e c'halloud.

V/- D'e skiant n'eus ket a vuzul, ha bras eo e c'halloud.

V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: O Doue, Tad ha n'eo ket ganet, o Mab unganet, o Spered Santel Frealzer, o Treinded santel ha disrannus, a-holl galon hoc'h anzavomp, ho meulomp hag ho pennigomp; deoc'h-c'hwi gloar da virviken.

Azeulomp an Tad, ar Mab hag ar Spered Santel... (P. 206)

GOUEL AR SAKRAMANT

DERC'HENT D'ABARDAEZ

Meulgan

Pa zeu an deiz d'astenn e zivrec'h Ha liammañ ar marv war ar Groaz, Neuze Mab an den, e-kerzh ur pred, A lak e gorf e dorn ar pec'her.

"Setu va c'horf, kemerit, debruit, Setu va Gwad, kemerit, evit. Evit ma vo kounaet va maro, Grit kement-mañ betek va distro."

Nebaon, na soe'hed, na maon: Rak Korf ar C'hrist a zo hor banvez; Pa zalc'homp e gibad 'n hon daouarn, Ez eus ganti blas ar bed nevez.

Pred-Pask m'eo debret ennañ Doue, Sin a garantez, a unaded, Ma kav ennañ an dud nevosact Madoù ar Rouantelezh da zont.

Dre Jezuz Krist, beleg-mour peurvat, Er Spered Glan a zegas ar peoc'h, 'Vit kement a c'hras, a vadelezh, Ho kanneulomp, o Tad an neñvoù.

S. 110 Ant.: An Aotrou a ro ar bevañs d'an neb e zouj, atav en devez soñj eus e Emglev.
 S. 147 - : Hor gwalc'h a roit dimp, Aotrou, eus flour ar gwinizh.
 Kant. Disk. (P. 22): Kemeret en deus en e zorn e c'halloud bras evit ren, an Aotrou Doue, Mestr an holl draoù.

Komz Doue 1 Kor 10,16-17 Ar c'hallir a vennozh a vennigomp, hag-efi n'eo ket ur gomunion ouzh Gwad ar C'hrist?
 Ar bara a rannomp, hag-efi n'eo ket ur gomunion ouzh Korf ar C'hrist? Peogwir n'eus nemet ur bara hepken, ned-omp ni holl nemet ur c'horf hepken: rak holl e kemeromp hol lod eus ar bara unan-se.
 Ar beorien a zebro, hag o gwalc'h o devo.
 V/- Meulifi a raint an Aotrou, ar re a glask anezhañ, hag o gwalc'h o devo.
 V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: An naon eus ar beurbadolezh a wask engroez an dud e gouelec'h ar bed-mañ. O ! territ o naon! O C'hwi dasorc'het, roit dezho ho Korf bet brevet d'eo magañ.
 Breudeur, pedomp an Aotrou Jezus Krist, bara hor buhez, ha lavaromp dezhañ gant joa:

- R/- Evurus neb a ranno gantañ ar bara e Rouantelezh Doue!
- O Krist, Mab an Doue bev, gourc'hemennet hoc'h eus dimp lidañ ar Pred Eukaristiel evit dero'hel soñj ac'hanoc'h, pinvidikait hoc'h Iliz a lid ho misterioù. R/
- O Krist, beleg unel an Doue neurbet-uhel, karget hoc'h eus ho peloien da ginnig an Eukaristiezh, roit dezho ar c'hras da heuliañ en o buhez ar pezh a lidont er Sakramant. R/
- O Krist, bara ar vuhez, ur c'horf hepken a rit gant an holl dud a gemer perzh en hevelep bara: kreskit ar peoc'h hag an intent vat etre an holl re a gred ennoc'h. R/
- O Krist, medesin kaset gant an Tad, kinnig a rit remed an divarvelezh ha hadenn an adsav d'ar vuhez gant ar bara a roit dimp: rontit ar yec'hed d'ar re glañv hag an esperañs santel d'ar bec'herion. R/
- O Krist, roue hag a c'hertozeomp, gourc'hemennet hoc'h eus dimplidañ an Eukaristiezh evit komenn ho marv betek ho tistro: roit perzh en hoc'h adsev d'ar vuhez d'an holl dud a zo marvet en ho karantez. R/

Kempedenn Salver Jezus, e Sakramant burzhudus an Aoter hoc'h eus lezet ganimp ar soñj eus ho Pasion, grit dimp eta, ni ho ped, kaout evit mister santel ho Korf hag ho Kwad an doujañs hag ar garantez a zo dloet evit ma c'hellimp kaout perzh bepred e frouezh ho silvidigezh.
 C'hwi a vev hag a ren, Doue gant an Tad hag ar Spored Glan, a-holl-viskoazh da virviken.

OPIS AL LENNADENNOU

Meulgan
 1 - Poblou kristen, kanit joaus
 Mister bras korf an Aotrou,
 Ha mister ar gwad prizius,

Pardon an holl bec'hedoù,
 'Zo bet skuilhet largentezus
 Gant Roue hon oncoù.

- 2 - Eus ar Werc'hez eo bet ganet 'Vidomp-ni, tud er glac'har, Evidomp-ni en deus hadet E gomzoù dre an douar, Hag e vuhez en deus klozet Gant ur sakramant dispar
- 3 - Goude pred al Lezonn gentañ Hervez Pask ar Yuzevion, Jezuz en e Goan diwezhañ Pa oa dezhañ da dremen, Gant ar burzhud ar souezhusañ En em ro d'eo ziskibion.
- 4 - Gant nerzh e gomz ar Verb graet den A dro 'n e gorf ar bara, Hag en e wad ar gwin laouen, Ha no gomprenomp netra, Homet gant feiz asur ha placen E kredomp hep maro'hata.
- 5 - Dirak ur Sakramant ken bras Stouomp holl 'vit adoriñ: Amañ eo profadenn ar Groaz 'Us d'an douar o skodiñ, Jezuz mammenn fonnus a c'hras 'Vit an ano o krediñ.
- 6 - D'an Tri Person eus an Dreinded, Kan, mouleudi, levonez, D'an Tad, d'ar Mab ha d'ar Spored Ra vo par hor c'harantez, Gload da Zoue da vo rontet A-had ar beurbadelezh. Amen.

S. 22 Ant.: Dirazon ec'h azoizt un daol a-dal d'am onebourion.
 S. 41 - : Youc'h a joa hag a veuleudi, pobl en gouel, ouzh taol an Aotrou.
 S. 80 - : O magañ 'ra Doue gant flour ar gwinizh hag o gwalc'h a ro dezho eus mel ar roc'h.
 V/- Ar beorien a zebro hag o gwalc'h o devo.
 R/- Meulifi a raint an Aotrou, ar re a glask anezhañ.

Lennadenn Erm 24,1-11

Ho tadoù, er gouelec'h, o deus debret ar manna, hag a zo marv.
 V/- Neb a zebro eus ar bara-se a vevo da virviken. Ar bara-se eo an hini a ziskenn eus an neñv: neb a zebri dioutañ ne varv mui-ken.
 R/- Neb a zebro eus ar bara-se a vevo da virviken.

Te Deum ha kempedenn

OPIS AR DEURE

S. 94 R/- C'hwi ha n'hell ket ar bed-holl dero'hel a ro dimp ho korf: Roue a c'hloar, hoc'h azeulifi a roomp.

Meulgan

An noz ma voe gwerzhet e kemeras bara; E sin eus e varv e dorras gant e zaoziam: "Va buhez, den n'he c'hemer, hogen me eo he ro 'Vit ma vo dasprenet an holl dud, va breudeur."
 Goude bezañ komet 'vit ar wech diwezhañ, 'N em brofas 'vel lazhiad dindan gwaskell ar Groaz: "Va gwad skuilhet evidoc'h a zo gwad an Emglev; Mignoned, grit kement-mañ en soñj ac'hanon."
 Ha ni, Pobl Doue, a zo test a gement-mañ: Ho marv a embannomp dre ar bara, ar gwin. Jezuz dasorc'het, hoc'h Iliz a ro gload deoc'h-c'hwi Treo'hour tremenet eus ar bed d'ar c'hloar difin.
 Dont a rit d'advevañ ennomp ho mister Pask: Mougil en hor c'horfoù tan a bep seurt drougoù.

Gouel ar Sakramant

Mi a zo ho parrou, gwinienn santel an Tad:
Grit dimp dougen frouezh a-benn an deiz diwezhañ.

Aotrou, gortoz 'reomp ho tistro gloriuz:
Un deiz hor c'hemerot ganeoc'h-c'hwi en neñvoù.
Ho korf-c'hwi a zo hadenn ar vuhez pourbadel:
Un deiz hol lakfot d'azezañ ouzh taol Doue.

S. 62 Ant.: Aotrou, fest d'am ene, joa d'am muzelloù, meuloudi em genou.
Kant. Dn (P. 6): Belec'h an Aotrou, benniget an Aotrou, profit dezhañ
ar bara hag an czañs.

S. 149 Ant.: D'an trec'hour e roin ur manna kuzhet hag un anv nevez.

Komz Doue Mal 1,11 Eus ar Sav-heol d'ar C'huzh-heol, bras
eo va Anv e-touez ar broadoù hag e pep
lec'h eo kinniget ur sakrifis a c'hwez-hat d'am Anv evel ur brofa-
denn c'hlan. Rak bras eo va Anv e-touez ar broadoù! a ziskler an
Aotrou holle' halloudek.

Em genou e lakas ur c'han nevez, meuloudi d'hon Doue.
V/- Joa ennañ ha levez, meuloudi d'hon Doue.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Lodennadur ar c'halir a siell hag a beurseven ar garantez;
resev a reomp, diubet diouzh an aon, ul lezenn a justis ne-
vez: karout betek mervel.

Broudeur, pedomp an Aotrou Jezuz Krist, Bara hor buhez, ha
lavaromp dezhañ gant joa:

R/- Evurus neb a zebro bara e Rouantelezh Doue!

- O Krist, beleg an Englev nevez ha pourbadel, war acter ar Groaz
hoc'h eus kinniget d'ho Tad ar sakrifis parfet, deskit dimp o
ginnig a-unan ganeoc'h. R/
- O Krist, Roue ar peoc'h hag ar justis, kensakret hoc'h eus ar bara
hag ar gwin e sin ho profadenn deoc'h-c'hwi hoc'h-unan, deskit dimp
on em ginnig ganeoc'h. R/
- O Krist, gwir azeuler an Tad, kinniget e vez gant an Iliz ho pro-
fadenn c'hlan eus ur penn d'ar penn all d'ar bed, bodit en hokorf
ar re hoc'h eus maget gant an hevelep bara. R/
- O Krist, manna deuet eus an neñv, ho gwalc'h e roit d'an Iliz gant
ho korf hag ho kwad, hor c'hennnerzhit en hor c'herzhadeg davet an
Tad. R/
- O Krist, ostiziad diwelus hor pred, c'hwi en em zalc'h dirak an
nor hag a sko: antreit en hon touez ha deuit da azezañ ganimp ouzh taol.
R/

Kempedenn (P. 209)

OPIS KREISTEIZ

S. 117 Ant.: Aotrou, fest d'am ene, joa d'am muzelloù, meuloudi em genou.

Komz Doue Fur 16,20 Reet hoc'h eus d'ho Pobl ur boued a seled,
hep faezhañ e kasit dezhi eus an neñv ur
bara aezet, gouest da bourchas an holl blijadurioù ha da seveniñ an
holl c'hoantoù.

V/- Ar beorion a zebro hag o gwalc'h o devo.
R/- Meuliñ a raint an Aotrou, ar re a glask anezhañ.

OPIS AN ABARDAEZ

Moulgan (P. 207) pe:

- | | |
|---|---|
| 1 - Ar Verb uhel, gwir Vab Doue,
Dout er bed hep kuitaat e Dad,
Erru o serr-noz e vuhez,
'Vennas ober labour pourvat. | 4 - Hor breur on e c'hinivelezh,
En e goan hor magadurozh,
En e varo priz hor buhez
Hag en e c'hloar hon levez. |
| 2 - Rak eñ gwerzhet d'ar Yuzevion
Gant an traitour gwall-didruet
En em roas d'e ziskibion
Da vezañ bevañs hor buhez. | 5 - Salver Jezuz, profad santel
A zigor dimp dorioù an neñv,
Spontus ouzhip pa sav brezel
Roit dimp nerzh da vezañ kroñv. |
| 3 - Dindan ar spesoù kensakret
'Mañ profad Sakrifis ar Groaz,
'Mañ korf ha gwad Jezuz kuzhet
Da vezañ dimp mammenn a c'hras. | 6 - Deoc'h-c'hwi, Tri Ferson an Drouin-
Gloar a-berzh ar grouadelezh;/dod,
Ha gras dimp da vont d'ho kwelet
Da holl viken er gwir vuhez. Amen. |

S. 109 Ant.: Beleg da viken hervez urzh Melkisedek an Aotrou Jezuz Krist
en deus kinniget ar bara hag ar gwin.

S. 115 - : Komz ar rin kalin ar silvidigezh hag o pedin Anv an Aotrou.
Kant. Disk. 19 (P. 8): Alleluia, alleluia.

Komz Doue 1 Kor 11,23-25 Me avat am eus resevet evel o tont eus
an Aotrou ar pezh am eus d'am zro dis-
klieriet deoc'h, penaos an Aotrou Jezuz, en noz ma voc gwerzhet, a
gemeras bara, ha goude lavarout ur bedenn a drugarez, a rannas ane-
zhañ en ul lavarout: "Kemont-mañ eo va c'horf, an hini a zo bet roet
evidoc'h. Grit an dra-mañ evit ober an eñvoradur ac'hanon." Evol-se
c'hoazh, goude koun, e gemeras ar c'halir en ul lavarout: " Ar c'ha-
liriad-mañ eo an Englev nevez em gwad. Pep gwech maz evfet dioutañ,
guit an dra-se evit ober an eñvoradur ac'hanon. "

Ar beorion a zebro hag o gwalc'h o devo.
V/- Meuliñ a raint an Aotrou, ar re a glask anezhañ,
hag o gwalc'h....
R/- Klod d'an Tad.....

Kant. ar W.: Mab Doue en deus 'n em zibourc'het: gant ar bec'herion
en deus graet e vignoned. Deuet eo da rannañ ganimp bara
an daeroù ha setu an eur maz evimp en e Rouantelezh gwin
al levezet pourbadel.

Broudeur, pedomp an Aotrou Jezuz Krist... (P. 208)

=====
=====
=====
=====

=====
GOUEL AR GALON SAKR
=====

DERC'HENT D'ABARDAEZ

Heulgan

- 1 - Sellit peloc'h e risklomp mont
pa droomp koin
da Goued
ho tiwaskoù.
Difonn ho Pask da zaoulagad
ho pourevion:
diskleriit dimpal levr digor(et)
a daolioù-gouaf.
- 2 - Penaos e kerzhfemp davedoc'h
kon diwezhat,
mar ne d-it ket
gant hon hentoù?
Ha vankit ket d'ar piro'hirin,
deut d'azezañ:
Prest an doubier 'vit ar bara
hag ar c'halir.
- 3 - Penaos e ouezimpes oc'h bev,
unan 'veldomp,
ma ne grogit
en traoù-simpl-se?
Rannit 'vidomp ho korf brevet
'vit ma savo
o don ar c'halonoù brellet
deiz ho tiskuizh.
- 4 - An deiz a vorzomp o sevel,
a welomp mat
o sklerijenn
ho tremm skedus:
Ha lezit ket an avel-noz
nag an diaoul
da vougañ ennomp an tan 'luc'h
war ho tremen.
- 5 - Lakit 'n hon daouarn asternet
evit ho klask,
ar Spered-se
dagemeret:
Sklaerait garineb ar galon,
rak ar pec'hed
a wisk ur maskl a zigened
war ho skoudenn.

S. 112 Ant.: Poblou an douar, meulit an Aotrou.
S. 145 - : Meulitholl an Aotrou a sav ar re a gouzha hag a gar an dud just.
Kant. Disk. 4: Dellezek... (P. 15)

Komz Doue Ef 5,25-27

Ar C'hrist on deus karot e Iliz, hag en
om roet e-unan d'ar marv eviti, evit he
santelaat hag he glanaat dre vadeziant an dour a-gevret gant ar gomz.
Fellout a rae dezhañ lakaat e-unan an Iliz-se d'en em ziskouez dira-
zañ leun a splannder, hep namm ebet, na roufenn, na netra a sourt-se,
met santel ha dibec'h.

Pareit va ene, rak pec'het em eus enep deoc'h.
V/- Lavaret em eus: truez ouzhin, va Doue, rak pec'het...
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Deuet on da zegas an tan war an douar: salv ma vefe dija
onaouet!

Breudeur, pedomp Jezuz, diskuih hon eneoù, ha lavaromp
dezhañ gant karantez:

R/- O Roue leun a garantez, ho pot truez ouzhip.

- Jezuz, ho koztez toullet on deus lezet da verañ an dour hag ar
gwad evit ma vefe ganet an Iliz ho Pried: rentit anezhi santel
ha dinamm. R/

- Jezuz, Templ santel Doue, diskaret gant an dud hag adsavet an tre-
de deiz gant an Tad, grit eus hoc'h Iliz chomadur an Uhel-meurbet. R/

- Jezuz, Roue ha kreizenn pep kalon, hor c'harout a rit gant ur ga-
rantez pourbadel ha davedoc'h e renit oc'hanomp en ho madelezh:
adveasait hoc'h Emglev gant an dud. R/
- Jezuz, hor Peoc'h hag hon adunvanidigezh, dastum a rit an dud en un
Den nevez nemetken ha distrujañ 'rit ar gasoni dre ar Groaz: grit
dimp mont da gichen an Tad. R/
- Jezuz, hor Buhez hag hon adsav d'ar vuhez, disamm ar re a c'houzañv
poan ha diskuih hon eneoù, degasit davedoc'h ar bec'herion. R/
- Jezuz, sentus betek ar marv hag ar marv war ar Groaz, dre ho karan-
tez divent galvit an Anaon d'an adsav d'ar vuhez. R/

Kempedenn

Aotrou Doue helle'halloudek, gant levenez
amaomp oc'h enorifi kalon ho Mab karot, en
ur soñjal e madelezhoù dispar e garantez en hor c'heñver,
eta, ni ho ped, ma veritimp resev eus ar vammenn sakr-se a zone-
zonnoù grasoù dreist-muzul. Dre Jezuz Krist...

OPIS AL LEHNADEHNOU

Meulgan

- 1 - C'hwi, splannder eus splannder an Tad, 4 - Mirit bepred, Doue salver,
Ha Doue eus Doue pourbad,
Jezuz, salver an eneoù
Ha roue mat ar c'hantvedoù.
- 2 - Gant peseurt nerzh a garantez
En em rit don, Adam nevez,
'Vit daskorifi dimp an holl vad
En doa kollet hor c'hentañ tad.
- 3 - Ar vadelezh he deus stummet
Ar mor, an douar, ar stered,
Ho deus ivez gant trugarez
Torret chadenn hor sklavelezh.
- 4 - Mirit bepred, Doue salver,
An druez-se on hor c'heñver,
Hag eus vammenn vev ho kalon
Ra dennimp holl gras ha pardon.
- 5 - Rak evit-se eo bet toullet
Ho kalon sakr, bras digoret,
Ma tivero eus ho kouli
An dour a welc'h hor falloni.
- 6 - Jezuz a zo dimp ho kalon
Mammenn a c'hraas hag a bardon,
Deoc'h ha d'an Tad ha d'ar Spered
Enor ha gloar dre an holl vad. Amen.

S. 35 Ant.: Ennoc'h mammenn ar vuhez, e froud ho levenez e torrit hor sec'hed.
S. 60 - : Tra ma samplae va c'halon, hoc'h eus va savet war ar roc'h.
S. 97 - : Holl boblou an douar o deus gwelet ar Salver.

V/- Kemerit va yev warnoc'h ha deskit diganin
R/- Ez on deus hag izel a galon.

Lonnadenn Rm 8,28-39

Marv eomp en abeg d'hor pec'hedoù;
gant ar C'hrist on deus Doue graet dimp adveañ.
R/- Dre e c'hraas en deus hor salvet. Gant ar C'hrist on
deus hon adsavet evit diskuliañ dimp pinvidigezhioù
o garantez. R/

Te Doue

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi a deurvez, en ho tru-
garez, lakaat gant largentez o kalon ho
Mab gloaset gant hor pec'hedoù teñzorioù dreist-muzul ho ka-
rantez: plijet ganec'h, ni ho ped, tra ma tiskouezomp en e
geñver testeni doujus hon devozion dener, ober ma c'hellimp
ivez reiñ dezhañ an digell hag an dic'haoù dleet. En a ren...

S. 94 R/- Kalon Jezuz, gloazet dre garantez evidomp, deuit, azeulomp anezhañ.

Meulgan

Gerioù Doue 'deus tregemet Ho tivrec'h, Aotrou, 'zo digor
En hol lavarioù denel, 'Vit degemer ar beorion,
Hor mouezhioù a gan Jezuz Krist Profet eo dimp ho karantez
Dre ar Spered a ro dimp. Dre ho Mab hag hor Salver.

Ho kalon a zigor 'vidomp
Pred an eured peurbadel,
Ha ni a ya dre an hentoù
Evit embann ar C'heloù.

S. 62 Ant.: Mar d-eus unan hag en deus sec'hed, ra zeuio davedon ha ra evo.
Kant. Dn (P. 6): Doue en deus hor c'haret gant ur garantez peurbadel; savet a-us d'an douar en deus hor sachet holl davet e galon, en e drugarez.

S. 149 Ant.: Va Mab, ro din da galon.

Komz Doue Yr 31,33

An Englev a skoulmin gant pobl Israel,
setu-efi amañ - komz an Aotrou - lakaat
a rin va lezenn en o c'hreiz hag ho skrivin en o c'halon. Neuze e
vin o Doue hag i a vo va Fobl.

Karantez an Aotrou da viken a ganin.
V/- A rumm da rumm e anv, da viken a ganin.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Sellout a raint an hini o deus treuzet.

Breudeur, pedomp Jezuz frealzer hon onsoù ha lavaromp
dezhañ gant karantez:

R/- O Roue mat-mourbet, ho pet truez ouzhip.

- Jezuz, ennoc'h e chom leunder an douezezh, hol lakit da gaout
perzh en ho natur-Doue. R/
- Jezuz, ennoc'h emañ holl deñzorioù ar furnez hag ar skiant, dis-
kouezet dimp dre an Iliz stumm lies-doare ha divent furnez Doue. R/
- Jezuz, ennoc'h e lak an Tad e holl garantez, deskit dimp selaou
ho komz gant fealded. R/
- Jezuz, eus ho leunder hon eus resevet an holl draoù, roit dimp gant
largentez ar c'hras hag ar wirionez. R/
- Jezuz, mammenn a vuhez hag a santelezh, hol lakit da vezañ santel
ha dinam er garantez. R/

Kempedenn (P. 213)

OFIS KREISTEIZ

S. 124 - 125 - 126: Mar en deus sec'hed unan bennak, ra zeuio davedon
ha ra evo.

Komz Doue Yr 31,3-4

Gant ur garantez peurbadel em eus da
garet, ken em eus miret va c'hrad-vat
evidout. A-nevez o savin ac'hanout hag e vi adsavet.

V/- Kemerit va yev warnoc'h.
R/- Rak douaron hag izel a galon.

Meulgan Sellit pelec'h... (P. 212) pe:

- 1 - O Kalon, arc'hasantelezh, 4 - Evit daspren an den pec'her,
A zalc'h emi lezenn nevez Sed ho kalon eo an aoter
An drugarez hag ar pardon, M'en em brofit warnid'ho Tad,
N'eo ken lezenn gozh an aon. C'hwi ar beleg hag al lazhiad.
2 - O Kalon, santual gwirion, 5 - Piv na vo evit karet
Splanno'h eget neved Sion, An Doue en deus hor salvet
Templ buheuz hag hollvedol Hag a blij dezhañ hor gervel
An Englev nevez, peurbadel. Da gaout ennañ joa beurbadel.
3 - C'hwi 'zo digor der ho kouli 6 - Jezuz a zo dimp ho kalon
Evit maz entreimp drezi, Mammenn a c'hras hag a bardon,
Bugale ar c'hras douzel, Deoc'h ha d'an Tad ha d'ar Spered,
Da lid ar garantez noñvel. Enor ha gloardre an hollved. Amen.

S. 109 Ant.: Poblou an douar, meulit an Aotrou.

S. 110 - : Meulit holl an Aotrou a sav ar re a gouezh hag a gar an dud
just.

Kant. Fil 2,6-11 (P. 28) : Jezuz hag a oa Doue a stumm...

Komz Doue Ef 2,4-7

Doue hag a zo pinvidik e drugarez, dre
ar garantez vras en deus hor c'haret ganti,
goude ma oamp marv en abeg d'hor pec'hedoù, en deus adroet dimp ar
vuhez a-unan gant ar C'hrist, rek dre c'hras ez eo'h salvet; a-unan
gantañ en deus hon adsavet da vev hag hon laket da azezañ en noñvoù
a-unan gantañ, ar C'hrist Jezuz. Gant-se e felle dezhañ diskouez er
c'hantvedoù da zont pegen divuzul eo pinvidigezh ar c'hras en deus
bet on e vadelezh en hor c'hoñver er C'hrist Jezuz.

Karantez an Aotrou da viken a ganin.
V/- A rumm da rumm e anv, da viken a ganin.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Gant joa tennit dour ar vuhez eus mammenn ar Salver,
alleluia.

Breudeur... (P. 212)

Kempedenn (P. 213)

oooooooooooo
oooooooooooo
oooooooooooo
oooooooooooo

AR C'HRIST-ROUE

DERC'HENT D'ABARDAEZ

Meulgan Treo'het hoc'h eus... (P. 8) pe:

- 1 - O Krist, barnar ar c'hantvedoù, Hag uhelvestr an holl vroioù, Bezit sklaerder hor speredoù, Bezit lezenn hor c'halonoù.
2 - An dud difeiz o deus krist: Ar C'hrist da Roue n'houlomp ket! Hogen ni 'venn embann ho kloar 'Vel mestr ha salvor an douar.
3 - Plegit dindan ho yev tener O Priñs ar peoc'h, ar pennoù taer, Kenstrollit dindan ho kammell An holl deñved dienket pell.
4 - Evit-se war ar c'head kalet Hoc'h eus ho tivrec'h astennet Ha diskouezet dor ho kalon Cant an faol-goaf digoret don.
5 - Evit-se war an aoterioù Oc'h kuzhet dindan ar spesoù, Evit kervel 'n ho karantez An holl dud da bred ar vuhez.
6 - Ra zeuio rouaned ar bed Da rentañ deoc'h ar c'hloardleet, Ha dindan ho sujidiagezh Ra blego pep galloudegezh.
7 - Bezit da viken bemiget Jezuz, Roue ar rouaned, Evel an Tad hag ar Spered, Cant an holl dud hag an Aoled. Amen.

S. 112 Ant.: An Aotroù eo hor barnar peurbadel, hol lezennour. An Aotroù eo hor Roue, Salver.

S. 116 - Graet em eus ganit sklerijenn ar pobloù, kas va silvidigezh betek penn ar bed.

Kant. Disk.4: Dellezek oc'h... (P. 15)

Komz Doue Ef 1,20-23 Doue en deus adsavet ar C'hrist a-douez ar re varv hag e laket da azezañ en tu dehou dezhañ, en neivoù, kalz uheloc'h eget pep galloudegezh, ha kement a c'hell bezañ anvet, n'eo ket hepken er bed-mañ, met ivez er bed da zont. Laket en deus pep tra dindan e dreid, ha diazeset en deus anezhañ a-us da bep tra, evel penn an Iliz; rak homañ a zo e gorf, ha leunder an Hini a resev leunder e pep doare digant pep tra.

War droun David e dad e reno da virviken. V/- Galvet e vo Doue-kreñv, Priñs ar Peoc'h, hag e reno da viken. V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Jezuz Krist, an hini galloudek nemetañ, a zo Roue ar rouaned hag Aotroù an aotrounez, alleluia.

Pedomp ar C'hrist, a zo a-raok pep tra hag a ra da bep tra bevañ, ha lavaromp dezhañ:

R/- Ra zeuio ho Rouantelezh, Aotroù.

- O Krist, hor Roue hag hor Mesaer, dastumit ho Pobl eus pevarc'horn ar bed ha renit anezhi davet ar magadurioù fonnus. R/
- C'hwi, hor Blesier hag hor Salvor, salvit an dud dianket, degasit en-dro ar re a zo pell, bodit ar re stlabezet, adsavit ar re ziskaret. R/
- C'hwi, ar Barnar peurbadel, hol lakit a-zehou deoc'h pa rofot ar Rouantelezh d'ho Tad. R/
- C'hwi, Priñs ar Peoc'h, pellait ar brezel, embannit ar peoc'h evit ar pobloù. R/

Ar C'hrist-Roue

- C'hwi hag hoc'h eus resevet en herzh ar broadoù, dastumit an holl dud en ho Rouantelezh: grit m'hoc'h an zavint evel o rener. R/
- C'hwi ar c'hentañ-ganet a-douez ar re varv, roit perzh d'an Anaon en hoc'h adsav d'ar vuhez c'hlorius. R/

Kempedenn Doue hollc'halloudek ha peurbadel, c'hwi hag a zo bet fellet deoc'h adsevel pep tra dre ho Mab muiañ-karet, Roue ar bed-holl, plijet ganeoc'h en ho madelezh ober ma vo tennet ar grouadeloñh a-bezh eus chadennoù ar pec'hed evit ho servijañ hag ho meulñ da viken. Dre Jezuz Krist...

OFIS AL LENNADENNOU

Meulgan Jezuz Krist a zo savet... (P. 3)

- S. 2 Ant.: Eñ, ar Mab, a zeskas sentif er boan, alleluia.
S. 71 I - : Doue en deus graet anezhañ barnar ar re varv, allel.
- II - : Graet em eus ac'hanout sklerijenn ar pobloù, kas va silvidigezh betek penn ar bed.

V/- Brus, ostlammus eo hoc'h oberoù, Aotroù. R/- Reizh hag asur hoc'h hentoù, Roue ar broadoù.

Lennadenn Dn 7,1-27

R/- Neuze e vo gwelet Nab an den o tont er c'hoabr gant galloud ha klod. + Hag e kaso an Aeled da vodañ e zibabidi eus ar pevar avel, eus penn pellañ an douar betek penn pellañ an neiv. V/- Hag e welfot Mab an den azezet en tu dehou d'an Hollc'halloudek hag o tont war goabr an oabl. + Hag e kaso...

Te Deum ha kempedenn

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- Jezuz Krist, Roue ar bed-holl, deuit, azoulomp anezhañ.

Meulgan R/- Alleluia, alleluia, alleluia! Krist, meuloudi deoc'h! Doue a ren... (P. 5)

S. 92 Ant.: An Aotroù a zo Roue; gwisket eo a nerzh, alleluia.

Kant. Dn (P. 6)

S. 150 Ant.: Salud, galloud, enor, meuloudi d'hon Doue, alleluia!

Komz Doue Ef 4,15-16

Bevomp er wirionez hervez ar garantez, evit kreskiñ e pep doare diouzh an hini a zo ar penn, ar C'hrist; eñ a ro d'ar c'horf a-bezh unvaniezh ha kevreadurezh, en doare ma resev pep ozel dre an holl liammoù, nerzh da labourat hervez e stumm, ha ma teu ar c'horf da greskiñ ha d'en em sevel e-unan er garantez.

Degasit d'an Aotroù klod ha galloud, alleluia, alleluia. V/- Degasit d'an Aotroù klod e anv, alleluia, alleluia. V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Ra vo bonniget ar Roue a zeu en anv an Aotroù, alleluia.

Pedomp ar C'hrist, a zo a-raok pep tra hag a ra da bep tra bezañ ha lavaromp dezhañ:

R/- Ra zeuio ho Rouantelezh, Aotroù.

Ar C'hrist - Roue

- O Krist, hor Salver, c'hwi hon Aotrou hag hon Doue, hor Roue hag hor Pastor, renit ho pobl war hent ar vuhez. R/
- C'hwi, ar Mosaer gwirion hag hoc'h eus roet ho puhez evit ho teñved, hor sturii, ha netra n'hellou mankout dimp. R/
- C'hwi, hon Dasprener, Roue an douar a-bezh, dre hoc'h adsav d'ar vuhez bodit ennoc'h an holl dud. R/
- C'hwi, Roue ar bed-holl, deuet er bed evit reiñ testeni d'ar wirionez, bezit Mestr diarvar ar speredoù hag ar c'halonoù. R/
- C'hwi, hor Mestr hag hor Skouer, hag hor galv d'ho Rouantelezh, grit dimp en em ziskouez dirazoc'h direbech, santel ha dinamma. R/

Kompedonn (P. 217)

OPIS KREISTEIZ

S. 117 Ant.: An Aotrou a zo Roue; gwisket eo a nerzh, alleluia.

Komz Doue Kol 1,16-17 Eñ a zo a-raok pep tra, ha drezañ e talc'h pep tra da vezañ. Hag eñ ivez eo ar penn eus ar c'horf, da lavarout eo eus an Iliz. Eñ eo ar penn-abeg anezhi, ar c'hentañ-ganet eus a-douez ar re varv, evit ma vefe dezhañ-eñ ar renk kentañ e pep doare.

V/- Bras, estlammus eo hoc'h oberoù, Aotrou.
R/- Reizh hag asur hoc'h hentoù, Roue ar broadoù.

OPIS AN ABARDAEZ

Meulgan O Krist, barnet... (P. 216)

S. 109 Ant.: Doue en deus tennet ar C'hrist eus ar marv ha graet dezhañ azezañ en e c'hloar.

S. 123 - : Hor sikour a zo e anv an Aotrou.
Kant. Disk. 19 (P. 8)

Komz Doue 1 Kor 15,25-28 Dleet eo d'ar C'hrist ren, betek m'en devo laket e holl enebourion dindan e droid. Hag an diwezhañ enebour a vo diskaret eo ar marv. Rak Doue en deus laket pep tra dindan e droid. Met pa lavaro setu sujet pep tra, ez eo sklêr emañ en diavaez d'ar gont an Hini en devo laket pep tra da sujañ dezhañ. Rak goude ma vo bet laket pep tra dindanañ, neuze ar Mab e-unan en em lakaio dindan an Hini en devo laket pep tra da sujañ dezhañ, evit ma vo Doue pep tra e kement tra 'zo.

Degasit d'an Aotrou klod ha galloud, alleluia, alleluia.
V/- Degasit d'an Aotrou klod e anv, alleluia, alleluia.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Pep tra a zo krouet gantañ, pep tra a zo krouet evitañ: klod dezhañ er c'hantvedoù.

Pedomp... (P. 216)



===== D E D I A N I L I Z O U =====

DERC'HENT D'ABARDAEZ

Meulgan R/- Hag e welis ar Jeruzalem nevez
O tiskenn eus an neñv, eus kichen Doue,
Kaer evel ur pried fichet evit he gwaz.
Hag e welis ar Gêr santel, Jeruzalem nevez,
O tiskenn eus an neñv, eus kichen Doue. R/
Kaer 'oa evel ur pried fichet evit he gwaz.
Hag e klevis ur vouezh o youc'hal eus an tron. R/
Setu teltenn Doue e-touez an dud,
Ober a ray ganto e chomadur. R/
Hag int a vo e bobl hag eñ Doue e-unan a vo ganto,
Ha disoc'hañ a ray pep daerouenn diwar o daoulagad. R/
Ha ne vo mui na marv, na kañv, na poan,
Dre maz eo tremenet ar bed kentañ. R/

S. 146 Ant.: Graet en deus ganimp ur rouantelezh a veleion hag e renimp war an douar.

S. 147 - : Un Aotrou hepken, ur feiz hepken, ur vadoziant hepken.

Kant. Disk. 19 (P. 8)

Komz Doue Disk 21,2-3, 22,27 Hag e welis ar Gêr santel, ar Jeruzalem nevez, o tiskenn eus an neñv, eus kichen Doue, hag hi kompennet evel ur plac'h nevez fichet evit he den. Hag e klevis ur vouezh kreñv o tont eus an tron, a lavaro: Setu teltenn Doue e-touez an dud, ha kampañ a raio en o zouez hag int a vo e bobl hag eñ, Doue, e-unan a vo ganto. Ha templ ebet ne welis omni, rak an Aotrou Doue, an Hollc'halloudeg, eo an templ anezhi hag an Oan ivez. N'antrec ken omni netra saotret, met hepken ar re enskri-vet e Levr Buhez an Oan.

Kanmeulit ganin an Aotrou, alleluia, alleluia.
V/- Holl a-unan uhelvrudomp e anv, alleluia, alleluia.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Setu amañ ti Doue ha dor an neñv.

- Gant an holl Sent meulomp an Aotrou en e dompl:
R/- Klod deoc'h, Aotrou.
- Gant an Aeled, an Aro'haeled hag ar Speredoù evurus ho meulomp, Aotrou. R/
- Gant ar Batriarked hag ar Brofeded ho pennigomp, Aotrou. R/
- Gant ar Werc'hez Vari, mamm an Aotrou, hon one a ganmeul an Aotrou. R/
- Gant an Ebestel hag an Avelourion ho trugarekaomp, Aotrou. R/
- Gant holl Verzherion ar C'hrist, Aotrou, e kinnigomp deoc'h hor c'horfoù e sakrifis. R/
- Gant an holl Sent, testoù an Aviel, Aotrou, e ouestlomp deoc'h hor buhez. R/
- Gant pobl an Iliz hollvedel, Aotrou, hoc'h azeulomp. R/

Dedi an Ilizoù

Kompedenn

Doue, c'hwi hag a gemer mein bev eus an dibab evit pourchas d'ho kloar un Ti pourbadus, skuilhit gant largentez en hoc'h Iliz ar Spored a c'hras hoc'h eus root dezhi, ma 'z aio bepred war gresk ar bobl fidel deoc'h, e-sell da sevel ar Jeruzalem eus an neñvoù. Dre Jezuz K.

=====
OPIS AL LENNADERNOU
=====

Moulgan (P. 3)

- S. 23 Ant.: Savomp war verez an Aotrou, eomp da di hon Doue.
- S. 83 - : Evurus ar re a zo o chom en ho Ti, da viken o c'hollint lidañ ho meulduioù.
- S. 86 - : Va Zi a vo anvet: Ti a bodenn evit an holl bobloù.

V/- Kanneul an Aotrou, pobl Doue.
R/- Kas a ra e Verb war an Douar.

Lennadenn 1 R 8,1-4. 10-13. 22-23
Disk 21,9-23 (Amzer Bask)

Te Deum ha Kompedenn

=====
OPIS AR BEURE
=====

S. 94 R/- E Ti Doue, azeulomp ar C'hrist, pried e Iliz.

Moulgan

- 1 - Jeruzalem, o Kêr evurus, Gweledigezh a beoc'h dalo'hus, C'hwi savet e barr an neñvoù Gant danvez bev an eneoù, Hag heñvel ouz ur plac'h nevez, En-dro deoc'h miliadoù Aolez.
- 2 - Pried ken kaer ho planedenn, Lugernit dindan ho talgen, C'hwi gant an Tad argouracuet Ha fichet gant gras ho pried, Rouanez leun a vrapentez Ha karet gant ar C'hrist Roue.
- 3 - O Kêr espar ho mogerioù Ha perlezennet ho torioù, C'hwi 'zo digor da zogemer An neb a heuilh roud ar Salver, O c'houzañv enkreiz hag ancaz Dre garantez evit e Groaz.
- 4 - Mein digrizet dre hirlabour Gant morzhel digar ar benour, Kizellet splann ha peurgempenn, C'hwi 'zo douget d'ar sklerijenn Evit antren er savadur Ha kaout war gresk'ho loc'hiaour.
- 5 - Enor ha gloar da vo rentet D'an Tad evel ma 'z eo dlect, Hevelep klod d'ar Mab unan A-gevret gant ar Spored Glan, D'o zri, galloud, meulduigezh A-hed an holl beurbadclezh. Amen.

S. 62 Ant.: Ur stêr a vuhez a laouena ar Gêr (alleluia).
Kant. Dn (P. 6): Gwelout a ris un neñv nevez, un douar nevez ha Kêr santel an Emmanouel.

S. 142 Ant.: An Aotrou an em blij gant e bobl.

Komz Doue Ef 2,19-22 Evel-se eta n'oc'h kot mui estrenion hag ostizidi, met kenvroiz ar Sent ha tudeus Ti Doue. Savet oc'h bet war ziazez an Ebistel hag ar Brofeded, Jezuz Krist e-unan o vezañ maen-uhel ar c'horn. Ennañ, an Aotrou, enañ an holl savadur o 'n em stummañ hag o kreskiñ da vezañ un Templ santel; ennañ, c'hwi ivez, hoc'h eus ho plas er savadur da vezañ Ti Doue er Spored.

Hon dasprenet hoc'h eus, Aotrou, gant priz ho kwad.

V/- Tud a bep gouenn, yezh ha pobl, gant priz ho kwad.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Savet eo war ar roc'h, Iliz an Aotrou.

Er gouel-mañ, dedi..... pedomp an Aotrou.

R/- Klod ha meuldui deoc'h, Salver Jezuz!

- Bezit benniget, Aotrou, dre m'hoc'h eus hor galvet en hoc'h Iliz, rak dre ar Groaz hoc'h eus diskaret ar marv. R/
- C'hwi, ar maen distaolot gant ar saverion, a zo deuet da vezañ maen-uhel ar c'horn. R/
- C'hwi, an test fidel ha gwirion, a zo ar c'hentañ-ganet a-douez ar re varv. R/
- C'hwi, pried nemetañ an Iliz, a zo ar c'hentañ hag an diwezhañ, marv e oac'h hag hoc'h eus adkavet ar vuhez. R/

Kompedenn

Doue, c'hwi hag a gemer mein bev eus an dibab evit pourchas d'ho kloar un Ti pourbadus, skuilhit gant largentez en hoc'h Iliz ar Spored a c'hras hoc'h eus root dezhi, ma 'z aio bepred war gresk ar bobl fidel deoc'h, e-sell da sevel ar Jeruzalem eus an neñvoù. Dre Jezuz Krist...

=====
OPIS KREISTEIZ
=====

(Salmoù hag antifonemoù an deiz)

Komz Doue 1 P 2,4-5 Tostait outañ, rak eñ eo ar maen bev, bet distaolot gant an dud, hogen an hini dibabet ha prizius da sell Doue. Ha c'hwi ivez, evel mein bev, bezit danvez an Templ sporedel a zo o sevel; deuit da vezañ ur velodigezh santel evit kinnig sakrifisoù sporedel plijus da Zoue. Dre Jezuz K.

V/- Kanneul an Aotrou, Pobl Doue.
R/- Kas a ra e Verb war an douar.

=====
OPIS AN ABARDAEZ
=====

Moulgan Hag e welis... (P. 219)

S. 109 Ant.: Graet en deus ganimp ur rouantelezh a veleion hag o renimp war an douar.

S. 121 - : Un Aotrou hepken, ur feiz hepken, ur vadeziant hepken.

Disk. 19 : (P. 8)

Komz Doue h.a. (P. 219)

=====
=====
=====
=====
=====

OFIS AR WERC'HEZ VARI

DERO'HEM D'ABARDAEZ

Meulgan Hag e welis... (P.219)

S. 112 Ant.: C'hwi a zo leun a c'hras, Mamm Jezuz Krist.
S. 147 - : C'hwi a zo gloar Jeruzalem, c'hwi a zo joa Israel.

Kant. Disk 19: (P. 8)

Komz Doue Ga 4,4-5 Pa 'z eo deuet leunder an amzer, en deus Doue kaset e Vab, ganet eus ur vaouez, ganet dindan al Lezenn, evit dasprenañ ar re a oa sujet d'al Lezenn, hag ober ac'hanomp e advibion.

En ho splannder, en ho kaerder, trec'hit ha renit, o Gwerc'hez Vari. V/- Selaouit, merc'h, roit skouarn, ar Roue a c'hoanta ho koned. Trec'hit... V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Setu ma vin anvet evurus gant an holl rummadoù, dre m'en deus sellet Doue ouzh izelded e vatezh.

Dre hanterouriezh ar Werc'hez Vari, goulenomp trugarez an Tad en ur lavarout:

R/- Ar Werc'hez leun a c'hras da erbediñ evidomp.

- Doue hollo'halloudek, grit d'ho tud fidel bezañ unan a galon hag a ene, ha kenderc'hel da bediñ a-gevret gant Mari, mamm Jezuz. R/
- C'hwi hag hoc'h eus graet gant Mari skouer peurvat an unaniezh gant Jezuz, roit d'ar gristenion ar c'hras d'ober evelti. R/
- C'hwi hag hoc'h eus graet gant Mari Mamm ar c'hras hag an drugarez, grit d'an dud ankeniet santout douster he c'harantez a Vamm. R/
- C'hwi hag hoc'h eus laket Mari e-kichen Jezuz ha Jozef, grit d'ar mammoù-familh klask karantez ha santelezh o ziegezh. R/
- C'hwi hag hoc'h eus kurrnet Mari Rouanez an Neñv, grit d'an holl Anaonkaout perzh en he joa e joa an holl Sent. R/

Kempedenn

Roit d'ho servijerion, ni ho ped, Aotrou Doue, ar c'hras da gaut bepred yec'hed ar c'horf hag an ene, ha gant sikour pedennoù ar Werc'hez glorius Vari, diwallit anezho diouzh tristidigezh ar bed-mañ ha grit dezho tañva evit mat al levezeg peurbadel. Dre Jezuz K.

OFIS AL LENNADENNOU

Meulgan

- 1 - Me ho salud, Gwerelaouen, Medisinez ar bec'herion, Priñsez ha rouanez ar bed, Gwerc'hez dreist d'an holl gwerc'hezeged.
2 - Lakit ouzh ar bירוù treitour Skoet gant ar rouanez, 'Vel ur skoued a silvidigezh, Galloud dreist ho sentidigezh.
3 - O merc'h dibabet gant Doue, Bezit ur rekour d'hon ene, Evit, dre ur vuhez santel, Ma tizhimp ar joa beurbadel.
4 - Goude genel ez oc'h ehomet Gwerc'hez dinamm ha dibec'hed, Plijet ganec'h evidomp-ni Dirak Jezuz advokadiñ.
5 - Deoc'h-c'hwi, Mab Doue bonniget, 'Zo bet gant ur Werc'hez ganet, D'an Tad ha d'ar Spered Santel, Gloar ha meuleudi peurbadel. Amon.

S. 23 Ant.: Setu pobl ar re ho klask, Aotrou.
S. 45 - : Doue a zo omni d'he lakaat da vezañ divrall.
S. 86 - : An holl o deus ennoc'ho chomadur, Mamm santel Doue.

Lennadenn 1 Kron 17,1-15

To Deum ha kempedenn

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- Ar C'hrist, ganet eus ar Werc'hez Vari, deuit, azeulomp anezhañ.

Meulgan

- 1 - Leun a c'hras, en em laouenait! Emmanouel en deus kavet plas En hoc'h annez sklerijennet. Drezoc'h ar c'hloar he deus skedet Evit silvidigezh hor gouenn.
2 - Arc'h an Englev 'n em laouenait! Warnoc'h eo e tiskuiñ bezañ An Doue kuzhet er goabrem. Drezoc'h eo e sklaera an hent Ma kerzher warnañ er gouelec'h.
3 - Gwerc'hez fidel, 'n em laouenait! En deñvalijenn m'ho kalv Doue, 'Rit skediñ ho feiz ken uhel, Ma skoudennit war hor c'hroazioù Peoc'h ar C'hrist hag e sklerijenn.
4 - Rouanez an Aeled, 'n em laouenait! Ennoc'h dija e wel an Iliz Ar groundelezh treuzneuziet: Grit dimp ar joa da gaut perzh E tridarez ho meuleudioù.

S. 62 Ant.: C'hwi a zo leun a c'hras, Mamm Jezuz Krist.

Kant. Dn (P. 6)

S. 149 Ant.: C'hwi a zo gloar Jeruzalem, c'hwi a zo joa Israel.

Komz Doue Iz 61,10

Tridal a joa a ran en Aotrou, tridal a ra va ene em Doue, rak va gwiskot en deus gant dilhad ar silvidigezh, gant mantell ar reizhdad pouroc'hot ac'hanon, evel ur priad yaouank gant he bragerizoù.

En ho splannder, en ho koned, trec'hit ha renit, o Gwerc'hez Vari. V/- Selaouit, va merc'h, stouit ho skouarn, ar Roue a c'hoanta ho koned, trec'hit ha renit, o Gwerc'hez Vari. V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Evurus oc'h, Gwerc'hez santel Vari, ac'hanoc'h eo ganet heol ar reizhdad, ar C'hrist hon Doue.

Breudeur, pedomp hor Salver en deus mennet bezañ ganet eus ar Werc'hez Vari, ha lavaromp:

R/- Va ene a gan braster an Aotrou.

- Mab an Doue bev, dre ho Pasion salvus hoc'h eus miret ho Mamm a bep saotradur: hor mirit glan a bep peoc'hed. R/
- Dasprener an dud, dibabet hoc'h eus da chomadur korf glan-meurbet ar Werc'hez Vari: grit ac'hanomp templ ho Spered. R/
- Mestr ar speredoù, ho Mamm a brederie en he c'halon war ho komzoù hag hoc'h oberoù: grit dimp miret ho komz en ur galon mat ha glan. R/
- Salver ar bed, fellot ez eus bet deoc'h e teufe Mari d'ho skoaziañ ouzh troad ar Groaz: roit dimp-ni e-kreiz hon trubuilhoù joa an esperañs. R/
- Roue ar rouaned, roit hoc'h eus gloar da Vari en he c'horf hag en hoc'h ene: troithor c'hoantoù davet an traoù peurbadus. R/

Kempedenn (P. 222)

Komz Doue Yd 13,22-23 Benniget oc'h gant an Doue hollc'halloudek: drezoc'h en deus kaset da get hon enebourion. Benniget oc'h, va merc'h, gant an Aotrou, an Doue hollc'halloudek, dreist d'an holl wragez war an douar.

V/- Mari a vire an holl draoù-se
R/- Hag a brederie warno en he c'halen.

Meulgan Hag e welis...(P. 219)
Pe: P. 273
Po:

- 1 - C'hwi a zo Gwerc'hez dispar, Mamm da Salver ar bed! C'hwi a zo ur gwir vuzhuh En ofrenn Doue, Itron Varia, En oberenn Doue.
- 2 - Gwerc'hez choazet gant an Tad, 'Vit genel un Doue, Bezit ivez bremañ c'hoazh Mamm bugale Doue, Itron Varia, Mamm bugale Doue.
- 3 - C'hwi 'zo ivez ur feunteun A c'hras hag a druez, Strinket eus an uhelder War an holl zenclezh, Itron Varia, War an holl zenclezh.
- 4 - O Gwerc'hez a sklerijenn, Steredenn an neñvoù, Lugernit 'vit an douar, Gant sklerijenn Doue, Itron Varia, Gant sklerijenn Doue.

S. 109 Ant.: Benniget oc'h e-touez ar gwagez ha benniget frouezh ho korf.
S. 126 - : Setu servijerez an Aotrou: ra vo graet din hervez ho lavar.
Kant. Ef 1,3-10 (P. 11)

Komz Doue Ga 4,4-5 Pa 'z eo deuet leunder an amzer, en deus kaset Doue e Vab, ganet eus ur vaouez, ganet dindan al Lezenn, evit daspronañ ar re a oa sujet d'al Lezenn, hag ober ac'hanomp e advibion.

En ho splannder, en ho kened, trae'hit ha renit, Gwerc'hez Vari.

V/- Selaout, va merc'h, stouit ho skouarn, ar Roue a c'hoanta ho kened, trae'hit ha renit, Gwerc'hez Vari.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: En em laouensit ganin, c'hwi hag a gar an Aotrou, em gwan-der em eus plijet d'an Uhel-neurbet hag em c'horf em eus ganet an Doue graet den.

Dre hanterouriezh ar Werc'hez Vari... (P. 222)

Kempedenn (P. 222)



Meulgan R/- Spered Doue a ziskuizh warno, Spered Doue 'n deus va sakret, Spered Doue en deus va c'haset d'embann ar peoc'h, ar joa.

- 1 - Spered Doue am dibab 'Vit astenn ren an Aotrou Krist e-touez ar broadoù, Hag evit embann ar C'heloù-mat d'e beorien. Mo 'drid a joa e Doue, va Salver. R/
- 2 - Spered Doue am dibab... 'Vit frealziñ ar c'halonoù gwasket gant ar boan... R/
- 3 - Spered Doue... Evit kemenn d'an holl gras ar frankiz adkavot... R/

S. 116 Ant.: Dre an douar a-bezh en em led o mouezh, hag o c'homz betek penn pellañ ar bed (alleluia).

S. 147 - : Evurus an dud a beoc'h, evurus ar re c'hlan a galon, gwelout a raint Doue (alleluia).

Kant. Ef 1,3-10 (P. 11): N'eus ket brasoc'h karantez eget reñf e vuhez evit e vignoned (alleluia).

Komz Doue EF 4,11-13 Hag ofi ivez en deus roet d'ar re-mañ bezañ ebostel, d'ar re-se bezañ profedet, pe c'hoazh avielerion, d'ar re-hont bezañ pastored ha doktored, ma vo reizhet mat ministrerezh ar Sent, evit savidigezh korf ar C'hrist, labour a dle kas ac'hanomp holl da vozañ unan dre ar feiz, dre anaoudegezh Mab Doue, ma teump da vozañ an Den parfet, en ur greskiñ betek barr an oad, betek leunder ar C'hrist.

Da viken, Aotrou, e chom digemm ho komz en neñvoù.

V/- A rumm da rumm e chom digemm ho kwirionez en neñvoù.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Leuniet gant ar Spered Santel, en em lakas an Ebostel da ziskleriañ komz Doue gant hardiziegezh.

En deiz-mañ gouel an ebostel sant... pedomp an Aotrou:

R/- Hor salvit dre ho trugarez.

- Aotrou peurbadel, c'hwi a bad er c'hantvedoù, skuilhit en hor c'halonoù ho komz vev. R/
- Doue kuzhet, c'hwi hag hoc'h eus en em ziskleriet d'an dud, lakit da greskiñ ennomp ar feiz, an esperañs hag ar garantez. R/
- An holl bobloù da anzav ennoc'h ar gwir Doue hag en Jezus Krist ar Salver hoc'h eus kaset dezho. R/
- Kasit mederion da eostañ, Aotrou, evit ma vo kanmeulet hoc'h anv gant an holl bobloù. R/

Kempedenn

Meulgan (P. 3 - 4)

S 18 A Ant.: Dre an douar a-bezh en em led o mouezh hag o c'homz betek dibannoù ar bed.

Ofis an Ebestel

- S. 63 Ant.: Evurus an dud a beoc'h, evurus ar re c'hlan a galon, gwelout a raint Doue.
- S. 96 - : N'eus ket brasoc'h karantez eget reiñe vuhez evit e vignoned.
V/- Embannet o deus oberoù Doue.
R/- Komprenet o deus e vuzhudoù.

Lennadenn Ob 5,12-32
Te Deum ha kempedenn

OFIS AR BEURE

S. 24 R/- Aotrou Jezuz, Roue an ebestel, gloar ha meuloudi deoc'h.

Moulgan

- 1 - Evidoc'h, Aotrou, e kanimp, Graet hoc'h eus dimp advevañ, Ra zevy ho komz en hor c'halon D'hon dieubiñ da viken.
- 2 - Ho kwinienn, o Jezuz Krist, War runioù an hollved, C'hwi dezhi a ray dougen frouezh En ur vendem frouezhusañ.
- 3 - E kalonoù ar gristenion Ho yaouankiz divarvel, A ray dezho kas d'ar bed-holl Hoc'h olichon virvidik.
- 4 - Gloar beurbad d'an Doue trec'her, En a zo mestr an istor, Ra gano onnomp ar Spered E veuleudi hag e c'hloar.

S. 62 Ant.: Dre an douar a-bezh en em led o mouezh hag o c'homz betek dibennoù ar bed.

Kant. Dn (P. 6): Evurus an dud a beoc'h, evurus ar re c'hlan a galon, gwelout a raint Doue.

S. 149 Ant.: N'eus ket brasoc'h karantez eget reiñ e vuhez evit e vignoned.

Komz Doue Ef 2,19,21

Breudeur, n'oc'h ket mui estrenion nag ostizidi, met kenvroiz ar Sent ha tud Jezuz Krist e-unan o vozañ maon-uhel ar c'horn. Ennañ, an Aotrou, emañ an holl savadur o 'n em stummañ hag o kreskiñ da vozañ un Templ santel; ennañ, c'hwi ivez, hoc'h eus plas er savadur da vozañ Ti Doue er Spered.

Da viken, Aotrou, e chom digemm ho komz en neñvou.
V/- A rumm da rumm e chom digemm ho kwirionez en neñvou.
R/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: C'hwi hag hoc'h eus va heuliet en ur gitaat pep tra, a rese-vo kant evit unan hag ho pe on herezh ar vuhez pourbadus.

En doiz-mañ, gouel an abostol sant...., pedomp an Aotrou:

R/- Ho pet soñj eus hoc'h Iliz, Aotrou.

- Sklorijenn ar broadoù, ho pet soñj eus ar re a zo e teñvalojenn ar falskredennoù, digorit o daculagad evit m'hoc'h anzavint, c'hwi an Doue gwirion. R/

- Jezuz, ho Mab, en deus kaset e ziskibion evit embann ar C'heloù-mat, grit bevañ eus ar Spered ar re a brezeg an Aviel. R/

- Doue, mignon an dud, grit d'hoc'h Iliz degas ar peoc'h, ma vezo sin a silvidigezh evit an holl bobloù. R/

- Fellet ez eus bet deoc'h e vefe an Ebestel testoù d'ho Mab dasor-o'het, grit dimp dougen o zosteni betek dibennoù ar bed. R/

Kempedenn

Ofis an Ebestel

OFIS KREISTEIZ

(D'ar gouelioù)

S. 119 - 120 - 121 : Dre an douar a-bezh en em led o mouezh hag o c'homz betek dibennoù ar bed.

Komz Doue Ob 5,41-42

An Ebestel neuze a yeas kuit a-zirak ar Sanedrin, leun a levonez o vozañ bet kavet dellezek da c'houzañv dismegañs evit an Anv. Ha bemdez, en Templ hag en tiez, ne ehanent ket da gelenn ha da embann Keloù-mat ar C'hrist Jezuz.

V/- Embannet o deus oberoù Doue.
R/- Komprenet o deus e vuzhudoù.

Kempedenn

OFIS AN ABARDAEZ

Moulgan Spered Doue... (P. 225) Pe:

- 1 - Ra vo laouen tud an douar Hag an Aelod da gano gloar D'an Ebestel o deus trec'het Gant nerzh Jezuz war ar pec'hed.
- 2 - C'hwi barneron ar c'hantvodoù, Gwir sklorijonn an holl vroioù, Plijet ganoc'h madelezhuz Selaou hor pedennoù doujus.
- 3 - Pa 'z eo ho komz-c'hwi a serr kloz Pe a zigor ar Baradoz, Dre ho kourc'hemenn, ni ho ped, Hon disammit diouz hor pec'hod.
- 4 - C'hwi a sent ouzhoc'h ar c'hleñved, C'hwi a rent buan ar yec'hed, Pareit hor broskadurezh Ha kreskit onnomp ar furnez.
- 5 - Ha pa zistroic ar barner, Jezuz, e dibenn an amzer, Da roio dimp joa didermen Ganeoc'h en e baloz laouen.
- 6 - Bezit meulet, Tad pourbadol, Mab unganet, Spered Santel, Doue unan en ho Treinded, Gant kement tra hoc'h eus krouet. Amen.

S. 109 Ant.: Dre an douar a-bezh en em led o mouezh hag o c'homz betek dibennoù ar bed.

S. 125 - : Evurus an dud a beoc'h, evurus ar re c'hlan a galon, gwelout a raint Doue.

Kant. Ef 1, 3-10 (P. 11): N'eus ket brasoc'h karantez eget reiñ e vuhez evit e vignoned.

Komz Doue Ef 4,11-13 h.a.... (P. 225)

```

0000
0000
000000000000
00000 00000
00000 00000
000000000000
0000
0000
0000

```

OFIS AR VERZHERION

DERC'HENT D'ABARDADZ

Moulgan

- 1 - Galloud, gloar ivez d'ar Spered: Evurus ar gwir Verzher! E gorf m'en deus Doue mezet Ennañ 'c'hello sevel.
2 - Bresk eo ar c'horf hep ar Spered Ha ludu er maro. Dre he Krozaz, Aotrou, oc'h adsav Ennomp gloar hor c'horfoù.
3 - En ho merzher, c'hwi a lazher, Mot c'hwi a gammouler; Rak saludiñ 'ra hoc'h Iliz Ennañ nerzh ar Spered.
4 - Treuzvezañ 'ra ar greun en eost, En deiz ma vo ho Teiz. Buhez na marv n'o deus un anv E ren ar garantez.

S. 117 Ant.: He varvin ket, bevañ a rin evit embann oberoù Doue (all.).
Kant. 1 P 2,21-24 Ar C'hrist en deus gouzañvet evidomp, ha lezet dimp ur skouer evit ma kerzhimp war e roudoù.

R/- Gant e c'houlioù oz omp bet yac'haet.

En n'en deus graet pec'het ebet, n'ous bet gaou ebet en e c'honou; pa veze kunujennet, ne rente kunujenn da zen, met en em lakaat a rae etre daouarn ar Hini a varn gant reizhder. R/

En deus dougethor pec'hedoù en e gorf war ar c'hoad evit hon lakaat da vervel d'hor pec'hedoù ha da vevañ er reizhder. R/

Komz Doue 1 P 4,13

E kement ha m'hoc'h eus perzh e poanioù ar C'hrist, bezit laouen, rak en deiz m'en em ziskulio e c'hloar, e vefot karget a levonez hag a joa. Mar bezit dismegañset en abeg da anv Jezuz, evurus oc'h, rak warnoc'h emañ o repoziñ ar Spered a c'hloar, Spered Doue.

Bezit laouen en Aotrou, tridit, tud just.
V/- Tridit, c'hwi, tud eoun a galon, tridit, tud just.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Evurus an dud heskinet evit ar reizhder, dezho eo Rouantelezh an neñvoù.

En deiz-mañ e lidomp sant...; gantañ podomp an Aotrou:

R/- Aotrou, hor selaouit.

- Sklerijenn ha silvidigezh an holl vroadoù, gwarezite pep lec'h ar re a ro testiñ deoc'h: skuilhit warno tan ho Spered. R/

- C'hwi, hor silvidigezh, hoc'h eus roet ho vuhez dre garantez evit ho preudour: deskit dimp en em garout an eil egile gant an hovelep garantez. R/

- Deuit da skoazellañ ar re a c'houzañv heskinerezh evit hoc'h Anv, ra zeuio ho Spered e-unan da gomz enno. R/

- Ho pediñ a reomp evit ar re a zo tremenet araozomp dre ar marv: tourvezit hon unaniñ holl e komunio ar Sent. R/

+----pa c'houzañve poan, ne c'hourdrouze ket,

Ofis ar Verzherion

Kempedenn

- 1 - Doue hollc'halloudek ha peurbadel, dre bedenn sant...ho merzher, a lidomp on deiz-mañ e c'hinivelezh d'an neñv, grit ma vimp konnerzhot e karantez hoc'h Anv. Dre Jezuz Krist...
2 - Aotrou Doue, c'hwi hag a ziskouez ho kalloud e-kreiz ar warded, selaouit ar re a lid gloar ho merzheroz santez...; resevet he deus diganeoc'h galloud da droc'hiñ, grit ma teuio ivez drozi evidomp ni ar c'hras da c'honit an troc'h. Dre Jezuz Krist...

OFIS AL LENNADENNOU

Moulgan (P. 3 - 4)

- S. 2 Ant.: "E gwirionez, en em unaniñ o deus graet a-enep ho servijer santel, Jezuz, an hini hoc'h eus olevet". Ob 4,27.
S. 10 - : "Hor saveteit, emamp o vont da goll". Mz 8,25.
S. 16 - : "En deizioù e vuhez douarel, gant garn bras ha daeroù, en deus kinniget aspedennoù hag azgoulennoù an Hini a c'hello salviñ anezhañ eus ar marv, hag e voe selaouet". He 5,7.

Lennadenn (Amzer-Fask): Ob 7,9-17. (En diavaez): Rm 8,12-39 pe 2 Kor 4,7 - 5,8.

Te Deum ha kempedenn

OFIS AR DEURB

S. 94 R/- An Aotrou, Roue ar verzherion, deuit, azeulomp anezhañ.

Moulgan

- 1 - Galloud ha gloar ar Spered Glan: 3 - O gwad 'n em vesk gant gwad salver Evrus ar gwir verzher! A walc'h hor pec'hedoù, E gorf m'en deus Doue mezet Karantez 'z int ar Galon-se Ennañ 'c'hello sevel.
2 - Evel ar greun a vez malet 4 - Evrus neb a ro hop kontañ Da vezañ hor bara, Bot' e gorf e-unan. O c'horf 'n em stag ouzh korf brevet En Doue e kav e frankiz, Profet gant hon daouarn. Dremm d'an holl dizelo.

S. 62 Ant.: An neb an heuilh ne gorzh ket en deñvalijenn, bezañ en devo sklerijenn ar vuhez.

Kant. Dn (P. 6): Evel an aour er c'hlozuzer, Doue a aprou e zibabidi.

S. 149 Ant.: Ur sklerijenn hop diskar a sklaera ho Sent.

Komz Doue Rm 8,35.37-39

Piv hon disrammo diouzh karantez ar C'hrist? an trubuilhoù? an anken, an heskinerezh,

an naon, an noazhder, ar riskloù, ar c'hloze? Mann; met e kement-se n'eo ket dias dimp troc'hiñ dre an hini en deus karet ac'hanomp. Ya, sur on eus an dra-se, nag ar marv, nag ar vuhez, nag an Alez nag ar Prifselezhioù, nag an amzer a-vromañ nag an amzer da-zont, nag ar galloudegezhioù, nag an uhelder nag an donder, na krouadur all ebet ne c'hellint hon disrammañ diouzh karantez Doue en em siskleriet e Jezuz Krist hon Aotrou.

An neb a sell ouzh Doue a splannao, war e zremm c'hwervoni ebet.
V/- Evurus ar re a c'houlder ennañ, war e zremm c'hwervoni ebet.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Evurus ar re a zo heskinet evit ar reizhder, dezho eo Rouantelezh an neñvoù.

Ofis ar Verzhherion

En deiz-mañ e lidomp sant...; gantañ pedomp an Aotrou:

R/- Ho Rouantelezh deuet dimp.

- Bezit benniget, O Krist, Salvor ar bed-holl, dre m'hoc'h eus gouzañvet ho Pasion evidomp, rak dasprenet ez omp bet gant ho kwad priziuz. R/
- Kasot hoc'h eus ho tiskibion da gemenn an Aviel d'ar bed, skoazollit ar re a embann ho Kreaz trec'hus. R/
- Ho pet soñjeus an dud gouestlet da servij o broudeour, ma ne vint ket digalonkaet en o mennadoù gant an droukverzh nag an diveizusted. R/
- Grit dimp dougan testeni dirak an dud, dezho da reiñ gloar, o woulout hon oberoù-mañ, d'an Tad a zo en neñvou. R/

Kempedenn (P. 229)

OFIS KREISTEIZ

(D'ar gouelioù)

S. 122 - 123 - 124: An neb am heuilh ne gerzh ket en deñvalijenn, bez' en devo sklerijenn ar vuhez.

Komz Doue Jk 1,2-4

Sollit evel un abeg a levenez vras e kouezhfe warnoc'h rouzioù a bep seurt, en ur c'houzout e teu gant aprou h feiz pasianted da sevel ennoc'h. Met ho pasianted, ra vo ganti obererezh pourvat, ma vefot parfet ha peurreizh hap netra o vankout ennoc'h.

V/- Hon one a c'hortoz an Aotrou.
R/- EH eo hon nerzh hag hor skoed.

Kempedenn

OFIS AN ABARDAEZ

Moulgan (P. 228) pe:

- 1 - O Doue, gopr ho karidi, O herozh hag o c'hurunenn, Selaouit ouzh mouezh her pedenn A gan d'ho merzher meuloudi.
- 2 - Rak hemañ on deus disprizet Joa faos ha dibad an douar Evit antren e-barzh ar c'hloar Na vo dezhi diskar ebet.
- 3 - En ur skuilh evidoc'h e wad Gant nerzh bras en deus gouzañvet An taolioù garv skoet outañ Ha gomezet buhez peurbad.
- 4 - Rak-se digant ho trugarez E c'houlennomp stouet izel, En deiz gouel ho merzher santel, Hor glanaat diouzh pep fallentez.
- 5 - Meuloudi deoc'h, Doue santel, O Tad ha Mab ha Spered Glan, Tri ferson an Doue unan, E gloar ho splannder divarvel. Amen.

S. 109 Ant.: An neb am heuilh ne gerzh ket en deñvalijenn, bez' en devo sklerijenn ar vuhez.

S. 115 - : Evel an acur er c'hlocuzer Doue a aprou e zibabidi.
Kant. Disk.4 (P. 15): Ur sklerijenn hep diskar a sklaera ho Senti.

Komz Doue h.a.... (P. 228)

=====
oooooooo
oooooooo
oooooooo
=====

OFIS AR GWERC'HEZED

DERC'HEMENT D'ABARDAEZ

Moulgan C'hwi, Tad ar ger kentañ... (P. 4) pe:

- 1 - O kurunenn ar gwerc'hez, C'hwi bet ganet gant an hini N'eus nemeti mamm ha gwerc'hez, Selaouit mouezh hor meuloudi.
- 2 - A galon frondus int ho kan C'hwi o vaesa 't ouez al lili, Rak o fried uhel ha glan Hag o joa peurbad ez oc'h-c'hwi.
- 3 - Ekement lec'h ma plij deoc'h mont E troont depred d'hoc'h heuliañ, Ha d'ho meulif ne bezouzent Gant son o c'hanennoù kaerañ.
- 4 - Ni avat, pec'herion maz omp, Ho pedomp a galon izel, Na gavo ken digor ennomp Na drouke'hoantegezh na touell.

5 - Meuloudi ha Klod peurbadel D'an Tad, d'ar Mab a sklerijenn, A ron gant ar Spered Santel A holl viskoazh da virviken. Amen.

S. 112 Ant.: Ra vo benniget anv an Aotrou a-vremañ ha da virken.
S. 147 - : Neul an Aotrou, Jeruzalem, lid da Zoue, o Sion.

Kant. Disk. 19 (P. 8)

Komz Doue 1) - 1 Kor 7,32-34 An den dizimez emañ e soñj gant traoù an Aotrou. E val-se ivez ur plac'h dizimez konkoulz hag ur plac'h yaouank a gmer preder gant traoù an Aotrou, c'hoant dezhi da vezañ santel a gorf hag a spered.

2) - Fil 4,8-9 Koment a zo gwir, uhel, leal, koment a zo vertuzus ha meulus, oc' koment-se a dle bezañ mennad ho spered. Hag an Doue a beoc'h a vo ganoc'h.

3) - 1 P 3,3-5 Ho kened ne vo ket ficherezh diavaoz, blev plañsonet, bragerizoù-acur, dilhad dreset-kaer, met kentoc'h kened diabarzh e sekred ar galon, hini un eno bepred dous ha peoc'hus: sed ar pezh a zo priziuz da sell Doue.

Grit dimp gwelout, Aotrou, ho karantez.
V/- Roit dimp, Aotrou, ho silvidigezh, ho karantez.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Va eno a gan braster an Aotrou.

Er gouel-mañ on enor da santoc'...pedomp an Aotrou:

- Ra skedo war ar bed hor buhez kuzhet onnoc'h gant ar C'hrist, evit ma teuo war wel an neñvou hag an douar nevez. R/
- Roit dimp an izelegezh a galon, dimp da vezañ e servij an eil egile e karantez ar C'hrist. R/
- Troit hor c'halon-vaen en ur galon-gig, roit dimp Spered nevez an Aviel, evit ma kerzhimp hep fallaenn gant an hent. R/
- Roit dimp, Aotrou, ho Spered a veuloudi hag a bedenn, evit ma c'hol-limp ho trugarskaat dizehan e pep tra. R/
- Grit dimp disteurel tristidigezh ar pec'hed ha bezañ mennet d'ar vuhez: bezit hoc'h-unan ar joa na vo ket lemet diganimp. R/

Kempedenn

- 1 - Ra zeuio santez...., gwerc'hez ha merzherez da c'houlenn evidomp ho pardon, Aotrou, rak gouezet ho doa plijout deoc'h dre veritoù he glanded hag an testeni roet ganti d'ho kalloud. Dre Jezuz Krist...
- 2 - Selaouit hor pedennoù, Doue hor Salver, hag o lidañ gant joa gouel santez...., roit dimp ar c'hras d'ho servijañ gant karantez. Dre Jezuz K.

OPIS AL LENNADENNOU

Moulgan (P. 3 - 4)

(Salmoù hag antifonennoù an deiz) pe:

S. 18 B Ant.: Bezit parfetevel m'eo parfetho Tad eus an neñv. (Mz 5,48)
 S. 44 - : An hini a zo gantañ ar wreg yaouank eo ar priod; met mignon an den yaouank p'omafi aze o selaou anezhañ, a gav levezon gant mouezh an den yaouank. (Yn 3,29)
 V/- Piv eo va mamm ha va breudour?
 R/- Ar re a selaou komz Doue.

Lennadenn 1 Kor 7,25-40

Te Deum

Kempedenn

- 1 - Aotrou Doue, c'hwi hag a ziskouez ho kalloud e-kreiz ar waded, selaouit ar re a lid gloar ho merzherez santel.....: resevet he deus diganoc'h galloud da drec'hiñ, grit ma teuo ivez drozi evidomp-ni ar c'hras da c'honit an trec'h. Dre Jezuz Krist...
- 2 - Aotrou Doue, c'hwi hag a gar ar werc'hded hoc'h eus graet skedif ar vortuz-se e buhez santez.... ken o leske he c'halon gant ar garantez; peogwir eo'h enoromp anezhi en deiz-mañ, roit dimp ar c'hras da gavout omni ur skour a c'hlanded hag a garantez. Dre Jezuz K.

OPIS AR BEURE

S. 94 R/- An Aotrou, Roue ar gwerc'hez, deuit, azeulomp anezhañ.

Moulgan

R/- Lavaret en deus Doue:
 "Eus kreiz an deñvalijenn ra luc'ho ar sklerijenn!"
 Setu ma rad'e sklerijenn skedif en hor c'halonou,
 Evit ma splanno enn' anaoudegezh gloar Doue,
 A zo war zremm ar C'hris.
 Bugale an deiz hag ar sklerijenn,
 Kerzhomp davet sklerijenn deiz ar C'hris,
 Ma sklerijenn hon teñvalijenn,
 Ha ma trec'ho e beoc'h en hor c'halon! R/
 Ra deurvezo hon Doue, Tad ar c'hloar,
 Dont da sklacraat daoulagad hor c'halon!
 Ra zisklerio pe seurt eo an herezh!
 A vir evidomp e-kichen ar C'hris. R/
 Meuleudi ha gloar da Zoue an Tad,
 Dre Jezuz Krist, Mab eus e garantez,
 En unanded Spered ar sklerijenn,
 Enor ha gloar d'an Doue peurbadel. R/

(Salmoù hag antifonennoù an deiz)

Komz Doue 2 Kor 11,2

Gwarizi am eus en ho keñver, gwarizi doue-ol, rak ho timezet em eus d'ur pried unel:
 ovel ur werc'hez c'hlan em eus ho kinniget d'ar C'hris.
 pe: Kant. 8,7 Doureier meur n'hellint ket mougañ ar garantez, na stêrioù beuziñ homañ. An nob a ginnigfe holl deñzorioù o di evit pronañ ar garantez ne zastumfenmet dispriz.

Grit din gwelout, Aotrou, ho karantez.
 V/- Roit dimp, Aotrou, ho silvidigezh, ho karantez.
 V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: (Ant. an deiz)

Er gouel-mañ en enor da santez.... pedomp an Aotrou:

- R/- Aotrou, hor selaouit, Aotrou, roit dimp hor mennad.
- Grit dimp klavout ho karantez a-dal ar beure: ho levezon da vezañ hon nerzh en deiz-mañ. R/
- Aotrou, grit dimp sevel hon daoulagad bepred etrezek ennoc'h, dimp da respont diouzhtu d'ho kalvadennou. R/
- Ra zeuio ho kras da zigeriñ hor c'halonou da ezhommoù hor breudeur; n'hol lezit ket d'e darempredif hep o c'harout. R/
- D'ar re hoc'h eus galvet d'ar c'hlanded peurvat evit rouantelezh an neñvoù roit ar c'hras da heuliañ ho Mab gant lealded. R/

Kempedenn (P. 232: Ra zeuio...)

OPIS KREISTEIZ

(Moulgan, salmoù hag antifonennoù an deiz)

Komz Doue

Krennl. 31,29-30

Kalz a vacuezed o deus labouret kalonek,
 met c'hwi a zo bet trec'h dezho holl.
 Gaouiat ar gened, moged ar goantiz; ur vacuez he deus doujañs Doue eo a zo da veuliñ.

V/- Piv eo va mamm ha va breudeur?
 R/- Ar re a selaou Komz Doue.

Kempedenn (P. 232)

OPIS AN ABARDAEZ

Moulgan

Tad ar ger kontañ... (P. 4)

Ant. ha Salmoù an deiz

Komz Doue

h.a.... (P. 231)

```

=====
=====
=====
=====
=====
=====
=====
=====
=====
=====

```

OFIS AR SENT
HAG AR SENTEZED

DERC'HENT D'ABARDAEZ

Meulgan Sellit pelec'h... (P. 212) pe:

(Evit ur c'hoñfesoù)

- 1 - Sed an den santel, gwir garour an Aotrou,
A lid an Iliz e ouel dre an douar,
P'en deus meritet pignat hizio gant gloar
Da lez an neñvoù.
- 2 - Rak keit m'eo chomet er bed-mañ e ene
En deus en em viret diouz pep kousiadur,
Evit en em ziskouez izel bepred ha pur
Da sell Doue.
- 3 - Ha sed an Aotrou en deus roet dezhañ
Galloud da drec'hiñ pep aroug ha pep kleñved
Ha da bareañ an dud keizh gwallskoet
Gant taolioù Satan.
- 4 - Rak-se holl hizio, unanomp hor mouezhioù
Da ganañ dezhañ meuleudioù laouen,
Ma vezimp harpet gant skoazell e bedenn
'N hon holl ezhommoù.
- 5 - Ra vezo bepred bemnoz, galloudegezh
Deoc'h-o'hwi, hon Doue, Tad ha Mab ha Spered,
Treinded evurus, a c'houarn an hollved
Gant pep madslezh. Amen.

(Evit ar merc'hod santel)

- 1 - Kanomp holl hizio, Kristenion,
Ar vaouez nerzhus a galon,
A lugern war ar bed a-bezh
Sklerijenn splann he santelezh.
- 2 - Leun a garantez doueüs
En ur argas ar bed lorbüs,
War-zu an neñv gant brasa gred,
War hent Jezuz he deus korzhet.
- 3 - Trec'het he c'horf gant pinijenn,
Maget hec'h ene gant pedenn,
He deus lezet joaioù dibad
Evit gonit buhez peurvat.
- 4 - O Jezuz, skouer hon eneoù,
Skoazell ha nerzh hor c'halonoù,
Dre ar santez a enoromp
Reit ar grasoù hon eus ezhomm.
- 5 - Ra vo gloar deoc'h, Tad peurbadel,
Deoc'h, Mab, ha deoc'h, Spered Santel,
A zo Doue ar sklerijenn
A holl viskoazh da virviken. Amen.

S. 112 Ant.: Ra vo benniget anv an Aotrou, a-vremañ ha da viken.
S. 145 - : Alleluia, an Aotrou a ren evit ar c'hantvedoù.
Kant. Ef 1,3-10 (P. 11)

Komz Doue (Sant, santez) Rm 8,28-30 Ha gouzout a reomp emañ Doue o
Konlabourat e pep tra evit o
mad gant ar re a gar anezhañ, gant ar re en deus dibabet en e vennad.
Rak ar re en deus anavezet a-ziaroak eo ar re en deus rak-veket da
vezañ heñvel ouz patrom e Vab, evit ma vo eñ ar mab-henañ da vreu-
deur e-leizh. Hag ar re en deus rak-veket, o galvet en deus; ar re

en deus galvet, o laket en deus ivez da reizh, hag ar re en deus laket
da reizh, eo dezho ivez en deus roet ar c'hloar.

(Pab, eskob, beleg) 1 P 5,1-4

Ar re a zo Henacurion en ho
touez, o fediñ a ran, me hag
a zo henaour evelto ha test eus poanioù ar C'hrist, me hag a dlo ivez
kaout lod er c'hloar a ya da vezañ diskuliet: mosait deñved Doue bet
fiziet ennoc'h, renit anezho, neket en ur c'hinañ, met a-galon c'hredus,
neket oc'h ober hoc'h aotronez war ar re a zo bet roet deoc'h da lod,
met o tont da vezañ skouer an deñved. Ha pa 'n em ziskouezo ar pem-
mesacr e resevot ar gurunenn a c'hloar, an hini na gollo ket e sked.

(Diagon) Ob 6,2-3

Neuze an Daouzek, o vezañ
dec'halvet engroez an dis-
kibled, a lavaras: "W'eo ket mat e tilezfemp komz Doue evit ober war-
dro ar pourvezerezh. Klaskit kentoc'h en ho touez, breudeur, seizh
gwaz a vrud-vañ, leun a Spered Santel hag a furnez, a vo laket ganimp
war ar servij-se."

(Doktored) Jk 3,17-18

Ar furnez eus an nec'h a zo
er c'hontrol pur da gentañ
ha goude-se peoc'hus, trugarezuz, douget da gaout fiziañ, leun a
druzezh hag a oberoù mat, douget hoñval e-keñver an holl hag hep pil-
pouzezh. Ar reizhed a zoug frouezh, pa vez hadet er peoc'h, evit
ar re oc'h ober gant ar peoc'h.

An den just morse ne vrafisell, an eñvor anezhañ 'zo peurbad.
V/- Evurus an neb a zouj an Aotrou, an eñvor...
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: (Ant. an deiz)

En deiz-mañ gouel sant(ez)....., gantañ (ganti) pedomp
an Aotrou:

R/- Ho pediñ a reomp, Aotrou.

- Aotrou, grit ma vo salvet an holl dud, ha ma teuint da anaout ar
wirionez. R/

- Grit ma vimp, dre hon oberoù hag her c'homzoù, holen an douar ha
sklerijenn ar bed. R/

- Roit d'ar re a gar ar reizhed hag a labour eviti ar c'hbras da la-
bourat evit lakaat er bed ur peoc'h gwirion. R/

- C'hwi hag a c'haly ac'hanoamp da vologiezh roueol ar C'hrist, grit
dimp kinnig deoc'h ur brofadenn speredel hag embann ho purzhudoù. R/

- Ho pediñ a reomp evit ar re a zo tremenet araozomp dre ar marv;
teurvezit hon unanif ganto e komunion ar Sent. R/

Kompedenn

1 - Aotrou Doue, sklerijenn ha pastor ho fi-
deled, diazezet hoc'h eus an hec'h iliz
sant(ez).... evit magañ ho pobl gant e gomz (he c'homz) hag
he stummañ gant e (he) skouer; roit dimp ar c'hbras, dre e be-
denn (he fedenn) da virout ar feiz en (he) deus kelennet ha da
houliañ an hent en (he) deus digoret. Dre Jezuz Krist...

2 - Grit, ni ho ped, Doue hollec'halloudek, ma
teuio skouer ar Sent d'hor broudañ evit
houliañ ur vuhez welloc'h; ha pa lidomp eñvor sant(ez)....
grit dimp ar c'hbras da vevañ eveltañ (evelt). Dre Jezuz K...

3 - Ni ho ped, Doue hollc'halloudek, da reiñ dimp dre bedenn santez..... ur skoazell speredel, peogwir ho buhez souezhus-meurbet a zo ur skouer a c'hell servijout da bep hini ac'hanomp. Dre Jezuz Krist...

OFIS AL LENNADENNOU

Meulgan (P. 3 - 4)

S. 20 Ant.: "Resevet en deus ar vuhez, an hini dasorc'het, evit heuliad an deizioù a-hed ar c'hantvedoù." (S. Ireneo)

S. 90 - : "Setu petra a ro g'leor da Zoue e tougfeoc'h e-leizh a frouezh." (Yn 15,8)

pe: (Salmoù hag antifennoù an deiz)

V/- An Aotrou a ren an den just dre hentoù eoun.
R/- Diskouez a ra dezhañ Rouantelezh Doue.

Lennadonn

Pastor: 2 Kor 4,1-18 pe 1 P 6,1-11.
Pab, eskob, beleg: Ob 20,17-36.
Doktor: 1 Kor 2,1-16 pe 2 Tm 2,1-7. 14b-26.
Sant(ez): Fil 1,29 - 2,16 pe Fil 3,8b-4,1. 4-9

Te Deum

Kempedonn

(Pab) Pastor peurbadel, beilhit gant tenerded war ho tropell ha dre ar pab santel..... a rojoc'h evel pastor d'hoc'h Iliz a-bezh, he mirit dindan ho kwarez dalc'hus. Dre Jezuz Krist...

(Eskob, beleg) Aotrou, sklerijenn ha pastor ho fideled, diazazet hoc'h eus en hoc'h Iliz sant... ..evit magañ ho pobl gant e gomz hag he stummañ gante skouer; roit dimp ar c'hras, dre e bedenn, da virout ar feiz en deus kolennet ha da heuliañ an hent en deus digoret. Dre Jezuz K...

(Diazezer an eskopti) Aotrou hon Doue, dre an eskob sant hoc'h eus graet skodañ sklerijenn ar gwir feiz e kalon ho fideled; grit dimp ar c'hras da heuliañ e gemennadur a silvidigezh ha skouer e santelezh. Dre Jezuz Krist...

(Lean(ez) Aotrou, roet hoc'h eus ar c'hras da sant (santez)..... da vont war-raok war hent perved an Avisel (ha da vleniañ-di ar re all): dre e bedenn (he fedenn) renit hor c'hammedoù hervez ho promesa evit ma c'hellimp a-holl-galon redok war hent ho kourc'hemenoù. Dre Jezuz Krist...

(Sant) Grit, ni ho ped, Doue hollc'halloudek, ma touio skouer ar sent d'hor broulfañ evit ma heuliimp gwelloc'h vuhez, ha pa lidomp eñvorsant..... grit dimp ar c'hras da vevañ eveltañ. Dre Jezuz Krist...

(Santez) Ni ho ped, Doue hollc'halloudek, da reiñ dimp dre bedenn santez....ur skoazell d'hor spered, peogwir ho buhez souezhus a zo ur skouer a c'hell servijout da bep hini ac'hanomp. Dre Jezuz Krist...

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- An Aotrou Jezuz, Test fidel, deuit, azeulomp anezhañ.

Meulgan Digorit va selloù.... (P. 3)

(Antifennoù ha salmoù ar sul pe an deiz)

Komz Doue (Sant-ez) Em 12,1-2 Hoc'h aspediñ a ran eta, breudeur, en anv trugarez Doue, d'en em gin-nig hoc'h-unan da brofadenn vev, santel ha plijus da Zoue: sed ar servijerezh speredel a die bezañ hoc'h hini. Ha n'it ket da gemer skouer war ar bed a-vremañ, met en em stummit en-dro dre nevezif ho spered, evit anavezout petra eo youl Doue, a zo kement a zo mat, kement a blij dezhañ, kement a zo parfet.

(Pab,eskob, beleg) 1 P 5,1-4 Ar re a zo Henacourion.. (P.234)

(Diagon) Ob 6,2-3 Neuze an Daeuzek... (P. 235)

(Doktor) Jk 3,17-18 Ar fumez eus an nec'h..(P. 235)

An den just morse n'la vrasell, an eñvor anezhañ 'zo peurbad.
V/- Eurus an neb a zouj an Aotrou, an eñvor...
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: (Ant. an deiz)

En deiz-mañ e lidomp gouel sant(ez)....gantañ (ganti) pedomp an Aotrou:

R/- Aotrou, hor selacuit.

- Beilhit war an dud, patred ha merc'hed, gouestlet deoc'h, roit dezho ar c'hras da heuliañ ho Mab gant nerzh-kalon. R/

- Ra vo talvoudus d'hor breudeur hol labour pemdeziek, evit ma savimp ganto hag evito ur bed da blijout deoc'h. R/

- Deskit dimp anavezout ho skeudenn en hor breudeur hag ho servijañ e pep hini anezho. R/

- Grit dimp ober gant eeunder al labour hoc'h eus fiziet ennomp ha bezañ servijerion mat ha leal. R/

Kempedenn (P. 235)

OFIS KREISTEIZ

(Meulgan, ant. ha S. an deiz)

Komz Doue Fil 3,7-8a

Met an holl draoù-se hag a roe din an tu-kreñv, em eus sellet outo evel ur

c'holl e-keñver ar gonid uhel-meurbet-se a zo anaoudagezh ar C'hris Jezuz, va Aotrou. Evitañ em eus kavet gwelloc'h koll pep tra, sel-lout a ran ouzh pep tra evel lastez evit gallout gonit ar C'hris.

V/- An Aotrou a ren an den just dre hentoù eoun.
R/- Diskouez a ra dezhañ Rouantelezh Doue.

OFIS AN ABARDAEZ

Meulgan h. a. (P. 234) nemet: Salmoù: 109 ha 111 (sul IV p. 80 gant ant.)
Kant. Disk 15,3-4 (p. 49)

GOUELIOU
AR
SENT

2 Genver S. BAZIL-VEUR
S. GREGOR-NAZIAN
esk. dokt.

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus prizet sklerijennañ hoc'h Iliz gant skouerioù ha kelennadurezh sant Bazil ha sant Gregor, roit dimp ar c'hras, ni ho ped, da zeskiñ ho kwirionez gant izelegezh ha da vezañ fidel d'he lakaat da vleuniañ dre ar garantez en hon oberoù. Dre Jezuz Krist...

7 Genver S. REMONT PEGNAFORD
beleg

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus roet d'ho peleg sant Remont gras ur garantez dispar e-keñver ar bec'herion hag ar brizonidi, grit dimp, dre e brezegerezh, terriñ chadennoù hor pec'hedoù evit ober gant speredoù dishual ar pezh a blij deoc'h. Dre Jezuz Krist...

13 Genver S. HILER
eskob, doktor

Kempedenn Roit dimp ar c'hras, ni ho ped, Doue hollc'halloudek, d'anavezout ha da embann douezelezh ho Mab bet diskle-riet gant nerzh hag hep fallaat gant an eskob sant Hiler. Dre Jezuz Krist...

15 Genver S. REMI
eskob

Kempedenn Fellet ez eus bet deoc'h, Aotrou, ober d'hoc'h Iliz kreskiñ dre labour abostolerezh sant Remi hag e aked d'ho servijañ; roit dimp, dre e hanterouriezh, mirout ar feiz en deus kaset dimp hag heuliañ e skouerioù. Dre Jezuz Krist...

17 Genver S. ANTON
abad

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hoc'h eus roet d'an abad sant Anton ar c'hras d'ho servijañ er gouelec'h dre ur vuhez dis- par, grit dimp, gant sikour e bedennoù, en em nac'h hon-unan evit ho karout dalc'hmat dreist pep tra. Dre Jezuz Krist...

20 Genver S. FABIAN
pab, merzher

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi gloar ho pelesion, roit dimp ar c'hras, gant sikour pedennoù ho merzher sant Fabian, da vont war wellaat o kaout ur feiz heñvel ouzh e hini hag ouzh ho servi- jañ evel m'eo dleet. Dre Jezuz Krist...

S. SEBASTIAN
merzher

Roit dimp, ni ho ped, Aotrou Doue, ar spered a nerzh evit ma c'hellimp deskiñ, hervez skouer c'hlorius ho merzher sant Sebastian, sentif ouzoc'h-c'hwi kentoc'h eget ouzh an dud. Dre Jezuz Krist...

21 Genver S. AGNEZ
gwerc'hez, merzheres

Kempedenn Doue hollc'halloudek ha peurbadel, c'hwi hag a zibab tud dinerzh ar bed evit izelaat ar reoù c'halloudusañ, sela- quit gant madelezh hor pedennoù; p'emaomp hiziv oc'h ober gouel ginivelezh santez Agnez da c'hloar ar baradoz, roit dimp ar c'hras da heuliañ skouer he dalc'husted er feiz. Dre Jezuz K...

22 Genver S. VISANT
diagon, merzher

Kempedenn Doue hollc'halloudek ha peurbadel, skuilhit ennomp gant madelezh ho Spered, ma vo nerzhet hor c'halonoù gant ar garantez-se a reas d'ho merzher sant Visant harpañ en e holl dourmantoù. Dre Jezuz Krist...

24 Genver S. FRANSEZ A SAL
eskob, doktor

Kempedenn Aotrou Doue, evit silvidigezh an eneoù ez eus bet fellet deoc'h e vefe an eskob sant Frañsez holl d'an holl, grit dimp, en ho madelezh, kemer skouer warnañ evit diskouez dalc'h- mat douster ho karantez e servij hor breudeur. Dre Jezuz K...

25 Genver S. PAOL
gonezet d'ar Feiz

Ofis an ebistel, nemet:

S. 94 R/- Jezuz en deus gonezet d'ar Feiz abostol ar broadoù, deut da reiñ gloar dezhañ.

Ant. (Beure hag abardaez)

- 1 - Plantet em eus, Apollo en deus दौरaet, met Doue eo en deus graet kreskiñ.
- 2 - Kemer a rin gloar eus va gwanderoù, evit ma chomo ennon galloud ar C'hrist.
- 3 - Gras Doue em c'heñver n'eo ket bet difrouezh, met chom a ra bepred ennon.

Komz Doue (Beure) Ob 26,16-18 Setu amañ evit petra em eus en em ziskouezet dit, evit da lakaat da servijer ha da dest eus ar weledigezh ac'h eus va gwelet enni, hag eus ar re en em ziskouezin c'hoazh ganto dit-te. Da zivall a rin diouzh ar bobl ha diouzh ar Baganed-se az kasan daveto, da zigerifi o daoulagad d'o lakaat da zistreiñ diouzh an deñvalijenn d'ar skleri- jenn ha diouzh galloud Satan war-zu Doue, evit ma resovint ar pardon eus o fec'hedoù hag ul lod-herrezh e-touez ar sent, dre ar feiz ennon- me.

(Kreisteiz) 1 Tm 1,14-15 Ha fonnus eo bet evidon gras an Aotrou, gant ar feiz hag ar garantez a zo er C'hrist Jezuz. Asur eo ar gomz-mañ ha dellezek da vezañ degemeret: ar C'hrist Jezuz a zo deuet er bed-mañ evit salviñ ar bec'herion, ez on me va-unan ar c'hentañ anezho.

(Abardaez) 1 Kor 15,9-10 Me eo an disterañ eus an Ebistel, ha n'on ket dellezek da vezañ anvet abos- tol, peogwir em eus heskinet Iliz Doue. Koulskoude, dre c'hras Doue ez on ar pezh ez on, hag ar c'hras-se en deus bet em c'heñver n'eo ket difrouezh; er c'hontrol eo muic'h egeto holl em eus labouret, o! n'eo ket me, met gras Doue ganin.

Gouelioù ar Sent

S. Paol gounezet d'ar Feiz

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus kelennet ar bed-holl gant prezegennoù an abostol sant Paol, roit dimpar c'hras, ni ho ped, pa lidomp an deiz ma voe gounezet d'ar Feiz, da gemerout skouer diwarnañ evit mont war-zu ennoù, ha bezañ er bed testoù eus ho kwirionez. Dre Jezuz Krist...

(Ant. evit ofis al lennadennoù)

- 1 - Evidon bevañ eo ar C'hrist ha mervel a zo ur gopr.
- 2 - E Kroaz hor Salver Jezuz Krist eo e kavan va c'hloar.
- 3 - Stourmet em eus an engann mat, peurec'hraet eo va redadenn, miret em eus ar Feiz.

Lennadenn Ga 1,11-24

26 Genver S. TIMOZEZ & S. TITOZ eskibion

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus kaeraet sant Timozez ha sant Titoz gant vertuzioù an ebestel, roit dimpar c'hras, gant sikour o fedennoù, da vevañ er santelezh hag er justis er bed-mañ evit meritaout en em gaut un deiz en hor gwir vro, ar baradoz. Dre Jezuz Krist...

27 Genver S. ANJELA guerc'hez

Kempedenn Aotrou Doue, ni ho ped, ra zalc'ho hep paouez ar wer-c'hez santel Anjela d'hon erbediñ ouzh ho madelezh, evit ma c'hellimp en ur heuliañ skouerioù he c'harantez hag he furnez mirout ho kelennadurezh ha bezañ testoù anezhi dre hor buhez. Dre Jezuz Krist...

28 Genver S. TOMAZ AKWINAZ beleg, doktor

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus lakaet sant Tomaz da vezañ brudet evit e c'hoant gredus d'ar santelezh hag e aked evit ar skiantoù-sakr, grit dimpar, ni ho ped, kompren ar pezh en deus bet kelennet, ha seveniñ hervez e skouer, ar pezh a reas e-uman. Dre Jezuz Krist...

AN DEN EVURUS JULUAN MANER beleg

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus en un doare efedus, dre labourioù an den eñrus Juluan Maner, adenaout e kalonoù an dud ar Feiz aet war ziskar, plijet ganeoc'h reiñ dimpar c'hras, gant sikour e bedennoù, da c'hoan stag-mat ouzh ar Feiz-se, ha da ziskouez en hon oberoù ar sklerijenn a skuilh en hon eneoù. Dre Jezuz Krist...

31 Genver S. YANN BOSKO beleg

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus laket da sevel ho peleg sant Yann Bosko da vezañ tad ha kelenn ar dud yaouank, roit dimpar c'hras, ni ho ped, da vezañ entanet gant tan ar garantez a oa en e greiz evit ma vimp troet da glask silvidigezh an eneoù ha d'ho servijañ c'hwi hepken. Dre Jezuz Krist...

Gouelioù ar Sent

2 C'HWEVRER H.S. KINNIGET EN TEMPL

DERC'HEM D'ABARDAZ

Neulgan Ne oa netra... (P. 128)

S. 112 Ant.: Diskleriet e oa bet gant ar Spered Santel da Simeon ne varvje ket a-raok dezhañ gwelout an Aotrou.

S. 147 - : Simeon a gemeras ar bugel war e zivrec'h, a drugarekaas hag a vennigas an Aotrou.

Kant. Fil 2,6-11 (P. 28): Gouloù da sklerijennañ ar broadoù ha gloarevit ho pobl Israel.

Komz Doue He 4,15-16

N'hon eus ket un arc'hveleg n'hellfe ket kendreuziñ ouzh hor gwanderoù, met unan a zo bet ampruet e pep tra, da vezañ heñvel ouzhip nemet ar peo'hod n'en deus ket bet. Tostaomp eta gant surentez ouzh tron ar c'hras evit kaout drugarez ha resev ar c'hras da vezañ skoazellet e kouls mat.

Kantikoù evidon ho polentezioù, koun am eus en noz eus hoc'h anv.
V/- Ho pet soñj eus ho komz d'ho servijer ma rejoc'h ganti va esper, koun...
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Ar c'hozhiañ a zouge ar Bugel met ar Bugel a rene ar c'hozhiañ.

Azeulomp hor Salver kinniget en Templ ha lavaromp dezhañ:

R/- Aotrou, grit dimpar gwelout ho silvidigezh.

- Krist hor Salver, gouloù da sklerijennañ ar broadoù, roit sklerijenn ar Feiz d'ar re n'hozh n'hozh anavezont ket c'hoazh. R/

- C'hwi hon Dasprener, gloar evit ho pobl Israel, grit d'hoc'h Iliz skidiñ e-touez ar broadoù. R/

- C'hwi hag a zo c'hoantaet gant tud an hollved hep gouzout dezho, c'hwi hag o deus daoulagad Simeon gwelet ho silvidigezh, salvit an holl dud. R/

- Pa voec'h kinniget en Templ e voe degemmet ur c'hleze a c'hlaoc'har d'ho Mamm Mari: kernerzhit ar re a c'houzav evit servij ho Rouantelezh. R/

- C'hwi, euvrusted ar Sent, c'hwi arvestet hervez e c'hoant gant Simeon a-raok mervel, en em ziskuilhit d'ar re a glask ho kwelout er beurba-delezh. R/

Kempedenn

Doue hollc'halloudek ha peurbadel, ni ho ped a galon izel: peogwir ho Mab unganet, gwisket gantañ hon natur-den, a zo bet kinniget hiziv en Templ, grit ma c'hellimp ivez en em ziskouez dirazoc'h gant eneoù glanaet. Dre Jezuz Krist...

OFIS AL LENNADENNOU

Neulgan En hor c'halon... (P. 126)

S. 2 Ant.: Mari ha Josef a zougas Jezuz da Jeruzalem evite ginnig d'an Aotrou.

S. 18A - : Simeon, den just ha devot, a c'hortoze frealzidigezh Israel hag ar Spered Santel a oa gantañ.

S. 44 - : A-raok deoc'h anavezout ar marve welfot ar C'hrist, ho Salver.

Lennadenn Em 13,1-3.11-16

V/- Gant ho sked hag ho kened.
R/- It war-raok, trec'hit ha renit.

Gouelioù ar Sent C'hwevrer

2 C'hwevrer

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- Kanithag en em laouenait, merc'h Sion, setu Doue ho Salver.
Meulgan Peurleum eo an cabl... (P. 127)
S. 62 Ant.: Diskleriet e oa bet da Simeon gant ar Spered Santel ne varv-
 je ket a-raok gwelout an Aotrou.
Kant. Dr (P. 6): Simeon a gemeras ar bugel war e zivrec'h, a drugarekaas
 hag a vennigas an Aotrou.
S. 149 Ant.: Gouloù da sklerijennañ ar broadoù ha gloar evit ho pobl Israel.
Komz Doue He 10,5-7 Ar C'hrist o tont er bed a gomz evel-hen:
 Nag aberzh na profadenn n'o deus plijet
 deoc'h, met ur c'horf hoc'h eus kempennet din. H'hoc'h eus ket kavet
 mat an olokoù hag ar sakrifisoù evit ar peoc'hed, neuze em eus la-
 varet: setu ma teuan, rak e rolled al Levr eo skrivet diwar va fenn,
 evit ober ho youl, o Doue.

Kantikou evidon ho polentezioù, koun an eus en noz eus hoc'h anv.
 V/- Ho pet soñj eus ho lavar d'ho servijer hag a voe va esper, koun...
 V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Simeon a zegemeras ar Bugel war e zivrec'h hag a vennigas Doue:
 Bremañ e c'hellit lezel ho servijer da dremen e peoc'h.

Azeulomp hor Salver kinniget en Templ ha lavaromp dezhañ:

R/- Aotrou, grit dimp gwelout ho silvidigezh.

- Aotrou Jezuz Krist, fellet ez eus bet deoc'h bezañ kinniget en Templ
 hervez al Lezenn: deskit dimp kemer perzh e profadenn eukaristiel an
 Iliz. R/
- C'hwi, frealzer Israel, degemeret gant Simeon an den just, en Templ,
 hol lakit da vezañ degemerus d'hor breudeur. R/
- C'hwi, gortozet gant ar broadoù hag a gomze Anna diwar ho penn d'ar
 re a oa en gortoz eus dieubidigezh Israel, deskit dimp ho reiñ da
 anavezout d'an dud. R/
- C'hwi hag ez eus bet fellet deoc'h bezañ galvet sin a enebiezh, grit
 m'en em gavo an dud ganeoc'h evit o silvidigezh ha nann evit o c'hol-
 lidigezh. R/

Kempedenn (P. 241)

OFIS KREISTEIZ

(Ant. & S. an deiz)

Komz Doue Iz 12,5-6 Kanit d'an Aotrou, rak graet en deus
 burzhudoù! Youc'hit a joa hag a levenez,
 amezidi Sion! Rak uhelsavet eo en ho touez Sant Israel!
 V/- Gant ho sked hag ho kened
 R/- It war-raok, trec'hit ha renit.

Meulgan An deiz-mañ... (P. 125)

S. 109 Ant.: Diskleriet e oa bet da Simeon gant ar Spered Santel ne varvje
 ket a-raok gwelout an Aotrou.
S. 129 - : Simeon a zegemeras ar Bugel war e zivrec'h, a drugarekaas
 hag a vennigas an Aotrou.

Gouelioù ar Sent C'hwevrer

Kant. Kol 1,12-20 (P. 18): Gouloù da sklerijennañ ar broadoù ha gloar
 evit ho pobl Israel.
Komz Doue h. a.... (P. 241)



3 C'hwevrer S. BLEAZ
 eskob, merzher

Kempedenn Selaouit, Aotrou, ar pedennoù a ra ho pobl ouzh en em
 harpañ war skoazell ar merzher sant Bleaz, ha roit dimp
 ar c'hras da gaout ar peoc'h e-pad hor buhez er bed-mañ, hag
 an tu da dizhout ar vuhez peurbadus. Dre Jezuz Krist...

S. ANSGAR
 eskob

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus kaset sant Ansgar da
 brezeg an Aviel da bobloù niverus, roit dimp, dre sikour
 e bedennoù, ar c'hras da gerzhout bepred e sklerijenn ho kwi-
 rionez. Dre Jezuz Krist...

5 C'hwevrer S. AGATA
 gwerc'hez, merzher

Kempedenn Santez Agata, ho kwerc'hez hag ho merzher, ra c'hou-
 lenno diganeoc'h ar pardon eus hor pec'hedoù, Aotrou,
 hi hag a blijas deoc'h dalc'hmat dre he nerzh-kalon en he mer-
 zherenti ha dre he vertuz a c'hlanded. Dre Jezuz Krist...

6 C'hwevrer S. PAOL MIKI
 hag e gompagnuned,
 merzherion

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi nerzh an holl Sent hag hoc'h eus gal-
 vet Paol Miki hag e gompagnuned da dremen dre ar groaz
 evit antren er vuhez, roit dimp ar c'hras, da virout evelto
 betek ar marv ar feiz a embannomp. Dre Jezuz Krist...

8 C'hwevrer S. JEROM EMILIAN
 beleg

Kempedenn Aotrou Doue, Tad leun a drugarez, c'hwi hag hoc'h eus
 dibabet dre ho Furnez sant Jerom Emilian evel madoberour
 ha tad d'ar vugale emzivad, roit dimp ar c'hras, gant sikour e
 bedennoù, da virout gant fealded ar Spered-se a ra dimp bezañ
 anvet ha bezañ en gwirionez ho pugale. Dre Jezuz Krist...

10 C'hwevrer S. SKOLASTIKA
 gwerc'hez

Kempedenn En ur lidañ gouel ar werc'hez santel Skolastika, e reomp
 deoc'h ar bedenn-mañ, Aotrou Doue: roit dimp ar c'hras
 d'ho servijañ, hervez skouer santez Skolastika, gant ur garantez
 divlam ha da santout an efed evurus eus ho mignoniezh. Dre J.K.

11 C'hwevrer I. V. LOURD

Kempedenn Doue leun a vadolezh, roit sikour d'hor sepladurezh,
 ha pa 'z enoromp ar Werc'hez Dinamm, Mamm da Zoue, grit
 ma vezimp gant sikour he fedennoù disammet eus hor pec'hedoù.
 Dre Jezuz Krist...

14 C'hwevrer S. KURILLOZ, manac'h
S. METODIOZ, eskob

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus sklerijennet ar pobloù Slav dre ar vredeur santel Kurilloz ha Metodios, roit ar c'hras d'hor c'halonoc'h da gompren komsoù ho kelennadurezh, ha grit ganimp ur bobl unvan er gwir Feiz hag er stumm reizh d'hec'h anzav. Dre Jezuz Krist...

17 C'hwevrer AR SEIZH SANT, diazezerion urzh servijerion ar Wero'hez.

Kempedenn Skuilhit ennomp gant madelezh, Aotrou Doue, devosion ar Vredeur Santel a reas dezho bezañ troet da enoriñ a-greiz-kalon ar Wero'hez gloriuz Vari, Mamma da Zoue, ha da zougen ho pobl etrezek ennoc'h. Dre Jezuz Krist...

S. BERNADETA SOUBIROUS gwerc'hez

Aotrou Doue, c'hwi hag a zifenn an dud izel, a gar hag a enor anezho, hoc'h eus roet da santez Vernadeta grasoc'h estonus a basianted hag a garantez; grit ma c'hellimp, dre ho fedenn hag he skouer, en ur heuliañ eun hentoc'h ar Feiz, ho kwelout e Rouantelezh an neñvoù. Dre Jezuz Krist...

21 C'hwevrer S. PER DAMIAN eskob, doktor

Kempedenn Roit dimp ar c'hras, ni ho ped, Aotrou Doue, hollec'halloudek, da heuliañ kentelioù ha skouerion an eskob sant Pêr, ma ne lakimp netra a-raok an Aotrou Krist, ha dimp douget bepred da servijañ an Iliz evit en em gaout un deiz e jaoù ar sklerijenn beurbadel. Dre Jezuz Krist...

22 C'hwevrer KADOR SANT PER abostol

Ofis an ebestel (P. 225) nemet:

Komz Doue (Beure) Ob 15,7-9 Breudeur, c'hwi a oar penaos, adalek an devezhioù kentañ, en deus Doue va dibabet en ho touez, evit ma klevfe ar Bagarad eus va genou va-unan, komz ar C'halon-mat, ha ma kred'fent. Ha Doue, anavezet ar c'halonoc'h, en deus roet testiñ a-du ganto, dre reiñ dezho ar Spered Santel, ken-koulz ha dimp-ni. N'en deus graet diforc'h ebet etrezomp hag i, peogwir en deus naetaet dre ar Feiz o c'halonoc'h.

(Kreisteiz) 1 P 5,1-2 Ar re a zo Henaourion en ho touez, o fedif a ran, ma hag a zo henaour evelto ha test eus pounioù ar C'hrist, ma hag a dle ivez kaout lod er c'hloar a ya da vezañ diskuliet, mesait deñved Doue bet fiziet ennoc'h.

(Abardaez) 1 P 1,3-5 Ra vo beniget Doue, Tad an Aotrou Jezuz Krist, en deus hol laket en e garantez vras, da vezañ adganet dre adsevidigezh Jezuz Krist eus a-douez ar re varv, evit un esperañs a vuhez: rak gortoz a reomp un herezh n'hell ket na breinañ, na gweñviñ, na bezañ saotret, an hini miret en neñvoù, evidoc'h-c'hwi ar re ziwallet dre ar Feiz gant galoud Doue, a-benn ar silvidigezh prest d'en em ziskleriañ e fin an amzer.

Kant. Zak. hag ar M. C'hwi a zo pastor an tropell, priñs an Ebestel, ennoc'h oc bet fiziet alc'hovezioù Rouantelezh an neñvoù.

Kempedenn Ni ho ped, Doue hollec'halloudek, grit na vimp biken lakaet da vrallañ gant trubuilh ebet, p'hoc'h eus hon diazezet war ar roc'hell m'eo foiz an abostol sant Pêr. Dre Jezuz Krist...

Lennadenn Ob 11,1-18

23 C'hwevrer S. POLIKARP eskob, merzher

Kempedenn Aotrou Doue, mestr ar bed-holl, c'hwi hag hoc'h eus prizet lakaet an eskob sant Polikarp e niver ar verzhedion, grit, gant sikour e bedennoc'h, ma c'hellimp, ni hag a gemer perzh a-unan gantañ e kalirad an Aotrou Krist, dasorc'h-hañ un deiz evit ar vuhez peurbadus. Dre Jezuz Krist...

4 Meurzh S. KAZIMIR

Kempedenn Doue hollec'halloudek, hoc'h anavezout a zo bevañ, hag ho servijañ a zo bezañ roue, roit dimp ar c'hras, gant sikour pedennoc'h ar roue Kazimir, d'ho servijañ dalc'hmat er santelezh hag er justis. Dre Jezuz Krist...

7 Meurzh SS. PERPETUA & FELISITE merzhered

Kempedenn Aotrou Doue, dre nerzh ho garantez, ar merzhered santez Perpetua ha santez Felisite o deus trec'het war dourmantoc'h ar marv ha graet fae war urzhioù o gwallgaser, roit dimp ar c'hras, ni ho ped, gant sikour o fedennoc'h, da greskiñ bepred en ho garantez. Dre Jezuz Krist...

8 Meurzh S. YANN DOUE relijiuz

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus skuilhet gant largentez spered an drugarez war sant Yann, roit dimp ar c'hras, dre ober an oberoù a drugarez, da veritout en em gaout un deiz en ho Rouantelezh e-touez ho tud choazet. Dre Jezuz Krist...

9 Meurzh S. FRANSEZA ROMANA leanez

Kempedenn Aotrou Doue, e santez Frañseza hoc'h eus roet dimp ur skouer eus ar c'haerañ evit buhez ar briedelezh hag ar vertuz relijiuz, grit dimp ho servijañ dalc'hmat hep skuizhañ en doare ma c'hellimp e pep degouezh eus hor buhez treiñ hon daoulagad war-zu ennoc'h hag hoc'h heuliañ. Dre Jezuz Krist...

17 Meurzh S. PADRIG eskob

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus dibabet an eskob sant Padrig da brezeg ho klear da bobl Iwerzhon, grit dre e veritoc'h hag e bedennoc'h d'ar re o deus an enor da gaout an anv a gristen, embann bepred d'an dud hoc'h oberoù burzhudus. Dre Jezuz Krist...

18 Meurzh S. KURILLOZ a Jerusalem eskob, doktor

Kempedenn Aotrou Doue, dre an eskob sant Kurilloz hoc'h eus degaset hoc'h Iliz en un doare burzhudus da vont donoc'h en anaoudegezh eus misterioù ar silvidigezh, roit dimp ar c'hras, gant sikour e bedennoc'h, da anaout ho Mab en doare da gaout ar vuhez gant muioù a largentez. Eñ a ren...

DERC'HENT D'ABARDAEZ

Meulgan Peogwir omañ ganimp... (P. 5)

S. 112 Ant.: An Ael Gabriel a voe kaset gant Doue d'ur werc'hez gouestlet en dimeziada Jozef: anv ar werc'hez a oa Mari (alleluia).

S. 145 - : Jozef, mab David, n'ho pet ket aonda gemer du-se Mari, ho pried: kofsevet he deus eus ar Spered Santel ha genel a ray ur mab a ro dezhañ an anv a Jezuz (alleluia).

Kant. Ef 1,3-10 (P. 11)

Komz Doue Kol 3,23-24 Petra bennak a rit, hen grit a galon vat, evel o servijañ an Aotrou ha n'eo ket an dud, o c'houzout e resevot digant an Aotrou e herezh evit ho kopr. Kemerit da vestr an Aotrou Jezuz Krist.

Aotrou, kontañ 'ran warnoc'h, grit ma klevin diouzh ar baure ho karantez.

V/- Grit ma welin an hent da heuliañ, rak davedoc'h e savan va ene, grit.. V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W. Jozef a reas ar pezh en devoa kemennet dezhañ an Ael, kemer a reas gantañ e bried (alleluia).

Azeulomp ar Verb peurbadel en deus fellet dezhañ bout mab un tiegezh eus an douar, ha lavaromp dezhañ:

R/- Bezit hor skouer hag hor Salver.

- Aotrou Jezuz, dre vister ho sujidigezh da Vari ha da Jozef, kelennit dimp an doujañs hag ar sentidigezh e-keñver hor mistri. R/

- Karet hoc'h eus ho tud hag i ho kare gant teneridigezh: diazezit an holl diegezhioù er peoc'h hag er garantez. R/

- C'hwi a oa evezhiek ouzh traoù ho Tad eus an neñv: grit ma vo enoret en holl diegezhioù. R/

- Fellet ez eus bet deoc'h bezañ klasket gant ho tud pa oac'h chometen Templ: deskit dimp klask da gentañ Rouantelezh Doue. R/

- Roet hoc'h eus perzh en ho kloar peurbadus da Vari ha da Jozef, grit d'hon tud tremenet antren e bodadeg ar Sent. R/

Kempedenn

Doue hollc'halloudek, e Sant Jozef ho poa fiziet da gentañ misterioù silvidigezh an dud da zivall ha da deurel evezh warnoc'h: plijet ganoc'h, ni ho ped, reiñ ar c'hraas d'hoc'h iliz, gant skoazell e badennoù, da zero'hel d'o diskleriañ hep paouez, ma teuint da wir evit ar bed. Dre Jezuz Krist...

OPIS AL LENNADENNOU

Meulgan (P. 3 - 4)

S. 20 Ant.: Ar vesaerion a zegouezhas, mall warno, hag e kavjont Mari ha Jozef hag ar bugelig gourvezet er prezeb (alleluia).

S. 91 I - : Jozef a gemeras ar Bugel ha Mari hag a loc'has d'an Ejipt (all.).
- II - : Tad Jezuz hag e Vamm a voe souezhet gant ar pezh a veze lavarret diwar e benn (alleluia).

V/- En e di, gloar ha pinvidigezh (alleluia).

R/- E reizhded a bad da viken (alleluia).

Lonnadenn Ho 11,1-16

S. Jozef

R/- Jozef a guitaas kêr Nazared e Galilea, evit pignat da Judea, da gêr David anvet Betleem + o vezañ ma oa eus tiegezh ha bro David. V/- Mont a rae da lakaat e anv gant Mari, e bried + o vezañ...

Te Deum ha kempedenn

OPIS AR BEURE

S. 94 R/- Ar C'hrist, mab Doue, anvet mab Jozef, deuit, azeulomp anezhañ (all.)

Meulgan

Heol o sevel
War an dud o kerkhout er marv,
Deuet oc'h 'vit ma welo ar re na welont ket,
Ar gwelod 'roit d'an den dall,
Deuit, Salver Jezuz!
Sklerijenn ar bed:
Ma kanimp a-benn ho tistro.

R/- Ra vo benniget en anv Doue an hini a zou da salviañ e bobl.

Koabrenn a dan
War an dud o kerkhout en noz,
Deuet oc'h evit diskouez an hent davet Doue,
Ho Kalvar a zigor an neñv.
Deuit, Salver Jezuz!
C'hwi 'zo bezañs ho Tad,
Ma kanimp a-benn ho tistro. R/

S. 62 Ant.: Tud Jezuz a bigne bep bloaz da Jeruzalem da vare Pask (alleluia)
Kant. Dn (P. 6)

S. 149 Ant.: Jezuz a ziskennas ganto, a zeuas da Nazared hag a oa sujet dezho (alleluia).

Komz Doue 2 S 7,28-29

Ya, Aotrou, c'hwi a zo Doue hag ho komzoù gwirionez, hag hoc'h eus prometet d'ho servijer ar madoù-se. Teurvezit bremañ bennigañ ti ho servijer, ma vezo dirazoc'h da viken. Rak, c'hwi, Doue, hoc'h eus konzet, ha gant ho pennozh e vo benniget ti ho servijer da viken.

Anden just morse ne vrañsell, an eñvor anezhañ a bad da viken.
V/- E lignez a vo galloudus war an douar ha gouenn an dud eum a vo benniget, an eñvor anezhi a bad da viken.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak. War-dro tregont vloaz en devoa Jezuz ha sellet e veze evel mab Jozef (alleluia).

Azeulomp ar Verb peurbadel, a zo bet fellet dezhañ bout anvet mab Jozef ha lavaromp dezhañ:

R/- Dre ho sujidigezh, Jezuz, hor santelait.

- Jezuz, Verb peurbadel an Tad, c'hwi hag a voe sujet da Vari ha da Jozef, kelennit dimp an izelegezh. R/

- C'hwi hor Mestr, a vire Mari en he c'halon ho komzoù hag hoc'h oberoù, deskit dimp selaou ha mirout ho Komz en ur galon c'hlan ha mat. R/

- C'hwi hag hoc'h eus krouet ar bed holl, a zo bet fellet deoc'h bout anvet mab ar c'halvez: grit dimp labourat gant koustiañs ha nerzh-kalon. R/

Gouelioù ar Sent - Meurzh
S. Jozef

- C'hwi hag hoc'h eus kresket e furnez, en oad hag e gras e tiegezh Nazared,
roit dimp ar c'hras da greskiñ bepred ennoc'h-c'hwi, hor Mastr. R/

Kempedenn (P. 246)

OFIS KREISTEIZ

S. 119 - 120 - 121 Ant.: Kaset e voe an Ael Gabriel gant Doue da gaout
ur werc'hez, gouestlet en dimezi da Jozef hag
anv ar werc'hez a oa Mari (alleluia).

Komz Doue Krennl 2,7

An Aotrou a vir evit an dud eun e sko-
zell, ur skoed eo evit ar re a gerzh di-
damall. Diwall a ra gwenodennou ar reizher, hent e vignoned a zo
difennet gantañ.

V/- En e di gloar ha pinvidigezh (alleluia).
R/- E reizhdad a bad da viken (alleluia).

Kempedenn (P. 246)

OFIS AN ABARDAEZ

Meulgan

Arneoc'h an Aeled hag Iliz an Douar
Da gano deoc'h, Jozef, meuloudioù a c'hloar,
Rak dre ho santelezh c'hwi hoc'h eus dellezet
D'ar Werc'hez c'hlan bezañ priod.

Pa zeuas an arvar da nec'hiñ ho spered
An Ael eus an Aotrou ho lakas divorc'hed
Hag a ziskulias deoc'h e oa deut eus an neñv
Da vezañ den gwir Vab Doue.

Pa voe ganet Jezuz, c'hwi a bokas dezhañ,
A-zirak Herodez c'hwi a deoc'has gantañ:
Hag e Jeruzalem, goude n'eo bet kollet
Gant joa hoc'h eus en adkavet.

D'ar re all 'vez roet gant ar maro hepken
'N em gavout gant Doue er c'hloar da virviken,
C'hwi avat er bed-mañ, ho lod a zo kaeroc'h,
Mab Doue 'zo aze ganec'h.

Teurvezit, Treinded sakr, selaou hor goulennoù,
Dre bedenn Sant Jozef pardonif hor mankoù
Ma c'hellimp en neñvoù kanañ deoc'h meulodi
Er vuhez-se n'echue mui. Amen.

S. 109 Ant.: Tad Jezuz a bigne bep bloaz da Jeruzalem da vare Pask (alleluia).

S. 111 - : Jezuz a ziskennas ganto, dont a reas da Nazared hag e voe
sujet dezho (alleluia).

Kant. Fil 2,6-11 (P.28).

Komz Doue h. a. (P. 246).

000

23 Meurzh S. TURIBIO eus Mongrovejo
eskob

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus roet kreskañs d'hoc'h
Iliz dre labourioù abostolel an eskob sant Turibio hag
e garantez evit ar wirionez, grit d'ar bobl kensakret deoc'h
derc'hel bepred da vont war gresk er feiz hag er santelezh.
Dre Jezuz Krist...

Gouelioù ar Sent Meurzh

25 Meurzh JEZUZ KONSEVET GANT MARI
DERC'HENT D'ABARDAEZ

Meulgan

R/- Spered Doue a ziskuizh warnon,
Spered Doue 'n deus vs sakret,
Spered Doue en deus va c'haset d'embann ar peoc'h, ar joa.

Spered Doue am dibab
'Vit astenn ren an Aotrou Krist e-touez ar broadoù,
Hag evit embann ar c'heloù-mat d'e becrion.
Me 'drid a joa e Doue, va Salver. R/

Spered...
Evit kemenn d'an holl gras ar frankiz adkavet... R/

Spered...
Hag evit lidañ e c'hloar e-touez an holl bobloù... R/

S. 112 Ant.: An Ael Gabriel a voe kaset da gaout ar Werc'hez Vari goues-
tlet en dimezi da Jozef (alleluia).

S. 147 - : Na spontit ket, Mari, gras hoc'h eus kavet dirak Doue: setu ma
vict dougerez ha ma c'hanfot ur mab (alleluia).

Kant. Fil. 2,6-11 (P. 28): An Aotrou a roio dezhañ tron David e Dad hag e
reno da virviken (alleluia).

Komz Doue 1 Yn, 1-12

Ar pezh a oa adalek ar penn kentañ, ar
pezh hon eus klevet, ar pezh hon eus
gwelet gant hon daoulagad hon-uman, ar pezh hon eus sellet outañ,
hag o deus touchet hon daouarn eus ar Verb a Vuhez, rak ar Vuhez
a zo en em ziskouezet, hag he gwelet hon eus, hag e testeniomp, hag
e kemennomp deoc'h ar Vuhez-se peurbadel, a oa gant an Tad hag a zo
en em ziskouezet deomp.

Ar Verb a zo en em c'hrast den, ha deut e oda chom en hon touez.

V/- Leun a c'hras hag a wirionez, - - - - -
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Ar Spered Santel a zeuio warnoc'h, ha galloud an Uhelañ ho
koloio gant e skeud (alleluia).

Pedomp gant joa Verb Doue, ganet a-viskoazh, deut da vezañ den
evidomp e-kevez an amzerioù, ha lavaromp dezhañ:

R/- Chomit ganimp, Aotrou.

- O Krist hon Aotrou, dre ho tonedigezh hoc'h eus graet d'hoc'h Iliz bezañ
ganet, kreskit bemdez niver ha santelezh hoc'h izili. R/

- En ho torn e talc'hit an neñv hag an douar: ar broadoù hag o mistri
da anzav ho kalloud. R/

- O tont da vezañ den oc'h bet kensakret evel ar beleg nemetañ: ra vezo ho
peleion ministred dellezek eus an dasprenerezh. R/

- E korf ar Werc'hez hoc'h eus unaneten un doare misterius Doue hag an
den, benniget ar re a gensakr deoc'h e glanded. R/

- O tont er bed en ur c'horf marvel hoc'h eus distrujet ar marv ha na
oa ket bet krouet ganec'h, treuzfurmit marv hon Anaon en ur vuhez
peurbadus. R/

Kempedenn

Aotrou Doue, fellez ez eus bet deoc'h e kemerfe ho Verb,
an eil Ferson eus an Dreinded, ur gwir natur-den e korf
ar Werc'hez glorius Vari, plijet ganec'h eta selaou ar bedenn
a reomp deoc'h. Evel ma 'z anzavomp ez eo hor Salver war un dro

Gouelioù ar Sent Meurzh
Jezuz koñsevet gant Mari

Deus ha den, roit dimp ar c'hraes da gaout perzh en e natur-Doue,
ma vimp heñvel outañ. Dre Jezuz Krist...

OFIS AL LENNADENNOU

Meulgan

Arc'hael Doue an Neñvoù
En deus da Vari lavaret:
C'hwi a vo mamm an Aotrou
Ar Mesias prometet.

Me 'zo gwir servijerez
Roue an Neñv ha va Doue:
Diouzh ho kemennadurezh
Ra vo graet eta din-me.

Hag eil Person an Dreinded
'Zo deut da vezañ Mab Mari;
En hon touez en deus bevet
En ur c'horf par d'hon hini. Amen.

- S. 18A Ant.: Ar Werc'hez a c'hano ur mab: anvet e vo an Estlammus, Doue kreñv
- S. 44 I - : Ael an Aotrou en deus kaset e gannadur da / (alleluia).
Vari hag he deus koñsevet eus ar Spered Santel (alleluia).
- II - : Setu servijerez an Aotrou, ra vo graet din hervez ho lavar (all.)
V/- Salud, Mari, leun a c'hraes (alleluia).
R/- An Aotrou a zo ganeoc'h (alleluia).

Lennadenn 1 Kron 17,1-15

R/- An Ael Gabriel a voe kaset da gaout ur plac'h yaouank, Mari,
gousstlet en dimezi da Jozef, gant ur c'hannadur: hi avat a
voe strafuilhet gant ar gomz-se: na spontit ket, Mari, kavet
hoc'h eus gras dirak Doue + setu ma viot dougerez ha ma
c'hanfot ur mab hag a vo anvet mab an Uhelañ (alleluia, allel).
V/- En em laouenait, muiañ-karet Doue, an Aotrou a zo ganeoc'h +

Te Deum ha kempedenn

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- Setu Doue, hor Salver, deuit, azeulomp anezhañ.

Meulgan 0 Tad ar c'hantvedoù... (P. 205) pe:

- 1 - Itron ha Gwerc'hez Venniget,
Kaeroc'h eget an holl stered,
Da grouadur hoc'h eus maget
An Hini en deus ho krouet.
- 2 - Gant ho Mabhoc'h eus daskoret
Pezh he devoa kollet Eva,
Ma c'hell antren en Neñv bremañ
Ar re o deus keuz d'oc'fec'hed.
- 3 - C'hwi eo annorsklarijennet
E teu dimp ar Salver drezi,
C'hwi ar feunteun ma strink diouti
An doura ro buhez d'ar bed.
- 4 - Jezuz, Mab Doue benniget,
Deut da vezañ Mab ar Werc'hez,
Ra vo gloar deoc'h hag azaouez
Evel d'an Tad ha d'ar Spered. Amen.

S. 62 Ant.: An Ael Gabriel a voe kaset da gaout ar Werc'hez Vari gous-
tlet en dimezi da Jozef (alleluia).

Kant. Di (P. 6): Na spontit ket, Mari, kavet hoc'h eus gras dirak Doue:
keñseviñ a reot hag e c'hanfot ur mab (alleluia).

S. 149 Ant.: An Aotrou a roio dezhañ tron David e Dad hag e reno da
virviken (alleluia).

Komz Doue Fil 2,6-7

Ar C'hrist hag a oa Doue a stumm ne sellas
ket evel e dra chom en e renk, par da
Zoue, met da netra eo 'n em laket dre gemer stumm ar servijer ha dont
da vezañ 'giz an dud, goude 'n em ziskouez evel un den.

Gouelioù ar Sent Meurzh
Jezuz koñsevet gant Mari

Ar Verb a zo en em c'hraet den, deuet eo da chom en hon touez.
V/- Leun a c'hraes hag a wirionez, - - - - -
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Ar Spered Santel a zeuio warnoc'h ha galloud an Uhelañ
ho kemero dindan e skeud (alleluia).

Pedomp gant joa ar Verb peurbadel, ganet a-viskoazh, deuet da
vezañ den evidomp e-kerez an amerioù, ha lavaromp dezhañ:

R/- Mab ar Werc'hez Vari, ho pet truez ouzhimp.

- C'hwi hor Roue hag hon Doue, dre ho tonedigezh hoc'h eus diskouezet ho
karantez: grit dimp hoc'h enoriñ dre hor feiz hag hor buhez. R/
- C'hwi hag a zo bet ganet dre ar Spered Santel eus ar Werc'hez c'hlan-
meurbet, roit dimp ar c'hraes d'ho servijañ hep pec'hed. R/
- C'hwi hag hoc'h eus en em c'hraet heñvel ouzhimp, hol lakit da
vezañ heñvel ouzhoc'h. R/
- C'hwi hag a zo deuet da gemer perzh en hor bed, grit dimp kaout
perzh en ho Rouantelezh. R/

Kempedenn (P. 250)

OFIS KREISTEIZ

S. 122 - 123 - 124 Ant.: An Ael Gabriel a voe kaset da gaout ar Werc'hez
Vari gousstlet en dimezi da Jozef.

Komz Doue 1 Yn 4,8-9

Doue a zo karantez: dre gement-mañ eo en
em ziskouezet karantez Doue en hor c'hen-
ver: dre m'en deus Doue kaset er bed e Vab unganet, evit ma vevimp dre-
zañ.

V/- Salud, Mari, leun a c'hraes (alleluia).
R/- An Aotrou a zo ganeoc'h (alleluia).

OFIS AN ABARDAEZ

Meulgan Spered Doue.... (P. 249)

S. 109 Ant.: An Ael Gabriel a voe kaset da gaout ar Werc'hez Vari gous-
tlet en dimezi da Jozef (alleluia).

S. 126 - : Na spontit ket, Mari, gras hoc'h eus kavet dirak Doue: setu
ma viot dougerez ha ma c'hanfot ur mab (alleluia).

Kant. Ef. 1,3-10 (P. 11): An Aotrou a roio dezhañ tron David e dad hag e
reno da virviken (alleluia).

Komz Doue (P. 249)

Kant. ar W.: Setu servijerez an Aotrou, ra vezo graet din hervez ho lavar
(alleluia)

000

2 Ebrel

S. FRANSEZ A BAOLA
lean digenvez

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag a uhela an dud izel, hoc'h eus
savet sant Frañsez da c'hleac ho Sent; grit dimp, ni
ho ped, dre e veritoù ha dre nerzh e skouerioù, gonit an evi-
rusted prometet d'an dud izel a galon. Dre Jezuz Krist...

Gouelioù ar Sent Ebreil

4 Ebreil S. IZIDOR
eskob, doktor

Kempedenn Selaouit, ni ho ped, Aotrou Doue, ar pedennoù a gimni-
gomp deoc'h en deiz gouel sant Izidor, ha grit ma vo
skoazellet an Iliz dre hantererezh an hini bet prezet kelen-
nadurezh dezhi dre e skidoù. Dre Jezuz Krist...

5 Ebreil S. VISANT FERRER
beleg

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus dibabet Visant Ferrer
da brezeg an Aviel, grit, ni ho ped, m'hor bo al leve-
nez da welout o ren er baradoz an hini bet prezet gantañ war
an douar evel ar barner da zont. Eñ a ren...

7 Ebreil S. YANN-VADEZOUR AR SAL
beleg

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus dibabet sant Yann-Va-
dezour ar Sal da gelemn ar yaouankiz, lakit da sevel en
hoc'h Iliz kelemerion hag en em ouestlo a-greiz-kalon da stum-
mañ ar re yaouank war skiantoù ar bed ha war skiantoù ar reli-
gion. Dre Jezuz Krist...

11 Ebreil S. STANISLAZ
eskob, merzher

Kempedenn Aotrou Doue, evit gloar hoc'h anv ez eo bet kouezet an
eskob sant Stanislaz dindan gleze e wallgasion; grit
eta, ni ho ped, ma vezimp gouest da zero'hel mat d'hor feiz
gant nerzh-kalon betek ar marv. Dre Jezuz Krist...

13 Ebreil S. VARZHIN 1^{er}-añ
pab, merzher

Kempedenn Roit dimp, ni ho ped, Doue hollc'halloudek, ar c'hras da
c'houzañv gant un nerzh-kalon diblog darvoudoù kontrol
ar bed, c'hwi ha n'hoc'h eus ket permetet e vefe spontet ar pab
merzher sant Varzhin gant ar gourdrouzoù, na trec'hot gant ar
poanioù. Dre Jezuz Krist...

21 Ebreil S. ANSELM
eskob, doktor

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus roet d'an eskob sant
Anselm an donezon da studiañ ha da gelemn misterioù don
ho furnez, grit ma teuo ar feiz da sikour hor spered ha d'ober
ma vo saourus d'hor c'halon ar wirionez a roit dimp da grediñ.
Dre Jezuz Krist...

23 Ebreil S. JORD
merzher

Kempedenn Ho kalloud a lidomp, Aotrou, hag ho pediñ a reomp a ga-
lon izel; evel ma kemeras sant Jord skouer diwar Basion
hor Salver, grit ma vo ivez prest da sikour hor sepladurezh.
Eñ a ren...

24 Ebreil S. FIDEL A SIGMARINGEN
beleg, merzher

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus prizet reiñ da sant Fi-
del entanet gant ho karentez, g. . . ar merzherenti, roit
dimp ar c'hras, gant sikour e bedennoù, da vezañ diazezet war
ar garantez evit meritout eveltañ an nerzh eus Adsav hor Salver
da vev. Eñ a ren... ~~Anavezout~~

Gouelioù ar Sent Ebreil

25 Ebreil S. MARK
avielour

Ofis an Ebestel (P. 225) nemet:

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus roet d'hoc'h avielour
sant Mark ar c'hras uhel-murbet da brezeg an Aviel, grit
dimp, ni ho ped, kompren ken mat e gentelioù ma heuilhimp dal-
c'hmat gant feiz roudoù hor Salver. Eñ a ren...

Lennadenn Ef 4,3-16

28 Ebreil S. PER CHANEL
beleg, merzher

Kempedenn Aotrou Doue, evit kreskiñ hoc'h Iliz hoc'h eus roet da
sant Pêr Chanel kurunenn ar verzhherenti, roit dimp ar
c'hras, e-kreiz joaioù an amzer-Fask-mañ, da lidañ misterioù
an Aotrou Krist o vervel hag oc'h adsevel d'ar vuhez en doare
ma veritimp bezañ testoù eus ar vuhez nevez degaset gantañ.
Dre Jezuz Krist...

29 Ebreil S. KATELL A SIENNA
gwerc'hez, doktor

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus graet da santez Katell
birviñ gant ho karentez oc'h arvestiñ ouzh Pasion hor
Salver hag o servijañ an Iliz, grit d'ho pobl hag a zo lodek e
mister an Aotrou Krist, bezañ el lovenez da viken p'len em zis-
kouezo e c'hloar. Dre Jezuz Krist...

30 Ebreil S. PIUS V
pab

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus laket da sevel en hoc'h
Iliz ar pab sant Pius evit difenn ar feiz hag al lidoù
santel, roit dimp ar c'hras, gant sikour e bedennoù, da gemer
perzh en ho misterioù santel gant feiz birvidik ha karentez
frouezhus. Dre Jezuz Krist...



1 Mae S. JOZEF
artizan

Kempedenn Doue, krouer ar bed, c'hwi hag hoc'h eus merket d'an dud
lezenn al labour: plijet ganeoc'h en ho madelezh, reiñ
dimp ar c'hras, hervez skouer sant Jozef ha gant e sikour, da
ober al labourioù a c'houro'hemennit ha da c'honit ar gopr a
brometit. Dre Jezuz Krist...

2 Mae S. BRIEG
eskob

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus galvet hon hentadoù da
sklerijenn ar feiz ha da reolenn ar vuhez vat dre bre-
zegerezh ha burzhudoù an eskob sant Brieg, roit dimp ar c'hras,
ni ho ped, pa lidomp evel ma tere an eñvor eus ken bras madober,
da virout gant fealded ar feiz kelennet gantañ ha da heuliañ ar
skuerioù en deus roet dimp. Dre Jezuz Krist...

S. ATANAZ
eskob, doktor

Doue hollc'halloudek ha peurbadel, c'hwi hag hoc'h eus
lakat an eskob sant Atanaz da vezañ difenner dispar
natur-Doue ho Mab, grit dimp en ho madelezh ar c'hras, dre nerzh

e gelemmadurezh hag e skoazell, d'hoc'h anavout bepred gwelloc'h evit ho karout muioc'h. Dre Jezuz Krist...

3 Mae S. FILIP & S. JAKEZ ebestel

Ofis an Ebestel (P. 225) nemet:

Ant. (Beure hag abardiaez)

- 1 - Aotrou, diskouezit dimp an Tad, a-walc'h e veze, alleluia.
- 2 - Filip, an neb an gwel a wel an Tad, alleluia.
- 3 - Ma karit ac'hanon, mirit va gourc'hemennou, alleluia.

Kant. Zak.: Me eo an hent, ar wirionez hag ar vuhez: den ne zeu d'an Tad nemet drezon, alleluia.

Kant. ar M.: Ma chomit emon ha ma chom va c'homzou ennoc'h, kement tra a c'houlennot a vo roet deoc'h, alleluia, alleluia.

Kempedenn Aotrou Doue, bep bloaz gant gouel an ebestel sant Filip ha sant Jakez e roit dimp levenez, roit dimp eta, ni ho ped, gant sikour o fedennoù, ar c'hras da gaout perzh e Pasion hag Adsav ho Mab unganet evit ma c'hellimp un deiz ho kwelout en ho kloar. Dre Jezuz Krist...

Lennadenn 1 Kor 9,1-23

12 Mae S. NERE & S. AKILLE merzherion

Kempedenn Aotrou Doue hollc'halloudek, anaout a reomp nerzh-kalon ho merzherion c'hlorius sant Nere ha sant Akille a rentas gloar deoc'h dre o marv, roit dimp ar c'hras d'o c'haout en ho kichen evel alvokaded. Dre Jezuz Krist...

S. PANKRAS merzher

Ra gemerc levenez hoc'h Iliz, Aotrou Doue, pa laka e fiziañs e sikour ho merzher sant Pankras, ha dre e bedennou/ho vuhez. Dre Jezuz Krist...

14 Mae S. VAZHEAZ abostol

Ofis an Ebestel (P. 225) nemet:

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus lakaet sant Vazheaz e niver hoc'h ebestel, roit dimp ar c'hras, gant sikoure bedennoù, da gaout lod en ho karantez evit meritout bezañ kontet e-touez ho tud choazet. Dre Jezuz Krist...

Lennadenn 1 Kor 4,1-16

18 Mae S. YANN 1-añ pab, merzher

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag a zigoll an eneoù fidel, hoc'h eus sakret an deiz-mañ gant merzherenti ar pab sant Yann, selaouit pedennoù ho pobl, ha roit dimp-ni hag a rent enor d'e veritoù, ar c'hras da gemer skouer war e feiz divrall. Dre Jezuz Krist...

19 Mae S. ERWAN beleg

Kempedenn 1 - Aotrou, hon Doue, c'hwi hag hoc'h eus dibabet sant Erwan, ar beleg dispar-ae, evit salvif an eneoù hag evit difenn an dud vihan, roit dimp ar c'hras da houliañ skouer e garantez

ha da gaout anezhañ evel alvokad en ho kichen. Dre Jezuz Krist...

2 - Aotrou Doue, mammenn ha krouer kement a zo just ha mat, c'hwi hoc'h eus dibabet sant Erwan da vezañ barner e-touez e vreudeur, ha graet hoc'h eus gantañ ur mignon bras d'ar be-orion, roit dimp ar c'hras, gant sikour e bedennoù, da glask ar justis a-greiz hor c'halon ha da vezañ leun a vadelezh eveldeoc'h. Dre Jezuz Krist...

20 Mae S. BERNARDIN A SIENNA beleg

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus roet d'ho peleg sant Bernardin ur garantez dispar evit anv santel Jezuz, grit eta, ni ho ped, da spered ho karantez ent-mañ bepred hor c'halon. Dre Jezuz Krist...

25 Mae S. BEDA ENORUS beleg, doktor

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag a ro sklerijenn d'hoc'h Iliz gant deskamant ho peleg sant Beda, roit, en ho madelezh, d'ho servijerion ar c'hras da vezañ bepred sklerijennet gant e furtenez ha sikouret gant e veritoù. Dre Jezuz Krist...

S. GREGOR VII pab

Aotrou Doue, fellet ez eus bet deoc'h e vefe brudet ar pab sant Gregor abalamour d'e spered a nerzh hag argred evit ar reizhdad, roit anezho, ni ho ped, d'hoc'h Iliz, ma tis-taole kuit an dislealdad ha ma sereno gant ur garantez dishual kement a zo reizh. Dre Jezuz Krist...

S. MARIA-MADALEN-PAZZI gverc'hez

Aotrou Doue, c'hwi hag a gar ar werc'hez hoc'h eus kaeraet gant donezonoù an neñv ar werc'hez santel Mari-Madalen entanet gant ho karantez, roit dimp ar c'hras da gemer skouer diwar glanded ha karantez an hini a enoromp en deiz-mañ. Dre Jezuz Krist...

26 Mae S. FILIP MERI beleg

Kempedenn Aotrou Doue, hep ehan e talc'hit da sevel uhel e gloar ar santelezh ho servijerion a vez fidel deoc'h: roit dimp ar c'hras, en ho madelezh, ma teuic ar Spered Santel da c'hwezhañ emomp an tan-se a dreuzas en un doare burzhudus kalon sant Filip. Dre Jezuz Krist...

27 Mae S. EOSTEN a Gêrgent eskob

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus, dre brezegenoù an eskob sant Eosten de gaset pobl ar Saizon d'an Avel, grit, ni ho ped, ma kendalc'ho e labourioù da zougen frouezh en hoc'h Iliz. Dre Jezuz Krist...

31 Mae G'HELADENN AR WERC'HEZ DA S. ELIZABED

Ofis ar Werc'hez (P. 222) nemet:

Lennadenn Kant. 2,8-14. 8,6-7

Gouelioù ar Sent Mae - Mezheven
Gweladenn ar Werc'hez da S. Elizabed

Komz Doue (Beure) Yl 2,27-28 Hag e ouiet ez on e-touez Israel, me, hag ez on an Aotrou, ho Toue, me nemo-don, ha n'he devo ket va fobl mezh biken ken. C'hoarvezout a ray goude-se ma skuilh'n va Spered war gement kig a zo, hag e tiougano ho mibion hag ho merc'hed.

(Kreisteiz) Fur 7,27-28 Drezi hec'h-unan e c'hell ar Furnez pep tra, en ur chom enni ez adnevesa pep tra, a rumm da rumm ez a en eneoù santel hag e stumm mignoned Doue ha profeded, rak Doue ne gar nemet kompagnuned ar Furnez.

(Aberdaez) 1 P 5,5-7 C'hwi holl, en em wiskit a izelegoza an eil e-keñver egile, rak Doue a harp ouzh ar re lorc'hus, met ar re izel a galon e ro dezho e c'hras. Scubl't izelek dindan dorn galloudus Doue, dezhañ d'hoc'h uhelaat pa vo deuet ar c'houlz. Hoc'h holl brederioù, o disammit warnañ, rak eñ en deus soursi ac'hanoc'h.

Kant. Zak. & ar N.: An holl rummadoù an arvo evurus, rak Doue en deus sellet ouzh izelded e vatezh, alleluia.

Kempedenn Doue hollc'halloudek, c'hwi hag hoc'h eus roet ar soñj d'ar Werc'hez Vari p'ado e tougen he Mab, da vont da wladenniñ santez Elizabed, roit dimp ar c'hras, ni ho ped, da sentiñ ouzh ar soñjoù a c'hwez enomp ar Spered Santel, ma c'hellimp a-unan gant ar Werc'hez, kanañ meuleudi d'ho prasted. Dre Jezuz Krist...

SADORN WARDEC'H 2 SUL AR PANTEKOST
KALON C'HLAN AR WERC'HEZ VARI

Kempedenn Aotrou Doue, kempennet hoc'h eus kalon c'hlan ar Werc'hez gl'cius Vari da vezañ tabernacl ar Spered Santel, plijet ganeoc'h, en ho madelezh, ha gant sikour pedennoù ar Werc'hez hec'h-unan, ober ganimp-ni Templ ho kloar. Dre Jezuz Krist...



1 MEZHEVEN S. JUSTIN
merzher

Kempedenn Aotrou Doue, dre follentez ar Graoz hoc'h eus desket en un doare burzhudus d'ho merzher sant Justin an anaoudegezh uhel-meurbet eus Jezuz Krist; plijet ganeoc'h gant sikour e bedennoù, reiñ dimp ar c'hras d'en em ziwall diouz ar falskredennoù touellus ha da chom start er feiz. Dre Jezuz K...

2 Mezheven S. MARSELIN & S. PER
merzherion

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hon diwall hag hon difenn dre vertuz merzherenti c'hlorius sant Marselin ha sant Pêr: roit dimp ar c'hras da gemer skouer diwarno evit mont war wellaat, ha da vezañ sikouret gant o fedennoù. Dre Jezuz Krist...

3 Mezheven S. CHARLEZ LWANGA & E
COMPAGNUNED, merzherion

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus lakaet gwad ar verzherion da vezañ had kristenion, plijet ganeoc'h lakaat an dachenn-se eus hoc'h Iliz hag a zo bet glebiet gant gwad sant

Gouelioù ar Sent Mezheven

Charlez hag e kompagnuned, da zougen deoc'h bepred un eost fonnus. Dre Jezuz Krist...

5 Mezheven S. BONIFAS
eskob, merzher

Kempedenn Plijet gant ho merzher sant Bonifas, Aotrou Doue, goulenn evidomp ar c'hras da zero'hel start d'ar feiz en deus embannet dre gomz ha sigilet gant e wad, ha da anzav anezhi hep aon ebet dre hon oberoù. Dre Jezuz Krist...

6 Mezheven S. NORBERZH
eskob

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus lakaet an eskob sant Norberzh da vezañ ur ministr dispar evit e spered a bedenn hag e c'hred a bastor, grit, ni ho ped, gant sikour e bedennoù, ma kavo bepred pobl ho fideled pastored hervez ho kalon ha magadurezh yac'hus. Dre Jezuz Krist...

9 Mezheven S. EPREM
diagon, doktor

Kempedenn Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, skuilh en hor c'halonoù ar Spered Glan a awenas an diagon santel Eprem d'ober didonkanañ laouen ho misterioù hag a norzhas anezhañ evit hen stagañ ouzh ho servij c'hwi hepken. Dre Jezuz Krist...

11 Mezheven S. BARNABAZ
abostol

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag ho poa goure'hemennet diñab sant Barnabaz, un den leun a feiz hag eus ar Spered Santel, evit ma labourfe da c'honit deoc'h ar pobloù pagan, grit eta, ni ho ped, ma talc'ho Aviel an Aotrou Krist hag a voe prezeget gredus gant ar sant-mañ, da vezañ embannet fidel dre gomz ha dre ober. Dre Jezuz Krist...

13 Mezheven S. ANTON A BADOVA
beleg, doktor

Kempedenn Doue hollc'halloudek ha peurbadel, c'hwi hag hoc'h eus roet d'ho pobl sant Anton evel prezeget helavar hag hanterour ar beorien en o ezhommoù, roit dimp ar c'hras, gant sikour e bedennoù, da glask gredus ar c'hentelioù war ar vuhez kristen, ma ho santimp ouzh hon harpañ en holl darvoudoù kontrol. Dre Jezuz Krist...

19 Mezheven S. ROMUALD
abad

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus renevezet en hoc'h Iliz dre sant Romuald buhez ar venec'h digenvez, roit dimp ar c'hras d'en em zilezel hon-unan ha da heuliañ an Aotrou Krist evit kaout an curvad da bignat da Rouantelezh an neñvoù. Dre Jezuz Krist...

21 Mezheven S. LOEIZ CONZAGA
leat

Kempedenn Aotrou Doue, mammenn an donezonoù eus an neñv, c'hwi hag hoc'h eus unanet e sant Loeiz ur c'hlandad dispar hag ur vuhez a binijenn, roit dimp ar c'hras, ni ho ped, gant sikour e veritoù hag e bedennoù, da gemer skouer da vihanañ diwar e binijenn pa n'hon eus ket e heuliet war hent ur vuhez dinamm. Dre Jezuz Krist...

22 Mezheven S. PAOLIN A NOLA eskob

Kempedenn

Actroù Doue, fellet ez eus bet deoc'h lakaat an eskobsant Paolin da vezañ brudet dre e garantez evit ar baouren- tez hag e aked a bastor, plijet ganeoc'h en ho madelezh, reñf dimp-ni hag a zo o veuliñ e veritoù ar c'hras da heuliañ skoue- rioù e garantez. Dre Jezuz Krist...

S. JOHN FISHER & S. TOMAZ MORUS merzherion

Actroù Doue, diskouezet hoc'h eus ar gwir feiz en he c'haerañ e marv ho merzherion, roit dimp ar c'hras, ni ho ped, da vezañ kemerzhet gant sikour pedennoù sant John Fisher ha sant Tomaz Morus, evit ma vimp gouest da ziskouez dre hor buhez ez eo gwirion ar feiz a anzavomp a c'henou. Dre Jezuz K..

24 Mezheven GINIVELEZH S. YANN VADEZOUR

DERC'HEM'T D'ABARDAEZ

Meulgan Spered Doue... (P. 249) pe:

- 1 - Calloud ha glear ar Spered Glan: Evrus ar gwir varzher! E gorf m'en deus Doue mezet Ennañ 'o'hellio sevel.
2 - Evel ar greun a vez malet Da vezañ hor barn, O c'horf 'n em stag ouzh korf brevet Profet gant hon daouarn.
3 - O gwad 'n em vesk gant gwad salver A welo'h hor pec'hedoù, Karantez 'z int ar Galon-se 'Deus kement hor c'haeret.
7 - Treuzvevañ 'ra ar greun en eost, En deiz ma vo ho Teiz. Buhez na marv n'o deus un anv E ren ar garantez.

S. 117 Ant.: Ar bugel-se a vo bras dirak an Actroù, dorn an Actroù a vo gantañ.

Kant. 1 P 2,21-24 (P. 228): Ar rouaned a welo, ar briñsed a savo hag a azeulo an Actroù en deus ho tibabet.

Komz Doue Ob 13,23-25 Diwar lignez David en deus Doue, hervez e bromesa, laket da sevel da Israel Jezuz e-giz Salver. Yann en devoa prezaget, evel diaraoger, e zonedigezh, en ur gemenn ur vadeziant a geuz da holl bobl Israel. Ha pa 'z edo Yann gant disoc'h e redadenn e lavare: An hini a soñjit ez on-me, n'on ket. Met setu ma teu war va lerc'h an hini n'on ket d'elletek da zis- koulmañ sandalennoù e dreid.

Bezit laouen en Actroù, tridit, c'hwi, tud just. V/- En em laouenait, c'hwi holl tud eum a galon, tridit... V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Ar bugel ganet dimp a zo muioc'h eget ur profed, diwar e benn e lavar Hor Salver: e-touez bugale ar maouezed n'eus hiniebet brasoc'h eget Yann Vadezour.

24 Mezheven

En deiz-mañ, deiz gouel sant Yann Vadezour, pedomp Jezuz Krist en deus hon dasprenet eus teñvalijenn ar pec'hed:

R/- Deuit, Actroù Jezuz.

- Oan Doue, deuet oc'h da zilemel pec'hedoù ar bed, diverkit ennomp kement roudenn eus hor mankoù. R/
- Deuet oc'h da salviañ ar pezh a oa kollet, gwarezit ar re hoc'h eus saveteet. R/
- Addont a reot, c'hwi hag hon eus lakaet ennoc'h hor feiz, grit dimp kaout perzh en ho joa peurbadel. R/
- Dont a reot da varn ar re vev hag ar re varv: renit an holl fideled e-touez ar re zibabet. R/

Kempedenn

Teurvezit, ni ho ped, Doue hollc'halloudek, ober ma 'z aio war-raok ho tiegezh war hent ar silvidigezh evezhiek ouzh galvadennoù sant Yann an diaraoger, evit en em gavout su- roc'h gant ar Salver a gemenne, Jezuz Krist, ho Mab hag hon Ac- troù. Eñ a ren...

OPIS AL LENNADEHNOU

Meulgan (P. 3 - 4)

- S. 2 Ant.: Ar bugel-se a vo bras dirak Doue, dorn Doue a vo gantañ.
S. 10 - : Laket em eus va c'homzoù en ho kenou: ho tiazezañ a ran war ar broadoù hag ar rouantelezhioù.
S. 16 - : Ar rouaned a welo, ar briñsed a savo hag a azeulo an Actroù Doue en deus ho tibabet.
V/- Hon ene a c'hortoz an Actroù.
R/- Hon martezeo hag hor skoed.

Lennadenn

Yr 1,4-10.17-19

R/- A-raok ho stummañ e korf ho mamm ez anavezet ac'hanoc'h: a-raok deoc'h dont er bed em eus ho kensaknet. + Ober a ran ac'hanoc'h ur profed evit ar pobloù. V/- Va c'hom- zoù a lakan en ho kenou: hiziv e roan deoc'h beli war ar pobloù hag ar rouantelezhioù. + Ober...

Te Doue

Kempedenn

Fellet ez eus bet deoc'h, Actroù, ma 'c'h aozfe sant Yann Vadezour ho Pobl a-benn donedigezh ar Meziav, roit, ni ho ped, d'ho tiegezh donezon ar joa speredel ha renit an holl grederion war hent ar silvidigezh hag ar peoc'h. Dre Jezuz K...

OPIS AR BEURE

S. 94 R/- An Actroù, Roue ar varzherion, deuit, azeulomp anezhañ.

Meulgan

O Sant burzhudus, uhel e gras Doue, Profed ar brasañ, embanner ar pened, O Yann Vadezour, gwelc'her an eneoù, Merzher kalonek.

Bremañ eus an neñv, breped evel gwehall, Tennit eus hor c'hreiz main kalet ar pec'hed, Ha renit eun kement 'zo skosellek Ha gwaret ennomp.

Ma c'hello Salver ha Dasprener ar bed
O tont gant truez e templ hor c'halonou,
Bale dre hentou skarzhet ha kempennet
Ha lirzhin d'e dreid.

Holl sent an neñv, gant o c'hanaouennoù,
Ho meul, o Doue, unan en ho Treinded,
Ha ni pec'herion, gant keuz e c'houlenomp
Izel ho pardon. Amen.

S. 62 Ant.: Ar bugel-se a vo bras dirak Doue, dorn Doue a vo gantañ.
Kant. Dn (P. 6): Laket em eus va c'homzoù en ho kenou: ho tiazezañ a
ran war ar broadou hag ar rouantelezhioù. R/

S. 149 Ant.: Ar rouaned a welo, ar briñsed a savo hag a azeulo an Aotrou
Doue en deus ho tibabet.

Komz Doue MI 3,23-24 Setu ma kasan deoc'h Eliaz ar profed,
a-rack ma teuo va deiz, bras ha spou-
ronus. Degas a raio kalonou an tadoù davet o mibion ha kalonou ar
vibion davet o zadoù, gant aon na zeufen da skeiñ ar vro gant an
anaoue.

An neb a sello war-zu Doue ne splannaio, war e zremm,
c'hwervoni ebet.
V/- Evurus an neb a glask goudor ennañ, war e zremm...
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Zakaria a zigoras e c'henoù hag a ziouganas en ur lavarout:
ra vo benniget Doue Israel.

Pedomp ar C'hrist Dasprener a zeuio un deiz en e c'hloar:
R/- Deuit, Salver Jezuz!

- Krist, hon Aotrou, addont a reot gant galloud, sellit ouzh hor
gwander hag hol lakit dellezek eus ho kras. R/
- Deuet oc'h evit kemenn ar C'heloù-mat d'an dud, roit dimp nerzh-
kalon evit dougen ho kannadur. R/
- Deuet oc'h evit frealziñ ar re o deus ur galon vrevet, yac'hait
reuzedigezhioù ho pobl. R/
- Bezit benniget, c'hwi hag a c'houarn pep tra: dre ho trugarez grit
dimp bevañ er bed-mañ er gerreizhdod, er justis hag en deoliesh. R/

Kempedenn (P. 259 Fellet...)

OPIS KREISTEIZ

S. 122 - 123 - 124 (pe S. ar sul): An neb an heuilh ne gerzh ket en deñva-
lijenn, met sklerijenn ar vuhez en devo.

Komz Doue Iz 49,5-6 Ha bremañ e komz an Aotrou, eñ hag en
deus va stummet e korf va mamm evit bezañ
e servijer. Lavarout a ra: Setu m'em eus graet ganeoc'h sklerijenn ar
broadou, evit ma 'z aio va silvidigezh betek pennoù pellañ ar bed.

V/- Va ene a c'hortoz an Aotrou.
R/- Hon nerzh eo hag hor skoed.

Kempedenn (P. 259)

OPIS AN ABARDAEZ

Meulgan

O sant bet choazet d'aozañ hent da Jezuz,
Pa vennomp meuliñ ho puhez vuzhodus,
Gwelc'hit hon diweuz, lamit hor pec'hedoù
Eus hor c'halonou.

An Ael a gemenn d'ho tad a-berzh Doue
Pegen bras e vo dirazañ ho toare,
Ho kinivelezh ha sked ho santelezh
A-hed ho puhez.

Met an den santel, p'eo chomet hep krediñ,
'Zo bet skoet mut, souezhusat testen!
C'hwi d'ho tad, o Yann, hoc'h eus ar gomz rentet
Kerkent ha ganet.

Eus don an askre hoc'h eus anavezet
E korf ar Werc'hez ar Mesiaz kuzhet,
Hag ho mamm santel diganeoc'h a zeskas
Ar mister ken bras.

Ra vo rentet gloar d'an Doue peurbadel,
D'an Tad ha d'ar Mab ha d'ar Spered Santel,
D'an Doue unan meuleudi didermen
Dre holl da viken. Amen.

S. 109 Ant.: Ar bugel-se a vo bras dirak Doue, dorn Doue a vo gantañ.
S. 115 - : Laket em eus va c'homzoù en ho kenou: ho tiazezañ a ran
war ar broadou hag ar rouantelezhioù.

Kant. Disk 4... (P. 15): Ar rouaned a welo, ar briñsed a savo hag a
azeulo an Aotrou en deus ho tibabet.

Komz Doue h. a... (P. 259)

mmmmmmmmmm
oooooooooooo
=====

27 Mezheven S. KURILLOZ A ALEXANDRIA
eskob, doktor

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus graet gant an eskob
sant Kurilloz un alvokad didrac'hus pa ziskoueze ez eo
ar Werc'hez glorius Vari gwir Vamm da Zoue, plijet ganeoc'h
reñf dimp-ni hag a gred ez eo Mari e gwirionez Mamm da Zoue,
ar c'hras da vezañ salvet dre vister ho Mab en em c'hraet den,
eñ a vev hag a ran a-holl-viskoazh...

28 Mezheven S. IRENE
eskob, merzher

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus bet roet d'an eskob
sant Irene an donezon da startaat ken mat ar gwir ge-
lennadurezh hag ar peoc'h en Iliz, plijet ganeoc'h reñf dimp
ar c'hras da vezañ troet bepred da labourat evit ar peoc'h hag
an unaniezh. Dre Jezuz Krist...

29 Mezheven S. PER & S. PAOL
ebestel

DERC'HEMMENT D'ABARDAEZ

Meulgan Spered Doue... (P. 225) pe:

Setu ma lugern gant sklerijenn beurbadel
An deiz-mañ gouestlet d'an daou abostol santel
'Zo pignet d'ar c'hloar da vezañ kurunennet
En ur ziskouez dimp an hent d'an evurusted.

Porzhier an neñvoù ha Doktor ar Baganed,
Tadoù kêr Roma ha barnerion an hollved,
An eil dre ar Groaz, egile dre ar c'hleze
O deus gonezet o zron e bro ar vuhez.

Roma evurus, dleet eo dit meuleudi,
O kêr skedusañ, sakret gant merzherenti
An daou abostol, brasoc'h eget rouaned
O deus da ruziet gant ar gwad o deus skuilhet.

Rentomp karantez da dri Ferson an Dreinded,
D'an Tad krouer mat ha gouarnar an hollved,
D'ar Mab hag a ren azezet er sklerijenn
Ha d'ar Spered Glan, bremañ ha da virviken. Amen.

S. 116 Ant.: Dre an douar a-bezh en em led o mouezh hag o c'homz
betek dibennoù ar bed.

S. 147 - : Evurus an dud a beoc'h, evurus ar re c'hlan a galon,
gwelout a raint Doue.

Kant. Ef 1,3-10 (P. 11): N'eus ket brasoc'h karantez eget reiñ e vuhez
evit e vignoned.

Komz Doue 1 Kor 1,27-29 Ar pezh a zo diskiant er bed-mañ a zo bet
dibabet gant Doue d'ober mezh d'ar re
skiantek; ar pezh a zo dinerzh er bed-mañ a zo bet dibabet gant Doue
d'ober mezh d'ar re greñv hag ar pezh a zo dilignez er bed-mañ, ar
pezh a zo disprizet a zo bet dibabet gant Doue, ar pezh n'eo netra,
dibabet evit kas da netra ar re a zo o vezañ, evit ne c'hello den
ebet en em veulif dirak Doue.

Da viken, Aotrou, e chom digemm ho komz en neñvoù.
V/- A rumm da rumm e chom digemm ho kwirionez en neñvoù.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Pêr, an abostol, ha Paol, doktor ar broadoù, o deus
kelennet dimp ho lezenn, Aotrou.

En deiz-mañ, deiz gouel an Ebestel sant Pêr ha sant Paol,
pedomp an Aotrou:

R/- Hor salvit dre ho karantez.

- Aotrou peurbadel, c'hwi hag a bad er c'hantvedoù, skuilhit en hor
c'halonoù ho komz vev. R/
- Doue kuzhet, c'hwi hag hoc'h eus en em ziskleriet d'an dud, grit
ma kresko hor feiz, hon esperañs hag hor c'harantez. R/
- An holl bobloù d'anavezout ennoc'h an Doue gwirion hag en Aotrou
Jezuz Krist ar Salver hoc'h eus kaset dezho. R/
- Kasit mederion d'hoc'h eost, Aotrou, evit ma vo enoret hoc'h anv
gant an holl bobloù. R/

Kempedenn

Grit, ni ho ped, Aotrou Doue, ma teuo pedennoù an ebes-
tel santel Pêr ha Paol d'hor skoazellañ, ha peogwir hoc'h
eus roet drezo d'hoc'h Iliz kentañ madoberoù ho kras, ra zega-
sint bremañ ar sikourioù hon eus ezhomm evit hor silvidigezh.
Dre Jezuz Krist...

OFIS AL LENNADENNOU

Meulgan (P. 3 - 4) pe:

O Pastor evurus, teurvezit hor selaou
Da derrif diouzhimp liammoù hor pec'hedoù:
Gant ur ger hepken e c'hallit-c'hwi digeriñ
Dorioù an neñvoù, ha gant ur ger o serrif.

C'hwi, doktor illur, o Paol renit hor buhez
Da vont en tu-hont da sklaerier danguzh ar feiz;
Gant ho kentelioù sachit hor c'halonoù gwan
Da dizhout Doue, e nerzh ar garantez splann.

Rentomp karantez da dri Ferson an Dreinded,
D'an Tad krouer mat ha gouarnar an hollved,
D'ar Mab hag a ren azezet er sklerijenn,
Ha d'ar Spered Glan, bremañ ha da virviken. Amen.

S. 18 Ant.: Dre an douar a-bezh en em led o mouezh hag o c'homz
betek dibennoù ar bed.

S. 33 - : Evurus an dud a beoc'h, evurus ar re c'hlan a galon:
gwelout a raint Doue.

S. 98 - : N'eus ket brasoc'h karantez eget reiñ e vuhez evit e vignoned.
V/- Embannet o deus oberenn Doue.
R/- Komprenet o deus e virzhudoù.

Lennadenn Ga 1,15-2,10

R/- An hini a eas eus Pêr abostol ar re androc'het an c'hasas
d'ar Baganed + Anzav a rejont ar c'hras roet din. V/- E
c'hras n'eo ket bet difrouezh ennon: gras Doue a zo dalc'h-
mat ganin. + Anzav...

To Deun

Kempedenn

Aotrou Doue, roet hoc'h eus dimp an deiz-mañ a levenez
santel evit lidañ an ebestel evurus Pêr ha Paol, grit
d'hoc'h Iliz bezañ fidel d'o c'heleñnadurezh peogwir eo drezo
eo he deus resevet kentañ kemennadenn ar feiz. Dre Jezuz Krist..

OFIS AR ESURE

S. 94 R/- Aotrou Jezuz, Roue an Ebestel, gloarha meuleudi deoc'h.

Meulgan

- 1 - Evidoc'h, Aotrou, e kanimp,
Graet hoc'h eus dimp adveañ,
Ra zeuy ho komz en hor c'halon
D'hon dieubiñ da viken.
- 2 - Ho kwinienn, o Jezuz Krist,
War runioù an hollved,
C'hwi dezhi a ray dougen frouezh,
Ur vandem frouezhusañ.
- 3 - Ar bed a c'hortoz diganimp
Ur sin eus ho kloar, Aotrou,
Ra zeuio ennomp ho Spered
Da beurgas ho trec'hadenn.
- 4 - E kalonoù ar gristenion
Ho yaouankiz divarvel
A ray dezho reiñ d'ar bed holl
Hoc'h elienenn virvidik.

5 - Glocar beurbad d'an Doue trec'her
Hag a zo Mestr an istor,
Ra gano ennomp ar Spered
E veuleudi hag e c'hlocar.

S. 62 Ant.: Dre an douar a-bezh en em led o mouezh hag o c'homz betek dibennoù ar bed.

Kant. Dn (P. 6): Evurus an dud a beoc'h, evurus ar re c'hlan a galon, gwelout a raint Doue.

S. 149 Ant.: N'eus ket brasoc'h karantez eget reiñ e vuhez evite vignoned.

Komz Doue Ob 15,7-9

Doue en deus va dibabet evit ma klevfe ar Baganed eus va genou va-unan komz ar C'heloù-mat, ha ma kredifent. Ha Doue, anavezet ar c'halonoù, en deus roet testeni a-du ganto, dre reiñ dezho ar Spered Santel, kenkouls ha dimp-ni. N'en deus graet diforc'h ebet etrezomp hag i, peogwir en deus naetaet dre ar feiz o c'halonoù.

Da viken, Aotrou, e chom digemm ho komz en neñvoù.
V/-A rumm da rumm e chom digemm ho kwirionez en neñvoù.
V/-Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Holl gement ho liammet war an douar a vo liammet en neñvoù hag holl gement ho po diliammet war an douar a vo diliammet en neñvoù, eme an Aotrou da Simon Pêr.

En deiz-mañ, goulz an ebestel sant Pêr ha sant Paol, pedomp an Aotrou:

R/- Ho pet soñj, Aotrou, eus hoc'h Iliz.

- Sklerijenn ar broadoù, ho pet soñj eus ar re a zo e teñvalijenn ar falskredennoù, digorit o daoulagad ma c'hellint hoc'h anavezout, c'hwi an Doue gwirion nemedoc'h. R/
- Jezuz, ho Mab, en deus kaset e ziskibled da embann ar C'heloù-mat, grit d'ar re a brezeg an Aviel bevañ hervez ar Spered. R/
- Doue, mignon an dud, grit d'hoc'h Iliz degas ar peoc'h, ma vo sin a silvidigezh evit an holl bobloù. R/
- Fellet ez eus bet deoc'h e vefe an ebestel testenioù d'ho Mab adsavet da vev, grit dimp kas o zesteni betek dibennoù ar bed. R/

Kempedenn (P. 263)

OFIS KREISTEIZ

S. 119 - 120 - 121 (Pe S. ar sul): Dre an douar a-bezh en em led o mouezh hag o c'homz betek dibennoù ar bed.

Komz Doue Ob 5,41-42

Int-i neuze a yeas kuit a-zirak ar Sanderin, leun a levenez o vezañ bet kavet d'ellesek da c'houzañv dismegañs evit anv Jezuz. Ha bemdez en Templ hag en tiez, n'chanent ket da gelenn ha da embann Keloù-mat ar C'hrist Jezuz.

V/- Embannet o deus oberenn Doue.
R/- Komprenet o deus e vuzhudoù.

Kempedenn (P. 263)

OFIS AN ABARDAEZ

Meulgan Spered Doue... (P. 203) 1 - 3 - 5.

S. 109 Ant.: Dre an douar a-bezh en em led o mouezh hag o c'homz betek dibennoù ar bed.

S. 125 - : Evurus an dud a beoc'h, evurus ar re c'hlan a galon, gwelout a raint Doue.

Kant. Ef 1,3 - 10 (P. 11): N'eus ket brasoc'h karantez eget reiñ e vuhez evite vignoned.

Komz Doue 1 Kor 15,3-5.8

Adroet em eus deoc'h eta da gentañ da c'houzout ar pezh am boa resevet me va-unan, penaos ez eo marvet ar C'hrist evit hor peoc'hedoù, hervez lavar ar Skriturioù, ez eo bet laket er bez, hag ez eo dihonet da vev an trede deiz, hervez lavar ar Skriturioù, en deus en em ziskouezet da Gefa, ha goude-se d'an Daouzek. Hag erfin, d'an diwezhañ-holl en deus en em ziskouezet din-me ivez.

Da viken, Aotrou...h.a... (P. 262-3)

30 Mezheven MERZHERION GENTAÑ ROMA

Kempedenn

Kensakret hoc'h eus, Aotrou Doue, amzerioù kentañ frouezhus Iliz Roma dre vad ar verzhion: roit dimp, ni ho ped, an nerzh da chom start ha divrall da heul ar re o deus gourenet en ur stourmadeg ken bras, hag al levenez da vezañ trec'h bepred en emgann santel. Dre Jezuz Krist...



3 Gouere S. TOMAZ abostol

Ofis an Ebestel (P. 225) nemet:

Kant. Zak. & ar H.: O vezañ m'hoc'h eus va gwelet hoc'h eus kredet: evurus ar re a gred hep bezañ bet gwelet.

Kempedenn

En deiz-mañ ma lidomp an abostol sant Tomaz, roit dimp, ni ho ped, Doue hollc'halloudek, ar c'hras da adkemer nerzh-kalon ha grit dimp kaout ar vuhez dre gredif eveltañ en Hini a anavezaz evel e Vestr Jezuz Krist hon Aotrou. Ef a ren..

Lennadenn Ob 5,12-32

4 Gouere S. ELIZABED AR PORTUGAL

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag a zo mammenn ar peoc'h hag a blij deoc'h ar garantez, d'hoc'h eus roet da santez Elizabeth an donezon dispar da lakaat emglev e-tre eñbourion, roit dimp ar c'hras, grit sikour he fedennoù, d'ober an oberoù a beoc'h evit ma c'hellimp kaout ar gwir da vezañ anvet bugale da Zeue. Dre Jezuz Krist...

5 Gouere S. ANTON-MARI ZAKARIAS beleg

Kempedenn

Aotrou Doue, roit dimp ar c'hras, ni ho ped, da dizhout, hervez spered an abostol sant Paol, an anaoudegezh uhel-meurbet eus Jezuz Krist hag a voe desket ken mat gant sant Anton-Maria Zakarias ma talc'has hep skuizhañ da brezeg en hoc'h Iliz komzoù ar silvidigezh. Dre Jezuz Krist...

6 Gouere

S. MARIA CORETTI
gwerc'hez, merzherez

Kempedenn

Aotrou Doue, mammenn ar c'hlanded ha mignon ar burentez, c'hwi hag hoc'h eus roet d'ho servijerez Maria gras ar verzhement e-kreiz splannder he yaouankiz, grit dimp, gant sikour he fedennoù, chom start en ho kourc'hemennoù, c'hwi hag hoc'h eus roet kurunenn an trec'h d'ho gwerc'hez kalonek. Dre Jezuz Krist...

11 Gouere

S. BENEAD
abad

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus graet gant an abad santel Benead ur mestr dispar e skol ar servij divin, roit dimp ar c'hras, ni ho ped, da lakaat ho karantez er penn-kentañ ha da heuliañ hent ho kourc'hemennoù gant ur galon leun a c'hred. Dre Jezuz Krist...

13 Gouere

S. HERRI

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus skuilhet ho kras gant largetez e sant Herri evit e denañ en un doare burzhudus eus karg ar goua namant er bed-mañ, evit sevel e spered e-tredek an traoù eus an nec'h, grit dimp, gant sikour e bedennoù, ho klask gredus gant kalonoù pur e-kreiz kemmadennoù ar bed-mañ. Dre Jezuz Krist...

14 Gouere

S. KAMILH LELLIZ
beleg

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus roet da sant Kamilh gras ur garantez hep he far e-keñver an dud klañv, skuilhit warnomp, abalamour d'e veritoù, ho spered a garantez evit ma c'hellimp ouzh ho servijañ en hor breudeur, tremen dinec'h da eur hor marv eus ar bed-mañ davedoc'h. Dre Jezuz Krist...

15 Gouere

S. BONAVENTURA
eskob, doktor

Kempedenn

Doue hollec'halloudek, prizit reiñ dimp-ni hag a zo o lidañ gouel ganedigezh hoc'h eskob santel Bonaventura da c'hloar ar Baradoz, ar c'hras da denañ hor mad eus e gentelioù hep o far, ha da gemer skouer bepred diwar e garantez nerzhus. Dre Jezuz Krist...

16 Gouere

ITRON VARIA GARMEZ

Kempedenn

Ni ho ped, Aotrou Doue, grit ma vimp sikouret gant pedennoù santel ar Werc'hez glorius Vari, ma c'hellimp gant he skoazell erruout betek ar Menez m'eo hor Salver Jezuz Krist. Eñ a ren...

21 Gouere

S. LAORAÑS BRINDIZI
beleg, doktor

Kempedenn

Aotrou Doue, evit gloar hoc'h anv ha silvidigezh an eneoù hoc'h eus roet d'ho peleg sant Laorañs ar spered a nerzh hag a furner : plijet ganeoc'h eta reiñ dimp ar spered-se evit anavezout ar pezh hon eus da ober hag evit ober gant e skoazell ar pezh hor bo anavezet. Dre Jezuz Krist...

22 Gouere

S. MARI-MADALEN

Kempedenn

Aotrou Doue, ho Mab unganet a fizias e Mari-Madalen ar garg da embann, a-raok den all ebet, levnez Pask, roit dimp ar c'hras, ni ho ped, gant he sikour hag evel ma reas hoc'h-

unan, da embann ez eo bev an Aotrou Krist, ha d'hen gwelout un deiz en ho kloar war e dron a roue. Eñ a ren...

23 Gouere

S. BERCH'HEZ
leanez

Kempedenn

Aotrou hon Doue, da santez Berc'hez o prederiañ war Basion ho Mab hoc'h eus diskleriet misterioù an neñvoù, roit dimp-ni, ho servijerion, ar c'hras da dridal un deiz gant al levnez p'en em ziskouezo ho kloar. Dre Jezuz Krist...

25 Gouere

S. JAKEZ
abostol

Ofis an Ebestel (P. 225) nemet:

Kempedenn

Aotrou Doue hollec'halloudek ha peurbadel, c'hwi hag hoc'h eus sakret ar frouezh kentañ eus labourioù an ebestel gant gwad sant Jakez, plijet ganeoc'h, ni ho ped, ober ma vo startaet hoc'h Iliz en he feiz gant merzhement an abostol ben-niget-se ha kennerzhet bepred gant sikour e bedennoù. Dre J. K.

Lennadenn

1 Kor 1, 18 - 2, 5

26 Gouere

S. ANNA & S. JOASIN

Kempedenn

Aotrou, Doue hon Tadou, c'hwi hag hoc'h eus roet da sant Joasin ha da santez Anna ar c'hras da lakaat er bed ar Werc'hez glorius Vari, mamm ho Mab unganet deuet da vezañ den, roit dimp ar c'hras gant sikour o fedennoù, da gaut ar silvidigezh bet prometet ganeoc'h d'ho pobl. Dre Jezuz Krist...

28 Gouere

S. SAMSON
eskob

Kempedenn

Aotrou Doue, renit ho teñved, ni ho ped, en hent ar silvidigezh peurbadus bet diskouezet dimp gant an eskob sant Samson, dre skouerioù e vuhez ha dre e gentelioù, ha grit dimp, gant sikour e bedennoù, dispenn e roudoù gant kement a c'hred ma veritimp bezañ kurunet eveltañ e gloar an neñvoù. Dre Jezuz Krist...

29 Gouere

S. GWILHERM
eskob

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus graet skedid en eskob evurus sant Gwilherm ur c'hlanded a eal, ur garantez dispar e-keñver ar beorion hag un nerzh divrall evit difenn gwirioù hoc'h Iliz, roit dimp ar c'hras, dre sikour e bedennoù, da stourm gant nerzh-kalon evit ar reizhded, da garout reiñ skoazell d'ar reuzeadion ha da ziwall gant kement a c'hredidouzh saotrarioù ar pec'hed ma veritimp mont un deiz da eured an Oan. Dre Jezuz Krist...

S. MARTA

Doue hollec'halloudek ha peurbadel, ho Mab a brizas ober e ziskenn e ti santez Marta: roit dimp ar c'hras, gant sikour he fedennoù, da servijañ gant feiz an Aotrou Krist en hor breudeur, ha da veritout evel-se bezañ degemeret ganeoc'h e palez an Dreinded. Dre Jezuz Krist...

30 Gouere

S. PER KRIZOLOG
eskob, doktor

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus graet gant an eskob sant Pêr Krizolog ur prezeger dispar d'ho Mab en em

c'hraet den, roit dimp ar c'hras, gant sikour e bedennoù, da brederiañ hep ehan en hor c'halon war visterioù ar silvidigezh ha d'o diskouez gant feiz ha lealded en oberoù hor buhez. Dre Jezuz Krist...

31 Gouere S. IGNAS A LOYOLA beleg

Kempedenn Aotrou Doue, evit kreskiñ gloar hoc'h anv hoc'h eus lakaet da sevel sant Ignas en hoc'h iliz, grit, ni ho ped, ma veritimp, goude bezañ stourmet er bed-mañ gant e sikour hag en ur gemer skouer warnañ, bezañ kurunet eveltañ en neñvoù. Dre Jezuz Krist...

==

1 Eost S. ALFONS-MARI LIGORI eskob, doktor

Kempedenn Aotrou, c'hwi hag a zalc'h hep paouez d'hor c'heleñn gant skouerioù ha vertuzioù ar sent, roit dimp ar c'hras da vezañ gredus evit silvidigezh an eneoù, evel an eskob sant Alfons, ma veritimp kaout eveltañ hor gopr er Baradoz. Dre Jezuz Krist...

2 Eost S. EUZEB A VERSEL eskob

Kempedenn Grit dimp, Aotrou Doue, en ur anzav hor feiz e doueelezh ho Mab, kemer skouer war nerzh-kalon an eskob sant Euzeb, evit mirout ar feiz bet kolennet gantañ, ma veritimp kaout perzh e buhez ho Mab. EH a ren...

4 Eost S. YANN-VARI VIANNEY beleg

Kempedenn Doue hollc'halloudek ha trugarezus, c'hwi hag hoc'h eus graet gant ho peleg sant Yann-Vari ur sant dispar evit e c'hred a bastor, plijet ganeoc'h, hervez e skouer ha gant sikour e bedennoù, ober dimp gonit hor breudeur d'an Aotrou Krist dre hor c'harantez, ha meritout en em gaout asambles ganto e gloar beurbadel an neñvoù. Dre Jezuz Krist...

5 Eost DEDI ILIZ VEUR S. MARI

Kempedenn Teurvezit, Aotrou Doue, pardonit pec'hedoù ho servijerion, ha peogwir ne c'hellomp ket ac'hanomp hon-unan plijout deoc'h, ra vimp salvet gant sikour Mamm ho Mab, ar Werc'hez glorius Vari. Dre Jezuz Krist...

6 Eost JEZUZ WAR MENEZ TABOR DERO-HENT

S. 112 - 116 - Kant. Disk. 19 (P. 8)

OFIS AL LENNADENNOU

Meulgan (P. 4 - 5)

S. 83 Ant.: Pebez eurvad evidomp bout amañ: roit dimp ar c'hras hag ar c'hloar, alleluia.

S. 96 Ant.: Gloar ho Kroaz a sked war ar bed; Krist, hor Salver, ho trugarekaat a reomp, alleluia.

S. 98 - : Er goabrenn e komz ganto, alleluia.

V/- Hemañ eo va Mab muia-karet.
R/- Selaouit-eñ.

Lennadenn 2 Kor 3,7 - 4,6

Te Deum

Kempedenn Aotrou Doue, pa oa Jezuz o tiskouez e c'hloar war ar Menez, hoc'h eus harpet misterioù ar feiz gant testen profedet an Testamant kozh ha roet da anout en a-raok e kemerfec'h an dud evit ho pugale, roit eta dimp-ni ho servijerion ar c'hras da selaou mouezh ho Mab karet evit kaout lod un deiz en e c'hloar beurbadel. EH a ren...

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- Ar C'hrist, roue a c'hloar, deuit, azeulomp anezhañ.

Meulgan Lavaret en deus Doue... (P. 232) PE:

- 1 - O Karantez hon eneoù,
Deuit, Jezuz, 'n hor c'halonoù
Da skarzhañ kuit pep teñvalder
Ha d'hon leuniañ gant ho touster.
- 2 - Pegen laouen eo an hini
A c'hell tañva gras ho tudi,
C'hwi sklerijenn bro an neñvoù
Kuzhet ouz selled hor c'horfoù.
- 3 - C'hwi splannder eus splannder
Digomprenus ho trugarez, / Doue,
Skuilhit ennomp gant largentez
Gant ho pezañs, ho karantez.
- 4 - Jezuz, Mab unganet Doue
En em ziskouez d'ar vugale,
Deoc'h ha d'an Tad ha d'ar Spered,
Ehor ha klod dre an holl ved. Amen.

S. 62 Ant.: Tra m'edo Jezuz o pedif e lugerne e zremm; en e sklerijenn hon eus gwelet ho sklerijenn, alleluia.

Kant. Dn (P. 6): Evel an heol e skede e zremm, e zilhad a zeus da vezañ gwenn evel an erc'h hag eus ar goabrenn e teus mouezh an Tad, alleluia.

S. 149 Ant.: Hemañ eo Mab va c'harantez, selaouit-eñ, alleluia.

Komz Doue Disk 21, 10.23

Ael an Aotrou va dougas en spered war ur menez bras hag uhel, hag e tiskouez Doue. Hag ar Gêr n'he deus ket ezhomm eus an heol hag eus al loar d'he goulaouif, rak klod Doue a ro sklerijenn dezhi, hag he lamp eo an Oan.

Emoc'h emañ mammenn ar vuhez, en ho sklerijenn e welomp ar sklerijenn.
V/- Aotrou, pegen prizioù ho karantez, en ho sklerijenn...
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Gwelet e sklaerder Mab an Den, ar Brofeded a-wechall a gemenne e Ermaeziade, hag en neñv ur vouzsh a roe dezhañ gloar: Setu va Mab, chomit en e sklerijenn.

Tad meurbet madelezhus, treuzneuziet hoc'h eus ho Mab muia-karet ha diskouezet ar Spered Santel er goabrenn skedus -

Jezuz war Menez Tabor

grit ma selaouimp gant feiz komz an Aotrou Krist.

R/- En ho sklerijenn, Aotrou, e welimp ar sklerijenn.

- Hor gwalc'h hoc'h eus roet dimp eus pinvidigezhioù ho neved hag ho kras, grit dimp kavout e korf ar C'hrist mammenn hor buhez. R/
- Aotrou Doue, graet hoc'h eus d'ar sklerijenn skedif en deñvalijenn ha sklaeraet hoc'h eus hor c'halonoù evit lakaat da skedif an anaoudegezh eus gloar Doue a zo war zremm Jezuz ar C'hrist, atizit ennomp ar c'hoant da arvestif ouzh ho Muiañ-karet. R/
- Aotrou Doue, hor galvet hoc'h eus dre ur c'halvadenn santel, hervez menoz ho kras diskouezet e donedigezh hor Salver Jezuz Krist, grit d'ar vuhez ha d'an divarvelezh skedif e-touez an dud dre an Aviel. R/
- Doue meurbet karantezus, kement hoc'h eus karet ac'hanomp maz omp galvet mibion da Zoue, pa 'n em ziskouezo ar C'hrist hol lakit da vezañ heñvel outañ. R/

Kempedenn (P. 269)

OPIS KREISTEIZ

S. & Ant. an deiz

Komz Doue 2 Kor 3,18

Ha ni holl, pa skeudennomp war hon dremmoù dizolo evel en ur vezaour, gloar an Aotrou, e vezomp troet er skeudenn-se, a zeu da vezañ ennomp splannoc'h-splannañ, dre labour an Aotrou a zo spered.

V/- Hemañ eo va Mab muiañ-karet. R/- Selaouit-efñ.

Kempedenn

OPIS AN ABARDAEZ

Meulgan

Doue 'reas d'ar bed tarzhañ... (P. 15) pe:

- | | |
|--|---|
| 1 - Mar klaskit Jezuz, Mab Doue, Savit gantañ war ar Menez, Dougit ho selloù d'an uhel Da welout e glod peurbadel. | 3 - Henezh eo Roue an holl ved, Ken Yuzevion ha Paganed, Bet prometet a-berzh Doue Da Abraham ha d'e lignez. |
| 2 - A-dreuz e gorf setu ma par Ur skin eus ar splannder dibar, Uhel, divrall ha didermen, 'Zo tra Doue da holl viken. | 4 - Ha gant lavar ar Brofeded O deus a-bell e ziouganet, Mouezh an Tad a ro testiñ Hag a gemenn dimp e gredifñ. |
| 5 - Jezuz, Mab unganet Doue, En em ziskouez d'ar vugale, Deoc'h ha d'an Tad ha d'ar Spered, Enor ha klod dre an hollved. Amen. | |

S. 109 Ant.: Sked gloar an Tad, deuet oc'h eus ar menezioù peurbadel, all.
S. 120 - : En em reizhit, bezit dizaon, alleluia.
Kant. 1 Tm 3,16: Gloar ha meuleudi deoc'h, Aotrou Jezuz.

Krist, diskouezet er c'horf, gloar deoc'h ha meuleudi.

Jezuz war Menez Tabor

Krist, diskleriet santel gant ar Spered, gloar deoc'h...

Krist, bet gwelet gant an Aeled, gloar...

Krist, prezeget d'ar Baganed, gloar...

Krist, kredet gant ar bed, gloar...

Krist, uhelsavet er c'hloar, gloar...

Komz Doue Em 8,16-17

Ar Spered e-unan a ro testiñ d'hor spered-ni ez omp heritourion; heritourion Doue, kenheritourion gant ar C'hrist, peogwir e c'houzañvomp poan gantañ da gacut gloar ivez e-unan gantañ.

Ennoc'h emañ mammenn ar vuhez, en ho sklerijenn e welomp ar sklerijenn. V/- Aotrou, pegen priziuz ho karantez, en ho sklerijenn... V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Hiziv war ar Menez en em ziskouez Doue evel hon Tad, pa zeuio deiz an hini dasorc'het en em ziskouezo hor gloar: heñvel outañ e teuimp da vezañ, alleluia.

O Krist, a-raok mont da vervel war ar Croaz hoc'h eus diskouezet ho Tasorc'hidigezh d'ho tiskibled; ho pediñ a reomp evit hoc'h Iliz a c'houzañv er bed, evit ma vo treuzneuziet en hec'h enkadenn gant levenez ho trec'hadenn. R/- Sklerijennit hon noz, Aotrou Jezuz.

- O Krist, ganec'h hoc'h eus kemeret Pêr, Jakoz ha Yann ha bleniet anezho d'ar Menez; ho pediñ a reomp evit hor Pab hag hon Eskibion, evit ma servijint ho pobl er peoc'h hag en esperañs eus an Treuz-neuziadur. R/
- O Krist en ho sav war ar Menez, graet ho poa lugernif ho tremm war Voizez hag Eli, ho pediñ a reomp evit ar Yuzevion, ar bobl dibabet gwechall ganec'h, evit ma c'hello tizhout an Dasprenadur klok. R/
- O Krist, sklerijennet hoc'h eus an douar pa 'z eo savet warnoc'h gloar ar C'hrouer, ho pediñ a reomp evit an dud a youl vat, ma kerzhint en ho sklerijenn. R/
- O Krist, stummañ a dleit hor c'horfoù dister hervez ho korf a c'hloar, ho pediñ a reomp evit hor breudeur tremonet, evit ma 'z antreint en ho kloar. R/

Kempedenn (P. 269)

††

7 Eost

S. ZIKST, pab hag e gom-pagnuned - merzherion

Kempedenn

Plijet ganec'h, Aotrou Doue, dre nerzh ar Spered Santel hol lakaat da vezañ douget d'ar feiz ha kalonek d'hec'h anv, c'hwi hag a roas da sant Zikst ha d'e gom-pagnuned ar c'hras da skuilh o gwad dre garantez evit ho kwirionez hag evit dougen testiñ d'hor Salver. Dre Jezuz Krist...

S. GAETAN beleg

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus douget ho peleg sant Gaetan da heuliañ doare-bevañ an ebistel, grit dimp, her-

vez e skouer ha gant sikour e bedennoù, lakaat bepred hor fiañs ennoc'h ha klask hep paouez ho Rouantelezh. Dre Jezuz K...

8 Eost S. DOMINIK beleg

Kempedenn Ra gavo hoc'h Iliz, Aotroù Doue, skoazell gant meritoù ha kentelioù sant Dominik, ha ra vo evidomp un alvokad leun a vadelezh, eñ hag a zo bet p...egor dispar ho kwirionez. Dre Jezuz Krist...

10 Eost S. LAORAÑS diagon, merzher

Ofis ar verzhherion (P. 228) nemet:

Ant. (Beure ha noz):

- 1 - An den evurus Laorañs a bede: Aotroù Jezuz Krist, mab Doue, ho pet truez ouzhin, pec'her.
2 - An den evurus Laorañs a bede: Va noz n'anav ket an deñvalijenn, pep tra anni a zo sklerijennet.
3 - Ho trugarekaat a ran, Aotroù, da vezañ gallet antren en ho Ti.

Kant. Zak.: Amprouet hoc'h eus va c'halon hag he gweladennet en noz; va amprouet hoc'h eus en tan ha n'hoc'h eus ket kavet emnon a zisleadet.

Kant. ar W.: An diagon Laorañs en deus rentet ar gweled d'an dud dall dre sin ar Groaz ha roet d'ar beorion teñzorioù an Iliz.

Kempedenn Dre nerzh ho karantez, Aotroù Doue, ez eo bet brudet sant Laorañs da vezañ bet fidel d'ho servijañ ha da c'houzañv ur verzhherenti c'hlorius, grit dimp, ni ho ped, karout ar perzh a gare hag ober ar pezh en deus kelennet. Dre Jezuz Krist...

Lenmadenn Ob 6,1-6. 8,1.4-8

11 Eost S. KLARA gwerc'hez

Kempedenn Aotroù Doue, c'hwi hag hoc'h eus, en ho trugarez, douget santez Klara da garout ar baourentez, roit dimpar c'hras, gant sikour he fedennoù, da zispenn roudoù hor Salver gant kallonù distag diouzh madoù ar bed-mañ, ma veritimp ho kwelout un deiz e Rouantelezh an neñvoù. Dre Jezuz Krist...

12 Eost S. PONTIAN & HIPOLIT Pab beleg merzhherion

Kempedenn Pasianted priziuz an dud just, ni ho ped, Aotroù Doue, ra gresko ennomp nerzh ho karantez, ha ra sikouro bepred ar feiz santel d'ober gwizioù start en hor c'halonou. Dre Jezuz Krist...

15 Eost AR WERC'HEZ VARI DOUGET D'AN NEÑV

DERC'HEMT

Meulgan Hag e welis... (P. 219) pe:

Ar Werc'hez Vari douget d'an neñv

1 - C'hwi a zo Mamm dispar, O Mamm Salver ar bed! C'hwi a zo kaerañ burzhud Bet graet gant an Aotroù, Itron Varia, Bet graet gant an Aotroù.
3 - C'hwi a zo ivez mammenn A c'hras hag a druez, Strinket eus an uhelder War gement denelezh, Itron Varia, War gement denelezh.

2 - Gwerc'hez choazet gant an Tad, 'Vit genel un Doue, Bezit c'hoazh ur Vamm dener Da bep bugel Doue, Itron Varia, Da bep bugel Doue.
4 - O Gwerc'hez a sklerijenn, Steredenn an neñvoù, Oskedit war an douar, Cant sklaerder hon Doue, Itron Varia, Cant sklaerder hon Doue.

S. 112 Ant.: Mari a zo bet savet d'an neñv: an Aeled a zo laouen, meulif ha bennigañ a reont an Aotroù.

S. 147 - : Benniget oc'h gant an Aotroù, c'hwi eo a ro dimp frouezhenn ar vuhez.

Kant. Disk. 19 (P. 8) R/- Alleluia, alleluia!

Komz Doue Rm 8,30

Ar re en deus rakverket Doue, o galvet en deus; ar re en deus galvet, o laket ivez en deus roet ar c'hloar. En ho splannder, en ho kened, trec'hit ha renit, Gwerc'hez Vari.

V/- Selaout, va mero'h, stouit ho skouarn, ar Roue a c'hoanta ho kened. V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Mero'h Sion, na kaer oc'h ha boemus, glan evel an heol!

Dre hanterouriezh ar Werc'hez Vari, pedomp trugarez an Tad en ur lavarout:

R/- Ra bedo evidomp ar Werc'hez leun a c'hras.

- Doue hollc'halloudek, grit d'ho fideled bezañ unvan a galon hag a ene, ha kendero'hel da bediñ unanet gant Mari, Mamm Jezuz. R/

- C'hwi hag hoc'h eus graet gant Mari skouer peurvat an unaniez gant Jezuz, roit d'ar gristenion ar c'hras d'ober evelti. R/

- C'hwi hag hoc'h eus graet eus Mari Mamm ar c'hras hag an drugarez, grit d'an dud ankeniet santout douster he c'harantez a vamm. R/

- C'hwi hag hoc'h eus lakef Mari e-kichen Jezuz ha Jozef, grit d'ar mammoù familh klask lakaat karantez ha santelezh en o ziegezh. R/

- C'hwi hag hoc'h eus kuruset Mari evel rouanez an neñv, grit d'an holl Anaon kaout perzh en he joa hag e joa an holl Sent. R/

Kempedenn

Aotroù Doue, c'hwi hag hoc'h eus taolet ho sellou war ar Werc'hez glorius Vari, ho servijerez izel, hag ho savet uhel betek reiñ dezhi ar c'hras da vezañ Mamm ho Mab karet, c'hwi hag hoc'h eus da geñver an deiz-mañ lakat war he fenn ur gurunenn a c'hloar, grit, gant sikour he fedennoù, pa 'z omp bet prenet gant gwad hor Salver, ma veritimp un deiz, ni ivez, bezañ douget da c'hloar ar Baradoz. Dre Jezuz Krist...

OFIS AL LENNADENNOU

Meulgan

Pegen skedus oc'h-c'hwi, o Mamm ar sklerder, Rouanez, merc'h David eus ti rouaned: Bremañ e lein an neñv, o Gwerc'hez Vari, Oc'h azezet a-us d'an holl arc'haeled.

C'hwi dinamm ho kalon, hoc'h eus kempennet Da Aotroù an Aeled, ho korf da balez, Drezoc'h Doue 'zo den, dre gemar ur c'horf, C'hwi 'zo mamm, ha bepred gwerc'hez enoret.

Bremañ tud an hollvod, 'vit en adoriñ, Dirak ho Mab, Jezuz, a stou d'an douar, Goulennit digantañ skarzhañ kuit diouzhip An drouk-teñvalijenn 'vit splannder e joa.

Roit kement-se dimp, Tad pep madelezh, Dre ar Mab a garit e flamm ho Spered, Hag a vev ganec'h-c'hwi, e lügen an neñv, O c'houarn hag o ren an holl gantvedoù. Amen.

S. 23 Ant.: Benniget oc'h e-touez ar maouezed, Gwerc'hez Vari, ha frouezh ho korf a zo benniget.

S. 45 - : An Uhel-meurbet en deus santelaet e annez.

S. 86 - : Displeget e vez ar pesh a ra ho kloar, Gwerc'hez Vari.

V/- Ar Werc'hez santel a zo bet savet R/- A-us d'an Aeled, e Rouantelezh an neñvoù.

Lennadenn Ef 1, 16-23. 2, 4-10

Te Deum

Kempedenn (P. 273)

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- Deuit, azeulomp Roue ar rouaned: ar Werc'hez, e Vamm, hiziv a zo savet d'an neñv.

Meulgan

Bannoù skedus an heol a ra deoc'h ur sae gran, Gant daouzek steredenn ho tal 'zo kurmet, Al loar en he splannder eo skabell ho troid glan, A c'hloar ez oc'h karget.

Goude trec'hiñ an Diaoul e trec'hit ar maro: 'Tal ar C'hrist azezet, c'hwi 'selaou gant evezh An neñv hag an douar unanet war un dro Da veuliñ o mestrez.

Hogen an Aerouant 'zalc'h da stegnañ pechoù D'ar vugale fiziet ennoc'h 'vit o difenn: Dre drez, o Mamm vat! Dispennit e ardoù, 'Plastrit dezhañ e benn!

Harpit ar gristenion a stoum evit ar feiz, An defived dianket o degasit en-dro, Dastumit ar pobloù gourvezet o'hoazh hep reizh Dindan skeud ar maro.

Goulennit, o Gwerc'hez, pardon d'ar bec'herion, D'ar paour roit frealz ha d'ar poaniour didorr; 'Kreiz ar c'herreg trestour bezit hor sklerijenn, Gwir steredenn ar mor!

Meuleudi hep ehan, meuleudi d'an Dreinded He deus ho kurmet, Gwerc'hez dous ha dinamm, Ha laket ac'hano'h en neñv, Itron garet, Da vezañ dimp ur vamm. Amen.

S. 62 Ant.: Savet eo bet Mari d'an neñv, an Aeled a zo laouen, meulif ha bennigañ a reont an Aotroù.

Kant. Du (P. 6)

S. 149 Ant.: Benniget oc'h gant an Aotroù, c'hwi eo a ro dimp frouezhenn ar vuhez.

Komz Doue Iz 61, 10

Tridal a ran a levnez en Aotroù, va ene a drid en Doue. Rak va gwisket en deus

gant dilhad ar silvidigezh, va goloet en deus gant mantell ar justis evel ur wreg nevez fichet gant he bragerizoù.

V/- Selaouit va mero'h, stouit ho skouarn, ar Roue en deus c'hoant eus ho kened.

V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Piv eo an hini a sav d'an neñvoù evel gouloù-deiz? Skedif a ra evel ur steredenn ha splannañ 'ra 'vel an heol.

Breudeur, pedomp hor Salver... (P. 223)

Kempedenn (P. 273)

OFIS KRISTEIZ

S. 119 - 120 - 121 : Savet eo bet Mari d'an neñv; an Aeled a zo laouen, meulif ha bennigañ a reont an Aotroù.

Komz Doue 2 Kor 5, 1

Ma c'hoarvez d'hor c'homadur douarel, d'an

deltenn-mañ bezañ distrujet, e resevomp ur c'homadur all digant Doue, un ti n'eo ket diwar dorn an den, unan peurbadel en neñvoù.

V/- Savet eo bet ar Werc'hez santel

R/- A-us d'an Aeled, e Rouantelezh an neñvoù.

OFIS AN ABARDAEZ

Meulgan

Leun a c'hras... (P. 223).

S. 109 Ant.: Savet eo bet Mari d'an neñv; an Aeled a zo laouen, meulif ha bennigañ a reont an Aotroù.

S. 126 - : Benniget oc'h gant an Aotroù, c'hwi eo a ro dimp frouezhenn ar vuhez.

Kant. Ef 1, 3-10 (P. 11)

Komz Doue

Evel ma varv an holl en Adam, evel-se

ivez eo ar C'hrist oc'h adkavo an holl ar vuhez, met pep hini en e renk: e penn an holl, ar C'hrist evel kentañ, war e lerc'h ar re a vo d'ar C'hrist da zeiz e Emziskle-riadur.

En ho splannder, en ho kened, trec'hit ha renit, Gwerc'hez Vari.

V/- Selaouit, va mero'h, stouit ho skouarn, ar Roue a c'hoanta ho kened.

R/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Hiziv eo savet d'an neñv ar Werc'hez Vari. Bezit laouen: gant ar C'hrist e ren da virviken.

Dre hanterouriezh ar Werc'hez Vari... (P. 273)

Kempedenn (P. 273)

16 Eost S. STEFAN
roue Hungria

Kempedenn Doue hollc'halloudek, roit, ni ho ped, d'hoc'h Iliz a zo bet kresket gant labour sant Stefan pa oa roue war an douar, ar c'hras d'e gaout bremañ evel difenner p'emañ e gloar an neñvoù. Dre Jezuz Krist...

19 Eost S. YANN EUDES
beleg

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus dibabet en un doare burzhudus ho peleg sant Yann da embann pinvigezhioù dreist-muzul kalon Jezuz, roit dimp ar c'hras, gant sikour e skouerioù hag e bedennoù, da greskifi en hoc'h anaoudegezh ha da vevañ gant feiz hervez sklerijenn an Aviel. Dre J. K...

20 Eost S. BERNEZ
abad, doktor

Kempedenn Aotrou Doue, an abad sant Bernez entanet gant argred evit ho Ti, hoc'h eus graet dezhañ lugernifi en hoc'h Iliz, roit dimp ar c'hras, gant sikour e bedennoù, da gaout ur spered birvidik evel e hini, ma c'hallimp bale bepred evel bugale ar sklerijenn. Dre Jezuz Krist...

21 Eost S. PIUS X
pab

Kempedenn Aotrou Doue, evit diwall ar feiz katolik ha diazezañ pep tra en Aotrou Krist, hoc'h eus leuniet ar pabsant Pius X gant furnez an neñv ha nersh-kalon an ebestel, plijet ganeoc'h, en ho madelezh, ober dimp heuliañ e gentelioù hag e skouerioù evit ma c'hallimp gonit ar gopr peurbadel. Dre J.K.

22 Eost S. MARI, ROUANEZ

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus diazezet Mamm ho Mab karet, ar Werc'hez glorius Vari, evel hor Mamm hag hor Rouanez, roit dimp ar c'hras, gant sikour he fedennoù, da gaout un deiz e Rouantelezh an neñvoù, ar c'hloar miret d'ho pugale. Dre Jezuz Krist...

23 Eost S. ROZENN A LIMA
gwerc'hez

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus graet da santez Rozenn entanet gant ho karantez, kuitaat ar bed evit plidifi ganeoc'h-c'hwi hepken en ur vuhez a binijenn galet, roit dimp ar c'hras, gant he sikour, da zarempredifi hentoù ar vuhez evit kaout lod da viken e mor ho tudioù en neñvoù. Dre Jezuz Krist..

24 Eost S. BERTELE
abostol

Ofis ar Ebestel (P. 225) nemet:

Kempedenn Kreñvait enomp, Aotrou Doue, ar feiz a reas d'an abostol sant Bertele en em stagañ ouzh ho Mab gant ur galon leal, ha roit dimp ar c'hras, gant sikour e bedennoù, ma vo hoc'h Iliz evit an holl bobloù sakramant ar silvidigezh. Dre Jezuz Krist...

Lennadenn 1 Kor 1,18 - 2,5

25 Eost S. LOEIZ
roue

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus graet da sant Loëiz tremen eus a soursi e rouantelezh war an douar da c'hloar an neñvoù, roit dimp ar c'hras, gant sikour e bedennoù, da glask ho Rouantelezh dre ar c'hargoù hon eus da ober er bed-mañ. Dre Jezuz Krist...

S. JOZEF KALAZAÑS
beleg

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus roet d'ho pelegsantel Jozef Kalazañs gras ur garantez hag ur basianted ken bras m'en em ouestlas hep paouez da gelenn ar vugale ha d'o stummañ d'an holl vertuzioù, grit, ni ho ped, ma heuilhimp bepred skouerioù an hini a enoromp evel mestr war ar furnez ha kenlabourer ar wirionez. Dre Jezuz Krist...

27 Eost S. MONIKA

Kempedenn Aotrou Doue, frealzer an dud c'hilac'haret, c'hwi hag a zegemeras gant madelezh daerou santez Monika evit distro he mab Eosten, roit dimp ar c'hras, gant sikour an eil hag egile, ar vamm hag ar mab, da ouelañ d'hor pec'hedoù ha da gaout ar pardon digant ho trugarez. Dre Jezuz Krist...

28 Eost S. EOSTEN
eskob, doktor

Kempedenn Nevesait, ni ho ped, Aotrou Doue, en hoc'h Iliz, ar spered ho poa skuilhet war an eskob sant Eosten, ma vimp leuniet anezhañ ni ivez, evit kaout sec'hed ac'hanoc'h-c'hwi, ar vammenn nemeti a furnez, hag ho klask c'hwi, krouer ar garantez santel. Dre Jezuz Krist...

29 Eost S. YANN-VADEZOUR
DIBENNET

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag a zo bet fellet deoc'h e vefe sant Yann-Vadezour diarsoger ho Mab o tonet er bed hag o vervel, selaout hor pedenn: evel ma kouezhas merzher ha test ar wirionez hag ar justis, grit dimp-ni ivez stourm kalonek evit difenn ar gwirionezhioù hoc'h eus diskleriet dimp. Dre Jezuz Krist...

††

3 Gwengolo S. GREGOR VEUR
pab, doktor

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi a daol evezh gant madelezh ouzh ar bobl a zo deoc'h, hag a ren wamo gant karantez, roit, dre bedennoù ar pab sant Gregor, ar spered a fumez d'ar re hoc'h eus karget da gelenn ar re all en Iliz, evit ma vo ar wellaenn deuet en o deñved, ur vammenn a joaioù peurbadus evit o fastored. Dre Jezuz Krist...

8 Gwengolo GINIVELEZH
AR WERC'HEZ VARI

Ofis ar Werc'hez Vari (P. 222) nemet:

Ant.: (Beure ha noz)

- 1 - Hiziv emañ ginivelezh ar Werc'hez glorius Vari, merc'h Abraham, dre veuriad Juda, eus lignez ubel David.
- 2 - Hiziv emañ ginivelezh ar Werc'hez glorius Vari; he buhez santel-meurbet a ra gloar an holl Ilizoù.
- 3 - Lidomp er joa ginivelezh ar Werc'hez glorius Vari; evit ma pedo evidomp e-kichen hon Aotrou Jezuz Krist.

Komz Doue (Beure) Iz 11,1-3 Eus kef Yese e teuo ur skourrnevez, ur gorzenn nevez a zeuio eus e wri-ziou. Spered an Aotrou a ziskuiizo war ar Mesiaz: Spered a furnez hag a skiant, Spered a guzul hag a nerzh, Spered a ouiziegezh hag a zeolizezh hag e leunio eus doujañs Doue.

(Kreisteiz) Disk 21,3 Setu telenn Doue e-touez an dud; ha kampañ a raio en o zouez, hag int a vo e bobl, hag eñ Doue e-unan a vo ganto.

(Noz) Rm 9,4-5 Int-i an Israeliz, a zo bet roet dezho an advabelezh, ar c'hloar, an emglevioù, al lezenn, al liderezh, ar promesaoù, dezho ivez an Uheldadoù, a zo deuet diouto evit ar pezh a sell e gorf, ar C'hrist, eñ hag a zo a-us da bep tra, Doue benniget da virviken. Amen.

Kant. Zak. & ar W.: Lidomp en deiz-mañ Ginivelezh Mari, Mamm Doue, bepred Werc'hez, ma 'z eo deuet drezi Roue ar rouaned en hon touez, alleluia.

Lennadenn Si 24,2-16.22-31

Kempedenn Plijet ganec'h, Aotrou Doue, digeriñ teñzor ho kras d'ho servijerion, ha peogwir ez eo bet gwilioud ar Werc'hez Vari ar penn-kentañ eus ar silvidigezh, ra gresko ar peoc'h gant gouel he Ginivelezh. Dre Jezuz Krist...

13 Gwengolo S. YANN CRIZOSTOM eskob doktor

Kempedenn Aotrou Doue, nerzh ar re a esper ennoc'h, c'hwi hag a zo bet fellet deoc'h lakaat an eskob sant Yann Crizostom da skedif dre e brezegennoù helavar-meurbet hag an trubuilhoù gouzañvet gantañ, roit dimp ar c'hras, ni ho ped, da dennañ hor mad eus e gentelioù gouiziezh ha da vevañ kennerzh gant skouer e basianted didreoc'hus. Dre Jezuz Krist...

14 Gwengolo GOUEL AR GROAZ SAVET

DERC'HEMENT

S. 146 - 147 - Kant. Fil 2,6-11 (P. 28) gant Ant. an deiz d'abardaez.

OPIS AL LENHADENNNOU

Meulgan 1 - Dre ar Groaz he deus graet mervel Mab an Tad, Skourr benniget m'eo deuet dioutañ ar blokad, Jezuz, ho pennigañ 'reomp.
Dre ar Groaz a laka an tan war an douar, Bodenn wrezus a ziskouez ar Garantez, Jezuz, ho kanneuliñ 'reomp.
Dre ar Groaz a voe plantet war ar C'halvar Skoultrig bev hag a bare a bep pec'hed, Doue trec'her hoc'h Iliz ho kanneul.

Gouel ar Groaz savet

- 2 - Dre ar gwad a verkas koad an dorjoù 'Vit hon diwall en noz ma tremene Doue, Jezuz, ho pennigañ 'reomp.
Dre ar gwad hon salvas en hon ermaeziadeg P'en em serre an dourioù war an ifern, Jezuz, ho kanneuliñ 'reomp.
Dre ar gwad a ro ar vuhez d'ar sevoù marv En ur zistrugañ binim ar frouezhenn fall, Doue trec'her, hoc'h Iliz ho kanneul.

S. 2 Ant.: Hor saveteit, o Krist, hor Salver, dre vertuz ho Kroaz. C'hwi hag hoc'h eus salvet Pêr e-kreiz an tonnoù, ho pet truez ouzhimp.
S. 8 - : Evidomp-ni e tleomp kemer gloar e Kroaz hon Aotrou Jezuz Krist.
S. 49 - : Dre sin ar Groaz hon dieubit diouzh hon holl enebourion, o Doue.

V/- Ni hoc'h ador, o Krist, hag ho pennigomp.
R/- Dasprenet hoc'h eus ar bed gant ho Kroaz.

Lennadenn Ga 2,19 - 3,7.13-14

R/- Evidon, biken ne gemerin gloar nemet e Kroaz hon Aotrou Jezuz Krist. Ennañ emañ hor silvidigezh, hor buhez hag hon adsav d'ar vuhez; + Salvat ha dieubet ez omp.
V/- Aotrou, azeuliñ a reomp ho Kroaz ha lidañ 'reomp ho Pasion c'hlorius. + Salvat...

Te Deum

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag a zo bet fellet deoc'h e varvfe ho Mab unganet war ar Groaz evit salviñ an holl dud, grit, ni ho ped, pa 'z anavezomp mister hor silvidigezh war an douar, ma veritimp kaout ar frouezh anezhi er baradoz. Dre Jezuz Krist...

OPIS AR BEURE

S. 94 R/- Ar C'hrist Roue, savet evidomp war ar Groaz, deuit, azeulomp anezhañ.

Meulgan

- 1 - Dre varv ar c'hentañ-ganet war ar greo'hienn O tougen ar c'hoad ha tan ar paou, Jezuz, ho pennigañ 'reomp.
Dre varv ar Pastor-mat e-kreiz ar spermenn, Oan Pask m'eo dezhañ e galon trebarzhet, Jezuz, ho kanneuliñ 'reomp.
Dre varv ar muiañ-karet a-drek e winienn, Evit kemmañ ar muntre en heritour, Doue trec'her, hoc'h Iliz ho kanneul.
- 2 - Dre ar c'hoad en deus kanet ar ganenn-oured D'an Doue bev o timezif gant Mab-den, Jezuz, ho pennigañ 'reomp.
Dre ar c'hoad a ra sevel e-kreiz e nerzh, Mab an Den a sach davetañ an hollved, Jezuz, ho kanneuliñ 'reomp.
Dre ar c'hoad m'eo sevenet warnañ belegiezh Ar beleg-bras aberzhet 'vit ar pec'hed, Doue trec'her, hoc'h Iliz ho kanneul.

S. 62 Ant.: Hor saveteit, o Krist, hor Salver, dre vertuz ar Groaz. C'hwi hag hoc'h eus salvet Pêr e-kreiz an tonnoù, ho pet truez ouzhimp.

Kant. Di (P. 6): Evidomp e tleomp kemer gloar e Kroaz hon Aotrou Jezuz Krist.

S. 149 Ant.: Dre sin ar Groaz, hon dieubid diouz hon holl enebourion.

Komz Doue He 2,9-10 Jezuz eo an hini a welomp bremañ, dre m'en deus gouzañvet ar marv, kurunet a c'hloar hag a enor, en doare ma talv, dre c'hras Doue, evit pep den, ar marv-se bet taffvaet gantañ. Rak Doue, hag a zo pep tra evit-tañ ha drezañ, pa felle dezhañ bleniañ d'ar c'hloar e-leizh a vibi-on, e oa dereat dezhañ lakaat da vezañ parfet dre c'houzañv poanioù, ar penn-rener a dlee o degas d'eo silvidigezh.

Mi hoc'h ador, o Krist, hag ho pennigomp.
V/- Dasprenet hoc'h eus ar bed gant ho Kroaz, hag ho pennigomp.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Doue santel, Doue kreñv, Doue divarvel, ho pet truez ouzhimp.

Mab Doue, dre skeudenn ar sarpant-arem hoc'h eus yac'haet pobl Israel, dre ho Kroaz, en deiz-mañ, hor mirit diouz gloazadur ar pec'hed.

R/- Dre ho Kroaz hoc'h eus dasprenet ar bed.

- Mab an Den, bet savet war ar Groaz evel ar sarpant savet gant Moizez er gouelec'h, dre ho Kroaz hor savit betek joaioù ho Rouantelezh. R/
- Mab unganet an Tad, roet d'ar bed evit ned-aio ket da goll hini obet eus ar re a gred ennoc'h, dre ho Kroaz, roit ar vuhez peurbadel d'ar re a glask ho tremm. R/
- Mab karet an Tad, kaser er bed nann evit e varn met evite salviñ, dre ho Kroaz, roit ar feiz d'hon tud-kar evit n'aint ket da goll. R/
- Mab peurbadel an Tad, deuet da zegas an tan war an douar, c'hwi hag ez eus bet fellet deoc'h enacuif, dre ho Kroaz, grit dimp sevenif ar wirionez ha dont d'ar sklerijenn. R/

Kempedenn (P. 279)

OFIS KREISTELZ

(Meulgan, Ant. & S. an deiz)

Komz Doue 1 Kor 1,23-24 Ni avat a brezeg ur C'hrist bet staget ouzh ar Groaz, droukskoilh evit ar Yuzevion, follented evit ar Jentiled, met evit ar re c'halvet, Yuzevion pe C'hresianed, ez eo ar C'hrist galloud ha furnez eus Doue.

V/- Ni hoc'h ador, o Krist, hag ho pennigomp.
R/- Dasprenet hoc'h eus ar bed gant ho Kroaz.

OFIS AN ABARDAEZ

- Meulgan
- 1 - Dre ar Groaz he deus graet mervel Mab an Tad, Skourr benniget m'eo deuet dioutañ ar blokad Jezuz, ho pennigañ 'reomp.
Dre ar Groaz a laka an tan war an douar, Bodenn wrezus a ziskouez ar Garantez, Jezuz, ho kanmeulif 'reomp.
Dre ar Groaz a voe plantet war ar C'halvar, Skoultrig bev hag a bare a bep pec'hed, Doue trec'her, hoc'h Iliz ho kanmeul.
 - 2 - Gwezenn sakr stok ouzh an neñv a-dal an douar 'Vit ma vo uhel-vrudet Doue Yakob Jezuz, ho pennigañ 'reomp.

Lestr-meur a ziframm ac'hanomp diouz ar gonnar Hag hor salv eus al liñvadeg gant Noe, Jezuz, ho kanmeulif 'reomp.
Koad tener hag a zistan an dourioù c'hwerv, Hag a ra strinkañ ar feunteun eus ar Roc'h, Doue trec'her, hoc'h Iliz ho kanmeul.

S. 109 Ant.: Hor saveteit, o Krist, hor Salver, dre vertuz ar Groaz. C'hwi hag hoc'h eus salvet Pêr e-kreiz an tonnoù, ho pet truez ouzhimp.

S. 113B - : Evidomp-nie tleomp kemer gloare Kroaz hon Aotrou Jezuz Krist.
Kant. Fil 2,6-11 (P. 28): Dre sin ar Groaz, hon dieubid diouz hon holl enebourion, o Doue.

Komz Doue 1 P 1,18-19 Gouvezit n'eo ket gant danvezioù kollidik, arc'hant pe sour, ez oc'h bet dieubet eus ar vuhez diskiant ho poa bet da herezh digant ho tadoù, met dasprenet oc'h bet gant ur gwad priuz, hini un oan dibec'h ha dinann, ar C'hrist.

Mi hoc'h ador, o Krist, hag ho pennigomp.
V/- Dasprenet hoc'h eus ar bed gant ho Kroaz, hag ho pennigomp.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Doue santel, Doue kreñv, Doue divarvel, ho pet truez ouzhimp.

O Krist, en em laket da netra o wiskañ renk ar sklavour hag o tonet da vezañ heñvel ouzh an dud, grit d'hoc'h Iliz sevenif izelegezh Mari, ho servijerez.

R/- Dre ho Kroaz, grit dimp sevel betek ho Rouantelezh.

- O Krist, en em izelaet dre 'n em ober sentus betek ar marv, hag ar marv war ar Groaz, roit d'ho servijerion sentidigezh ha pasianted. R/
- O Krist, uhel-savet gant Doue ha degemeret ganeoc'h an anv a zo dreist da bep anv, roit d'ho fideled ar c'hras da gendrec'hel betek ar fin. R/
- O Krist, ma pleg pep glin en hoc'h anv en neñv ha war an douar hag e bro an Ankoù, skuilhñ ho karantez e kalon an dud evit m'hoc'h azeulint er peoc'h. R/
- O Krist, a vo anzavet gant kement teod evel an Aotrou e gloar Doue an Tad, degemerit hor breudeur tremenet e Rouantelezh an azeulerezh peurbadel. R/

Kempedenn (P. 279)

15 Gwengolo ITRON VARIA AR 7 GLAC' HAR

Kempedenn
Aotrou Doue, e-kichen ho Mab stag ouzh ar Groaz ez eus bet fellet deoc'h e vefe e Vamm o kemer perzh en e boanioù, roit d'hoc'h Iliz deuet da vezañ lodek e Pasion an Aotrou Krist, ar c'hras da gaout perzh ivez en e adsav d'ar vuhez. En a ren...

16 Gwengolo S. KORNELI & S. KIPRIAN
pab eskob
m e r z h e r i o n

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus roet d'ho pobl pastored gredus ha merzherion didrec'hus e sant Korneli ha sant Kiprian, kreñvait, ni ho ped, dre o fedennoù, hon nerzh-kalon hag hor feiz, ha grit dimp labourat gant aked evit unaniez an Iliz. Dre Jezuz Krist...

17 Gwengolo S. ROPARZH BELLARMIN
eskob, doktor

Kempedenn Aotrou Doue, evit difenn feiz hoc'h Iliz ho poa roet
grasoù kaer a ouiziegezh hag a vertuz d'an eskob sant
Roparz Bellarmin, grit eta, gant sikour e bedennoù, ma viro
ho pobl ar feiz-se bepred divoulc'h. Dre Jezuz Krist...

19 Gwengolo S. GENVER
eskob, merzher

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag a ro dimp ar c'hras da enorifi
an evor eus ar merzher sant Genver, grit m'hor bo al
levenez da vezafi en e gompagnunezh en eürusted peurbadel. Dre
Jezuz Krist...

21 Gwengolo S. VAZHEV
abostol, avieler

Ofis an Ebestel (P. 225) nemet:

Kempedenn En ho madelezh divent, Aotrou Jezuz, hoc'h eus dibabet
ar publikan Mazhev evit ober gantañ un abostol; roit
dimp ar c'hras da vezafi harpet gant e skour hag e bedennoù,
ma c'hellimp mont d'hoc'h heul hag en em stagañ start ouzhoc'h.
C'hwi a ren...

Lennadenn Ef 4,3-16

26 Gwengolo S. KOSMA & S. DAMIAN
merzherion

Kempedenn Aotrou Doue, ra zegaso enor deoc'h ha meuloudi gowel
evurus sant Kosma ha sant Damian, o vezafi m'hoc'h eus
dre un taol kaer eus ho Providañs roet dezho gloar beurbadel
ha pourchaset sikour dimp-ni. Dre Jezuz Krist...

27 Gwengolo S. VISANT A BAOL
beleg

Kempedenn Aotrou Doue, evit silvidigezh ar beorion hag evit kelenn
an dud-a-iliz, hoc'h eus karget ho peleg sant Visant
gant vertuzioù un abostol, roit dimp ar c'hras da vezafi enta-
net gant ar memes spered evit karout ar pezh en deus karet
e-unan, hag ober ar pezh en deus kelennet. Dre Jezuz Krist...

28 Gwengolo S. WENSESLAZ
merzher

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus desket d'ar merzher
sant Wenseslaz dilezel e rouantelezh eus an douar evit
dibab hini ar baradoz, roit dimp ar c'hras, gant sikour e
bedennoù, d'en em zilezel hon-unan evit en em stagañ ouzhoc'h
a-greiz-kalon. Dre Jezuz Krist...

29 Gwengolo S. MIKAEL, S. RAFAEL,
S. GABRIEL

OFIS AL LENNADENNOU
=====

Meulgan (P. 4-5)

S. 96 Ant.: Tra ma stoume Mikael ouzh an aerouant e voe klevet mouezh
ar re a lavare: Salud d'hon Doue, alleluia!

S. 102 - I: An Ael Gabriel a voe kaset da gaout ar Werc'hez Vari, gues-
tlet en dimezi da Jozef.

S. Mikael, S. Rafael, S. Gabriel

- II: Benniget Doue an neñv, rentit gloar dezhañ, graet en deus
deoc'h trugarez.

V/- Benniget an Aotrou, c'hwi holl e Aeled.
R/- Harozed galloudus, kannaded e Gomz.

Lennadenn Disk 12,1-17

Te Deum

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag a oar renkañ en un doare burzhu-
dus karg ha labour an Aeled hag an dud; roit dimp ar
c'hras, ni ho ped, ma vo diwallet hor buhez war an douar gant
ar re a zo bepred ouzh ho servijañ en neñvoù. Dre Jezuz Krist...

OFIS AR BEURE
=====

S. 94 R/- Bezomp laouen dirak Doue, hor Salver.

Meulgan O Tad ar c'hantvedoù bedel... (P. 205) Pe:

- 1 - Krist, o sklerijenn Aeled santel an neñv,
Dasprenar nerzhus, salver gouenn an dud,
Roit d'hor spered sevel a-dal bremañ
Betek ho palez.
- 2 - Kasit dimp Mikael, arc'hael trec'hus ar peoc'h,
Da zivall amañ red hor buhez marvel,
Da bellaat diouzhip an droug hag ar brezel
Ha pep eñbour.
- 3 - Gabriel da zont, azeuler galloudek,
Evit hon harpañ en hor sakrifikoù,
Hag eñ da buraat pedenn hor c'halonoù
M'ho lidimp ervat.
- 4 - En hor c'hlevedoù a gorf hag a spered
Ra vo Rafael frealz dimp ha pare
A-berzh ho truez, hon ambrouger nerzhus
Dre riskloù ar bed.
- 5 - Treinded evurus, teurvezit en reifi dimp,
En ho madelezh, Tad, Mab ha Spered Glan,
Ha kanimp bepred gant Aeled an neñvoù
Meuloudi d'ho kloar. Amen.

S. 62 Ant.: Tra ma stoume Mikael ouzh an aerouant, e voe klevet mouezh
ar re a lavare: Salud d'hon Doue, alleluia!

Kant. Dn (P. 6): An Ael Gabriel a voe kaset d'ar Werc'hez Vari gouestlet
en dimezi da Jozef.

S. 149 Ant.: Benniget Doue an neñv, roit gloar dezhañ; graet en deus
trugarez ouzhoc'h.

Komz Doue Dn 9,21-22

Gabriel, an hini am boa dija gwelet en
ur welidigezh, a nijas betek annon war-
dro koulz profadenn an abardaez. Ha e teuas da gomz ganin en ur la-
varout: Daniel, deust on bremañ da sklerijennañ da skiant.

Ho kanañ a ran, Aotrou, gant an Aeled.

V/- Ho trugarekaat a ran, Aotrou, gant an Aeled.

V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: Ho kanañ a ran, Aotrou, gant an Aeled, stouñ a ran dirazoc'h.

Pedomp ... (An deiz)

Kempedenn (P. 283)

OPIS KREISTEIZ

(Meulgan, S. & Ant. an deiz)

Komz Doue Tb 12,6

An arc'hael Rafael a lavar: Bennigit Doue, kanneulit anezhañ dirak an holl dud vev, evit ar mad en deus graet deoc'h.

OPIS AN ABARDAEZ

Meulgan

Joe ha sklaerder... (P. 11)

S. 109 Ant.: Tra ma stourme Mikael ouzh an aerouant, e voe klevet mouezh ar re a lavare: Salud d'hon Doue, alleluia!

S. 137 - : An Ael Gabriel a voe kaset da gaout ar Merc'hez Vari gouestlet en dimezi da Josef.

Kant. Kol 1,12-20 (P. 18): Bennigit Doue an neñv, roit gloar dezhañ: graet en deus trugarez ouzhoc'h.

Komz Doue Disk 12,7-8

Hag e c'hoarvezas un emgann en neñv: Mikael hag e Aeled o stourm ouzh an aerouant. An aerouant a stourme ivez a-gevret gant e aeled, nemt ne voent ket evit trec'hiñ ha ne voe ken kavet evito plas ebet en neñv.

Ha kanañ... h. a.... (Evel en ofis ar beure)

30 Gwengolo S. JEROM beleg, doktor

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus roet d'ho pelegsant Jerom ur garantez tener ha bev evit ar Skritur-Sakr, grit ma vo maget ho pobl gant ho komz gant maoc'h a lar-gentez evit ma kavo enni mammenn ar vuhez. Dre Jezuz Krist...



1 Here S. TEREZA AR MABIG JEZUZ gwerc'hez

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag a ro ho Rouantelezh d'ar revihan ha d'an dud izel a galon, grit dimp dispenn, gant fiañs, roudoù santez Tereza, ma vo diskuilhet dimp, gant sikour he fedennoù, ho kload beurbadel. Dre Jezuz Krist...

2 Here AN AELED MAT

Komz Doue (Beure) Iz 62,6-7

War da ramparzhioù, Jeruzalem, e lakan gedourion. A-hed an deiz, a-hed an noz, ne dleont morse tevel. C'hwi a gav soñj eus an Aotrou, tamm peoc'h ebet evidoc'h! Na lezit gantañ tamm ehan ebet, ken en devo stabi-liet, diazezet Jeruzalem evel meuleudi war an douar.

(Noz) Disk 8,3-4 Hag un Ael all a zeuas d'en em lakaat en e sav e-kichen an aoter, en ur zero'hel

ur baliked aour; ha roet e voe dezhañ froudoù e-leizh a zo pedennoù

an holl Sent, evit o c'hinnig war an aoter aour a zo dirak an tron. Hag e savas moged ar froudoù gant pedennoù ar Sent, eus dorn an Ael dirak Doue.

Kempedenn

Aotrou Doue, dre ur soursi dispar eus ho Providoù e prizit degas hoc'h Aeled sanfel d'hon diwall; roit eta d'ar re a zo ouzh ho pedif kalonek ar c'hras da gaout un deiz al levenez da vezañ en o c'hompagnuezh. Dre Jezuz Krist...

4 Here S. FRANSEZ ASIZI

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus roet da sant Fransez ar c'hras da vezañ heñvel ouzh an Aotrou Krist dre e baourentez hag e izelder a galon, grit dimp bale war e roudoù evit heulian ho Mab Jezuz ha bezañ unanet ganeoc'h dre ur garantez leun a levenez. Dre Jezuz Krist...

6 Here S. BRUND beleg

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus galvet sant Bruno d'ho servijañ en ul lec'h distro, roit dimp ar c'hras, gant sikour e bedennoù, da bleal bepred ganeoc'h e-kreiz kemmaadennoù ar bed-mañ. Dre Jezuz Krist...

7 Here ITRON VARTA AR ROZERA

Kempedenn

Plijet ganeoc'h. Aotrou Doue, skuilh ho kras en hor c'halon, ha peogvir hon eus anavezet dre salud an Ael mister ho Mab en em c'hruet den, renit ac'hanomp dre hent e Basion hag e Groaz betek gloar an adivs d'ar vuhez. Dre Jezuz Krist...

9 Here S. DENEZ & E GOMPAGNUNED eskob merzherion

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus kaset sant Denez hag e gompagnuned da brezeg an Aviel d'ar pobloù pagan, ha roet nerzh-kalon dezho evit chom divrall en o merzherenti, roit dimp, ni ho pad, ar c'hras da gemer skouer warno evit oberfae war eurved ar bed-mañ ha chom dispart e-kreiz an degouezhioù kontrol a gaver ennañ. Dre Jezuz Krist...

S. YANN LEONARDI beleg

Aotrou Doue, mammenn an holl vadoù, dre ho peleg sant Yann Leonardi, hoc'h eus graet embann an Aviel d'an holl bobloù, grit eta, gant sikour e bedennoù, ma 'z aio ar gwir feiz war gresk e pep lec'h hag e pep amzer. Dre Jezuz K...

14 Here S. KALLIST pab, merzher

Kempedenn

Selaouit gant madelezh, ni ho pad, Aotrou Doue, goulennoù ho pobl, evit ma vimp sikouret gant dellidoù ar pab sant Kallist a lidomp en deiz-mañ e verzherenti. Dre Jezuz Krist...

15 Here S. TEREZA AVILA gwerc'hez

Kempedenn

Aotrou Doue, dre labour ar Spered Glan hoc'h eus lakaet

santez Tereza da sevel evit ma tiskouazfe en hoc'h Iliz an hent da dizhout ar beurvadelezh, roit dimp ar c'hras da gaout bepred magadur en he c'hentelioù, ha da vezañ entanet gant ar c'hoant d'ar gwir santelezh. Dre Jezuz Krist...

16 Here S. HEDWIJA leanez

Kempedenn Grit, ni ho ped, Doue hollc'halloudek, ma talvezo pedennoù santez Hedwija da c'honit dimp sikour an neñv, hi hag a ro d'an holl gant he buhez kaer ar skouer a izelded a galon. Dre Jezuz Krist...

S. MARC'HARID-MARI gwerc'hez

Skuilhit warnomp, ni ho ped, Aotroù Doue, ar spered ho poa roet da santez Marc'harid-Mari da binvidikaat hec'h ene en un doare dispar, ma c'hellimp anaout karantez an Aotroù Krist hag a zo dreist pep skiant, ha bezañ leuniet gant holl leunder ho puhez. Dre Jezuz Krist...

17 Here S. IGNAS A ANTIOKIA eskot, merzher

Kempedenn Doue hollc'halloudek ha peurbadel, gant testeni mersherion santel e kaerait korf sakr hoc'h Iliz, plijet ganeoc'h reiñ dimp hor gouenn: evel ma rons an deiz glorius-mañ eus e verzhherenti enor peurbadus da sant Ignas, grit ivez ma pourchaso dimp sikour ha difenn hep ehan. Dre Jezuz Krist...

18 Here S. LUKAZ avielour

(Ofis an Ebestel) (P. 225) nemet:

Kempedenn Aotroù Doue, c'hwi hag hoc'h eus dibabet sant Lukas evit diskuilh dre e brezegennoù hag e skridoù mister ho karantez -keniver ur beorion, grit d'ar re o deus an enor da zougen hoc'h anv kenderc'hel da vezañ unanet a galon hag a ene, ha grit ivez d'an holl bobloù gwelout ho silvidigezh. Dre Jezuz Krist...

Lennadenn Ef 4,3-16

19 Here S. YANN BREEEUF, IZAAG JOGUES HAG O C'HOMPAGNUNED

Kempedenn Aotroù Doue, gant prezegennoù ha gwad sant Yann hag e gompagnuned hoc'h eus kensakret frouezh-kentañ ar feiz en Amerika an Hanternoz, grit eta, en ho madelezh, gant sikour o fedemnoù, ma kresko mui-ouzh-mui e pep lec'h un eostad-fonnus a gristenion. Dre Jezuz Krist...

S. PAOL AR GROAZ beleg

Roit dimp ho kras, ni ho ped, Aotroù Doue, dre bedennoù sant Paol hag a garas ar Groaz gant ur garantez dispar, evit ma vimp broudet gant muioc'h a nerzh dre e skouer da zegemer hor c'hroaz gant kalon. Dre Jezuz Krist...

Du

23 Here S. YANN GAPISTRAN beleg

Kempedenn Aotroù Doue, evit konfortiñ pobl an dud fidel en o ankenioù, hoc'h eus lakaet da sevel sant Yann Gapistran, grit, ni ho ped, ma vimp bepred e surentez dindan ho skoazell ha mirit hoc'h Iliz en ur peoc'h padus. Dre Jezuz K...

24 Here S. ANTON-MARI KLARET eskob

Kempedenn Aotroù Doue, c'hwi hag hoc'h eus roet da sant Anton-Mari ur garantez hag un nerzh-kalon burzhudus evit kaleun d'an dud glanded an Aviel, roit dimp ar c'hras, gant sikour e bedennoù, da glask ar pezh a zo just ha matevit gant hor breudeur da Jezuz Krist. Ef a ren...

28 Here S. SIMON & S. JUD ebestel

(Ofis an Ebestel) (P. 225) nemet:

Kempedenn Aotroù Doue, c'hwi hag hoc'h eus graet dimp anavezout hoc'h anv dre labour an ebestel, grit, en ho madelezh, gant sikour pedemnoù sant Simon ha sant Jud, ma talc'ho hoc'h Iliz da vont war gresk dre ar gwellaemnoù er re a grad emoc'h. Dre Jezuz Krist...

Lennadenn Ob 5,12-33



1 Du GOUEL AN HOLLSENT DERC'HEMENT

Meulgan Hag e welis... (P. 219)

S. 112 Ant.: Meulit ho Toue, servijerion an Aotroù, graet en deus ganeoc'h ur rouantelezh a veleion.

S. 116 - : Ho tasprenet en deus, tud a bep yezh, a bep meuriad, a bep pobl hag a bep broad.

Kant. Disk 19 (P. 8): Doue a ren, ra drido an douar, alleluia.

Komz Doue He 12,22-24 C'hwi avat hoc'h eus tastaet ouzh Menez Sion, ouzh Kêr an Doue bev, Jeruzalem an neñv, ouzh milmiliadoù an Aeled en o lidadeg, ouzh ilizied ar re gentañ-ganet enskrivet en neñvoù, ouzh Doue barnar an holl, ouzh speredoù an dud reizh deuet da vezañ peurvat, ouzh Jezuz, hanterour un Englev nevez, ouzh ar gwad en deus nerzh-glannat, a gomz splan-noc'h eget hini Abel.

Bezit laouen en Aotroù, tridit, c'hwi tud just.

V/- Tridit, c'hwi holl, tud eun a galon, tridit, c'hwi tud just.

V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar N.: An holl Sent, a-unvouezh, hoc'h anzav, Treinded santel, un Doue hepken.

Pedomp gant joa hon Doue a gurun e servijerion, ha lavaromp dezhañ:

R/- Hoc'h anv santel a vennigomp.

Gouelioù ar Sent Du
Gouel an Hollsent

- Doue fur-meurbet, laket hoc'h eus an ebestel evel diazeaz d'hoc'h Iliz, hor mirit fidel d'ar feiz o deus kelennet.
- R/- Hoc'h anv santel a vennigomp.
- Roet hoc'h eus d'ar verzhherion gras un testiñ divrall betek ar gwad skuilhet: ra vezo ar gristenion testoù fidel d'ho Mab. R/
- Lakot hoc'h eus ar gwerc'hezad santel da gemer skouer diwar ar C'hrist gwerc'h: roit d'an holl ar sklerijenn evit anzav talvoudegezh dreistpar ar werc'hded kensakret. R/
- Ho santelezh hag ho pezañs a ziskouezit en holl Sent: roit dimp ar c'hras d'en em santout tostoc'h deoc'h pa encromp anezho. R/
- Lakit an holl Anaon da chom gant ar Werc'hez Vari, an Aeled hag an holl Sent, ha grit dimp kaout perzh ganto er joa beurbadel. R/

Kempedenn

Doue hollc'halloudek ha peurbadel, c'hwi hag a ro dimp ar c'hras gant ar gouel-mañ da enoriñ war-un-dro meritoù hoc'h holl Sent: plijet ganeoc'h skuilh warnomp ho kras santel gant seul vuioch a largetez m'hon eus dirazoc'h evit ho pediñ, niverusoc'h alvokaded. Dre Jezuz Krist...

OFIS AL LEMNADENNOU

Meulgan Eñrus neb a ro hep kontañ Didalvoud korf kuit a spered
Betek e gorf dezhañ! Ha ludu er maro.
E frankiz a gav en Doue, Dre ho Kroaz e treuzvev ennomp
Un dremm a wel d'an holl. Aotrou, gloar hor c'horfoù.

'Vel ma treuzvev en eost ar greun,
En deiz ma tistroot,
Buhez na marv n'o deus ano
E ren ar garantez.

- S. 18 B Ant.: Chomit em c'harantez, mirit va gourc'hemennoù hag e vo peurvat ho joa.
 - S. 15 - : Joa peurvat ganeoc'h hag an evursted da virviken en ho kichen.
 - S. 44 - : Evurus ar re a zo kouviet da eured an Oan, alleluia.
- V/- Doue a vo sklerijenn beurbad ar re zibabet.
R/- Da viken e revint.

Lennadenn Disk 5, 1-14

R/- Ho trugarekaat a reomp, Aotrou hon Doue ha Nestr ar bed, c'hwi a zo hag a oa: + Dre m'hoc'h eus kemeret 'n ho tom ho kalloud bras evit ren da Roue; setu deuet ar c'houz da reif o gopr d'ho servijerion, ar Sent.

V/- Hoc'h holl oberoù d'ho trugarekaat hag ho fideled d'ho pennigañ. + Dre...

Te Deum

Kempedenn

OFIS AR BEURD

S. 94 R/- Azeulomp Roue ar rouaned, levezet an Hollsent.

Meulgan

- 1 - Jezuz, o Redemtor ar bed, Ha c'hwi, Gwerc'hez a drugarez,
Deut da sikour ho fideled: Pedit 'vidomp gant madelezh.

Gouelioù ar Sent Du
Gouel an Hollsent

- 2 - Miliadoù Aeled an neñvoù, C'hwi, strollad an Uheldadoù, Gant laz-kan an diogenion, Gouennit 'vidomp ar pardon.
- 3 - O diaraoger ar Fried, Abostoled ha diskibled, Douger alc'hwezioù an neñvoù, Torrit diouzhip hor chadernoù.
- 4 - Bagad ruz-tan ar verzhherion, Koñfessored ha beleion, Gwerc'hezad leun a burentez, Gwelc'hit diouzhip hor fallentez.
- 5 - Holl briñsed palez an neñvoù, A ren bremañ war al laezioù, Selaout mouezh hon daspedenn, O c'houleñn nerzh ha sklerijenn.
- 6 - D'an tri ferson eus an Dreinded, An Tad, ar Mab hag ar Spered, Meulgan ha gloar ha karantez, Digant an dud hag an Aeled. Amen.

S. 62 Ant.: Evurus an neb a genero e brad e Rouantelezh Doue.
Kant. Du (P. 6): Bennigit an Aotrou, c'hwi e re zibabet, roit dezhañ gloar hag enor.

S. 149 Ant.: Dirak an tron e welis un engroez diniver a dud: youc'hal a raent a vouezh uhel, alleluia.

Komz Doue Ef 1, 17-18 Plijet gant Doue hon Aotrou Jezuz Krist, Tad ar c'Hoar, reif deoc'h gras ar furnez, ma 'n em ziskulio deoc'h ha ma teufot d'e anavezout da vat. Plijet gantañ sklerijennañ daublagad ho spered, ma ouezfot pebezh esperañs hoc'h eus en e c'halv, pegen kaer eo pinvidigezh ar c'hoar ho po da herezh e-touez ar Sent.

Dezit laouen en Aotrou, tridit, c'hwi, tud just.
V/- Tridit, c'hwi holl, tud eum a galon, tridit c'hwi tud just.
V/- Klod d'an Tad...

Kant. Zak.: A-unvouezh, an holl Sent hoc'h anzav, Treinded santel, un Doue hepken.

Pedomp gant joa hon Doue hag a gurun e servijerion ha lavaromp dezhañ:

R/- Hoc'h anv santel a vennigomp.

- Doue, mammenn ar santelezh, ober a rit skedif er Sent burzhudoù divent ho kras: roit dimp ar c'hras da lidañ enno ho prasted. R/
- Doue peurbadel ha trugarezus, er Sent e tiskouezit dimp tud treuz-neuziet da vat hervez skouer ar C'hrist: grit ma tegasint ac'hanomp dre o fedennoù hag o skouerioù, da vezañ startoc'h-unanet ganeoc'h. R/
- Roue an neñv, dre ar re o deus heuliet gant lealded ar C'hrist e vroidit ac'hanomp da glask ar Gêr-da-zont: ra zeuint da gelemm dimp an hent pearsur evit he zizhout. R/
- Aotrou hon Doue, dre sakrifis an oferenn e lakit ac'hanomp da vezañ gwelloc'h-unanet gant annezidi an neñv: ra zeuint d'hor sikour da lidañ gant muioch a c'hred ar sakrifis a azulezezh a spered hag e gwirionez. R/

Kempedenn (P. 288)

OFIS KRISTEIZ

S. 122 - 123 - 124 Ant.: Kanneulit ho Tous, servijerion an Aotrou, graet en deus ganeoc'h ur rouantelezh a veleion.

Komz Doue 2 Kor 6, 16

Chom a rin en o zouez ha kerzhout a rin en o metoù, hag e vin o Doue, hag int a vo va fobl.

Gouelioù ar Sent Du
Gouel an Hollsent

V/- Doue a vo sklerijenn beurbad ar re zibabet.
R/- Da viken e vevint.

OFIS AN ABARDAEZ

Meulgan Hag e welis... (P. 219)

po:

- 1 - Ouzhimp, o Krist, ho pet truez,
P'hon eus ho Mamm da batronez
A c'houlenn diganeoc'h ho krad
Evidomp holl, o Salver mat.
- 2 - Ha c'hwi, Aeled evrus an neñv,
Rannet e nav armead kreñv,
Hon diwallit enep ar gwall,
Bremañ ivez evel gwechall.
- 3 - C'hwi, Ebestel ha Profedet,
Dirak hor barner, ni ho ped,
Goulenit dimp e drugarez
Evit pec'hedoù hor buhez.
- 4 - O Merzherion gwisket e raz,
Kofesored pur ha nerzhus,
Galvit da vro ar sklerijenn
Ho predeur en deñvalijenn.
- 5 - Strollad dinamm ar gwerc'hezad,
Menec'h sentus hag Ermited,
C'hwi holl antreet er gwir vro,
Aozit ul lec'h dimp en neñvoù.
- 6 - Aotrou, lakit holl dud ar bed
Da zont e bagad ho teñved,
Ne vo nemet ur Pastor ken
Da benrener ar Gristenien.

7 - D'an tri Person eus an Dreinded,
An Tad, ar Mab hag ar Spered,
Meulgan ha gloar ha karantez
Digant an dud hag an Aelez. Amen.

S. 109 Ant.: D'an trec'hour e rin dezhañ azezañ em c'hichen war e
dron, alleluia.

S. 115 - : Kenloded o deus kop an Aotrou hag ez int deuet da vezañ
e vignoned.

Kant. Ef 1,3-10 (P. 11)

Komz Doue 1 P 1,15-16 Evel ma 'z eo santel an Hini en deus ha
kalvet, c'hwi ivez klaskit bezañ santel
en holl zoareoù ho pùhez, hervez ma 'z eo skrivet: santel e veot,
dre ma 'z on-me santel.

Bezit laouen... h. a... (P. 287-8)

o'o

2 Du

GOUEL AN ANAON

Meulgan (P. 4 - 5)

OFIS AL LENNADENNOU

S. 22 Ant.: War bradeier leton glas Doue am lak da ziskuihzañ.

S. 24 - : Disoñjit dihentadurioù va yaouankiz, met ho pet soñj
ac'hanon en ho karantez.

S. 26 - : Me 'gred e welin madelezh an Aotrou war zouar ar re vev.

V/- Roit dezho, Aotrou, an diskuizh peurbadel.

R/- Ha sklerijenn ho tremm da skediñ warno.

Lennadenn 2 Kor 4,16 - 5.10

Kempedenn Selaouit gant madelezh hor pedennoù, Aotrou Doue: lakit
da greskiñ ennomp hor feiz en ho Mab savet a varv da
vev, ma vo kreñvaet hon esperañs en adsav ho servijerion d'ar
Vuhez. Dre Jezuz Krist...

OFIS AR BEURE

S. 94 R/- Doue a zo Aotrou ar re vev: deuit, azeulomp anezhañ.

Meulgan R/- Ho pet soñjeus Jezuz Krist, adsavet a-douez ar re varv,
En eo hor silvidigezh, hor gloar beurbadel.

Ma vezomp-ni marv gantañ, gantañ ivez 'vevimp,
Ma c'houzañvomp gantañ, gantañ ivez e renimp. R/

Ennañ 'mañ hor poanioù, ennañ hor joatioù,
Ennañ an esperañs hag hor c'harantez. R/

Ennañ emañ pep gras, ennañ 'mañ hor peoc'h,
Ennañ emañ hor gloar, hor silvidigezh. R/

S. 64 Ant.: Aotrou, selaouit va fedenn, pep den a c'hell mont betek
ennoc'h.

Kant. Ez Ia 38,10-20 (P. 37): En tu all d'am dienez, grit din bevañ, Aotrou.

S. 150 Ant.: Meuleudi d'an Aotrou gant kement a zo buhez ennañ.

Komz Doue 1 Tes 4,14 Mar kredomp ez eo marvet Jezuz hag adsav-
vet a-douez ar re varv, evel-se ivez Doue
a zegaso da vevañ gant Jezuz ar re a vo marvet o kacout ar feiz ennañ.

Ennoc'h emañ mammenn ar vuhez, en ho sklerijenn e welomp
ar sklerijenn.

V/- Aotrou, pegen priziuz ho karantez, en ho sklerijenn...

V/- Klod d'an Tad...

Kant Zak.: Me eo an dasorc'h hag ar vuhez: an neb a gred emnon, na pa
vefe marv a vevo.

Pedomp Doue an Tad hollc'hallouiek en deus adsavet Jezuz Krist
a-douez ar re varv hag a roio ar vuhez d'hor c'horfoù marvel,
ha lavaromp dezhañ:

R/- O Mestr ar vuhez, hor selaouit.

- Aotrou hon Doue, dre ar vadeziant ez omp bet sebeliet gant Jezuz ha
gantañez omp adsavet; grit dimp kerzhout en ur vuhez nevez, evit ma
c'hellimp da eur hor marv, bevañ bepred gant ar C'hrist. R/

- Roit dimp ar bara bev diskennet eus an neñv, evit m'hor bo ar vuhez
peurbadel ha ma 'z adsavimp d'an deiz diwezhañ. R/

- E penn hor beaj war an douar, roit dimp ar c'hrras da guitaat hor
c'horf gant joa evit arvestiñ ouzhoc'h er c'hloar. R/

- Un Ael hoc'h eus kaset d'ho Mab evit e frealziñ an e dremenvan: da eur
hor marv deuit d'hor sikour gant un esperañs dudies. R/

- Doue ar re vev hag ar re vev, c'hwi hag hoc'h eus adsavet Jezuz,
roit buhez d'hor Anaon ha lakit ac'hanomp ganto en ho kichen. R/

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag a zo gloar an dud just ha buhez
ho tui fidel, dre varv ho Mab hag e adsav d'ar vuhez,
ez omp bet dasprenet, sellit gant madelezh ouzh hon holl vreu-
deur tremenet ha peogvir o deus anavezet mister hoc'h adsav
d'ar vuhez, grit dezho antren e joatioù an evurusted peurba-
del. Dre Jezuz Krist...

OFIS KREISTEIZ

S. 125 - 126 - 127 Ant.: Aotrou, selaouit va fedenn, pep den a c'hell
mont betek ennoc'h.

Komz Doue Jb 19,25-26 Me a oar ez eo bev va dasprener hag e savo d'an diwezh war boultre ar re varv; gant va c'horf en em zalc'hin em sav ha gant va daoulagad-me e welin Doue.

V/- Roit dezho, Aotrou, an diskuizh peurbadel. R/- Ha sklerijenn ho tremm da skedif warno.

OFIS AN ABARDAEZ

Meulgan R/- Aotrou, trec'h oc'h bet war ar marv... (P. 8)

S. 114 Ant.: Kerzhout a rin e bezañs Doue, war zouar ar re vev.

S. 129 - : Ma virit hor mankoù dirak ho taoulagad, Aotrou, piv a c'hello padout?

Kant. Kol 1,12-20 (P. 18): Da Zoue ar c'hloar beurbadel! rak dioutañ ev pep tra, hadrezañ hag evitañ! Amen!

Komz Doue 1 Kor 15,55-57 Emen, o Marv, emañ da drec'h? Pelec'h, Ankoù, emañ da vroud? Broud an Ankoù eo ar pec'hed, ha nerzh ar pec'hed eo al Lezenn. Met rentomp bemnoz da Zoue, eñ hag en deus roet dimp an trec'h dre Jezus Krist hon Aotrou.

Ehoc'h emañ mammenn ar vuhez, en ho sklerijenn e welomp ar sklerijenn.

V/- Aotrou, pegen priziuz ho karantez, en ho sklerijenn... V/- Klod d'an Tad...

Kant. ar W.: Holl gement en deus roet din an Tad a zeuio davedon evit bevañ da viken em c'hichen.

Pedomp an Aotrou Jezuz, eñ hag a druzfumo hor c'horf reuzidik hag en lako da vezañ heñvel ouzh e gorf gloriuz, ha lavaromp dezhañ:

R/- C'hwi a zo hor buhez hag hon adsav d'ar vuhez.

- O Krist, Mab an Doue bev, c'hwi hag hoc'h eus adsavet Lazar ho mignon, blegnit d'an adsav gloriuz ar re varv hoc'h eus dasprenet gant ho kwad priziuz. R/
- O Krist, Frealzer an dud enkeniet, c'hwi hag hoc'h eus sec'het daerou ar re a leñve da Lazar, da baotr yaouank Naim ha da verc'h Jairoz, frealzit ar re a zo en kañv. R/
- O Krist bepred bev evit erbedif evidomp, deskit dimp kinnig evit an Anaon ar sakrifis a vouleudi. R/
- Roit dimp an trec'h war ar pec'hed a gas d'ar marv, evit ma tizhimp an divarvelezh. R/
- Ho pet soñj eus enebourion ho Kroaz, eus ar re n'o deus ken esperañs: roit dezho ar c'hras da gredif e buhez ar-bed-da-zont. R/
- Peogwir e tle bout distrujet hor chomadur douarel, roit dimp en neñvoù ar chomadur peurbadel n'eo ket graet gant darn an den. R/

Kempedenn Aotrou Doue, ho Mab unganet, goude m'en devoa trec'h war ar marv, hoc'h eus graet dezhañ tremen da Rouantelezh an Neñvoù, grit d'ho servijerion varv, pa vo bet diskaret marv ar bed-mañ, mont d'ho kwelout da viken fas-ouzh-fas, c'hwi o C'hrouer hag o Salver. Dre Jezus Krist...

3 Du S. VARZHIN PORREZ lean

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus renet sant Varzhin dre hent an izeldad betek gloar an neñvoù, roit dimp ar c'hras da heuliañ ken mat e skouerioù kaer ma veritimp bezañ savet uhel eveltañ er baradoz. Dre Jezus Krist...

4 Du S. CHARLEZ BORRONEO eskob

Kempedenn Mirit en ho pobl, ni ho ped, Aotrou Doue, ar spered ho poa skuilhet gant largentez en eskob sant Charlez, evit ma talc'ho an Iliz da nevesat hep ehan, ha ma c'hello, o tont da vezañ mui-ouzh-mui heñvel ouzh Jezus Krist, diskouez d'ar bed ar gwir boltred anezhañ. Eñ a ren...

9 Du DEDI ILIZ-VEUR AL LATRAN

(Ofis Dedi an Ilizoù) (P. 219)

10 Du S. LEON-VEUR pab, doktor

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi ha ne bemetit ket e toufe morse nerzhioù an droug da drec'hif war an Iliz diazezet war ar roc'hell divrall m'eo bet an obestel, grit eta dezhi, ni ho ped, gant sikour pedennoù ar pab sant Leon, derc'hel mat d'ar wirionez ha tañva evel-se ur peoc'h asur ha padus. Dre Jezus Krist...

11 Du S. VARZHIN eskob

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag a zo bet enoret gant an eskob sant Varzhin koulz dre e vuhez evel dre e varv, nevesait burzhudoù ho kras en hor c'halonoù, ma ne c'hello biken nag ar vuhez nag ar marv hon dispartiañ diouzh ho karantez. Dre Jezus Krist...

12 Du S. YOZAFAD eskob, merzher

Kempedenn Dihunit en hoc'h Iliz, Aotrou Doue, ar Spered a leunie sant Yozafad hag hen dougas da reif e vuhez evit e zeñved, ma c'hellimp ni ivez, gant sikour e bedennoù, reif hep aon hor buhez evit hor breudeur. Dre Jezus Krist...

15 Du S. ALBERZH eskob, doktor

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus graet gant an eskob sant Alberzh un don meur evit pe-zh a sell lakaat furnez an dud da glotañ gant ar feiz divin, roit dimp ar c'hras da heuliañ ken mat e geleñnadurezh ma c'hellimp, en ur vont war wellaat er skiantoù, tizhout d'oc'h anaoudegezh ha karantez ac'hanoc'h. Dre Jezus Krist...

16 Du S. MARC'HARID A VRO SKOS

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus roet ul lufr dispar da santez Marc'harid gant he c'harantez taneer e-keñver ar beorien, grit, ni ho ped, dre sikour he fedennoù hag he skouerioù, ma vimp ni hon-unan e-touez an dud ur melezoureus

ho madelezh. Dre Jezuz Krist...

S. JERTRUDA
gwerc'hez

Aotrou Doue, c'hwi hag ho poa aozet e kalon santez Jertruda ul lojeiz eus ar plijusañ evidoc'h, plijet ganeoc'h, gant sikour he fedennoù, sklerijennañ, gant madelezh, teñvalijenn hor c'halonoù, ma santimp, gant levenez, emac'h o chom en hor c'hreiz hag e labourit ennomp. Dre J.K.

17 Du S. ELIZABED A HUNGARIA

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus roet da santez Elizabeth ar c'hras da anaout ha da enoriñ an Aotrou Krist er beorion, grit dimp, dre sikour he fedennoù, servijañ an dud ezhommek hag an dud trubuilhet gant ur garantez diastal. Dre Jezuz Krist...

18 Du DEDI ILIZOU-MEUR
S. PER & S. PAOL

Kempedenn

Difennit hoc'h Iliz, Aotrou Doue, gant nerzh hoc'h ebestel, en doare ma c'hello, gant sikour ar re a zo bet da gentañ o reñf dezhi an anaoudegezh eus ar feiz, dero'hel betek fin an amzerioù da greskiñ e gras an neñvoù. Dre Jezuz Krist...

21 Du AR WERC'HEZ VARI
KINNIGET EN TEMPL

Kempedenn

F'emaomp oc'h ober gant devoision ar memor gloriuz eus ar Werc'hez Vari, grit, ni ho ped, Aotrou Doue, gant sikour ho fedennoù, ma veritimp ni ivez resev lod eus leunder ho kras. Dre JK

22 Du S. SESILIA
gwerc'hez, merzherez

Kempedenn

Selaouit gant madelezh, Aotrou Doue, hor pedennoù gredus, ha prizit reñf dimp, dre sikour santez Sesilia, ar graoù a c'houlenamp. Dre Jezuz Krist...

23 Du S. KLEMAÑS I
pab, merzher

Kempedenn

Doue hollc'halloudeka peurbadel, c'hwi hag en em ziskouez ken burzhudus ho labour e nerzh-kalon hoc'h holl Sent, roit dimp gras al levenez e deiz-gouel merzherenti sant Klemañs, eñ beleg ha test ho Mab a harpas dre edastoni ar pezh a lide, hag a startaas dre e skouer ar pezh a brezege a c'henou. Dre Jezuz Krist...

S. KOLOMBAN
abad

Aotrou Doue, e sant Kolomban hoc'h eus bet unanet ar garg da brezeg an Aviel gant ar gred evit buhez ar venoc'h, roit dimp ar c'hras, ni ho ped, gant sikour e bedennoù hag e skouerioù, d'ho klask a-raok pep tra, ha da labourat a-zevri da greskiñ pobl ar re a gred ennoc'h. Dre Jezuz Krist...

30 Du S. ANDREV
abostol

(Ofis an Ebestel) (P. 225) nemet:

Ant. (Beure ha noz)

- 1 - Pêr hag Andrev, o tilozel o rouedoù, a heulias Jezuz, ar C'hrist.
- 2 - Salud, Kroaz priziuz, degemerit diskibl ar C'hrist, va Mestr.

3 - N'am lezit ket, Aotrou, da vezañ dispartiet diouzhoc'h.

Kant. Zak & ar W.: O Kroaz vurzhudus, Kroaz c'hoantaet, skediñ a rit war an hollved.

Kempedenn

Aotrou Doue, mestr ar bed, ho pediñ a reomp a galon izel, grit ma c'hello an abostol sant Andrev, goude bezañ prezeget an Aviel ha renet hoc'h Iliz, kenderc'hel da bediñ evidomp ho truz. Dre Jezuz Krist...

1 Kor 1, 18 - 2, 5

Lennadenn

3 Kerzu S. FRANSEZ ZAVIER
beleg

Kempedenn

Aotrou Doue, dre brezegemmoù sant Frañsez Zavier hoc'h eus gonezet deoc'h hoc'h-unan pobloù niverus, grit eta ma vervo enoc'h ho fideled gant ur feiz gredus evel e hini, ham'he devo an Iliz santel al levenez da gaout e pep lec'h bugale e-leizh. Dre Jezuz Krist...

4 Kerzu S. YANN DAMASKEN
beleg, doktor

Kempedenn

Roit dimp ar c'hras, ni ho ped, Aotrou Doue, da vezañ skoazellet gant pedennoù ho beleg sant Yann Damasken, evit ma vo bepred ar gwir feiz bet prezeget ken mat gantañ, hon nerzh hag hor silvidigezh. Dre Jezuz Krist...

6 Kerzu S. NIKOLAZ
eskob

Kempedenn

Ni ho ped a-greiz-kalon, Aotrou Doue, da skulh warnomp ho trugarez, ha gant sikour pedennoù an eskob sant Nikolaz, plijet ganeoc'h hon diwall e pep dañjer evit ma vo diskoilh dirazomp hent ar silvidigezh. Dre Jezuz Krist...

7 Kerzu S. AMBROAZ
eskob, doktor

Kempedenn

Aotrou Doue, gant an eskob sant Ambroaz hoc'h eus graet un doktor eus ar gwir feiz hag un den nerzhus ha kalonek hervez skouer an ebestel, lakit eta da sevel en hoc'h Iliz tud hervez ho kalon evit he gouarn gant nerzh ha furnez. Dre Jezuz K...

8 Kerzu GOUEL AR WERC'HEZ VARI
KROUET DINANN

DERO'HEMT

Moulgan Hag e welis ar Jeruzalem nevez... (P. 219) pe:

R/- Ni ho salud, o Mamm a drugarez,
Mamm da Zoue ha Mamm al levenez,
Mammenn a c'hras hag a buridigezh,
Mamm ar pardon ha Mamm ar santelezh,
O Maria!

C'hwi 'zo splannder 'tousez bugale Adam,
C'hwi 'zo santel ha dreist an holl dinamm,
C'hwi ar Werc'hez 'us d'an holl werc'hezad,
Hag azezet e penn an holl Aeled,
O Maria!

Mamm ha gwerc'hez, degemerit hor grad,
Rak an hini 'zo a-zehou d'e Dad,
Roue an Neñv, ar mor hag an douar,
En em glozas en ho korf digailhar,
O Maria!

Doue an Tad a zo bet ho krouer,
Doue ar Mab 'zo bet ho tiwaller,
Ha Mamm oc'h bet dre vertuz ar Spered,
C'hwi eo kaerañ oberenn an Dreinded,
O Maria!

Doue en deus ho krouet estonus,
Hag ho karet, servijerez doujus,
Da bried ker en deus ho koulenet,
Morse par deoc'h n'eus bet gantañ furmet,
O Maria!

Bezit, Mamm vat, hor frealzidigezh,
Bezit, Gwerc'hez, hor brasañ levenez,
Ha grit dimp mont, eus traoñienn ar maro
D'an evrusted, e palez an neñvoù,
O Maria!

S. 112 Ant.: C'hwi a zo kaer-dreist, o Mari, ha n'eus ennoc'h namm ebet.

S. 147 - : C'hwi a zo gloar Jeruzalem, c'hwi 'zo levenez Israel,
c'hwi a zo enor hor pobl.

Kant. Disk 19 (P. 8) R/- Alleluia, alleluia!

Komz Doue Rm 8,30

Ar re en deus Doue anavezot a-ziaraok eo
ar re en deus rakverket da vezañ heñvel
ouzh patrom e Vab, hag ar re en deus rakverket, o galvet en deus,
ar re en deus galvet, o laket en deus ivez da reizh.

C'hwi 'zo enor, c'hwi 'zo gloar hor pobl, Gwerc'hez Vari.

V/- C'hwi a zo gloar Jeruzalem, Gwerc'hez Vari.

V/- C'hwi a zo levenez uhelañ Israel, Gwerc'hez Vari.

V/- C'hwi a zo evit hor pobl enor bras, Gwerc'hez Vari.

C'hwi 'zo enor, c'hwi 'zo gloar hor pobl, Gwerc'hez Vari.

Kant. ar W.: An holl rummadoù an anv evurus, rak an Hollo'halloudeg
en deus graet evidon burzhudoù.

Dre hanterouriezh ar Werc'hez Vari... (P. 273)

Kempedenn

Aotrou Doue, gant krouidigezh dinamm ar Werc'hez Vari
hoc'h eus kempennet al lojeiz kaerañ da reñf degemer
d'ho Mab, rak en ur welout a-viskoazh meritoù marv hor Salver
hoc'h eus miret outi da vezañ saotret gant pec'h ebet, grit eta,
ni ho ped, gant sikour he Fedennol, ma vimp naet a bec'hed evit
erruout betek ennoc'h. Dre Jezuz Krist...

OFIS AL LENNADENNOU

Meulgan

1 - Me ho salud, Gwerelaouen
Medisinez ar bec'herien,
Priñsez ha rouanez ar bed,
Gwerc'hez dreist an holl gwerc'h-
ezed.

3 - Omerc'h dibabet gant Doue,
Bezit ur rekour d'hon ene,
Evit, dre ur vuhez santel,
Ma tizhimp ar joa beurbadel.

2 - Lakit ouzhar binoù tresitour
Skoet gant arl an ensbour,
'Vel ur skoued e silvidigezh,
Galloud dreist ho sentidigezh.

4 - Goude genel ez oc'h chomet
Gwerc'hez dinamm ha dibec'hed,
Plijet ganec'h evidomp-ni
Dirak Jezuz alvokadinn.

5 - Deoc'h-c'hwi, Mab Doue benniget,
'Zo bet gant ur werc'hez ganet,
D'an Tad ha d'ar Spered Santel,
Gloar ha meuloudi peurbadel. Amen.

S. 23 Ant.: Gonit a raio Mari bemnoz an Aotrou ha reizhder Doue, he Salver.

S. 45 - : Doue hec'h anavezaz adalek goulou-deiz, an Uhel-meurbet
en deus santelaet e annez.

S. 86 - : Kanet e vez ho kloc'h, o Mari, rak graet en deus an Hollo'hall-
loudeg burzhudoù evidoc'h.

V/- Va leuniet en deus an Aotrou a c'hloar.

R/- Ha va gwisket en deus a santelezh.

Lernadenn Rm 5,12-21

R/- Dre un den hepken eo antreet ar pec'hed er bed hag an
holl o deus pec'hed. + Na spontit ket, Mari, gras hoc'h
eus kavet dirak Doue.

V/- An Aotrou en deus dieubet hoc'h ene eus ar marv ha deuet eo
da vezañ ho tifenner a-snepd'an e nebour. + Na spontit...

Te Deum

Kempedenn (P. 296)

OFIS AR BEURD

S. 94 R/- Lidomp krouidigezh dinamm ar Werc'hez Vari; azeulomp he Mab
Jezuz Krist hon Aotrou.

Meulgan Hag e welis... (P. 219)

S. 62 Ant.: C'hwi a zo kaer-meurbet, o Mari ha n'eus ennoc'h namm ebet.

Kant. Dn (P. 6)

S. 149 Ant.: C'hwi a zo gloar Jeruzalem, c'hwi 'zo joa Israel, c'hwi
'zo enor ho pobl.

Komz Doue Iz 43,1

Evel-hen e komz an Aotrou, da grouer, o
Yakob, da furmer, Israel: Bez dizaon, rak
da zasprenet em eus; dre da anv em eus da c'halvet, din ez out.

C'hwi 'zo enor... (P. 296)

Kant. Zak.: Ho krouidigezh dinamm, Gwerc'hez, Mamm da Zoue, he deus
kamennet al levenez d'ar bed holl.

Breudeur, pedomp hor Salver... (P. 223)

Kempedenn (P. 296)

OFIS KREISTEIZ

S. 119 - 120 - 121 Ant.: C'hwi a zo kaer-meurbet, o Mari, ha n'eus
ennoc'h namm ebet.

Komz Doue Ef 5,25-27

Ar C'hrist en deus karet e Iliz, hag en
em roet e-unan d'ar marv eviti, evit he
santelaat. Fellout a rae dezhañ lakaat e-unan an Ilz-se d'en em
ziskouez dirazañ, leun a splander, hep namm ebet, na roufen, na
netra a-seurt-se, met santel ha dibec'h.

V/- Va leuniet a levenez en deus an Aotrou.

R/- Ha va gwisket en deus a santelezh.

OFIS AN ABARDAEZ

Meulgan Leun a c'hbras en em laouenait... (P. 223)

S. 109 Ant.: C'hwi a zo kaer-meurbet, o Mari, ha n'eus ennoc'h namm ebet.

S. 126 - : C'hwi a zo gloar Jeruzalem, c'hwi a zo joa Israel, c'hwi a
zo enor hor pobl.

Kant. Ef 1,3-10 (P. 11)

Komz Doue Rm 5,20-21 El lec'h m'eo bet fonnus ar pec'hed, eo bet ar c'hras fonnusoc'h c'hoazh; hag evel m'en deus renet ar pec'hed o reifi ar marv, evel-se ivez e oa d'ar c'hras da ren dre ar reizhder evit reifi buhez peurbadus, dre Jezuz Krist hon Aotrou.

C'hwi 'zo enor... (P. 296)

Kant. ar N.: Hiziv ez eus deuet ur greskenn war wrizienn Yese, hiziv ez eo bet koñsevet Mari dinamm, alleluia.

11 Kerzu S. DAMAZ I pab

Kempedenn Grit, ni ho ped, Aotrou Doue, ma c'hellimp e pep amzer enorifi meritoù ho merzherion a voe ar pab sant Damaz ar servijer devot anezho. Dre Jezuz Krist...

12 Kerzu S. JANED FRAÑSEZA A CHANTAL leanez

Kempedenn Aotrou Doue, a-dreuz an degouezhioù a bep seurt eus he buhez, hoc'h eus brudet santez Janed Frañseza a Chantal gant meritoù dispar, roit d'imp ar c'hras, gant sikour he feddennoù, da heuliañ fidel hent hor galvedigezh evit diskouez e pep amzer skouerioù a sklerijenn. Dre Jezuz Krist...

13 Kerzu S. LUSTIA gwerc'hez, merzheres

Kempedenn Grit, ni ho ped, Aotrou Doue, dre bedennoù santez Lustia, ma vo kemmerzet hor gred, evit ma c'hellimplidañ en deiz-mañ he merzherenti ha gwelout he gloar en ho kichen. Dre JK

14 Kerzu S. YANN AR GROAZ beleg, doktor

Kempedenn Aotrou Doue, roet hoc'h eus d'ho peleg sant Yann ar Groaz ar c'hras d'en em zistagañ a-grenn dioutañ e-unan hag ivez ur garantez virvidik evit ar Groaz, grit d'imp-ni ivez kerzhout bepred war e roudoù ma c'hellimp un deiz arvestiñ ouzh ho klod da viken. Dre Jezuz Krist...

21 Kerzu S. PER KANIZIUS beleg, doktor

Kempedenn Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus roet d'ho peleg sant Pêr Kanizius nerzh-kalon ha gouiziegezh evit difenn ar feiz katolik, grit eta, dre sikour e bedennoù, d'ar re a glask ar wirionez ma kavint ac'hanoc'h-c'hwi, Aotrou Doue, ha ma kendalc'ho pobl he fideled da grediñ emoc'h ha d'ho meuliñ. Dre Jezuz Krist...

23 Kerzu S. YANN A GENTI beleg

Kempedenn Grit, ni ho ped, Aotrou Doue hollc'halloudek, ma 'z aimp evel ho peleg sant Yann a Genti war gresk e skiant ho mister, ha ma c'hellimp, dre ziskouez trugarez e-keñver an holl, meritout ho pardon. Dre Jezuz Krist...

26 - 27 - 28 Kerzu (P. 130)

29 Kerzu S. TOMAZ BEKET eskob, merzher

Kempedenn Aotrou Doue, roet hoc'h eus ar c'hras d'ho merzher sant Tomaz da reifi e vuhez gant nerzh-kalon evit ar justis, grit d'imp gant sikour e bedennoù, aberzhif hor buhez er bed-mañ evit an Aotrou Krist, ma c'hellimp hec'h adkavout er baradoz. Dre Jezuz Krist...

30 Kerzu S. JELVESTR I pab

Kempedenn Roit sikour, Aotrou Doue, d'ho pobl hag en em harp war bedennoù ar pab sant Jelvestr, ma c'hello tremen a-dreuz ar vuhez dindan ho renevezh, ha kacout an evurusted da errucout er vuhez beurbadel. Dre Jezuz Krist...



LENNADENNOU TENNET EUS AR SKRITUR SAKR

Bloavezhioù ampar (76-77)

AZVENT

SUL 1 Iz 6,1-13 R/- Santel, santel, santel, an Aotrou Doue, mestr ar bed holl. Eni a oa, a zo hag a zeu. + An douar a-bezh a zo leun gant e c'hloar. V/- Ar Serafined a youc'he an eil d'egile: Santel...

Lun Iz 7,1-17 Mer 8,23b-9,6 Gwe 11,10-16
Meu 8,1-18 Yaou 10,5-21 Sad 13,1-22a

SUL 2 Iz 14,1-21 R/- Ez kalon e lavares d'an neiv e savin; a-us d'ar stered e savin va zron. + Setu ma 'z out kouezhet e denderioù an islonkoù. V/- Enep da sant Israel ac'h eus komzet uhel ha savet warnañ da selloù balc'h. + Setu ma 'z out...

Lun Iz 34,1-17 Mer Rt 1,1-12 Gwe Rt 2,14-23
Meu 35,1-10 Yaou 2,1-13 Sad 3,1-18

SUL 3 Rt 4,1-22 (17 Kerzu: gwelout izeloc'h)

R/- Setu deizioù o tont ma roin da Zavid ur c'hellid reizh: + Dindan e ren, Youda a vo salvet hag Israel a chomo e surentez. V/- An Aotrou Doue a roio dezhañ tron David e dad + Dindan...

Lun 1 Kron 17,1-15 Mer Mi 4,14-5,7 Gwe Mi 7,14-20
Meu Mi 4,1-17 Yaou 7,7-13

17 Kerzu Iz 40,1-11 21 Kerzu Iz 42,10-25
18 - 40,12-18.21-31 22 - 43,1-13
19 - 41,8-20 23 - 43,19-28
20 - 41,21-29 24 - 44,1-8.21-23

NEDELEG - EPIFANIEZH

NEDELEG - 25 KERZU Iz 11,1-10

R/- Evidomp, hiziv, Roue an neñv a zo bet fellez dezhañ bout ganet eus ar Werc'hez, evit degas en-dro da Rouantelezh an neñv an den a oa kollet. + Engroez an Asled a zo laouen, pa 'z eo diskleriet d'an dud ar silvidigezh peurbadel. V/- Klod da Zoue e barr an neñv ha peoc'h war an douar d'an dud a blij dezhañ. + Engroez...

GOUEL AN TIBOZEZH SANTEL Ef 5,21 - 6,4

R/- C'hwi, bugale, selaouit ho tud: kement-se a zo just en Aotrou. + Enor da dad ha da vamm, eus an holl c'houre'hemmennoù hen-nezh eo an hini kentañ o kaout ur bromesa. V/- Jezuz a siskennas eus Jeruzalem gant e dud da Nazared hag e touje dezho. + Enor...

26 Kerzu :	S. STEFAN	Ob 6,8-7,20.44-59	1	Genver :	He 2,9-17
27 Kerzu :	S. YANN	1 Yn 1,1-2,3	2	- :	Kol 2,16-3,4
28 Kerzu :	INOSANTEZ SANTEL	Ern 1,8-16.22	3	- :	3,5-16
29 Kerzu :	Kol	1,1-14	4	- :	3,17-4,1
30 Kerzu :		1,15-2,3	5	- :	4,2-18
31 Kerzu :		2,4-15	6	- :	Iz 42,1-8
			7	- :	61,1-11

EPIFANIEZH (Sul goude an deiz kentañ ar bloaz): Iz 60,1-22 (Sizhun 2)

Lun	Iz 61,1-11	Mer	Iz 63,7-9	Gwe	Iz 65,13-25
Meu	62,1-12	Yaou	63,19-64,11	Sad	66,5-14a.18-23

BADEZIANT HOR SALVER (Sul goude ar 6 genver): Iz 42,1-8; 49,1-9

K O R A I Z

MERC'HER AL LUDU : Iz 58,1-14

R/- Rann da vara gant ar re o deus naon, ambroug ez ti ar paour dic'houder: + Neuze e tarzho da sklerijenn evel ar goulou-deiz hag ar justis a gerzho dirazout. V/- Ro dilhad d'an hini a zo noazh, na dec'h ket dirazañ: da gorf-te ez eo. + Neuze...

Yaou Adl	1,6-18	Gwe Adl	4,1-8.32-40	Sad Adl	5,1-22
----------	--------	---------	-------------	---------	--------

SUL 1 ar C'horaiz (Sizhun 1) Adl 6,4-25

R/- Selaou, Israel, ha mir ar reolennoù en deus roet dit an Aotrou. + Gouzout a ri eo an Aotrou da Zoue ar gwir Doue an Tad fidel a vir e Englev hag e garantez d'ar re a gar anezhañ. V/- Karout a ri da Zoue gant da holl galon, gant da holl ene ha gant da holl nerzh. + Gouzout...

Lun Adl	7,6-14;8,1-6	Mer Adl	10,12-11,7.26-28	Gwe Adl	15,1-18
Meu	9,7-21.25-29	Yaou	12,1-14	Sad	16,1-17

SUL 2 ar C'horaiz (Sizhun 2) Adl 18,1-22

R/- Ober a rin sevel dezho ur profed a-douez o breudeur hag e lakin va o'homzoù en e c'henou. + Hag e lavaro dezho kement a gemennin dezhañ. V/- Ez an da gas va Mab muiañ-karet. Eñ eo ar profed a zle dont er bed. + Hag e lavaro...

Lun Adl	24,1-25,4	Mer Adl	29,1-5.9-28	Gwe Adl	31,1-5.23
Meu	26,1-19	Yaou	30,1-20	Sad	32,48-52
					34,1-12

SUL 3 ar C'horaiz (Sizhun 3) He 1,1-2,4

R/- Ar C'hrist Jezuz, sklerijenn skedus eus gloar an Tad hag eilskedenn e anien, eñ hag a zalc'h pep tra er bod dro nerzh e gomz, goude bezañ kaset da benn puridigezh ar pechedoù, + a zo aet da azezañ en tu dehou da Veurdez-Doue e barr an neñv. V/- Eñ hag a ren hor feiz, Jezuz, eñ hag en deus graet fae war an eurvad en em ginnige dezhañ, evit gouzañv ar Groaz, + a zo aet...

Lun He	2,5-48	Mer He	4,1-13	Gwe He	5,14-6,8
Meu	3,1-19	Yaou	4,14-5,10	Sad	6,9-20

SUL 4 ar C'horaiz (Sizhun 4) He 7,1-11

R/- Molkisedek a zo anvet "roue a justis hag a beoc'h" + Keñveriet da Vab Doue, e chom beleg da viken. V/- Degas a reas bara ha gwih hag e vennigas Abraham, + keñveriet...

Lun He	7,11-28	Mer He	9,1-14	Gwe He	10,1-25
Meu	8,1-13	Yaou	9,15-28	Sad	10,26-39

SUL 5 ar C'horaiz (Sizhun 1) He 11,1-19

R/- Dre ar feiz e kuitas Moizez an Ejipt hep aon rak komar ar roue. + Evel p'en defe gwelet an Diwelus, e talc'has start. V/- Doue en deus roet gloar dezhañ dirak ar rouaned, er fealded hag en izelegezh e reas Doue ur sant gantañ. + Evel...

Lun He	11,20-40	Mer He	12,14-29	Gwe Iz	50,4-51,3
Meu	12,1-13	Yaou	13,1-25	Sad	52,13-53,12

SUL AR BLEUNIOU Za 9,9-12.16-17

R/- Trid gant da holl nerzh, merc'h Sion! Taol youc'hadennoù a joa, merc'h Jeruzalem! Setu da roue o tont davedout. + Paour eo ha war gein un azen. V/- Ren a ray evel ur gwir roue ha gant skiant ez ay en e labour o lakaat ar gwir hag ar reizher da ren war ar vro. + Paour...

Lun Lam	1,1-12.18-20	Mer Lam	3,1-33	Gwe He	9,11-28
Meu	2,1-10	Yaou	5,1-22	Sad	4,1-16

S U L F A S K

Lun 1 P	1,1-21	Mer 1 P	2,11-25	Gwe 1 P	3,18-4,11
Meu	1,22-2,10	Yaou	3,1-17	Sad	4,12-5,14

SUL 2 FASK Kol 3,1-17 (Sizhun 2)

R/- Mar d-oc'h adsavet da vev a-gevret gant ar C'hrist, klaskit traoù an nec'h, e-lec'h m'emañ ar C'hrist, azezet a-zehou da Zoue. + Lakit ho soñj e traoù an neñv, ha n'eo ket a traoù an douar. V/- Marv ez oc'h evit gwir, hag ho puezh a zo bremañ kuzhet gant ar C'hrist en Doue. + Lakit...

Lun Disk	1,1-20	Mer Disk	2,12-29	Gwe Disk	4,1-11
Meu	2,1-11	Yaou	3,1-22	Sad	5,1-14

SUL 3 FASK Disk 6,1-17 (Sizhun 3)

R/- Klevet em eus galvadem ar re a zo bet lazhet: "Pegeb, Aotrou, e taleit d'ober dimp justis?" Ha Doue en deus respontet dezho: + Ho pet o'hoazh pasianted un nebeut amzer, betek ma vo leun niver ho kompagnuned. V/- Dindan aoter Doue em eus gwelset eneoù ar re a oa bet abertzhet en abeg da gomz Doue ha d'an testeni o deus douget. + Ho pet o'hoazh...

Lennadennoù ar Skritur Sakr

Lun	Disk 7,1-17	Mer	Disk 9,1-12	Gwe	Disk 10,1-11
Meu	8,1-13	Yaou	9,13-21	Sad	11,1-19

SUL 4 FASK Disk 12,1-18 (Sizhun 4)

R/- Trec'hot o deus dre wad an Oan ha dre lavar o zestoni: rak, disprizet o deus o buhez betek mervel. + En abeg da se bezit laouen, o neñvoù, ha c'hwi ar re a chom enno, alleluia, alleluia. V/- Goude gouzañv ur bean dibad o deus bremañ perzh er vuhez peurbadel dre emglev Doue. + En abeg...

Lun	Disk 13,1-18	Mer	Disk 14,14-15,4	Gwe	Disk 17,1-18
Meu	14,1-13	Yaou	15,5-16,21	Sad	18,1-20

SUL 5 FASK Disk 18,21 - 19,10 (Sizhun 1)

R/- Klevet em eus o tont eus an neñv evel taolioù-kurun, alleluia. Hon Doue en deus kemeret en e zorn e c'halloud bras evit ren da Roue da viken, alleluia. + Setu amañ silvidigezh, galloud ha beli e Crist, alleluia, alleluia. V/- Hag eus an tron e teue ur vouezh a lavare: kanit meuleudioù hon Doue, c'hwi e Sent, ha c'hwi-holl e servijerion, ar re vihan evel ar re vras. + Setu amañ...

Lun	Disk 19,11-21	Mer	Disk 21,1-8	Gwe	Disk 22,1-9
Meu	20,1-15	Yaou	21,9-27	Sad	22,10-21

SUL 6 FASK 1 Yn 1,1-10 (Sizhun 2)

R/- En em ziskouezet eo ar vuhez, he gwolet hon eus hag e roomp testoni hag e kemennomp deoc'h ar vuhez-se peurbadel, + a oa e-kichen an Tad hag a zo bet 'n em ziskouezet dimp, alleluia, alleluia. V/- Gouzout a roomp ez eo deuet Mab Doue, eñ a zo gwir Doue, hag ar vuhez peurbadel, + a oa e-kichen...

Lun	1 Yn 2,1-11	Mer	1 Yn 2,18-29	Gwe	1 Yn 3,1-10
Meu	2,12-17	Yaou	4,1-24	Sad	3,11-17

SUL 7 FASK 1 Yn 3,18-24 (Sizhun 3)

R/- Doue en deus diskouezet e garantez evidomp o kas e Vab unganet er bed. + E giz-se kement den a gred ennañ en deus ar vuhez peurbadel. V/- Kement en deus Doue karet ar bed m'en deus roet e Vab unganet. + E giz-se...

Lun	1 Yn 4,1-10	Mer	1 Yn 5,1-12	Gwe	2 Yn
Meu	4,11-21	Yaou	5,13-21	Sad	3 Yn

S U L A R P A N T E K O S T Rm 8,5-27

AMZER ORDINAL

SUL 1 (Sizhun 1) Badeziant hor Salver: (P. 300)

Lun	Rm 1,1-17	Mer	Rm 2,1-16	Gwe	Rm 3,1-20
Meu	1,18-32	Yaou	2,17-29	Sad	3,21-31

SUL 2 (Sizhun 2) : Rm 4,1-25

R/- Dre ar feiz eo e kinnigas Abraham Izaag, pa voe amrouet, hag e vab unganet eo an hini a oa profet gantañ goude resev ar promesaoù. + Rak kredif a rae ez eo Doue galloudus a-walc'h evit dasorc'hif a varv da vev. V/- Kredif a reas en Doue-se a ro ar vuhez d'ar re varv hag a c'halv eus an netra d'ar vuhez. + Rak kredif...

Lun	Rm 5,1-11	Mer	Rm 6,1-11	Gwe	Rm 7,1-13
Meu	5,12-21	Yaou	6,12-23	Sad	7,14-25

Lennadennoù ar Skritur Sakr

SUL 3 (Sizhun 3) : Rm 8,1-17

R/- Doue en deus kaset e Vab e-unan en ur c'horf heñvel ouzh hini ar pec'hed: e sell da ziskar ar pec'hed en deus kondaonet ar pec'hed en e gorf + evit m'he defe reizhidigezh al Lezenn he leunder ennomp-ni. V/- Varservijer en deus didamallet an engroez o kemer warnañ o mankoù + evit m'he defe...

Lun	Rm 8,18-39	Mer	Rm 9,19-33	Gwe	Rm 11,1-12
Meu	9,1-18	Yaou	10,1-21	Sad	11,13-24

SUL 4 (Sizhun 4) : Rm 11,25-36

R/- O donder dreist-muzul pinvidigezh, furnez ha gouziedigezh Doue! + Pegen digomprenus eo e zivizoù, pegen diveizus e hentoù! V/- Diazezet eo e vadelezh evit atav, divrall eo e fealded en neñvoù. + Pegen digomprenus...

Lun	Rm 12,1-21	Mer	Rm 14,1-23	Gwe	Rm 15,14-33
Meu	13,1-14	Yaou	15,1-13	Sad	16,1-27

SUL 5 (Sizhun 1) : 1 Kor 1,1-17

R/- Gortoz a roomp Emziskleriadur hon Aotrou Jezuz Krist, + eñ hag hon startaio betek ar fin. V/- Feal eo an Doue en deus ho kalvet da genvevañ gant e Vab Jezuz Krist hon Aotrou, + eñ hag...

Lun	1 Kor 1,18-31	Mer	1 Kor 3,1-23	Gwe	1 Kor 5,1-13
Meu	2,1-16	Yaou	4,1-21	Sad	6,1-11

SUL 6 (Sizhun 2) : 1 Kor 6,12-20

R/- Ha n'ouzoc'h ket ez oc'h santual Doue, + hag amañ Spered Doue o chom ennoc'h. V/- Mar distruj unan bennak santual Doue, Doue a zistrujo an den-se, rak sakr eo santual Doue, ha c'hwi eo : ar santual-se + hag amañ...

Lun	1 Kor 7,1-24	Mer	1 Kor 8,1-13	Gwe	1 Kor 9,19-27
Meu	7,25-40	Yaou	9,1-18	Sad	10,1-13

SUL 7 (Sizhun 3) : 1 Kor 10,14-11,1

R/- Ar c'halir a vennozha a vennigomp, hag-eñ n'eo ket ur gomunion gant gwad ar C'hrist? + Ar bara a rannomp, hag-eñ n'eo ket ur gomunion gant korf ar C'hrist? V/- N'eus nemet ur bara hepken, ned-omp ni holl nemet ur c'horf hepken, rak holl e kemeromp hol lod eus ar bara unan-se. + Ar bara...

Lun	1 Kor 11,2-16	Mer	1 Kor 12,1-11	Gwe	1 Kor 12,31-13,13
Meu	11,17-34	Yaou	12,12-31	Sad	14,1-19

SUL 8 (Sizhun 4) : 1 Kor 14,20-40

R/- Na vougit ket ar Spered, na rit ket fae war an diougenoù + Hogen amodit pep tra, hag ar pezh a zo mat, mirit anezhañ. V/- C'hoantait an donesom.où speredel, dreist-holl ar brofediezh + Hogen...

Lun	1 Kor 15,1-19	Mer	1 Kor 15,35-58	Gwe	Jk 1,1-18
Meu	15,20-34	Yaou	16,1-24		1,19-27

SUL 9 (Sizhun 1) : Jk 2,1-13

R/- Doue en deus dibabet ar re baour hervez ar bed da vezañ pinvidik er feiz hag heritourion ar Rouantelezh-se + en deus prometet d'ar re a gar anezhañ. V/- Evurus ar re a gar ar baourentez, rak dezho eo Rouantelezh an neñvoù + en deus...

Lennadennoù ar Skritur Sakr

Lun	Jk 2,14-26	Mer	Jk 3,13-18	Gwe	Jk 4,13-5,11
Meu	3,1-12	Yaou	4,1-12	Sad	5,12-20

SUL 10 (Sizhun 2) : Si 46,1-10

R/- Jozua a bedas an Doue uhel-meurbet pa voe gwasket gant enebourion a-zivwar-dro + An Aotrou santel ha galloudek a selasous anezhañ en ur skeiñ warno grizilh ponner-meurbet.
 V/- Piv, a-raok dezhañ, en devoa bet kement-all a nerzh-spered? Hag-efi n'eo ket dre e zorn eo e harzas an heol? + Hag e...

Lun	Yozua 1,1-18	Mer	Yozua 3,1-17	Gwe	Yozua 7,4-26
Meu	2,1-24	Yaou	5,10-12	Sad	10,1-14
		Yaou	5,13-6,21		11,15-17

SUL 11 (Sizhun 3) : Yozua 24,1-7.13-28

R/- Kentoc'h mervel eget dilezel an Aotrou evit servijañ doueed all. + Ni a servijo an Aotrou hon Doue hag e sentimp ouzh e c'houre'hemennou. V/- Daoust d'an holl zoueed a vez graet diouto en neiv ha war an douar, n'hon eus-ni nemet un Doue hepken + Ni a servijo...

Lun	Barn 2,6-3,4	Mer	Barn 6,1-6.11-24	Gwe	Barn 8,30-32
Meu	4,1-24	Yaou	7,1-3.16-22		9,1-15.19-20
				Sad	11,1-9.29-40

SUL 12 (Sizhun 4) : Barn 13,1-25

R/- Brazez e vi hag az po ur bugel, ur mab; hag aotenn ebet ne savo war e benn, rak ar bugel-se a vo gouestlet da Zoue. + Efi eo a zle salviañ Israel eus e enebourion, V/- Setu ma vi brazez ha ma c'hani ur mab hag e roi dezhañ Jezuz da anv. + Efi ..

Lun	Barn 16,4-6.16-31	Mer	1 Sam 1,26-28	Gwe	1 Sam 3,1-21
Meu	1 Sam 1,1-19	Yaou	2,11-21	Sad	4,1b-18
		Yaou	2,22-36		

SUL 13 (Sizhun 1) : 1 Sam 5,1-6,4.10-12

R/- Savit, Aotrou, da vont da lec'h ho tiskuilh, c'hwi hag arc'h ho splannder + Ho peleon da wisko warno ar santelezh hag ho tud fidel da drido gant ar joa. V/- Addeuit, Aotrou, da vet engroezioù ho pobl a Israel. + Ho peleon...

Lun	1 Sam 7,15-8,22	Mer	1 Sam 11,1-15	Gwe	1 Sam 15,1-23
Meu	9,1-6.14-10,1	Yaou	12,1-25	Sad	16,1-13

SUL 14 (Sizhun 2) : 1 Sam 17,1-10.23b-26.40-51

R/- Doue en deus va zennet gwechall eus geol al leon hag eus skillfoù an arzh + a demno ac'hanon hisiv eus dorn va enebourion.
 V/- An Doue fidel ha leun a vadelezh en deus va dieubet pa oan enkelc'hiet gant loened gouez + a demno...

Lun	1 Sam 17,57-18,9.20-30	Mer	1 Sam 21,1-10	Gwe	1 Sam 26,2-25
Meu	19,8-10,20,1-17	Yaou	25,14-24	Sad	28,3-25
			28-39		

SUL 15 (Sizhun 3) : 1 Sam 31,1-4; 2 Sam 1,1-16

R/- Menezioù Gilboe, arabat e kouezhfe warnoc'h na glizh na glav + e-lec'h ma kouezhas harozed Israel. V/- C'hwi holl venezioù a-zivwar-dro, ra zeuio an Aotrou d'ho kwelout met ra dremenno e-biou da Venez Gilboe + E-lec'h...

Lun	2 Sam 2,1-11;3,1-5	Mer	2 Sam 6,1-23	Gwe	2 Sam 11,1-17.26-27
Meu	4,2-5,7	Yaou	7,1-25	Sad	12,1-25

Lennadennoù ar Skritur Sakr

SUL 16 (Sizhun 4) : 2 Sam 15,7-14.24-30; 16,5-13

R/- Va c'hensil zoken hag em boa fiziañs ennañ + efi hag a zebre eus va bara, en deus savet e seul d'am flastrañ. V/- Unan ac'hanoc'h a ya d'am gwerzhañ, unan hag a zo o tebrifi ganin + efi hag a zebra...

Lun	2 Sam 18,6-17.24-19,4	Mer	1 Kron 22,5-19	Gwe	1 R 3,5-28
Meu	24,1-4.10-19	Yaou	1 R 1,11-35	Sad	8,1-21
			2,10-12		

SUL 17 (Sizhun 1) : 1 R 8,22-34.54-61

R/- Me o reno d'am menez santel hag o lako evurus + rak va zi a vo graet anezhañ "ti a bedenn" e-touez an holl vroadoù.
 V/- Noz ha deiz, ra vezo digor ho taoulagad war an ti-se peogwir hoc'h eus lavaret: Aze eo e vo va anv o chom + rak va zi..

Lun	1 R 10,1-13	Mer	1 R 12,1-19	Gwe	1 R 16,29-17,16
Meu	11,1-4.26-43	Yaou	12,20-33	Sad	18,16b-40

SUL 18 (Sizhun 2) : 1 R 19,1-9a.11-21

R/- An Aotrou a lavaras da Voizez: Pa dremenno va gloar e lakin ac'hanout e toull ar roc'h ha va dorn a vo warnout ken e vin tremenet + rak an den ne c'hell va gwelout hep mervel.
 V/- Doue, den ebet n'en deus e walet biskoazh; ar Mab unganet, Doue, an hini a zo en askr e an Tad, hennzh en deus e roet da anaout + rak an den...

Lun	1 R 21,1-21.27-29	Mer	2 Kron 20,1-9.13-24	Gwe	2 R 3,5-27
Meu	22,1-9.15-23	Yaou	2 R 2,1-15	Sad	4,8-37

SUL 19 (Sizhun 3) : 2 R 4,38-44; 6,1-7

R/- Un den a zegasas ugent baraenn heiz hag Elizeas a lavaras: Ro anezho d'an holl dud-se ma tebrint diouto. + Rak evel-hen e komz an Aotrou: debret e vo hag e vano anezhañ. V/- Jezuz a vennigas ar baraennou, a rannas anezho hag an holl a zebzas hag o gwalc'h o devoe + rak evel-hen...

Lun	2 R 5,1-19	Mer	2 R 6,24-25;32-7,16	Gwe	2 R 11,1-12,1
Meu	6,8-23	Yaou	9,1-16;22-27	Sad	13,10-25

SUL 20 (Sizhun 4) Ef 1,1-14

R/- Doue en deus rakdivizet diwar hor penn e vefemp advibion dezhañ dre Jezuz Krist. Setu petra eo bet plijet gantañ ober en e vadelezh, evit ma vefe kanneulet splannder ar c'hras + en deus roet dimp en e Vab muiañ-karet. V/- Drezañ eo hon eus dor-digor d'ar c'hras-se a chomomp start enni dre ar feiz + ar c'hras en deus roet...

Lun	Ef 1,15-23	Mer	Ef 2,11-22	Gwe	Ef 3,14-21
Meu	2,1-10	Yaou	3,1-13	Sad	4,1-16

SUL 21 (Sizhun 1) : Ef 4,17-24

R/- En em nevesait a spered hag a soñj, ha gwiskit warnoc'h an Den nevez + a zo bet krouet diouzh skeudenn Doue er reizhder hag er santelezh hervez ar wirionez. V/- Diwiskit an denkozh gant e oberoù evit gwiskañ an Den nevez + a zo bet...

Lun	Ef 4,25-5,7	Mer	Ef 5,22-33	Gwe	Ef 6,10-24
Meu	5,8-21	Yaou	6,1-9	Sad	Flm 1-25

Lennadennoù ar Skritur Sakr

SUL 22 (Sizhun 2) : 2 R 14,1-27

R/- Ma kontez war da nerzh ha da c'halloud er brezel, Doue a roio lamm dit dirak da enbourion + rak Doue a ro an trec'h pe al lamm. V/- Gant Doue e sevenimp taolioù kadarn, eñ a vac'h'o hon enbourion dindan e dreid + rak Doue a ro...

Lun Am 1,1-2,3 Mer Am 3,1-15 Gwe Am 5,1-17
Meu 2,4-16 Yaou 4,1-13 Sad 5,18-6,14

SUL 23 (Sizhun 3) : Am 7,1-17

R/- Netra ne ra an Aotrou Doue hep diskleriañ e sekret d'e ser-vijerion ar Brofeded + An Aotrou en deus komzet, piv ne c'hellfe dont da vezañ Profed? V/- An Aotrou en deus va di-babet pa can 'drek an tropell ha lavaret en deus din: kae, bezañ e vi profed evit va fobl Israel + An Aotrou en deus...

Lun Am 8,1-14 Mer Oz 1,1-9;3,1-5 Gwe Oz 4,1-10;5,1-7
Meu 9,1-15 Yaou 2,4-24 Sad 5,15b-7,2

SUL 24 (Sizhun 4) : Oz 8,1-13

R/- Treiñ a rejont gloar Doue e skeudenn ur c'hole o tebrifi foen. + Ankouaat a rejont Doue o Salver. V/- Ankouaat en deus Is-rael e Grouer ha savot o deus evito paleziou. + Ankouaat...

Lun Oz 9,1-14 Mer Oz 11,1-9 Gwe Oz 14,2-10
Meu 10,1-15 Yaou 13,1-14,1 Sad 2 R 15,1-5.32-16,8

SUL 25 (Sizhun 1) : Iz 6,1-13

R/- Santel, santel, santel an Aotrou Doue, Mestr ar bed. Eñ a oa, a zo hag a zeu. + An hollved a zo leun gant e c'hloar. V/- Ar Serafined a youc'he an ail d'egile: santel...

Lun Iz 3,1-15 Mer Iz 7,1-17 Gwe Iz 28,1-6.14-22
Meu 5,8-13.17-24 Yaou 9,7-10,4 Sad Mi 1,1-9;2,1-11

SUL 26 (Sizhun 2) : Mi 3,1-12

R/- Abalamour deoc'h e teuo Sion da vezañ un douar-labour + ha Jeruzalem a vo ur bern dismantroù ha menez an Templ ur gre-c'hienno-goadek. V/- Ne vo ket lezet maen war vaen a gement ne vo diskaret + ha Jeruzalem...

Lun MI 6,1-15 Mer 2 R 17,24-41 Gwe Iz 20,1-6
Meu 2 R 17,1-18 Yaou 2 Kron 29,1-2 Sad 2 R 20;1-19
30,1-16a

SUL 27 (Sizhun 3) : Iz 22,1-14

R/- Distroit davedon a-holl-galon, er boan, en daeroù hag er c'hañ-voù. + Fregit ho kalonoù ha nann ho tilhad. V/- Distroit d'an Aotrou ho Toue, rak tener eo ha trugarezus. + Fregit...

Lun Iz 30,1-18 Mer 2 R 18,37-19,19.35-37 Gwe 2 R 21,1-18.
23-22,1
Meu 2 R 18,17-36 Yaou Iz 37,21-35 Sad So 1,1-7,14-2,3

SUL 28 (Sizhun 4) : So 3,8-20

R/- Ne lezin da vevañ emout nemet ur bobl isel a galon ha dister. + En anv an Aotrou e lako Israel e fiziañs. V/- D'an holl bobloù e roñ muzelloù c'hlan dezho gellout aspediñ anv an Aotrou + En anv...

Lun Yr 1,1-19 Mer Yr 3,1-5.19-4,4 Gwe Yr 7,1-20
Meu 2,1-13.20-25 Yaou 4,5-8.13-28 Sad 9,1-11.16-21

Lennadennoù ar Skritur Sakr

SUL 29 (Sizhun 1) : 2 R 22,8-23,4,21-23

R/- Selaouit va mouezh ha grit ar pezh a c'hourc'hemennan deoc'h. + Hag e vefot va fobl ha me a vezo ho Toue. V/- Ma chomit fidel d'am c'hourc'hemennou e chomfot em c'harantez. + Hag...

Lun Na 1,1-3.3,1-11 Mer Ha 1,1-2,4 Gwe Yr 22,10-30
Meu 2 Kron 35,20-36,12 Yaou 2,5-20 Sad 19,1-5.10-20,6

SUL 30 (Sizhun 2) : Yr 23,9-17.21-29

R/- Diwallit diouz ar falsprofed a zeu davedoc'h treuzwisket en defved. + Ha n'int e-diabarzh nemet bleizi-tager. V/- Dont a ray falsprofed niverus hag a raio burzhudoù gouest da douellañ kalz a dud. + Ha n'int ket...

Lun Yr 25,15-17.27-28 Mer Yr 24,1-10 Gwe Yr 28,1-17
Meu 36,1-10.21-22 Yaou 27,1-15 Sad 29,1-14

SUL 31 (Sizhun 3) : 2 R 24,20b-25.13.18-21

R/- Dilezet eo Sion, Jeruzalem 'zo ur gouelec'h, hon Templ santel ha meurdezus e-lec'h ma pede hon hendadoù a zo bet devot gant an tan. + Na gonnarit ket, Aotrou, n'ho pet ket soñj da viken eus hon torfed, rak ho pobl ez omp holl. V/- Hag-eñ e c'hellit chom diseblant ouzh kement-se, Aotrou, hag-eñ e c'hell-lit tevel evit hor mezhekaat hep muzul? + Na gonnarit ket...

Lun Yr 37,21;38,14-28 Mer Yr 30,18-31,9 Gwe Yr 42,1-16;43,4-7
Meu 32,6-10.26-40 Yaou 31,15-22.27-34 Sad Ez 1,3-14.22-28

SUL 32 (Sizhun 4) : Ez 2;8-3,11.16-21

R/- Graet em eus ganit ur gedouñ evit ti Israel; Pa glevi ur gomz eus va genou, e kemenni dezho eus va ferzh: + Bez dizaon dirazo ha na vez ket disuj. V/- Da zremm a lakin ken kalet hag o dremm, da dal ken kalet hag o zal. + Bez dizaon...

Lun Ez 5,1-17 Mer Ez 10,18-22;11,14-25 Gwe Ez 13,1-16
Meu 8,1-6a.16-9,11 Yaou 12,1-16 Sad 14,12-23

SUL 33 (Sizhun 1) : Ez 16,3-19.35-43.59-63

R/- Evel ur vaouez dilezet eo'h adgalvan ac'hanout. E tan va fulor em boa kuzhet ouzhit va dremm; + E tan va c'harantez em eus ouzhit truez, eme an Aotrou, da Zasprenner. V/- Kounañ a rin an Englev an boa graet ganit em amzer da youankiz hag e tiazezin ez keñver un Englev peurbadel. + E tan va c'harantez...

Lun Ez 17,3-15.19-22 Mer Ez 20,27-44 Gwe Ez 28,1-19
Meu 18,1-13.20-22 Yaou 24,15-27 Sad 34,7-16.23-31

SUL 34 (Sizhun 2) : Dn 7,1-27

R/- Gwelet e vo Mab an Den o tont war ur goabrenn gant galloud ha gloar + Hag e kaso e Aeled evit bodañ ar re zibabet eus pevar c'horn ar bed, eus penn an douar betek penn an neñv. V/- Hag e vo gwelet Mab an Den azezet a-zehou d'an Tad Hollc'hal-loudek hag o tonet war goabrenn an oabl. + Hag e kaso...

Lun Ez 36,16-34 Mer Ez 37,15-28 Gwe Ez 40,1-4;43,1-12
Meu 37,1-14 Yaou 38,14-39,10 Sad 47,1-12

Lennadennoù ar Skritur Sakr

Bloavezhioù par (77-78)

AZVENT

SUL 1 (Sizhun 1) : Iz 1,1-18

R/- En em welc'huit, an em naetait, lemit ho fallagriez a-zirak va gweled + Ha deuit: Na pa ve ho pec'hedoù evel skarleg, evel erc'h e teuint gwenn. V/- Paouezit d'ober ar fall, des-kit ober ar mad. + Na pa ve...

Lun Iz 1,21-27;2,1-5 Mer Iz 5,1-7 Gwe Iz 19,16-25
Meu 2,6-22;4,2-6 Yaou 16,1-5;17,4-8 Sad 21,6-12

SUL 2 (Sizhun 2) : Iz 22,8-23

R/- Evel-hen e komz ar Sant, ar Gwirion, an hini en deus gantañ alc'houez David. + Setu m'em eus laket dirazout un nor digor na c'hell don he serriñ. V/- O vezañ m'ac'h eus miret va lavar ha n'ac'h eus ket dinac'het va anv. + Setu m'em...

Lun Iz 24,1-18a Mer Iz 25,6-26,6 Gwe Iz 27,1-13
Meu 24,18-25,5 Yaou 26,7-21 Sad 29,1-3

SUL 3 (Sizhun 3) : Iz 29,13-24

R/- An deiz-se e klevo ar re vouzar lavarennoù al levr; ha kuitaet ganto ar skeud hag an deñvalijenn, daoulagad ar re dall a welo, + Hag ar beorion a drido a levenez abalamour da sant Israel.
V/- It da gemenn da Yann ar pezh a glevit hag a welit: an dud dall a wel, ar re gamm a gerzh, ar re lovr a zo glanaet, ar re vouzar a glev hag ar re baour a zo kemennet dezho ar c'helloù-mat. + Hag ar beorion...

Lun Iz 30,18-26 Mer Iz 31,1-3;32,1-8 Gwe Iz 33,7-24
Meu 30,27-33;31,4-9 Yaou 31,1-5-33,6

17 Kerzu Iz 45,1-13 20 Kerzu Iz 48,1-11 22 Kerzu Iz 49,14-50,1
18 - 46,1-13 21 - 48,12-21 23 - 51,1-11
19 - 47,1-15 49,9b-13 24 - 51,17-52,2
7-10

NEDELEG - EPIFANIEZH

NEDELEG - 25 KERZU Iz 11,1-10

R/- Evidomp en deus goulet Roue an neñv bezañ ganot eus ar Werc'hez, evit degas en-dro da Rouantelezh an neñvoù anden a oa kollet. + Engroez an Aeled a zo laouen dre m'eo diskleriet d'an dud ar silvidigezh peurbadel. V/- Klod da Zoue e barr an neñvoù ha peoc'h war an douar d'an dud a blij dezhañ. + Engroez ...

GOUEL AN TIEGEZH SANTEL Ef 5,21-6,4

R/- C'hwil, bugale, sentit ouzh ho tud en Aotroù: just eo an dra-se. + Enor da dad ha da vamm; hennezh eo ar gourc'hemenn-kentañ a vefe stag outañ ur bromesa. V/- Jezuz a ziskemas eus Jeruzalem gant e dud evit dont da Nazared hag e touje dezho. + Enor...

26 Kerzu: S. S'DEEFAN Ob 6,8-15;7,1-2a.44-60

27 Kerzu: S. YANN 1 Yn 1,1-2,3

28 Kerzu: I'NOSANTEZ SANTEL Erm 1,8-16.22

29 Kerzu: Kant 1,1-8

30 Kerzu: 1,9-2,7

31 Kerzu: 2,8-3,5

1 Genver : He 2,9-17 5 Genver : Kant 7,11-3,7
2 - : Kant 4,1-5,1 6 - : Iz 49,1-9
3 - : 5,1-6,1 7 - : 54,1-17
4 - : 6,2-7,10

EPIFANIEZH (Sul goude an deiz kentañ ar bloaz): Iz 60,1-22 (Sizhun 2)

Lun Iz 54,1-17 Mer Iz 56,1-8 Gwe Ba 4,5-29
Meu 55,1-13 Yaou 59,15-21 Sad 4,30-5,9

BADEZIANT HOR SALVER (Sul goude ar 6 genver): Iz 42,1-8;49,1-9

KORAIZ

MERC'HER AL LUDU : Iz 58,1-14

R/- Rann da vara gant ar re o deus naon, degas d'az ti ar paour d'ic'houder; + Neuze e tarzho da sklerijenn evel goulou-deiz hag ar justis a gerzho dirazout. V/- Ro dilhad d'an hini a zo noazh; na dec'h ket dirazañ: da gorf-te eo. + Neuze e tarzho...

Yaou Erm 1,1-22 Gwe Erm 2,1-22 Sad Erm 3,1-20

SUL 1 ar C'horaiz (Sizhun 1): Erm 5,1-6,1

R/- Mont a reas Meizez da gaout Faraon hag e lavaras dezhañ: Setu penaos e komz an Aotroù, Doue Israel: + Lez va fobl da vont kuit ma raio er gouelec'h ur pirc'hirinañ em enor. V/- An Aotroù, Doue Israel, en deus va c'haset da lavarout dit: + Lez...

Lun Erm 6,2-13 Mer Erm 10,21-11,10 Gwe Erm 12,21-36
Meu 6,29-7,25 Yaou 12,1-20 Sad 12,37-49
13,11-16

SUL 2 ar C'horaiz (Sizhun 2): Erm 13,17-14,9

R/- Pa zeuas Israel e-maez eus an Ejipt, pa guitaas tiegezh Jakob ur bobl kris, + e teuas Youda e santual hag Israel e zomani. V/- An Aotroù a gerzho dirazo evit diskouez dezho an hent, en ur peulriad-koumoul + hag e teuas Youda...

Lun Erm 14,10-31 Mer Erm 17,1-16 Gwe Erm 19,1-19;20,18-21
Meu 16,1-18,35 Yaou 18,13-27 Sad 20,1-17

SUL 3 ar C'horaiz (Sizhun 3): Erm 22,20-23,9

R/- Rentit e vir d'an den moustret ha d'ar minor, difennit kacz an den izel ha reuzeudik + Dieubit an den gwasket, an ezhomgeg, e dennit a-dre daouarn ar re fallakr. V/- Doue en deus dibabet ar re baour hervez ar bed da vezañ pinvidik er feiz hag heritourion ar Rouantelezh + Dieubit...

Lun Erm 24,1-18 Mer Erm 33,7-23 Gwe Erm 35,30-36,1
Meu 32,1-6.15-34 Yaou 34,5b-9.29-35 Sad 37,1-9
34,10-28 Sad 40,16-38

SUL 4 ar C'horaiz (Sizhun 4): Lv 8,1-17; 9,22-24

R/- Bet ez eus kalz a veleion, dre ma vire ar marv outo da chom atav. + Met ar C'hrist, o vezañ ma chom da virviken, en deus ur velegiezh na dremen ket. V/- Ober a reas an Aotroù eus Aaron ur sant bras hag e lakas anezhañ da vezañ beleg war ar bobl hag e roas dezhañ gloar hag eurvad. + Met ar C'hrist...

Lun Lv 16,2-28 Mer Lv 26,3-17.38-45 Gwe Niv 9,15-10,10.33-36
Meu 19,1-18.31-37 Yaou Niv 3,1-13;8,5-11 Sad 11,4-6.10-33

Lennadennoù ar Skritur Sakr

SUL V ar C'horaz (Sizhun 1): Niv 12,1-15

R/- Moizez a zo bet feal en e holl di, evel servijer + Ar C'hrist avat eo evel Mab, e penn e di e-unan, hag e di ez omp ni hon-unan. V/- Benniget eo efivor Moizez; karet e voe gant Doue hag an dud, er fealded hag en izelegezh e reas Doue gantañ ur sant. + Ar C'hrist...

Lun Niv 12,16-13,3 Mer Niv 16,1-11.16-35 Gwe Niv 22,1-8a.20-35
Meu 14,1-25 Yaou 20,1-13.21,4-9 Sad 24,1-19

SUL AR BLEUNIOU (Sizhun Santel) : Za 9,9-12.16-17

R/- Trid gant da holl nerzh, o mero'h Sion! Youc'h gant al levenez, Jeruzalem! Setu da roue o tont davadout + Paour eo ha pignet war gein un azen. V/- Ren a ray evel ur gwir roue, gantskiant e labouro, hag e lako da ren war ar vro ar gwir hag ar justis. + Paour eo...

Lun Yr 11,18-12,13 Mer Yr 16,1-15 Gwe He 9,11-28
Meu 15,10-21 Yaou 20,2-18 Sad 4,1-16

S U L F A S K

Lun Ob 1,1-26 Mer Ob 2,22-41 Gwe Ob 3,12-4,4
Meu 2,1-21 Yaou 2,42-3,11 Sad 4,5-31

SUL 2 FASK (Sizhun 2): Kol 3,1-17

R/- Mar d-oc'h adsavet da vev a-gevret gant ar C'hrist, klaskit traoù an nec'h, e-lec'h m'emañ ar C'hrist, azezet a-zehou da Zoue. + Lakit ho soñj e traoù an neñv, ha n'eo ket e traoù an douar, alleluia, alleluia. V/- Marv ez oc'h evit gwir, hag ho puhez a zo bremañ kuzhet gant ar C'hrist en Doue. + Lakit...

Lun Ob 4,32-5,16 Mer Ob 6,1-15 Gwe Ob 7,17-43
Meu 5,17-42 Yaou 7,1-16 Sad 7,44-8,3

SUL 3 FASK (Sizhun 3): Ob 8,4-25

R/- Jezuz a lavar d'e ziskibion: Pareit ar re glañv, dasorc'hit ar re varv + resevet hoc'h eus evit netra, roit evit netra, alleluia, alleluia. V/- It, embannit emañ tost Rouantelezh an neñvoù. + Resevet...

Lun Ob 8,26-40 Mer Ob 9,23-43 Gwe Ob 10,34-11,4;18
Meu 9,1-22 Yaou 10,1-33 Sad 11,19-30

SUL 4 FASK (Sizhun 4): Ob 12,1-23

R/- Pêr, sav prim, kemer da c'houriz ha laka da sandalenoù, + kouezhet eo ar chadennoù diouzh da zaouarn, alleluia, alleluia.
V/- Ael an Aotrou a baras trumm hag e skedas ur sklerijenn en toull-bac'h. O skeifi gant Pêr en e gostez e tihunas anezhañ hag e lavarar: + kouezhet eo...

Lun Ob 12,24-13,14a Mer Ob 13,44-14,7 Gwe Ob 15,5-35
Meu 13,14b-43 Yaou 14,8-15,4 Sad 15,36-16,15

SUL 5 FASK (Sizhun 1): Ob 16,16-40

R/- Petra 'zo ret din ober evit bezañ salvet? + Kred en Aotrou Jezuz, hag e vi salvet, te ha da diegezh, alleluia, alleluia.
V/- Homañ eo oberenn Doue, kredifi en hini en deus kaset. + Kred...

Lun Ob 17,1-18 Mer Ob 18,1-28 Gwe Ob 19,21-40
Meu 17,19-34 Yaou 19,1-20 Sad 20,1-16

Lennadennoù ar Skritur Sakr

SUL 6 FASK (Sizhun 2): Ob 20,17-38

R/- Eveshait war an holl zefived en deus ar Spered Santel ho laket da episkobed warno + da vezañ mesaerion Iliz Doue, an Iliz-se en deus prenet gant e wad e-unan, alleluia, alleluia. V/- Ar pezh a c'houlenner digant ministred eo en em ziskouez feal, + da vezañ...

Lun Ob 21,1-26 Mer Ob 21,40-22,21 Gwe Ob 22,22-23,11
Meu 21,27-39 Yaou Ef 4,1-24 Sad 23,12-35

SUL 7 FASK (Sizhun 3): Ob 24,1-27

R/- Dont a ra an eur ma vo klevet mouezh Mab Doue gant ar re holl a zo er bezioù + ha ma teuint er-maez, ar re o devo graet ar mad oc'h adsevel evit ar vuhez, alleluia, alleluia. V/- Heuliañ a ran an Hent-se a anvont ur rann-gredenn ha gantañ e servijan Doue va Zadou en ur esperifi e vo un advevadeg evit ar re just ha kenkoulz evit ar bec'herion. + Heuliañ a ran...

Lun Ob 25,1-27 Mer Ob 27,1-20 Gwe Ob 28,1-14
Meu 26,1-32 Yaou 27,21-44 Sad 28,15-31

S U L A R P E N T E K O S T Rm 8,5-27

AMZER ORDINAL

SUL 1 (Sizhun 1) Badeziant hor Salver: (P. 309)

Lun Gn 1,1-2,4a Mer Gn 3,1-24 Gwe Gn 6,5-22;7,17-24
Meu 2,4b-25 Yaou 4,1-24 Sad 8,1-22

SUL 2 (Sizhun 2) : Gn 9,1-17

R/- En amzer Noe em eus touet ne dremenje ken an doureier bras war an douar; evel-se em eus touet ne gonnarjen ken enep dit. + Ha va emglev a beoc'h a vo dirvral. V/- Nag e tilec'hfe ar menezioù, nag e vrall fe ar runioù, va o'harantez evidout ne gemmo ket. + Ha va emglev...

Lun Gn 11,1-26 Mer Gn 14,1-24 Gwe Gn 16,1-16
Meu 12,1-9 Yaou 15,1-21 Sad 17,1-27

SUL 3 (Sizhun 3) : Gn 18,1-33

R/- Dirak promesa Doue ne chomas ket Abraham doustus na difeiz. + rak n'eus netra dic'hallus da Zoue. V/- N'eas ket e feiz war semplaat diwar soñjal e oa erru marv e gorf. + rak...

Lun Gn 19,1-17.23-29 Mer Gn 22,1-19 Gwe Gn 24,33-41.49-67
Meu 21,1-21 Yaou 24,1-27 Sad 25,7-11.19-34

SUL 4 (Sizhun 4) : Gn 27,1-29

R/- C'hwez va Mab a zo evel c'hwez ur park en deus benniget Doue. An Aotrou d'az lako ken niverus hag an traozh war an aod. + Ha da roio dit evel sin e vennoz glizhem an neñv. V/- An Aotrou Doue hollc'halloulek d'az pennigo ha d'az kresko + ha da roio...

Lun Gn 27,30-45 Mer Gn 31,1-18 Gwe Gn 35,1-29
Meu 28,10-29,14 Yaou 32,4-31 Sad 37,2-4.12-36

SUL 5 (Sizhun 1) : Gn 39,1-23

R/- Va mab, taolit evezh ouzh va furnez + Na daolit ket evezh ouzh ur vaouez siek, he o'hammedoù a gas d'an Ankoù. V/- Lavard'ar furnez: va e'hoar out-te, ha d'ar skiant: va o'haneilez. + Na...

Lennadennoù ar Skritur Sakr

Lun Gn 41,1-17a,25-43	Mer Gn 43,1-34	Gwe Gn 45,1-15,21-28
Meu 41,56-42,26	Yaou 44,1-34	46,1-7
		Sad 49,1-28,33

SUL 6 (Sizhun 2) : 1 Tes 1,1-2,12

R/- En em zistroet oc'h ouzh Doue evit servijañ an Doue Bev ha gwirion, ha gortoz e Vab a zeuio eus an neñv, eñ bet adsavet gantañ a-deuz ar re varv, + Jezuz, an hini a salv ac'hanomp eus ar gonnar o tont. V/- Ra **Ni**jo gant an Aotrou ho lakaat da fonnaat er garantez ha da startaat ho kalonoù en ur santelezh didamall a-benn donedigezh an Aotrou + Jezuz...

Lun 1 Tes 2,13-3,13	Mer 1 Tes 5,1-28	Gwe 2 Tes 2,1-17
Meu 4,1-18	Yaou 2 Tes 1,1-12	Sad 3,1-18

SUL 7 (Sizhun 3) : 2 Kor 1,1-14

R/- Ho madelezh, Aotrou, a zeu d'am souten; + Pa 'z eus em c'halon re holl a anken, ho frealz a ro en-iro joa d'am ene. V/- Evel ma 'z eo bras al lod hon eus e poanioù ar C'hrist, evel-se dre ar C'hrist ez eo bras ivez hor frealzidigezh. + Pa 'z eus...

Lun 2 Kor 1,15-2,11	Mer 2 Kor 3,7-4,4	Gwe 2 Kor 5,1-21
Meu 2,12-3,6	Yaou 4,5-18	Sad 6,1-7,1

SUL 8 (Sizhun 4) : 2 Kor 7,2-16

R/- An dristidigezh hervez Doue a lak an ene da gaout keuz evit e silvidigezh, ur c'heuz ha n'eus war e lerc'h kerseñ ebet. + Tristidigezh ar bed, hi avat, a ro ar marv. V/- Hon tristidigezh a zo bet hervez Doue ha n'hon eus bet koll ebet. + Tristi...

Lun 2 Kor 8,1-24	Mer 2 Kor 10,1-11,6	Gwe 2 Kor 11,30-12,13
Meu 9,1-15	Yaou 11,7-29	Sad 12,14-13,13

SUL 9 (Sizhun 1) : Gal 1,1-12

R/- Gras deoc'h ha peoc'h digant Doue an Tad hag an Aotrou Jezuz Krist + eñ hag a zo en em roet e-unan en abeg d'hor peoc'hedoù. V/- Ma vefen o klask grad-vat an dud, n'eo ket servijer ar C'hrist e vefen ken + eñ hag a zo en em roet...

Lun Ga 1,13-2,10	Mer Ga 3,14-4,7	Gwe Ga 5,1b-25
Meu 2,11-3,14	Yaou 4,8-5,1	Sad 5,26-6,18

SUL 10 (Sizhun 2) : Fil 1,1-11

R/- Ho karantez da gresko muioc'h-mui, en ur reiñ deoc'h ar ouiziegezh hag ar skiant-vat, + deoc'h da brizout an talvoudegezhioù gwirion ha da vezañ dinamm ha direbech a-benn deiz ar C'hrist. V/- Sur on eus an dra-mañ: an Hini en deus staget enno'ha gant e labour kaer a zalc'ho gantañ beteke gas da benn evit Deiz ar C'hrist + deoc'h da brizout...

Lun Fil 1,12-26	Mer Fil 2,12-30	Gwe Fil 3,17-4,9
Meu 1,27-2,11	Yaou 3,1-16	Sad 4,10-23

SUL 11 (Sizhun 3) : Iz 44,21 da 45,3

R/- Neñvoù, meulit an Aotrou, tridit, douar a-bezh, + rak an Aotrou en deus graet trugarez. V/- An Aotrou en deus dasprenet Yakob hag Israel a vo roet gloar dezhañ, + rak an Aotrou...

Lun Esd 1,1-3;2,68-3,8	Mer Ag 1,1-2,10	Gwe Za 1,1-2,4
Meu 4,1-5,24-5,5	Yaou 2,11-23	Sad 2,5-17

SUL 12 (Sizhun 4) : Za 3,1 da 4,14

Lennadennoù ar Skritur Sakr

R/- Int eo an div olivezenn hag an daou gantolor + a zo en o sav dirak Mestr an Douar. V/- An Aotrou a gaso e zaou dest da brofedif + I a zo en o sav...

Lun Za 8,1-17,20-23	Mer Esd 7,6-28	Gwe Ne 1,1 da 2,8
Meu Esd 6,1-5,14-22	Yaou 9,1-9,15-10,5	Sad 2,9-20

SUL 13 (Sizhun 1) : Ne 3,33 da 4,17

R/- C'hwi, Aotrou, a zo ur repu evit ar reuzeudig, evit ar paour en e zienez, + ur goudor ouzh ar glav hag un disheol ouzh ar wrez. V/- Jeruzalem, ar menezioù a galc'h anezhi: evel-se emañ an Aotrou e-keñver e bobl, + ur goudor...

Lun Ne 5,1-19	Mer Ne 9,1-2,5-21	Gwe Ne 12,27-47
Meu 7,72b-8,18	Yaou 9,22-37	Sad Iz 59,1-14

SUL 14 (Sizhun 2) : Krennl. 1,1-7,20-33

R/- N'en em blijit ket en ho furnez hoc'h-unan; maz eus unan bennak a soñj gantañ bezañ fur e-giz tud ar bed-mañ, ra 'n em raio foll evit dont da vezañ fur, + rak furnez ar bed-mañ a zo follentez dirak Doue. V/- Ni a brezeg ur C'hrist bet staget ouzh ar Groaz, galloud ha furnez Doue, + rak furnez ar bed-mañ...

Lun Krennl. 3,1-20	Mer Kren. 9,1-18	Gwe Kren. 25,1-28
Meu 8,1-5,12-36	Yaou 10,6-32	Sad 31,10-31

SUL 15 (Sizhun 3) : Jb 1,1-22

R/- Ma tegemeromp an eurvad evel donezon Doue, perak ne zegemerfemp ket memes-tra ar gwalleur? + An Aotrou en deus roet, an Aotrou en deus adkemeret, ra vo benniget anv an Aotrou. V/- En noazh ez on deuet eus korf va mamm, en noazh e tistroin d'an douar + An Aotrou en deus...

Lun Jb 2,1-13	Mer Jb 4,1-21	Gwe Jb 6,1-30
Meu 3,1-26	Yaou 5,1-27	Sad 7,1-21

SUL 16 (Sizhun 4) : Jb 11,1-20

R/- Bepred emaoamp gwasket a bep tu, met n'omp ket flasret; hep surentez, met n'omp ket diasur; + gwallgaset, met n'omp ket dilezet. V/- Emaoamp bepred o tougen en hor c'horf poanioù marv Jezuz, evit ma vo diskouezet ivez buhez Jezuz en hor c'horf marvel, + gwallgaset, met...

Lun Jb 12,1-25	Mer Jb 18,1-21	Gwe Jb 22,1-30
Meu 13,13-14,6	Yaou 19,1-29	Sad 23,1 da 24,12

SUL 17 (Sizhun 1) : Jb 28,1-28

R/- Prezeg a reomp furnez misterius Doue, an hini a oa chomet kuzhet, + a oa bet ragaozet a-holl-viskoazh gant Doue evit hor gloar. V/- Emao'ha er C'hrist Jezuz; dre c'hras Doue eo deuet da vezañ furnez evidomp + eñ hag a oa bet ragaozet...

Lun Jb 29,1-10;30,1,9-23	Mer Jb 32,1-6;33,1-22	Gwe Jb 40,6-24;42,1-6
Meu 31,1-23,35-37	Yaou 38,1-30;40,1-5	Sad 42,7-17

SUL 18 (Sizhun 2) : Ab 1-21

R/- Da vrasoni he deus touellet ac'hanout, te hag a oa o chom e kleuzioù ar roc'h hag o terc'hel ar runioù uhelañ; nag e vefes ken uhel hag an erer o neizhiañ, + nag e vefe kludet da neizh e-mesk ar stered, ac'hano e rindit diskenn. V/- Ne deo'ho den; Ha te, mar en em voutes e donderioù an douar, va dom az tenno ac'hano + nag e vefe kludet...

Lennadennoù ar Skritur Sakr

Lun Yl 1,13 da 2,11	Mer Yl 3,1 da 4,8	Gwe Mal 1,1-14;2,13-16
Meu 2,12-27	Yaou 4,9-21	Sad 3,1-21

SUL 19 (Sizhun 3) : Yon 1,1 da 2,1,11

R/- Yona a voe tri devezh ha teir nozvezh e korf al loen-mor; evel-se e vo Mab an Den tri devezh ha teir nozvezh e korf an douar + ha tri deiz goude e varv e tasorc'ho. V/- Mab an Den a zo da vezañ drouklakaet etre dasuam an dud, hag han lazhañ a raint + ha tri deiz...

Lun Yon 3,1 da 4,11	Mer Za 10,3 da 11,3	Gwe Za 12,9 da 13,9
Meu Za 9,1 da 10,2	Yaou 11,4 da 12,8	Sad 14,1-21

SUL 20 (Sizhun 4) : Koh 1,1-18

R/- Sellat em eus ouzh kement a vez graet dindan an heol; setu, avel eo pep tra, ha redadenn war-lerc'h avel. + En nozh eo bet ganet an den, en nozh e tistro evel m'eo deuet; netra ne denn eus e labour a virfe etre e zaoarn. V/- N'hon eus degaset netra ganimp o tont er bed, na kennebeut-all n'hellimp kas netra ganimp en ur guitaat + En nozh eo bet...

Lun Koh 2,1-26	Mer Koh 5,9 da 6,8	Gwe Koh 8,5-9,10
Meu 3,1-23	Yaou 7,1 da 8,1a	Sad 11,7-12,14

SUL 21 (Sizhun 1) : Tt 1,1-16

R/- Din-me, an hini bihanañ-holl e-touez ar Sent, eo bet roet ar c'hrus-mañ, prezeg d'ar Baganed pinvidigezh divuzul ar C'hris + dre ar feiz emañ hon eus hardizhiegezh a-walc'h da dostaat ouzh Doue gant fiziañs. V/- Drezañ eo hon eus bet gras ha karg an abostoliezh, evit prezeg e-touez an holl vroadoù, en enor d'e anv, ar sentidigezh ouzh ar feiz + dre ar feiz...

Lun Tt 2,1 da 3,2	Mer 1 Tm 1,1-20	Gwe 1 Tm 3,1-16
Meu 3,5-15	Yaou 2,1-15	Sad 4,1 da 5,2

SUL 22 (Sizhun 2) : 1 Tm 5,3-25

R/- Renit ur vuhez dellezek eus Aviel ar C'hris, o stourm a-gevret gant un hevelep kalon evit ar feiz. + Na glaskit ket hepken ho konid hoc'h-unan, met ivez hini ar re all. V/- Sed ar soñ-job a dleit lakaat ennoc'h, evel m'emaint ivez er C'hris Jezuz. + Na glaskit ket...

Lun 1 Tm 6,1-10	Mer 2 Tm 1,1-18	Gwe 2 Tm 2,22 da 3,17
Meu 6,11-21	Yaou 2,1-21	Sad 4,1-22

SUL 23 (Sizhun 3) : 2 P 1,1-11

R/- Dre e c'hloar e-unan ha gant e c'halloud en deus ho kalvet an Aotrou; drezañ hon eus resevet an donezonoù prometet, ken priziuz ha ken bras + ma 'z oc'h deuet ganto da gaout perzh en natur-Doue. V/- C'hwi-holl hag a zo bet badezet er C'hris, hoc'h eus gwisket ar C'hris warnoc'h, + ken ma 'z oc'h...

Lun 2 P 1,12-21	Mer 2 P 2,9-22	Gwe 2 P 3,11-18
Meu 2,1-8	Yaou 3,1-10	Sad Jud 1-25

SUL 24 (Sizhun 4) : Est 1,1-12; 2,5-17

R/- Piv a zo par d'an Aotrou, hon Doue, a dron azezet war an uhel hag a stou evit treiñ e selloù etreze an neñv hag an douar? + Adsevel a ra eus ar boultrenn an ezhommeg, diwar an teil e tenn ar reuzeudig evit e lakaat da dronañ gant ar brifsed. V/- Diskouezet en deus nerzh e vreo'h ha dispennet ar re a zo brasoni en o c'halon, diskaret en deus an dud c'halloudek diwar

zron hag uhelaet an dud izel. + Adsevel a ra...

Lun Est 3,1-11	Mer Est 14,1-19	Gwe Ba 1,14-2,5;3,1-8
Meu 4,9-16	Yaou 5,1-14	Sad Ba 3,9-15,24 da 4,4
		7,1-10

SUL 25 (Sizhun 1) : Tb 1,1-22

R/- Tobiaz a roe an aluzen d'e vroadour ha bara d'ar re naoniet; + Dre ma touje Doue muic'h eget ar roue, e sebelie korfoù e genvroidi. V/- Mont a rae da welout ar brizonidi hag e roe dezho alioù salvus + Dre ma touje

Lun Tb 2,1 da 3,6	Mer Tb 4,1-6,19;5,17	Gwe Tb 7,1,9-16;8,4-14
Hou 3,7-17	Yaou 6,2-18	Sad 10,7b da 11,14

SUL 26 (Sizhun 2) : Ydt 2,1-12; 4,9-15

R/- Klevet hon eus gwalleurioù ar c'hêrioù hag ez omp bet semplet. Spont hag aon a zo deuet ennomp-ni hag en hor bugale. + Ar menezioù o-unan a nac'h reiñ dimp goudor, Aotrou, ho pet truzi V/- Pec'het hon eus evel hon tadoù, graet hon eus ar fall hag an displealded. + Ar menezioù...

Lun Ydt 5,1-22	Mer Ydt 8,1a,9-36	Gwe Ydt 12,1 da 13,3
Meu 6,1 da 7,5	Yaou 10,1-6a,11-23	Sad 13,4 da 14,3

SUL 27 (Sizhun 3) : Si 1,1-20

R/- Gwizienn ar Furnez, da biv ez eo bet dizoloet? Hoc'h holl ijinerzh piv hen anavez? An Uhel-neurbet en deus he skuilhet war bep den + hen roet en deus da gement hini a gar anezhañ. V/- Kement furnez a zo a zeu eus an Aotrou, gantañ emañ bepred + hen...

Lun Si 2,1-18	Mer Si 3,17 da 4,10	Gwe Si 6,5-37
Meu 3,2-16	Yaou 5,1 da 6,4	Sad 7,22-36

SUL 28 (Sizhun 4) : Si 10,6-18

R/- Diskar a ra an dud c'halloudek diwar o zron hag uhelaet an dud izel. + Diskouez a ra nerzh e vreo'h ha dispenn ar re a zo brasoni en o c'halon. V/- Tronioù ar brifsed a ziskar an Aotrou, o lakaat reoù habask en o flas. + Diskouez a ra...

Lun Si 11,12-28	Mer Si 15,11-20	Gwe Si 17,15-32
Meu 14,20 da 15,10	Yaou 16,24 da 17,14	Sad 24,1-22

SUL 29 (Sizhun 1) : Si 26,1-4,9-18

R/- Heol o sevel en uhelurioù an Aotrou, evel-se eo kaerder ur wreg vat evel ur c'houlouenn en he zi + Un donezon a-berzh Doue eo ur wreg didrouz. V/- Evurus an den en deus ur wreg vat: e vuhez a vo div wech kaeroc'h. + Un donezon...

Lun Si 27,22 da 28,7	Mer Si 35,1-18	Gwe Si 42,15-25
Meu 29,1-13;31,1-4	Yaou 38,24 da 39,11	Sad 43,27-33
		51,1-12

SUL 30 (Sizhun 2) : Fur 1,1-15

R/- Evurus an den en deus kavet ar furnez, priziuzoc'h eo eget perlez. + he hentoù a zo hentoù dudius hag he holl wenedennoù a gas d'an eurvad. V/- Ar furnez eus an nec'h a zo da gentañ pur, ha goude-se peoc'hus, trugarezus, douget da gaout fiziañs, leun a druez hag a oberoù-mat. + He hentoù...

Lun Fur 1,16 da 2,24	Mer Fur 4,1-20	Gwe Fur 6,1-25
Meu 3,1-19	Yaou 5,1-23	Sad 7,15-30

Lennadennoù ar Skritur Sakr

SUL 31 (Sizhun 3) : Fur 8,1-21

R/- Pedet em eus ha skiant a zo bet roet din + azgoulennet em eus ha deuet eo din ar spered a furnez; kentoc'h eget tronioù ha bizhier-roue em eus prizet anezhi. V/- Ma vank furnez da unan bennak, ra c'houlenno anezhi digant an Doue a ro d'an holl gant largetez, ha roet e vezo dezhañ. + Azgoulennet em eus...

Lun Fur 9,1-18	Mer Fur 11,20b-12,2.	Gwe Fur 16,2b-13.20-26
Meu 10,1 da 11,4	11b-19	Sad 18,1-15a
	Yaou 13,1-10;14,15-21	19,4-9
	15,1-6	

SUL 32 (Sizhun 4) : 1 Mak 1,1-25

R/- Mar d-eo konnaret an Aotrou a-enep dimp evit hor c'hastizañ, evit ur pennad, + en em adunvano gante servijerion. Pep kastiz a hañval, a-dra sur, d'ar c'houlz ma vez gouzañvet, bezañ un abeg a dristidigezh, met diwezhatoc'h e tegas d'ar re a zo bet stummet gantañ, ur frouezh peoc'hus a reizhder. + En em adunvaniñ a ray gant...

Lun 1 Mak 1,41-61	Mer 2 Mak 7,1-19	Gwe 1 Mak 2,15-28.42-50
		65-70
Meu 2 Mak 6,18-31	Yaou 7,20-41	Sad 3,1-26

SUL 33 (Sizhun 1) : 1 Mak 4,36-59

R/- Greiañ a rejont an Templ gant kurunennoù acour ha kensakrañ a rejont aoter an Aotrou, + hag e voe levezet vras e-touez ar bobl. V/- Hag e vennigjont an Aotrou gant meulganou ha meuleudioù + hag e voe...

Lun 2 Mak 12,32-45	Mer 1 Mak 9,1-22	Gwe Dn 2,1.25-47
Meu 1 Mak 6,1-17	Yaou Dn 1,1-21	Sad 3,8-30

SUL 34 (Sizhun 2) AR C'HRIST ROUE Dn 7,1-27

R/- Neuze e vo gwelet Mab an Den o tonet war ar c'hoabr gant galloud ha gloar. + Hag e kaso e Aeled evit bodañ ar re zibabet eus pevar c'horn ar bed, eus penn pellañ an douar betek penn pellañ an neñv. V/- Hag e vo gwelet Mab an Den azezet a-zehou d'an Holle'halloudeg hag o tonet war goabrenn an oabl. + Hag e kaso...

Lun Dn 5,1-17.23 da 6,1	Mer Dn 8,1-26	Gwe Dn 10,1 da 11,1
Meu 6,5-28	Yaou 9,1-4.18-27	Sad 12,1-13

```

=====
==
==      B E N N O Z H      ==
==                      ==
==          D A          ==
==                      ==
==          Z O U E          ==
==                      ==
=====

```

